

An Testamant: Nevez.

Kelou Mad
JEZUZ OR Zalver



minhi levez

An Testamant Nevez

**Kelou Mad
Jezuz,
or Zalver.**

Lakeet e brezoneg gand Pierre Guichou
diwar ar c'hresianeg.

Embannet gand
Minihi-Levenez e miz mae 2002

ISBN 2-908230-15-1

D'al lenner...

Pa c'hoarvez ar poent da vond er mêz a-garg, e tle pep hini klask peseurt implij a vefe mad dezañ ober euz e amzer hag euz e dammig nerz... Bet va-unan, a-hed kalz bloaveziou, o tispaka teñzor ar Skritur Zakr da gloareged Kemper, em-eus soñjet e c'hellfen labourad adarre war an dachenn-ze, med bremañ evid ar Vrezonegerien, pa 'z on-me dleour e-keñver yez Breiz! Dre ar brezoneg eo bet digoret va spered da ouiziegez ar bed-mañ, ha digoret ive va c'halon da sklêrijenn an Neñv: ne ouien ket eur gér galleg pa 'z on eet da 'Skol ar japel', war ar mêz e Sant-Tegoneg...

*Diwar-benn kement-se eo degouezet din komz gand va mignon Job an Irien, a zo abaoe pell-zo o labourad a bep tu war an dachenn-ze... Ha deuet om da zoñjal e c'hellfem (marteze!) trei en eun doare strisoc'h an Testamant Nevez, hag aoza eul leor kaer evid kinnig Kelou Mad or Zalver d'an oll Vrezonegerien... Rag anad eo d'an oll: an traou a lennom pe a glevom a vez kavet kalz c'hwecoc'h pa zeuont deom en or yez c'hinidig, e yez or c'halon! C'hweg eo d'ar Vrezonegerien klevet Doue, an Tad, o komz dezo e brezoneg, ha klevet êl Doue o tegemenn dezo, evel d'ar Bastored, Kelou Mad or Zalver: **“Setu ma tegemennan deoc'h eur C'helou Mad: ganet ez-eus deoc'h hirio eur Zalver, an Aotrou Mesiaz an Hini eo!”***

Labour on-eus bet a-hed bloaveziou: heulia an destenn c'hresianeg, skriva heb fin, reiza, difazia, reñka ha kempenn mad pep tra, ha da fin, aoza al leor en e bez gand kalz skeudennou. Evid kement-se eo bet Job eur mestr war an dachenn... Mil bennoz dezañ!... Bennoz ive d'an oll re o-deus or sikouret, ha da voullerien Sant-Tonan, o-deus greet euz on labour eul leor euz ar c'haerra, da verka frêz e kaver ennañ eun teñzor dispar: Komz Doue on Tad, ha Kelou Mad or Zalver...

A-greiz kalon e kinnigom frouez on labour

d'an oll Vreiziz, d'an oll Vrezonegerien dre ar béd...

P. G.

**AN TESTAMANT - EMGLEO
NEVEZ HA PEURBADUZ**

		E berr:
A	viel Sant Vaze	p. 13 Mz
	Sant Mark	p. 71 Mk
	Sant Lukaz	p. 107 Lk
	Sant Yann	p. 169 Yn
O	berou Ebestel	p. 221 Ob
L	izeri Ebestel:	
Sant Paol	da Romiz	p. 271 Rom
	da Gorintiz 1 - 2	p. 294 1 Kor; 2 Kor
	da C'halatiz	p. 330 Gal
	da Efeziz	p. 339 Ef
	da Filipiz	p. 347 Fil
	da Goloziz	p. 355 Kol
	da Desalonigiz	p. 362 1 Tes; 2 Tes
	da Dimote 1 - 2	p. 372 1 Tim; 2 Tim
	da Dit	p. 382 Tit
	da Filemon	p. 386 Fim
	da Hebreiz	p. 388 Heb
Sant Jakez		p. 406 Jak
Sant Pèr 1 - 2		p. 412 1 Pèr; 2 Pèr
Sant Yann 1 - 2 - 3		p. 423 1 Yn; 2 Yn; 3 Yn
D	iskuliadenn Sant Yann	p. 434 Disk

**BERRADURIOU EVID EUN NEBEUD LEORIOU
EUZ AN TESTAMANT KOZ**

Geneliez	Gen
Ermêziadeg (Ekzod)	Erm
Leviegaz	Lev
Niverou	Niv
Adlezenn (Deuteronom)	Ad pe Dt
Samuel	Sam
Rouaned	R
Izaiaz	Iz
Jeremiaz	Jer
Ezekiel	Ez
Daniel	Dan
Oze	Oz
Joel	Joel
Amoz	Am
Jonaz	Jz
Zakaria	Zak
Malachi	Mal
Job	Job
Salmou	Salm
Krenlavariou	Lav
Furnez	Fur

Notennou

DEIZ-ar-RAGAOZA. D'ar Zabad ha d'ar goueliou-braz e oa difennet striz ober an disterra labour; red e oa eta aoza pep tra en deiz araog: ablamour da-ze e vez anvet an deiz-se 'Deiz-ar-ragaoza' (Mk 15,42).

DOUJERIEN-DOUE. Evelse e veze anvet ar Baganed a oa troet ouz Doue hag a veze o pedi hag oc'h adori Doue a-unan gand ar Juzevien, med heb dezo beza amdrohet (Ob 17,4).

FARIZEIZ. War boent al Lezenn, setu ar rumm strisa e-touez ar Juzevien. Bez' ez int aketuz da zeveni an 'oberou' gourhemennet gand al Lezenn: pedennou, yunou, provadou, sakrifisou. Diwar-ze e vezont lorhet, ha fae a reont war an dud na reont van ebed euz al Lezenn... Da weled, ez-eus anezo tud just ha santel... Siwaz! Lod anezo ne glaskont nemed beza gwelet, meulet hag enoret gand an dud! En aner e sevenont eta an 'oberou', peogwir ema o c'halon pell-pell diouz Doue! Heñvel int, eme Jezuz, ouz beziou kaer en diavêz, ha leun a vreinadurez en diabarz (Mz 23... Lk 18...). Doue hepkén a c'hell justiza an dén, diwar ar feiz ha dre ar feiz... Dre an 'oberou' hepkén, ne vez justizet dén ebed!

JERUZALEM-SANTUAL-TEMPL. Kalon ar Juzevien, kalon Jezuz dreist-oll, a vez bepred troet warzu Jeruzalem, ar Gêr Zantel, el lec'h ema Ti-Doue! Souezet e vezont o tigouezoud war blasenn vraz an Templ! Estlammet e vezont gand ar zavadoriou, dreist-oll gand ar Zantual, kaerreet ma 'z eo gand aour ha mein prisiuz (Lk 21...). Trefuet e vezont avad o tostaad ouz ar Zantual; med n'eus nemed ar veleien da vond el lodenn genta (ar Zantual), ha n'eus nemed ar beleg-braz da vond en eil lodenn (Santual ar Zantualiou): eno ema an Aotrou o chom, azezet war 'Dron an Drugarez' (Heb 9,7). Siwaz! Euz Ti-Doue, euz an Ti-Pedi, o-deus an dud greet eun toull-torfetourien, eun toull-laeron!

JUSTIZ. Er Skritur-Zakr, gand ar gér-se n'eus ket ano euz ar vertuz a ra deom rei da bep hini ar pep a zo pe a zeu dezañ: komz a vez euz 'santelez'.

JUSTIZ DOUE. An dud oll a zo e dalc'h ar pehed (Rom 3 ha 5). Doue hepkén a zo just, santel: eñ eo ar 'justiz', ar santelez en he leunder, ha n'eus nemed eñ da c'helloud 'justiza', santellaad kalon an den. Henn ober a ra dre e Vab, marvet hag adsavet evid beza evid an oll 'justizer', Santellaer ha Dasprener (1 Kor 1,30...). Ne c'hell dén meritoud 'Justiz Doue' dre 'oberou': gand Doue e vez justizet dre c'hras evid netra, diwar ar feiz ha dre ar feiz.

FEIZ. Ar feiz a vezom justizet drezi eo ar feiz 'bividig', ar vertuz dreist-natur roet deom dre c'hras pa zeuom da drei or c'halon warzu Doue. Ar feiz a ro deom:

- da gredi ha da anzav ez eo Jezuz Mab Doue, deuet da veza dén dre c'halloud ar Spered Santel, marvet hag adsavet da veo evid or savetei;

- da zelaou Jezuz gand doujañs ha da heulia e gelennadurez gand aked;

- da zigeri frank dezañ or c'halon, ha da lakaad ennañ or fiziañs hag on espe-rañs (gweled al Lizeri da Romiz ha da C'halatiz...)

JUSTIZ AL LEZENN. An dud aketuz da zeveni an 'oberou' gourhemennet gand al Lezenn, a zeu da gaoud 'justiz al Lezenn': hervez al Lezenn ez-eus anezo 'tud just', da weled... Med m'ema o c'halon pell diouz Doue, ma ne vevont ket dre ar feiz, ne vez ket o c'halon justizet gand Doue: n'o-deus ket 'justiz Doue'.

GOUEL PASK. Setu brasa gouel ar Juzevien: anvet e vez ive 'Gouel ar Bara Dihoell', rag a-hed sizunvez ar gouel eo difennet striz debri bara gô. D'ar Goan Zantel, e vez debret 'Oan Pask', en eur veuli Doue evid ar frankiz roet d'e Bobl a-dre zaouarn Faraon, hag ive evid ar frouez kenta e-neus roet d'e dud en nevez-amzer.

GOUEL AR PANTEKOST. D'an hanter-kantved devez goude Pask e vez lidet ar Pantekost: euz ar bed-oll e tired Juzevien da drugarekaad Doue evid al Lezenn zantel e-neus roet da Voizez, ha c'hoaz evid an éd nevez eostet er vro. Da geñver ar gouel-ze, e-neus Jezuz skuillet founnuz ar Spered Santel war e Ebestel, dezo da embann Lezenn Nevez an Aviel dre ar béd.

GOUEL AN TELTENNOU. D'an diskar-amzer e vez lidet laouen ar gouel-mañ: a-héd seiz devez e vev an dud dindan teltennou, tro-dro da Jeruzalem; meulet e vez an Aotrou evid ar skoazell e-neus roet d'an Tadou er gouelec'h epad 40 vloaz, hag ive evid ar vendem nevez greet er Vro en amzer-ze.

KOZIDI ar BOBL. A-douez ar Bobl e vez dibabet Pennou-Braz, dezo da veza karget da vlenia ha da varn ar Bobl, a-unan gand ar Veleien-Vraz hag ar Skribed, er C'huzul-mzur, ar Zanedrin. Nikodem a oa marteze unan anezo (Mz 27,1).

"ME-EO-A-ZO!" E Aviel Sant-Yann, Jezuz a implij aliez ar reol-skrid-ze, bet implijet gand Doue da zisklêria da Voizez e Ano Santel a Zoue: "Me-eo-an-Hini-a-zo!", pe "Me-eo-a-zo!" Pa 'z eo Jezuz Doue gwirion, ec'h implij ive ar reol-skrid-ze evid disklêria deom piou eo ha petra eo dezañ ober:

"Me-eo-a-zo" ar Bara-diskennet-euz-an-Neñv, ar Bara-Beo, Sklêrijenn-ar-Bed, ar Pastor-Kaer, an Adsao-hag-ar-Vuez, an Hent - ar Wironez - hag ar-Vuez, ar Winienn-wirion!... Ma ne zeuoc'h ket da gredi eo "Me-eo-a-zo!" e varvoc'h en ho pehejou! (Yn 8,26).

MESIAZ - KRIST. 'Mesiaz' en hebreeg, ha 'Krist' e gresianeg a verk eun dén olevet a-berz Doue, dezañ da veza roue pe veleg pe brofed. Jezuz avad a zo bet olevet gand Spered Doue, dezañ da veza Doue ha Dé, Roue oll-c'halloudeg war ar Bed-oll, Beleg-Meur etre Doue hag an dud, ha gwir Brofed e Dad.

LEZENN. Lorhet e vez ar Juzevien gand al Lezenn, bet roet gand Doue da Voizez war ar menez Sinai: dindan an neñv, n'eus pobl all ebed da anavezoud evelto bolontez an Aotrou! Med al Lezenn, drezi hec'h-unan ne c'hell ket justiza kalon an dén; roet eo bet d'ar Juzevien evid deski dezo ez int peherien, hag evid o heñcha warzu ar C'hrist, dezo reseo justiz Doue dre ar feiz e Jezuz. (Rom 7...Gal 3...).

PAGANED pe **"TUD-an-DIAMDROC'H"**, pe c'hoaz **"An DIAMDROC'H"** pe ive **"Ar BROADOU"**. Dibabet dre c'hras gand Doue, Izrael a zo anezañ 'ar Bobl', Pobl Doue! Ar re all n'int nemed broadou 'ordinal'! Da viroud dihланаad o c'hredenn pe o buez, n'o-deus ar Juzevien darempred ebed gand ar Baganed! Deuet int zokén d'ober fae warno, da gaoud kas outo, evel ma ra ar Baganed en o c'heñver! Etrezo ez-eus eur voger a gasoni! Lod Juzevien avad o-deus truez outo, pa n'eus dezo na Mesiaz, na Kêriadelez en Izrael, nag Emgleviou ar Bromesa, nag esperañs, na

Doue er Bed-mañ (Ef 2)! Diskaret gantañ moger ar gasoni, Jezuz e-neus o unanet o-daou en eur c'horv hepkén, en Iliz, rag dre ar feiz Ennañ, ar Baganed a reseo bremañ ive ar Spered Santel ha donezonou ar Zilvidigez koulz hag ar Juzevien...

PELERINAJOU. *Al Lezenn a gemenn d'ar Juzevien sevel da Jeruzalem teir gwech ar bloaz da nebeuta, da lida eno ar Goueliou braz (Pask, Pantekost, Gouel an Teltennou), da adori Doue a-unan gand ar Bobl, ha da ginnig provadou ha sakrifisou hervez an doareou (Lk 2,41...). Adal e zaouzeg vloaz e-neus Jezuz heuliet ar c'hustum. Ar Zamariz ne blij ket dezo gweled ar C'halileiz o tremen dre o bro warzu Jeruzalem. (Lk 9,51).*

PROZELIDED. *An ano-ze a vez roet d'ar Baganed gounezet da Gredenn ha da relijion ar Juzevien, beteg dezo beza amdrohet (Mz 23,15...).*

PUBLIKIZ. *Evelse e vez anvet ar Valtouterien, an dud karget da zastum an taillou a bep seurt evid ar Romaned! Brudet int da veza laeron kriz. Goude beza feurmet o c'harg, e skrapont muia ma c'hellont digand an dud! Evid dezo beza lakeet e-touez ar beherien braz, lod anezo, 'vel Maze ha Zache, o-deus degemeret kaer ar Zalver (Mz 9; Lk 19...).*

SADUKEIZ. *E rumm ar Zadukeiz e kaver ar Veleien-Vraz, tud o famillou ha servicherien an Templ. D'o meno, goude beza gouarnet gand Romaned, ne 'z a ket fall an traoù er Vro, gand ma pado! Ne blij ket dezo an nevezentiou, na war dachenn ar gredenn (ne zegemeront ket ar c'hredennou 'nevez': e vefe êlez, sperejou, adsao ar re varo!), na war dachenn ar c'hustumou... Ne blij ket dezo kelennadurez Jezuz, nag e oberou, pa zeu d'ober e vestr war o Zempl, o kas ar varhadourien er-mêz (Mz 22; Ob 23,8...).*

SAMARIZ. *Pa 'z eo bet Juzevien ar Samari kaset en harlu da Vro-Asour, ez-eus bet degaset en o flas Paganed euz broiou all: ablamour da-ze e vez lakeet ar Zamariz a-vremañ da hanter-baganed! Rag-se, ne fell ket d'ar Juzevien kaoud an dis-terra darempred ganto... Jezuz avad ne bleg ket d'eur seurt kustum (Yn 4).*

SKRIBED. *Peurvuia e vezont e rumm ar Farizeiz. Bez' e vezont bepred o lenn, o studia, o furchal pe o kelenn pe oc'h adskriva ar Skritur Zakr. Lakaad a reont sammou ponner ha landrammuz war gein an dud: int-i avad ne douchont ket outo gand o biz bian! A-wechou zoken ec'h intentont fall gourhemennou Doue beteg o zaoler d'an traoñ dre ar c'hustumou a zifennont (Mk 7,5...; Mk 7,11...). Bepred emaint war buez Jezuz, o klask e baka en eur gêr pe en eur respont bennag, evid kaoud tro d'e damall! Kavet o-deus o Mestr!*

SINAGOG, *da lavared eo: 'Lec'h ar Vodadeg'. E kêriou ar Palestin, hag ive e kêriou ar broiou pagan, pa vez enno Juzevien, e kaver peurvuia eur zinagog. Evid kennerza o feiz hag evid skigna o c'hredenn, e vez ar Juzevien aketuz d'en em voda enni, bep sabad ha beb gouel, dezo da zelaou pennadou euz Lezenn Voizez, hag euz Skridou ar Brofeded, ha da bedi o kana Salmou. Jezuz e-unan, ha war e lerc'h an Ebestel, a vez aketuz da vond d'ar zinagog: evelse e kavont tro da brezeg an Aviel. Prisiuz eo bet ar zinagogou evid an Aviel.*

Maze hag e Aviel

Maze a zo maltouter pa zeu Jezuz d'e c'helver da vond d'e heul, dezañ da veza diwezatoc'h lakeet da Abostol (Lk 5, 27).

Wardro ar bloavez 50, e-neus Maze skrivet eun Aviel er yez arameeg, yez Jezuz e-unan. An Aviel-se a zo bet kollet. Diwezatoc'h e-neus Maze -pe unan euz e ziskibien- kroget adarre gand ar memez labour, oc'h implij an Aviel arameeg, hag ive Aviel Mark, bet skrivet etretant, ha c'hoaz pennadou all.

Peogwir e skriv e Aviel evid degas ar Juzevien da gredi e Jezuz, e rank Maze diskouez frêz eun nebeud poenchou:

1°) Buez Jezuz, -adal e vugaleaj beteg e varo hag e adsao da veo-, a zo bet dirollet evel m'e-noa profedet Doue dre ar Brofeded a-wechall (Mz 1, 23 ; 2,6 ; 15, 18 ; 3, 3 ; 12, 18 ; 21, 5, 42 ; 27, 9-10 ; 27, 35).

2°) Jezuz eo ar Profed-dreist prometet gand Doue d'e Bobl: evel m'e-neus Moizez embannet al Lezenn war ar Menez Sinai ec'h embann Jezuz al Lezenn Nevez, Lezenn peurvad ar Garantez, war ar Menez (Mz 5, 1).

3°) Sklêrijennet gand Doue, e-neus Pèr, ar c'henta euz an Ebestel, disklêriet eo Jezuz ar Mesiaz, Mab an Doue-Beo! (Mz 16, 16).

4°) Doue e-unan, da zeiz Badeziant Jezuz ha war an Tabor, e-neus lavaret:

“Hemañ eo va Mab muia-karet! (Mz 3, 17 ; 17, 5)

Jezuz e-neus poaniet stard da zegas e Bobl da gredi ennañ!

“Jeruzalem! Na pet kwech eo bet fellet din boda da Vugale en doare ma vod eur vamm-yar he yér-vian dindan he diwaskell” ha n'eo ket bet fellet deoc'h! Setu ma vo lezet ho Ti ganeoc'h, goullo!” (Mz 21, 1 ; 23, 37)

5°) Distaolet gand e Bobl, bet eo Jezuz degemeret mad gand e Dad: adsavet eo a-douez ar re varo, savet d'an Neñv hag azezet en tu dehou da Zoue, hag ema bepred o labourad gand e Iliz evid savetei ar Bed! ... (Mz 28, 16)

**Aviel Jezuz Krist
hervez
sant Vaze.**



Sant Vaze, Pleiber-Krist. Sk J. F.

1

Lk 3,34...

¹ Leor Geneliez Jezuz Krist, Mab Abraham:

² Da Abraham eo bet ganet eur mab, Izaag, da Izaag Jakob, ha da Jakob Juda hag e vreudeur; ³ da Juda, euz Tamar, eo bet ganet Farez ha Zara, da Farez Ezron, ha da Ezron Aram; ⁴ da Aram eo bet ganet Aminadab, da Aminadab Naason, ha da Naason Salmon; ⁵ da Zalmon euz Rahab, eo bet ganet Booz, da Vooz euz Rut eo bet ganet Obed, ha da Obed Jese; ⁶ da Jese avad eo bet ganet ar roue David, ha da Zavid eo bet ganet Salomon, euz an hini a zo bet gwreg da Uri;

⁷ Da Zalomon eo bet ganet Roboam, da Roboam Abia, ha da Abia Azaf; ⁸ da Azaf eo bet ganet Jozafad, da Jozafad Joram, ha da Joram Oziaz; ⁹ da Oziaz eo bet ganet Joatam, da Joatam Akaz, ha da Akaz Ezekiaz; ¹⁰ da Ezekiaz eo bet ganet Manase, da Vanase Amon, ha da Amon Joziaz; ¹¹ da Joziaz eo bet ganet Jekoniaz hag e Vreudeur epad an harlu e Babilon; ¹² goude an harlu e Babilon, da Jekoniaz eo bet ganet Salatiel, da Zalatiel Zorobabel; ¹³ da Zorobabel avad eo bet ganet Abioud, da Abioud Eliakim, ha da Eliakim Azor; ¹⁴ da Azor eo bet ganet Sadog, da Zadog Akim, ha da Akim Elioud; ¹⁵ da Elioud eo bet ganet Eleazar, da Eleazar Matan, ha da Vatan eo bet ganet Jakob; ¹⁶ da Jakob avad eo bet ganet Jozef, pried Mari: euz Houmañ eo ganet Jezuz, an hini a vez anvet Krist (Mesiaz)...

¹⁷ Evel-se, an oll rummou euz Abraham beteg David a zo anezo pevarzeg : euz David beteg an harlu e Babilon: pevarzeg rumm; euz an harlu e Babilon beteg ar C'hrist : pevarzeg rumm...

SETU AR WERHEZ O VOND DA VEZA DOUGEREZ...

Lk 1,26...

¹⁸ Ganedigez Jezuz Krist a c'hoarvez evel-henn:

Dimezet eo Mari, e vamm, da Jozef, med araog dezo beva er memez ti, e teu da veza dougerez dre c'halloud ar Spered Santel. ¹⁹ Jozef, he fried, pa z'eo eun den just ha ma ne fell ket dezañ he diskulia, a zo o klask d'he c'has diwar e dro dre guz...²⁰ P'ema o trei an dra-ze en e benn, setu eun êl d'an Aotrou o para dirazañ dre huñvre hag o lavared dezañ: **“Jozef-mab-David, arabad dit kaoud aon da gemer ganit Mari da bried, rag euz ar Spered Santel eo ar vuhez ganet enni! ²¹ Genel a raio eur Mab, ha dezañ e roi an Ano a Jezuz, rag Eñ eo a zalvo ar Bobl euz he fehejou!...”** ²² Kement-se a c'hoarvez evid ma vo sevenet ar pez e-neus lavaret an Aotrou dre ar Profed:

Iz 7,14

²³ *“Setu ar Werhez o vond da veza dougerez ha da c'henel eur Mab;*

“Dezañ e vo roet an Ano a ‘Emmanuel’ da lavared eo ‘Ganeom ema Doue’!”...

²⁴ Savet euz e gousk, e ra Jozef evel m'e-neus êl an Aotrou kemennet

Lk 2,7

dezañ: gandañ e kemer e wreg en e di, ²⁵ hag he mired gwerhez a ra beteg an deiz dezi da c'henel eur Mab, hag eñ a ro dezañ an Ano a 'Jezuz'.

2

PE-LEC'H EMA AR ROUE GANET NEVEZ 'ZO ?

Lk 2, 1-7

¹ Goude m'eo ganet Jezuz e Betleem er Jude, en amzer ar roue Herodez, setu Majed euz ar Zav-Heol o tegouezoud e Jeruzalem, ² hag o lavared: **“Pe-lec'h ema ar Roue, ganet nevez 'zo d'ar Juzevien ? Rag gwelet on-eus e steredenn er Zav-Heol, hag e teuom da stoui dirazañ!”** ³ O klevet ano euz kement-se, ez eo strafuillet ar roue Herodez, ha gantañ Jeruzalem a-bez!. ⁴ Boda a ra an oll Veleien-Vraz ha Skribed ar Bobl, evid goulenn outo: **“Ar Mesiaz, e pe-lec'h eo dezañ dond er bed ?”**

Miche 5,2

⁵ Int-i avad a lavar dezañ: **“E Betleem, er Jude, rag evel-henn eo bet skrivet dre ar profed:** ⁶ *“Ha te, Betleem, Bro-Juda, n'out e-giz ebed an disterra euz kêriou-meur ar Jude, rag ahanout e savo ar Rener, an hini a vo Pastor war va Fobl Izrael!”* ⁷ Neuze, dre guz, e c'halv Herodez ar Vajed evit goulenn diganto resiz peur he-deus paret ar steredenn, ⁸ hag o c'has a ra da Vetleem en eur lavared: **“Kit hag enklaskit piz diwarbenn ar Bugelig! Pa vezoc'h deuet d'e gavoud, degasit din kelou, ma 'z in-me ive da stoui dirazañ!”**

⁹ Klevet ganto ar roue, e kerzont en hent. Hag ar steredenn gwelet ganto er Zav-Heol, setu-hi o vond en o raog, beteg dezi chom a zav azioc'h al lec'h m'ema ar Bugelig! ¹⁰ O weled ar steredenn, e teu eul levenez vraz-kenañ d'o laouennaad! ¹¹ Eet en ti, e welont ar Bugelig gand Mari e Vamm, hag e kouezont d'an douar da stoui dirazañ. Digoret ganto o fakadou, e kinnigont dezañ donezonou, aour, ezañs ha mir! ¹² Aliet dre huñvre da jom heb mond endro daved Herodez, e tehont d'o bro dre eun hent-all...

EUZ AN EJIPT AM-EUS GALVET VA MAB!

Dt 23,7

¹³ Pa 'z int tehet kuit, setu eun êl d'an Aotrou o para dirag Jozef dre huñvre en eur lavared dezañ: **“Sav! Kemer ganit ar Bugelig hag e Vamm, ha tec'h buan d'an Ejipt! Ha chom eno beteg ma lavarint dit, rag ema Herodez o vond da glask ar Bugelig evit e laza!”** ¹⁴ Sevel a ra, hag e kreiz an noz e kemer gantañ ar Bugelig hag e Vamm, evit tehed d'an Ejipt: eno e chom beteg maro Herodez! ¹⁵ Kement-se a c'hoarvez evid ma vo sevenet ar pezh a lavar an Aotrou dre ar profed: **“Euz an Ejipt em-eus galvet va Mab!”**

Oz 11,1

¹⁶ Neuze, o weled ez eo bet touellet gant ar Vajed, ez eo gwall-fuloret Herodez! Kas a ra tud da laza an oll vugale a zo e Betleem ha tro-war-dro, oajet a zaou-vloaz pe nebeutoc'h, diouz ar poent e-neus klevet resiz gand ar Vajed. ¹⁷ Sevenet eo neuze ar pezh a zo lavaret dre ar profed Jeremi:

Jer 31,15

¹⁸ “*Eur vouez a vez klevet e Rama: goueladeg ha klemmadeg e-leiz!*”

*“Rachel a zo o ouela d’he bugale, ha ne fell ket dezi beza frealzet
“Rag n’eus ket ken anezo!”*”

¹⁹ Goude maro Herodez, setu eun êl d’an Aotrou o para dirag Jozef dre huñvre en Ejipt, ²⁰ o lavared dezañ: “**Sav! Kemer ganit ar Bugelig hag e Vamm, ha kerz da Vro Izrael, rag marvet eo ar re a glaske buez ar Bugelig!**” ²¹ Kerzent ha savet, e kemer ar Bugelig hag e Vamm, hag e kerz warzu Bro Izrael! ²² Klevet gantañ ema Arkelaüs o rén war ar Jude, e-lec’h e dad Herodez, e-neus aon da vond di. Aliet dre huñvre, e tec’h warzu douarou ar Galile; ²³ dond a ra da jom en eur gêr anvet Nazared, evid ma vo sevenet ar pezh a zo lavaret dre ar profed: “*Nazaread e vo galvet*”.

Erm 4,19

Lk 1,26

3

Mk 1,1...
Lk 3,3...

ME HO PADEZ EN DOUR EVID TREI HO KALON!

¹ En deveziou-ze ema Yann-Vadezour oc’h embann e gouelec’h ar Jude, ² o lavared: “**Troit ho kalon ouz Doue! rag deuet eo tost Rouantelez an Neñv!**”...

³ Rag hennez eo an hini a zo komzet diwar e-benn dre ar profed Izai, pa lavar:

Iz 40,3

“Mouez an hini a youc’h er gouelec’h:

“Kempennit Hent an Aotrou! Lakit eeun e wenojennou!””

⁴ Yann e-unan a zo e wiskamant greet gand reun kañval, hag eur gouriz-lêr endro d’e zargreiz! Killeien-raden ha mél-gouez a ra e vevañs. ⁵ Davetañ e teu neuze Kêr Jeruzalem hag ar Jude a-bez, hag ar vro all a zo endro d’ar Jordan. ⁶ Gantañ e vezont badezet er stêr Jordan en eur anzav o fehejou...

Yn 5,35

⁷ O weled kalz euz ar Farizeiz hag euz ar Zadukeiz o tond d’e vadiziant, e lavar dezo: “**Gorad Naered! Piou e-neus diskouezet deoc’h tehed diouz ar Gounnar-a-zeu ?** ⁸ Dougit ’ta frouez din ouz eur galon troet ouz Doue! ⁹ Ha n’it ket da lavared ennoc’h hoc’h-unan: ‘Abraham a zo deom-ni tad!’ Rag me ’lavar deoc’h: euz ar mein-mañ e c’hell Doue sevel bugale da Abraham! ¹⁰ A-vremañ ez a ar vouhal da wrizienn ar gwez: kement gwezenn eta na ro ket frouez

Yn 8,33
Rom 9,7

Yn 1,26
Ob 1,5
Mz 13,42

kaer a vez trohet ha taolet en tan! ¹¹ Me ho padez en dour, deoc'h trei ho kalon ouz Doue! Med an Hini a zeu war va lerc'h a zo kreñvoc'h egedon! ha n'on ket mad da zougen e zandalennoù! Henez ho padezo er Spered Santel hag en tan! ¹² Ar bal-wenta gantañ en e zorn, ema o vond da beur-c'hланаad e leuriad! E winiz a zastumo er grignol! Med pulluha a raio ar pell en eun tan na vougo ket!"

HEMAÑ EO VA MAB MUIA-KARET !

Mk 1, 9...
Lk 3, 21...
Yn 1, 31...

¹³ Neuze e tegouez Jezuz euz ar Galile war ribl ar Jordan daved Yann, da veza badezet gantañ. ¹⁴ Yann avad a eneb outañ o lavared: "**Me am-eus ezomm da veza badezet ganeoc'h, ha c'hwi eo a zeu davedon ?**" ¹⁵ Jezuz a respont dezañ o lavared: "**Bez asant bremañ, rag evelse eo mad deom seveni peb justiz!**" Neuze ec'h asant gantañ! ¹⁶ Kerkent ha badezet, e sav Jezuz er mêz euz an dour ha setu an Neñv o tigeri dezañ: gweled a ra Spered Doue o tiskenn evel eur goulm hag o tond warnañ. ¹⁷ Ha setu eur Vouez eus an Neñv o lavared:

Iz 42,1

"Hemañ eo va Mab muia-karet! Ennañ e kavan va dudi!"

4

KEE KUIT, SATAN!

Mk 1, 12...;
Lk 4, 1...
Hb 4, 15...

¹ Neuze ez eo Jezuz heñchet d'ar gouelec'h, gand ar Spered Santel, dezañ beza tentet gand an Diaoul.² Diwar yuni epad daou-ugent devez ha daou-ugent nozvez, e teu pelloc'h naon dezañ! ³ Hag an Tenter, deuet davetañ, a lavar dezañ: "**Ma z'oc'h-c'hwi Mab da Zoue, lavarit d'ar mein-mañ trei e baraennoù!**" ⁴ Eñ avad a respont o lavared: "**Skrivet eo: n'eo ket diwar vara traken e vevo an den! Med diwar bep Komz a zeu euz genou Doue!**"

Dt 8,3

⁵ Hag an Diaoul e gas neuze gantañ d'ar Gêr Zantel hag e laka war lein an Templ, ⁶ en eur lavared dezañ: "**Ma z'oc'h-c'hwi Mab da Zoue, en em daolit d'an traoñ, rag skrivet eo: D'e êlez e kemenno evidoc'h, hag ho tougen a raint war o daouarn gand aon na stokfec'h ho troad ouz ar mên!**" ⁷ Dezañ e lavar Jezuz: "**Skrivet eo ive: 'Ne denti ket an Aotrou, da Zoue!**"

Salm 91,11
Dt 6,16

⁸ Hag an Diaoul d'e gas c'hoaz gantañ war eur menez uhel-kenañ; diskouez a ra dezañ oll rouanteleziou ar Bed hag o gloar! ⁹ Hag e lavar dezañ: "**Deoc'h-c'hwi e roin an oll draou-ze, ma kouezit d'an douar d'am adori!**" ¹⁰ Ha Jezuz a lavar dezañ: "**Kee kuit! Satan, rag skrivet eo: 'An Aotrou, da Zoue, a adori, ha ne zervichi nemetañ!'**"

Dt 6,13

¹¹ An Diaoul neuze d'e lezel! Ha setu êlez o tond d'e zervicha...

TROIT HO KALON OUZ DOUE

Mk 1, 14..
Lk 4, 14..
Yn 4, 43..

¹² Pa glev eo bet Yann taolet er prizon, e tec'h Jezuz d'ar Galile.

¹³ Dilezet gantañ Nazared, ez a da jom da Gafarnaom-Arvor, war harzou Zabulon ha Neftali, ¹⁴ evid ma vo sevenet ar peza a zo lavaret dre ar profed Izai:

Iz 8,23...

¹⁵ “*Douar Zabulon ha douar Neftali,*

“Hent ar Mor en tu-all d’ar Jordan, Galile ar Baganed!

¹⁶ *Ar Bobl azezet en deñvalijenn a wél eur sklêrijenn vraz!*

“D’ar re azezet e bro hag e skeud ar Maro, dezo e tarz sklêrijenn!”

¹⁷ Adaleg neuze e krog Jezuz da embann ha da lavared:

“Troit ho kalon ouz Doue, rag deuet eo tost Rouantelez an Neñv!”

DEUIT D’AM HEUL!

Mk 1, 16..
Lk 5, 1...

¹⁸ En eur vond a-hed Mor ar Galile, e wél daou vreur, Simon, an hini anvet Pèr, hag Andre e vreur, o stlepel eur roued er mor, rag bez' ez int pesketerien! ¹⁹ Hag e lavar dezo: **“Deuit d’am heul, hag ahanoc’h e rin-me pesketerien-tud!”** ²⁰ Ha raktal, dilezet ganto ar rouejou, ez eont d’e heul...²¹ Eet ahano eun tamm larkoc’h, e wel c’hoaz daou vreur all, Jakez-mab-Zebede, ha Yann, e vreur, en o bag gand o zad o kempenn o rouejou. O gelver a ra ive. ²² Raktal e tilezont o bag hag o zad evid mond d’e heul...

Yn 1,15..
Yn 21,3...

Mk 1,39
Lk 4,15
Ob 10,38

²³ Mond a ra Jezuz dre ar Galile a-bez, en eur gelenn en o zinagogou, en eur embann Kelou-Mad ar Rouantelez, hag en eur barea peb kleñved ha pep sempladurez e-touez ar Bobl. ²⁴ Ar vrud anezañ a red dre ar Siri a-bez. Dirazañ e tegasont an oll re o-deus poan, tud gwasket gand bep seurt drougou ha poaniou, tud sujet d’eun droug-spered, re loariet, re zeizet..., ha dezo oll e ro ar pare...²⁵ D’e heul ez a leun a dud euz ar Galile, euz an Dekapol, euz Jeruzalem hag euz ar Jude, hag euz an tu all d’ar Jordan...

5

EÜRUS! EÜRUS! LAOUENNAIT HA TRIDIT!...

Lk 6, 30...

¹ O weled an dud, e sav war ar Menez; kerkent hag azezet, e teu davetañ e ziskibien. ² En eur zevel e vouez, e stag d’o c’helenn hag e lavar:

Lk 1,35...

Iz 57,15

³ **“Eüruz an dud paour a galon, rag dezo eo Rouantelez an Neñv!”**

- Salm 37,11 4 Eüruz an dud douz, rag int-i o-do an Douar da lod-hêrez!
- Iz 61,3 5 Eüruz an dud glaharet, rag int-i a vo frealzet!
- Iz 51,1... 6 Eüruz ar re o-deus naon ha sehed a Justiz, rag int-i a vo maget!
- Salm 23,4 7 Eüruz an dud truezuz, rag int-i a gavo truez!
- 8 Eüruz an dud glan a galon, rag int-i a welo Doue!
- 9 Eüruz ar re a laka peoc'h, rag int-i a vo galvet 'Bugale-Doue'.
- 1 Pèr 3,14 10 Eüruz ar re heskinet evid o Justiz, rag dezo eo Rouantelez an Neñv!
- 1 Pèr 4,14 11 Eüruz oc'h-c'hwi ma teu an dud d'ho tismega, d'ho heskina ha da lavared e gaou bep seurt droug a-eneb deoc'h ablamour din-me. 12 Laouennait ha tridit a levenez, rag founnuz e vo ho kopr en Neñv!...

Evel-se o-deus int-i heskinet ar Brofeded deuet araozoc'h!

- Mk 9,59
Lk 14,34 13 C'hwi eo a zo holenn an Douar! Med ma teu an holenn da zizaoura, gand petra e vo saouret ? N'eo mui mad da netra nemed da veza taolet er-mêz ha da veza breset gand an dud! 14 C'hwi eo a zo Sklêrijenn ar Bed! Eur gêr savet war gern ar menez ne c'hell ket beza kuzet! 15 Ne daner ket eul lamp evid e lakaad dindan eun arc'h, med war eur c'hantolor, hag e sked d'an oll dud, en ti! 16 Evel-se, ra skedo ho sklêrijenn dirag an dud, dezo da weled hoc'h oberou mad ha da zougen gloar d'ho Tad a zo en Neñv!"
- Yn 8,12
- Ef 5,8...
Yn 3,21

DEUET ON-ME DA BEUR-WELLAAD AL LEZENN!

- Rom 3,31 17 "N'it ket da zoñjal ez on-me deuet da ziskar al Lezenn pe ar Brofeded! N'on ket deuet d'o diskar, med d'o beur-wellaad! 18 Rag evid gwir e lavaran deoc'h: Ken na dremeno an neñv hag an douar, na lizerennig na pik ebed ne gouezo diouz al Lezenn ken na vezo sevenet pep tra! 19 Ma teu eta unan bennag da ziskar unan euz an disterra gourhemennou ha da gelenn an dud evel-se, hennez a vo galvet an disterra e Rouantelez an Neñv! Ma teu avad unan d'o mired ha d'o c'helenn, hennez a vo galvet braz e Rouantelez an Neñv."
- Lk 16,17
- Jk 2,10

BEZ E OE LAVARET ... ME AVAD A LAVAR...

- Rom 10,3 20 "Rag me a lavar deoc'h: ma ne vez ket ho Justiz founnuc'h eged hini ar Skribed hag ar Farizeiz, nann! ne z'eoc'h ket e Rouantelez an Neñv!
- Erm 20,13 21 Kleved a rit eo bet lavaret d'on Tud-Koz: *ne lazi ket! an neb*

Dt 17,8... *a laz a vo sujet d'al lez-varn!* ²² Me avad a lavar deoc'h: kement hini a vo kounnaret a-eneb e vreur, a vo sujet d'al lez-varn! An neb a lavaro d'e vreur 'Penn-skañv', a vo sujet d'ar zanedrin! An neb a lavaro dezañ 'Penn-foll', a vo sujet da jeen an tan!"

Mk 11,25 ²³ "Ma vezez eta o kinnig da brov war an aoter, ha ma teu soñj dit eno e-neus da vreur tra pe dra a-eneb dit, ²⁴ lez da brov dirag an aoter ha kee da genta d'ober peoc'h gand da vreur, ha deus neuze da ginnig da brov!²⁵ Tremen dizale diouz da eneber epad m'emaout gantañ en hent, gand aon na zeufe da eneber d'az rei etre daouarn ar barner, ar barner etre daouarn ar gward, ha na vefez stlapet er prizon!..²⁶ E gwirionez e lavaran dit: Ne zeui ket er-mêz ahano ken n'az-po rentet beteg ar gwenneg diweza..."

Erm 20,14 ²⁷ Kleved a rit eo bet lavaret: "*Ne avoultri ket!*" ²⁸ Me avad a lavar deoc'h: kement-hini a zell ouz eur vaouez evid he c'hoantaad, e-neus a-neuze avoultret ganti en e galon! ²⁹ Ma teu da lagad dehou da veza eur skoill evidout, dit d'e denna ha d'e stlepel pell diouzit! Rag gwelloc'h eo dit e vefe kollet unan euz da izili ha na vefe ket da gory a-bez taolet er jeen!". ³⁰ Ma teu da zorn dehou da veza eur skoill evidout, dit d'e droha ha d'e stlepel pell diouzit! Rag gwelloc'h eo dit e vefe kollet unan euz da izili ha na 'z afe ket da gory a-bez er jeen!"

Mk 10, 2
Mz19, 3...
Lk 16,18...
I Ko 7, 10...
Dt 24,1

³¹ "Bez eo bet lavaret: "*An neb a zeufe da gas kuit e wreg, dezañ rei dezi eur skrid a zisrann!*" ³² Me avad a lavar deoc'h: Kement-hini a gas kuit e wreg (nemed e stad a zerherez e vefe) a ra dezi avoultri!. Hag an neb a zimez d'eur vaouez bet kaset kuit, hennez a ra avoultriez! "

Erm 20,7 ³³ "C'hoaz e klevit eo bet lavaret d'on Tud-Koz: "*Ne doui ket er gaou! Med dit renta d'an Aotrou da leou-touet!*" ³⁴ Me avad a lavar deoc'h chom heb toui tamm ebed: na dre an Neñv pa z'eo trôn Doue, ³⁵ na dre an douar pa z'eo skabell e dreid, na dre Jeruzalem pa z'eo Kêr an Doue-Meur! ³⁶ Na dou ket ive dre da benn-te, rag ne c'hellez ket degas eur vlevenn hepkén da veza gwenn pe zu! ³⁷ Ho komz 'ya', ra vezo 'Ya', ho komz 'nann', ra vezo 'Nann'. Ar pezh a zo ouspenn-ze a zeu euz an Hini droug...

Erm 21,24 ³⁸ Kleved a rit eo bet lavaret: "*Lagad evid lagad! Dant evid dant!*" ³⁹ Me avad a lavar deoc'h miroud da enebi ouz unan droug: an neb a zistag dit eur garvanad, war da jod dehou, tro eben ive dezañ! ⁴⁰ An neb a fell dezañ da gas dirag ar barner ha paka da zae, lez da vantell ive gantañ! ⁴¹ An neb a ra dit ober mil paz gantañ, kerz gantañ a-hed daou vil! ⁴² Ro d'an neb a c'houlenn diganit ; an neb a c'houlenn diganit presti dezañ, arabad dit trei kein dezañ. "

Lev 19,18 ⁴³ " Kleved a rit eo bet lavaret: "*Kared a ri da nesa ha kasaad da enebour*" ⁴⁴ Me avad a lavar deoc'h: Karit hoc'h enebourien ha pedit evid hoc'h heskinerien, ⁴⁵ deoc'h beza Bugale d'ho Tad a zo en

Lk 6,27...
Rom 12,20

Lk 23,34

Neñv, rag Eñ a laka e heol da zevel war an dud, droug ha mad, hag ar glao da goueza war an dud, just ha direiz. ⁴⁶ Rag ma karit an dud ho kar, peseurt gopr a vo deoc'h ? Daoust hag ar Bublikiz ne reont ket kemend-all ? ⁴⁷ Ha ma saludit ho Preudeur hepken, petra a zreist a rit ? Daoust hag ar Baganed ne reont ket kemend-all ?

1 Pèr 1,16

⁴⁸ C'hwi, bezit eta peurvad, evel m'eo peurvad ho Tad euz an Neñv!”.

6

PA RI ALUZENN...PA YUNI...PA BEDI...

Lk 16,14
Yn 5,44

¹ “Diwallit avad da zeveni hoc'h oberou mad a-wel d'an dud evid beza gwelet ganto! A-hend-all n'ho-po gopr ebed digand ho Tad a zo en Neñv!

Mz 23,13

² Pa rez aluzenn, eta, na zon ket an drompill dirazout evel ma ra an douellourien er sinagogou ha war ar strêjou, dezo da gaoud gloar digand an dud!...

Evid gwir e lavaran deoc'h: bez o-deus o gopr! ³ Te avad, pa rez aluzenn, arabad d'az torn kleiz gouzoud petra ra da zorn dehou! ⁴ Evel-se, da aluzenn a jom e kuz, ha da Dad, Eñ hag a wel er c'huz, Eñ a rento dit!

⁵ Ha pa vezit o pedi, na vezit ket evel an douellourien! Rag kared a reont pedi en o zav er sinagogou pe e kern al leuriou-kêr, d'en em ziskouez d'an dud! Evid gwir e lavaran deoc'h: bez o deus o gopr! ⁶ Te avad, pa bedez, kee en da gao, prenn an nor, evid pedi da Dad er c'huz! Da Dad, Eñ hag a wél er c'huz, Eñ a rento dit!

⁷ O pedi, na randonit ket evel ar Baganed, pa gav dezo e vezint selaouet en abeg d'o randonerez! ⁸ Na rit ket eta eveldo, rag gouzoud a ra ho Tad petra ho-peus ezomm araog deoc'h goulenn digantañ! ⁹ Evel-henn eta e pedoc'h:

Lk 11,2...
Yn 17,6

“On Tad hag a zo en Neñv,

“Hoc'h Ano bezet santelleet!

Yn 17,6

“Ho Rouantelez deuet deom!

Mz 26,39

¹⁰ “Ho polontez bezet greet war an douar evel en Neñv!

Yn 6,32

¹¹ “Roit deom hirio or Bara pemdezieg!

¹² “Pardonit deom or mankou

Evel m'on-eus, ni ive, pardonet d'ar re o-deus manket ouzom!

Mz 18,21...
Mz 26,41

¹³ “N'or c'hasit ket e tentadur, med on diwallit diouz an Droug!

¹⁴ Rag ma pardonit d'an dud ho mankou, deoc'h ive e pardono ho Tad euz an Neñv! ¹⁵ Med ma ne bardonit ket d'an dud, ho Tad

Mk 11,25 **kennebeud ne bardono ket deoc’h ho mankou!”**

16 “Pa yunit avad, na vezit ket pennou-teñval evel an douellou-rien, rag distruja a reont o fenn, ma vo anad d’an dud e reont yun! Evid gwir e lavaran deoc’h: bez o-deus o gopr! 17 Te avad, pa yunez, taol c’hwez-vad war da benn, ha gwelc’h da zremm, 18 Evid na vo ket anad d’an dud e yunez, med hepkén d’az Tad, Eñ hag a zo er c’huz! Ha da Dad hag a zo er c’huz, a rento dit!”

KLASKIT DA GENTA ROUANTELEZ DOUE!

Lk 12,16...
Yn 12,33
Mz 19,21

19 “Na zastumit ket deoc’h hoc’h-unan teñzoriou war an douar, el lec’h ma z’eus preñv ha mergl o lonka, el lec’h ma z’eus laeron o toulla hag o laerez! 20 Dastumit deoc’h avad teñzoriou en Neñv, el lec’h ma n’eus na preñv na mergl o lonka, el lec’h ma n’eus ket a laeron nag o toulla nag o laerez! 21 Rag el lec’h m’ema da deñzor, eno ive e vo da galon!”

Lk 11,34

22 “Lamp ar c’horv eo al lagad! Ma z’eo eta glan da lagad, e vo sklêr da gorr a-bez! 23 Med ma z’eo fall da lagad, e vo teñval da gorr a-bez! Ma z’eo eta teñvalijenn ar sklêrijenn a zo ennout, pebez teñvalijenn!”

Lk 16,13

24 “Ne c’hell den servicha daou aotrou: pe e kasaio ar c’henta hag e karo egile! Pe ouz unan e stago hag e tisprizo egile! Ne c’hellit ket servicha a-unan Doue hag an Arhant!”

Lk 12,22...
Fil 4,6...
Heb 13,5...

25 “Rag-se e lavaran deoc’h: na vezit ket nehet evid ho puez, gand ar pez ho-po da zebri pe da eva, nag evid ho korr, gand ar pez ho-po da wiska! Daoust hag ar vuez n’eo ket muioc’h eged ar bevañs, hag ar c’horv muioc’h eged ar wiskamant ? 26 Sellit ouz laboused an neñv: ne hadont ket! Ne vedont ket! Ne zastumont ket e grignolou! Hag ho Tad euz an Neñv a zeu d’o maga! Daoust ha c’hwi ne dalvezit ket muioc’h egeto ? 27 Piou en ho touez, dre nehi, a c’hell kreski e vent euz eun ilinad ? 28 Ha gand ho kwiskamant, perag nehi ? Gwelit lili ar mêziou, penaoz e kreskont: ne labouront ket, ne vedont ket! 29 Me avad a lavar deoc’h: Salomon zokén e-kreiz e c’hloar ne veze gwisket par da unan anezo! 30 Ma vez Doue o wiska evel-se glazvez ar park, hirio en he zav ha warhoaz taolet en tan, daoust ha ne raio ket kalz muioc’h evidoc’h-c’hwi, krederien laosk!”

31 “N’it ket eta da nehi en eur lavared: “Petra a vo deom da zebri! Petra a vo deom da eva ? Petra a vo deom da wiska ?” 32 Rag kement-se e vez ar Baganed o klask! Rag gouzoud a ra ho Tad euz an Neñv hopeus-c’hwi ezomm a gement-se!...33 Klaskit ’ta da genta Rouantelez Doue hag e justiz!... Ha kement-se a vo roet deoc’h ouspenn! 34 Na vezit ket eta nehet evid an deiz war-lerc’h!. An deiz war-lerc’h a vo nehet gantañ e-unan! Peb devez e-neus awalc’h gand e boan...”

7

TENN DA GENTA AN TREUST EUZ DA LAGAD!

¹ “Na varnit ket, ha ne vezoc’h ket barnet! ² Hervez an doare m’ho-po barnet e vezoc’h barnet c’hwil ive! Ha gand ar muzul a vuzulit gantañ e vo muzuliet deoc’h-c’hwil! ³ Perag e sellez ouz ar blouzenn a zo e lagad da vreur, ha ne welez ket an treust a zo en da lagad-te? ⁴ Penaoz e lavari d’az preur: ‘Lez, ma tennan ar blouzenn euz da lagad!’, ha setu an treust en da lagad-te! ⁵ Touellour ma ’z out! Tenn da genta an treust euz da lagad, ha neuze e weli mad evid tenna ar blouzenn euz lagad da vreur!”

⁶ “Na roit ket d’ar chas an Dra zakr, ha na daolit ket ho perlez dirag ar moc’h!...Gand aon na zeufent d’o bresa gand o zreid ha da zistrei evid ho trailla!”

GOULENNIT! HA ROET E VO DEOC’H!..

⁷ “Goulennit! Ha roet e vo deoc’h! Klaskit! Hag e kavoc’h! Skoit! Ha digoret e vo deoc’h! ⁸ Rag kement-hini a c’houlenn, a reseo! An neb a glask a gav! Ha d’an hini a sko e vez digoret! ⁹ Pehini an den en ho touez, ma c’houlenn e vab bara digantañ, a roio dezañ eur mên? ¹⁰ Pe ma c’houlenn ive eur pesk, daoust ha dezañ e roio eun naer? ¹¹ Ma ouezit-c’hwil eta, ha c’hwil droug!, rei donezo-nou mad d’ho pugale, pegement muioc’h e roio ho Tad euz an Neñv traou mad d’ar re a c’houlenn digantañ!”

¹² “Kement ho-peus eta c’hoant e rafe deoc’h an dud, c’hwil ive grit kemend-all dezo! Rag setu aze al Lezenn hag ar Brofeded!”

¹³ “Kit e-barz dre an nor striz. Rag frank eo an nor ha ledan an hent a gas da goll, ha niveruz an dud a ia drezañ! ¹⁴ Nag eñk eo an nor ha striz an hent a gas d’ar Vuez! Ha rouez an dud a zeu d’e gavoud!”

DIOUZ O FROUEZ EO DEOC’H O ANAVEZOU!

¹⁵ “Diwallit ouz ar fals-profeded a zeu davedoc’h gand gwiskamant deñved! En diabarz avad ez eus anezo bleizi skraper! ¹⁶ Diouz o frouez eo deoc’h o anavezoud! Daoust ha kutuillet e vez rezin diwar spern, pe fiez diwar askol? ¹⁷ Evel-se, peb gwezenn vad a ra frouez kaer, hag ar wezenn vreïn a ra frouez fall! ¹⁸ Eur wezenn vad ne c’hell ket dougen frouez fall, nag eur wezenn vreïn dougen frouez kaer! ¹⁹ Kement gwezenn na ra ket frouez kaer a vez trohet kuit ha taolet en tan...”

20 Diouz o frouez eta eo deoc'h o anavezoud...

DIAZEZET EO WAR AR ROC'H!

Lk 6,46...

21 “N’eo ket kement-hini a lavar din ‘Aotrou! Aotrou!’ a yelo e Rouantelez an Neñv, med an hini a ra bolontez va Zad a zo en Neñv! 22 Kalz tud a lavaro din en Deiz-se: ‘Aotrou! Aotrou! Daoust ha n’eo ket en hoc’h Ano on-eus-ni profedet ? En hoc’h Ano on-eus-ni kaset er-mêz droug-sperejou ? En hoc’h Ano-c’hwil ive on-eus greet kalz burzudou ?’ 23 Ha neuze e tisklêrin-me dezo: ‘N’am-eus biskoaz hoc’h anavezet! Tehit pell diouzin, c’hwil, tud an dizurz!...”

Lk 13,26...
Mz 26,11...

Lk 6,47

24 “Kement hini eta a zelaou hag a vir ar C’homzou-ze din, a vezo heñvellet ouz eur gwaz fur, savet gantañ e di war ar roc’h! 25 Dond a ra ar glao da goueza, ar stêriou da redeg, an aveliyou da c’hweza ha da ziroll war an ti-ze... Hemañ ne gouez ket, rag diazezet eo bet war ar roc’h!

26 Ha kement hini a zelaou ar C’homzou-mañ din-me ha n’o mir ket, a vezo heñvellet ouz eur gwaz foll, savet gantañ e di war an trêz! 27 Dond a ra ar glao da goueza, ar stêriou da redeg, an aveliyou da c’hweza ha da ziroll war an ti-ze. Koueza a ra, ha braz eo an dizac’h anezañ!”

Yn 4,32
Lk 7,2
Mk 1,22

28 P’e n’eus Jezuz peur-lavaret ar C’homzou-ze, setu ma chom an dud sebezet gand e gelennadurez! 29 Rag o c’helenn a ra evel eun den dezañ galloud, ha n’eo ket evel o Skribed...

8

OR C’HLEÑVEJOU E-NEUS SAMMET!

Mk 1, 40...
Lk 5, 12...

1 Pa ziskenn diwar ar Menez, ez a leun a dud d’e heul! 2 Ha setu eun den lôr o tond da stoui dirazañ en eur lavared: “Aotrou! Ma fell deoc’h, e c’hellit va glanaad!” 3 Oc’h astenn e zorn, e touch Jezuz outañ en eur lavared: “Me a fell din: Bez glaneet!” Ha glaneet eo raktal e lorgnez! 4 Ha Jezuz a lavar dezañ: “Diwall da lavared da zen! Med kee d’en em ziskouez d’ar beleg, ha kinnig ar prov kemennet gand Moizez, da veza eun testeni dezo!”

Mk 1,34

Lk 7,1...

5 Pa zegouez Jezuz e Kafarnaom, e teu davetañ eur c’hantener d’e aspedi, 6 o lavared: “Aotrou! Va faotr a zo gourvezet em zi, seizet, ha gwasket gand poaniou kriz!” 7 Ha dezañ e lavar: “Mond a ran d’e barea!” 8 Hag ar c’hantener a respont o lavared: “Aotrou! N’on-me ket dîn e teufec’h dindan va zoenn! Lavarit hepkén, dre eur gér! ha pareet e vo va faotr! 9 Rag me ive a zo eun den dindan galloud, gand soudarded dindanon... Da hemañ e lavaran ‘Kee!’ hag ez a! Da unan all ‘Deus!’ hag e teu! ha d’am mevel ‘Gra evel-henn!’ hag e ra!” 10

Lk 13,23 Ouz e gleved, eo Jezuz sebezet! Hag e lavar d'an dud a zo d'e heul: **“E nikun n'am-eus kavet ken braz feiz en Izrael! ¹¹ Lavared a ran deoc'h: Euz ar Zav-Heol hag euz ar C'huz-Heol e teuo kalz tud ouz taol gand Abraham, Izaag ha Jakob e Rouantelez an Neñv! ¹² Bugale ar Rouantelez avad a vezo taolet kuit en Deñvalijenn diavêz! Eno e vo goueladeg ha skrignadeg dent”.** ¹³ Hag e lavar Jezuz d'ar c'hante-ner: **“Kee! Ra c'hoarvezo dit hervez ma kredez!”** Ha d'an eur-ze eo pareet ar paotr...

Mk 1, 29...
Lk 4, 38...
Iz 53,4
¹⁴ Jezuz, deuet da di Bèr, a wél lez-vamm hemañ gourvezet ha dal-het gand an derzienn... ¹⁵ Touch a ra ouz he dorn, ha dioustu e tistag an derzienn, hag hi da zavel d'o zervicha... ¹⁶ Deuet an abardaez, e tegasant dezañ kalz a dud sujet d'an droug-spered: dre eur gér e kas kuit an droug-sperejou hag e pare an oll re o-deus poan. ¹⁷ Sevenet eo evel-se ar pez a zo lavaret dre ar profed Izai, pa lavar: **“ Or sempladureziou e-neus e-unan kemeret hag or c'hleñvejou e-neus sammel! ”**

Lk 9, 57...
2 Kor 8,9
¹⁸ O weled eun dud en dro dezañ, e kemenn Jezuz mond d'an tu-all d'al Lenn! ¹⁹ Davetañ e teu eur Skrib hag a lavar dezañ: **“Mestr! D'hoc'h heul ez in-me, da belec'h bennag ez afec'h!”** ²⁰ Ha Jezuz a lavar dezañ: **“Al lern o-deus toullou! laboused an neñv o-deus o c'hlud! Mab-an-Den avad n'e-neus ket eul lec'h da boueza e benn!”** ²¹ Unan all euz e Ziskibien a lavar dezañ: **“Va lezit da vond da genta da zebelia va Zad!”** ²² Jezuz avad a lavar dezañ: **“Deus d'am heul! Ha lez ar re varo da zebelia o re varo!”**

Mk 4, 36...
Lk 8, 22...

AOTROU! O VOND DA GOLL EMAOM!

Salm 65,8
²³ Pa zav en eur vag, ez a e Ziskibien d'e heul. ²⁴ Ha setu ma tiroll eur gorventenn vraz war ar mor, ken m'eo goloet ar vag gand an tarzou!. Eñ avad a zo kousket. ²⁵ Hag ez eont davetañ ha d'e zihuna o lavared: **“Aotrou! Deuit d'or savetei: o vond da goll emao!”** ²⁶ Ha dezo e lavar: **“Perag oc'h-c'hwi aonig, krederien laosk !”** Savet neuze en e zav, e ra trouz d'an aveliyou ha d'ar mor, hag e tegouez peoc'h braz! ²⁷ Chom a reont sebezet hag e lavaront: **“Peseurt Den eo Hemañ ?! peog-wir e sent outañ hag an aveliyou hag ar mor!”**

Mk 5, 11...
Lk 8, 26...

PETRA A ZO ETREZOM-NI, MAB DOUE ?

²⁸ Degouezet en tu-all d'al Lenn, e bro ar C'hadariz, e teu davetañ daou zen sujet da zroug-sperejou, deuet a-greiz ar beziou !. Bez' ez int kriz-kenañ ken na c'hell den tremen dre an hent-se! ²⁹ Ha setu int-i o youhal o lavared: **“Petra a zo etrezom-ni, Mab Doue ? Daoust ha deuet oc'h-c'hwi amañ araog ar poent d'ober poan deom ?”** ³⁰ Pell diouto ez eus eur vandenn vraz a voc'h o peuri. ³¹ An droug-sperejou e bed o lavared: **“Ma teuit d'or c'has er-mêz, or c'hasit er vandenn voc'h!”** ³² Hag e lavar dezo: **“Kit 'ta!”** Eet er mêz, ez eont er moc'h!. Ha setu ar vandenn a-bez o vond a-lamm diwar an tarroz er mor, hag e varvont el lenn...

³³ Ar bastored a dec'h kuit evid mond e kêr da gas kelou euz kement-se hag euz an daou zen sujet d'an droug-sperejou... ³⁴ Ha setu kêr a-bez o tond daved Jezuz. Ouz e weled, e c'houlenn an dud digantañ mond kuit diwar o douarou...

9

N'ON KET DEUET DA C'HELVER TUD JUST, MED PEHERIEN!

Mk 2, 1...
Lk 5, 17...

¹ Sevel a ra en eur vag evit treuzi al Lenn hag e teu d'ar gêr. ² Ha setu ma tegasont dezañ eun den seizet, astennet war eur gwele. O weled o feiz, e lavar Jezuz d'an den seizet: **“Bez kaloneg! Va mab! Pardonet eo dit da behejou!”** ³ Ha setu lod euz ar Skribed o lavared enno o-unan: **“Hemañ a zo o vlasfemi!”** ⁴ Anad dezañ o zoñjou, e lavar dezo Jezuz: **“Perag droug-soñjal en ho kalonou ? ⁵ Rag petra eo an êsa: lavared ‘Pardonet eo dit da behejou!’, pe lavared ‘Sav en da zav ha bale!’ ? ⁶ Deoc’h da c’houzoud e-neus Mab-an-Den war an douar galloud da bardoni pehejou, (neuze e lavar d’an den seizet): ‘Sav en da zav! Samm da wele ha kee d’ar gêr!’”** ⁷ Hag an den a zav en e zav hag ez a d’ar gêr! ⁸ Ouz e weled, e krog aon en dud, hag e tougont gloar da Zoue, pa ro eur seurt galloud d’an dud...

Lk 7,48

Yn 5,27

Mk 2, 13...
Lk 5, 27...

⁹ En eur vond ahano, e wél Jezuz eun den anvet Maze, azezet dirag ar valtouterez, ha dezañ e lavar: **“Deus d’am heul!”** Hag an den a zav hag ez a d’e heul... ¹⁰ P’ema astennet ouz taol en ti, setu kalz Publikiz ha Peherien o tond da astenn ouz taol gand Jezuz hag e Ziskibien! ¹¹ O weled kement-se, e lavar ar Farizeiz d’e Ziskibien: **“Perag ema ho Mestr-c’hwi o tebri gand ar Bublikiz hag ar Beherien ?”** ¹² Eñ avad, ouz o c’hleved, a lavar: **“N’eo ket an dud kreñv o-deus ezomm a vedisin, med ar re o-deus poan! ¹³ Kit avad da zeski petra eo al lavar-mañ: ‘Trugarez a glaskan, ha n’eo ket provad!’ Rag n’on-me ket deuet da c’helver tud just, med peherien.”**

Lk 15,2

Lk 15,10
1 Tim 1,15

Mk 2, 18...
Lk 5, 33...

GWIN-NEVEZ E SEHIER-LÊR NEVEZ!

Yn 3,29

¹⁴ Neuze e teu Diskibien Yann davetañ o lavared: **“Perag e vezom, ni hag ar Farizeiz, o yuni aliez, ho Tiskibien-c’hwi avad ne yunont ket!”** ¹⁵ Ha dezo e lavar Jezuz: **“Daoust ha paotred an Eured a c’hell ober kañv epad m’ema ganto an Den-Nevez ? Med dond a raio deveziou ma vo lamet an Den-Nevez diganto!. Neuze e yunint!”**

¹⁶ **“N’eus den da beñselia eur vantell goz gand eur peñsel nevez-gwiet! Rag mirout a rafe d’ar vantell chom en he fez, ha gwasoc’h e vefe ar freg!**

¹⁷ **“Ha ne daoler ket gwin-nevez e sehier-lêr koz! A-hend-all, e**

Yn 1,17
Gal 1,6

tarz ar sehier-lêr, hag e vez skuillet ar gwin ha kollet ar zehier-lêr!...Med bez' e taoler ar gwin-nevez e sehier-lêr nevez, hag an eil hag egile a vez miret a-unan!"

VA MERC'H A ZO NEVEZ-MARVET! DEUIT HAG E VEVO!

Mk 5, 22...
Lk 8, 41...

¹⁸ P'ema Jezuz o komz dezo, setu eur rener bennag o tond da stoui dirazañ en eur lavared: **"Va merc'h a zo nevez-marvet! Med deuit! Astennit warni ho taouarn, hag e vevo!"** ¹⁹ Hag e sav Jezuz da vond d'e heul gand e Ziskibien...

Mz 8,10

²⁰ Ha setu eur vaouez - dezi eur c'holl-gwad abaoe daouzeg vloaz! - o tond davetañ a-zia-dreñv hag o touch ouz fleñch e vantell! ²¹ Rag enni hec'h-unan e lavar-hi: **"Ma teuan hepkén da douch ouz e vantell, e vezin saveteet!"** ²² Jezuz avad, en eur zistrei, hag ouz he gweled, a lavar: **"Bez kaloneg, va merc'h: da feiz he-deus da zaveteet!"** Ha saveteet eo ar vaouez adaleg an eur-ze!

Yn 11,11...

²³ En eur zegouezoud e ti ar rener hag o weled ar fleüterien hag an dud oc'h ober trouz, ²⁴ e lavar Jezuz: **"Tehit kuit! rag n'eo ket marvet ar plahig! Med kousket eo-hi!"** ²⁵ Hag e c'hoarzont dezañ... Pa z'eo kaset an dud er-mêz, ez a en ti: kregi mad a ra e dorn ar plahig, hag homañ a zav en he zav... ²⁶ Hag ar vrud a gement-se a red dre ar vro-ze a-bez...

HO-PET TRUEZ OUZOM-NI, MAB-DAVID!

Mk 1,34

²⁷ P'ema Jezuz o vond kuit ahano, e teu daou zen dall war e lerc'h en eur youhal: **"Ho-pet truez ouzom-ni, Mab-David!"** ²⁸ Pa z'a en ti, e teu an daou zen dall davetañ, ha Jezuz a lavar dezo: **"Daoust ha kredi a rit e c'hellan-me ober an dra-ze?"** ²⁹ Hag e respontont: **"Ya da! Aotrou!"** Neuze e touch ouz o daoulagad en eur lavared: **"Ra c'hoarvezo deoc'h diouz ho feiz!"** ³⁰ Ha digoret eo dezo o daoulagad! Ha Jezuz o c'hourdrouz rust, o lavared: **"Diwallit na ouezfe den!"** ³¹ Mond a reont avad d' e vruda dre ar vro-ze a-bez!..

Lk 11,14

³² P'ema an daou-ze o vond kuit, setu ma tegaser dezañ eun den mud, sujet d'eun droug-spered. ³³ Kaset an droug-spered er-mêz, e krog an den mud da gomz! Chom a ra souezet an dud hag e lavaront: **"Biskoaz n'eus bet gwelet seurt traou en Izrael!"** ³⁴ Med ar Farizeiz a lavar: **"Dre Vestr an droug-sperejou e kas Hemañ kuit an droug-sperejou!"**

Mk 7,37

Mk 6,34...

³⁵ Jezuz a ra tro an oll gêriou ha kêriadennou, en eur gelenn en o sinagogou, en eur embann Kelou-Mad ar Rouantelez, hag en eur barea peb kleñved ha pep sempladurez! ³⁶ O weled kement-se a dud, eo rannet e galon, rag bez' ez int mantret hag enkrezet evel Deñved n'eus dezo Pastor ebed!

Lk 10,2...

³⁷ Neuze e lavar d'e Ziskibien: **“An Eost a zo stank, rouez avad al labourerien! Pedit eta Aotrou an Eost ma kaso Labourerien d'e Eost!”**

10

Mk 6,7...

Lk 9,1...

Mk 3,14
Lk 6,13...
Yn 1,40...
Ob 1,13

¹ Gelper a ra e zaouzeg Diskib: dezo e ro galloud war ar sperejou hudur evid o c'has kuit, hag evid para peb droug ha peb sempladurez. ² Setu amañ anoiou an Daouzeg Abostol: ar c'henta, Simon anvet Pèr, hag Andre e vreur ; Jakez-mab-Zebede, ha Yann e vreur; ³ Filip ha Bartolome; Tomaz ha Maze ar Publikad; Jakez-mab-Alfe, ha Tade; ⁴ Simon ar C'hananead, ha Judaz Iskariod, an hini end-eeün e-neus e roet!

Mz 4,17

⁵ Ha Jezuz a gas an Daouzeg-ze hag e kemenn dezo o lavared: **“Na gemerit ket hent ar Baganed, ha n'it ket en eur gêr a Zamariz!. ⁶ Kit kentoc'h daved an Deñved kollet euz Pobl Izrael! ⁷ En eur vond, embannit ha lavarit: “Deuet eo tost Rouantelez an Neñv!” ⁸ Pareit tud klañv! Adsavit tud varo! Glanait tud lôr! Kasit kuit droug-sperejou! Evid netra ho-peus bet, roit evid netra!”**

Lk 9,53...

Yn 4,9...

Mk 6,8

Lk 9,3

⁹ “Na gemerit ganeoc'h nag aour nag arhant na moneiz en ho kouriz, ¹⁰ na bisac'h evid an hent, na diou zae na sandalennou, na baz, rag ar micherour a zo dîn ouz e voued! ¹¹ E kement kêr pe e kement kêriadenn ez eoc'h, klaskit piou enni a zo dîn: chomit eno beteg ma z'eo ch kuit! ¹² En eur vond en ti, deoc'h d'e zaludi: ‘Peoc'h dit!’ ¹³ Ma z'eo dîn an ti, ra ziskenno warnañ ho peoc'h! ma n'eo ket dîn avad, ra zistroio warnoc'h ho peoc'h! ¹⁴ Hag an hini ne fell ket dezañ nag ho tegemer na selaou ho komzou, en eur vond er-mêz euz an ti-ze pe euz ar gêr-ze, hejit ar boultrenn diouz ho treid! ¹⁵ E gwirionez e lavaran deoc'h: Da zeiz ar Varn, da Zodom ha da Gomor ne vo ket ken kriz eged d'ar gêr-ze!”

Lk 12,48

1 Kor 14,20

¹⁶ “Setu m'ho kasan-me evel Deñved e-touez Bleizi! Bezit eta evezieg evel an naered ha glan evel ar c'houlmed! ¹⁷ Diwallit diouz an dud, rag ho rei a reint d'ar zanedrinou, hag ho skourjeza en o zinagogou. ¹⁸ Kaset e vezoc'h dirag gouarnourien ha rouaned ablamour din-me, deoc'h beza eun testeni dezo ha d'ar Baganed...”

Mk 13,9...

Lk 21,12...

Yn 14,26

¹⁹ “Pa vezoc'h roet evel-se, na vezit ket nehet o klask penaoz pe betra lavared, rag roet e vo deoc'h d'an eur-ze ar pez ho-po da lavared! ²⁰ Rag n'eo ket c'hwi a gomzo, med Spered ho Tad a vo o komz ennoc'h-c'hwi! ²¹ Eur breur a roio e vreur da veza lakeet d'ar maro, hag eun tad e grouadur. Bugale a zavo a-eneb o c'herent hag o c'haso d'ar maro! ²² Kasaet e vezoc'h gand an oll ablamour d'am Ano-me! An hini avad a zalho beteg penn, hennez a vo saveteet. ²³ Pa vezoc'h heskinet er gêr-mañ, tehit d'eben-all!. Evid gwir e lavaran deoc'h: n'ho-po ket echuet gand kêriou Izrael araog ma tistroio

Yn 15,18

Lk 6,43
Yn 13,16

Mab-an-Den!”

Lk 12,2
Mk 4,22

²⁴ “Ne vez ket eun diskib dreist e Vestr, nag eur zervicher dreist e Aotrou! ²⁵ Awalc’h eo ma teu an diskib da veza par d’e Vestr, hag ar zervicher par d’e Aotrou! M’o-deus lesanvet ar Penn-tiegez ‘ Beelzeboul ‘, pegement muioc’h tud e di! ²⁶ Arabad deoc’h eta kaoud aon razo, rag n’eus netra goloet ha na vefe ket dizoloet, ha netra kuzet ha na vefe ket gouezet! ²⁷ Kement a lavaran en deñvalijenn, deoc’h lavared er sklêrijenn! Ha kement a glevit e pleg ar skouarn, deoc’h embann war al leuriou-toenn!. ”

1 Pêr 3,14

²⁸ " N’ho-pet ket aon rag ar re a laz ar c’horv, med ne c’hellont ket laza an ene! Ho-pet kentoc’h aon rag an Hini a c’hell kas da goll hag an ene hag ar c’horv er jeenn! ²⁹ Daoust ha daou filip ne vezont ket gwerzet eur gwenneg ? Koulskoude ne gouez ket eun unan anezo war an douar heb asant ho Tad. ³⁰ Hag ar bleo a zo war ho penn a zo bet oll kontet!... ³¹ N’ ho-pet ket aon eta, rag muioc’h eged eur bern filiped e talvezit-c’hwil!”

Lk 21,18

Lk 12,8...
Mk 9,38

³² “Kement-hini eta am anzavo dirag an dud, a anzavin me ive dirag va Zad a zo en Neñv! ³³ Kement-hini avad am naho dirag an dud, a nahin me ive dirag va Zad a zo en Neñv! ³⁴ N’ it ket da zoñjal ez on deuet da zegas peoc’h, war an douar! N’ on ket deuet da zegas peoc’h, med ar c’hleze! ³⁵ Deuet on da zavel eun den a-eneb e dad, hag eur verc’h a-eneb he mamm-dezi, hag eur verc’h-kaer a-eneb he mamm-gaer! ³⁶ Hag enebourien eun den a vo tud e di!”

Disk3,5
Lk 12,51...

Lk 14,26

³⁷ “An neb a gar tad pe vamm muioc’h egedon-me n’eo ket dîn ahanon! Hag an neb a gar mab pe verc’h muioc’h egedon-me, n’eo ket dîn ahanon! ³⁸ Hag an neb ne zamm ket e groaz ha ne zeu ket war va lerc’h, n’eo ket dîn ahanon!

Mk 8,24...
Lk 9,23...

Mk 9,3...
Lk 9,40...
Yn 12,44...
Mz 25,40...

³⁹ An neb a zalc’h d’e vuez he c’hollo! An hini avad a goll e vuez ablamour din, he c’havo! ⁴⁰ An hini ho tegemer am degemer! Hag an hini am degemer, a zegemer an Hini e-neus va c’haset. ⁴¹ An hini a zegemer eur profed en ano a brofed, e-no eur gopr a brofed! An hini a zegemer eun den just en ano a zen just, e-no eur gopr a zen just! ⁴² Ha kement-hini a roio da eva eur werennad dour yén hepkén da unan euz ar re vian-mañ, en ano a ziskib, e gwirionez e lavaran deoc’h, ne gollo ket e c’hopr.”

11

Lk 7, 18...

DAOUST HA C’HWI EO AN HINI-A-ZEU !

¹ Neuze, echuet gantañ rei kemennou d’e Ziskibien, ez a Jezuz ahano da gelenn ha da brezeg en o c’hêriou! ² Yann Vadezour avad, klevet gantañ, e prizon-kêr, ano euz oberou ar Mesiaz, a gas daou euz e ziskibien, ³ da lavared dezañ: **“Daoust ha c’hwï eo an Hini-a-zeu, pe unan-all eo deom gortoz ?”** ⁴ Jezuz a lavar dezo: **“Kit da zegemenn da Yann kement a glevit hag a welit: ⁵ tud dall a wêl sklêr! Tud kamm a vale! Tud lôr a vez glaneet! Tud bouzar a glev! Re varo a adsav! Ha peorien a glev ar C’helou-mad! ⁶ Hag eüruz an den ha ne vo ket skoillet ennon-me!”**

Lk 4,18
Mz 8,3
Yn 6,61

⁷ P’emaint o vond kuit, e krog Jezuz da gomz d’an dud diwar-benn Yann: **“Ouz petra ez oc’h-c’hwï eet da zelled er gouelec’h ? Ouz eur raosklenn hejet gand an avel ? ⁸ Med da weled petra ez oc’h-c’hwï eet ? Eun den gwisket gand dillajou flour ? An dud a zoug dillajou flour, setu int-i o veva e tiez ar rouaned! ⁹ Med evid petra oc’h-c’hwï eet ? Da weled eur profed ? Ya! me a lavar deoc’h, ha kalz gwelloc’h eged eur profed! ¹⁰ Henez eo an hini a zo skrivet diwar-e-benn:**

Lk 1,76

Mk 1,2...
Yn 1,28

“Setu ma kasan va C’hannad en ho raog!

Mal 3,1

“Henez a gempenno hoc’h hent dirazoc’h!”

¹¹ **“Evid gwir e lavaran deoc’h: e-touez bugale ar gwragez, n’eus ket savet brasoc’h eged Yann-Vadezour! Med an Hini-Biannohig e Rouantelez an Neñv a zo brasoc’h egetañ! ¹² Abaoe Yann-Vadezour beteg bremañ e vez gwasket Rouantelez an Neñv, hag ar waskerien a bak krog enni!**

Lk 16,16

Mal 3,23

¹³ **Rag an oll Brofeded hag al Lezenn o-deus profedet beteg Yann! ¹⁴ Ha ma fell deoc’h intent: eñ eo an Eli a oa da zond! ¹⁵ An hini e-neus diskouarn, ra glevo!”**

Lk 7,31...

¹⁶ **“Ouz petra ec’h heñvellain-me ar rummad-mañ ?! Heñvel eo ouz bugale azezet war al leuriou-kêr ; o c’helver ar re all, ¹⁷ e lavaront:**

“Fleütet on-eus, ha n’ho-peus ket korollet!

“Hirvoudet on-eus, ha n’ho-peus ket skoet war boull ho kalon!”

Lk 1,15
Mk 3,4

¹⁸ **Rag deuet eo Yann: ne zebre na ne eve! Hag e lavar an dud: “Ennañ ez-eus eun diaoul!” ¹⁹ Deuet eo Mab-an-Den: debri hag eva a ra! Hag e lavaront: “Setu eun den lonteg hag eun ever-gwin! Mignon d’ar Bublikiz ha d’ar Beherien!” Med justizet eo ar Furnez dre hec’h oberou!”**

SIWAZ DIT, KOROZAÏN! HA DIT, BETSAID!

Lk 10,13 20 Neuze e krog d'ober rebechou d'ar c'hêriou a zo c'hoarvezet enno an darn vrasa euz e vurzudou, pa n'int ket troet ouz Doue!

Yn 13,24
Mz 19,58 21 **“Siwaz dit! Korozaïn! Siwaz dit! Betsaid! Rag ma vije c'hoarvezet e Tir hag e Sidon ar burzudou c'hoarvezet ennoc'h-c'hwi, abaoe pell'zo e vefent troet ouz Doue, en eur zae reun ha war al ludu!... 22 Ya! me 'lavar deoc'h: da Zeiz ar Varn, da Dir ha da Zidon ne vo ket ken kriz eged deoc'h-c'hwi!**

23 **“Ha te, Kafarnaom! Daoust hag uhelleet e vezi beteg an Neñv?... Beteg an ifern e tiskenni!... Rag ma vije c'hoarvezet e Sodom ar burzudou c'hoarvezet ennout-te, e vije chomet en e zav beteg an deiz a hirio!...**

24 **Ya! Me 'lavar deoc'h: da Zeiz ar Varn, da vro Zodom ne vo ket ken kriz eged dit-te!”**

TAD! HO MEULI A RAN!

Lk 10,21... 25 D'ar poent-se e sav Jezuz e vouez da lavared:

Mz 13,10
Yn 7,46
1 Kor 1,26 **“Ho meuli a ran, Tad, Aotrou an Neñv hag an douar,
“Da zelher kuzet an traou-ze ouz tud fur ha speredeg,
“Ha d'o diskulia da vugaligou!.**

26 **“Ya! Tad! Evel-se eo bet plijet deoc'h!**

Yn 3,35 27 **“Pep tra a vez roet din gand va Zad!
“Nikun ne anavez ar Mab nemed an Tad!**

“Ha nikun ne anavez an Tad nemed ar Mab,

“Hag an hini a blij d'ar Mab e ziskulia dezañ! ”

28 **“Deuit oll davedon, c'hwi, tud skuiz ha sammet! Ha me ho tiskuizo!.**

Oz 10,11 29 **“Kemerit warnoc'h va yeo ha bezit Diskibien din,**

1 Yn 5,3 **“Rag Me a zo douz hag izel a galon, hag e kavoc'h diskuiz d'ho spered!**

Gal 5,1 30 **“Rag va yeo a zo êz, ha skañv eo va zamm!”**

12

RAG AOTROU WAR AR ZABAD EO MAB-AN-DEN

Mk 2,23...
Lk 6,1...

¹ Er poent-se, d'ar zabad, e kerz Jezuz dre greiz parkajou east.

E Ziskibien, naon dezo, a zeu da gutuill pennou éd ha d'o debri. ² Ouz o gweled, e lavar dezañ ar Farizeiz: **“Setu ho Tiskibien oc'h ober ar pezh n'eo ket aotret ober d'ar zabad!”** ³ Eñ avad a lavar dezo: **“Daoust ha n'ho-peus ket lennet ar pezh e-neus greet David, deuet naon dezañ ha d'e dud ?** ⁴ **Penaoz ez eo eet e ti-Doue hag e-neus debret baraennou ar Brovadenn, ha n'e oa ket aotreet dezañ debri na d'e dud, med d'ar veleien hepkén!**

Yn 5,16...

⁵ **Pe n'ho-peus ket lennet, el Lezenn, e torr ar veleien ar zabad en Templ, d'ar zabad, hag e vezont direbech ?** ⁶ **Me avad a lavar deoc'h: Bez 'ez eus amañ Brasoc'h eged an Templ!** ⁷ **Ma ouezfec'h hepkén petra eo: “Trugarez a glaskan, ha n'eo ket provad!”**, **n'ho-pefe ket barnet tud dibec'h!** ⁸ **Rag Mab-an-Den a zo Aotrou war ar zabad!”**

Mk 3,1...
Lk 6,6...Yn 8,8
Lk 14,5

⁹ Hag o vond kuit ahano, ez a en o zinagog. ¹⁰ Ha setu eno eun den a zo dezañ eun dorn dizec'h! Hag int-i a c'houlenn outañ: **“Daoust hag aotreet eo, emezo, para d'ar zabad ?”** Evid kaout d'e damall ez eo! ¹¹ Eñ avad a lavar dezo : **“Pehini ahanoc'h , ma n'eus dezañ nemed eun dañvad ha ma kouez hemañ en eun toull don d'ar zabad, ne bako ket krog ennañ evid e denna kuit ?** ¹² **Pegement muioc'h eta e talvez eun den war eun dañvad, ken ma z'eo aotreet ober kaer d'ar zabad!”** ¹³ Ha neuze e lavar d'an den: **“Astenn da zorn!”** Hag e astenn a ra: yac'h eo evel an dorn all!

Yn 11,53

Mk 1,34

¹⁴ O vond ahano, e tiviz ar Farizeiz d'e gas da goll!. ¹⁵ Deuet da c'houzoud, e tec'h Jezuz kuit ahano. Mond a ra kalz tud d'e heul: dezo oll e ro ar pare. ¹⁶ Ha dezo e ra trouz, da viroud outo d'e ziskulia...

ENNAÑ E KAV VA C'HALON HE DUDI!

Iz 42,1-4

¹⁷ Kement-se evid ma vefe sevenet ar pezh a zo lavaret dre ar profed Izai:

¹⁸ *“Setu va Zervicher, an Hini am-eus dibabet,*

“Va Muia-karet: Ennañ e kav va c'halon he dudi!

“Lakaad a rin warnañ va Spered,

“Hag e kemenno ar varn d'ar Baganed.

¹⁹ *“Ne rendaelo ket ha ne youho ket ;*

“Ne glevo den e vouez war al leuriou-kêr!

- 20 “Ne flastro ket ar raosklenn torret,
 “Ne vougo ket ar vouchenn c’hoaz o tivogedi,
 “Ken na gaso ar Varn d’an trec’h !
 21 “En e Ano ec’h espero ar Baganed...”

Mk 3, 22...
 Lk 11, 14...

DEGOUZET EO ETA ROUANTELEZ DOUE...

22 Neuze e tegasont dezañ eun den sujet d’eun droug-spered: dall ha mud eo, ha dezañ e ro ar pare: evel-se e komz an den mud hag e wél mad.

Mk 3,23
 Lk 11,17

23 Chom a ra an oll sebezet, hag e lavaront: “**Daoust ha n’eo ket Hemañ ‘Mab-David’ ?**” 24 Ouz o c’hleved e lavar ar Farizeiz: “**Hemañ ne gas kuit an droug-sperejou nemed dre Veelzeboul, Mestr an droug-sperejou!**” 25 Jezuz avad, anad dezañ o zoñjou, a lavar dezo: “**Peb rouantelez rannet a-eneb dezi hec’h-unan a vez diboblet! Ha peb kêr pe bep ti rannet a-eneb dezo o-unan ne zalhont ket en o zav!** 26 Ha ma vez Satan o kas Satan kuit, ez eo rannet a-eneb dezañ e-unan ; penaoz ’ta e talho e rouantelez en he zav ? 27 Ha ma kasan-me kuit an droug-sperejou dre Veelzeboul, ho pugale c’hwi, dre biou o c’hasont kuit ? Rag-se e vezint o-unan ho parnerien!. 28 Med ma kasan-me kuit an droug-sperejou dre Spered Doue, degouezet eo eta warnoc’h Rouantelez Doue! 29 Ha penaoz e c’hell unan bennag mond e Ti an Hini-Kreñv ha skrapa dezañ e draou, ma ne liamm ket da genta an Hini-Kreñv? Neuze e skrapo e Di!”

Yn 12,31
 Mk 9,40
 Heb 6,4...

30 "An hini n’ema ket a-du ganin a zo a-eneb din! Hag an neb na zastum ket ganin, a zo o fouilleza*... 31 Rag-se e lavaran deoc’h: **Peb pehed ha peb blasfem a vo pardonet d’an dud. Ar blasfem a-eneb ar spered avad ne vo ket pardonet!** 32 An neb bennag a lavarfe eur gomz a-eneb Mab-an-Den, dezañ e vo pardonet! An neb avad a lavarfe eur gomz a-eneb ar Spered Santel, dezañ ne vo ket pardonet, nag er bed-mañ, nag er Bed-da-zond”.

Lk 12,10

Lk 6, 43...

DIWAR PUILDER AR GALON E KOMZ AR GENOU!

33 Pe lakit ez eo kaer ar wezenn, ha kaer e vezo he frouez! Pe lakit ez eo brein ar wezenn, ha brein e vo he frouez! Rag diouz ar frouez e vez anavezet ar wezenn! 34 Gorad naered! Penaoz e c’hellit lavared traou mad, ha deoc’h beza droug ? Rag diwar puilder ar galon e komz ar genou! 35 An den mad a denn traou mad euz e deñzor mad! Hag an den fall a denn traou fall euz e deñzor fall! 36 Me a lavar deoc’h: **peb gér goull o-do lavaret an dud, diwarnañ e rentint kont da Zeiz ar Varn;** 37 rag “*Diouz da gomzou e vezi justizet, diouz da gomzou e vezi barnet!*”.

Jk 3,1...

*Stlabeza, strewi

NI A FELL DEOM GWELED EUR ZIN !

Lk 11,29...
Mk 8,11...
Mz 16,1...

³⁸ Neuze e respont dezañ lod euz ar Skribed hag euz ar Farizeiz, o lavared: **“Mestr! Ni a fell deom gweled eur zin diganeoc’h!”** ³⁹ Respont a ra o lavared dezo: **“Eur rummad droug hag avoultrer a c’houleñn eur zin! Ha sin ebed ne vo roet dezo nemed sin ar profed Jonaz! ⁴⁰ Rag evel m’eo bet Jonaz e kov ar valum epad tri devez ha teir nozvez, evel-se e vezo Mab-an-Den e kalon an douar epad tri devez ha teir nozvez!”**

Yn 6,35

⁴¹ **“Gwazed Niniv a zavo, d’ar Varn, gand ar rummad-mañ, hag e varno, rag troet o-deus o c’halon ouz Doue diwar embann Jonaz, ha setu amañ kaerroc’h eged Jonaz!”**

Lk 12,24
Mz 8,29

⁴² **Rouanez ar C’hreisteiz a zavo, d’ar Varn, gand ar rummad-mañ hag e varno, rag deuet eo-hi euz penn pella ar bed da zelaou furnez Salomon... Ha setu amañ kaerroc’h eged Salomon!”**

Mk 5,9

⁴³ Pa ’z a ar spered hudur er-mêz euz eun den, e red dre lehiou dizec’h da glask distan, ha ne gav ket! ⁴⁴ Neuze e lavar: **“Distrei a rin d’am zi, ez on deuet kuit anezañ!”** Pa zegouez, e kav an ti goullo, skubet ha kempennet! ⁴⁵ Mond a ra neuze da gemer gantañ seiz spered all, droukoc’h egetañ, hag e teuont da jom eno !. Hag e teu stad diweza an den-ze da veza gwasoc’h eged an hini kenta!. Evel-se e vo ive evid ar rummad droug-mañ!”

Mk 3,31...
Lk 8,19...

SETU VA MAMM HA VA BREUDEUR.

Lk 2,49

⁴⁶ O komz d’an dud ema c’hoaz, ha setu e Vamm hag e vreudeur en o-zav er-mêz, o klask komz gantañ... ⁴⁷ Unan bennag a lavar dezañ: **“Setu ho Mamm hag ho preudeur, er-mêz, o klask komz ganeoc’h!”** ⁴⁸ Hag e respont d’an hini e-neus komzet dezañ: **“Piou eo va Mamm ha piou eo va Breudeur ?”** ⁴⁹ Hag en eur astenn e zaouarn war e Ziskibien, e lavar: **“Setu va Mamm ha va Breudeur!... ⁵⁰ Rag piou bennag e-no greet bolontez va Zad a zo en Neñv, hennez a zo din Breur ha C’hoar ha Mamm!”**

13

Mk 4,3...
Lk 8,4...

SETU AN HADER EET DA HADA

¹ En devez-ze, eet euz an ti, ec’h azez Jezuz war ribl ar mor. ² Bez’ ez eus leun a dud bodet endro dezañ, ken ma sav en eur vag da azeza: an oll dud a jom war an aod. ³ Ha dezo e tispleg kalz traou dre barabolen-nou, o lavared: **“Setu m’eo eet an Hader da hada. ⁴ Hag epad an hada, e kouez greun a-hed an hent: hag e teu al laboused d’o debri. ⁵ Greun all a gouez war ar veineg, el lec’h n’o-deus ket kalz a zouar.**

Yn 15, 8... Raktal e tiwanont pa n'o-deus ket a zonder douar. ⁶ Pa uhella an heol, ez int skotet, ha pa n'o-deus ket a wriziou, e tizehont! ⁷ Re all a gouez er spern: o kreski, e teu ar spern d'o moug! ⁸ Re all a gouez war an douar kaer hag e roont frouez: unan kant, unan tri-ugent, unan all tregont... ⁹ An hini e-neus diskouarn, ra glevo!"

PERAG E KOMZIT DRE BARABOLENNOU ?!

Mk 4,10...
Lk 8,9...

¹⁰ Ha davetañ e teu e Ziskibien, da lavared dezañ: "**Perag e komzit dre barabolennoù ?**" ¹¹ Hag e respont o lavared: "**Deoc'h-c'hwi eo roet anavezoud Misteriou Rouantelez an Neñv! D'ar re-ze avad n'eo ket roet!**" ¹² **Rag d'an hini e-neus, e vo roet, hag e-no muioch-mui! An neb avad n'e-neus ket, ar pezh a zo dezañ a vo lamet digantañ!** ¹³ **Setu perag e komzan dre barabolennoù:**

Mz 25,29

Iz 6,9...
Yn 12,40
Ob 28,26...

"Rag o selled, ne welont ket!

"O selaou, ne glevont ket ha n'intentont ket!

¹⁴ *"Sevenet eo evito profedadenn Izai, a lavar:*

"Selaou ha selaou a reoc'h ha n'intentoc'h ket!

"Selled ha selled a reoc'h, ha ne weloc'h ket!

¹⁵ *"Rag mouget eo kalon ar Bobl-mañ,*

"Pounner-gleo o diskouarn ha serret o daoulagad,

"Gand aon da weled gand o daoulagad, da glevet gand o diskouarn,

"Da intent gand o c'halon ha da drei ouz Doue!

"Ha me o fareo!..."

¹⁶ *"Eüruz ho taoulagad, peogwir e welont!*

"Hag o tiskouarn, peogwir e klevont!

Lk 10,23...

¹⁷ **"Rag, evid gwir, e lavaran deoc'h: Kalz profeded ha tud just o-deus c'hoanteet gweled ar pezh a welit, ha n'o-deus ket gwelet! Ha klevet ar pezh a glevit, ha n'o-deus ket klevet!"**

KLEVIT PARABOLENN AN HADER

Mk 4,13-20
Lk 8,11-15

¹⁸ **"C'hwi eta, klevit Parabolenn an Hader! ¹⁹ Daved kement den a glev komz ar Rouantelez, heb hec'h intent, e teu an Hini-Droug hag e skrap ar pezh a zo hadet en e galon! Hennez eo an hini hadet a-héd an hent.**

²⁰ **An hini hadet war ar veineg, hennez eo an hini, klevet gantañ ar Gomz, he degemer raktal, gand levezet! ²¹ Med n'e-neus ket a wriziou ennañ e-unan, med eun den amzerier a zo anezañ! Pa zegouez trubuill pe heskinerez diwar goust ar Gomz, raktal ez eo**

skoillet!

Yn 15,8...
Gal 5,22

22 An hini hadet e-touez ar spern, hennez eo an hini a glev ar Gomz, med nehamant ar Bed-mañ ha touellerez ar binvidigez a voug ennañ ar gomz, hag e chom homañ difrouez!

23 An hini avad a zo hadet war an douar kaer, hennez eo an hini a glev hag a intent ar Gomz, ha neuze e toug frouez, hemañ a ro kant, egile tri-ugent, unan all tregont!”

LEZIT DREOG HA GWINIZ DA GRESKI!

24 Dezo e tispleg eur Barabolenn-all, o lavared: **“Bez’ e vez heñ-velleet Rouantelez an Neñv ouz eun den e-neus hadet had kaer en e bark...**

25 Med epad m’eo kousket an dud, e teu e enebour: war gorre, e had dreog e-touez ar gwiniz hag e kerz kuit! **26** Pa gresk an éd glaz ha pa ra pennou, neuze e tispak ive an dreog. **27** Hag ez a ar zervicherien da gaoud ar penn-tiegez ha da lavared dezañ: **“Aotrou, daoust ha n’eo ket had kaer ho-peus hadet en ho park ? A-belec’h ’ta e teu ennañ an dreog ?”** **28** Eñ avad a lavar dezo: **“Eun enebour eo e-neus greet an taol!”** Ar zervicherien avad a lavar dezañ: **“Ha c’hoant ho-peus eta ez afem d’e zastum ?”** **29** Lavared a ra: **“Nann da! gand aon na zeufec’h, o tastum an dreog, da ziwrizia ar gwiniz da heul! 30** Lezit an eil hag egile da greski a-unan beteg an eost, ha da boent an eost e lavararin d’an eosterien: **“Dastumit da genta hag erenit an dreog en hordennou, evid e bulluha! Degasit avad ar gwiniz em grignol!”**

Mk 4, 30...
Lk 13, 18...

HEÑVEL OUZ EUR C’HREUNENN ZEZO!

31 Eur barabolenn-all a zispieg dezo o lavared: **“Heñvel eo Rouantelez an Neñv ouz eur c’hreunenn zezo e-neus eun den kemeret hag hadet en e bark.**

32 Ar bianna eo euz an oll hajou, med p’e-neus kresket, e vez ar brasa euz al legumachou! Hag e teu da wezenn, ken ma teu al laboused da gluda en he skourrou!”

Lk 13,20
Mk 4,33

33 Eur barabolenn-all a lavar dezo: **“Heñvel eo Rouantelez an Neñv ouz goell, he-deus kemeret eur vaouez ha sanket e tri vuzuliad toaz, ken na vo goet a-bez!”**

Salm 78,2

34 Kement-se a lavar Jezuz d’an dud dre barabolennou, hag heb parabolennou, ne lavar dezo netra **35** evid ma vo sevenet ar pez a zo lavarret dre ar profed pa lavar:

“Digeri a rin va genou e parabolennou,

“Hag ec’h embannin traou kuzet abaoe krouidigez ar bed!”

SKLERRAIT DEOM PARBOLENN AN DREOG!

³⁶ Dilezel a ra neuze an dud hag ez a d'ar gêr. Davetañ e teu e Ziskibien hag e lavaront: “Skêrrait deom Parabolenn dreog ar park!”

³⁷ Hag e respont o lavared: “An Hini a had an had kaer eo Mab-an-Den, ³⁸ hag ar Park eo ar Bed! An had kaer avad, ar re-ze eo Bugale ar Rouantelez, med an dreog eo Bugale an Hini droug! ³⁹ Hag an Enebour e-neus hadet an Dreog eo an Diaoul! An Eost eo Fin ar Bed, hag êlez eo an Eosterien. ⁴⁰ Evel ma vez eta dastumet an dreog ha pulluhet en tan, evel-se e vo da fin an Amzer! ⁴¹ Mab-an-Den a gaso e êlez da zastum euz e Rouantelez an oll skoillou hag oberourien an direiz: o stlepel a reint e forn an tan! ⁴² Eno e vo ar goueladeg hag ar skrignadeg-dent! ⁴³ Neuze e skedo an dud just evel an heol e Rouantelez o Zad! An hini e-neus diskouarn da gleved, ra glevo!”

Disk 14,15

Disk 21,8

Dan 12,3

HEÑVEL OUZ EUN TEÑZOR, EUR BERLEZENN, EUR ROUED!

Lk 14, 33...

⁴⁴ “Heñvel eo Rouantelez an Neñv ouz eun teñzor kuzet en eur park.

Lk 18,22

Eun den, deuet d' e gavoud, e guz adarre, ha diwar levenez ez a da werza kement a zo dezañ ha da brena ar park-se!.

Lk 14,33

Mz 19,21...

⁴⁵ “Heñvel eo c'hoaz Rouantelez an Neñv ouz eur marhadour a zo o klask perlez kaer. ⁴⁶ Deuet da gavoud eur berlezenn talvouduz-braz, ez a da werza kement a zo dezañ ha d' he frena!.

⁴⁷ “Heñvel eo c'hoaz Rouantelez an Neñv ouz eur roued stlapet er mor, hag a zegas a-unan pesked a bep seurt! ⁴⁸ Pa vez leun, an dud he zenn war an aod, hag ec'h azezont da zastum ar re gaer e panerou, ha da stlepel ar re vrein er mor! ⁴⁹ Evel-se e vo da fin an Amzer: dond a raio an êlez da zibab ar re zroug a-douez ar re just, ⁵⁰ ha d' o stlepel e forn an tan! Eno e vo ar goueladeg hag ar skrignadeg-dent!”

⁵¹ “Daoust hag intent a rit kement-se ?” Hag e lavaront dezañ: “Ya 'vad!” ⁵² Dezo e lavar: “Rag-se, pep skrib desket war Rouantelez an Neñv a zo heñvel ouz eur Penn-tiegez a denn euz e deñzor traou nevez ha traou koz!”

Mk 6, 1...

Lk 4, 15...

NE VEZ DISPRIZET EUR PROFED NEMED EN E VRO!

Yn 6,42

Mz 27,56

⁵³ Neuze, echuet gantañ ar Parabolennou-ze, ez a Jezuz ahano. ⁵⁴ Deuet d'e Vamm-Vro, e stag da gelenn an dud en o zinagogou, ken ma 'z-int sebezet hag e lavaront: “A-belec'h e teu da Hemañ ar furnez hag ar burzudou-ze ? ⁵⁵ Daoust ha n'eo ket Hemañ Mab-ar-C'halvez ? Daoust ha n'eo ket e Vamm a vez anvet Mari ? Hag e vreudeur Jakez, Jozef, Simon ha Jud ? ⁵⁶ Hag e c'hoarezed daoust ha n'emaint

ket oll en on touez ? A-belec'h e teu kement-se da Hennez ?” ⁵⁷ Ha skoillet int ennañ! Jezuz avad a lavar dezo: **“Ne vez disprizet eur Profed nemed en e Vamm-Vro hag en e di!”** ⁵⁸ Ne ra ket eno kalz a vurzudou, pa ne gredont ket!

14

RO DIN PENN YANN-VADEZOUR!

Mk 6, 12...
Lk 9, 7...
Lk 3, 1...

¹ D'ar poent-se e teu Herodez an Tetrark da glevet ano euz brud Jezuz, ² hag e lavar d'e zervicherien: **“Yann Vadezour eo Hennez! Adsavet eo a-douez ar re varo: ha setu perag eman an Nerziou o virvi ennañ!”**

³ Rag Herodez e-neus lakeet paka krog e Yann, e jadenna hag e stlepel er prizon, en abeg da Herodiadez, gwreg e vreur Filip, ⁴ rag dezañ e lavare Yann: **“N'eo ket aotreet ganit he c'haoud da wreg!”** ⁵ C'hoant e-nez d'e laza, med aon e-nez rag an dud, rag e gemer a reont evid eur Profed...

⁶ Da geñver deiz-ha-bloaz ganedigez Herodez, e teu merc'h Herodiadez da zañsal e-kreiz an dud! Ha plijoud a ra da Herodez, ⁷ setu perag e tou dre lé rei dezi kement a c'houlenno! ⁸ Hag homañ, atizet gand he mamm, a lavar: **“Ro din amañ, war eur plad, penn Yann-Vadezour!”** ⁹ Glaharet eo ar roue, med en abeg d'al leou ha d'an dud astennet gantañ ouz taol, e kemenn ma vefe roet dezi. ¹⁰ Kas a ra tud da zibenna Yann er prizon, ¹¹ Degaset eo e benn war eur plad ha roet d'ar blahig hag homañ e gas d'he mamm! ¹² Dond a ra e ziskibien da gemer e gorr ha d'e zebelia, hag ez eont da gas kelou da Jezuz.

DEOC'H-C'HWI REI DEZO DA ZEBRI!

Mk 6, 31...
Lk 9, 10...
Yn 6, 1...
Mz 15,32

¹³ Pa glev ar c'helou, e tec'h Jezuz ahano, en eur vag, warzu eul lec'h distro, diouz e du... Klevet ganto ano euz kement-se, e kerz an dud war o lerc'h, war o zroad, euz o c'heriadennou... ¹⁴ Pa ziskenn, e wél leun a dud: rannet eo e galon evito, ha da dud klañv e ro ar pare...

¹⁵ Deuet an abardaez, e teu davetañ e Ziskibien, o lavared:

“Dibourvez eo al lec'h-mañ, hag eet eo an eur war-raog!. Kasit an dud kuit, ma 'z-aint d'ar c'heriadennou da brena magadurez evito o-unan!”.

¹⁶ Jezuz avad a lavar dezo: **“N'o-deus ezomm ebed da vond kuit! Deoc'h c'hwi rei dezo da zebri!”** ¹⁷ Hag e lavaront dezañ: **“N'eus deom amañ nemed pemp baraenn ha daou besk!”** ¹⁸ Eñ avad a lavar dezo: **“O degasit din amañ!”.**

Yn 11,41
Yn 17,1

¹⁹ Kemenn a ra d'an dud gourvez war ar yeot. En eur gemer ar pemp baraenn hag an daou besk, e sav e zaoulagad warzu an Neñv hag e lavar trugarez. Ranna a ra ar baraennou hag o rei d'an Diskibien, hag an Diskibien d'an dud. ²⁰ Debri a ra an oll ha bez' ez int maget mad! Dastum a reont an dreist euz an tammou: daouzeg panerad leun!

²¹ An dud o-deus debret a zo anezo wardro pemp mil den, heb konta merhed ha bugale...

KREDER LAOSK! PERAG OUT BET NEHET ?

Mk 6, 45...
Yn 6, 15...

²² Raktal e ra d'e Ziskibien sevel er vag ha mond en e raog d'an tu-all d'al Lenn, epad ma kaso kuit an dud... ²³ Kaset an dud kuit, e sav diouz e du war ar Menez da bedi. Deuet an abardaez, ema eno e-unan-penn...

²⁴ Ar vag he-deus neuze tehet meur a stad diouz an douar. Gwall-hejet eo gand an tonnou, rag an avel a zo a-benn! ²⁵ D'ar bevare beilla-denn euz an noz, e teu warzu enno o vale war ar mor. ²⁶ Ouz e weled, o vale war ar mor, ez eo strafuillet an Diskibien! **“Eur skeud eo!”** emezo, hag e youhont gand ar spont!...²⁷ Raktal e komz dezo Jezuz o lavared: **“Bezit kaloneg! Me eo a zo! N'ho-pet ket aon!”**

²⁸ Ha Pèr a respont dezañ o lavared: **“Ma 'z-eo-C'hwi an Hini eo, gourhemennit din mond davedoc'h war an dour!”** ²⁹ **“Deus-ta!”** emezañ! Diskennet euz ar vag, ema Pèr o vale war an dour hag o vond daved Jezuz! ³⁰ Med o weled ez eo kreñv an avel, e krog aon ennañ, ha pa ziskenn don en dour e youc'h: **“Aotrou!. Va zaveteit!”** ³¹ Raktal ec'h astenn Jezuz e zorn evid e dapoud, hag e lavar dezañ: **“Kreder laosk! Perag out bet nehed?”** ³² Eur wech savet o daou er vag, e sioula an avel! ³³ Ar re a zo er vag a stou dirazañ en eur lavared: **“Evid gwir, ez oc'h-c'hwi Mab da Zoue!”**

Mz 4,3
Mz 16,16

³⁴ Treuzet ganto al Lenn, e touaront e Jenezaret. ³⁵ Deuet d'e anaoud, gwazed an tu-ze a gas kelou dre ar vro-ze a-bez. Davetañ e tegasont an oll dud o-deus poan, ³⁶ ha digantañ e c'houlennont ma c'hellint nemetkén touch ouz fleñch e vantell! Ha kement hini a douch outi a vez saveteet...

15

PERAG E VRESIT GOURHEMENN DOUE ?

Mk 7, 1...
Lk 11, 38...

¹ Daved Jezuz e teu neuze euz Jeruzalem Farizeiz ha Skribed, o lavared:

Gal 1,14
Kol 12,8...

² **“Perag e vez ho tiskibien o vresa ar C'hustum deuet euz an Dud-koz ? Rag ne walhont ket o daouarn araog debri bara!”** ³ Respont a ra o lavared dezo: **“Perag e vresit, c'hwi ive, Gourhemenn**

Erm 20,12
Dt 5,16

Doue dre ho Kustum ? ⁴ **Rag Doue e-neus lavaret:** “*Enor da dad ha da vamm!*” **hag ive:** “*An neb a valloz tad pe vamm, a vo lazet!*” ⁵ **Med c’hwi a lavar:** “*An neb e-no lavaret d’e dad pe d’e vamm: “Donezon zakr eo kement a zeuje diganin d’az skoazella!”*, ⁶ **hennez n’ e-no ket ken da enori e dad pe e vamm!** **ha dre ho Kustum, e tinerzit Komz Doue!...** ⁷ **Touellourien, profedet kaer e-neus Izai diwar ho penn, o lavared:**

Iz 29,13

⁸ “*Ar Bobl-mañ am enor gand he muzellou!*

Salm 78,36

“*O c’halon avad a zo pell diouzin!*

⁹ “*Heb frouez ebed am zoujont,*

“*O kelenn kelennou, reolennou-tud!*” ...

Mk 7,14...

DEBRI HEB GWELHI AN DAOUARN NE ZIHLAN KET!

¹⁰ **Ha Jezuz a c’halv an dud davetañ ha dezo e lavar:** “**Selaouit hag intentit!** ¹¹ **N’ eo ket ar pez a ia er genou a zihlan an den, med ar pez a zeu er-mêz euz ar genou, an dra-ze a zihlan an den!**” ¹² **Neuze e teu e Ziskibien da lavared dezañ:** “**Ha gouzoud a rit ez eo bet skoillet ar Farizeiz o kleved eur seurt Komz ?**” ¹³ **Respont a ra o lavared:** “**Kement plantenn ha n’ eo ket bet plantet gand va Zad euz an Neñv a vo diwriziet!** ¹⁴ **Deoc’h o lezel: n’eus anezo nemed tud dall o vlenia tud dall! Ma tegouez avad d’eun den dall blenia eun den dall, e kouezint o daou en eur poull don!”**

Yn 15,2

Lk 6,39

Rom 2,19

Mk 4,13

¹⁵ **Ha Pêr da zavel e vouez ha da lavared dezañ:** “**Displegit deom ar Barabolenn!**” ¹⁶ **Hag e lavar dezo:** “**Bremañ c’hoaz, daoust ha c’hwi ive a zo poud a spered ?** ¹⁷ **Kement a ia er genou, daoust ha ne ouezit ket e tiskenn er c’hov hag e vez distaolet er foz ?** ¹⁸ **Med kement a zeu euz ar genou, a zeu euz ar galon, ha kement-se a zihlan an den!** ¹⁹ **Rag euz ar galon e teu an divizou fall: lazadou, avoultrereziou, laeradou, falstesteniou, blasfemou ;** ²⁰ **Kement-se a zihlan an den! Debri heb gwelhi an daouarn ne zihlan ket an den...”**

BRUZUNOU DIWAR TAOL AN AOTROU!

Mk 7, 24...

²¹ **O vond ahano, e tec’h Jezuz da vro Tîr ha Sidon.** ²² **Ha setu eur vaouez, eur Gananeadez deuet euz ar vro-ze, o youhal en eur lavared:** “**Ho-pet truez ouzin, Aotrou! Mab-David! Va merc’h a zo gwall-zujet d’eun droug-spered!**” ²³ **Med ne respont seurt ebed dezi...** **Hag e Ziskibien mond davetañ evid e aspedi o lavared:** “**Grit, ma ’z-aio kuit! Rag ema o youhal war on lerc’h!**” ²⁴ **Respont a ra o lavared:** “**N’on-me kaset nemed evid an Deñved kollet euz Ti Izrael!**” ²⁵ **Med dond a ra hi da stoui dirazañ en eur lavared:** “**Aotrou! Roit din sikour!**” ²⁶ **Eñ avad a respont:** “**N’ eo ket aotreet kemer Bara ar Vugale evid e stlepel d’ar chas bian!**” ²⁷ **Hi avad a lavar:** “**Ya ’vad! Aotrou! Padal e tebr ar chas**

Lk 11,8...

bian euz ar bruzunou a gouez diwar daol o aotrounez!”. ²⁸ Neuze e respont Jezuz o lavared: **“O Maouez! Braz eo da feiz! Ra c’hoarvezo dit diouz da c’houlenn!”.** Hag adaleg an eur-ze eo deut yac’h he merc’h!

Mk 7,31

²⁹ Distroet ahano, e teu Jezuz war ribl Mor ar Galile. Sevel a ra war ar Menez hag eno ec’h azez. ³⁰ Davetañ e teu leun a dud, en eur zegas ganto tud kamm, tud dall, re vahagnet, re vud ha kalz klañvourien all ; hag o zaoler a reont e-harz e dreid! Dezo e ro ar pare, ³¹ ken ma chom an dud souezet o weled re vud o komz, re vahagnet deuet yac’h, re gamm o vale, tud dall o weled sklêr, hag e tougont gloar da Zoue Izrael!...

Mk 8,1
Mz 14,1

³² Jezuz avad a c’halv e Ziskibien hag e lavar: **“Rannet eo va c’halon gand an dud-ze, rag abaoe bremañ tri devez e chomont d’am heul ha n’ o-deus seurt ebed da zebri! Ha ne fell ket din o c’has kuit war yun, gand aon na zeufent da zempla en hent!”** ³³ Hag e Ziskibien a lavar dezañ: **“A-belec’h e c’hellfem kavoud, er gouelec’h, kement-se a varaennou da vaga kement-se a dud ?”** ³⁴ Hag e lavar Jezuz: **“Ped baraenn ho-peus ?”- “Seiz! emezo, hag eun nebeud peskedigou!”.**

³⁵ Jezuz a gemenn d’an dud gourvez war an douar. ³⁶ Kemer a ra ar seiz baraenn hag ar pesked, lavared trugarez, ranna ar baraennou hag o rei d’e Ziskibien hag an Diskibien d’an dud. ³⁷ An oll a zebr hag a zo maget... Dastum a reont an dreist euz an tammou: seiz panerad leun! ³⁸ Ar re o-deus debret a zo anezo pevar mil den, heb konta merhed ha bugale. ³⁹ Goude beza kaset an dud kuit, e sav er vag evid mond warzu Bro Magadan...

16

DIWALLIT OUZ GOELL AR FARIZEIZ...

Mk 8, 11...
Lk 11,16
Mz 12,38

¹ Davetañ e teu ar Farizeiz hag ar Zadukeiz evid e denti o c’houlenn digantañ diskouez dezo eur zin euz an neñv... ² Hag e respont o lavared dezo: **“Deuet an abardaez, e lavarit: ‘Amzer vrao! rag ruz-tan an oabl!’** ³ **Ha diouz ar mintin : ‘Gwall amzer hirio, ruz livet fall an oabl!’ Bez’ e ouezit lenn e doare an oabl, hag e sinou an Amzeriou ne c’hellit ket henn ober!** ⁴ **Eur rummad droug hag avoultrer a glask eur zin, ha sin all ebed ne vo roet dezañ nemed sin Jonaz!”.** Hag o lezel a ra ha mond kuit...

Yn 6,30
Lk 12,54Mk 8,14...
Lk 12,1

⁵ Hag en eur vond d’an tu-all, o-deus an Diskibien ankounaheet kemer ganto baraennou. ⁶ Jezuz avad a lavar dezo: **“Gwelit da ziwall ouz goell ar Farizeiz hag ar Zadukeiz!”.** ⁷ Enno o-unan e tivizont o lavared: **“N’ on-eus ket kemeret ganeom a varaennou!”** ⁸ Henn gouzoud a ra Jezuz hag e lavar dezo: **“Perag e tivizit ennoc’h hoc’h-unan,**

Mk 4,13

krederien laosk, pa n'ho-peus ket kemeret ganeoc'h a varaennou ?
⁹ Ne intentit ket c'hoaz, ha ne zalhit ket soñj euz ar pemp baraenn evid ar pemp mil den, nag euz ped panerad ho-peus kaset ganeoc'h ?
¹⁰ Nag euz ar seiz baraenn evid ar pevar mil den, nag euz ped panerad ho-peus kaset ganeoc'h ?
¹¹ Penaoz ne intentit ket na gomzen-me deoc'h diwar-benn baraennou! Diwallit ouz Goell ar Farizeiz hag ar Zadukeiz!”
¹² Neuze ec'h intentont ne lavare ket dezo diwall ouz goell ar baraennou, med ouz kelennadurez ar Farizeiz hag ar Zadukeiz!...

C'HWI EO AR MESIAZ, MAB AN DOUE-BEO!

¹³ Jezuz avad, en em gavet e Bro Sezare-Filip, a c'houlenn ouz e Ziskibien: **“Piou, eme an dud, piou eo Mab-an-Den ?”**
¹⁴ Hag e lavaront: **“Lod a lavar ‘Yann Vadezour’, lod all ‘Eli’, re all ‘Jeremi’, pe ‘unan euz ar Brofeded!’**
¹⁵ Hag e lavar dezo: **“Piou, emezoc'h avad, piou on-me ?”**
¹⁶ Respont a ra Simon Pèr o lavared: **“C’hwi eo a zo ar Mesiaz! Mab an Doue-Beo!”**
¹⁷ Respont a ra Jezuz o lavared dezañ: **“Eüruz out-te, Simon-mab-Yona, rag n’ eo ket ar c’horv hag ar gwad o-deus henn diskuliet dit, med va Zad hag a zo en Neñv!**
¹⁸ Ha me a lavar dit: **Te eo a zo Roc’h! Ha war ar Roc’h-ze e savin va Iliz! Ha galloudegeziou an Ifern ne vezint ket trec’h dezi!**
¹⁹ Dit-te e roin alhweziou Rouantelez an Neñv: **ha kement az-po liammet war an douar a vezo liammet an Neñv! Ha kement az-po diliammet war an douar a vezo diliammet en Neñv!”**

Mk 8, 27...
Lk 9, 1...
Yn 6, 69...

Yn 1,42
Rom 7,5

Disk 3,7

Mk 1,34
Mk 8,31
Lk 9,33
Mz 17,12

Mk 4,13

²⁰ Neuze e c'hourdrouz e Ziskibien evid na lavarint da zen ez eo Eñ ar Mesiaz...
²¹ Diwar neuze, e stag Jezuz da ziskouez d’e Ziskibien e rank mond da Jeruzalem, gouzañv kalz poaniou a-berz ar Gozidi, ar Veleien-Vraz hag ar Skribed, beza lakeet d’ar maro, ha d’an trede deiz adsevel da veo!
²² Ha Pèr e gas gantañ a gostez, hag e stag d’ ober trouz dezañ o lavared: **“A drugare Doue evidoc’h, Aotrou! Nann, ne zegouezo ket kement-se ganeoc’h!”**
²³ Med en eur zistrei e lavar dezañ: **“Kee a-dreñv din, Satan!... Eur skoill out evidon, pa ne gavez ket mad menoziou Doue, med re an dud!”**

Mk 8,24...
Lk 9,23...

SAMMA AR GROAZ HA DOND D’AM HEUL!

²⁴ Neuze e lavar Jezuz d’e Ziskibien: **“Ma fell da unan bennag dond war va lerc’h, dezañ en em nac’h e-unan, samma e groaz ha dond d’am heul!**

Lk 14,27
Yn 12,25
1 Tes 1,7
Mz 26,64

²⁵ Rag ma fell da unan bennag savetei e vuez, hennez he c’hollo! An hini avad a gollo e vuez ablamour din-me, hennez he c’havo!
²⁶ Ha petra a c’hounezo eun den, m’ e-neus gounezet ar Bed a-bez ha ma koll e vuez ? Petra a rofe eun den en eskemm euz e vuez?
²⁷ Rag Mab-an-Den a zo war-nes dond e gloar e Dad gand e êlez, ha neuze e rento da bep hini diouz e oberou...

²⁸ Evid gwir, e lavaran-me deoc'h: e-touez an dud a zo amañ, bez' ez eus lod ha ne dañvint ket ar maro ken n' o-do gwelet Mab-an-Den o tond en e Rouantelez!

17

TREUZ-STUMMET EO-EÑ DIRAZO!

¹ Ha c'hwec'h devez goude-ze, e kemer Jezuz gantañ Pèr, Jakez ha Yann e vreur, hag o c'has a ra, a-gostez, war eur Menez uhel-dreist!

² Ha treuz-stummet eo-Eñ dirazo: e zremm a sked evel an heol, e zillad a zeu da veza gwenn-kann evel ar sklêrijenn! ³ Ha setu o para dirazo Moizez hag Eli, stag da gomz gantañ! ⁴ Pèr avad a zav e vouez da lavared: **“Aotrou! Kaer eo deom beza amañ! Ma karit e rin amañ teir deltenn: deoc'h-c'hwi unan, da Voizez unan, ha da Eli unan!”**

⁵ O komz ema c'hoaz, ha setu eur goabrenn skeduz oc'h ober skeud warno, ha setu eur vouez o tond euz ar goabrenn hag o lavared: **“Hemañ eo va Mab muia-karet! Ennañ e kavan va dudi! Deoc'h E zelaou!”**.

⁶ Ouz he c'hleved, e kouez an Diskidien, o zal d'an douar! hag e krog enno eun aon spontuz! ⁷ Daveto e teu Jezuz, hag en eur douch outo, e lavar: **“Savit! Ha n' ho-pet ket aon!”** ⁸ O sevel o daoulagad, ne welont nikun, nemed Jezuz hepkén all!

⁹ P' emaint o tiskenn diwar ar Menez, e kemenn dezo Jezuz: **“Na gomzit da zen euz ar weledigez-ze, ken na vezo Mab-an-Den adsavet a-douez ar re varo!”** ¹⁰ Hag e Ziskibien a c'houlenn outañ: **“Perag' ta, emezo, e lavar ar Skribed e rank Eli dond da genta ?”** ¹¹ Eñ avad a respont o lavared: **“Skrivet eo ‘Eli a zo da zond hag a reizo pep tra!’** . ¹² **Me avad a lavar deoc'h: deuet eo Eli dija, hag an dud n' o-deus ket e anavezet! Med greet o-deus dezañ ar pez a garent! Evel-se ive, ema Mab-an-Den o vond da c'houzañv poaniou euz ho ferz!”** ¹³ An Diskibien a intent neuze e-neus komzet dezo diwar-benn Yann-Vadezour!

M'HO-PEUS FEIZ EVEL EUN HADENN ZEZO!

¹⁴ Pa zegouezont e-touez an dud, e teu davetañ eun den: en eur zaoulina dirazañ, ¹⁵ e lavar: **“Aotrou! Ho-pet truez ouz va mab! Rag loarieg eo hag e tiwask poan! Aliez e kouez en tan hag aliez en dour!”** ¹⁶ **E zegaset am-eus d' ho Tiskibien, ha n' o-deus ket gellet e barea!”**

¹⁷ Jezuz a respont o lavared: **“O rummad diskredig ha troet da fall! Beteg peur e vezin ganeoc'h ? Beteg peur e vezo din d'ho kouzañv ? Degas-eñ din amañ!”** ¹⁸ Jezuz a ra trouz dezañ, hag ez a an

droug-spered er-mêz euz ar bugel: pareet eo hemañ d'an eur-ze!

Lk 17,6
Mk 11,22

¹⁹ Neuze e teu e Ziskibien daved Jezuz, ha dezañ, outañ e-unan, e lavaront: **“Perag n'on-eus-ni ket gellet e gas er-mêz ?”** ²⁰ Dezo avad e lavar: **“Pa z'eo dister ho feiz! Evid gwir e lavaran deoc'h: m'ho-peus feiz evel eun hadenn zezo, e lavaroc'h d'ar menez-mañ ‘Tremen ahallenn beteg aze!’, hag e tremeno! Ne vo netra dreist ho kalloud! ²¹ Ar seurt sperejou ne z'eont er-mêz nemed dre ar bedenn hag ar yun!”**

MAB-AN-DEN A ZO O VOND DA VEZA ROET.

Mk 9, 30
Lk 9, 43

²² Pa z' int bodet er Galile, e lavar Jezuz dezo: **“Mab-an-Den a zo o vond da veza roet etre daouarn tud: ²³ e laza a raint, ha d'an trede deiz ec'h adsavo!”** Hag e chomont glaharet-oll!

²⁴ Pa zegouezont e Kafarnaom, e teu dastumerien an Didrakm daved Pèr en eur lavared: **“Daoust hag ho Mestr ne ro ket an Didrakm ?”** ²⁵ **“Eo'vad!”** emezañ! Eet Pèr en ti, e teu Jezuz davetañ o lavared: **“Petra a gav dit, Simon: rouaned an douar , digand pe-re e kemeront taillou ha truaj ? Digand o bugale pe digand diavezidi ?”** ²⁶ Pa lavar ‘digand diavezidi’, e lavar Jezuz dezañ: **“neuze 'ta e vez diskarg ar vugale ! ²⁷ Med deom diwall d'o skoilla, kee d'ar mor, taol da higen, hag ar pesk kenta a zavo, digor dezañ e c'henou, hag e kavi eur pezaour! Dit e gemer hag e rei dezo, evidon hag evidout!”**

18

Mk 9, 33
Lk 9, 43

SIWAZ D'AN DEN A LAKA MEIN-SKOILL

Mk 10,15
Lk 18,17
Yn 3,5

¹ D'an eur-ze ez a an Diskibien daved Jezuz o lavared: **“Piou'ta eo ar brasa e Rouantelez an Neñv ?”** ² Gelper a ra davetañ eur bugel hag e lakaad e-kreiz an oll, ³ en eur lavared: **“Evid gwir, e lavaran deoc'h: ma ne droit ket ho kalon evid dond da veza evel ar vugale, nann, ne z'eoc'h ket e Rouantelez an Neñv! ⁴ Kement hini eta en em ra izel evel ar bugel-mañ, hennez eo ar brasa e Rouantelez an Neñv! ⁵ Hag an hini a zegemer em Ano eun heveleb bugel, am deger me va-unan!**

Mk 9,43..
Mz 5,29

⁶ Med an neb a zeufe da lakaad eur skoill da unan euz ar re vian-mañ a gred ennon, gwelloc'h eo dezañ e vefe staget mên eur vilin-azen ouz e c'houzoug hag e vefe kaset da strad ar mor!”

⁷ **“Siwaz d'ar Bed diwar goust ar skoillou! Rag red eo e vefe skoillou, med siwaz d'an den a vo drezañ lakeet eur skoill! ⁸ Ha ma vez da zorn pe da droad eur skoill evidout, dit e droha hag e stlepel pell diouzit! Rag kaerroc'h eo dit mond er Vuez mounn pe vahagnet,**

eged dit, gand da zaou zorn ha da zaou droad, beza stlapet en tan peurbaduz! ⁹ Ha ma vez da lagad eur skoill evidout, dit e denna hag e stlepel pell-pell diouzit! Kaerroc'h eo dit mond born er Vuez, eged dit, gand da zaoulagad, beza stlapet er jeen!”

¹⁰ “Diwallit da zisprizoud eun unan euz ar re vian-mañ! Rag, me' lavar deoc'h: o êlez en Neñv a wel bepred dremm Va Zad a zo en Neñv!”.

Lk 15,4

NE FELL KET D'HO TAD E VEFE KOLLET EUN UNAN!

¹¹ (Rag deuet eo Mab-an-Den da zavetei kement a zo kollet.) ¹² Lk 9,56... “Petra a gav deoc'h ? Ma z'eus da unan bennag kant dañvad ha ma teu unan anezo da ziañka, daoust ha ne lezo ket an naonteg-hapevar-ugent all war ar menez evid mond da glask an hini dianket ? ¹³ Lk 15,4... Ha ma teu d'e gavoud, evid gwir e lavaran deoc'h: diwar henez e laouennaio muioc'h eged diwar an naonteg-hapevar-ugent n'int ket bet dianket! ¹⁴ Evel-se ne fell ket d'ho Tad euz an Neñv e vefe kollet eun unan euz ar re vian-mañ!”

Lk 17,3

Dt 19,15

Rom 16,17

¹⁵ “Ma vank da vreur en da geñver, kee da rebech dezañ, etrezoc'h ho taou, te hag eñ hepkén! Ma teu d'az selaou, az-po gounezet da vreur! ¹⁶ Ma ne zelaou ket avad, kemer c'hoaz ganit unan pe zaou all, ma chomo an abadenn a-bez war muzellou daou pe dri! ¹⁷ Ma ne fell ket dezañ o zelaou, lavar d'an Iliz! Ha ma ne fell ket dezañ selaou an Iliz kennebeud, ra vezo evidout evel eur Pagan hag eur Publikad!”

Yn 20,23

Yn 15,7

¹⁸ “Evid gwir e lavaran deoc'h: kement ho-po liammet war an douar a vo liammet en Neñv! Ha kement ho-po diliammet war an douar a vo diliammet en Neñv!”

¹⁹ “Evid gwir e lavaran deoc'h adarre: ma teu daou ahanoc'h war an douar d'en em glevet war gement o-deus da c'houlenn, e tegouezo dezo kement-se digand va Zad a zo en Neñv! ²⁰ Hag el lec'h ma vez daou pe dri bodet em Ano, eno e vezan en o c'hreiz!”

Lk 17,4...

Mk 6,12...

EVEL-SE E RAI O HO TAD MA NE BARDONIT KET!

²¹ Neuze e teu Pèr davetañ, ha dezañ e lavar: “Aotrou! Pet kwech e c'hello va breur mankoud em c'heñver hag e vo din pardoni dezañ ? Beteg seiz kwech ?” ²² Ha Jezuz a lavar dezañ: “Ne lavaran ket dit beteg seiz kwech, med beteg deg-ha-tri-ugent kwech seiz kwech! ²³ Rag-se, bez' e vez heñvellet Rouantelez an Neñv ouz eun den, eur Roue, a fell dezañ reñka e gont gand e zervicherien. ²⁴ Pa grog da reñka, e tegaser dezañ unan hag a zo dleour dezañ a zeg mil talant!... ²⁵ Pa n'eus ket da hemañ peadra da renta, e kemenn ma vefe gwerzet, eñ e-unan, hag ive e wreg, e vugale ha kement a zo dezo, evid ma vo rentet pep tra. ²⁶ En eur goueza d'an douar, e stou

Mk 7, 24...

ar zervicher-ze hag e lavar: ‘Kemerit hoc’h amzer ganin hag e rentin deoc’h pep tra!’²⁷ Rannet e galon, aotrou ar zervicher-ze a laka diliamma an den, ha dezañ e ro an dilez euz e zle...

²⁸ En eur vond er-mêz, e kav ar zervicher-ze unan euz e genseurte d a zle dezañ kant diner! Tapoud a ra krog ennañ, hag, ouz e vouga, e lavar dezañ: ‘Rent kement a zleez!’²⁹ En eur goueza d’an douar, e genseurt en asped o lavared: ‘Kemer da amzer ganin hag e rentin dit!’³⁰ Eñ avad ne fell ket dezañ: mond a ra d’e stlepel er prizon beteg n’e-no rentet ar pez a zle...

³¹ O weled ar pez a zo c’hoarvezet, ez eo glaharet oll e genseurte d: hag ez eont da ziskulia d’an aotrou kement a zo degouezet...³² hag an aotrou neuze a c’halv an den hag e lavar dezañ: ‘Servicher droug! Euz an dle-ze a-bez am-eus-me greet dit an dilez, peogwir az-peus va fedet!’³³ Daoust ha ne oa ket red dit ive kaoud truez ouz da genseurt, evel m’am-eus-me bet truez ouzit?’³⁴ Eet e kounnar, e aotrou e ro etre daouarn ar vourrevien, beteg m’e-no rentet kement a zle dezañ!

Mz 6,14

³⁵ Evel-se ive e raio deoc’h va Zad euz an Neñv, ma n’ho-peus ket pardonet a-greiz ho kalon, pep hini ahanoc’h d’e vreur!...”

19

ARABAD DA ZEN DISRANNA AR PEZ E-NEUS DOUE UNANET!

Mz 5, 31
Mk 10, 1...
Lk 16, 18

¹ Echueta gantañ ar prezegenno-ze, e kuita Jezuz ar Galile evid mond e bro ar Jude en tu-all d’ar Jordan. ² D’e heul ez a leun a dud, hag eno e ro dezo ar pare.

³ Davetañ e teu Farizeiz evid e denti, o lavared: “**Daoust hag aotreet eo gand eun den kas kuit e wreg, diwar bep seurt digarez?’**”⁴ Respont a ra o lavared: “**Daoust ha n’ho-peus ket lennet:**

Gen 1,27
Gen 2,24
Ef 5,31

“*Ar C’hrouer, er penn-kenta, o reas gwaz ha maouez, hag e lavaras:*

⁵ “*Setu perag e tilezo eun den e dad hag e vamm,*

hag e vo unanet (gand Doue) d’e wreg, hag e teuint o daou da veza eur c’horv nemetken!”

1 Kor 7,10

⁶ “*Evel-se, n’eus ket ken daou anezo, med eur c’horv nemetken!”*

“**Ar pez e-neus eta Doue unanet, arabad da zén henn disran-na!”**

Lk 16,18

⁷ Dezañ e lavaront: “**Perag ’ta e-neus Moizez kemennet deom rei eur skrid a zisrann ha kas kuit!”** ⁸ Dezo e lavar: “**Diwar ma z’eo kaledet ho kalonou e-neus Moizez aotreet ganeoc’h kas kuit ho kwra-**

gez! Med er penn-kenta ne oa ket evel-se! ⁹ Me avad a lavar deoc'h: an neb a gas kuit e wreg (nemed e stad a zerherez e vefe), hag a zimez gand unan-all, hennez a ra avoultriez!”

¹⁰ Lavared a ra dezañ e Ziskibien: “Ma vez evel-se stad an den gand ar vaouez, ne dalvez ket dimezi!” ¹¹ Eñ avad a lavar dezo: “N’eo ket an oll a intent ar Gomz-ze, med hepkén ar re a zo roet dezo hec’h intent!”

1 Kor 7,1...

¹² Rag bez’ ez eus tud difrouez bet ganet evel-se euz korv o mamm ; ha bez’ ez eus tud difrouez bet lakeet difrouez gand an dud ; ha bez’ ez eus tud difrouez hag o-deus en em zalhet difrouez evid Rouantelez an Neñv! An hini a c’hell intent, ra intento!”

Mk 10, 13...
Lk 18, 15
1 Tim 4,9

LEZIT AR VUGALE DA ZOND DAVEDON!

¹³ Bugale a zo neuze degaset davetañ, dezañ astenn warno e zaouarn en eur bedi evito. An Diskibien avad a ra trouz dezo. ¹⁴ Hag e lavar Jezuz: “Lezit ar vugale ha na virit ket outo da zond davedon, rag d’an heveleb re eo Rouantelez an Neñv!”.

¹⁵ Hag astenn a ra warno e zaouarn, ha mond kuit ahano...

Mk 10, 17
Lk 18, 18

MA FELL DIT BEZA PEURVAD!

¹⁶ Ha setu eun den o tond davetañ hag o lavared: “Mestr! Petra a vad eo réd din ober evid kaoud buez peurbaduz ?” ¹⁷ Eñ avad a lavar dezañ: “Perag e c’houlennez ouzin diwar-benn an Hini Mad ? An Hini Mad a zo e-unan kaer! Ma fell dit mond er Vuez, mir ar gour-hemennou!” ¹⁸ “Pe re ?” emezañ... Hag e lavar Jezuz: “Kement-mañ: ne lazi ket! Ne ri ket avoultriez! Ne laeri ket! Ne ri ket a fals-testeni! ¹⁹ Enor da dad ha da vamm, ha kar da nesa eveldout da-unan!” ²⁰ Hag ar pôtr yaouank a lavar dezañ: “Kement-se a viran! Petra a zioueran-me c’hoaz ?” ²¹ Ha Jezuz a lavar dezañ: “Ma fell dit beza peurvad, kee ha gwerz da vadou, evid rei d’ar beorien! Hag az-po eun Teñzor en Neñv! Ha deus d’am heulia!” ²² Pa glev ar paotr yaouank ar gomz-ze, ez a kuit, glaharet, rag bez’ e-neus eur bern madou!

Mk 10,23
Lk 18,24

²³ Jezuz avad a lavar d’e Ziskibien: “E gwirionez e lavaran deoc’h: d’eun den pinvidig e vo diêz mond e Rouantelez an Neñv! ²⁴ Adarre e lavaran deoc’h: êsoc’h eo d’eur c’hañval mond dre eun toull-nadoz eged d’eun den pinvidig mond e Rouantelez an Neñv!” ²⁵ Ouz e glevet, e chom souezet an Diskibien hag e lavaront: ²⁶ “Piou’ta a c’hell beza saveteet ?”. En eur daoler eur zell warno, e lavar Jezuz dezo:

Lk 1,37

“Kement-se a zo dreist galloud an dud!

Med pép tra a zo e galloud Doue!”

Mk 10,28
Lk 18,28

PETRA E VEZO DEOM-NI ETA ?

²⁷ Respont a ra neuze Pèr hag e lavar dezañ: “Setu m’*on-eus-ni lezet pep tra evid hoc’h heulia! Petra a vezo deom-ni eta ?*”

Lk 22,30
Disk 20,14
2 Kor 6,2

²⁸ Jezuz avad a lavar dezo: “Evid gwir e lavaran deoc’h: c’*hwi hag ho-peus va heuliet, da Zeiz ma vo neveset pep tra, pa azezo Mab-an-Den war e drôn a-c’hloar, c’hwi ive a azezo war zaouzeg trôn evid barn Daouzeg Meuriad Izrael!* ²⁹ Ha kement-hini e-no dilezet tiez, pe vreudeur, pe c’*hoarezed, pe dad pe vamm, pe wreg pe vugale, pe barkeier, ablamour d’am Ano, a resevo kant kwech muioc’h, hag e-no buez peurbaduz da lod-hêrez!*”

Mz 20,16

³⁰ “Kalz re genta a vo da ziweza!

“Ha kalz re ziweza a vo da genta!”

20

AR RE ZIWEZA A VO DA GENTA!

¹ Hag heñvel eo Rouantelez an Neñv ouz eur Penn-tiegez a ia er-mêz kerkent hag an deiz da c’*hopra devezourien evid e winieg.* ² En em glevet a ra gand an devezourien evid eun diner an devez, hag eñ o c’*has d’e winieg.* ³ Eet wardro an trede eur, e wél re all en o zav war al leur-kêr, dilabour! ⁴ Ha dezo e lavar: ‘C’*hwi ive, kit d’am winieg, hag ar pez a vo just a roin-me deoc’h !*’ ⁵ Ha mond a reont... Eet adarre wardro ar c’*hwehved eur, hag an naved eur, e ra kemend-all !* ⁶ Eet wardro an unnegved eur, e kav re all en o zav hag e lavar dezo: ‘Perag oc’h-c’*hwi chomet aze dilabour a-hed an deiz ?*’ ⁷ hag e lavaront dezañ: ‘Pa n’*eus deuet den d’or gopra!*’ Ha dezo e lavar: ‘C’*hwi ive, kit d’am winieg!*’.

⁸ Deuet an abardaez, e lavar Aotrou ar Winieg d’e verour: ‘Galv an devezourien ha ro dezo ar gopr, o vond euz ar re ziweza d’ar re genta!’.

⁹ Dond a ra ar re degouezet wardro an unnegved eur, hag e tegemeront beb a ziner! ¹⁰ En eur zond, ar re genta a zonzj kaoud muioc’h! Hag e tegemeront int ive beb a ziner! ¹¹ Ouz e zegemer, e c’*hrozmolont a-eneb ar penn-tiegez,* ¹² hag e lavaront: ‘Ar re ziwezamañ n’*o-deus greet nemed eun eurvez!* Ha c’*hwi o laka par deom-ni, ni hag on-eus diwasket bec’h an deiz, ha tommder vraz!*’ ¹³ Respont a ra da unan anezo: ‘Den mad! Ne ran ket a c’*haou ouzit: daoust ha*

1 Kor 9,25
Rom 9,16
2 Tim 4,8

n'eo ket war eun diner az-peus en em glevet ganin ? ¹⁴ Kemer ar pezh a zo dit! ha kee kuit! Me a fell din rei d'an diweza-mañ eveldit-te! ¹⁵ Daoust ha n'eo ket aotreet ganin ober ar pezh a garan gand ar pezh a zo din ? Pe daoust ha fall eo da lagad pa z'on-me mad ?

¹⁶ 'Evel-se e vo ar re ziweza da genta. Hag ar re genta da ziweza!'”.

MAB-AN-DEN A ZO DEUET EVID SERVICHA!

¹⁷ P'ema Jezuz o vond da zével da Jeruzalem, e kemer an Daouezeg outo o-unan hag en hent e lavar dezo: ¹⁸ “Setu ma savom da Jeruzalem ha ma vo roet Mab-an-Den etre daouarn ar Veleien-Vraz ha re ar Skribed: e varn a reint d'ar maro, ¹⁹ hag e rei etre daouarn ar Baganed, dezo d'e c'hoapaad, d'e skourjeza hag d'e staga ouz ar groaz! ha d'an trede deiz ec'h adsavo!”

²⁰ Neuze e teu davetañ mamm mibien Zebede gand e mibien: en eur stoui, e c'houlenn eun dra bennag digantañ. ²¹ Eñ avad a lavar dezi: “Petra 'fell dit ?” Hag hi a lavar: “Lavarit ma vo an daou vab-mañ-din azezet, unan a-zehou, egile a-gleiz deoc'h en ho Rouantelez!” ²² Respont a ra Jezuz o lavared: “Ne ouezit ket petra c'houlennit! Daoust ha bez' e c'hellit eva ar c'halirad am-eus-me da eva ?”. Lavared a reont: “Bez' e c'hellom!” ²³ Hag e lavar dezo: “Va c'halirad avad a evoc'h! Med an azeza a-zehou pe a-gleiz din, n'eo ket din-me rei, med roet e vo d'ar re e-neus va Zad renket an dra-ze evito!”

²⁴ Ouz o c'hleved, ez eo kounnaret an deg-all ouz an daou vreur! ²⁵ Ha Jezuz o galv davetañ hag e lavar dezo: “Gouzoud a rit: gouarnourien ar baganed a ra o aotrounez warno, hag ar pennou-braz a bouez warno! ²⁶ Ne vo ket evelse en ho touez! Med an hini ahanoc'h a glaskfe beza braz a vo servicher deoc'h! ²⁷ Hag an hini ahanoc'h a glaskfe beza ar c'henta a vo sklav deoc'h! ²⁸ Evel-se, n'eo ket deuet Mab-an-Den evid beza servichet, med evid servicha hag evid rei e vuez da frankiza leun a dud!”.

HO-PET TRUEZ OUZOM, MAB-DAVID!

²⁹ P'emaint o kuitaad Jeriko, ez a leun a dud d'e heul... ³⁰ Ha setu daou zen dall azezet war ribl an hent, ha deuet da glevet emma Jezuz o tremen, o youhal e lavaront: “Aotrou! Ho-pet truez ouzom, Mab-David!” ³¹ An dud a ra trouz dezo, ma chomint sioul! Hag e youhont kreñvoc'h o lavared: “Aotrou! Ho-pet truez ouzom, Mab-David!” ³² Chomet a-zav, Jezuz o galv hag e lavar: “Petra a fell deoc'h e rafen evidoc'h ?” ³³ Dezañ e lavaront: “Aotrou! Ma tigo on daoulagad!” ³⁴ Rannet e galon, Jezuz a douch ouz o daoulagad: raktal e welont sklêr! hag int-i mond d'e heul!...

21

Mk 11, 1...
Lk 19, 28...
Yn 12, 12...

SETU DA ROUE O TOND DAVEDOUT!

¹ Ha pa dostaont da Jeruzalem ha mac'h erruont e Betfaje, e-harz Menez an Olived, neuze e kas Jezuz daou euz e Ziskibien, ² o lavared dezo: **“Kit d’ar gêriadenn a zo dirazoc’h! Raktal e kavoc’h eun aze- nez ouz ar stag, hag eun azenig ganti: deoc’h o distaga hag o degas din! ³ Ha ma lavar unan bennag tra pe dra deoc’h, e lavaroc’h: ‘An Aotrou e-neus ezomm anezo hag o degaso raktal endro!’”**.

Zak 9,9
Iz 62,11

⁴ Kement-se a c’hoarvez evid ma vo sevenet ar pezh a zo lavaret dre ar profed, pa lavar:

⁵ *“Lavarit da Verc’h-Sion: ‘Setu da Roue o tond davedout, ” Dous, hag azezet war eun azen, war hini bian eul loen-zamm!’”*

⁶ Mond a ra an Diskibien hag ober evel m’e-neus Jezuz kemennet dezo.

⁷ Degas a reont an azevez hag an azenig, ha warno e lakont o dillad: hag ec’h azez Jezuz warno. ⁸ An darn vuia euz an dud a led o mantilli war an hent ; re all avad a droc’h skourrou euz ar gwez hag o led war an hent.

Salm
118,25

⁹ An dud, ar re a gerz araozañ hag ar re a zeu war-lerc’h a youc’h o lavared:

“Hozanna da Vab-David! Meuleudi d’an Hini a zeu en Ano Doue!

“Hozanna e barr an Neñv!”

¹⁰ Pa zegouez e Kêr Jeruzalem, e teu Kêr a-bez da virvillad, en eur lavared: **“Piou Henez ?”**... ¹¹ Hag an dud da lavared: **“Henez eo ar Profed Jezuz, an Hini euz Nazared er Galile!”**

Mk 11,15...
Lk 19, 45...
Yn 2, 13...

VA ZI A VO GALVET ‘TI-PEDI’ !

¹² Mond a ra Jezuz en Templ, hag e taol er-mêz an oll-re a zo o werza hag o prena en Templ. Taoliou an eskemmerien-arhant a daol d’an douar, hag ive kadoriou ar re a werz ar c’houlmed, ¹³ en eur lavared dezo:

Iz 56,7
Jer 7,11

“Skrivet eo : Va Zi a vo galvet ‘Ti-Pedi’ ! C’hwi avad a ra ane- zañ eun toull torfetourien!”

¹⁴ Hag en Templ e teu davetañ tud dall ha re gamm, ha dezo e ro ar pare!

Salm 8,3
Mk 11, 12...
Lk 13,6

¹⁵ O weled ar burzudou e-neus greet, hag ar vugale o youhal en Templ en eur lavared: **“Hozanna da Vab-David!”**, ez eo kounnaret ar Veleien-Vraz hag ar Skribed, ha dezañ e lavaront: **“Daoust ha kleved a rit petra lavar ar re-ze ?”** ¹⁶ Jezuz a lavar dezo: **“Ya vad! Daoust ha n’ho-peus ket lennet: ‘Euz genou ar vugaligou hag ar vagadennou ho-peus-c’hwi tennet meuleudi!’?”** ¹⁷ Hag Eñ d’o lezel ha da vond er-mêz euz Kêr beteg Betani: eno e tremen an noz!

Mz 8,10
Lk 17,6

¹⁸ Mintin-mad, en eur zistrei e Kêr, e teu naon dezañ! ¹⁹ Gweled a ra eur wezenn-fiez tost d’an hent, hag ez a beteg enni, med ne gav enni netra nemed deliou. Ha dezi e lavar: **“Nann! Diouzit ne zeuio biken frouez ebed ken!”** Ha dizehet eo war an-taol ar wezenn-fiez! ²⁰ Ouz he gweled, e chom souezet an Diskibien hag e lavaront: **“Penaoz eo dizehet ar wezenn-fiez war-an-taol ?”** ²¹ Respont a ra Jezuz o lavared dezo: **“Evid gwir e lavaran deoc’h: m’ho-pefe feiz ha na vefec’h ket etre an daou, ne rafec’h ket hepkén taol ar wezenn-fiez, med goude deoc’h lavared d’ar menez-mañ: ‘Bez dibradet ha bez stlapet er mor!’, kement-se a c’hoarvezfe! ²² Kement-tra a c’houlennoc’h er bedenn, en eur gredi start, a resevoc’h!”**

Mk 11, 27...
Lk 20, 1...

BADEZIAN YANN, A-BE-LEC’H E OA ?

Yn 2,18

²³ Eet Jezuz en Templ, hag Eñ e-kreiz kelenn, e teu davetañ Beleien-Vraz ha Kozidi, da lavared: **“Dre be-seurt galloud e rit kement-se, ha piou e-neus roet deoc’h ar galloud-ze ?”** ²⁴ Respont a ra Jezuz o lavared dezo: **“Ha diganeoc’h e c’houlennan-me ive eur gêr hepkén: ma lavarit din, me ive a lavaro deoc’h dre be-seurt galloud e ran kement-se! ²⁵ Badeziant Yann, a-be-lec’h e oa ? Euz an Neñv ? Pe euz an dud ?”** Hag int-i avad da zivizoud ken-etrezo o lavared: **“Ma lavarom ‘euz an Neñv’, e lavaro deom: ‘Perag ’ta n’ho-peus ket kredet ennañ ?”** ²⁶ Ma lavarom ‘euz an dud’, on-eus aon rag an dud, rag an oll a gemer Yann evid eur Profed!” ²⁷ Respont a reont da Jezuz o lavared: **“N’ouzom ket!”** Eñ ive a lavar dezo: **“Na me kennebeud, ne lavarint ket deoc’h dre beseurt galloud e ran kement-se!”**

PEHINI A RA BOLONTEZ DOUE ?

²⁸ **“Petra a gav deoc’h ? Eun den e-neus daou vab ; mond a ra da lavared d’an hini kenta: ‘Va mab! Kee hirio da labourad em gwinieg!’** ²⁹ Hemañ avad a respont o lavared: **‘Ne fell ket din!’** Med dahoude e sav keuz dezañ hag ez a... ³⁰ Mond a ra da lavared kemend-all d’an eil. Hemañ a respont o lavared: **‘Mond a rin, Aotrou!’** Med ne z’a ket!

Lk 7,29...
Lk 18,9
Mz 8,10

³¹ **Pehini anezo o daou a ra bolontez an Tad ?” - “An hini kenta!”** emezo. Ha Jezuz a lavar dezo: **“Evid gwir e lavaran deoc’h: ar Publikiz hag ar Zerhed a ia araozoc’h e Rouantelez Doue! ³² Rag deuet eo Yann davedoc’h dre Hent ar Justiz, ha n’ho-peus ket kredet**

Mk 12, 1...
Lk 20, 9...
ennañ! Ar Bublikiz hag ar Zerhed o-deus kredet ennañ! C’hwil avad, ouz o gweled, n’ho-peus ket troet ouz Doue dre gredi ennañ!"

DEUIT D’E LAZA, MA VO DEOM AN HÊREZ!

Yn 3,16
Gal 3,16
Heb 1,2
33 “Selaouit eur Barabolenn all. Eun dén, eur penn-tiegez, e-neus plantet eur winieg: lakaad a ra eur c’harz endro dezi, kleuza enni eur waskerez, sevel eun tour-ged, hag he feurmi da winierien. Hag eñ da guitaad ar vro! 34 Pa dosta poent ar frouez, e kas e zervicherien daved ar winierien, evid degemer ar frouez anezi. 35 Ar winierien avad a grog en e zervicherien, a sko gand unan, a laz egile hag a labez unan all. 36 Kas a ra c’hoaz servicherien all, niverusoc’h eged ar re genta ; ha d’ar re-mañ e reont kemend-all! 37 Da ziweza, e kas e Vab, en eur lavared: ‘Douja a reïnt va Mab!’ 38 Ar winierien avad, en eur weled ar Mab, a lavar ken-etrezo: ‘Hemañ eo ar Penn-Hêr! Deuit d’e laza, ma vo deom-ni an Hêrez!’. 39 Hag int-i paka krog ennañ, e stlepel er-mêz euz ar winieg, hag e laza...

40 Pa zeuio eta Aotrou ar winieg, petra ’raio d’ar winierien-ze ?”

Salm 118,22...
41 Dezañ e lavaront: “D’eur maro kriz e kaso an dud kriz-ze! Hag ar winieg a feurmo da winierien hag a zegaso dezañ ar frouez d’ar poent!” 42 Dezo e lavar Jezuz: “Daoust ha n’ho-peus biskoaz lennet ar Skrituriou:

Iz 28,16
“Ar Mên o-deus disprizet ar vañsonerien,
“Hennez a zo deuet da veza Mên-korn-uhella!
“Dre nerz an Aotrou eo c’hoarvezet kement-se!
“Hag ez eo eun dra zouezuz dirag on daoulagad!”

43 “Ablamour da-ze e lavaran deoc’h: diganeoc’h e vo tennet Rouantelez Doue! Ha roet e vo d’eur Vroad hag a raio dezi dougen frouez! 44 Hag an dén a gouezo war ar Mên-ze, a vo brevet! Hag an neb a gouezo ar Mên-ze warnañ, a vo bruzunet!”

45 O kleved e barabolennou, ec’h intent ar Farizeiz hag ar Veleien-Vraz ema-Eñ o komz diwar-o-fenn! 46 Pa glaskont tapoud krog ennañ e teu dezo aon rag an dud, rag e gemer a reont evid eur Profed!

22

AN OLL A ZO GALVET! NEBEUD A VEZ DIBABET!

Lk 14, 15...
Mz 8,11
Disk 19,9
1 Sevel a ra Jezuz e vouez evid komz dezo adarre dre barabolennou, o lavared: 2 “Heñvelleet e vez Rouantelez an Neñv ouz eun den, eur Roue, hag a ra eul Lein-Eured evid e Vab! 3 Kas a ra e zervicherien da c’helver ar re a zo bet galvet d’al Lein-Eured, med ne fell ket dezo dond! 4 Adarre e kas servicherien all o lavared: ‘Lavarit d’ar re a zo bet galvet: ‘Setu m’am-eus aozet va fest! Lazet eo an tirvi hag al

Disk 11,1-4
Lk 21,21-25

loened lard! Hag aozet eo pep tra! Deuit 'ta d'al Lein-Eured!'.⁵ Int-i avad heb ober van, a gerz gand o hent: unan wardro e bark, egile d'e genwerz!⁶ Ar re all avad, tapet ganto krog en e zervicherien, o dismeg hag o laz!...

⁷ Ar Roue, eet e kounnar, a gas soudarded da laza ar vuntre-rien-ze ha da bulluha o c'hêr!⁸ Neuze e lavar d'e zervicherien: 'Al Lein-Eured a zo prest! An dud a oa bet galvet avad ne oant ket dîn!⁹ Kit 'ta er c'hroaziou-hent, ha galvit d'al Lein-Eured an oll dud a gavoc'h!' ¹⁰ Mond a ra ar zervicherien-ze dre an heñchou, hag e vodont an oll dud a gavont, fall ha mad! Hag ema an Ti-Eured leun a dud astennet ouz taol!

¹¹ Dond a ra ar Roue da zelled ouz an dud astennet ouz taol, hag eno e wél eun den ha n'e-neus ket gwisket dillad-eured!¹² Ha dezañ e lavar: 'Va mignon! Penaoz out-te deuet amañ heb kaoud dillad-eured?' Ne zigor ket e c'henou!¹³ Neuze e lavar ar Roue d'e zervicherien: 'Liammit dezañ e dreid hag e zaouarn, evid e stlepel en deñvalijenn diavêz! Eno e vo ar goueladeg hag ar skrignadeg-dent!'

¹⁴ Rag an oll a zo galvet!

Nebeud avad a vez dibabet!''.

HAG AOTREET EO REI TRUAJ DA ZEZAR ?

¹⁵ Neuze en eur vond kuit, e tiviz ar Farizeiz d'e baka en eul lavar...¹⁶ Davetañ e kasont o diskibien hag Herodezidi da lavared:

“Goud a ouzom ez oc'h-c'hwi gwirieg hag e kelennit Hent Doue e gwirionez heb ober van ouz den, rag ne zellit ket ouz dremm an dud!¹⁷ Lavarit 'ta deom: petra a gav deoc'h: hag aotreet eo rei truj da Zesar, pe n'eo ket?”¹⁸ Jezuz avad, anad dezañ o drougiaj, a lavar dezo: “Perag e teuit d'am zenti, touellourien ?¹⁹ Diskouezit din pezh-moneiz an taill!” Ha dezañ e tegasont eun diner.²⁰ Hag e lavar dezo: “Euz piou ar skeudenn-mañ hag an enskrid ?”²¹ “Euz Sezar!” emezo! Neuze e lavar dezo: “Rentit 'ta da Zesar kement a zo da Zesar! Ha da Zoue kement a zo da Zoue!”

²² Hag ouz e gleved e chomont souezet: e lezel a reont ha mond kuit...

D'AN ADSAO E VINT EVEL ÊLEZ DOUE!.

²³ En deiz-ze e teu davetañ Sadukeiz, tud hag a lavar n'eus Adsao ebed! Hag outañ e c'houlennont: ²⁴ “Mestr! emezo, Moizez e-neus lavaret: 'Ma varv unan bennag heb lezel bugale, d'e vreur dimezi gand e wreg-intañvez ha sevel eul lignez d'e vreur!'.

²⁵ Bet ez eus avad en on touez seiz breur. Ar c'henta, deuet da

zimezi, a zo marvet, ha pa n'e-noa ket a lignez, e-neus lezet e wreg d'e vreur. ²⁶ Evel-se ive an eil hag an trede, beteg ar zeizved! ²⁷ Warlerc'h an oll avad, eo marvet ar wreg. ²⁸ D'an Adsao eta, da behini anezo o zeiz e vo-hi gwreg? Rag int-i oll o-deus bet honnez da wreg?"

Erm 3,6 ²⁹ Respont a ra o lavared dezo: **"Fazia a rit pa ne ouezit ket ar Skrituriou na galloud Doue! ³⁰ Rag d'an Adsao, ne gemeront na gwreg na gwaz, med bez' ez int evel êlez Doue en Neñv! ³¹ Diwarbenn Adsao ar re varo, daoust ha ne anavezit ket ar pez a zo lavaret deoc'h gand Doue pa lavar: ³² "Me eo a zo' Doue Abraham ha Doue Izaag ha Doue Jakob!" Doue n'eo ket eun Doue re varo, med hini re veo!"**

Mk 12, 28...
Lk 10, 25...
Yn 13,34 ³³ Ouz e gleved, e chom an dud estlammet gand e Gelennadurez!...

Dt 6,5 ³⁴ Klevet ganto e-neus Jezuz serret o genou d'ar Zadukeiz, setu m'eo bodet a-unan ar Farizeiz, ³⁵ hag unan anezo, eur Skrib, a c'houlenn outañ evid e denti: ³⁶ **"Mestr! Pehini eo ar gourhemenn braz el Lezenn ?"** ³⁷ Eñ avad a lavar dezañ: **"Kared a ri da Zoue a-greiz da galon, a-greiz da ene, hag a-greiz da spered! ³⁸ Hennez eo ar brasa hag ar c'henta eus ar gourhemennou!"**

Lev 19,18
Gal 5,14 ³⁹ **An eil avad a zo par dezañ: kared a ri da nesa eveldout da-unan! ⁴⁰ Ouz an daou gourhemenn-ze eo stag al Lezenn a-bez hag ar Brofeded!"**

Mk 12, 35
Lk 20, 41

AR MESIAZ, DA BIOUS EO-EÑ MAB ?

⁴¹ Pa z'eo bodet ar Farizeiz, e ra Jezuz eur goulenn outo, o lavared:

⁴² **"Petra 'gav deoc'h diwar-benn ar Mesiaz: Mab piou eo-Eñ?"**

Salm 110,1 - **"Mab David!"** emezo. ⁴³ Hag e lavar dezo: **"Penaos 'ta e teu David, dre ar Spered, d'e c'helver 'Aotrou', o lavared:**

⁴⁴ **"Lavaret e-neus an Aotrou d'am Aotrou: 'Azezit en tudehou din, ken n'am-bo lakeet hoc'h enebourien dindan ho treid'!"**

⁴⁵ **Ma ra eta David 'Aotrou' anezañ, penaos eo-Eñ Mab dezañ?..."**

⁴⁶ Ha ne c'hell den respont eur grig dezañ ; diwar an deiz-ze ne gred dén ebed kén ober outañ eur goulenn...

23

AN HINI EN EM IZELLAIO, A VO SAVET UHEL!

Mk 12, 38...
Lk 20, 45...
Lk 11, 39...

¹ Neuze e komz Jezuz d'an dud ha d'e Ziskibien o lavared: ² "War Gador-Gelenn Voizez eo azezet ar Skribed hag ar Farizeiz! ³ Grit ha mirit eta kement a lavaront! Na rit ket avad diouz o oberou, rag lavared a reont, med ober ne reont ket! ⁴ Liamma a reont sammou pounner ha drastuz, hag o lakaad a reont war ziskoaz an dud, med ne fell ket dezo o-unan lakaad o biz evid o loha! ⁵ Bez' e reont o oll oberou evid beza gwelet gand an dud, rag ledannaad a reont o filaktered hag hirraad fleñch o mantilli! ⁶ Plijoud a ra dezo ar reñk kenta er prejou, hag ar c'hadoriou uhella er zinagogou, ⁷ ha beza saludet war al leuriou-kêr, ha beza galvet 'Mestr' gand an dud!"

Rom 2,17

Lk 11,46

Mk 12,38

⁸ "C'hwi avad, na vezit ket galvet 'Mestr', rag n'eus deoc'h nemed eur Mestr, c'hwi oll avad a zo Breudeur! ⁹ Ha na c'halvit nikun 'on tad' war an douar, rag n'eus deoc'h nemed eun Tad, ho Tad euz an Neñv! ¹⁰ Ha na vezit ket galvet 'kelenner', rag n'eus deoc'h kelenner ebed nemed unan: ar Mesiaz!"

Lk 14,11

¹¹ "Ar brasa ahanoc'h a vo ho mevel!

Lk 1,52

¹² An neb en em uhellaio a vo izelleet!

Hag an hini en em izellaio a vo savet uhel!"

SIWAZ DEOC'H! SKRIBED! FARIZEIZ!

Mz 6,9...

¹³ Siwaz deoc'h! Skribed ha Farizeiz toueller, peogwir ec'h alhwezit Rouantelez an Neñv dirag an dud! Rag ne z'it ket enni hoc'h-unan, ha ne lezit ket da vond enni ar re a glask mond...

¹⁴ Siwaz deoc'h! Skribed ha Farizeiz toueller! Lonka a rit tiez an intañvezed, war zigarez e rit pedennou hir! Rag-se e pakoc'h gwasoc'h barn!

¹⁵ Siwaz deoc'h, Skribed ha Farizeiz toueller! Rag redeg a rit ar mor hag ar gouelec'h evid ober eun diskib hepkén! Ha pa zegouez unan, e rit anezañ eun ifern-a-zen diou wech gwasoc'h egodoc'h!

Yn 9,39
Rom 2,19

¹⁶ Siwaz deoc'h, Blenierien zall, hag a lavar: 'Ar re a dou dre ar zantual, n'eo seurt! Med an néb a dou dre aour ar zantual, hennez a zo dalhet!' ¹⁷ Tud foll ha dall: pehini eo ar brasa, an aour pe ar zantual e-neus santelleet an aour? ¹⁸ Hag ive: 'An néb a dou dre an aoter, n'eo seurt! An néb avad a dou dre ar prov a zo war an aoter, hennez a zo dalhet! ¹⁹ Tud dall! Rag petra eo ar brasa: ar prov pe an aoter a zakr ar prov?

²⁰ An néb eta a dou dre an aoter, a dou drezi ha dre gement a

zo warni; ²¹ Hag an néb a dou dre ar zantual, a dou drezañ ha dre an Hini a zo o chom ennañ! ²² Hag an hini a dou dre an Neñv, a dou dre drôn Doue ha dre an Hini a zo azezet warnañ!

²³ Siwaz deoc'h! Skribed ha Farizeiz toueller! Rag bez' e roit an deog war ar vent, ar fanouill hag ar c'houmin! hag e tilezit traou grevuz al Lezenn: ar Varn, an Drugarez, hag ar Feiz! Red eo ober an traou-mañ heb dilezel ar re-ze! ²⁴ Blenierien zall, c'hwi hag a zil ar c'huibuenn hag a lonk ar c'hañval!

Mz 7,4

²⁵ Siwaz deoc'h! Skribed ha Farizeiz toueller! Glanaad a rit diavêz ar c'halir hag ar plad, en diabarz avad ez int leun a skraperez hag a zizurz! ²⁶ Farizead dall! Glana da genta diabarz ar c'halir, ma vezo ive glan e ziaivêz!

²⁷ Siwaz deoc'h! Skribed ha Farizeiz toueller! Brudet oc'h da veza heñvel ouz beziou gwennet gand lêz-raz: diouz an diavêz ez int kaer da weled, en diabarz ez int leun a eskern re varo hag a bep seurt traou dihlan!

Lk 16,15

²⁸ Evel-se ive, diouz an diavêz, ez oc'h, evid an dud, tud just da weled! En diabarz avad ez oc'h leun a douellerez hag a zizurz!

²⁹ Siwaz deoc'h! Skribed ha Farizeiz toueller! Sevel a rit beziou ar Brofeded ha kaerraad beziou an dud just, hag e lavarit: ³⁰ 'Ma vefem bet beo en amzer on tadou, ne vefem ket bet ken-lodeg e gwad ar Brofeded!'

³¹ Testenia a rit evel-se a-eneb deoc'h hoc'h-unan ez oc'h bugale d'an dud o-deus lazet ar Brofeded! ³² Ha c'hwi, peur-gargit 'ta muzuliad ho tadou!

Lk 11,45

Mk 5,12

Ob 16,6

³³ Naered! Gorad naered-wiber! Penaoz e tiwalloc'h diouz ar varn d'ar jeen ? ³⁴ Setu perag e kasan davedoc'h Profeded, tud fur ha Skribed! Lod anezo a lazoc'h, a stagoc'h ouz ar groaz! Ha lod anezo a skourjezoc'h en ho sinagogou hag a heskinoc'h euz an eil kêr d'eben! ³⁵ Evel-se e teuio warnoc'h kement gwad just a zo bet skuillet war an douar adal gwad Abel an den just beteg gwad Zakari-mab-Barag, ho-peus lazet etre ar zantual hag an aoter! ³⁶ Evid gwir e lavaran deoc'h: kement-se a zeuio war ar rummad-mañ.

Lk 13,34...

Lk 23,28

Yn 2,19

³⁷ JERUZALEM! JERUZALEM! An Hini a laz ar Brofeded hag a labez an dud kaset daveti! Na pet kwech eo bet fellet din boda da Vugale en doare ma vod eur vamm-yar he yér-vian dindan he diwaskell! Ha n'eo ket bet fellet deoc'h! ³⁸ Setu ma vo lezet ho Ti ganeoc'h, goullo! ³⁹ Rag deoc'h e lavaran: diwar-vremañ, nann, n'am weloc'h ket, kén na lavaroc'h:

Salm 118,26

'Meuleudi d'an Hini a zeu en Ano Doue!''.

24

Mk 13,1...
Lk 21,5...
Disk 8,11

PETRA A VO AR ZIN EUZ HO TISTRO ?

¹ Eet er-mêz euz an Templ, e kerz Jezuz gand e hent, ha davetañ e teu e Ziskibien da ziskouez dezañ savaduriou an Templ... ² Eñ avad a respont dezo o lavared: “**Daoust ha ne welit ket an oll draou-ze ? Evid gwir e lavaran deoc’h: nann! ne vo lezet amañ mên war vên ha na vefe ket diskaret!**” ³ P’ema-Eñ azezet war ‘Menez an Olived’, e teu davetañ e Ziskibien outo o-unan hag e lavaront: “**Lavarit deom peur e tegouezo kement-se, ha petra vo ar zin euz ho Tistro hag euz Fin ar Bed ?**” ⁴ Jezuz a respont dezo o lavared: “**Gwelit na zeufe den d’ho touella!**” ⁵ Rag dond a raio meur a hini em Ano o lavared: “**Me-eo-a-zo’ ar Mesiaz! Hag e touellint kalz tud!**” ⁶ Kleved a reoc’h trouz-brezeliou hag ano euz brezeliou: diwallit da veza strafuillet, rag red eo da gement-se degouezoud, med n’eo ket c’hoaz ar fin. ⁷ Rag sevel a raio pobl a-eneb pobl, rouantelez a-eneb rouantelez! Ha bez’ e vo meur a gernez, a vosenn hag a gren-douar, a dachadou! ⁸ An oll draou-ze a verko digor poaniou ar Gwilioud!...”

Yn 16,21
Rom 8,22

⁹ “**Neuze e vezoc’h beuzet en drubuill ha kaset d’ar maro! Kasaet e vezoc’h gand an oll boblou ablamour d’am Ano!**” ¹⁰ Bez’ e vo skoillet kalz tud: kenetrezo e roint an eil egile, hag e kasaint an eil egile!

2 Tes 2,3
Lk 18,8

¹¹ Ha meur a fals-profed a zavo hag a douello kalz tud! ¹² Ha dre ma peur-gresko an dizurz, e yennaio karantez an dud!”

¹³ “**An hini avad a zalho beteg penn, hennez a vo saveteet!**” ¹⁴ Ha bez’ e vo embannet Kelou-Mad ar Rouantelez-mañ dre ar Béd a-bez, da veza eun testeni evid ar Baganed... ha neuze e teuio ar Fin...”

NEUZE E PARO SIN MAB-AN-DEN!

Mk 13,14...
Lk 21,20...
Disk 10...

¹⁵ “**Pa weloc’h eta, en he zav, el Lec’h Santel, an ‘Euzadenn Spontuz’, an hini a zo embannet dre ar Profed Daniel, (ra intento al Lenner!),**” ¹⁶ neuze, d’an dud, er Jude, tehed d’ar Meneziou! ¹⁷ An néb a vo war e leur-doenn, arabad dezañ diskenn da gemer an traou euz e di! ¹⁸ Hag an hini a vo er park, arabad dezañ distrei war e giz da gerhed e vantell! ¹⁹ Siwaz avad d’ar gwragez a vo dougerez pe o vaga en deveziou-ze! ²⁰ Pedit na vo ket deoc’h tehed e-kreiz ar goañv pe d’ar zabad! ²¹ Rag bez’ e vo neuze eun drubuill ken braz ma n’eus ket bet degouezet kement-se abaoe penn-kenta ar Bed beteg bremañ ha na zegouezo biken kén! ²² Ha ma ne vefe ket berreet an deveziou-ze, ne vefe saveteet den ebed! Med evid an dud dibabet e vo berreet an deveziou-ze!”

2 Tes 2,3...

²³ “**Neuze, ma lavar deoc’h unan-bennag: ‘Sed amañ ar**

Mesiaz!’ pe ‘Sed aze!’, diwallit da gredi! ²⁴ Rag sevel a raio meur a fals-vesiaz ha meur ha fals-profed, hag ober a raint sinou braz ha burzudou beteg dezo touella (ma c’hellfe beza!), an dud dibabet o-unan! ²⁵ Setu m’am-eus-me lavaret deoc’h! ²⁶ Ma lavaront deoc’h eta: ‘Sed-Eñ er gouelec’h!’, n’it ket di! ‘Sed-Eñ er c’hao!’ Diwallit da gredi! ²⁷ Rag evel ma tarz al luhedenn euz ar Zav-heol ha ma sked beteg ar C’huz-heol, evel-se e vo Distro Mab-an-Den! ²⁸ N’eus forz pe-lec’h e vefe ar c’horv maro, eno e vo bodet ar guped!”

Lk 17,37

²⁹ “Raktal goude trubuill an deveziou-ze, e teñvallaio an heol, hag al loar ne roio ket kén he sklêrijenn, hag ar stered a gouezo euz an neñv, ha galloudegeziou an Neñv a vo brallet! ³⁰ Ha neuze e paro en Neñv sin Mab-an-Den! Neuze e hirvoudo oll veuriadou an Douar, hag e welint Mab-an-Den o tond war goabr an neñv, gand kalz a c’halloud hag a c’hloar! ³¹ Hag e kaso e êlez, gand eun drompill kreñv he mouez, hag e vodint an dud dibabet gantañ euz ar pevar roud-avel, euz ar penn-mañ d’an Neñv beteg ar penn-all!”

Mk 13,28...
Lk 21,29...

N’OUZOC’H KET PE DA ZEIZ E TEUIO!

³² “Diwar ar wezenn-fiez deskit ar barabolenn-mañ! Pa vez tener he skourrou ha digoret he deliou, e ouezit ez eo tost an hañv! ³³ Evel-se ive, pa weloc’h an oll draou-ze, deoc’h gouzoud ema-Eñ tost, e tal an nor!”

³⁴ E gwirionez e lavaran deoc’h: nann, ne dremenno ket ar rum-mad-mañ, ken na vo degouezet an oll draou-ze! ³⁵ An neñv hag an douar a dremenno, va C’homzou-me avad ne dremenint ket!”

Mk 13, 32...
Lk 17, 26...

³⁶ “An Deiz-ze hag an eur-ze, nikun n’o anavez, nag êlez an Neñv, nag ar Mab, nemed an Tad e-unan! ³⁷ Evel m’eo bet e deveziou Noe, evel-se e vo pa baro Mab-an-Den! ³⁸ Rag en deveziou araog an Dour-Beuz, ema an dud o tebri hag oc’h eva, o kemer gwreg pe o rei da wreg, beteg an deiz ma z’a Noe en Arc’h! ³⁹ Ha n’ouzont seurt, ken na zeu an Dour-Beuz hag o lonk oll! Bez’ e vo ive evel-se pa baro Mab-an-Den! ⁴⁰ Bez’ e vo neuze daou zen en eur park: unan a vo paket , egile a vo lezet! ⁴¹ Diou a vo o vala er vilin: unan a vo paket, eben lezet! ⁴² Beillit’ ta, rag ne ouezit ket pe da zeiz e teuio hoc’h Aotrou! ⁴³ Gouzoud a rit an dra-mañ: ma ouezfe ar penn-tiegezh da bed eur e teufe al laer, e chomfe da veilla ha ne lezfe ket da doulla e di! ⁴⁴ Evel-se ive, bezit prest, rag d’an eur na zonjit ket e teuio Mab-an-Den!”

Lk 12, 42...

1 Tes 5,1...

⁴⁵ “Piou ’ta eo ar zervicher feal ha fur e-neus an Aotrou lakeet war e diegezh evid rei dezo ar bevañs d’ar poent ? ⁴⁶ Eüruz ar zervicher-ze ma vez kavet gand e Aotrou, pa zegouezo, oc’h ober evel-se! ⁴⁷ Evid gwir e lavaran deoc’h: e lakaad a raio war e oll vadou! ⁴⁸ Med ma lavar en e galon ar zervicher-fall-ze: “Dalea a ra va Aotrou!” ⁴⁹ Ha ma krog da skei gand e gen-seurted, da zebri ha da

eva gand al lonkerien, ⁵⁰ e tegouezo Aotrou ar zervicher-ze d'an deiz na c'horthoz ket ha d'an eur na oar ket! ⁵¹ E draou a lamo digantañ hag e lod a lakaio gand an douellourien! Eno e vo ar goueladeg hag ar skrignadeg-dent!”

25

Lk 12,35...

SETU AN DEN-NEVEZ: KIT D'E ZIAMBROUG!

Yn 2,9
Yn 3,29
Ef 5,25

¹ Neuze e vo heñvelleet Rouantelez an Neñvou ouz deg gwerhez, kemeret ganto o lampou evid mond da ziambroug an Den-Nevez. ² Pemp anezo a zo foll ha pemp a zo fur. ³ Rag ar re foll, en eur gemer o lampou, ne gemeront ket a eoul ganto! ⁴ Ar re fur avad a gemer eoul e podigou da-heul o lampou. ⁵ Ha pa zale an Den-Nevez, e teuont oll da vorgousked ha da gousked...

Mk 13,33

⁶ E-kreiz an noz e sav eur youhadenn: “Setu an Den-Nevez! Kit d'e ziambroug!” ⁷ Neuze e sav an oll werhez-ze hag ec'h aozont o lampou. ⁸ Ar re foll avad a lavar d'ar re fur: “Roit deom euz hoc'h eoul! rag ema on lampou o vervel!” ⁹ Hag ar re fur a respont o lavared: “Gand aon na vefe ket awalc'h evidom hag evidoc'h, kit kentoc'h daved ar varhadourien ha prenit evidoc'h hoc'h-unan!” ¹⁰ Epad ma z'eont da bréna, e tegouez an Den-Nevez: ar re a zo prest a ia gantañ d'al Lein-Eured hag ez eo prenet an nor!... ¹¹ Diwezatoc'h e teu ive ar plahed all hag e lavaront: “Aotrou! Aotrou digorit deom!” ¹² Eñ avad a respont o lavared: “Evid gwir, e lavaran deoc'h: n'hoc'h anavezan-me ket!”

¹³ “Beillit 'ta! rag ne ouezit nag an Deiz nag an Eur!”.

Lk 19, 12...

KEMER PERZ E LEVENEZ DA AOTROU

¹⁴ “Rag bez' e vo evel gand eun den o vond da guitaad e vro: gelver a ra e zervicherien evid fizioud enno e vadou. ¹⁵ Da unan e ro pemp talant, d'egile daou, ha da unan all unan hepkén: da bep hini diouz e ampartz e-unan! Hag e kuita ar vro!

¹⁶ Hag an hini e-neus bet pemp talant a ia raktal da ober ganto, hag e c'hounid pemp talant all! ¹⁷ Evel-se ive, an hini e-neus bet daou dalant a c'hounid daou all! ¹⁸ An hini e-neus bet unan hepkén, a ia da gleuza an douar ha da guzad arhant e Aotrou!

Lk 16,10
Yn 15,11

¹⁹ Pell amzer goude-ze, e tegouez Aotrou ar zervicherien-ze, ha ganto e reñk e gont! ²⁰ Da genta e teu an hini e-neus bet pemp talant, hag e kinnig pemp talant all, en eur lavared: “Aotrou! Pemp talant ho-peus fiziét ennon: Setu pemp talant all, am-eus-me gounezet!”. ²¹ Dezañ e lavar e Aotrou: “Mad-tre! Servicher mad ha feal! War nebeud a draou out bet feal: da lakaad a rin war berniou traou! Kemer perz e levenez da Aotrou!”

²² Davetañ e teu ive an hini e-neus bet daou dalant, hag e lavar: “Aotrou! Daou dalant ho-peus fiziet ennon: setu daou all am-eus-me gounezet!” ²³ Dezañ e lavar e Aotrou: “Mad-tre! Servicher mad ha feal! War nebeud a draou out bet feal! Da lakaad a rin war berniou traou! Kemer perz e levez da Aotrou!”.

²⁴ Dirazañ e teu ive an hini e-neus bet eun talant hepkén! hag e lavar: “Aotrou! Hoc’h anavezoud a ran da veza eun den kaled! Eosti a rit el lec’h n’ho-peus ket hadet! ha dastum a rit euz al lec’h n’ho-peus ket skignet ennañ! ²⁵ Kroget aon ennon, ez on-me eet da guzad ho talant en douar! Setu m’ho-peus ar pez a zo deoc’h!” ²⁶ Respont a ra e Aotrou o lavared dezañ: “Servicher fall ha lezireg! Goud a ouiez ec’h eostan-me el lec’h n’am-eus ket hadet ennañ! hag e tastuman-me euz al lec’h n’am-eus ket skignet ennañ! ²⁷ Red e oa dit eta kas va arhant d’ar bañkerien, ha d’am distro, am-befe kavet va feadra gand frouez! ²⁸ Lamit ’ta digantañ an talant ha roit d’an hini e-neus deg talant! ²⁹ Rag an hini e-neus, dezañ e vo roet hag e-no muioc’h mui! An néb avad n’e-neus ket, digantañ e vo lamet zoken ar pez e-neus! ³⁰ Ha stlapit ar zervicher didalvez-ze e teñvalijenn an diavêz! Eno e vo ar goueladeg hag ar skrignadeg-dent!”...

NAON AM-OA! SEHED AM-OA!

³¹ “Pa zeuio avad Mab-an-Dén en e c’hloar, ha gantañ an oll êlez, neuze ec’h azezo war e drôn a c’hloar! ³² Bez’ e vo bodet dirazañ an oll boblou, hag e tistranno an eil diouz egile, evel ma tistrann ar pastor an deñved diouz ar bouhou. ³³ An Deñved a lakaio a-zehou dezañ, hag ar Bouhou a-gleiz!

Rom 8,17
Ef 1,4...

³⁴ Neuze e lavaro ar Roue d’ar re a vo a-zehou dezañ: “Deuit! Tud benniget gand va Zad! Degemerit da lod-hêrez ar Rouantelez reñket evidoc’h adaleg krouidigez ar Bed!

³⁵ “Rag naon am-eus bet, ha roet ho-peus din da zebri!

“Sehed am-eus bet, ha roet ho-peus din da eva!

“Diaveziad e oan, ha va degemeret ho-peus!

³⁶ “En noaz e oan, ha va gwisket ho-peus!

“Klañv e oan, ha d’am gwelet ez oc’h deuet!

“Er prizon e oan, ha deuet oc’h davedon!”...

³⁷ Neuze e responto dezañ an dud just, o lavared:

“Aotrou! Peur on-eus-ni ho kwelet o kaoud naon, hag on-eus ho maget ? O kaoud sehed, hag on-eus roet deoc’h da eva ?

³⁸ “Peur on-eus-ni ho kwelet diaveziad hag on-eus ho tegemeret ?

“Pe en noaz, hag on-eus ho kwisket ?

³⁹ “Peur on-eus-ni ho kwelet klañv pe er prizon, hag ez om

deuet davedoc'h ?

Ob 9,5
Mz 10,40
Lk 19,16

⁴⁰ Hag ar Roue a responto o lavared:

“Bep tro m’ho-peus greet evel-se da unan euz va disterra breudeur-mañ,

“Din-me ho-peus greet kement-se!”

⁴¹ Neuze e lavaro d’ar re a vo a-gleiz dezañ:

“Kit diwar va zro, tud milliget, d’an tan peurbaduz, greet evid an diaoul hag e êlez!

⁴² “Rag naon am-eus bet, ha n’ho-peus ket roet din da zebri!

“Sehed am-eus bet, ha n’ho-peus ket roet din da eva!

⁴³ “Diaveziad e oan! ha n’ho-peus ket va degemeret!

“Hag en noaz!. ha n’ho-peus ket va gwisket!

“Ha klañv hag er prizon! ha n’oc’h ket deuet d’am gwelet!”

⁴⁴ Neuze e respontint, int-i ive, o lavared:

“Aotrou! Peur on-eus-ni ho kwelet o kaoud naon, o kaoud sehed, pe diaveziad pe en noaz, pe glañv pe er prizon, ha n’on-eus-ni ket ho servichet ?”

⁴⁵ Neuze e responto dezo o lavared:

“Bep tro n’ho-peus ket greet evel-se da unan euz an disterra tud-mañ, na din-me end-eeün n’ho-peus ket greet kement-se!”

Yn 5,29

⁴⁶ Hag ez aio ar re-ze d’eur c’hastiz peurbaduz!

An dud just avad d’eur Vuez peurbaduz!”

26

A-BENN DAOU ZEVEZ E VO ROET MAB-AN-DEN

¹ Ha neuze, peur-lavaret gantañ ar c’homzou-ze, e lavar Jezuz d’e Ziskibien: ² “Gouzoud a rit: a-benn daou zevez ema Pask, hag e vo roet Mab-an-Den evid beza staget ouz ar groaz!” ³ Ha bodet eo neuze ar Veleien-Vraz ha Kozidi ar Bobl e porz ar Beleg-Braz, an hini anvet Kaifaz. ⁴ Hag a-unan e tivizont da baka krog e Jezuz dre douellerez ha d’e laza! ⁵ Lavared a reont: “Arabad na vefe epad ar Gouel, gand aon na zavje trouz e-touez ar Bobl!”.

EVID VA ZEBELIA HE-DEUS GREET KEMENT-SE!

⁶ P’ema Jezuz e Betani, e ti Simon-al-Lor, ⁷ e teu davetañ eur vaouez

gand eur podig alabastr leun a valzam talvouduz-braz, hag e skuilla ra war benn Jezuz, astennet ma z'eo ouz taol. ⁸ O weled kement-se, ez eo kounnaret an Diskibien hag e lavaront: **“Perag eur seurt koll ? ⁹ Rag bez’e c’helle an dra-ze beza gwerzet kër ha beza roet d’ar beorien!”** ¹⁰ Anad dezañ o zoñjou, e lavar Jezuz dezo: **“Perag e rit poan d’ar vaouez-mañ ? Rag eun oberenn gaer he-deus greet em c’heñver! ¹¹ Rag bepred ho-peus ar beorien ganeoc’h, Me avad n’ho-peus ket bepred! ¹² Rag o taoler ar valzam-ze war va c’horv, evid va zebelia he-deus greet kement-se! ¹³ E gwirionez e lavaran deoc’h: E kement lec’h bennag e vo embannet ar C’helou-Mad-mañ, dre ar Béd a-bez, e vo lavaret ive ar pez he-deus greet homañ, evid ober koun anezi!”**.

Mk 14, 10...
Lk 22, 3...

¹⁴ Mond a ra neuze unan euz an Daouzeg, an hini anvet Judaz Iskariot, daved ar Veleien-Vraz, ¹⁵ o lavared: **“Petra a fell deoc’h rei din, ha me e roio etre ho taouarn!”**. Ar re-ze a laka dezañ tregont pez arhant! ¹⁶ Ha diwar neuze, ema-eñ o klask eur poent mad evid e rei...

Mk 14, 12...
Lk 22, 7...
Yn 13,18...

UNAN AHANOC’H A ZO O VOND D’AM REI!

¹⁷ Da zeiz kenta ar Bara-Dihoell, e teu an Diskibien daved Jezuz en eur lavared: **“Pe-lec’h e fell deoc’h ez afem da aoza an traou, deoc’h debri ar Pask ?”** ¹⁸ Eñ avad a lavar: **“Kit e Kêr da di an neb-mañ, ha lavarit dezañ: “Ar Mestr a lavar: ‘Va eur-me a zo tost! Du ’ze e rin ar Pask gand va Diskibien!”** ¹⁹ Hag an Diskibien a ra evel ma kemenn dezo Jezuz, hag ec’h aozont ar Pask...

²⁰ Deuet an abardaez, ec’h astenn Jezuz ouz taol gand an Daouzeg! ²¹ E-kreiz ma tebront e lavar: **“E gwirionez e lavaran deoc’h: unan ahanoc’h a zo o vond d’am rei!”** ²² Bez’ ez int glaharet-oll, hag e stagont da lavared dezañ pep hini d’e dro: **“Daoust ha me an hini eo, Aotrou ?”** ²³ Respont a ra Jezuz o lavared: **“An néb a gas e zorn ganin d’ar plad, hennez eo am roio! ²⁴ Mab-an-Dén avad a ia kuit evel m’eo skrivet diwar-e-benn! Siwaz avad d’an den-ze a vo drezañ roet Mab-an-Den! Kaerroc’h e oa dezañ na vefe ket ganet an den-ze!”** ²⁵ Respont a ra Judaz, an hini a zo o vond d’e rei, hag e lavar: **“Daoust ha me an hini eo, Mestr ?”** Hag Eñ a lavar: **“Mad az-peus lavaret!”**.

Mk 14, 22...
Lk 22, 15...
1 Kor 11,23

Yn 6,51...

²⁶ E-kreiz ma prejont avad, kemeret gantañ eur varaenn ha lavaret trugarez, Jezuz he rann hag he ro d’e Ziskibien en eur lavared: **“Kemerit! Debrit! rag kement-mañ a zo va C’horv!”** ²⁷ Kemeret gantañ ivez eur C’halirad ha lavaret trugarez, e rei a ra dezo en eur lavared: **“Evit oll anezañ! ²⁸ Rag kement-mañ a zo va Gwad, Hini an Emgleo, skullet evid leun a dud da bardoni ar pehejou! ²⁹ Deoc’h e lavaran: a-vremañ, ne evin mui euz ar Frouez-mañ euz ar winienn, beteg an Deiz ma hen evin, nevez, a-unan ganeoc’h e Rouantelez Doue!”**.

Mk 14,26
Lk 22,31
Yn 13,36

DEOC'H OLL E VEZIN-ME EUR SKOILL

³⁰ Kanet ganto ar Zalmou, ez eont warzu Menez-an-Olived. ³¹ Neuze e lavar dezo Jezuz: **“C’hwil oll a vo skoillet ennon-me epad an noz-mañ, rag skrivet eo: ‘Skei a rin gand ar Pastor, hag e vo skignet Deñved an Tropell!’** ³² Med goude va Adsao, ez in en ho raog d’ar Galile!” ³³ Respont a ra Pèr o lavared dezañ: **“Ma vez an oll skoillet ennoc’h, me ne vin biken skoillet!”**. ³⁴ Dezañ e lavar Jezuz: **“Evid gwir e lavaran-me dit: en noz-mañ, araog d’ar c’hillog kana, teir gwech az-po va nahet!”**. ³⁵ Pèr a lavar dezañ: **“Ha goude din rankoud mervel ganeoc’h, ho nac’h ne rin-me ket!”**.

Mk 14, 32...
Lk 22, 40...
Yn 18,1...
Heb 5,7...

GLAHARET-DREIST EO VA ENE, DA VERVEL!

³⁶ Neuze ez a Jezuz ganto en eun dachenn anvet Jetsemani, hag e lavar d’e Ziskibien: **“Azezit amañ, epad ma z’an-me ahont da bedi!”** ³⁷ Gantañ e kemer Pèr ha daou vab Zebede, hag e teu da veza glaharet!... ³⁸ Neuze e lavar dezo: **“Glaharet-dreist eo va ene, da vervel! Chomit amañ ha beillit ganin!”** ³⁹ Eet eun tammig larkoc’h, e kouez, e dal d’an douar, hag e ped o lavared: **“Va Zad!... Ma c’hell beza, ra dremeno ar C’halirad-ze a-biou din! Koulskoude, ra vezo, n’eo ket evel ma fell din-me, med evel ma fell deoc’h-C’hwil!”**.

Rom 7,5

⁴⁰ Dond a ra daved e Ziskibien, hag Eñ o c’hav kousket!... Hag e lavar da Bèr: **“Evel-se, n’ho-peus ket a nerz da veilla eun eurvez hep-kén a-unan ganin!** ⁴¹ **Beillit ha pedit, evid miroud da vond en tentadur! Ar spered a zo prim! An den avad a zo disterig!”**

⁴² Adarre, evid an eil gwech, ez a da bedi o lavared: **“Va Zad! Ma ne c’hell ket ar C’halirad-ze tremen nemed e eva a rafen, ho polontez bezet greet!”** ⁴³ Hag adarre e teu daveto hag o c’hav kousket, rag eet eo pounner o daoulagad... ⁴⁴ Hag o lezel a ra ha mond c’hoaz da bedi evid an trede gwech, o lavared an heveleb komzou...

⁴⁵ Neuze e teu daved e Ziskibien hag e lavar dezo: **“Kouskit bremañ, ha diskuizit! Setu deuet tost an Eur ma vo roet Mab-an-Dén etre daouarn Peherien...”**

Mk 14, 43
Lk 22, 47
Yn 18, 3

VA MIGNON! EVID-SE EMAOUT AMAÑ ?

⁴⁶ **“Savit! Deom! Setu m’eo tost an hini a zo o vond d’am rei!”** ⁴⁷ O komz ema c’hoaz, ha setu Judaz o tegouezoud, unan euz an Daouzeg, ha kalz tud d’e heul, gand klezeier ha bizier, a-berz ar Veleien-Vraz ha Kozidi ar Bobl! ⁴⁸ An hini a zo e-tu d’e rei e-neus roet dezo eur zin o lavared: **“An Hini a bokin dezañ, Hennez an Hini eo! Tapit krog-mad ennañ!”** ⁴⁹ Raktal ez a daved Jezuz en eur lavared: **“Salud! Mestr!”** hag e pok dezañ! ⁵⁰ Jezuz avad a lavar dezañ: **“Va mignon! Evid-se emaout amañ!”** Neuze e teuont war-raog: taoler a reont o

daouarn war Jezuz ha tapoud krog-mad ennañ...

Yn 18,16

Lk 24,26

⁵¹ Ha setu unan euz ar re a zo gand Jezuz oc’h astenn e zorn da denna e gleze ha da skei gand mevel ar Beleg-Braz: dezañ e troc’h e skouarn! ⁵² Neuze e lavar dezañ Jezuz: **“Kas da gleze endro d’e blas! Rag oll ar re a gemer eur c’hleze a varvo dre eur c’hleze!”** ⁵³ **Pe daoust hag e kav dit ne c’hellan-me ket gelver va Zad davedon ? Ha din e rofe bremañ ouspenn daouzeg strollad êlez!** ⁵⁴ **Penaoz’ta e vefe sevenet ar Skrituriou a lavar e rank degouezoud kement-se ?”**

⁵⁵ D’an Eur-ze e lavar Jezuz d’an dud: **“Evel d’eun torfetour ez oc’h deuet gand klezeier ha bizier da dapoud krog ennon ? Bemdez e vezen en Templ o kelenn ha n’ho-peus ket tapet krog ennon!”** ⁵⁶ **Kement-se avad a c’hoarvez evid ma vo sevenet Skrituriou ar Brofeded!”**. Hag an oll Ziskibien d’e zilezel ha da dehed kuit...

Mk 14, 53...

Lk 22, 54...

Yn 18, 12...

HA BEZ’ EZ OC’H AR MESIAZ, MAB DOUE ?

⁵⁷ Ar re o-deus tapet krog ennañ a gas Jezuz ganto da di Kaifaz ar Beleg-Braz, el lec’h m’eo bodet ar Skribed ha Kozidi ar Bobl. ⁵⁸ Pèr avad a zeu d’e heul, a-bell, beteg porz ar Beleg-Braz, ha mond a ra e-barz da azeza gand ar zervicherien, dezañ gweled ar fin...

Yn 2,19

⁵⁹ Ar Veleien-Vraz hag ar Zanedrin a-bez a glask eur fals-testeni aneb Jezuz evid e gas d’ar maro, ⁶⁰ ha ne gavont ket eun unan, goude ma z’eus deuet kalz fals-testou! Da ziweza e teu daou, ⁶¹ hag e lavaront: **“Hennez e-neus lavaret: ‘Me a c’hell diskar santual Doue hag e adsevel en eur ober tri devez!’”** ⁶² Hag ar Beleg-Braz, en e zav, da lavared dezañ: **“Ne respontit seurt d’ar pez a damall deoc’h ar re-ze ?”** ⁶³ Jezuz avad a jom sioul. Ha dezañ e lavar ar Beleg-Braz: **“Diganeoc’h e c’houlennan toui dre an Doue-Beo e lavaroc’h deom ha c’hwï eo ar Mesiaz, Mab Doue!”** ⁶⁴ Ha Jezuz a lavar dezañ: **“Mad e lavarez-te! Ouspenn-ze e lavaran deoc’h: a-vremañ e weloc’h Mab-an-Den azezet a-zehou d’an Oll-C’halloudeg hag o tond war goabr an Neñv!”**.

Mk 8,20

⁶⁵ Ar Beleg-Braz a freg neuze e zaeou, en eur lavared: **“Blasfemet e-neus!... Da betra on-eus-ni c’hoaz ezomm a destou ? Setu m’ho-peus bremañ klevet ar blasfem!”** ⁶⁶ **Petra ’gav deoc’h ?”** Int-i avad a respont o lavared: **“Dleet eo dezañ mervel!”** ⁶⁷ Neuze e tufont warnañ hag e roont dezañ cholpadou*. Lod all a ro dezañ taoliou-dorn ⁶⁸ en eur lavared: **“Profedit deom, Mesiaz!. Piou an hini e-neus skoet ganeoc’h...”**

Mk 14, 66...

Lk 22, 56...

Yn 18, 17...

N’ANAVEZAN-ME KET AN DEN!...

⁶⁹ Pèr avad a zo azezet er-mêz, er porz, ha davetañ e teu eur zervicherez yaouankig en eur lavared: **“Te ive, te a oa gand Jezuz-ar-Galilead!”** ⁷⁰ Dirag an oll, e nac’h o lavared: **“N’ouzon ket petra lavarez!”** ⁷¹ P’ema o vond warzu an nor-vraz, e tegouez d’eur zervicherez-all

*Skouarnadou, karvanadou, javedadou...

e weled, hag e lavar-hi d'ar re a zo eno: **“Henez a oa gand Jezuz-an-Nazaread!”**.⁷² Ha nac'h a ra adarre en eur doui: **“N'anavezan ket an Dén!”**⁷³ Prest goude e teu ar re a zo eno da lavared da Bèr: **“Evid gwir, ez out-te ive euz an dud-ze!. rag ema da rann-yêz ouz da ziskulia!”**⁷⁴ Neuze e krog da vallozi ha da doui: **“N'anavezan ket an Dén!”**. Ha raktal e kan eur c'hillog!⁷⁵ Hag e teu soñj da Bèr euz ar Gomz e-neus lavaret Jezuz: **“Araog d'eur c'hillog kana, teir gwech az-po va nahet!”**

Hag eñ mond er-mêz ha gouela c'hwero...

27

Mk 15, 1
Lk 23, 1
Yn 18, 28

PEHET AM-EUS O REI EUR GWAD DIREBECH!

¹ Deuet ar mintin, a-unan e tiviz an oll Veleien-Vraz ha Kozidi ar Bobl, a-eneb Jezuz, d'e gas d'ar maro! ² Hag e jadenna a reont evid e gas ganto hag e rei etre daouarn Pilat, ar Gouarnour. ³ Judaz, an hini e-neus e roet, o weled neuze ez eo barnet d'ar maro, a zav keuz dezañ! Degas a ra endro an tregont pezarhant d'ar Veleien-Vraz ha d'ar Gozidi, ⁴ en eur lavared: **“Pehet am-eus o rei eur Gwad direbech!”** Int-i a lavar: **“Petra an dra-ze deom-ni! Da-unan e weli!”** ⁵ Stlapet gantañ ar peziou-arhant er zantual, e tec'h kuit hag ez a d'en em grouga...

⁶ Ar Veleien-Vraz, en eur gemer ar peziou-arhant, a lavar: **“N'eo ket aotreet d'o zaoler en Teñzor, pa z'int priz ar Gwad!”** ⁷ Ken-etrezo e tivizont da brena Park-ar-Poder da zebelia an Diavezidi. ⁸ Setu perag ez eo galvet ar park-se beteg-henn 'Park-ar-Gwad'... ⁹ Sevenet eo neuze ar pez a zo lavaret dre ar Profed Jeremi, pa lavar:

Zak 11,12-13

“Kemeret o-deus an tregont pezarhant,

“Priz an Hini bet lakeet e-priz hag o-deus prizachet Bugale Izrael!

¹⁰ *“Hag o roet o-deus evid Park-ar-Poder,*

“Evel m'e-neus an Aotrou kemennet din!”

Mk 15, 2...
Lk 23, 2...
Yn 18, 28...

BARABAZ PE JEZUZ ?

¹¹ Jezuz avad a zo en e zav dirag ar Gouarnour, hag e c'houlenn outañ ar Gouarnour: **“Daoust ha C'hwil eo Roue ar Juzevien ?”** Ha Jezuz a lavar dezañ: **“Mad e lavarez!”** ¹² Ha goude dezañ beza tamallet gand ar Veleien-Vraz hag ar Gozidi, ne respont netra! ¹³ Neuze e lavar Pilat dezañ: **“Daoust ha ne glevit ket ped testeni a zougont a-eneb deoc'h!”** ¹⁴ Ha ne respont dezañ war netra ebed, ken m'eo souezet braz ar Gouarnour...

Yn 18,39

¹⁵ Da geñver ar Gouel, ez eo ar Gouarnour kustum da ziliamma d'ar Bobl eur prizoniad, an hini a garont! ¹⁶ Bez' e-neus neuze eur prizo-

niad brudet-braz, anvet Barabaz! ¹⁷ Pa 'z int eta bodet, e lavar dezo Pilat: **“Pehini ho-peus c’hoant e lakfen diliamma deoc’h ? Barabaz pe Jezuz, an Hini a vez anvet Mesiaz ?”** ¹⁸ Rag gouzoud a ra o-deus int-i e roet etre e zaouarn dre warizi!

¹⁹ War e Gador-Varn eo azezet, pa gas e wreg davetañ eun den da lavared dezañ: **“Na vezet netra etre te hag an Den just-ze! Rag kalz poaniou am-eus diwasket hirio dre huñvre ablamour dezañ!”** ²⁰ Ar Veleien-Vraz hag ar Gozidi a zoug an dud da c’houleñn Barabaz ha da gas Jezuz d’ar maro...

²¹ Hag ar Gouarnour a zav e vouez da lavared dezo: **“Euz an daou-mañ, pehini ho-peus c’hoant e lakfen diliamma deoc’h ?”** Int-i a lavar: **“Barabaz!”** ²² Dezo e lavar Pilat: **“Petra a rin eta euz Jezuz a vez anvet Mesiaz ?”** Hag e lavar an oll: **“Ra vo staget ouz ar groaz!”** ²³ Eñ avad a lavar: **“Peseurt droug e-neus 'ta greet ?”** A-bouez-penn e youhont o lavared: **“Ra vo staget ouz ar groaz!”**

²⁴ O weled ne zeu ket da-benn, med e sav kentoc’h dispac’h, e kemer Pilat dour da welhi e zaouarn dirag ar Bobl en eur lavared: **“Direbech on-me e-keñver Gwad an Den just-mañ! C’hwí hoc’h-unan a welo!”** ²⁵ Hag ar Bobl en he fez da respont o lavared: **“Ra vezo e wad warnom-ni ha war or bugale!”** ²⁶ Neuze e laka diliamma Barabaz, med skourjeza Jezuz hag e rei dezo evid beza staget ouz ar groaz...

Mk 15, 16...
Lk 23, 11...
Yn 19, 2...

SALUD! ROUE AR JUZEVIENT!

²⁷ Soudarded ar Gouarnour a gas neuze Jezuz ganto e porz ar Gouarnour, hag endro dezañ e ken-vodont ar Gohortenn en he fez! ²⁸ Hag e ziwiska a reont evid lakaad warnañ eur vantell ruz-tan! ²⁹ Eur gurunenn a vlašonont gand spern, hag e lakont war e benn, hag ive eur raosklenn en e zorn dehou! Daoulina a reont dirazañ hag e c’hoapaad o lavared: **“Salud! Roue ar Juzevien!”** ³⁰ Hag en eur dufa warnañ, e kemeront ar raosklenn da skei war e benn! ³¹ Goude c’hoarzin goap warnañ, e tennont diwarnañ e vantell, e wiskont dezañ e zillad, hag e gas a reont ganto evid e staga ouz ar groaz...

Mk 15, 21...
Lk 23, 26...
Yn 19, 16...

HEMAÑ EO JEZUZ, ROUE AR JUZEVIENT!

³² En eur vond er-mêz, e kavont eun den, eur Sirenead, Simon e ano, hag ober a reont dezañ dougen kroaz Jezuz... ³³ Erruet el lec’h anvet Golgota, - da lavared eo ‘Lec’h ar Glopenn’, ³⁴ e roont dezañ da eva gwinn mesket gand bestl: tañvad a ra, med ne fell ket dezañ eva. ³⁵ P’o-deus e staget ouz ar groaz, e lodennont e zillad, o tenna al Lod! ³⁶ Hag ec’h azezont eno evid e ziwall!

³⁷ A-zioc’h e benn, e lakont e skrid-tamall:

Lk 22,37

“Hemañ eo Jezuz, Roue ar Juzevien!” ³⁸ D’e heul, e stagont neuze ouz ar groaz daou dorfetour, unan a-zehou, hag unan a-gleiz.

Mz 15,29...
Lk 23,35...

³⁹ An dremenidi avad e zismeg o heja o fenn, ⁴⁰ hag o lavared: **“C’hwï hag a ziskar ar zantual hag e adsao en eur ober tri devez, en em zaveteit hoc’h-unan! Ma z’oc’h-c’hwï Mab da Zoue, diskennit diouz ar groaz!”**. ⁴¹ Evel-se ive, e c’hoarz goap ar Veleien-Vraz gand ar Skribed hag ar Gozidi, en eur lavared: ⁴² **“Re-all e-neus saveteet! Ne c’hell ket en em zavetei e-unan! Roue Izrael eo-Eñ! Ra ziskenno bremañ diouz ar groaz hag e kredim ennañ!”** ⁴³ **Fizioud a ra war Zoue! Da Zoue e ziframma bremañ, ma talc’h dezañ! Rag lavaret e-neus: ‘Mab on-me da Zoue!’”**. ⁴⁴ Evel-se ive e teu d’e zismega an dorfetou-rien stag ouz ar groaz en e gichenn!

Salm 22,9

Mk 15, 33...
Lk 23, 44...
Yn 19, 28...

ELI! ELI! LAMA SABAKTANI ?

Salm 22,2

⁴⁵ Adaleg ar c’hwehved eur beteg an naved, e tegouez teñvalijenn war an Douar a-bez! ⁴⁶ Wardro an naved eur, e youc’h Jezuz a vouez kreñv: **“Eli! Eli! Lama sabaktani ?”** da lavared eo: **“Va Doue! Va Doue! Perag ho-peus va dilezet ?”** ⁴⁷ Ouz e gleved, e lavar lod euz ar re a zo eno: **“O c’helver Eli ema!”** ⁴⁸ Ha raktal e red unan anezo da gemer eur spoueenn leun a winegr ha d’e lakaad e beg eur raosklenn evid rei dezañ da eva. ⁴⁹ Ar re-all avad a lavar dezañ: **“Lez! Gwelom ha dond a raio Eli d’e zavetei!”**

EVID GWIR EO HEMAÑ MAB DA ZOUÉ.

⁵⁰ Jezuz avad, en eur youhal adarre a vouez kreñv, a zilez e Spered!...

1 Pèr 3,19

⁵¹ Ha setu gouél ar zantual o frega e daou euz an nec’h beteg an traoñ, hag an Douar o krena, hag ar rehier o faouti, ⁵² hag ar beziou o tigeri, ha kalz korvou a dud santel eet da anaon oc’h adsevel! ⁵³ Eet ermêz euz o beziou, goude e Adsao, e teuont er Gêr Zantel d’en em ziskouez da veur a zen...

Mk 15,39

⁵⁴ Ar c’hantener hag ar re a zo gantañ o tiwall Jezuz, o weled ar c’hrén-douar hag an traou-all, a grog enno aon braz hag e lavaront:

“Evid gwir! Bez’ e oa Hemañ Mab da Zoue!”

⁵⁵ Bez’ ez eus eno avad kalz gwraegez o selled, med euz a-bell! Heuliet o-deus Jezuz adaleg ar Galile, ouz e zervicha. ⁵⁶ En o zouez ema Mari-Madalen, ha Mari, mamm Jakez ha Jozef, ha mamm mibien Zebede...

DIWALLIT MAD AR BÉZ!

Mk 15, 40...
Lk 23, 49...
Yn 19, 38...

⁵⁷ Deuet an abardaez, e teu eun den pinvidig euz Arimati, Jozef e ano, hag a zo, eñ ive, diskib da Jezuz. ⁵⁸ Mond a ra daved Pilat hag e c’houlenn Korv Jezuz. Pilat a gemenn neuze ma vefe roet dezañ. ⁵⁹ Jozef a gemer ar C’horv evid e liena en eul liñser c’hlan, ⁶⁰ hag e lakaad a ra en e véz nevez e-neus-eñ greet toulla er roc’h! Eur mên braz a ruill dirag

dor ar béz hag ez a kuit... ⁶¹ Bez' ez eus eno avad Mari Madalen hag ar Vari all, azezet dirag ar béz...

⁶² D'an deiz war-lerc'h, -a zo goude ar zabad-, ez eo bodet ar Veleien-Vraz hag ar Gozidi dirag Pilat: ⁶³ **"Aotrou! emezo, deuet ez eus deom soñj e-neus an Toueller-ze lavaret, Eñ c'hoaz beo: 'Goude tri devez ec'h adsavin da veo!'.** ⁶⁴ **Kemenn eta ma vefe diwallet ar béz beteg an trede deiz, gand aon na zeufe e Ziskibien d'e laerez, ha da lavared d'ar Bobl: 'Adsavet eo a-douez ar re varo!' Rag an touella-deg ziweza-ze a vefe gwasoc'h eged an hini genta!"** ⁶⁵ Pilat a lavar dezo: **"Bez' ho-peus c'hwi gwarded! Kit ha diwallit mad ar béz evel ma ouezit!"**. ⁶⁶ Mond a reont da ziwall ar béz o siella ar mên hag o lakaad gwarded...

28

N'EMA KET AMAN! ADSAVET EO!...

¹ Goude ar zabad, p'ema goulou-deiz kenta ar zizun o c'houlaoui, e teu Mari-Madalen hag ar Vari all da zelled ouz ar béz...

² Ha setu ma c'hoarvez eur c'hrén-douar braz, rag eun êl d'an Aotrou, diskennet euz an Neñv, a zeu eno da ruilla kuit ar mên ha da azeza warnañ!... ³ E zremm a zo evel eul luhedenn, hag e wiskamant gwenn evel erc'h! ⁴ Gand an aon razañ avad, e krén ar warded hag e teuont da veza evel maro!...

⁵ O sevel e vouez, e lavar an êl d'ar gwragez: **"N'ho-pet ket aon! Rag goud a ouzon emaoe'h o klask Jezuz, a zo bet staget ouz ar groaz!"** ⁶ **N'ema ket amañ! Rag adsavet eo evel m'e-neus lavaret. Deuit ha gwelit al lec'h ma oa astennet ennañ!** ⁷ **Ha bremañ, kit da lavared d'e Ziskibien: 'Adsavet eo a-douez ar re varo! Ha setu-Eñ o vond en ho raog d'ar Galile, hag e weled a reoc'h eno!'.** Setu m'am-eus lavaret deoc'h!"

⁸ Ha buan e tehont kuit euz ar béz: diwar aon ha levenez vraz e redont da gas ar C'HELOU-MAD d'e Ziskibien...

TRIDIT A LEVENEZ!

⁹ Ha setu Jezuz o tond d'o diambroug, en eur lavared: **"Tridit a levenez!"** Mond a reont davetañ da dapoud krog en e dreid ha da stoui dirazañ. ¹⁰ Neuze e lavar Jezuz dezo: **"N'ho-pet ket aon! Kit da gas ar C'helou-mad d'am Breudeur, dezo mond d'ar Galile! Va gweled a reint eno!"**.

DEUET E ZISKIBIEN D'E LAERREZ!

¹¹ P'emaint o vond, setu lod euz ar warded o tond e Kêr da zege-menn d'ar Veleien-Vraz kement a zo c'hoarvezet! ¹² Ar re-mañ, bodet a-unan gand ar Gozidi, a ziviz rei eur bern arhant d'ar zoudarded ¹³ en eur lavared dezo: **“Lavarit 'ta: ‘Deuet eo e Ziskibien epad an noz d’e laerrez, pa oam-ni kousket!’** ¹⁴ **Ha ma vez brudet an dra-ze beteg ar Gouarnour, e teuim a-benn anezañ hag e raim deoc’h beza dinec’h!”** ¹⁵ Int-i avad a gemer an arhant, hag ober a reont evel m’eo kenteliet dezo... Ha brudet e vez ar gont-ze e-touez Juzevien beteg bre-mañ...

SETU ‘ME EO A ZO’ GANEOC’H.

Lk 24,11...
Yn 20,24...

¹⁶ Mond a ra an Unneg Diskib d’ar Galile, war ar Menez e-neus Jezuz merket dezo. ¹⁷ Ouz e weled, e stouont dirazañ, med lod anezo a jom nehet...

Yn 3,35

¹⁸ Deuet daveto, e komz Jezuz dezo o lavared:

“Roet eo bet din peb galloud en Neñv ha war an douar!

Mk 16,15

¹⁹ **“Kit eta, hag euz an oll Baganed grit Diskibien,**

“Ouz o badezi en Ano an Tad hag ar Mab hag ar Spered Santel!

²⁰ **“Hag o teski dezo mired kement am-eus-me gourhemennet deoc’h!**

Mz 1,23
Yn 14,18

“Ha setu ‘Me eo a zo’ ganeoc’h

“A-héd an oll zeveziou beteg Fin an Amzer!”.

Mark hag e Aviel

Mark a zo ganet e Jeruzalem, ha da heul e dud, ez eo deuet abred da gredi e Jezuz. Dizale e-neus en em ouestlet da zervich an Aviel: heuliet e-neus en o Misionou ar visionerien genta, e genderv Barnabe ha Paol (Ob 12, 12 ; Kol 4, 10). Diwezatoc'h avad e-neus dalhet da heulia Pèr e-unan: gantañ e-neus labouret hir-amzer e Rom, evel eur mab karet... (Ob 13, 5 ; 1 Pèr 5, 13)

Wardro ar bloavez 60, eo bet karget da zastum en eul Leor ar pep penna euz Prezeg Pèr e-unan, en eur implij ouspenn Aviel arameeg Maze, bet troet e gresianeg, ha meur a bennad all...

Evel ma ra Pèr en e Brezeg, Mark, en e Aviel, a glask degas ar Baganed d'ar Feiz e Jezuz Krist, o tiskouez eo Jezuz mab d'an Doue gwirion ha Salver ar Bed. Souezet eo an dud gand e gelennadurez roet gand eur galloud dispar! Souezet int muioc'h c'hoaz gand e c'halloud war an avel hag ar mor, war ar c'hleñvejou a bep seurt, war ar maro zoken! E vadelez a ziskouez ive da Baganed, d'eur Baganez ha d'he merc'h! (Mk 1, 22 ; 4, 39 ; 2, 12 ; 7, 24...) Galloud e-neus ivez Jezuz war an droug-sperejou, ken ma teuont da ziskulia eo-Eñ Mab Doue! Jezuz avad a ra dezo chom sioul! (Mk 1, 34 ; 2, 22)

Doue an Tad a zeu ive da rei dezañ testeni. Da zeiz Badeziant Jezuz, ha war ar Menez Tabor, e tiskenn e Vouez euz an Neñv: **“C’hwï eo va Mab muia-karet: ennoc’h e kavan va dudi!”** (Mk 1, 11 ; 9, 6)

D'ar fin, evid e lennerien pagan, e tegas Mark eun testeni mad da c'hounid o fiziañs, testeni ar c'hantener roman e-neus heuliet Jezuz en e Basion: chomet eo sebezet o weled hag o kleved Jezuz war ar groaz, hag e lavar: **“Evid gwir, e oa an Den-ze Mab da Zoue!”** (Mk 15, 39)

A-hed e Aviel evid gwir, Mark a verk mad e talc'h Jezuz d'ober sioulig e labour a Zalver: ne glask ket gloar an dud! 'Benn ar fin eo bet kaset da netra dre e Basion hag e varo war ar groaz! (Mk 1, 34, 44 ; 3, 12 ; 5, 43)

Med adsavet eo a-douez ar re varo! Ha savet eo d'an Neñv! Ha n'eus nemed Eñ da c'helloud kas an dud d'eur Vuez eüruz ha peurbaduz: **“An hini a gredo hag a vezo badezet a vezo salvet!**

“An neb na gredo ket a vezo kondaonet!” (Mk 16, 16)

Aviel Jezuz-Krist
hervez
Sant Mark



Sant Mark, Pleiber-Krist. Sk J. F.

1

KELOU-MAD JEZUZ KRIST!

Mz 3, 1-6...
Lk 3, 1-6...

1 Digor Kelou-Mad Jezuz Krist, Mab Doue:

2 Evel m'eo skrivet er profed Izai:

Mal 3,1

“*Setu ma kasan va C'hannad en ho raog,*

Iz 40,3

“*Hag e kempenno hoc'h hent dirazoc'h!*

3 “*Mouez an hini a youc'h er gouelec'h:*

“*Kempennit hent an Aotrou; lakit eeun e wenojennou*”,

4 Bez' ema Yann o vadezi er gouelec'h hag oc'h embann badeziant an Distro ouz Doue evid kaoud pardon ar pehejou. ⁵ Ha davetañ e tired Bro ar Jude a-bez hag oll Jeruzalemiz: badezet e vezont gantañ er Stêr Jordan en eur anzav o fehejou... ⁶ Gwisket eo Yann gand dillad reun kañval, gand eur c'houriz-lêr endro d'e zargreiz, ha bez' e tebr killeien-raden ha mêl-gouez!. ⁷ Embann a ra o lavared:

Yn 1,27

“Dond a ra war va lerc'h an Hini kreñvoc'h egedon!

“Ha n'on-me ket dîn, en eur blega, da ziskoulma lêrenn e zandalennou!

8 “Me ho padez en dour! Eñ avad ho padezo er Spered Santel!”

HA GAND YANN EO BADEZET JEZUZ!

⁹ Hag en deveziou-ze, e teu Jezuz euz Nazared er Galile, ha badezet eo gand Yann er Jordan! ¹⁰ Savet raktal euz an dour, e wél (Jezuz) an Neñvou o tigeri hag ar Spered, evel eur Goulm, o tiskenn warnañ. ¹¹ Hag euz an Neñv e tiskenn eur Vouez: **“C'hwi eo va Mab muia karet! Ennoc'h e kavan va dudi!”**

¹² Hag ar Spered e vount raktal d'ar gouelec'h... Hag er gouelec'h a-hed daou-ugent devez, e vez-Eñ tentet gand Satan... ¹³ Eno ema gand loened gouez, hag an êlez a vez ouz e zervicha...

DEUIT D'AM HEUL!...

¹⁴ Goude m'eo taolet Yann er prizon, e kerz Jezuz d'ar Galile, en eur embann Kelou-Mad Rouantelez Doue. ¹⁵ Bez' e lavar:

“Erruet eo ar Poent hag ema tost Rouantelez Doue!

“Troit ho kalon ouz Doue, ha kredit er C'helou-Mad!”

¹⁶ En eur vond a-hed Mor-ar-Galile, e wél Simon hag Andre, breur

Simon, o stlepel rouejou er mor, rag bez' ez int pesketêrien. ¹⁷ Dezo e lavar Jezuz: **“Deuit d’am heul, hag e rin deoc’h dond da veza Pesketêrien-tud!”**¹⁸ Ha raktal, dilezet ganto o rouejou, ez eont d’e heul! ¹⁹ Eet eun tamm larkoc’h, e wél Jakez-mab-Zebede ha Yann, e vreur, int-i ive en o bag o kempenn o rouejou... ²⁰ Hag Eñ o galv raktal, hag int-i a zilez o zad Zebede er vag gand an devezourien, hag ez eont d’e heul...

KELENN A RA EVEL EUN DEN DEZAÑ GALLOUD!

Lk 4,31 ²¹ Mond a reont da Gafarnaom, ha raktal, d’ar zabad, ez a d’ar zinagog hag e stag da gelenn. ²² Estlammet eo an dud gand e gelennadurez, rag o c’helenn a ra evel eun Den dezañ galloud, ha n’eo ket evel ar Skribed!. ²³ Raktal e tegouez en o zinagog eun den sujet d’eur spered hudur: youhal a ra, ²⁴ ha lavared: **“Aha! Petra’zo etre ni ha c’hwi, Jezuz Nazaread ?? Daoust ha deuet oc’h-c’hwi d’or c’has da goll ? Goud a ouzon piou oc’h-c’hwi: Sant Doue!”** ²⁵ Ha Jezuz a ra trouz dezañ: **“Chom sioul ha kee er-mêz anezañ!”** ²⁶ En eur zifreta an den hag en eur youhal a vouez kreñv, ez a ar spered hudur er-mêz anezañ! ²⁷ Hag e chom an oll sebezet, beteg klask kenetrezo, o lavared: **“Petra eo kement-mañ ? Eur gelennadurez nevez roet gand galloud! Ha gourhemenn a ra d’ar sperejou hudur, ha senti a reont outañ!”** ²⁸ Hag e vrud a red raktal e peb lec’h endro d’ar Galile...

Mz 7,28

Mz 8,29

Mz 8, 14-15
Lk 4, 40-44

AN OLL A ZO OUZ HO KLASK!

Mz 8,14...
Lk 4,38 ²⁹ Kerkent ha deuet euz ar zinagog, ez a da di Simon hag Andre, gand Jakez ha Yann. ³⁰ Lez-vamm Simon a zo gourvezet, terzienn dezi ; ha raktal e komzont dezañ diwar-he-fenn! ³¹ Mond a ra daveti hag ober dezi sevel ; an derzienn a zistag diouti ; hag hi d’o zervicha...

³² D’an abardaez, eet an heol da guzad, e tegasont dezañ an oll re o-deus poan hag an dud sujet d’an droug-spered... ³³ Kêr a-bez a zo bodet dirag an nor! ³⁴ Parea a ra kalz tud, poan dezo diwar bep seurt droug! Kas a ra er-mêz kalz a zroug-sperejou, ha ne lez ket an droug-sperejou da gomz, rag e anavezoud a reont...

Lk 4,42
Mz 14,23...
Lk 3,21 ³⁵ Abred-mad e sav hag ez a er-mêz. Degouezet en eul lec’h distro, ema eno o pedi. ³⁶ D’e glask ez a Pèr hag ar re a zo gantañ. ³⁷ Deuet d’e gavoud, e lavaront dezañ: **“Ouz o klask ema an oll!”** ³⁸ Ha dezo e lavar: **“Deom da lec’h-all, d’ar gêriadennou tro-dro, din da embann eno ive, rag evid-se ez on deuet er-mêz!”** ³⁹ Mond a ra en eur embann en o zinagogou dre ar Galile a-bez, hag ive en eur gas er-mêz an droug sperejou...

ME A FELL DIN; BEZ GLANEET!

Mz 8,2...
Lk 5,12 ⁴⁰ Ha davetañ e teu eun den lôr: Hemañ, en eur zaoulina, e asped o lavared dezañ: **“Ma fell deoc’h, e c’hellit va glanaad!”** ⁴¹ Jezuz, rannet e galon, a astenn e zorn, hag e touch outañ en eur lavared: **“Me a fell din: bez**

glaneet!” ⁴² Raktal ez a al lorgnez kuit dioutañ hag ez eo glaneet! ⁴³ Gourdrouz a ra an den hag e gas kuit raktal, ⁴⁴ en eur lavared dezañ: **“Diwall da lavared tra da zen! Med kee d’en em ziskouez da-unan d’ar beleg, hag evid beza bet glaneet, kinnig ar pez e-neus Moizez kemennet, da veza dezo eun testeni!”** ⁴⁵ Eet er-mêz, e stag an den da embann kalz traou ha da vruda ar c’helou, ken na c’hell mui Jezuz dond e kêr, a-wél d’an dud!

En diavêz e chom, e lehiou distro, ha davetañ e teuont a bep tu!

2

VA MAB, PARDONET EO DIT DA BEHEJOU!

¹ Pa zeu adarre da Gafarnaom, a-benn eun nebeud deveziou e kle-vont lavared ema er gêr! ² Ha setu bodet leun a dud, ken na jom plas ebed ken, na dirag an nor kennebeud! Hag e tispieg ar Gomz dezo! ³ Dond a ra tud da zegas dezañ eun den seizet, douget gand pevar gwaz! ⁴ Pa ne c’hellont ket e zegas dirazañ, en abeg d’an dud, e tizoloont al lec’h m’ema-Eñ: greet ganto eun toull, e lezont da ziskenn ar gwele m’eo astennet warnañ an den seizet...

⁵ Jezuz, o weled o feiz, a lavar d’an den seizet: **“Va mab, pardonet eo dit da behejou!”** ⁶ Bez’ez eus eno, azezet, eun nebeud Skribed, hag en o c’halon e tivizont: ⁷ **“Perag e komz Hemañ evel-se ? Blasfemi a ra! Piou a c’hell pardoni ar pehejou nemed Doue, hag Eñ hepken!”** ⁸ Ha raktal e oar Jezuz, dre e Spered, e tivizont evel-se enno o-unan, ha dezo e lavar: **“Perag divizoud evel-se en ho kalonou ?** ⁹ **Petra eo an esa: lava-red d’an den seizet ‘Pardonet eo dit da behejou’, pe lavared ‘Sav en da zav, kemer da wele ha bale!’ ?** ¹⁰ **Evid ma ouezoc’h e-neus Mab-an-Den galloud da bardoni ar pehejou war an douar, -e lavar d’an den seizet-:** ¹¹ **‘Dit e lavaran: sav en da zav, kemer da wele ha kee d’ar gêr!’**” ¹² Sevel a ra en e zav, kemer e wele ha mond kuit dirag an oll, ken ma z’eo souezet an oll ha ma tougont gloar da Zoue o lavared: **“Biskoaz n’on-eus-ni gwelet kemend-all!”**.

GAND PUBLIKIZ HA PEHERIEN EMA O TEBRI!

¹³ Mond a ra adarre war ribl ar mor: davetañ e teu an dud hag e stag d’o c’helell! ¹⁴ En eur vond, e wél Levi-Mab-Alfe, azezet dirag ar val-touterez, ha dezañ e lavar: **“Deus d’am heul!”** Sevel a ra ha mond d’e heul! ¹⁵ Degouezet dezañ astenn ouz taol e ti Levi, ez eus kalz Publikiz ha Peherien astennet gand Jezuz hag e Ziskibien, rag bez’ ez int e-leiz o vond d’e heul! ¹⁶ Skribed ha Farizeiz, o weled ema o tebri gand Publikiz ha Peherien, a lavar d’e Ziskibien: **“Petra! Gand Publikiz ha Peherien ema-Eñ o tebri hag oc’h eva ?”** ¹⁷ Ouz o c’hleved, e lavar Jezuz dezo:

“N’eo ket an dud kreñv o-deus ezomm a vedisin, med ar re o-deus poan! N’on-me ket deuet da c’helver tud just, med peherien!”.

GWIN NEVEZ E SEHIER-LÊR NEVEZ!

Mz 9, 14-17
Lk 5, 33-39

¹⁸ Bez’ema Diskibien Yann hag ar Farizeiz o yuni, hag e teuont da lavared dezañ: **“Perag ema diskibien Yann ha diskibien ar Farizeiz o yuni, hag ho Tiskibien-c’hwil ne yunont ket!”** ¹⁹ Hag e lavar Jezuz dezo: **“Daoust ha Pôtre al Lein-Eured a c’hell yuni epad m’ema ganto an Den-Nevez ?** ²⁰ Dond a raio an amzer ma vo lamet diganto an Den-Nevez! Neuze e yunint, d’an Deiz-ze!”

Yn 2,9
Ef 5,25
Disk 19,7

²¹ “Ne ’z a den da c’hwriad eur peñsel nevez-gwiel war eur vantell goz: a-hend-all, an tamm nevez a lam eun tamm euz ar vantell goz ha gwasoc’h e vez ar freg! ²² Ha ne z’a den da lakaad gwin nevez e sehier-lêr koz: a-hend-all, ar gwin nevez a laka ar sehier-lêr da darza, hag e vez kollet ar gwin hag ar sehier-lêr! Med gwin nevez e sehier-lêr nevez!”.

AOTROU WAR AR ZABAD EO IVE MAB-AN-DEN!

Mz 12, 1-8
Lk 6, 1-5

²³ Ha d’ar zabad e tegouez dezañ mond dre barkajou gwiniz, hag en eur vond, e teu an Diskibien da zizilla pennou éd... ²⁴ Hag ar Farizeiz a lavar dezañ: **“Gwelit ’ta! Perag e reont d’ar zabad ar pez n’eo ket aotreet ?”** ²⁵ Hag e lavar dezo: **“Daoust ha n’ho-peus morse lennet petra e-neus greet David p’e-noa naon, eñ hag an dud a oa gantañ ?** ²⁶ **Penaoz ez eo eet e Ti-Doue, en amzer ar Beleg-Braz Abiatar, hag e-neus debret baraennou ar Brovadenn ha n’eo aotreet debri nemed gand ar veleien, hag anezo e-neus roet ive d’ar re a oa gantañ!”** ²⁷ Hag e lavar dezo: **“Ar zabad a zo evid an den, ha n’eo ket an den evid ar zabad! ²⁸ Evel-se, Aotrou war ar zabad eo ive Mab-an-Den!”.**

1 Sam 21,1...

3

D’AR ZABAD, OBER VAD PE OBER DROUG ?

Mz 12, 9-16
Lk 6, 6-11

¹ Mond a ra adarre d’ar zinagog, hag eno ez eus eun den, dezañ eun dorn dizehet. ² Warnañ e taolont evez, da weled hag e barea a raio d’ar zabad, evid kaoud d’e damall! ³ Hag Eñ a lavar d’an den a zo dizehet e zorn: **“Sav! ha deus e-kreiz!”** ⁴ Ha dezo e lavar: **“Daoust hag aotreet eo ober vad d’ar zabad pe ober droug ? Savetei eur vuez pe he laza ?”** Int-i avad a jom sioul. ⁵ Tro-dro e taol warno e zell gand kounnar, ha, glaharet diwar kaleter o c’halonou, e lavar d’an den: **“Astenn da zorn!”** Henn ober a ra: pareet eo e zorn! ⁶ En eur vond kuit, e tiviz raktal ar Farizeiz gand an Herodezidi a-eneb Jezuz, a-benn e gas d’ar maro!

Mz 19,8
Ob 7,53

⁷ Ha Jezuz gand e Ziskibien a dec'h war ribl ar Mor: euz ar Galile ez a leun a dud d'e heul ; euz ar Jude ive, ⁸ euz Jeruzalem, euz an Idume; euz an tu-all d'ar Jordan, hag euz wardro Tir ha Sidon e teu davetañ tud e-leiz, diwar gleved ano euz kement a ra! ⁹ Hag e lavar d'e Ziskibien ma vefe eur vag prest evitañ, gand aon na zeufe an dud d'e voustra!

Mz 8,29 ¹⁰ Parea a ra kalz tud, ken ma teu an oll re o-deus gwall-boaniou d'en em daoler warnañ evid touch outañ! ¹¹ Hag ar sperejou hudur, ouz e weled, a stou dirazañ, hag en eur youhal e lavaront: **“C’hwí eo Mab Doue!”**.

¹² Ha dezo e ra trouz, da viroud outo d'e ziskulia...

KEMER A RA DAOUZEG.

Mz 10, 1-4
Lk 6, 12-16

¹³ Neuze e sav war ar Menez, ha davetañ e c'halv ar re a fell dezañ e-unan: ha dond a reont davetañ! ¹⁴ Hag e ra ma vefe Daouzeg d'e heul, ha ma c'hellfe o c'has da brezeg, ¹⁵ ha rei dezo galloud da gas kuit an droug-sperejou. ¹⁶ Diazeza a ra an Daouzeg: Simon, lesanvet gantañ Pèr ; ¹⁷ Jakez-mab-Zebede, ha Yann, breur Jakez, lesanvet gantañ Boanerjèz, da lavared eo 'Paotred-ar-Gurun' ; ¹⁸ hag Andre, Filip, Bartolome, Maze, Tomaz, Jakez-mab-Alfe, Tade, Simon ar C'hannad, ¹⁹ ha Judaz Iskariot, an hini end-eeun e-neus e roet...

BEZ' E LAVARONT: KOLLET E-NEUS E BENN!

Mz 12,24-32
Lk 11, 15...

²⁰ Dond a ra d'ar gêr, hag ez eus adarre bodet leun a dud, ken na c'hellont ket zoken debri o bara! ²¹ Ha klevet ganto ano euz kement-se, e teu e dud da baka krog ennañ, rag bez' e lavaront: **“Kollet e-neus e benn!”**

²² Hag ar Skribed, diskennet euz Jeruzalem, a lavar: **“Beelzeboub a zo ennañ!”** hag ive: **“Dre vestr an droug-sperejou e kas kuit an droug-sperejou!”** ²³ Hag Eñ o c'halv davetañ hag e lavar dezo dre barabolennou: **“Penaoz e c'hell Satan kas Satan kuit ? ²⁴ Ma teu eur rouantelez da zavel a-eneb dezi hec'h-unan, ne c'hell ket ar rouantelez-ze chom en he zav! ²⁵ Ma teu eun ti da zavel a-eneb dezañ e-unan, ne c'hell ket an ti-ze chom en e zav! ²⁶ Ha ma sav Satan a-eneb dezañ e-unan, ha ma z'eo rannet, ne c'hell ket chom en e zav: med echu eo gantañ! ²⁷ Med ne c'hell den mond e Ti an Hini-Kreñv da skrapa e draou, ma ne liamm ket da genta an Hini-Kreñv: ha neuze e skrapo e Di!”**

²⁸ **“E gwirionez e lavaran deoc'h: Pardonet e vo d'an dud an oll behejou, hag an oll vlasfemou o-dezo blasfemet! ²⁹ An neb avad e-no blasfemet a-eneb d'ar Spered Santel, n'e-no ket a bardon da viken, med sujet eo d'eur pehed peurbaduz!”** ³⁰ Kement-se, pa lavaront: **“Eur spered hudur a zo ennañ!”**

Mz 12, 46...
Lk 8, 19, 21

PIOU EO VA MAMM HA VA BREUDEUR ?

³¹ Hag e tegouez e Vamm hag e vreudeur... Chomet er-mêz, e kasont davetañ tud d’e c’helver! ³² Endro dezañ ez eus kalz tud azezet, ha dezañ e lavaront: **“Setu ho Mamm, hag ho preudeur hag ho c’hoarezed er-mêz ouz ho klask!”** ³³ Hag e respont o lavared dezo: **“Piou eo va Mamm ha va breudeur?”** ³⁴ En eur daoler eur zell tro-dro war an dud azezet endro dezañ, e lavar: **“Setu va Mamm ha va Breudeur!”** ³⁵ **Rag an hini a ra bolontez Doue, henez a zo din breur ha c’hoar ha mamm!”**.

4

SETU AN HADER O VOND DA HADA...

¹ Hag adarre e stag da gelenn war ribl ar mor ; endro dezañ ez eus bodet leun-a-dud ken ma sav en eur vag, hag ec’h azez er mor; an oll dud a jom war an douar, troet warzu ar mor. ² Kelenn a ra dezo kalz traou dre barabolennoù, ha dezo e lavar en e gelennadurez:

³ **“Selaouit! Setu an Hader o vond da hada. ⁴ Ha neuze, epad an hada, e kouez had a-hed an hent: dond a ra al laboused d’o debri! ⁵ Hag e kouez had all war ar veineg, el lec’h n’o-deus ket kalz a zouar! Raktal e tiwanont, pa n’eus ket dezo a zonder douar! ⁶ Pa uhella an heol, ez int skotet, ha pa n’eus ket dezo a wrizioù, e tizec’hont! ⁷ Hag e kouez had all e-touez ar spern: sevel a ra ar spern hag e teu d’o moug! Ne zougont tamm frouez ebed! ⁸ Hag e kouez had all war an douar kaer! Bez’ e tougont frouez o sevel hag o kreski: unan a zoug tregont, unan tri-ugent, unan kant!...”**

⁹ Hag e lavar: **“An neb e-neus diskouarn da gleved, ra glevo!”**.

¹⁰ P’ema outañ e-unan, e teu ar re a zo endro dezañ gand an Daouzeg d’ober goulennoù outañ diwar-benn ar barabolennoù, ¹¹ ha dezo e lavar: **“Deoc’h eo roet Mister Rouantelez Doue! Med d’an dud-ze euz an diavêz, e teu pep tra dre barabolennoù! ¹² Evel-se,**

“Selled ha selled a reint, ha ne welint ket!

“Kleved ha kleved a reint, ha ne intentint ket!

“Gand aon na drofent ouz Doue ha ma vefe pardonet dezo!”

¹³ Hag e lavar dezo: **“Ha c’hwï, ne intentit ket ar barabolenne-ze? Ha penaoz ec’h intentoc’h an oll barabolennoù ?”**

¹⁴ **“An Hader a zo oc’h hada ar Gomz! ¹⁵ Ar re a zo hadet en hent, el lec’h m’eo hadet ar Gomz: pa glev ar re-ze ar Gomz, e teu raktal Satan da denna ar Gomz hadet enno! ¹⁶ Evel-se ive eo ar re a zo hadet er veineg: pa glevont ar Gomz, he degemer a reont raktal gand levenez ¹⁷ N’o-deus ket avad a wrizioù enno o-unan, med bez’ ez**

int tud amzerier ; ha neuze, pa zegouez trubuill pe heskinerez ablamour d'ar Gomz, raktal e vezont skoillet! ¹⁸ Ha tud all eo ar re a zo hadet e-touez ar spern: ar re-ze eo an dud a glev ar Gomz, ¹⁹ med nehamant ar Bed-mañ ha touellerez ar binvidigez ha c'hoantegeziou euz traou-all, a zil enno hag a voug ar Gomz: chom a ra difrouez! ²⁰ Hag ar re-mañ eo ar re a zo hadet en douar kaer: Ar re-ze eo ar re a glev ar Gomz hag he degemer mad, ha frouez a zougont, unan tregont, unan tri-ugent, unan kant.”

NE GOMZ KET DEZO HEB PARBOLENNOU.

²¹ Ha dezo e lavar: “Daoust ha degaset e vez eul lamp evid beza lakeet dindan ar boezell pe dindan ar gwele ? Daoust ha n'eo ket evid beza lakeet war ar c'hantolor ? ²² Rag ne vez kuzet eun dra nemed evid dond da veza lakeet a-wél, ha ne vez goloet eun dra nemed evid beza dizoloet! ²³ M'e-neus unan bennag diskouarn da gleved, ra glevo!”

²⁴ Hag e lavar dezo: “Gwelit petra a glevit! Gand ar muzul a vuzulit gantañ, e vezo muzulet deoc'h! ha muioc'h e vo lakeet deoc'h-c'hwi hag a zelaou! ²⁵ Rag an hini e-neus, dezañ e vo roet! Hag an neb n'e-neus ket, ar pezh e-neus end-eeun a vo tennet digantañ!”

²⁶ Lavared a ra c'hoaz: “Evel-henn eo Rouantelez Doue: evel eun dén hag a daol had war an douar. ²⁷ Ha dezañ beza kousket pe war-zav, en noz hag en deiz, e tiwan hag e kresk an had, ne oar ket eñ penaoz!

²⁸ Drezañ e-unan, an douar a zoug frouez, da genta yeot, goude-ze pennou, goude-ze leun a c'hreun er pennou! ²⁹ Pa zistag ar frouez, raktal e kas ar falz endro, rag degouezet eo an eost!”

³⁰ Lavared a ra ouspenn: “Ouz petra eo deom heñvellaad Rouantelez Doue ? Pe dre be-seurt parabolenn he displega ? ³¹ Heñvel eo ouz eur c'hreunenn zezo: pa vez hadet war an douar, ez eo biannoc'h eged an oll hajou war an douar! ³² Pa vez hadet, e sav hag e teu da veza brasoc'h eged an oll legumaj, hag ober ar ra skourrou braz ken ma c'hell laboused an neñv kluda dindan e skeud!”

³³ Ha gand kalz parabolennou, par d'ar re-ze, e lavar dezo ar Gomz, diouz ma c'hellont klevet! ³⁴ Ne gomz ket dezo heb parabolennou, med d'e Ziskibien, diouz o zu, e tispleg kement-tra!

CHOM SIOUL. RO PEOC'H!

³⁵ Hag en deiz-ze, d'an abardaez, e lavar dezo: “**Treuzom d'an tu-all!**” ³⁶ Ha lezel a reont an dud hag E gemer, evel m'ema, ganto er vag: bagou all a zeu d'e heul... ³⁷ Ha setu eur gwall-gorventenn o tiroll hag o stlepel tarziou er vag, beteg dezi beza karget pe dost! ³⁸ Eñ avad a zo e

penn-a-dreñv ar vag, kousket war eun dorchenn! E zihuna a reont o lavared dezañ: **“Mestr! Ne ra netra deoc’h ez afem-ni da goll!”** ³⁹ Pa zav, e ra trouz d’an avel, hag e lavar d’ar mor **“Chom sioul! Ro peoc’h!”** Kouezet an avel, e c’hoarvez sioulder braz! ⁴⁰ Hag e lavar dezo: **“Perag oc’h-c’hwi aonieg evel-se ? Perag n’ho-peus ket a feiz ?”** ⁴¹ Hag enno e krog aon, aon braz, hag etrezo e lavaront: **“Piou ’ta eo Hemañ, peogwir e sent outañ hag an avel hag ar mor ?”**

5

EMBANN KEMENT E-NEUS GREET DIT AN AOTROU!

¹ Mond a reont en tu-all d’ar Mor, e korn-bro ar C’heraziz. ² Pa ziskenn euz ar vag, e tegouez raktal gantañ, euz a-douez ar béziou, eun den sujet d’eur spered hudur. ³ Er béziou e vez o chom, ha gand eur jadenn zoken ne c’hell den e zelher stag! ⁴ Aliez eo bet staget gand hualou ha chadennou, ha gantañ e veze torret ar chadennou ha brevet an hualou... ha n’eus den gouest d’e zuja! ⁵ Bepred, noz-deiz, e vez e-touez ar béziou ha war ar menezioù, hag o vloñsa e gorr a daoliou-mein!

⁶ O weled Jezuz a-bell, e tired hag e stou dirazañ, ⁷ hag en eur youhal a vouez kreñv e lavar: **“Petra’zo etre me ha c’hwi, Jezuz, Mab an Doue Oll-C’halloudeg ? Me ho ped, dre Zoue: mirit d’am bourevia!”** ⁸ Rag dezañ e lavar Jezuz: **“Kee er-mêz euz an den, spered hudur!”** ⁹ Hag e c’houleñn digantañ: **“Petra eo da ano ?”** Hag e lavar dezañ (ar spered) : **“Strollad eo va ano, rag bez’ ez om niveruz!”** ¹⁰ Goulenn stard a ra digand Jezuz miroud d’o c’has kuit euz ar vro. ¹¹ Eno avad, war ar menez, ez eus eur vandenn vraz a voc’h o peuri. ¹² Hag int-i e asped o lavared: **“Or c’hasit er moc’h, ma z’aim-ni enno!”** ¹³ Hag o lezel a ra da vond... Eet er-mêz euz an den, ez a ar sperejou hudur er moc’h, hag ar vandenn voc’h mond a lamm diwar an tarroz er mor: wardro daou vil a zo anezo!... Hag ez int beuzet er mor.

¹⁴ Ar bastored a dec’h kuit, da gas ar c’helou e kêr ha war ar mêz, hag e teu an dud da weled ar pez a zo c’hoarvezet. ¹⁵ Dond a reont daved Jezuz, hag e sellont mad ouz an den a oa sujet d’eun droug-spered: bez’e chom azezet, gwisket ha reiz, an den a zo bet sujet d’eur strollad!... Hag e krog aon enno! ¹⁶ Ar re o-deus gwelet a zispleg dezo penaoz eo degouezet gand an den sujet d’an droug-spered, hag ive abadenn ar moc’h! ¹⁷ Neuze e stagont da c’houleñn digantañ mond kuit diwar o douarou...

¹⁸ P’ema o sevel er vag, e teu an den bet sujet d’an droug-spered da c’houleñn digantañ gelloud chom d’e heul. ¹⁹ Ne asant ket dezañ, med lavared a ra dezañ: **“Kee d’ar gêr, daved da dud, hag embann dezo kement e-neus greet dit an Aotrou hag an druez e-neus bet ouzit!”**

²⁰ Mond a ra hag e stag da embann en Dekapol kement e-neus Jezuz greet dezañ, hag e chom an oll souezet...

*N'AZ-PEZ KET AON! KRED HEPKEN!*Mz 9,18...
Lk 8,40...

²¹ P'e-neus adarre Jezuz treuzet gand ar vag d'an tu-all d'ar Mor, ez eus adarre leun a dud bodet endro dezañ: chom a ra war ribl ar Mor. ²² Degouezoud a ra unan euz renerien ar Zinagog, anvet Jair, hag ouz e weled, e kouez e-harz e dreid: ²³ E bedi stard a ra, o lavared: **“Va merhig a zo war he zremenvan! Deuit da astenn warni ho taouarn, dezi da veza saveteet ha da veva!”** ²⁴ Mond a ra gantañ, ha d'e heul ez a tud e-leiz, a-unan o voustra warnañ...

²⁵ Ha setu eur vaouez, dezi eur c'holl-gwad abaoe daouzeg vloaz! ²⁶ Gwall-ziwasket he-deus-hi a-berz kalz medisined, ha dispignet he-deus kement a oa en he c'herz! N'eo-hi gwelleet tamm ebed! Med falleet eo kentoc'h! ²⁷ Klevet ganti ano euz Jezuz, eo-hi deuet e-touez an dud a-dreñv dezañ, ha touchet he-deuz ouz e vantell! ²⁸ Rag lavared a ree: **“Ma touchan, paneve nemed ouz e zillad, e vezin saveteet!”** ²⁹ Dizehet eo raktal eienenn he gwad, hag anavezoud a ra en he c'horv ez eo-hi pareet euz he c'hastiz!

³⁰ Raktal e oar Jezuz ennañ e-unan ez eus eet eun nerz er-mêz anezañ... En eur zistrei, e-kreiz ar bobl, e lavar: **“Piou e-neus touchet ouz va dillad!”** ³¹ Ha dezañ e lavar e Ziskibien: **“Sellit ouz ar bobl a zo o voustra warnoc'h! hag e lavarit ‘Piou e-neus touchet ouzin’?”**. ³² Eur zell a daol tro-dro da weled an hini e-neus greet an dra-ze. ³³ Ar vaouez avad, en eur gréna gand an aon, hag o c'houzoud petra a zo c'hoarvezet dezi, a zeu da stoui dirazañ ha da lavared ar wirionez penn-da-benn! ³⁴ Eñ avad a lavar dezi: **“Va merc'h! Da feiz he-deus da zaveteet! Kee er peoc'h ha bez pareet euz da gastiz!”**

³⁵ O komz ema c'hoaz, pa zegouez tud euz ti rener ar zinagog da lavared: **“Marvet eo da verc'h ! Perag tregasi pelloc'h ar Mestr ?”** ³⁶ Jezuz a glev ar c'homzou lavaret ganto, hag e lavar da rener ar zinagog: **“N'az-pezh ket aon! Kréd hepken!”**.

Mz 8,10

³⁷ Ne lez dén da vond d'e heul, nemed Pèr, Jakez, ha Yann, breur Jakez. ³⁸ Mond a reont da di rener ar zinagog, hag e wél cholori, tud o ouela hag o youhal kreñv... ³⁹ Eet en ti, e lavar dezo: **“Perag e rit trouz hag e ouelit ? Ar bugel n'eo ket marvet! Kousket eo-hi!”** ⁴⁰ Hag e c'hoarfont dezañ! Eñ avad a gas an oll er-mêz ; kemer a ra gantañ tad ar bugel hag he mamm, hag ar re a zo gantañ, hag ez a d'al lec'h m'eo astennet ar bugelig. ⁴¹ En eur gregi stard e dorn ar bugel e lavar dezi: **“Talita! Koum!”** da lavared eo: **“Plahig! me a lavar dit: sav en da zav!”** ⁴² Raktal e sav ar plahig hag e vale: rag daouzeg vloaz eo-hi. Raktal eo sebezet an dud, ha sebezet-braz! ⁴³ Ha dezo e kemenn stard na ouezfe dén kementse!... Lavared a ra ive rei dezi da zebri...

6

NE VEZ DISPRIZET EUR PRFOFED NEMED EN E VRO!

¹ Eet kuit ahano, e teu d'e Vamm-Vro, hag e Ziskibien d'e heul. ² Deuet ar zabad, e stag da gelenn er zinagog. Ar Bobl, ouz e gleved, a zo strafillet, hag a lavar: **"A-be-lec'h e teu kement-se da Hemañ ? Petra eo ar furnez a zo roet dezañ, hag ar burzudou souezuz a c'hoarvez dre e zaouarn ?"** ³ Daoust ha n'eo ket Hemañ ar c'halvez, mab Mari, ha breur da Jakez ha da Jozed, da Jud ha da Zimon ? Daoust ha n'ema ket e c'hoarezed amañ ganeom ?" Skoillet int ennañ! ⁴ Hag e lavar Jezuz dezo: **"Ne vez disprizet eur Profed nemed en e Vamm-Vro, en e gerentiez hag en e di e-unan!"** ⁵ Ne c'hell ober burzud ebed eno, nemed astenn e zaouarn war eun nebeud klañvourien, hag o fareal! ⁶ Souezet eo gand o diskred, hag ez a tro-war-dro, dre ar c'hêriadennou en eur gelenn...

HAG E STAG DA GAS AN DAOUZEG DAOU HA DAOU!

⁷ Gelfer a ra an Daouzeg davetañ hag e stag d'o c'has, daou ha daou, en eur rei dezo galloud war ar sperejou hudur. ⁸ Hag e kemenn dezo kemer evid an hent netra all nemed eur penn-baz: na bara, na bisac'h, nag arhant en o gouriz, ⁹ med sandalennou en o zreid: **"ha na lakit ket diou zae!"** ¹⁰ Dezo e lavar: **"El lec'h ma z'eoc'h en eun ti, chomit eno beteg ma z'eoc'h kuit ahano!"** ¹¹ Ma vez eul lec'h bennag ha n'ho tegemer ket, ha tud ha n'ho tegemeront ket, hejit ar boultrenn a-zindan ho treid da veza eun testeni dezo!" ¹² Eet en hent, ec'h embannont d'an dud ez eo red dezo trei ouz Doue. ¹³ Kalz a zroug-sperejou a daolont ermêz, ha kalz a glañvourien a olevont gand eoul, ha dezo e roont ar pare...

N'EO KET AOTREET GANIT KAOD GWREG DA VREUR!

¹⁴ Ar roue Herodez a glev kelou diwar-benn Jezuz, (rag deuet eo e Ano da veza brudet) hag e lavar: **"Adsavet eo Yann a-douez ar re varo! Setu perag ema an nerziou o virvi ennañ!"** ¹⁵ Lod all a lavar: **"Eli an hini eo!"** Lod all avad: **"Eur profed a zo anezañ, heñvel ouz unan euz ar brofeded!"** ¹⁶ Ouz o c'hleved, e lavar Herodez: **"An den am-eus-me lakeet dibenna, hennez a zo adsavet da veo!"** ¹⁷ Rag Herodez e-unan e-neus kaset tud da baka krog e Yann ha d'e jadenna er prizon, ablamour da Herodiadez, gwreg e vreur Filip, e-neus kemeret da wreg. ¹⁸ Rag lavared a ra Yann da Herodez: **"N'eo ket aotreet ganit kaoud gwreg da vreur!"**

¹⁹ Herodiadez avad a zo dirollet a-enebtañ, ha c'hoant he-deus d'e gas d'ar maro, med ne zeu ket da-benn! ²⁰ Rag Herodez a zouj Yann, o c'houzoud ez eo eun den just ha santel! hag e zifenn a ra! Ouz e gleved, e vez nehet maro, ha koulskoude e plij dezañ e gleved...

²¹ Hag e tegouez eun dro vad: da geñver deiz-ha-bloaz e c’hanedigez, e ra Herodez eul lein evid e Uhelidi hag e Ofizerien, hag evid Pennou-braz ar Galile. ²² Dond a ra merc’h Herodiadez hec’h-unan da zañsal, hag e plij da Herodez ha d’an dud astennet ouz taol...

Ar roue avad a lavar d’ar plahig: **“Goulenn diganin ar pez a gari, hag e roin dit”!** ²³ Hag e tou dezi: **“Kement tra a c’houlennfez diganin, a roin-me dit, beteg an hanter euz va rouantelez!”** ²⁴ Hag ez a-hi da lavared d’he mamm: **“Petra eo din goulenn ?”** Homañ avad a lavar: **“Penn Yann-Vadezour!”** ²⁵ Raktal, gand mall, ez a daved ar roue, hag e ra ar goulenn o lavared: **“Me a fell din e rofez din dioustu, war eur plad, penn Yann-Vadezour!”**.

²⁶ Glaharet-dreist eo ar roue! Med en abeg d’e lé ha d’an dud astennet ouz taol, ne fell ket dezañ he distaoler! ²⁷ Raktal e kas ar roue eur gward o kemenn dezañ degas penn Yann... hag ez a-eñ d’e zibenna er prison. ²⁸ Degas a ra e benn war eur plad hag e rei d’ar plahig! Hag ar plahig e ro d’he mamm! ²⁹ Pa glevont ano, e teu e ziskibien da gemer e gorr ha d’e lakaad en eur béz...

ROIT DEZO DA ZEBRI, C’HWI HOC’H-UNAN!

³⁰ An Ebestel, bodet endro da Jezuz, a zispleg dezañ kement o-deus greet ha kement o-deus kelennet! ³¹ Hag e lavar dezo: **“Deuit, c’hwi hoc’h-unan, diouz ho tu, d’eul lec’h distro, ha diskuizit eun tammig!”** Rag bez’ez eus leun a dud o tond hag o vond, ha n’o-deus ket zokén amzer da zebri! ³² Mond a reont dre ar vag warzu eul lec’h distro, outo o-unan. ³³ Kalz tud o wél o vond kuit, hag o anavez! War o zroad, euz an oll gêriadennou, e redont di hag ec’h erruont araozo!

³⁴ Pa ziskenn euz ar vag, e wél leun a dud! Rannet eo e galon ganto, rag bez’ez int evel Deñved n’eus dezo Pastor ebed! Hag e stag da gelenn dezo kalz traou.

³⁵ Deuet diwezdad an eur, e teu davetañ e Ziskibien o lavared: **“Distro eo al lec’h-mañ, hag eet diwezdad an eur!”** ³⁶ Kasit an dud kuit, dezo da vond war ar mêziou hag er c’hêriadennou tro-dro da bréna evito o-unan traou da zebri!” ³⁷ Respont a ra o lavared dezo: **“Deoc’h-c’hwi rei dezo da zebri!”** Dezañ e lavaront: **“Daoust ha deom-ni eo mond da bréna baraennou evid daou c’hant diner, ha rei dezo da zebri ?”** ³⁸ Eñ avad a lavar dezo: **“Pet baraenn ho-peus ? Kit da weled!”** Deuet da c’houzoud, e lavaront: **“Pemp! ha daou besk!”** ³⁹ Kemenn a ra d’an dud gourvez, strollad ha strollad, war ar yeot glaz. ⁴⁰ Gourvez a reont, reñkajou ha reñkajou a gant pe a hanter-kant! ⁴¹ Kemer a ra ar pemp baraenn hag an daou besk, hag en eur zével e zaoulagad warzu an Neñv, e lavar trugarez, e rann ar baraennou hag o ro d’an Diskibien evid o c’hinnig d’an dud ; an daou besk a rann ive etre an oll...

⁴² An oll a zebr hag a zo maget mad! ⁴³ Dastum a reont an tammou, daouzeg panerad leun! hag ive an tammou pesked. ⁴⁴ Ar re o-deus debret ar

baraennou a zo anezo pemp mil gwaz...

‘ME EO A ZO’! N’HO-PET KET AON!

Mz 14, 22...
Yn 6, 16...

⁴⁵ Raktal e ra d’e Ziskibien sevel er vag evid mond araozañ d’an tu-all, da Vetsaid, epad ma kas ar bobl kuit... ⁴⁶ Dilezet gantañ an dud, e sav war ar Menez da bedi. ⁴⁷ D’an abardaez, ema ar vag e-kreiz ar Mor, hag Eñ, e-unan penn war an douar. ⁴⁸ Pa wél ez int brevet o roeñvi, -rag an avel a zo a-eneb dezo!-, d’ar bederved beilladenn e teu daveto o vale war ar mor: C’hoant e-neus da dremen a-biou dezo! ⁴⁹ Int-i avad, ouz e weled o vale war ar mor, a gav dezo ez eo eur Skeud, hag e stagont da youhal, ⁵⁰ rag e weled a reont oll hag ez int strafuillet! Med raktal e komz outo hag e lavar dezo: **“Bezit kaloneg! ‘Me eo a zo’! N’ho-pet ket aon!”** ⁵¹ Ganto e sav er vag, hag e kouez an avel! Enno o-unan ez int estlammet muioc’h mui, ⁵² rag n’o-deus ket intentet burzud ar baraennou, med kaledet eo o c’halon...

⁵³ Treuzet ganto ar Mor, e touaront e Jennezaret. ⁵⁴ Pa ziskennont euz ar vag, an dud o anavez raktal, ⁵⁵ hag e redont dre ar vro-ze a-bez da lakaad degas war o gweleou ar re oll o-deus poan, da gement lec’h e vefe-Eñ. ⁵⁶ Da forz pe-lec’h ez a, d’ar c’hêriadennou pe d’ar c’hêriou pe war ar mêziou, war al leuriou-kêr e lakont an dud klañv, ha digantañ e c’houlennont evito gel-loud touch, paneve nemed ouz fleñch e vantell: kement-hini a douch outo a vez saveteet!

7

MERKA A RA EO GLAN AN OLL VOUJOU!

¹ Endro dezañ eo ive bodet ar Farizeiz hag hiniennou euz ar Skribed deuet euz Jeruzalem. ² Gweled a reont lod euz e Ziskibien o tebri bara gand daouarn dihlan, da lavared eo: chomet heb beza gwelhet! ³ Rag ar Farizeiz hag an oll Juzevien ne zebront ket heb beza gwelhet o daouarn beteg an ilin: delher a reont d’ar C’hustum deuet euz o zud-koz! ⁴ Distroet euz ar Marhad, ne zebront ket heb beza strinket dour warno o-unan... Bez’ez eus kalz traou all dezo da vired: gwelhi kanafou, podou, listri-arem.

⁵ Ar Farizeiz hag ar Skribed a c’houlenn outañ: **“Perag ne vale ket ho tiskibien hervez ar C’hustum deuet euz on tud-koz ? Med debri a reont bara gand daouarn dihlan!”** ⁶ Jezuz a lavar dezo: **“Profedet kaer e-neus Izai diwar ho penn, touellourien, evel m’eo skrivet:**

“Ar Bobl-mañ am enor gand he muzellou...”

“O c’halon avad a zo pell diouzin!”

⁷ *“Heb frouez ebed am zoujont,*

“O keleñn keleñnou, reolennoù tud!”

⁸ “O lezel Gourhemennou Doue, e kreñvait Kustum an dud!”

Erm 20,12
Dt 5,16

⁹ Dezo e lavar c’hoaz: **“Distaoler kaer a rit Gourhemennou Doue evid mired ho Kustum-koz!** ¹⁰ **Rag Moizez a lavar:** “*Da dad ha da vamm a enori*”, **hag ive:** “*An neb a vallozo e dad pe e vamm a vo kaset d’ar maro!*”. ¹¹ **C’hwï avad a lavar:** “**Ma lavar eun dén d’e dad pe d’e vamm: ‘Korban!’**, da lavared eo ‘**Donezon sakr**’, eo ar pez a zeufe diganin evid da skoazella!”, ¹² **ne lezit ket kén an dén-ze d’ober tra pe dra evid e dad pe e vamm!...** ¹³ **Hag e tinerzit Komz Doue gand ar C’hustum a roit a rummad da rummad! Ha kalz traou-all a rit par d’ar re-ze.”**

¹⁴ Adarre e c’halv ar Bobl davetañ hag e lavar dezo: **“C’hwï oll, va zelaouit, hag intentit mad!** ¹⁵ **Netra a-ziavêz d’an dén ne c’hell e zihlana o vond en e ziabarz! Med an traou a zeu euz diabarz an dén eo ar re a zihlan an dén!** ¹⁶ **An neb e-neus diskouarn da gleved, ra glevo!”**

¹⁷ Pa ’z a d’an ti, pell diouz ar Bobl, e ra e Ziskibien eur goulenn outañ diwar-benn ar barabolenn. ¹⁸ Hag e lavar dezo: **“Evel-se, daoust ha c’hwï ive a zo poud a spered ? Daoust ha ne ouezit ket ne c’hell netra a-ziavêz dihlana an dén o vond en e ziabarz ?** ¹⁹ **Rag ne ’z a ket an dra-ze en e galon, med en e gov, ha goude-ze ez a er foz.”** Merka a ra evel-se eo glan an oll vouejou! ²⁰ Lavared a ra avad: **“Ar pez a zeu er-mêz euz an dén, an dra-ze a zihlan an dén,** ²¹ **rag euz an diabarz, euz kalon an dud e teu an divizou fall: gadaliez, laeroñsi, muntrez, ²² avoultriez, youlegez, fallagriez, touellerez, hudurnez, taol-lagad fallagr, blasfem, ourgouill, fallentez...** ²³ **An oll draou-fall-ze a zeu euz an diabarz hag a zihlan an dén...”**

AR CHAS BIAN A ZEBR EUZBRUZUNOU AR VUGALE!

Mz 15, 21...

²⁴ Ahano e sav evid mond warzu douarou Tir ha Sidon. Mond a ra en eun ti hag e fell dezañ na ouezfe dén! Med ne c'hell ket chom kuzet! ²⁵ Raktal, klevet ganti e oa eno, e teu davetañ eur vaouez, a zo dezi he merhig sujet d'eur spered hudur; hag hi d'en em daoler e-harz e dreid! ²⁶ Eur vaouez gresianez a zo anezi, siro-fenisianez a ouenn, ha digantañ e c'houlenn taoler an droug-spered er-mêz euz he merc'h!

²⁷ Eñ a lavar dezi: **"Lez da genta maga ar Vugale! Rag n'eo ket kaër kemer bara ar Vugale hag e stlepel d'ar chas bian!** ²⁸ **Hi avad a respont:** "Ya da! Aotrou! Med ar chas bian, dindan an daol, a zebr euz bruzunou ar Vugale!" ²⁹ Hag e lavar dezi: **"Abalamour d'ar Gomz-ze, kee'ta! Eet eo an droug-spered er-mêz euz da verc'h!"**

³⁰ Eet ahano d'ar gêr, e kav-hi he bugel astennet war he gwele, hag an droug-spered eet kuit...

EFFETA! DIGOR 'TA!

Mz 8,3...

³¹ Eet kuit euz douarou Tir, e teu dre Zidon warzu Mor ar Galile, dre greiz douarou an Dekapol. ³² Dezañ e tegasont eun dén bouzar ha besteed, en eur c'houlenn digantañ astenn warnañ e zorn. ³³ Hag e kemer gantañ an dén, a-gostez, pell diouz an dud; lakaad a ra e vizied en e ziskouarn, ha gand e halo e touch ouz e deod. ³⁴ En eur zewel e zaoulagad warzu an Neñv, e huanad hag e lavar: **“Effeta!”**, da lavared eo **“Digor 'ta!”** ³⁵ Ha raktal e tigor e ziskouarn hag eo distagellet e deod: komz mad a ra. ³⁶ Kemenn a ra dezañ miroud da lavared grig da zén! Med seul vuioc'h e kemenn dezo, seul vuioc'h ec'h embannont ar brud! ³⁷ Ha muioc'h mui ez int straufillet, hag e lavaront: **“Kaer a ra kement-tra! An dud bouzar a laka da gleved, hag ar re vud da gomz!”**

8*RANNET EO VA C'HALON GAND AN DUD-ZE!*

¹ En deveziou-ze, e tegouez adarre leun a dud, ha n'eus dezo netra da zebri! Gelver a ra davetañ e Ziskibien hag e lavar dezo: ² **“Rannet eo va c'halon gand an dud-ze! rag abaoe tri devez e chomont endro din, ha n'eus dezo netra da zebri!”** ³ **Ha ma teuan d'o c'has d'ar gêr, war yun, e semplaint en hent, rag lod anezo a zo deuet euz a-bell!”**

⁴ Dezañ e respont e Ziskibien: **“A-be-lec'h e c'hello eun dén maga an dud-ze gand baraennou, aman en eur gouelec'h!”** ⁵ Hag e c'houlenn outo: **“Ped baraenn ho-peus-c'hwi ?”** ⁶ Hag e lavaront: **“Seiz!”** Hag e kemenn d'an dud gourvez war an douar ; kemer a ra ar seiz baraenn, lavared trugarez, ranna ar baraennou hag o rei d'e Ziskibien evid o c'hinnig ; hag o c'hinnig a reont d'an dud! ⁷ Bez'o-deus ive peskedigou: o benniga a ra ha lakaad o c'hinnig ive! ⁸ An dud a zebr hag a zo maget mad... Dastum a reont an dreist euz an tammou: seiz panerad!

⁹ Bez' ez int wardro pevar mil! hag e ra dezo mond kuit.

¹⁰ Raktal e sav er vag gand e Ziskibien, evid mond da zouarou Dalmanouta...

AR FARIZEIZ A GLASK EUR ZIN EUZ AN NEÑV.

¹¹ Hag ar Farizeiz da zispaka ha da rendael gantañ o klask digantañ eur zin euz an Neñv, evid e denti... ¹² En eur huanada en e Spered, e lavar: **“Perag ema ar rummad-mañ o klask eur zin euz an Neñv ? E gwirionez**

e lavaran-me deoc'h: Nann! Ne vezo roet sin ebed d'ar rummad-mañ!"

¹³ O lezel a ra hag e sav er vag evid mond d'an tu-all...

Mz 16,5...

DIWALLIT OUZ GOELL AR FARIZEIZ

¹⁴ Ankounahaad a reont kemer ganto baraennou, ha n'eus ganto nemed eur varaenn, er vag! ¹⁵ Hag Eñ a gemenn dezo o lavared: **"Gwelit! Diwallit ouz goell ar Farizeiz, hag ouz goell Herodez!"** ¹⁶ Hag etrezo e tivizont: **"Kement-se, ablamour n'on-eus ket a varaennou!"** ¹⁷ O c'houzoud an draze, e lavar dezo Jezuz: **"Perag divizoud etrezoc'h ablamour n'ho-peus ket a varaennou ? Daoust ha ne vezit ket ha n'intentit ket c'hoaz ? Daoust ha kaledet eo ho kalon ?**

Jer 5,21

¹⁸ *"Daoulagad ho-peus, ha ne welit ket ?*

"Diskouarn ho-peus, ha ne glevit ket ?"

"Daoust ha ne zalhit ket soñj ? ¹⁹ **Ar pemp baraenn am-eus-me rannet evid ar pemp mil, ped panerad leun a dammou ho-peus-c'hwi dastumet ?"** Hag e lavaront dezañ: **"Daouzeg!"** ²⁰ **"Ar seiz baraenn evid ar pevar mil, ped panerad leun a dammou ho-peus-c'hwi dastumet ?"** **"Seiz!"**, emezo. ²¹ Hag e lavar dezo: **"Daoust ha n'intentit ket c'hoaz ?"**

GWELED A RAN AN DUD EVEL GWEZ!

Yn 9,6

²² Mond a reont da Vetsaid, ha dezañ e tegasont eun dén dall en eur c'houlenn digantañ touch outañ! ²³ Kregi a ra e dorn an dén dall evid e gas gantañ er-mêz euz ar gêriadenn! Goude beza lakeet halo war e zaoulagad hag astennet warnañ e zaouarn, e c'houlenn outañ: **"Daoust ha gweled a rez eun dra bennag ?"** ²⁴ En eur zavel e zaoulagad e lavar: **"Gweled a ran an dud evel gwez, o vale!"** ²⁵ Neuze e laka adarre e zaouarn war e zaoulagad, hag an dén a wél mad! Pareet eo, ha frêz e wél pep tra! ²⁶ Ha Jezuz d'e gas d'ar gêr en eur lavared: **"Arabad dit kennebeud mond er gêriadenn!"**

Mz 16, 13...
Lk 9, 18...

C'HWI EO AR MESIAZ!

²⁷ Ahano ez a Jezuz da gêriadennou Sezare-Filip. En hent, e ra outo eur goulenn, o lavared: **"Piou, eme an dud, piou on-me ?"** ²⁸ Int-i avad a respont o lavared: **"Yann-Vadezour', ha lod 'Eli', lod all 'Unan euz ar brofeded!"** ²⁹ Hag e c'houlenn outo: **"Piou, emezoc'h-c'hwi, piou on-me ?"** Pèr a respont o lavared: **"C'hwi eo ar Mesiaz!"** ³⁰ Hag e ra trouz dezo, evid na gomzint da zén diwar-e-benn!

³¹ Neuze e krog da gelenn dezo e rank Mab-an-Dén gouzañv kalz poaniou, beza disprizet gand ar Gozidi, ar Veleien-Vraz hag ar Skribed, beza lakeet d'ar maro, hag adsevel goude tri devez! ³² Ha frêz e lavar ar Gomz-ze dezo! Ha Pèr, ouz e gemer a gostez, a stag d'ober trouz dezañ! ³³

Mz 16, 24...
Lk 9, 23...

Eñ avad, o tistrei hag o weled e Ziskibien, a ra trouz da Bèr o lavared: **“Kee a-dreñv din, Satan, pa ne gavez ket mad menziou Doue, med re an dud!”**.

PETRA DALVEZ D’AN DÉN GOUNID AR BED ?

³⁴ Davetañ e c’halv an dud hag e Ziskibien ha dezo e lavar: **“Ma fell da unan bennag dond war va lerc’h, dezañ en em nac’h e-unan, samma e groaz ha dond d’am heul!** ³⁵ Rag ma fell da unan bennag savetei e vuez, hennez he c’hollo! An hini avad e-no kollet e vuez ablamour din-me ha d’an Aviel, hennez he zaveteio! ³⁶ Rag petra dalvez d’an dén gounid ar Béd a-bez, ma ’z a e vuez da goll ? ³⁷ Rag petra a roio eun dén en eskemm euz e vuez ?”

³⁸ **“M’e-neus unan bennag méz ganin-me ha gand va c’homzou e-kreiz ar rummad-mañ, avoultrer ha peher, e-no ive Mab-an-Dén méz gantañ pa zeuio e gloar e Dad gand e êlez santel!”**

9

HA SETU EÑ TREUZ-STUMMET DIRAZO!

¹ Hag e lavar dezo: **“E gwirionez e lavaran-me deoc’h: Euz an dud a zo amañ, ez eus lod ha ne dañvint ket ar maro, ken n’o-do gwelet Rouantelez Doue o tegouezoud gand galloud!”**

² C’hwec’h devez goude-ze, e kemer Jezuz gantañ Pèr, Jakez ha Yann, hag o c’has a ra, heb den all, a-gostez, war eur Menez uhel-dreist, ha setu Eñ treuz-stummet dirazo: ³ e zillad a zeu da veza gwenn-kann, ken na c’hell kanner ebed war an douar kanna evel-se! ⁴ Ha dirazo e teu da bara Eli gand Moizez, stag da gomz gand Jezuz! ⁵ Pèr a zav e vouez da lavared da Jezuz: **“Mestr! kaer eo deom-ni beza amañ! Ha graom teir deltenn: unan deoc’h-c’hwil, unan da Voizez hag unan da Eli!”** ⁶ Rag ne oar ket petra respont: bez’ ez int spouronet!

⁷ Dond a ra eur goabrenn d’ober skeud warno, hag euz ar goabrenn e tiskenn eur Vouez: **“Hemañ eo va Mab Muia-Karet! Deoc’h e zelaou!”** ⁸ Raktal, en eur zelled endro dezo, ne welont den all ebed nemed Jezuz, e-unan-penn ganto!

⁹ En eur ziskenn diwar ar menez, e kemenn dezo miroud da zisplega da zén kement o-deus gwelet, nemed pa vo Mab-an-Dén adsavet a-douez ar re varo! ¹⁰ Delher a reont ar Gomz-ze en o c’herz, en eur glask petra eo ‘Adsevel a-douez ar re varo’!

¹¹ Neuze e reont outañ eur goulenn o lavared: **“Lavared a ra ar Farizeiz hag ar Skribed e rank Eli dond da genta!”** ¹² Dezo e lavar: **“Eli a zo deuet da genta da reizha pep tra! Ha penaoz eo skrivet evid Mab-**

an-Dén, e rank-Eñ gouzañv poaniou ha beza kaset da netra! ¹³ Med deoc'h e lavaran: Eli a zo deuet! Ha greet o-deus dezañ ar pezh a garent, hervez m'eo skrivet evitañ!”

SKOAZELLIT VA DISKRED!

¹⁴ Pa zeuont daved an Diskibien, e welont leun a dud endro dezo, ha Skribed o rendael ganto. ¹⁵ Kerkent ha ma welont Jezuz, ez int oll strauillet hag e redont davetañ evid e zaludi. ¹⁶ Hag e c'houlenn outo: **“Diwar-benn petra emac'h o rendael ganto ?”** ¹⁷ Hag unan a lavar, adouez an dud: **“Mestr! degaset am-eus davedoc'h va mab, sujet d'eur spered mud! ¹⁸ Hag e peb lec'h ma krog ennañ, e teu d'e zrailla, hag ar paotr da eonenna, da skrignal e zent ha da zizehi! Lavaret am-eus d'ho Tiskibien e daoler er-mêz, med n'o-deus ket gellet!”**

¹⁹ Eñ avad a respont dezo o lavared: **“Ô rummad diskredig! Beteg peur e vezin-me en ho kichenn ? Beteg peur e vo din d'ho kouzañv ? Degasit-eñ davedon!”** ²⁰ Hag e zegas a reont davetañ. O weled Jezuz, e teu raktal ar spered da zifreta ar bugel: d'an douar e kouez hag e ruill en eur eonenna! ²¹ Ha Jezuz a c'houlenn digand an tad: **“Pe-geid amzer a zo abaoe ma tegouez an dra-ze gantañ ?”** Hag e lavar: **“Abaoe e vugaleaj! ²² Aliez ive e-neus e daolet hag en tan hag el lenn, evid e gas d'ar maro! Med, ma c'hellit eun dra bennag, roit deom skoazell, dre rann-galon evidom”!**

²³ Hag e lavar Jezuz dezañ: **“Petra eo an dra-ze: ‘Ma c'hellit ?... Kement-tra a c'hell degouezoud d'an hini a gréd!”** ²⁴ Raktal, en eur youhal, e lavar tad ar bugel: **“Kredi a ran! Skoazellit va diskred!”** ²⁵ O weled kalz tud o tiredeg, e ra Jezuz trouz d'ar spered hudur o lavared dezañ: **“Spered mud ha bouzar! Gourhemenn a ran dit: kee er-mêz anezañ! Ha na zistro biken ennañ!”** ²⁶ En eur youhal hag en eur wall-zifreta, ez a er-mêz, hag e teu ar paotr da veza evel unan maro, ken ma lavar an dud: **“Marvet eo!”** ²⁷ Jezuz a grog en e zorn evid e zével, hag e sav ar paotr en e zav...

²⁸ P'ema o vond en ti, e teu an Diskibien, diouz o zu, da c'houlenn outañ: **“Perag n'on-eus-ni ket gellet e daoler er-mêz ?”**. ²⁹ Ha dezo e lavar: **“Ar seurt-ze ne c'hellont mond er-mêz dre netra all nemed dre ar bedenn hag ar yun!”**

³⁰ Pa 'z eont kuit ahano, e kerzont a-dreuz ar Galile, ha ne fell ket dezañ e teufe dén da c'houzoud! ³¹ Rag ema o kelenn e Ziskibien, o lavared dezo: **“Mab-an-Dén a vezo roet etre daouarn tud, hag e laza a reint! Tri devez goude beza bet laz, ec'h adsavo!”**

³² Int-i avad n'anavezont ket ar Gomz-ze! Hag aon o-deus d'ober goulennou outañ...

PIOU EO AR BRASA ?

Lk 9,49... ³³ Mond a reont da Gafarnaom. Degouezet er gêr, e c'houleñn outo: **“Diwar-benn petra e oac’h o tivizoud war an hent ?”** ³⁴ Chom a reont sioul, rag en hent e tivizent etrezo da c’houzoud piou eo ar brasa! ³⁵ Pa ’z eo azezet, e c’halv an Daouzeg hag e lavar dezo: **“Ma fell da unan ben-nag beza da genta, dezañ beza an diweza euz an oll ha servicher an oll!”**

Mz 10,42 ³⁶ Kemer a ra eur bugel hag e lakaad en o c’hreiz, hag ouz e vriata e lavar dezo: ³⁷ **“An hini a zegemer, em Ano, unan euz an heveleb bugale, am degemer, me va-unan! Hag an hini am degemer, hennez a zegemer n’eo ket me, med an Hini e-neus va c’haset!”**

Mz 18, 6...
Lk 17, 1... ³⁸ Yann a lavar dezañ: **“Mestr! Gwelet on-eus eun dén o kas kuit droug-sperejou en hoc’h Ano, ha na zeu ket d’on heul! Ha ni on-eus miret outañ, pa ne zeu ket d’on-heul!”** ³⁹ Jezuz avad a lavar: **“Na virit ket outañ! Rag n’eus dén ebéd d’ober eur burzud em Ano-me ha da c’helloud dioustu goude-ze lavared droug ouzin!”** ⁴⁰ Rag an néb n’ema ket a-eneb deom, a zo ganeom! ⁴¹ Hag an néb a roio deoc’h da eva eur c’halirad dour em Ano-me, ablamour ma z’oc’h d’ar C’hris, e gwirionez e lavaran deoc’h: hennez ne gollo ket e c’hopr!”

MA VEZ DA ZORN. DA LAGAD OUZ DA SKOILLA!

Iz 66,24 ⁴² Hag an néb a zeuio da skoilla unan euz ar re vian-mañ a gréd ennon-me, kaerroc’h e vefe dezañ ma vefe lakeet eur mên-milin-azen endro d’e c’houzoug, ha ma vefe stlapet er mor!

Mz 5,13 ⁴³ Ha ma vez da zorn eur skoill evidout, dit d’e droha! rag kaerroc’h eo dit mond moun er Vuez, eged dit, gand da zaou zorn, mond e jeen an tan na voug ket! ⁽⁴⁴⁾ ⁴⁵ Ha ma vez da droad eur skoill evidout, dit d’e droha. Rag kaerroc’h eo dit mond kamm e-barz ar Vuez, eged dit, gand da zaou droad, beza taolet er jeenn! ⁽⁴⁶⁾ ⁴⁷ Ha ma vez da lagad eur skoill evidout, dit d’e denna kuit! Rag kaerroc’h eo dit mond born e Rouantelez Doue, eged dit, gand da zaoulagad, beza taolet er jeen ⁴⁸ el lec’h na varv ket ar preñv ha na zeu ket an tan da vouga...

Mz 19, 1...
Lk 16, 18 ⁴⁹ Rag pep hini a vezo sallet en tan! ⁵⁰ Kaer eo an holen! Ma teu avad an holenn da veza dizall, gand petra e vezo blazet ? Dalhit Holenn ennoc’h hoc’h-unan! Ha bezit er peoc’h ken-etrezoc’h!

10

HAG AOTREET EO GAND EUR GWAZ KAS KUIT E WREG ?

Dt 24,24 ¹ O vond kuit ahano, ez a war zouarou ar Jude, en tu-all d’ar Jordan. Adarre e teu kalz tud davetañ, hag evel m’eo kustum, e stag d’o c’heleñn. ²

Davetañ e teu ive Farizeiz hag a c'houlenn outañ: **“Daoust hag aotreet eo eur gwaz da gas kuit e wreg ?”** Ouz e denti emaint...³ Eñ avad a respont en eur lavared dezo: **“Petra e-neus Moizez gourhemennet deoc’h ?”**⁴ Hag e lavaront: **“Moizez e-neus aotreet da skriva eul lizer a zisrann ha da gas kuit!”**⁵ Jezuz avad a lavar dezo: **“Dre ma z’eo kaled ho kalon e-neus Moizez skrivet deoc’h ar gourhemenn-ze!”**⁶ Adal penn-kenta ar Bed avad e-neus (Doue) o greet gwaz ha maouez!⁷ Ablamour da-ze, e tilezo ar gwaz e dad hag e vamm,⁸ hag e vezo unanet d’e wreg, hag e teuint o daou da veza eur c’horv hepken! Evel-se n’eus ket kén daou anezo, med eur c’horv hepken!⁹ Ar re e-neus Doue unanet, arabad da zén o disran-na!”

¹⁰ Eet en ti, e teu an Diskibien d’ober eur goulenn diwar-benn an dra-ze. ¹¹ Ha dezo e lavar: **“Kement hini a gas kuit e wreg hag a zimez gand unan all, a ra avoultriez en he c’heñver!”** ¹² Hag ar vaouez he-deus kaset kuit he gwaz, ma timez gand unan all, a ra avoultriez!”

LEZIT AR VUGALIGOU DA ZOND DAVEDON-ME

¹³ Tud a zegas dezañ bugale, dezañ da douch outo. An Diskibien avad a ra trouz d’ar re o degas...¹⁴ Ouz o gweled, eo Jezuz kounnaret hag e lavar dezo: **“Lezit ar vugale da zond davedon-me!. Na virit ket outo, rag d’an heveleb re eo Rouantelez Doue!”**¹⁵ E gwirionez e lavaran deoc’h: An néb na zegemer ket Rouantelez Doue evel ma ra eur bugel, nann, ne z’aio ket enni!”

¹⁶ Hag eñ d’o vriata, d’o benniga ha da astenn warno e zaouarn...

PEGEN DIÊZ EO MOND E ROUANTELEZ DOUE!

¹⁷ P’ema-Eñ o vond en hent, e tired davetañ eun dén: en eur zaouli-na dirazañ e c’houlenn outañ: **“Mestr mad! Petra eo din ober evid kaoud da hêrez buez peurbaduz ?”**¹⁸ Jezuz avad a lavar dezañ: **“Perag e rez ‘mad’ ahanon-me ? N’eus Hini ‘mad’ ebed nemed Doue hepken all!”**¹⁹ Ar gourhemennou a anavezez: Ne lazi ket! Ne ri ket avoultriez! Ne laeri ket! Ne ri ket fals-testeni! Ne douelli ket! Enor da dad ha da vamm!”²⁰ Ha dezañ e lavar an dén: **“Kement-se a viran abaoe va yaouankiz!”**²¹ Ha Jezuz da bara warnañ e zell, d’e gared, ha da lavared dezañ: **“Eun dra a ra diouer dit: Kee! Gwerz kement a zo dit evid rei d’ar beorien, hag az-po eun teñzor en Neñv! Ha deus d’am heulia!”**

²² Teñvalleet e benn diwar ar Gomz-ze, ez a an den kuit, glaharet... rag bez’ez eus dezañ eur bern madou...

²³ En eur daoler eur zell endro dezañ, e lavar Jezuz d’e Ziskibien: **“Pegen diêz eo, d’ar re o-deus madou, mond e Rouantelez Doue!”**²⁴ Sebezet eo an Diskibien gand e Gomzou! Adarre e sav Jezuz e vouez da lavared dezo: **“Bugale! Pegen diêz eo mond e Rouantelez Doue!”**²⁵

Mz 19,23...
Lk 18,24...

Esoc'h eo d'eur c'hañval mond dre doull eun nadoz eged d'eun dén pinvidig mond e Rouantelez Doue!” ²⁶ Strafuillet int muioc'h mui, hag e lavaront enno o-unan: **“Ha piou a c'hell beza saveteet ?”** ²⁷ En eur bara e zell warno, e lavar Jezuz dezo: **“D'an dud eo dreist o galloud! Med n'eo ket da Zoue: pep tra a zo e galloud Doue!”**

²⁸ Hag e krog Pèr da lavared dezañ: **“Setu m'on-eus-ni dilezet pep tra ha m'on-eus dalhet d'hoc'h heulia!”** ²⁹ Respont a ra Jezuz o lavared: **“E gwirionez e lavaran-me deoc'h: N'eus den ebed, dilezet gantañ ti, breudeur pe c'hoarezed, mamm pe dad, pe vugale pe barkeier, ablamour din-me ha d'ar C'helou-Mad,** ³⁰ **ha ne zegemerje ket kant kwech muioc'h bremañ er bed-mañ, tiez, breudeur, c'hoarezed, mammou, bugale, parkeier, gand heskinou, hag er Bed-da-zond, buez peurbaduz...”**

³¹ **“Kalz re genta a vo da ziweza, Hag ar re ziweza da genta!”**

SETU MA SAVOM DA JERUZALEM...

³² En hent emaint, o sevel da Jeruzalem, ha Jezuz a vale en o raog... bez' ez int strafuillet, hag ar re a zo d'o heul o-deus aon... Adarre e kemer an Daouzeg gantañ, hag e krog da lavared dezo kement a zo da c'hoarvezoud gantañ! ³³ **“Setu ma savom da Jeruzalem, hag e vo Mab-an-Dén roet etre daouarn ar Veleien-Vraz hag ar Skribed : hag e varn a reint d'ar maro hag e rei etre daouarn ar Baganed,** ³⁴ **hag e c'hoapaad ha tufa outañ hag e skourjeza hag e laza! Ha goude tri devez ec'h adsavo!”**

UNAN A-ZEHOU DEOC'H! EGILE A-GLEIZ!

³⁵ Hag e teu davetañ Jakez ha Yann, mibien Zebede, o lavared dezañ: **“Mestr! Ni a fell deom e rafec'h evidom kement a c'houlennom diganeoc'h!”** ³⁶ Hag e lavar dezo: **“Petra a fell deoc'h e rafen evidoc'h ?”** ³⁷ Dezañ e lavaront: **“Roit deom azeza en ho kloar, unan en tu dehou, egile en tu kleiz deoc'h!”** ³⁸ Jezuz a lavar dezo: **“Ne ouezit ket petra c'houlennit! Daoust ha bez e c'hellit eva ar C'halirad am-eus-me da eva ? Pe beza badezet dre ar Vadeziant ez an-me da veza badezet drezi ?”** ³⁹ Lavared a reont: **“Bez e c'hellom!”** Dezo e lavar Jezuz: **“Ar C'halirad ez an-me da eva a evoc'h, c'hwi-ive! Ha dre ar Vadeziant ez an-me da veza badezet e vezoc'h ive badezet!”** ⁴⁰ **An azeza avad en tu-dehou din pe en tu-kleiz, n'eo ket din-me rei! Med roet e vo d'ar re m'eo an dra-ze reñket evito!”**

⁴¹ Ouz o c'hleved, e teu an Deg all da gounnari ouz Jakez ha Yann...

⁴² Ha Jezuz o galv davetañ hag e lavar dezo: **“Gouzoud a rit: ar re a zo, da weled, o rén war ar boblou, a ra o aotrou warno, hag an uhelidi**

Mz 20, 29...
Lk 18, 35...

ive a bouez warno. ⁴³ Ne vo ket evel-se en ho touez: an néb a glaskfe beza braz en ho touez a vo ho servicher! ⁴⁴ Hag an néb a glaskfe en ho touez beza da genta, a vo sklav d'an oll! ⁴⁵ Rag Mab-an-Dén ive n'eo ket deuet evid beza servichet, med evid servicha ha rei e vuez evid frankiza leun a dud!”.

MAB-DAVID! HO-PET TRUEZ OUZIN!

⁴⁶ Hag e tegouezont e Jeriko. P'ema-Eñ o vond kuit euz Jeriko gand e Ziskibien, ha leun a dud, ema Bar-Time, Mab-Time, eun den dall, azezet e-kichenn an hent, o klask aluzenn. ⁴⁷ O kleved ema aze Jezuz-an-Nazaread, e stag da youhal o lavared: **“Mab-David! Jezuz, ho-pet truez ouzin-me!”** ⁴⁸ Kalz tud a ra trouz dezañ, ma chomo sioul! Med youhal a ra kalz kreñvoc'h c'hoaz: **“Mab-David! Ho-pet truez ouzin-me!”**

⁴⁹ Chomet a-zav, e lavar Jezuz: **“Galvit an dén!”** Hag an dud a c'halv an dén dall o lavared dezañ: **“Bez kaloneg! Sav! Da c'helver a ra!”** ⁵⁰ Stlepel a ra e vantell, hag en eur lammad e teu daved Jezuz. ⁵¹ Jezuz a zav e vouez da lavared dezañ: **“Petra a fell dit e rafen evidout ?”** Hag an dén dall a lavar dezañ: **“Rabouni! Ma welin sklêr!”** ⁵² Hag e lavar Jezuz dezañ: **“Kee! Da feiz he-deus da zaveteet!”** Ha raktal e wél sklêr hag ez a d'e heul war an hent...

11

MEULEUDI D'AN HINI A ZEU EN ANO AN AOTROU!

¹ Pa zegouezont tost da Jeruzalem, e tro Betfaje ha Betani, e-harz Menez an Olived, e kas daou euz e Ziskibien, ² ha dezo e lavar: **“Kit d'ar gêriadenn a zo dirazoc'h! Kerkent hag eet enni, e kavoc'h eun azenig ouz ar stag, ha n'eus bet dén ebed c'hoaz war e gein! Distagit-eñ ha degasit ganeoc'h!”** ³ Ma lavar unan bennag deoc'h ‘Perag e rit an draze ?’, e lavaroc'h: **‘An Aotrou e-neus ezomm anezañ hag e zegaso raktal endro!’** ⁴ Mond a reont hag e kavont an azenig ouz ar stag e-kichenn eun nor, er-mêz, war ar strêd, hag e zistaga a reont. ⁵ Tud eno en o zav a lavar dezo: **“D'ober petra e tistagit an azenig ?”** ⁶ Int-i avad a lavar dezo hervez m'e-neus lavaret Jezuz, hag an dud a lez da gas. ⁷ Degas a reont an azenig da Jezuz, lakaad warnañ o mantilli, ha Jezuz a azez warnañ! ⁸ Tud e-leiz a léd o mantilli war an hent, lod all a léd bodou trohet ganto er parkeier. ⁹ An dud a vale en e raog hag ar re a zeu war e lerc'h a youc'h:

“Hozanna! Meuleudi d'an Hini a zeu en Ano Doue!

¹⁰ **“Meuleudi d'ar Rouantelez a-zeu, Hini an Tad David!**

“Hozanna e lein an Neñvou!”

Mz 21, 18...

¹¹ Mond a ra e kêr Jeruzalem, hag e-barz an templ: eur zell a daol tro-war-dro war an oll draou. P’ema an abardaez, ez a kuit, da Vetani, gand an Daouzeg...

VA ZI A VO GALVET ‘TI-PEDI!’

Mz 21, 10...

Lk 19, 28...

Yn 12, 12...

¹² En deiz war-lerc’h, pa ’z eont kuit euz Betani, e teu naon dezañ. ¹³ O weled a-bell eur wezenn-fiez, deliou dezi, e teu da weled ha kaoud a rafe eun dra bennag ; deuet beteg enni, ne gav netra nemed deliou, rag n’ema ket poent ar fiez! ¹⁴ Hag e sav e vouez da lavared dezi: **“Biken mui ne zebro dén frouez deuet ahanout-te!”** Hag e Ziskibien a glev kement-se!

Iz 56,7

¹⁵ Mond a reont da Jeruzalem. Degouezet en templ, e stag da gas er-mêz an dud a zo o werza hag ar re a zo o prena en templ ; taoler a ra d’an traon taoliou an eskemmerien-arhant ha kadoriou ar re a werz ar c’houlmed. ¹⁶ Ha ne lez dén da gas traou dre greiz an templ! ¹⁷ Keleenn a ra an dud o lavared: **“Daoust ha n’eo ket skrivet:**

“Va Zi a vo galvet ‘Ti-Pedi’ evid an oll Baganed,

Mz 21, 20...

“C’hwi avad a ra anezañ eun toull torfetourien!”

¹⁸ Ouz e glevet, e teu ar Veleien-Vraz hag ar Skribed da glask an tu d’e gas d’ar maro, rag aon o-deus razañ, pa z’eo ar Bobl a-béz estlammet gand e geleznadurez! ¹⁹ Deuet an abardaez, ez eont er-mêz euz Kêr!

SETU DIZEHET AR WEZENN!

²⁰ Antronoz-vintin, en eur dremen e-kichenn, e welont ar wezenn-fiez dizehet beteg he gwriziou! ²¹ Pêr, deuet soñj dezañ, a lavar dezañ: **“Rabbi! Setu dizehet ar wezenn ho-peus mallozet!”** ²² Jezuz a respont o lavared dezo: **“Ho-pet feiz e Doue!** ²³ **E gwirionez e lavaran-me deoc’h: ma lavar unan-bennag d’ar Menez-ze: ‘Bez dibradet ha stlapet er mor!’**, ha ma n’eo ket eñ nehet en e galon, med ma kréd e tegouezo ar pez a lavar, bez’ e tegouezo an dra-ze dezañ! ²⁴ **Ablamour da-ze e lavaran deoc’h: kement-tra a c’houlennoc’h er bedenn, kredit ho-peus degemeret! Ha roet e vo deoc’h!** ²⁵ **Ha ma vezit en ho sav o pedi, pardonit, m’ho-peus eun dra bennag a-eneb unan bennag, d’ho Tad a zo en Neñv pardoni deoc’h ive ho mankou!...** ²⁶ **Rag ma ne bardonit ket, ho Tad euz an Neñv kennebeud na bardono deoc’h ho mankou!”**

Mz 21, 23...

Lk 20, 1...

DRE BESEURT GALLOUD E RIT KEMENT-SE ?

²⁷ Adarre e teuont da Jeruzalem. P'ema o vond hag o tond en templ, e teu davetañ ar Veleien-Vraz, ar Skribed hag ar Gozidi, ²⁸ o lavared dezañ: **“Dre be-seurt galloud e rit kement-se ? pe c’hoaz: Piou e-neus roet deoc’h ar galloud-ze, deoc’h d’ober kement-se ?”** ²⁹ Dezo e lavar Jezuz: **“Diganeoc’h e c’houlennan-me eur gér hepken: respontit din, hag e lavarin-me deoc’h dre be-seurt galloud e ran kement-se!** ³⁰ **Badeziant Yann, daoust hag euz an Neñv e oa ? pe euz an dud ? Respontit din!”** ³¹ Ha kenetrezo e tivizont o lavared: **“Ma teu deom lavared ‘Euz an Neñv!’, e lavaro ‘Perag ’ta n’ho-peus ket kredet ennañ ?’** ³² **Med daoust ha lavared a raim ‘Euz an dud!’”**. Med aon o-deus rag ar Bobl, pa zalc’h an oll e oa Yann eur profed! ³³ Hag e respontont da Jezuz o lavared: **“N’ouzom-ni ket!”** Ha Jezuz a lavar ive dezo: **“Na me kennebeud, ne lavarin ket deoc’h dre be-seurt galloud e ran kement-se!”**.

Mz 21,33...
Lk 20,9...

Iz 5,1...

12*HEMAÑ EO AR PENN-HÊR! DEUIT D’E LAZA!*

¹ Hag e stag da gomz dezo dre barabolennou. **“Eun dén e-neus plantet eur winieg, lakeet eur c’harz endro dezi, kleuzet eur waskerez, ha savet eun tour-géd: he feurmi a ra da winierien hag e kuita ar vro...”**

Heb 1,1

² Deuet ar poent, daved ar winierien e kas eur zervicher, da zege-mer digand ar winierien lod euz frouez ar winieg. ³ Hag int-i da gregi er zervicher, da lopa warnañ ha d’e gas kuit ez c’houllo! ⁴ Adarre e kas eur servicher all, hag int-i d’e daol-benna ha d’e zismega! ⁵ Kas a ra unan all, hag hemañ a lazont! Kas a ra kalz re all daveto: skei a reont gand lod ha laza re all!

Salm 118,22...

⁶ Bez ’e-neus c’hoaz unan all: e Vab muia-karet! E gas a ra da ziweza en eur lavared ennañ e-unan: **“Bez’ e toujint va Mab!”** ⁷ Ar winierien avad a lavar kenetrezo: **“Hemañ eo ar Penn-Hêr! Deuit ’ta d’e laza, hag ema deom-ni an Hêrez!”** ⁸ Kregi a reont ennañ, e laza hag e stlepel er-mêz euz ar winieg! ⁹ Petra ’ta raio Aotrou ar winieg ? Dond a raio da lakaad ar winierien d’ar maro ha da rei e Winieg da dud all...

¹⁰ **Daoust ha n’ho-peus ket lennet ar Skritur-mañ:**

“Ar Mên o-deus disprizet ar Vañsonerien,

“Hennez a zo deuet da veza Mên-Korn uhella!

¹¹ *“Dre nerz an Aotrou eo c’hoarvezet an dra-ze,*

“Hag eun dra zouezuz eo dirag on daoulagad!”

¹² Emaint o klask tapoud krog ennañ! Med aon o-deus rag ar Bobl, rag

Rom 13,1... goud a ouzont e-neus lavaret ar barabolenn-ze evito! E lezel a reont ha mond kuit!

13 Davetañ e kasont eun nebeud Farizeiz hag Herodezidi evid e baka diwar eur Gomz bennag! 14 O tegouezoud e lavaront dezañ: **“Mestr! Goud a ouzont ez oc’h-c’hwirieg ha ne rit forz euz dén ebed, rag ne zellit ket ouz penn an dud, med Hent Doue a gelennit e gwirionez! Daoust hag aotreet eo rei truaj da Zesar pe n’eo ket ? Ha deom eo rei pe viroud da rei ?”** 15 Eñ avad, anad dezañ o zouellerez, a lavar dezo: **“Perag va zenti ? Degasit din eun diner, ma welin!”** 16 Degas a reont dezañ, hag e lavar: **“Euz Sezar!”** 17 Dezo e lavar Jezuz: **“Rentit ’ta da Zesar kement a zo da Zesar! Ha da Zoue kement a zo da Zoue!”** Hag e chomont souezet!

Mz 22, 22...
Lk 20, 27...

Dt 25,5...

D’AN ADSAO, E VEZINT EVEL ÊLEZ.

18 Davetañ e teu Sadukeiz (ar re-ze a lavar n’eus ket a Adsao!), hag e reont outañ eur gouleñn o lavared: 19 **“Mestr! Deom e-neus skrivet Moizez: ‘Ma tegouez da vreur unan bennag mervel en eur lezel eur wreg med héb lezel bugel ebed, d’ar breur kemer gwreg hennez, ha sevel eul lignez d’e vreur!’** 20 **Bez’ e oa seiz breur. Ar c’henta a gemer gwreg hag a varv héb lezel lignez.** 21 **An eil he c’hemer hag a varv héb lezel lignez, an trede kemend-all!** 22 **Hag o zeiz n’o-deus lezet lignez ebed! War-lerc’h an oll e varv ive ar wreg.** 23 **D’an Adsao, pa adsavint, da be-hini anezo e vezo-hi gwreg, rag o zeiz o-deus bet honnez da wreg!...**”

Erm 3,6

24 Jezuz a lavar dezo: **“Daoust ha ne faziit ket en abeg da gement-mañ: ne anavezit ket ar Skrituriou na galloud Doue ?** 25 **Rag pa adsavint a-douez ar re varo, ne gemerint ket gwreg pe waz, med bez’ e vezint evel êlez an Neñv!** 26 **Ha diwar-benn ar re varo, daoust ha n’ho-peus ket lennet leor Moizez, e pennad ‘Ar Bod-Spern-entanet’, penaoz e-neus Doue komzet o lavared: ‘‘Me eo a zo’ Doue Abraham ha Doue Izaag ha Doue Jakob’’.** 27 **N’eo ket Eñ eun Doue tud varo, med Hini tud veo! Gwall-fazia a rit...”**

Mz 22, 34...
Lk 10, 25...

Dt 6,4...

Lev 19,18

AR C’HENTA EUZ AR GOURHEMENNOU!

28 Hag e teu davetañ unan euz ar Skribed: klevet gantañ an dud-ze o rendael hag anad dezañ e-neus Jezuz respontet kaer dezo, e c’houlenn outañ: **“Pehini eo ar c’henta euz an oll Gourhemennou ?”** 29 Ha Jezuz a respont: **“Hemañ ar c’henta: ‘Selaou, Izrael! An Aotrou, on Doue-ni, a zo Aotrou e-unan-kaer!’** 30 **Kared a ri an Aotrou, da Zoue, a-greiz da galon, a-greiz da ene, a-greiz da spered hag a-greiz da nerz!’** 31 **Hemañ eo an eil: ‘Kared a ri da nesa evel dout da unan!’ Brasoc’h egeto n’eus gourhemenn ebéd!”**

Amoz 5,20

32 Hag ar Skrib a lavar dezañ: **“Kaer-kenañ, Mestr! Gand gwirionez ho-peus lavaret eo an Aotrou e-unan-kaer, ha n’eus hini all ebéd nemetañ!...** 33 **Hag e gared a-greiz ar galon hag a-greiz ar goustiañs hag a-**

Mz 22, 41...
Lk 20, 44...

Salm 110,1... **greiz an nerz, ha kared an nesa eveldor an-unan a zo talvoudusoc'h eged an oll olokostou ha provou!...**" ³⁴ Ha Jezuz, o weled e-neus respontet gand skiant, a lavar dezañ: **"N'emaout ket pell diouz Rouantelez Doue!"** Ha ne gred mui dén ober outañ goulennoù...

Mz 23,6...
Lk 20,45...

DAVID E-UNAN A RA 'AOTROU' EUZ AR MESIAZ.

³⁵ Jezuz a zav e vouez hag e lavar, o kelenn en Templ: **"Penaos e lavar ar Skribed ez eo ar Mesiaz Mab da Zavid ?** ³⁶ **David e-unan a lavar dre ar Spered Santel:** *"Lavaret e-neus an Aotrou d'am Aotrou: 'Azezit en tu dehou din, ken n'am-bo lakeet hoc'h enebourien da skabell dindan ho treid!"*

Lk 21, 1-4

³⁷ **David e-unan a ra 'Aotrou' anezañ: hag a-be-lec'h eo-eñ Mab dezañ ?...**" Hag ar Bobl, niveruz, a jom d'e zelaou gand plijadur...

³⁸ Hag en e gelennadurez e lavar: **"Diwallit ouz ar Skribed! Plijoud a ra dezo bale gand diou zae; kared a reont ar zaludou war al leuriou-kêr, ³⁹ ar c'hadoriou kenta er zinagogou, hag ar renkou uhella er prejou, ⁴⁰ int-i hag a lonk tiez an intañvezed, war zigarez e reont pedennoù hir! Ar re-ze a bako gwasoc'h barn!"**

AN INTAÑVEZ-ZE HE-DEUS ROET MUIOC'H EGED AN OLL

⁴¹ Azezet dirag an Teñzor, ema-Eñ o selled penaos e taol an dud arhant en Teñzor! Kalz tud pinvidig a daol e-leiz! ⁴² Hag e teu eun intañvez baour, hag e taol daou bezig, da lavared eo eur gwenneg! ⁴³ Gelper a ra davetañ e Ziskibien ha dezo e lavar: **"E gwirionez e lavaran deoc'h: An intañvez-ze, ar baourez-ze he-deus taolet muioc'h eged an oll re o-deus taolet arhant en Teñzor! ⁴⁴ Rag int-i o-deus taolet diwar o êzant! Hi avad, diwar he dienez, he-deus taolet kement a oa dezi, kement he-doa da veva!"**

Mz 24, 1...
Lk 21, 5...

13

NE VEZO LEZET MÊN WAR VÊN!

¹ P'ema Jezuz o vond er-mêz euz an templ, e lavar dezañ unan euz e Ziskibien: **"Mestr! Gwelit pebez mein ha pebez savaduriou!"** ² Ha dezañ e lavar Jezuz: **"Gweled a rez ar zavaduriou braz-ze! Nann, ne vo lezet mên war vên ha na vefe ket diskaret!"**

Disk 6,1...

³ Pa azez war Menez an Olived, a-wél d'an templ, e teu davetañ, diouz o zu, Pèr, Jakez, Yann hag Andre, da c'houlenn outañ: ⁴ **"Lavarit deom, emezo, peur e tegouezo kement-se, ha petra a vo ar zin ema kement-se o vond da veza sevenet ?"**

⁵ Jezuz avad a stag da lavared dezo: **"Gwelit na zeufe dén d'ho touella!"**

⁶ Rag kalz a zeuio em Ano, o lavared: “Me eo a zo’ (ar Mesiaz!)” hag e touellint kalz tud! ⁷ Pa glevoc’h ano euz brezelioù ha trouz brezelioù, na vezit ket straufillet! Rag bez’ e rank degouezoud evel-se, med n’eo ket c’hoaz ar fin! ⁸ Sevel a raio pobl a-eneb pobl, rouantelez a-eneb rouantelez ; bez’ e vo meur a grén-douar a dachadou, ha meur a gernez! Digor poanioù ar gwilioud eo kement-se... ⁹ Beillit warnoc’h hoc’h-unan! Roet e vezoc’h etre daouarn ar zanedrin, ha skourjezet er zinagogou, ha kaset dirag gouarnourien ha rouaned, ablamour din-me, evid beza dezo eun testeni! ¹⁰ D’an oll boblou pagan e rank da genta beza embannet ar C’helou-Mad! ¹¹ Pa zeuint d’ho kas evid ho rei evel-se, na vezit ket nehet en a-raog gand ar pezh a lavaroc’h, rag ar pezh a vo roet deoc’h d’an eurze end-eün, an dra-ze eo deoc’h lavared, rag n’eo ket c’hwia vo o komz, med ar Spered Santel! ¹² Eur breur a roio eur breur da vond d’ar maro, hag eun tad e vugel! Bugale a zavo a-eneb o zud, hag o lazo!

Mz 24, 15...
Lk 21, 20...

Disk 11,1...

¹³ Kasaet e vezoc’h gand an oll ablamour d’am Ano... An hini avad a zalho beteg penn, hennez a vezo salvet!”

NEUZE E WELINT MAB-AN-DÉN O TOND.

¹⁴ “Pa weloc’h avad an ‘Euzadenn spontuz’ en he zav el Lec’h n’eo ket dezi beza, (ra intento al lenner!), neuze an dud a vo er Jude, dezo tehed d’ar Menezioù! ¹⁵ An néb a vo war al leur-doenn, arabad dezañ diskenn evid mond en ti da dapoud eun dra bennag! ¹⁶ An néb a vo er park, arabad distrei war-e-giz da dapoud e vantell! ¹⁷ Siwaz d’ar gwragez a vo dougerez pe o vaga en devezioù-ze! ¹⁸ Pedit evid na zegouezo ket an dra-ze er goañv, ¹⁹ rag an devezioù-ze a vo anezo eun drubuill ken gwaz ma n’eus ket bet e bar abaoe penn-kenta ar grouidigez beteg bremañ, ha na vo mui kén! ²⁰ Ha ma n’e-nije ket an Aotrou berreet an devezioù-ze, ne vije saveteet dén ebed! Med ablamour d’an dud dibabet, d’ar re e-neus e-unan dibabet, e verraio-Eñ an devezioù-ze!”

²¹ “Neuze, ma lavar unan bennag deoc’h: ‘Sed amañ ar Mesiaz!’, pe ‘Sed aze!’, n’it ket da gredi! ²² Rag sevel a raio meur a fals-vesiaz ha meur a fals-profed, hag e raint sinou ha burzudou da douella (ma c’hellfe beza!) an dud dibabet o-unan! ²³ C’hwia avad, beillit! Setu m’am-eus rag-lavaret deoc’h pep tra! ²⁴ En devezioù-ze, goude an drubuill-ze, e teñvallaio an heol, al loar ne roio ket kén he sklêrijenn, ²⁵ ar stered a vo o koueza euz an Neñv, ha brallet e vo an nerzioù a zo en Neñv!... ²⁶ Ha neuze e welint Mab-an-Dén o tond er goabr gand kalz a nerz hag a c’hloar! ²⁷ Neuze e kaso e êlez, hag e vodo an dud dibabet gantañ euz ar pevar roud-avel, euz penn an douar beteg penn an neñv...

Mz 24, 32...
Lk 21, 29...

D’AN OLL E LAVARAN: BEILLIT!

²⁸ Diwar ar wezenn-fiez, deskit ar barabolenn! Pa vez tener e skourrou ha digoret he delioù, e ouezit ez eo tost an hañv! ²⁹ Evel-se, c’hwia ive, pa weloc’h kement-se o c’hoarvezoud, deoc’h gouzoud ema-Eñ

Mz 25,5 tost, e tal an nor! ³⁰ E gwirionez e lavaran deoc'h: ne dremeno ket ar rummad-mañ ken na c'hoarvezo kement-se! ³¹ An Neñv hag an douar a dremeno, va C'homzou-me avad ne dremenint ket! ³² An deiz hag an eur-ze avad, nikun ne oar, nag an êlez en Neñv, nag ar Mab kennebeud, n'eus nemed an Tad.

Mz 26, 1...
Yn 12, 1... ³³ Gwelit da veilla! Rag n'ouzoc'h ket peur e vo ar poent! ³⁴ Bez' e vo evel-henn: eun dén, o kuitaad e vro, a zilez e di hag e ro ar garg anezañ d'e vevelien, da bep hini e labour, ha d'ar porzier e kemenn beilla! ³⁵ Beillit 'ta! Rag n'ouzoc'h ket peur e teuio Aotrou an Ti, pe d'an abar-daez, pe da hanter-noz, pe da gan ar c'hillog, pe diouz ar mintin, ³⁶ gand aon na zeufe a-greiz-oll ha n'ho kavje kousket!

³⁷ Ar pezh a lavaran deoc'h, d'an oll hel lavaran: beillit!...

14

BALZAMET HE-DEUS VA C'HORV EVID VA ZEBELIADUR.

¹ Bez' e vo ar Pask ha deveziou ar Bara-Dihoell a-benn daou zevez... Ar Veleien-Vraz hag ar Skribed a zo o klask tapoud krog ennañ dre douelle- rez hag e gas d'ar maro. ² Lavared a reont: “Arabad henn ober epad ar Gouel, gand aon na zavje trouz e-touez ar Bobl!”

³ P'ema e Betani, e ti Simon-al-Lôr, hag Eñ astennet ouz taol, e teu eur vaouez, ganti eur podig alabastr leun a valzam nardig, gwirion ha talvouduz- braz! Hag e torr ar podig alabastr hag e skuill ar valzam war benn Jezuz. ⁴ Bez' ez eus lod o kounnari etrezo: “Evid petra koll an eoul evel-se ? ⁵ Rag ar valzam-ze a c'helle beza gwerzet ouspenn tri c'hant diner, da veza roet d'ar beorien!” Hag e reont trouz dezi.

Mz 26, 17...
Lk 22, 7... ⁶ Jezuz avad a lavar: “Lezit-hi! Perag e rit poan dezi ? Eun oberenn gaer he-deus greet em c'heñver! ⁷ Rag bepred ho-peus ar beorien ganeoc'h ha, pa garit, e c'hellit ober vad dezo! Me avad n'ho-peus ket bepred! ⁸ Gand ar pezh he-doa, he-deus greet: en-araog he-deus kemeret an dra-ze da valzami va c'horv a-benn va zebeliadur! ⁹ E gwirionez e lavaran-me deoc'h: e kement lec'h bennag e vo embannet ar C'helou- Mad, dre ar bed a-béz, e vo ive lavaret ar pezh he-deus greet homañ, evid ober koun anezi!”

¹⁰ Ha Judaz Iskariot, unan euz an Daouzeg, a ia daved ar Veleien-Vraz a-benn e rei etre o daouarn. ¹¹ Ouz e gleved, e laouennaont, hag e prometont rei arhant dezañ! Hag eñ da glask penaoz e teuio d'e rei etre o daouarn en eur poent mad...

PE LEC'H AOZA AN TRAOU, DEOC'H DA ZEBRI AR PASK ?

¹² Da zeiz kenta ar Bara-Dihoell, pa lazer an Oan-Pask, e lavar dezañ e

Ziskibien: “**Pe-lec’h e fell deoc’h ez afem da aoza an traou, deoc’h da zebri ar Pask ?**” ¹³ Hag e kas daou euz e Ziskibien en eur lavared dezo: “**Kit e Kêr, ha ganeoc’h e tegouezo eun dén o tougen eur podad dour: kit d’e heul!**” ¹⁴ En ti ma z’aio, lavarit da vestr an ti: “**Ar Mestr a lavar: ‘Pe-lec’h ema ar zal-ziskuiz e c’hellin-me enni debri ar Pask gand va Diskibien ?**” ¹⁵ Diskouez a raio deoc’h eur zal en nec’h, braz, palennet ha prest! Aozit eno an traou evidom.”

¹⁶ Mond a ra an Diskibien: erruet e Kêr, e kavont an traou evel m’e-neus Jezuz lavaret dezo, hag ec’h aozont ar Pask!

¹⁷ Degouezet an abardaez, e teu gand an Daouzeg. ¹⁸ P’emaint astennet ouz taol hag o tebri, e lavar Jezuz: “**E gwirionez e lavaran deoc’h: unan ahanoc’h a zo o vond d’am rei! unan hag a zo ganin o tebri!**” ¹⁹ Hag e teuont da veza glaharet ha da lavared dezañ hini hag hini: “**Daoust ha me an hini eo ?**” ²⁰ Eñ avad a lavar dezo: “**Unan euz an Daouzeg! An hini a daol e zorn er plad ganin-me!**” ²¹ Ha Mab-an-Dén a ia gand e hent hervez m’eo skrivet diwar-e-benn. Siwaz avad d’an hini a vo drezañ roet Mab-an-Dén! Kaerroc’h e oa dezañ na vije ket ganet an dén-ze...”

KEMENT-MAÑ A ZO VA C’HORV! VA GWAD!...

²² Ha p’emaint o tebri, e kemer eur varaenn en eur lavared trugarez, hag Eñ d’he ranna ha d’he rei dezo en eur lavared:

“Kemerit! kement-mañ a zo va C’horv!”

²³ Ha kemeret gantañ eur C’halirad en eur lavared trugarez, e rei a ra dezo hag anezañ ec’h evont oll, ²⁴ ha dezo e lavar:

“Kement-mañ a zo va Gwad, Hini an Emgleo, skulilet evid leun a dud!”

²⁵ “**E gwirionez e lavaran deoc’h: ne evin mui euz frouez ar winienn beteg an Deiz din d’e eva, Nevez, e Rouantelez Doue!**”

TEIR GWECH AZ-PO VA NAHET!

²⁶ Kanet ganto ar Zalmou, ez eont warzu Menez an Olived. ²⁷ Ha Jezuz a lavar dezo: “**Oll emaoc’h o vond da veza skoillet, rag skrivet eo: ‘Skei a rin gand ar Pastor, hag e vo skignet an Deñved!’**” ²⁸ **Ha goude va Adsao, ez in-me en ho raog d’ar Galile!**” ²⁹ Pèr avad a lavar dezañ: “**Ha skoillet e vefe an oll, me avad ne vezin ket!**” ³⁰ Ha dezañ e lavar Jezuz: “**E gwirionez e lavaran dit: Te hirio, en noz-mañ, araog d’eur c’hillog kana diou wech, teir gwech az-po va nahet!**” ³¹ Eñ avad a lavar kaerroc’h da-ze: “**Ha pa rankfen-me mervel ganeoc’h, nann, ho nac’h ne rin ket!**”

Ha kemend-all e lavaront int-i oll!

PELLAIT DIOUZIN AR C'HALIRAD-ZE!

Rom 7,5

³² Ha mond a reont en eun dachenn anvet Jetsemani, hag e lavar d'e Ziskibien: **“Azezit amañ, epad ma vezin-me o pedi!”** ³³ Gantañ e kemer Pèr, Jakez ha Yann, hag e teu da veza strafuillet hag ankeniet! ³⁴ Ha dezo e lavar: **“Dreist-glaharet eo va ene, da vervel! Chomit amañ ha beillit!”** ³⁵ Eet eun tammig pelloc'h, e kouez d'an douar, hag e c'houlenn ma vo an Eurze pelleet dioutañ, ma c'hell beza! ³⁶ Lavared a ra: **“Tad! Pep tra a zo en ho kalloud! Pellait diouzin ar C'halirad-ze! Med ra c'hoarvezo n'eo ket ar pezh a fell din-me, med ar pezh a fell deoc'h-c'hwi!”**

³⁷ Dond a ra daveto, hag o c'hav kousket! Hag e lavar da Bèr: **“Simon! Kousket out ? N'az-peus ket bet an nerz da veilla epad eun eurvez ?** ³⁸ **Beillit ha pedit evid miroud da vond e tentadur! Ar spered a zo prim, an dén avad a zo disterig!”**

³⁹ Adarre ez a da bedi, o lavared an heveleb komzou. ⁴⁰ Hag Eñ, pa zistro, o c'hav adarre kousket, rag eet eo pounner o daoulagad, ha n'ouzont ket petra lavared dezañ! ⁴¹ Deuet eun trede gwech, e lavar dezo: **“Kouskit a-vremañ ha diskuizit!”**... **“Awalc'h eo! Deuet an eur! Setu Mab-an-Dén o vond da veza roet etre daouarn ar Beherien!** ⁴² **Savit en ho sav! Deom! Setu deuet tost an hini a zo o vond d'am rei!”**

EVEL D'EUN TORFETOUR EZ OC'H-C'HWI DEUET!

⁴³ Raktal, hag Eñ c'hoaz o komz, e tegouez Judaz an Iskariotad, ha d'e heul, tud gand klezeier ha bizier, a-berz ar Veleien-Vraz, ar Skribed hag ar Gozidi! ⁴⁴ An hini a zo e-tu d'e rei e-neus divizet ganto war eur zin, o lavared: **“An Hini a bokin dezañ, hennez an hini eo! Tapit krog ennañ, ha kasit eñ ganeoc'h gand evez!”** ⁴⁵ Pa zegouez, ez a raktal davetañ en eur lavared: **“Rabbi!”** hag e pok dezañ! ⁴⁶ Ar re all avad a daol warnañ o daouarn hag a dap krog ennañ! ⁴⁷ Unan euz ar re a zo eno a denn e gleze, a sko war mevel ar Beleg-Braz hag a droc'h dezañ e skouarn!

⁴⁸ Jezuz a zav e vouez da lavared dezo: **“Evel d'eun torfetour ez oc'h-c'hwi deuet gand klezeier ha bizier da dapoud krog ennon!** ⁴⁹ **Bemde e vezen en ho touez o kelenn en templ ; ha n'ho-peus ket tapet krog ennon! Med degouezet eo evel-se, evid ma vo sevenet ar Skrituriou!”**

⁵⁰ Hag an oll d'e zilezel ha da dehed kuit! ⁵¹ D'e heul ez eus eur paotr yaouank, gwisket gand eul linser hepken! Ennañ e tapont krog ive. ⁵² Eñ avad, o tilezel al linser, a dec'h kuit diouto en noaz!

DAOUST HA C'HWI EO AR MESIAZ ?

⁵³ Kas a reont Jezuz da di ar Beleg-Braz: eno ema bodet an oll Veleien-Vraz, ar Skribed hag ar Gozidi! ⁵⁴ Pèr a ia d'e heul a-bell, beteg diabarz porz ar Beleg-Braz, hag ec'h azez gand ar zervicherien a zo o

tomma e-kichenn an tan...

⁵⁵ Ar Veleien-Vraz hag ar Zanedrin a-béz a glask a-eneb Jezuz eun testeni evid e gas d'ar maro, ha ne gavont ket! ⁵⁶ Rag kalz tud a zoug fals-testeni a-eneb dezañ, ha n'eo ket par o zesteniou! ⁵⁷ Sevel a ra tud da zougen fals-testeni a-eneb dezañ o lavared: ⁵⁸ **“Ni on-eus e glevet o lavared: ‘Me a ziskaro ar zantual-mañ greet gand an dorn, hag en eur ober tri devez, e savin unan all ha ne vo ket greet gand an dorn!’”**. ⁵⁹ Ha war an dra-ze ive, n'eo ket par o zesteniou... ⁶⁰ Ar Beleg-Braz a zav en e zav e-kreiz, hag e ra ouz Jezuz ar goulenn-mañ, o lavared: **“Ha ne respontit netra d'ar pez ema ar re-mañ o tamall deoc'h ?”** ⁶¹ Chom a ra sioul ha ne respont netra! Hag adarre e ra ar Beleg-Braz eur goulenn outañ o lavared: **“Daoust ha C'hwi eo ar Mesiaz, Mab an Doue Benniget ?”** ⁶² Jezuz avad a lavar: **“Me eo a zo! Ha gweled a reoc'h Mab-an-Dén azezet a-zehou d'an Oll-C'halloudeg hag erru war goabr an Neñv!”** ⁶³ Hag ar Beleg-Braz a freg e zaeou en eur lavared: **“Da betra on-eus-ni ezomm a destou ?”** ⁶⁴ **Klevet ho-peus ar blasfem! Petra a gav deoc'h ?”** Int-i oll avad a varn eo dleet dezañ ar maro! ⁶⁵ Ha lod a stag da dufa outañ, da voucha e benn, d'e cholpata, en eur lavared: **“Grit ho profed!”** Hag ar vevelien e zegemer gand taoliou dorn...

N'ANAVEZAN-ME KET AN DÉN!

⁶⁶ Epad m'ema Pèr en traon, er porz, e tegouez unan euz servicherezed ar Beleg-Braz ; ⁶⁷ o weled Pèr o tomma, hag en eur zelled mad outañ, e lavar-hi: **“Te ive, te a oa gand Jezuz-an-Nazaread!”** ⁶⁸ Eñ avad a lavar: **“N'ouzon ket ha n'intentan-me ket petra lavarez!”**. Mond a ra er-mêz, warzu ar porched, hag e kan eur c'hillog! ⁶⁹ Ouz e weled, e stag adarre ar zervicherez da lavared d'an dud a zo eno: **“Hennez a zo unan anezo!”** ⁷⁰ Eñ avad a nac'h adarre... Eur pennadig goude-ze, e lavar an dud a zo eno da Bèr: **“Evid gwir, ez out-te unan anezo, rag eur Galilead a zo ahanout ive!”** ⁷¹ Eñ avad a stag da vallozi ha da doui: **“N'anavezan-me ket an Dén a lavarit!”** ⁷² Raktal, evid an eil gwech, e kan eur c'hillog! Hag e teu soñj da Bèr euz ar Gomz e-neus Jezuz lavaret dezañ: **“Araog d'eur c'hillog kana diou wech, teir gwech az-po va nahet!”**. Hag e tiroll da ouela...

15

STAG-EÑ OUZ AR GROAZ!

¹ Raktal, diouz ar mintin, e tiviz ar Veleien-Vraz, gand ar Gozidi hag ar Skribed hag ar Zanedrin a-béz, da jadenna Jezuz evid e gas hag e rei etre daouarn Pilat. ² Ha Pilat da c'houlenn outañ: **“Daoust ha c'hwi eo Roue ar Juzevien ?”** Eñ avad a respont dezañ o lavared: **“Te 'lavar!”** ³ Bez' ema ar Veleien-Vraz o tamall dezañ kalz traou.⁴ Pilat 'ra outañ adarre eur goulenn o lavared: **“Ne respontit netra ? Gwelit pebez traou a damallont deoc'h!”** ⁵

Jezuz avad ne respont seurt, ken ma chom Pilat sebezet...

⁶ Da geñver peb gouel, e tiliamm dezo eur prizoniad, an hini a c'hou-lennont! ⁷ Bez' ez eus unan, -Barabaz a vez greet anezañ-, bet chadennet da-heul an dispaherien, lazet ganto eun dén epad an dispac'h!

⁸ Pa z'eo savet an dud d'an nec'h, e stagont da c'houlenn ma rafe evito evel ma ra atao! ⁹ Respont a ra Pilat o lavared: **“Ha c'hoant ho-peus e lak-fen diliamma ‘Roue ar Juzevien’ ?”** ¹⁰ Rag gouzoud a ra o-deus int-i e roet etre e zaouarn dre warizi! ¹¹ Ar Veleien-Vraz avad a boulz ar Bobl d'ober dezañ diliamma kentoc'h Barabaz! ¹² Pilat a zav adarre e vouez da lavared dezo: **“Petra rin eta d'an Hini a rit anezañ ‘Roue ar Juzevien’ ?”**. ¹³ Hag int-i a youc'h adarre: **“Stag-Eñ ouz ar groaz!”** ¹⁴ Pilat avad a lavar dezo: **“Peseurt droug e-neus-Eñ greet eta ?”** Med youhal a reont muioc'h c'hoaz: **“Stag-Eñ ouz ar groaz!”** ¹⁵ Pilat eta, o klask tremen ouz ar Bobl, a ziliamm dezo Barabaz hag e laka skourjeza Jezuz hag e rei evid beza staget ouz ar groaz...

Mz 27, 27...
Yn 19, 2...

SALUD! ROUE AR JUZEVLEN!

¹⁶ Hag ar zoudarded e gas ganto e diabarz ar Porz, da lavared eo er Pretor-di, hag e vodont ar Gohortenn a-bez! ¹⁷ Dezañ e wiskont eur vantell voug, hag eur gurunenn spern e vlašonont da lakaad war e benn! ¹⁸ Hag e teuont d'e zaludi: **“Salud! Roue ar Juzevien!”** ¹⁹ Skei a reont war e benn gand eur raosklenn, outañ e tufont, ha mond a reont war o daoulin da stoui dirazañ! ²⁰ Goude beza e c'hoapeet, e tiwiskont e vantell voug, e wiskont dezañ e zillad, hag e gas a reont ganto evid e staga ouz ar groaz.

Mz 27, 33...
Lk 23, 36...
Yn 19, 16...

GAND TUD DIREIZ EO BET RENKET!

²¹ Da zougen e groaz e lakont eun tremeniad a zo o tond diwar ar mêz: Simon, eur Sirenad, tad da Aleksandr ha da Rufuz. ²² Hag e gas a reont war c'horre eul lec'h anvet Golgota, da lavared eo: ar Glopenn.

Iz 53,1

²³ Dezañ e roont gwin mesket gand mîr: Eñ avad ne gemer ket! ²⁴ P'o-deus e staget ouz ar groaz, e rannont e zillad, en eur denna al lod warno, da weled piou a zegemer petra...

²⁵ Bez' ez eo avad an trede eur, hag e staga a reont ouz ar groaz.

²⁶ War e skrid-tamall ez eus enskrivet: 'ROUE ar JUZEVLEN'! ²⁷ D'e heul e stagont ouz ar groaz daou dorfetour: unan a-zehou hag egile a-gleiz dezañ, ²⁸ hag ema sevenet ar Skritur a lavar: *“Gand tud direiz eo bet reñket!”* ²⁹ Hag an dremenidi e valloz en eur heja o fenn hag en eur lavared: **“Ahanta! C'hwi hag a ziskar ar zantual hag e adsao en eur ober tri devez, ³⁰ en em zaveteit hoc'h-unan o tiskenn diouz ar groaz!”** ³¹ Evel-se ive, ar Veleien-Vraz, en eur c'hoapaad etrezo gand ar Skribed, a lavar: **“Tud-all e-neus-Eñ saveteet! Ne c'hell ket en em zavetei e-unan!”** ³² Ar Mesiaz, Roue Izrael, ra ziskenn bremañ diouz ar groaz, ma welim ha

ma kredim!”. Hag e zismega a ra zoken an dud stag ouz ar groaz en e gichenn!

AN DÉN-MAÑ A OA MAB DA ZOUE!

Mz 4,3

³³ Deuet ar c’hwehved eur, e kouez teñvalijenn war an Douar a-béz, beteg an naved eur! ³⁴ Ha d’an naved eur, e youc’h Jezuz a-bouez e benn: **“Eloi! Eloi! Lama sabaktani ?”** da lavared eo: **“Va Doue! Va Doue! Perag ho-peus va dilezet ?”** ³⁵ Lod euz an dud a zo war e dro a lavar ouz e glevet: **“Setu-Eñ o c’helver Eli!”** ³⁶ Unan avad a réd da zouba eur spoueenn e gwin-treñk ha d’e lakaad e bég eur raosklenn a-benn rei dezañ da eva, en eur lavared: **“Lezit! Gwelom ha dond a raio Eli d’e ziskenn d’an traoñ!”**.

³⁷ Jezuz avad, en eur youhal a-bouez penn, a ro e Spered!

³⁸ Ha setu gouél ar zantual o frega e daou euz an nec’h beteg an traoñ! ³⁹ Ar c’hantener a zo en e zav dirazañ, o weled penaoz e-neus-Eñ roet e Spered, a lavar: **“Evid gwir! An Dén-ze a oa Mab da Zoue!”**...

⁴⁰ Bez’ ez eus ive merhed o selled a-bell... En o zouez, Mari Madalen, Mari, Mamm da Jakez-Vian ha da Jozed, ha Salome, ⁴¹ -ar merhed-ze, pa veze Jezuz er Galile, a veze d’e heul ouz e zervicha-, ha kalz re all savet d’e-heul da Jeruzalem...

HAG E LAKA AR C’HORV EN EUR BÉZ TOULLET ER ROC’H

⁴² Pa zeu an abardaez ha peogwir ema ‘Deiz-ar-rag-aoza’, da lavared eo ‘Derhent ar zabad’, e teu Jozef a Arimati, eur zanedrinad brudet, hag a zo, eñ ive, o c’hortoz Rouantelez Doue! ⁴³ Kredi a ra mond daved Pilat ha goulenn Korv Jezuz. ⁴⁴ Pilat avad a zo souezet e vefe marvet a-benn neuze... Gelper a ra ar c’hantener ha goulenn digantañ ha marvet eo abaoe pell-zo. ⁴⁵ Pa glev gand ar c’hantener, e ro ar C’horv da Jozef. ⁴⁶ Prenet gantañ eul linsel, ez a Jozef da ziskenn ar c’horv, d’e liena el linsel, ha d’e lakaad en eur béz toullet er roc’h; ha dirag dor ar béz e ruill eur mên.

⁴⁷ Mari Madalen avad ha Mari mamm da Jozed a zell mad e pelec’h e lakeet...

16

ADSAVET EO!

¹ Tremenet ar zabad, ez a Mari-Madalen, Mari, mamm Jakez, ha Salome, da brena louzeier-c’hwez-vad a-benn mond da valzami Jezuz. ² Mintin-mad, da zeiz kenta ar zizun, d’ar zav-heol e teuont d’ar béz. ³ Etrezo e lavaront: **“Piou a ruillo deom ar mên a-zirag ar béz ?”** ⁴ O sevel

o daoulagad, e welont eo ruillet ar mên, goude dezañ beza braz-kenañ!

Mz 28,10
Yn 20,11

⁵ Eet e-barz ar béz, e welont eur paotrig yaouank, azezet en tu-dehou, gwisket gand eur stol wenn! hag ez int strafuillet! ⁶ Eñ avad a lavar dezo: **“Na vezit ket strafuillet! Jezuz emaoc’h o klask, an Nazaread, a zo bet staget ouz ar groaz ? Adsavet eo! N’ema ket amañ! Setu al lec’h m’o-doa e lakeet!** ⁷ Med kit! Lavarit d’e Ziskibien ha da Bêr: **“Mond a raio en ho raog d’ar Galile! E weled a reoc’h eno, evel m’e-neus lavaret deoc’h!”**.

⁸ Eet er-mêz, e tehont diouz ar béz, rag kroget a zo enno aon ha sebez! Ha ne lavaront grig da zen, rag aon o-deus!

Lk 24,10...
Yn 20,10...
1 Kor 15,5...

EMBANNIT AR C’HELOU-MAD!...

Lk 24,16

⁹ Adsavet diouz ar mintin da zeiz kenta ar zizun, e teu Eñ da bara da genta dirag Mari-Madalen: diouti e-noa kaset kuit seiz droug-spered!

Mz 28,16...

¹⁰ Homañ a gerz da gas ar C’helou-Mad d’an dud a oa gantañ hag a zo e kañv hag en daelou! ¹¹ Ar re-mañ avad, o kleved ez eo beo hag ez eo bet gwelet frêz ganti, ne gredont ket! ¹² Goude-ze, dirag daou anezo, epad ma valeont o vond war ar mêz, e teu da bara en eur stumm disheñvel. ¹³ Ar re-mañ ive a zeu da zegas ar C’helou-Mad d’ar re all: ha ne gredont ket ive an daou-mañ!

Mz 10,1

¹⁴ Da ziweza oll, e teu da bara dirag an Unneg, astennet ouz taol! Rebech a ra dezo o diskred ha kaleter o c’halon, peogwir n’o-deus ket kredet an dud o-deus e welet adsavet a-douez ar re varo!...

¹⁵ Ha dezo e lavar:

Ob 28,3

“Kit dre ar Bed a-bez! Embannit ar C’HELOU-MAD d’an oll Grouadelez!

¹⁶ An hini a gredo hag a vezo badezet a vezo salvet!

An neb avad a ziskredo a vezo barnet!

¹⁷ Ar zinou-mañ a heulio ar re a gredo:

Lk 24,50
Ob 1,4

Em Ano e kasint kuit an droug-sperejou ;

Yezou nevez a gomzint! ¹⁸ En naered e tapint krog!

Ha ma evont eun evaj varo, ne raio dezo droug ebed!

Ob 2,33

War ar c’hlañvourien ec’h astennint o daouarn, hag ez aint mad!”

JEZUZ A ZO DOUGET D’AN NEÑV!

¹⁹ Jezuz, an Aotrou, goude beza komzet dezo, a zo douget d’an Neñv,



E iliz Rumengol, sant Lukaz o skriva e Aviel
hag o prezeg. Sk Y.-P. C.


Hag azezet eo en tu-dehou da Zoue!...

²⁰ Int-i avad a gerz da embann ar C'HELOU-MAD e peb lec'h!

An Aotrou a vez o labourad ganto,

O startaad ar Gomz dre ar Zinou a ro d'hec'h heul!

**Aviel Jezuz-Krist
hervez
sant Lukaz.**



Sant Lukaz, Bodiliz. Sk Job.

1

Ob 1,1 ¹ Peogwir o-deus kalz tud kroget da renka eun danevell diwar-benn an traou peur-zevenet en on touez, ² -hervez m'o-deus degaset deom ar re a zo bet adaleg ar penn-kenta testou ha servicherien ar Gomz-, ³ me ive, goude beza heuliet piz an oll draou-ze adaleg ar penn-kenta, me am-eus kavet mad o skriva dit diouz renk, Aotrou Teofil, ⁴ dit gouzoud mad ez eo difazi ar C'homzou a zo bet kelennet dit!...

ELIZABED A C'HANO DIT EUR MAB!

⁵ Bez' ez eus, en amzer Herodez, roue ar Jude, eur beleg anvet Zakari, euz rummad Abia. E wreg a zo euz lignez Aaron, hag Elizabed eo hec'h ano. ⁶ Bez' ez int o daou just dirag Doue, dre heulia direbech oll c'hourhemennou ha reolennou an Aotrou. ⁷ Ha n'eus dezo bugel ebed, rag difrouez eo Elizabed, hag eet int o daou war an oad...

Erm 30,7 ⁸ P'ema-eñ o seveni e garg a veleg dirag Doue, diouz tro e rummad, ⁹ hervez kustum Urz ar Veleien, e tegouez e dro da vond er zantual da ginnig an ezañs, ¹⁰ epad m'ema oll dud ar Bobl o pedi er-mêz da eur an ezañs. ¹¹ Dirazañ e teu eun êl d'an Aotrou da bara, en e zav en tu dehou da aoter an ezañs...

Lk 1,41 ¹² Strafuillet eo Zakari ouz e weled hag e krog aon ennañ! ¹³ An êl avad a lavar dezañ: "N'az-pez ket aon, Zakari! Rag selaouet eo bet da bedenn! Da wreg Elizabed a c'hano dit eur mab, hag e ano a c'halvi Yann! ¹⁴ Bez'e vo evidout levenez ha trid! ha kalz tud a laouennaio diwar e c'hanedigez! ¹⁵ Rag braz e vo dirag an Aotrou: ne evo na gwinn nag evaj kreñv, ha leuniet e vo gand ar Spered Santel adaleg korv e vamm! ¹⁶ Trei a raio kalz euz Bugale Izrael ouz Doue an Aotrou! ¹⁷ Eñ e-unan a valeo dirag Doue, gantañ Spered ha nerz Eli, da zegas kalonou an Tadou er vugale, hag an dud diskredig da furnez an dud just, ha da reizha d'an Aotrou eur Bobl beurvad!..."

Mz 17,12 ¹⁸ Zakari a lavar d'an êl: "Diouz petra e ouezin-me an dra-ze ? Rag eun dén koz a zo ahanon, hag eet eo va gwreg war an oad!" ¹⁹ An êl a respont o lavared dezañ: "Me eo Gabriel, bepred em zav dirag Doue, kaset da gomz dit ha da zegemenn dit ar C'helou-Mad-ze! ²⁰ Setu ma chomi sioul hag heb gelloud komz beteg ma c'hoarvezo kement-se, pa n'az-peus ket kredet d'am C'homzou-me! Peur-zevenet e vezint d'o amzer!"

Mk 1,1 ²¹ Ar Bobl a zo o c'hortoz Zakari: an dud a gav souezuz e talefe er zantual! ²² Pa zeu er-mêz, ne c'hell ket komz dezo: intent a reont e-neus gwelet eur weledigez er zantual! Delher a ra d'ober sinou dezo, med chom a ra mud!

²³ Echuet gantañ deveziou e zervich, ez a d'ar gêr! ²⁴ Goude an deveziou-ze e teu e wreg Elisabed da veza dougerez. A-hed pemp miz, e chom-hi kuzet, en eur lavared: ²⁵ **“Kement-se e-neus greet din an Aotrou, en amzer m’e-neus taolet warnon e zell, evid lemel ar pez a zo din eur véz e-touez an dud!”**

Lk 2, 1...

LAOUENNAIT, Ô LEUN A C’HRAS!

Mz 1,18

²⁶ D’ar c’hwehved miz eo kaset an êl Gabriel gand Doue d’eur Gêr euz ar Galile, anvet Nazared, ²⁷ daved eur Werhez dimezet d’eur gwaz, anvet Jozef, euz Ti David, ha Mari eo ano ar Werhez. ²⁸ Degouezet dave-ti, e lavar dezi: **“Laouennait, ô Leun a C’hras! An Aotrou a zo ganeoc’h!”** ²⁹ Hi avad a zo trefuet diwar ar Gomz-ze, hag e tiviz da c’houzoud petra eo ar zalud-ze! ³⁰ Ha dezi e lavar an êl: **“N’ho-pet ket aon, Mari! Rag kavet ho-peus gras dirag Doue! ³¹ Setu c’hwi o vond da veza dougerez ha da c’henel eur Mab, hag e Ano a c’halvoc’h Jezuz; ³² Hennez a vezo braz, ha galvet e vezo Mab an Uhel-Meurbed! Doue, an Aotrou, a roio dezañ trôn David e dad: ³³ Roue a vezo war Di Jakob, a-hed ar c’hantvejou, ha d’e Rouantelez ne vo Fin ebed!”**.

Iz 7,14

Mz 9,27

Mz 1,20

Mz 4,13

³⁴ Mari avad a lavar d’an êl: **“Penaos e c’hoarvezo kement-se, peogwir ne anavezan ket ar pried”**. ³⁵ Respont a ra an êl o lavared dezi: **“Ar Spered Santel a ziskenno warnoc’h, ha galloud an Uhel-Meurbed a raio skeud warnoc’h, ha dre-ze, ar C’hrouadur santel a vezo galvet Mab Doue! ³⁶ Ha setu ho keniterv Elizabed, hi ive, a zo o tougen eur mab en he c’hozni, hag ez eo ar c’hwehved miz d’an hini a vez lesanvet an ‘Difrouez’! ³⁷ Rag n’eus netra dreist galloud Doue!...”** ³⁸ Mari avad a lavar: **“Setu amañ servicherez an Aotrou! Ra c’hoarvezo din hervez da lavar!”** Hag an êl mond kuit diouti...

DEUET DAVEDON MAMM VA AOTROU!

Jk 5,24

Yn 20,29

³⁹ Ha Mari sevel en deveziou-ze ha mond dillo warzu ar Meneziou, d’eur gêr euz ar Jude. ⁴⁰ Mond a ra e ti Zakari hag e salud Elizabed. ⁴¹ Pa glev Elizabed salud Mari, e trid he c’hrouadur en he c’hreiz, ha leuniet eo Elizabed gand ar Spered Santel. ⁴² Sevel a ra he mouez en eur youhadenn greñv da lavared: **“Benniget oc’h-c’hwi dreist an oll gwragez ha benniget eo Frouez ho korv! ⁴³ A-belec’h e teu din an dra-mañ, e vefe deuet davedon Mamm va Aotrou ? ⁴⁴ Rag pa z’eo deuet mouez ho salud d’am diskouarn, setu m’e-neus va c’hrouadur tridet a levenez em c’hreiz! ⁴⁵ Eüruz an hini he-deus kredet e vo sevenet ar pez a zo bet lavaret dezi digand an Aotrou!”**

MAGNIFICAT!

⁴⁶ Ha Mari da lavared:

“Gloar ema va ene o kana d’an Aotrou,

Lk 11,27

⁴⁷ **“Ha tridal a ra va spered e Doue va Zalver!**

⁴⁸ **“Gwelet e-neus e chom izelig e Zervicherez,**

“Rag a-vremañ peb rummad am galvo ‘Evuruz’!

Salm 111,9

⁴⁹ **“Burzudou e-neus greet evidon an Oll-C’halloudeg,**

Salm 103,17

“Ha ‘Santel’ eo e Ano.

⁵⁰ **“E drugarez a ziroll war rummad ha rummad,**

Salm 89,11

“Evid an dud a zouj dezañ!”

⁵¹ **“Ober a ra e Vestr dre nerz e Vrec’h,**

“Ha penfolla an dud lorheg e menoz o c’halon!

⁵² **“D’an traoñ e pil rouaned diwar o zrôn,**

Salm 107,9

“Hag uhel-uhel e sav an dud izel!

⁵³ **“Tud naoneg a garg a vadou,**

“Ha re binvidig a gas kuit ez c’houllo!

Salm 98,3

⁵⁴ **“Intent a ra ouz Izrael e Vugel,**

“O telher koun euz e drugarez

⁵⁵ **“-hervez e lavar d’ou Tadou-Meur-**

“E-keñver Abraham hag e lignez da viken!”...

⁵⁶ Chom a ra Mari en he c’hichenn wardro tri miz, hag e tistro d’ar gêr...

YANN EO E ANO!

Gen 17,10

⁵⁷ Evid Elizabed e tegouez ar poent da wilioudi, ha genel a ra eur mab. ⁵⁸ Hec’h amezegezed hag he c’herent a glev e-neus an Aotrou diskouezet braster e drugarez en he c’heñver, ha laouennaad a reont a-unan ganti! ⁵⁹ D’an eizved devez e teuont da amdroha ar bugelig: e c’helver a reont dre ano e dad Zakari. ⁶⁰ Hag hi a zav he mouez da lavared: **“Nann zur! Med galvet e vo Yann!”** ⁶¹ Ha dezi e lavaront: **“N’eus ket eun unan euz da gerent da veza galvet dre an ano-ze!”** ⁶² Hag e reont sin d’e dad da c’houzoud penaoz e fell dezañ e vefe galvet! ⁶³ Goulenn a ra eun daolennig hag e skriv da lavared: **“Yann eo e ano!”** Chom a ra an oll

souezet! ⁶⁴ War an taol ez eo avad digoret e c’henou ha distagellet e deod: komz a ra da veuli Doue.

⁶⁵ Aon a grog en oll amezeien, ha dre oll Veneziou ar Jude e red brud an oll draou-ze! ⁶⁶ An oll re o c’hlev, o zalc’h en o c’halon en eur lavared: **“Petra ’ta e vo ar bugelig-ze ? Rag evid gwir, ema gantañ Dorn an Aotrou!”**

MEULEUDI D’AN AOTROU!

Salm 41,14

⁶⁷ Ha leuniet eo Zakari e dad gand ar Spered Santel, hag e teu da brofedi o lavared:

⁶⁸ **“Meuleudi d’an Aotrou, Doue Izrael!**

“Deuet eo da weled ha da frankiza e Bobl,

⁶⁹ **“Da zegas deom eur zilvidigez nerzuz**

“E Ti David e zervicher,

⁷⁰ **“Hervez e lavar dre c’henou e Brofeded santel a wech-all:**

⁷¹ **“Eur Zilvidigez diouz on enebourien**

“Ha diouz daouarn an oll re o-deus kas ouzom,

⁷² **“Da ziskouez trugarez e-keñver on Tadou**

“Ha da zelher koun euz an Emgleo santel:

⁷³ **“Touet e-neus lé, d’on Tad Abraham, da rei deom**

⁷⁴ **“Beza diframmet diouz dorn on enebourien**

hag e zervicha heb aon,

Mz 16,14...

⁷⁵ **“Er zantelez hag er justiz dirazañ a-héd or buez!**

Lk 1,16

⁷⁶ **“Ha te, Paotrig, galvet e vezi Profed an Uhel-Meurbed,**

“Rag mond a ri e-raog an Aotrou, da gempenn e heñchou:

⁷⁷ **“Evid rei d’e Bobl anaoudegez euz ar zilvidigez**

“Dre ar pardon euz he fehejou,

Mz 4,16

⁷⁸ **“Ablamour da galon druezeg on Doue,**

“A laka da bara warnom eun Heol-Mintin euz an Uhel,

Mz 3,1

⁷⁹ **“Da sklêrijenna an dud azezet e teñvalijenn hag e skeud ar Maro,**

“Ha da lakaad on treid da vale eeun war hent ar peoc’h!...”

⁸⁰ Ar paotrig avad a gresk hag a greñva en e spered, hag ema o chom er gouelec’h beteg an Deiz d’en em ziskouez da Izrael.

2

GANET EZ EUS DEOC'H EUR ZALVER

Yn 7,42 ¹ En deveziou-ze e teu eun Urz digand Sezar-Aogust evid ma vo enskrivet tud e oll zouarou! ² An Enskrivadeg kenta-ze a zegouez p'ema Kiriniuz o c'houarn ar Siri. ³ Hag ez a an oll da veza enskrivet, pep hini en e gêr. ⁴ Jozef ive a zav euz kêr Nazared d'ar Jude, beteg kêr David, galvet Betleem, -pa z'eo euz Ti hag euz ligned David-, ⁵ evid beza enskrivet a-unan gand Mari e bried, hag a zo dougerez...

Mz 1,25 ⁶ Hag epad m'emaint eno, e teu eviti ar poent da wilioudi: genel a ra he Mab kenta-ganet, ⁷ e vaillura, hag e c'hourvez en eul laouer, rag n'eus ket plas dezo en ostaleri...

Mz 1,21 ⁸ Bez' ez eus er c'horn-bro-ze pastored hag a vev er-mêz hag a ra ged-noz war o zropell. ⁹ Ha setu eun êl d'an Aotrou en e zav dirazo, ha gloar an Aotrou o skedi endro dezo: hag e krog aon braz enno!... ¹⁰ Dezo e lavar an êl: **“N'ho-pet ket aon! Setu ma tegemennan-me deoc'h eur C'helou-Mad, eul levenez vraz hag a vo evid ar Bobl a-bez! ¹¹ Ganet ez eus deoc'h hirio eur Zalver, -an Aotrou Mesiaz an Hini eo!- e Kêr David! ¹² Setu eur zin evidoc'h: Bez' e kavoc'h eur bugelig, mailluret ha gourvezet en eul laouer!”**

Erm 3,12 ¹³ Raktal, da heul an êl, e teu êlez e-leiz euz Strollad an Neñv, da veuli Doue o lavared:

¹⁴ **“Gloar da Zoue e lein an Neñv**

“Ha peoc'h war an douar d'an dud deuet mad dezañ!”

Mz 1,21 ¹⁵ Eet an êlez kuit diouto warzu an Neñv, e lavar ar bastored kene-trezo: **“Deom beteg Betleem, ha gwelom an darvoud-ze, nevez c'hoarvezet, ha disklêriet deom gand an Aotrou!”** ¹⁶ Mond a reont dillo, hag e kavont Mari ha Jozef, hag ar Bugelig gourvezet el laouer... ¹⁷ Ouz e weled, e tisklêriont an traou lavaret dezo diwar-benn ar Bugelig-ze! ¹⁸ An oll re o c'hlev a jom souezet gand ar pez a zo displeget dezo gand ar bastored... ¹⁹ Mari avad a gendalc'h an oll draou-ze en he c'halon! ²⁰ Hag ar bastored mond endro en eur gana gloar ha meuleudi da Zoue, evid kement o-deus gwelet ha klevet, hervez m'eo bet lavaret dezo...

²¹ Tremenet an eiz devez merket evid e amdroha, ez eo e Ano galvet Jezuz, Ano galvet gand an êl, araog dezañ beza douget e korv e Vamm...

VA DAULAGAD O-DEUS GWELET HO SILVIDIGEZ!

Erm 13,11
Lev 5,7

²² Tremenet ive an deveziou merket dezo da veza glaneet hervez Lezenn Voizez, e tegasont ar Bugelig da Jeruzalem evid e ginnig d'an Aotrou, ²³ -hervez m'eo skrivet e Lezenn an Aotrou: '*Pep Paotr kenta-ganet a vezo galvet 'Gouestlet d'an Aotrou'*', ²⁴ hag evid rei eur prov, hervez ar pezh a zo lavaret e Lezenn an Aotrou: '*Eur c'houblad turzunelled pe ziou goulmig*'.

²⁵ Ha setu ma z'eus e Jeruzalem eun dén anvet Simeon, hag an dén-ze a zo just ha doujuz da Zoue! Gortoz a ra Frealz Izrael, hag ema warnañ ar Spered Santel. ²⁶ Dezañ eo bet diskleriet gand ar Spered Santel ne welfe ket ar maro araog dezañ gweled Mesiaz an Aotrou! ²⁷ Dond a ra d'an Templ poulzet gand ar Spered, p'ema e dud o tegas ar Bugelig Jezuz evid ober en e geñver hervez Kustum al Lezenn.

²⁸ Hag e gemer a ra e pleg e ziwrec'h en eur veuli Doue o lavared:

²⁹ **“Bremañ, ô Mestr! e lezoc'h ho servicher**

“Da dremen er peoc'h, hervez ho lavar,

³⁰ **“P'o-deus va daoulagad gwelet ho Silvidigez,**

³¹ **“Reizet ganeoc'h dirag an oll boblou,**

³² **“Sklêrijenn da veza diskuliadur ar Baganed,**

“Ha da veza gloar ho Pobl Izrael!”

Yn 19,25...

³³ Hag e chom souezet e dad hag e Vamm gand kement a zo lavaret diwar-e-benn. ³⁴ O benniga a ra Simeon ha lavared da Vari, e Vamm: **“Setu Hemañ ganet evid lakaad da goueza ha da zevel kalz tud en Izrael, hag evid beza eur zin enebet!** ³⁵ -**Ha c'hwi avad, eur c'hleze a dreuzo deoc'h ho kalon!- Evel-se e vo diskuliet divizou kalz kalonou!”**

³⁶ Eno ema ive Anna, eur brofedez, merc'h Fanuel, euz Meuriad Azer. Eet eo kaer war an oad! Bevet he-deus gand he gwaz seiz vloaz diwar o eured. ³⁷ Hag hi, intañvez, a zo degouezet d'he fevar bloaz ha pevar-ugent! Ne guita ket an Templ: noz-deiz e servich Doue, dre ar yun hag ar bedenn.

Mz 2,23...

³⁸ Hag erruet d'an eur-ze end-eeun, e stag da veuli Doue ha da gomz euz ar Bugel d'an oll re a c'hortoz silvidigez Izrael.

³⁹ Peur-zevenet ganto pep tra hervez Lezenn an Aotrou, e tistroont d'ar Galile, da Nazared, o c'hêr! ⁴⁰ Ar Bugelig avad a gresk hag a greñva: leun eo a furnez, hag ema warnañ gras Doue...

Dt 16,16

E TI VA ZAD E RANKAN-ME BEZA!

⁴¹ Mond a ra e dud beb bloaz da Jeruzalem, da geñver Gouel Pask.

42 Deuet Jezuz d’e zaouzeg vloaz, e savont di, hervez kustum ar Gouel. 43 Trement ganto an deveziou hag int-i war an distro, e chom ar Paotrig Jezuz e Jeruzalem heb gouzoud d’e dud! 44 O soñjal ema gand o c’henveajourien, e reont eun deveziad hent araog mond d’e glask e-touez o c’herent hag o anaouedegez. 45 Pa ne zeuont ket d’e gavoud, e tistroont da Jeruzalem ouz e glask. 46 A-benn tri devez e tegouezont d’e gavoud en Templ, azezet e-kreiz ar Gelennerien, stag d’o zelaou ha d’ober outo goulennou... 47 An oll re e glev a jom estlammet gand e skiant hag e respoñchou...

Yn 7,15...
 Yn 2,16
 48 Ouz e weled, e chom e dud sebezet, ha dezañ e lavar e Vamm: **“Mab! Perag ho-peus greet deom an dra-ze ? Setu ma z’om-ni, ho tad ha me, enkrezet ouz ho klask!”** 49 Hag e lavar dezo: **“Petra ’zo, pa oac’h-c’hwil ouz va c’hlask ? Daoust ha ne ouiec’h ket e rankan-me beza e Ti va Zad ?”** 50 Hag int-i ne intentont ket ar Gomz a lavar dezo... 51 Diskenn a ra ganto ha dond da Nazared, ha dezo e vez sujet. E Vamm a zalc’h an oll draou-ze en he c’halon...

52 Jezuz avad a gresk er furnez, e ment hag er c’hras dirag Doue hag an dud!

3

Mz 3, 1...
 Mk 1, 1.....
 Yn 1, 19...

MOUEZ AN HINI A YOUC’H ER GOUELEC’H.

1 D’ar poent m’eo Tiber Sezar impalaer evid ar bemzegved bloavez, d’ar poent m’eo Pons Pilat gouarnour war ar Jude, Herodez tetrark war ar Galile, Filip e vreur, Tetrark war an Iture hag an Trakonid, Lizaniaz tetrark war an Abilen, 2 dindan ar Veleien-Vraz, Annaz ha Kaifaz, e teu Komz Doue da Yann-mab-Zakari, er gouelec’h.

Yn 1,23
 Iz 40,3...
 3 Mond a ra dre gorn-bro ar Jordan a-bez, en eur embann eur vadeziant da drei ar galon ouz Doue evid kaoud pardon ar pehejou, evel m’eo skrivet e Leor Komzou ar profed Izai:

4 **“Mouez an hini a youc’h er gouelec’h:**

“Kempennit Hent an Aotrou!

“Lakit eeun e wenojennou!

5 **“Pep traonienn a vo karget!**

“Peb menez ha torgenn a vo izelleet!

“An troiou-pleg a vo eeunet!

“An heñchou digompez a vo kompezet!

6 **“Ha peb dén a welo Silvidigez Doue!”**

Mz 23, 33...
Yn 3, 36

DOUGIT FROUEZ DIOUZ EUR GALON TROET OUZ DOUE!

⁷ Lavared a ra d'an dud a zeu da veza badezet gantañ: “Gorad Naered! Piou e-neus diskouezet deoc'h tehed diouz ar Gounnar-a-zeu ?
⁸ Dougit 'ta frouez diouz eur galon troet ouz Doue! Na lavarit ket ennoc'h hoc'h-unan: “On tad deom-ni eo Abraham!” Rag me a lavar deoc'h: Euz ar mein-mañ e c'hell Doue sevel bugale da Abraham!
⁹ A-vremañ avad ez a ar vouhal da wrizioù ar gwez! Kement gwezenn na zoug ket frouez kaer a vo trohet ha stlapet en tan.”

Mz 5,46

¹⁰ Hag an dud a c'houlenn outañ o lavared: “Petra eo deom-ni ober ?”
¹¹ Respont a ra o lavared dezo: “An néb e-neus diou zae, dezañ rei unan d'an hini n'e-neus hini ebed! Hag an hini e-neus magadur, dezañ ober kemend-all!”
¹² Dond a ra ive Publikiz evid beza badezet, ha dezañ e lavaront: “Mestr! Petra eo deom-ni ober ?”
¹³ Dezo avad e lavar: “Na gemerit netra ouspenn ar pez a zo merket deoc'h!”
¹⁴ Soudarded ive a c'houlenn outañ o lavared: “Ha ni, Petra eo deom ober ?”
Hag e lavar dezo: “Na spouronit ha na ziskuillit dén! Ha deoc'h kaoud awalc'h gand ho kopr!”

Yn 1, 19...

HENNEZ HO PADEZO ER SPERED SANTEL

¹⁵ War c'hortoz ema ar Bobl! Hag en o c'halon e soñj an oll diwarbenn Yann: “Daoust ha ne vije ket eñ ar Mesiaz ?”
¹⁶ Respont a ra Yann o lavared d'an oll: “Me ho padez en dour. Med erru eo an Hini kreñvoc'h egedon, an Hini n'on-me ket mad da ziskoulma lêrenn e zandalennou! Hennez ho padezo er Spered Santel hag en tan!
¹⁷ En e zorn ema ar bal-wenta da c'hlanaad e leuriad, da zastum ar gwiniz en e c'hgrignol; ar pell avad a bulluho en eun tan na vougo ket!”

Mz 14, 3...
Mk 6, 17

¹⁸ En eur rei dezo kalz kenteliou-all, ec'h embann d'ar Bobl ar C'helou-Mad.
¹⁹ An tetrark Herodez avad a vez greet rebechou dezañ gand Yann, en abeg da Herodiadez, gwreg e vreur, hag en abeg da gement droug e-neus greet Herodez.
²⁰ Ouspenn kement-se, e ra c'hoaz an dramañ: lakaad Yann er prizon...

Mz 3, 13
Mk 1, 9...
Lk 9, 35
Yn 1, 32

C'HWI EO VA MAB MUIA-KARET!

²¹ Neuze eta, badezet ar Bobl a-bez, ha badezet ive Jezuz hag Eñ stag da bedi, e tigor an Neñv!
²² Warnañ e tiskenn ar Spered Santel e stumm eur c'horv evel eur goulm, hag euz an Neñv e teu eur vouez: “C'hwi eo va Mab Muia-Karet! Ennoc'h e kavan va dudi!”

Iz 42,1

Mz 1, 1...

²³ Jezuz e-unan a zo krog en e dregont vloaz pe wardro! War a greder, eo-Eñ Mab-Jozef, mab Heli,
²⁴ mab Matat, mab Levi, mab Melki,

mab Yanni, mab Jozef, ²⁵ mab Matatiaz, mab Amoz, mab Nahoum, mab Ezli, mab Nagai, ²⁶ mab Maaz, mab Matatiaz, mab Semei, mab Jozeg, mab Yoda, ²⁷ mab Yoanan, mab Reza, mab Zorobabel, mab Salatiel, mab Neri, ²⁸ mab Melki, mab Addi, mab Kozam, mab Elmadam, mab Êr, ²⁹ mab Jezuz, mab Eliezer, mab Jorim, mab Matat, mab Levi, ³⁰ mab Simeon, mab Youda, mab Jozef, mab Jonam, mab Eliakim, ³¹ mab Melea, mab Menna, mab Mataza, mab Nazam, mab David, ³² mab Jese, mab Yobed, mab Booz, mab Sala, mab Naason, ³³ mab Aminadab, mab Admin, mab Arna, mab Ezron, mab Farez, mab Youna, ³⁴ mab Jakob, mab Izaag, mab Abraham, mab Tera, mab Nahor, ³⁵ mab Sarouk, mab Ragan, mab Falek, mab Eber, mab Sala, ³⁶ mab Kainan, mab Arfakaad, mab Sem, mab Noe, mab Lamek, ³⁷ mab Matuzalem, mab Enok, mab Jaret, mab Malaleel, mab Kainan, mab Enoz, mab Set, mab Adam, Mab Doue...

Mz 4, 1...
Mk 1, 12...

4

NE DENTI KET AN AOTROU, DA ZOUE!

¹ Jezuz, leun euz ar Spered Santel, a zistro euz ar Jordan, ha gand ar Spered ez eo heñchet d'ar gouelec'h. ² Epad daou ugent devez e vez tentet gand an diaoul. Ne zebr seurt epad an deveziou-ze, ha pa z'int echu, e teu dezañ naon. ³ An diaoul avad a lavar dezañ: **“Ma z'oc'h-c'hwi Mab da Zoue, lavarit d'ar mên-mañ trei e bara!”** ⁴ Ha Jezuz a respont dezañ: **“Skrivet eo: ‘N'eo ket diwar vara tra-kén e vevo an dén!’”** ⁵ Hag e gas a ra war an uhel ha diskouez dezañ war-an-taol oll rouanteziou ar Bed, ⁶ hag e lavar dezañ an diaoul: **“Deoc'h e roin an oll c'halloudegez-ze ha gloar ar rouanteziou-ze, din-me eo bet roet hag he rei a ran d'an néb a garan! ⁷ C'hwi eta, ma stouit dirazon, deoc'h e vo en he fez!”** ⁸ Respont a ra Jezuz o lavared dezañ: **“Skrivet eo: ‘Bez' ec'h adori an Aotrou, da Zoue, hag Eñ hepkén a zervichi!’”** ⁹ Hag e gas a ra da Jeruzalem hag e lakaad war gern an Templ en eur lavared dezañ: **“Ma 'z oc'h Mab da Zoue, en em daolit ahann d'an traoñ, ¹⁰ rag skrivet eo: ‘Evidoc'h e-neus karget an êlez d'ho tiwall!’ ¹¹ Hag ive: ‘Ho tougen a raint war o daouarn gand aon na stokfec'h ho troad ouz ar mên!”** ¹² Respont a ra Jezuz o lavared dezañ: **“Skrivet eo: ‘Ne denti ket an Aotrou, da Zoue!’”**

Mz 4,12
Mk 1,14

¹³ Echuet gantañ pep tentadur, e tec'h an diaoul beteg kavoud tro...

SPERED AN AOTROU A ZO WARNON!

Mz 13, 53
Mk 6, 1...

¹⁴ Jezuz a zistro dre nerz ar Spered d'ar Galile, hag e vrud a red er vro a-bez endro dezañ! ¹⁵ Kelenn a ra en o zinagogou, ha meulet e vez gand an oll. ¹⁶ Deuet da Nazared, el lec'h m'eo bet savet, ez a d'ar zina-

Iz 61,1... gog evel m'eo kustum da zeiz ar zabad: hag e sav da lenn al lennadenn.
 17Roet eo dezañ Leor ar profed Izai. O tigeri al Leor, e kav an tachad m'eo skrivet ennañ:

Sof 2,3... 18 *“Spered an Aotrou a zo warnon!
 “Rag-se e-neus va olevet ha va c’haset
 “Da zegemenn ar C’helou-Mad da Beorien,
 “Da embann ar frankiz evid prizonidi, ar gweled evid tud dall,
 “Da zegas tud flastret d’ar frankiz,
 19 “Ha da embann eur bloavez a vadelez a-berz an Aotrou!”*

Yn 7,46... 20 Rollet gantañ al Leor, ha roet d’ar zervicher, ec’h azez: warnañ eo paret daoulagad an oll er zinagog. 21 Hag e stag da lavared dezo: **“Sevenet eo hirio ar Skritur-ze a zo savet d’ho tiskouarn!”** 22 An oll a ro dezañ testeni, hag a jom souezet gand ar c’homzou a c’hras a zeu euz e c’henou. Lavared a reont: **“Daoust ha n’eo ket Hemañ Mab-Jozef ?”** 23 Hag Eñ a lavar dezo: **“A dra-zur e lavaroc’h din ar barabolenn: ‘Medisin, en em bareit hoc’h-unan!’ Ken braz traou hag ar re greet e Kafarnaom, grit ive amañ en ho Mamm-Vro!”**

Jk 5,17 24 Eñ avad a lavar: **“E gwirionez e lavaran deoc’h: Profed ebed ne vez degemeret mad en e vro! 25 E gwirionez e lavaran deoc’h: kalz intañvezed a oa en Izrael en amzer Eli, pa oa prenet an neñv epad tri bloaz ha c’hwec’h miz, ken ma tegouezas eur gernez vraz dre an Douar a-bez. 26 Daved hini anezo n’eo bet kaset Eli, med hepken da Zarepta, e Sidon, daved eur vaouez intañvez! 27 Kalz tud lôr a oa en Izrael en amzer ar profed Elize: hini anezo ne oe glaneet, med hepken Naaman ar Siriad!”**

Yn 8,59 28 An oll, er zinagog, a zo leun a fulor o kleved kement-se, 29 hag e savont d’e daoler er-mêz euz o c’hêr, ha d’e gas beteg eun tarroz euz ar menez m’eo savet o c’hêr warnañ, evid e stlepel d’an traoñ!

Mk 1, 21... 30 Eñ avad, o tremen dre o zouez, a gerz gand e hent...

Mz 7,28

CHOM SIOUL HA KEE KUIT!

Mz 8,20
 Mz 2,23
 Mk 1,24
 Mz 8,29 31 Diskenn a ra da Gafarnaom, eur gêr euz ar Galile, ha d’an deveziou sabad e vez o kelenn an dud. 32 Estlammet e vezont gand e gelennadurez, rag komz a ra gand galloud! 33 Er zinagog, ez eus eun dén sujet d’eur spered hudur hag a youc’h a vouez kreñv: 34 **“Lezit ’ta! Petra a zo etre ni ha c’hwi, Jezuz Nazaread ? Daoust ha deuet oc’h d’or c’has da goll ? Goud a ouzon piou oc’h-c’hwi: Sant Doue!”** 35 Jezuz a ra trouz dezañ o lavared: **“Chom sioul ha kee kuit dioutañ!”** Ouz e ruill d’an douar e-kreiz an dud, ez a an droug-spered er-mêz anezañ. 36 Ar spont a grog en oll! hag etrezo e komzont o lavared: **“Petra eo ar Gomz-ze ? Rag gand galloud ha gand nerz e c’hourhemenn d’ar sperejou hudur,**

Mz 8, 14
Mk 1, 29

ha mond a reont er-mêz!” ³⁷ Kelou diwar-e-benn a red e peb lec’h tro-war-dro!

³⁸ Pa zav euz ar zinagog, ez a da di Simon. Lez-vamm Simon a zo dalhet gand eun derzienn vraz, hag e bedi a reont eviti... ³⁹ En e zav a-zioc’h dezi, e ra trouz d’an derzienn, hag an derzienn a zistag diouti. Sevel a ra raktal en he zav, hag e stag d’o zervicha...

Mz 8,29

⁴⁰ Eet an heol da guzad, ar re oll o-deus tud gwanet gand bep seurt kleñvejou o degas davetañ! Oc’h astenn e zorn war bep hini, e ro dezo ar pare. ⁴¹ Euz kalz tud ive, ez a droug-sperejou kuit, en eur youhal hag en eur lavared: **“C’hwï eo Mab Doue!”** Eñ a ra trouz dezo ha n’o lez ket da gomz, rag goud a ouzont eo-Eñ ar Mesiaz!...

Mk 1,35...

⁴² Deuet an deiz, e kerz er-mêz evid mond d’eul lec’h distro, hag ez a an dud d’e glask. Pa zegouezont davetañ, e talhont warnañ evid miroud outañ d’o c’huitaad. ⁴³ Ha dezo e lavar: **“D’ar c’hêriou-all ive e rankan degemenn Kelou-Mad Rouantelez Doue, rag evid-se ez on bet kaset!”** ⁴⁴ Hag e vez o prezeg e sinagogou ar Galile...

5

Mz 4, 18...
Mk 1, 16...

ADAL BREMAÑ E VEZI O PAKA TUD!

¹ Degouezoud a ra d’an dud chom d’e voustra evid kleved Komz Doue, p’ema en e zav war ribl Lenn-Jenesared! ² Gweled a ra diou vag, a-zav, war ribl al Lenn: ar besketerien, diskennet diwarno, a welc’h o rouejou. ³ Sevel a ra en unan euz ar bagou, -hini Pèr eo-, hag e c’houlenn digantañ pellaad eun tammig diouz an douar. Hag ec’h azez hag e kelenn an dud adal ar vag.

Yn 21,1...

⁴ Pa ehan da brezeg, e lavar da Zimon: **“Kee d’an doñvor, ha laoskit ho rouejou evid eur besketadenn!”** ⁵ Respont a ra Pèr o lavared: **“Mestr! Goude deom poania a-héd an noz, n’on-eus paket seurt! Diwar ho lavar avad, e laoskin ar rouejou!”**

Mk 1, 40...
Lk 5, 12...
Lk 7, 1...

⁶ Oc’h ober evel-se, e pakont eur bern braz a besked! ⁷ P’ema o rouejou o frega, e reont sin d’o c’hen-vreudeur a zo en eil vag, da zond da zaspugn ganto! Dond a reont hag e kargont an diou vag, ken ma z’eont dôn en dour... ⁸ O weled kement-se, e kouez Simon-Pèr ouz daoulin Jezuz en eur lavared: **“Pellait diouzin, rag eur gwaz peher a zo ahanon, Aotrou!”** ⁹ Rag spont a zo kroget ennañ, hag ive er re all a zo gantañ, en abeg d’ar besketadenn o-deus paket! ¹⁰ Koulz all e tegouez gand Jakez ive ha gand Yann, mibien Zebede, ken-vreudeur Simon! Ha Jezuz a lavar da Zimon: **“N’az-pezh ket aon! Adal bremañ, tud eo e paki evid o beva!...”** ¹¹ Degaset ganto o bagou d’an douar, e tilezont kement tra hag e

Lk 1,12

Yn 21,15...

Mz 8, 1...
Mk 1, 40...

stagont d'E heulia...

BEZ GLANEET!...

¹² P'ema en unan euz o c'hêriou, setu ma 'z eus eno eun dén leun a lorgnez. O weled Jezuz, e kouez, e dal d'an douar, evid e bedi o lavared: **"Aotrou! Ma fell deoc'h, e c'hellit va glanaad!"** ¹³ Hag astenn a ra e zorn ha touch outañ en eur lavared: **"Me a fell din: Bez glaneet!"** Hag ez a raktal al lorgnez kuit dioutañ! ¹⁴ Hag e kemenn dezañ: **"Diwall da lavared da zén! Med kee d'en em ziskouez d'ar beleg, hag evid beza bet glaneet, kinnig eur brovadenn hervez m'e-neus kemennet Moizez, da veza dezo eun testeni!"**

¹⁵ Redeg a ra muioc'h-mui ar vrud diwar-e-benn, hag e tired leun a dud d'e zelaou ha da veza paret diouz o c'hleñvejou...

Mz 9, 1...
Mk 2, 1.....

¹⁶ Eñ avad a dec'h d'al lec'hiou distro, da bedi...

PARDONET EO DIT DA BEHEJOU!

Mz 8,10

¹⁷ Da unan euz an deveziou-ze, ema o kelenn, hag ez eus eno, azezet, Farizeiz ha Skribed, deuet euz oll gêriadennou ar Galile hag ar Jude, hag euz Jeruzalem. Ha galloud an Aotrou a zo evid ma roio ar pare! ¹⁸ Ha setu gwazed o tougen war eur gwele eun dén seizet: klask a reont e zegas hag e lakaad dirazañ! ¹⁹ Pa ne gavont ket an tu d'e zegas, en abeg d'an dud, e savont war an doenn, ha dre douez an teol, e teuont d'e lakaad gand e dammig gwele, e-kreiz an oll, dirag Jezuz.

²⁰ O weled o feiz, e lavar: **"Va dén! Pardonet eo dit da behejou!"**

Yn 5,8

²¹ Hag ar Skribed hag ar Farizeiz da zivizoud o lavared: **"Piou eo hemañ, a zo o lavared blasfemou? Piou a c'hell pardoni pehejou, ma n'eo ket Doue hepken all!"** ²² Jezuz a oar mad o divizou hag e respont o lavared dezo: **"Perag e tivizit evel-se en ho kalonou?"** ²³ **Petra an êsa: lavared 'Pardonet eo dit da behejou', pe lavared 'Sav en da zav ha bale'?"** ²⁴ **Evid ma ouezoc'h e-neus Mab-an-Dén galloud war an douar da bardoni pehejou, -e lavar d'an dén seizet:- "Dit e lavarant: Sav en da zav! Kemer da dammig gwele ha kee d'ar gêr!"** ²⁵ Raktal e sav en e zav, e kemer ar pez m'eo gourvezet warnañ, hag ez a d'ar gêr en eur veuli Doue!

Mz 9, 9...
Mk 2, 13...

²⁶ Strafuill a grog en oll hag e veulont Doue! bez' ez int leun a spont, hag e lavaront: **"Traou iskiz on-eus gwelet hirio!"**

PERAG EMAOC'H O TEBRI GAND PUBLIKIZ ?

²⁷ Diwar-ze e kerz er-mêz, hag e teu da bara e zell war eur Publikad, Levi e ano, azezet dirag ar valtouterez. Dezañ e lavar: **"Deus**

d'am heul!" ²⁸ Dilezet gantañ pep tra, e sav hag ez a d'e heul... ²⁹ Ha Levi d'ober eur fest vraz evitañ en e di: leun a Publikiz hag a dud all a zo astennet ganto ouz taol.

³⁰ Grozmolad a ra ar Farizeiz hag ar Skribed ouz e Ziskibien, o lavared: **"Perag emao'h-c'hwi o tebri hag oc'h eva gand Publikiz ha Peherien ?"** ³¹ Hag e respont Jezuz o lavared dezo: **"An dud yac'h n'o-deus ket ezomm a vedisin, med ar re o-deus poan! ³² N'on-me ket deuet da c'helver tud just, med peherien, da drei o c'halon ouz Doue!"**

Disk 20,2
Yn 2,9
Mz 25,1

³³ Int-i avad a lavar dezañ: **"Diskibien Yann a yun aliez, hag ober a reont pedennou! Kemend-all ive ar Farizeiz! Ho re-c'hwi avad a vez o tebri hag oc'h eva!"** ³⁴ Jezuz avad a lavar dezo: **"Daoust ha paotred al Lein-Eured a c'hellit lakaad da yuni epad ma chom ganto an Dén-Nevez ? ³⁵ Dond a raio deveziou ma vo lamet diganto an Dén-Nevez. Neuze e yunint, en deveziou-ze..."**

³⁶ Bez e lavar ive dezo eur barabolenn: **"Dén ne rog eur peñsel diouz eur vantell nevez evid peñselia eur vantell goz! A-hend-all e rog an hini nevez, ha diouz ar vantell goz ne z'a ket mad ar peñsel tennet diouz an hini nevez! ³⁷ Ha dén ne laka gwin nevez e sehier-lêr koz! A-hend-all, ar gwin nevez a darz ar zehier-lêr, ha setu skuillet ar gwin ha kollet ar zehier-lêr! ³⁸ Med gwin nevez a zo da lakaad e sehier-lêr nevez! ³⁹ An dén, oc'h eva gwin koz, ne fell ket dezañ hini nevez, rag lavared a ra: 'An hini koz eo a zo c'hweg!'"**

Mz 12, 1...
Mk 2, 23...

6

AOTROU WAR AR ZABAD EO IVE MAB-AN-DÉN!

¹ D'eun deiz sabad, p'ema-Eñ o vond dre barkajou eost, e teu e Ziskibien da gutuill pennou-éd ha d'o debri, goude o dizilla gand o daouarn. ² Lod euz ar Farizeiz a lavar: **"Perag e rit ar pez n'eo ket aotreet ober d'ar zabad ?"** ³ Respont a ra Jezuz o lavared dezo: **"N'ho-peus ket zoken lennet ar pez e-neus greet David, deuet naon dezañ ha d'ar re a oa gantañ ? ⁴ Penaoz ez eo eet e Ti-Doue, e-neus kemeret baraennou ar Brovadenn, e-neus debret e-unan hag e-neus roet d'ar re a oa gantañ baraennou n'eo aotreet debri nemed gand ar veleien hepken ?"**

⁵ Hag e lavar dezo: **"Aotrou war ar zabad eo ive Mab-an-Dén!"**

⁶ D'eur zabad all, ez a d'ar zinagog hag e stag d'o c'helenn. Eno avad ez eus eun dén a zo dizec'h e zorn dehous... ⁷ Warnañ e taol evez ar Skribed hag ar Farizeiz, da weled ha para a raio d'ar zabad, dezo kaoud tro d'e damall... ⁸ Eñ avad, anad dezañ o divizou, a lavar d'an dén a zo dizec'h e zorn: **"Sav! ha chom en da zav, e-kreiz!"** Sevel a ra ha chom

en e zav. ⁹ Dezo avad e lavar Jezuz: **“Ouzoc’h e c’houlennan: hag aotreet eo d’ar zabad ober vad ? Pe ober droug ? Savetei eur vuez ? Pe he laza ?”** ¹⁰ Taoler a ra eur zell warno oll, tro-dro, hag e lavar d’an dén: **“Astenn da zorn!”** Henn ober a ra: pareet eo e zorn! ¹¹ Int-i avad, leun a fulor, a ziviz ken-etrezo da weled petra ober da Jezuz...

Mz 10, 1...
Mk 3, 7...
Yn 6,70
Ob 1,13

DIBABA A RA DAOUZEG!

¹² En deveziou-ze, e tegouez dezañ sevel war ar Menez da bedi, ha tremen a ra an noz o pedi Doue! ¹³ Deuet an deiz, e c’halv davetañ e Ziskibien: dibaba a ra Daouzeg anezo hag o eñvel Ebestel: ¹⁴ Simon hag a anv ive Pèr, Andre e vreur, Jakez, Yann, Filip, Bartoleme, ¹⁵ Maze, Tomaz, Jakez-mab-Alfe, Simon lesanvet ‘Gredeg’, ¹⁶ Jud-mab-Jakez, ha Judaz Iskariot, hag a droio da drubard.

Mz 5-7...
Mk 3,7...

EÜRUS! C’HWI, PEORIEN!

¹⁷ Diskenn a ra ganto, hag e chom war eur gompezenn gand eun niver braz euz e Ziskibien, ha gand eun niver braz a dud euz ar Jude a-bez, euz Jeruzalem hag euz arvor Tir ha Sidon. ¹⁸ Deuet int d’e zelaou ha da veza pareet diouz o c’hleñvejou; ar re a zo gwasket gand sperejou hudur a vez ive pareet. ¹⁹ An oll a glask touch outañ, rag eun nerz a zeu dioutañ hag a ro dezo oll ar pare!

Mz 5, 2...
Yn 15,19

²⁰ En eur zevel e zaoulagad war e Ziskibien e lavar:

“Eüruz! c’hwi, Peorien, rag deoc’h eo Rouantelez Doue!

²¹ **“Eüruz! c’hwi, bremañ naoneg, rag maget e vezoc’h !**

“Eüruz c’hwi, bremañ o ouela, rag c’hoarzin a reoc’h!

²² **“Eüruz oc’h-c’hwi, pa zeu an dud d’ho kasaad, d’hoc’h argas, d’ho tismega, da zistaoler hoc’h ano evel mézuz ablamour da Vab-an-Dén!**

²³ **“Laouennait en deiz-ze ha tridit: setu ma vo puill ho kopr en Neñv!**

Iz 5,8

“Evel-se e ree o zadou d’ar Brofeded!

²⁴ **“Med siwaz deoc’h! tud pinvidig!**

rag bez’ ho-peus ho frealz!

²⁵ **“Siwaz deoc’h! c’hwi, peur-leuniet bremañ!**

rag bez’ ho-po naon!

“Siwaz deoc’h! c’hwi o c’hoarzin bremañ!

Hirvoudi ha gouela a reoc’h!

26 “Siwaz deoc’h! ma komz kaer an oll diwar-ho-penn!

Mz 5, 39

Rag evel-se e ree o zadou d’ar fals-profeded!”

KARIT HOC’H ENEBOURIEN!

27 “Med deoc’h-c’hwi amañ ouz va zelaou e lavaran:

Mz 7,12

Karit hoc’h enebourien! Grit kaer d’ar re o-deus kas ouzoc’h!
28 Bennigit ar re ho malloz! Pedit evid ar re ho tispenn! 29 An néb da sko war eur jod, kinnig ive eben dezañ! Hag an néb a lam diganit da vantell, na vir ket outañ paka ive da zae! 30 Ro da gement-hini a c’houlenn diganit! Ha digant an hini a lam da draou, na c’houlenn ket o renta dit endro!

31 Evel ma c’hoantait e rafe deoc’h an dud, evel-se eo deoc’h ober dezo ive. 32 Ma karit hepkén ar re ho kar, peseurt trugarez a vo deoc’h ? Rag ar Beherien ive a gar ar re o c’har! 33 Ha c’hoaz: ma rit vad d’ar re a ra vad deoc’h, peseurt trugarez a vo deoc’h ? Ar Beherien ive a ra kemend-all!

Mz 7,1...

34 Ha ma prestit hepkén d’ar re a gredit degemer diganto endro, peseurt trugarez a vo deoc’h ? Ar Beherien ive a brest d’ar Beherien, evid degemer kemend-all endro...

Mz 6,14
Mk 4,24

35 Karit hoc’h enebourien! Grit vad ha prestit heb gortoz seurt endro! Hag e vo founnuz ho kopr hag e vezoc’h Bugale d’an Uhel-Meurbed, rag madelezuz eo-Eñ e-keñver an dud dianaoudeg ha droug! 36 Deuit da veza trugarezuz evel m’eo trugarezuz ho Tad! 37 Na varnit ket, ha ne vezoc’h ket barnet! Na gondaonit ket, ha ne vezoc’h ket kondaonet! Pardonit ha deoc’h e vo pardonet! 38 Roit ha deoc’h e vo roet! eur muzuliad kaer, moustret, hejet, leun-dreist, a vo roet en ho pruched! Rag diouz ar muzul a vuzulit gantañ e vo muzuliet deoc’h endro!...”

Mz 15, 14...
Mz 10,24
Yn 13,16

PEB GWEZENN A VEZ ANAVEZET DIOUZ HE FROUEZ!

Mz 7, 3...

39 Dezo ive e lavar ar barabolenn-mañ; “Daoust hag eun dén dall a c’hell heñcha eun dén dall ? Daoust ha ne gouezint ket o daou en eun toull ? 40 Ne vez ket an diskib dreist e vestr! Peur-zesket e vo, kement-hini a vo par d’e vestr!”

Mz 12, 33...
Mz 7,16

41 “Perag e sellez ouz ar blouzenn a zo e lagad da vreur, ha ne welez ket an treust a zo en da lagad-te! 42 Penaoz e c’hellez lavared d’az preur: ‘Breur! Lez ma tennan ar blouzenn a zo en da lagad!’, pa ne welez ket da-unan an treust a zo en da lagad-te ! Fallagr ma ’z out! Tenn da genta an treust a zo en da lagad, ha neuze e weli mad evid tenna ar blouzenn a zo e lagad da vreur!”

43 “N’eus ket eur wezenn gaer o tougen frouez fall, nag ive eur wezenn fall o tougen frouez kaer! 44 Peb gwezenn a vez anavezet diouz he frouez! Rag ne vez ket dastumet fiez diwar spern, na

Mz 7, 21... kutuillet rezin diwar dréz! ⁴⁵ An dén mad a denn ar mad euz teñzor mad e galon! Hag an dén droug a denn an droug euz e hini droug, rag euz puillder ar galon e komz ar genou!”

LAKEET E-NEUS AN DIAZEZ WAR AR ROC'H!

⁴⁶ “Ha perag am galvit ‘Aotrou! Aotrou!’, ha ne rit ket ar pezh a lavaran ?

⁴⁷ Kement dén a zeu davedon en eur zelaou hag en eur vired va C’homzou, deoc’h e tiskouezan ouz piou eo heñvel! ⁴⁸ Heñvel eo ouz eun dén savet gantañ eun ti: kleuzet e-neus ha toullet don, ha lakeet e-neus an diazez war ar roc’h! Deuet eo an dour-beuz, ha dirollet ar stêr a-eneb d’an ti-ze, med n’e-neus ket gellet e vralla, pa z’eo bet savet mad! ⁴⁹ An néb avad o zelaou med n’o vir ket, a zo heñvel ouz eun dén, savet gantañ e di war an douar heb diazez! Warnañ eo dirollet ar stêr, ha raktal eo dizahet! ha braz eo bet dizac’h an ti-ze!”

7

Mz 8, 5...
Yn 4,45

LAVARIT...MA VO PAREET VA FAOTR!

¹ Peur-gaset gantañ an oll lavarou-ze beteg diskouarn ar Bobl, ez a Eñ da Gafarnaom. ² Eur c’hantener bennag a zo dezañ eur zervicher gwall-glañv, o vond da vervel, hag eñ plijuz-kenañ d’e vestr! ³ Klevet gantañ ano euz Jezuz, e kas davetañ Kozidi a-douez ar Juzevien, evid e bedi da zond da zavetei e zervicher. ⁴ Int-i avad, deuet daved Jezuz, e asped kaloneg, o lavared: “Dleet eo, e rafec’h an dra-ze evitañ, ⁵ rag kared a ra or Pobl, hag ar zinagog e-neus-eñ savet deom!” ⁶ Ha ganto ez a Jezuz. N’ema ket kén pell diouz an ti, pa gas ar c’hantener mignoned da lavared dezañ en e ano: “Aotrou! Na gemerit ket a boan! Rag n’on-me ket dîn e teufec’h dindan va doenn! ⁷ Setu perag, ne zoñjen ket va-unan beza dîn da vond davedoc’h! Med lavarit dre eur gér, hag e vo pareet va zervicher! ⁸ Rag me va-unan, a zo eun dén dindan galoud, gand soudarded dindanon: da unan e lavaran ‘Kee!’ hag ez a; d’egile ‘Deus!’ hag e teu; d’am zervicher: ‘Gra kement-mañ!’, hag e ra!”.

⁹ O klevet kement-se, eo Jezuz souezet razañ! Troet warzu an dud a zo d’e heul, e lavar: “Lavared a ran deoc’h: en Izrael zokén n’am-eus ket kavet ken braz feiz!” ¹⁰ Pa zistro ar gannaded d’an ti, e kavont ar zervicher yac’h mad...

PAOTRIG! ME A LAVAR DIT: SAV!

¹¹ Degouezoud a ra dezañ goude-ze mond d’eur gêriadenn galvet Naim: d’e heul ez a kalz euz e Ziskibien ha tud e-leiz! ¹² Pa zegouez tost

Mz 8,3 da zor-kêr, setu ma touger d'ar véred eun dén maro, mab penn-hêr d'e vamm, hag homañ a zo intañvez! Kalz tud euz kêr a zo d'hec'h heul. ¹³ Ouz he gweled, e-neus an Aotrou truez outi, hag e lavar dezi: **“Ehan da ouela!”** ¹⁴ Mond a ra da douch ouz ar c'hraevaz: an dougerien a jom a-zav. Mz 16,14 Hag Eñ a lavar: **“Paotrig! me a lavar dit: Sav!”** ¹⁵ Sevel a ra an dén maro war e c'hoazez hag e stag da gomz! Ha Jezuz e ro d'e vamm! ¹⁶ Kregi a ra aon en oll, hag e veulont Doue o lavared:

“Eur profed braz a zo savet en on touez!

“Ha deuet eo Doue da weled e Bobl!”

Mz 11, 2... ¹⁷ Redeg a ra ar Gomz-ze dre ar Jude a-bez ha dre ar vro tro-war-dro!

DAOUST HA C'HWI EO AN HINI-A-ZEU ?

¹⁸ Diskibien a zegemenn kement-se da Yann! Ha Yann a c'halv davetañ daou euz e ziskibien ¹⁹ hag o c'has da lavared d'an Aotrou: **“Daoust ha C'hwi eo an Hini-a-zeu, pe unan all eo deom gortoz ?”**

Iz 26;9 ²⁰ Pa zeu ar wazed davetañ, e lavaront: **“Yann-Vadezour e-neus or c'haset da lavared deoc'h: ‘Daoust ha C'hwi eo an Hini-a-zeu, pe unan all eo deom gortoz ?’”** ²¹ D'an eur-ze, ema-Eñ o para kalz tud diouz kleñvejou, poaniou ha droug-sperejou, hag o rei da galz re all ar gweled! ²² Respont a ra o lavared dezo: **“Kit da zegemenn da Yann kement a welit hag a glevit: tud dall a wél sklêr, re gamm a vale, tud lôr a vez glaneet, tud bouzar a glev, tud varo a adsao, peorien a glev ar C'helou-Mad. ²³ Eüruz an hini na vo ket skoillet ennon-me!”**

Mal 3,1 ²⁴ Eet kuit kannaded Yann, e krog Jezuz da gomz d'an dud diwar-benn Yann. **“Ouz petra ez oc'h eet da zelled er gouelec'h ? Ouz eur raosklenn hejet gand an avel ? ²⁵ Med petra ez oc'h eet da weled ? Eun dén gwisket gand dillad flour ? Setu m'ema an dud, dezo dilla-jou flour ha stroñs ganto, o veva e paleziou ar rouaned! ²⁶ Med petra oc'h-c'hwi eet da weled ? Eur profed ? Ya! Me 'lavar deoc'h: ha kalz gwelloc'h eged eur profed! ²⁷ Henez eo an hini a zo skrivet diwar-e-benn:**

“Setu ma kasan va C'hannad en ho raog!

“Henez a gempenno hoc'h Hent dirazoc'h!”

Mz 21,31... ²⁸ **“Rag lavared a ran deoc'h: E-touez bugale ar gwragez, evid brasoc'h eged Yann, n'eus ket eun unan! An Hini-Biannoc'h avad e Rouantelez Doue a zo brasoc'h egetañ! ²⁹ Ar Bobl a-béz hag ar Publikiz, ouz e zelaou, o-deus justizet Doue o tond da veza badezet dre vadeziant Yann! ³⁰ Ar Farizeiz avad hag ar Skribed o-deus distaolet Mennad Doue en o c'heñver, o chom heb beza badezet gantañ.”**

³¹ **“Ouz piou ec'h heñvellain-me tud ar rummad-mañ ? Ouz**

piou int heñvel ? ³² Heñvel int ouz bugale azezet war eul leur-kêr hag o youhal ken-etrezo o lavared:

Mk 10, 12... **“Fleütet on-eus deoc’h, ha n’ho-peus ket korollet!**

“Hirvoudet on-eus, ha n’ho-peus ket gouelet!”

Yn 6,35 ³³ **“Rag deuet eo Yann-Vadezour: ne zebr ket a vara! Ne ev ket a win! Hag e lavarit: ‘sujet eo d’eun diaoul!’** ³⁴ **Deuet eo Mab-an-Dén: debri a ra hag eva! hag e lavarit: ‘setu eun dén lonteg hag ever gwin! eur mignon da Bublikiz ha da Beherien!’** ³⁵ **Justizet eo ar Furnez gant hec’h oll vugale!”**

PEHINI A GARO AR MUIA ?

³⁶ Unan euz ar Farizeiz a c’houlenn digantañ dond da breja gantañ. Mond a ra da di ar Farizead hag ec’h astenn ouz taol. ³⁷ Ha setu eur vaouez, hag a zo e kêr eur beherez anezi! Deuet da c’houzoud emma-Eñ astennet ouz taol e ti ar Farizead, he-deus-hi kemeret eur podig alabastr leun a valzam. ³⁸ Hag a-dreñv dezañ, e-kichenn e dreid, emma-hi o ouela! Gand e daelou, e stag da c’hlebia e dreid, ha gand he bleo d’o zehi! Pokad a ra d’e dreid ha skuilla warno balzam...

Mz 16,14
Yn 4,18

³⁹ Ouz he gweled, e lavar ennañ e-unan ar Farizead e-neus e bedet:

Lk 10, 21... **“Hemañ, ma vije anezañ eur profed, a ouije piou ha peseurt maouez eo an hini a douch outañ, ez eo-hi eur beherez!”** ⁴⁰ O sevel e vouez, e lavar dezañ Jezuz: **“Simon! eun draig am-eus da lavared dit!”** Hag e lavar dezañ: **“Mestr! Lavarit!”** Hag e lavar: ⁴¹ **“Eur prester a oa dezañ daou zleour: unan a zlee pemp kant dîner, egile hanter-kant! ⁴² Pa n’o-deus ket peadra da renta, dezo o daou e-neus greet dilez euz o dle! Pehini ’ta anezo a zeuio d’e gared ar muia ?”** ⁴³ Respont a ra Simon o lavared: **“Me ’zoñj din eo an hini e-neus-eñ greet dezañ dilez euz ar brasa dle!”** Eñ avad a lavar dezañ: **“Eeun az-peus barnet!”** ⁴⁴ Ha troet warzu ar vaouez, e lavar da Zimon: **“Gweled a rez ar vaouez-mañ? Pa z’on-me deuet en da di, banne dour ebed n’az-peus skuillet war va zreid! Hi avad, gand he daelou, he-deus glebiet va zreid, ha gand he bleo he-deus o zehet! ⁴⁵ Pok ebed n’az-peus roet din! Hi avad, abaoe m’eo deuet, ne ehan ket da boka d’am zreid! ⁴⁶ Eoul n’az-peus ket skuillet din war va fenn! Hi avad he-deus skuillet balzam din war va zreid!**

Mz 21,31

⁴⁷ Ablamour da-ze e lavaran-me dit: **“Pardonet eo bet dezi he fehejou, braz o niver, rag kared a ra hag e ra! An néb avad a zo bet pardonet nebeud dezañ, henez a gar nebeud!”** ⁴⁸ Dezi avad e lavar: **“Pardonet eo bet da behejou!”** ⁴⁹ Hag e krog an dud astennet gantañ ouz taol da lavared enno o-unan: **“Piou eo Hemañ, a bardon zoken ar pehejou ?”** ⁵⁰ Eñ avad a lavar d’ar vaouez: **“Da feiz he-deus da zave-teet! Kê er peoc’h!”**

8

D'E HEUL EZ A AN DAOUZEG, HAG EUN NEBEUD MERHED!Mz 8,29
Mz 27,55
Yn 19,25

¹ Diwar-ze ez a a-dreuz kêriou ha kêriadennou en eur embann hag en eur zegemenn Kelou-Mad Rouantelez Doue. An Daouzeg a zo d'e heul, ² hag ive eun nebeud merhed, bet pareet diouz droug-sperejou ha kleñvejou: Mari, galvet Madalen, eet seiz diaoul diouti, ³ ha Janet, gwreg Kouza, merour Herodez; Suzanna ha kalz re all: ar merhed-se a zalc'h d'o zervicha diwar o madou...

Mz 13, 1...
Mk 4, 1...***EET AN HADER DA HADA...***

⁴ Pa z'eus leun a dud bodet endro dezañ ha pa zired tud euz peb kêr davetañ, e lavar en eur barabolenn: ⁵ **“Eet eo an Hader da hada e had. Epad an hada, e kouez had a-hed an hent. Breset e vezont, ha laboused an neñv a zeu d'o debri. ⁶ Had all a gouez war ar mein. Pa ziwanont e tizec'hont, rag n'o-deus ket a c'hlebor! ⁷ Had all a gouez e-touez spern. Ar spern a gresk d'o heul hag a zeu d'o moug! ⁸ Had all a gouez en douar mad. Diwana a reont, ha dougen frouez: kant evid unan!”**. O lavared kement-se, e sav e vouez: **“An hini e-neus diskouarn da glevet, ra glev!”**.

Iz 6,9

⁹ E ziskibien avad a c'houlenn digantañ petra eo ar barabolenn-ze. ¹⁰ Hag e lavar: **“Deoc'h eo roet anavezoud Misteriour Rouantelez Doue, med d'ar re all, dre barabolennou hepkén! Evel-se, ‘o selled, ne welont ket! O klevet, ne intentont ket!’**

Mz 4, 21...

¹¹ An dra-mañ eo ar barabolenn-ze! An Had eo Komz Doue. ¹² Ar re a zo hadet en hent eo an dud a glev: goude-ze e teu an diaoul hag e lam ar Gomz euz o c'halonou, gand aon na zeufent da veza saveteet dre gredi! ¹³ Ar re a zo hadet war ar mein eo ar re a glev ar Gomz hag he degemer gand levez, med n'o-deus ket a wrizio! En amzer vad, e kredont, da boent an tentadur e tehont! ¹⁴ Ar re a gouez e-touez ar spern eo ar re a glev, med gand nehamant-madou ha plijadureziou ar Bed, en eur vond, e vezont mouget ha ne zougont ket a frouez azo! ¹⁵ An had kouezet en douar kaer eo ar re a zelaou gand eur galon gaer ha mad! Delher a reont d'ar Gomz, hag e tougont frouez dre o dalc'h...

Mz 5,15

¹⁶ Pa vez tanet eul lamp, ne z'a dén d'e c'holei gand eul lestr, pe d'e lakaad dindan eur gwele! E lakaad a ra war eur c'hantolor, d'an dud a zeu en ti da weled ar sklêrijenn!

¹⁷ N'eus netra goloet ha na zeuio ket da veza anavezet! N'eus netra guzet ha na zeuio ket da veza gouezet hag anad d'an oll!

**18 Gwelit 'ta penaoz e selaouit! An néb e-neus, dezañ e vo roet!
An néb n'e-neus ket, ive ar pez a gav dezañ kaoud, a vo lamet digantañ!**

Mz 12, 46
Mk 3, 31

19 Davetañ e teu e Vamm hag e Vreudeur, med ne c'hellont ket dond beteg ennañ en abeg d'ar bern tud! **20** Hag e lavar er dezañ: **“Ho Mamm hag ho preudeur a zo er-mêz o klask ho kweled!”** **21** Hag e respont o lavared dezo: **“Ar re-ze eo a zo Mamm din ha Breudeur, ar re a zelaou hag a vir Komz Doue!”**

Mz 8, 18...
Mk 4, 35...

KEMENN A RA D'AN AVELIOU HA D'AN DOUR!

22 Da unan euz an deveziou-ze, e sav en eur vag, Eñ hag e Ziskibien, hag e lavar dezo: **“Treuzom, da vond en tu-all d'al Lenn!”** Hag ez eont en donvor! **23** Epad ma z'eont war-raog, e teu-Eñ da gousked, hag e tiroll eur gorventenn war al Lenn: leun-raz eo o bag hag emaint en argoll! **24** Mond a reont d'e zihuna, o lavared: **“Mestr! Mestr! emaom-ni o vond da goll!”** Pa zav, e ra trouz d'an avel ha da donnou ar mor! Paouez a reont hag e c'hoarvez sioulder! **25** Hag e lavar dezo: **“Pe-lec'h ema ho feiz ?”** Kroget aon enno, e chomont souezet, o lavared an eil d'egile: **“Piou'ta eo Hemañ ? Rag d'an aveliou e c'hourhemenn hag ive d'an dour, ha senti a reont outañ!”**

Mz 8, 28...
Mk 5, 1...

DISPLEG PETRA E-NEUS DOUE GREET DIT!

26 Mond a reont war vag warzu korn-bro ar Jeraziz, a zo dirag ar Galile. **27** Pa ziskenn d'an dour, e teu davetañ eur gwaz euz kêr, sujet d'an droug-sperejou! Abaoe pell amzer, ne zoug ket a zillad, ha ne vez ket o chom en eun ti, med e-touez ar béziou! **28** O weled Jezuz, en eur youhal e stou dirazañ, hag e lavar a vouez kreñv: **“Petra a zo etre me ha c'hwi, Mab an Doue uhel-meurbed ? Me ho péd: mirit d'am wall-gas!”** **29** Rag gourhemenn a ra d'ar spered hudur mond kuit euz an dén, rag meur a wech e-neus paket krog ennañ. Pa vez staget gand chadennou hag hualet e dreid, e torr an ereou hag e vez kaset gand an droug-spered d'ar gouelehiou!”

30 Ha Jezuz a c'houlenn outañ: **“Pe ano eo da hini ?”** Hag e lavar: **“Strollad!”** rag kalz droug-sperejou a zo eet ennañ. **31** Ha digantañ e c'houlennont miroud d'o c'has d'an isloñk. **32** Eno, war ar menez, ez eus eur vandenn vraz a voc'h o peuri: pedi a reont Jezuz d'o lezel da vond enno! O lezel a ra! **33** Eet er-mêz euz an dén, ez a an droug-sperejou er moc'h! Hag ar vandenn mond a lamm diwar an tarroz el Lenn! Eno eo beuzet...

34 En eur weled kemend-all, e tec'h ar bastored da gas kelou e kêr ha war ar mêziou! **35** Diredeg a ra an dud da weled petra a zo c'hoarvezet, hag e teuont daved Jezuz. An dén a zo eet dioutañ droug-sperejou a

gavont azezet, gwisket ha reiz, e-harz treid Jezuz! Hag e krog aon enno!
³⁶ Ar re o-deus gwelet a zispleg dezo penaoz eo bet saveteet an dén droug-speredet! ³⁷ Oll dud korn-bro ar C'heraziz a c'houlenn digantañ mond kuit diwar o zro, rag gwasket int gand eur spont braz! Eñ avad a zav en eur vag evid mond endro. ³⁸ Ar gwaz a zo eet kuit dioutañ an droug-sperejou a c'houlenn digand Jezuz gelloud chom gantañ... Med Jezuz a ra dezañ mond kuit, o lavared: ³⁹ **“Distro d'ar gêr! Ha displeg pebez traou e-neus Doue greet dit!”** Mond a ra dre ar gêr a-bez en eur embann pebez traou e-neus Jezuz greet dezañ...

Mz 9, 18...
 Mk 5, 21...

N'AZ-PEZ KET AON! KRED HEPKEN!

⁴⁰ Pa zeu Jezuz endro, e teu an dud d'e zegemer: oll emaint ouz e c'hortoz! ⁴¹ Ha setu o tond davetañ eur gwaz, anvet Jair: rener ar zinagog eo-eñ. Koueza a ra e-harz treid Jezuz, ⁴² ha digantañ e c'houlenn stard dond d'e di! N'eus dezañ nemed eur verc'h, dezi wardro daouzeg vloaz, hag ema e par ar maro! Epad ma vale en hent, e vez gwasket gand an dud, da vouga!

⁴³ Ha setu eur vaouez, dezi eur c'holl-gwad abaoe daouzeg vloaz! Gand medisined he-deus-hi dispignet hec'h oll dañvez, ha n'he-deus ket gellet beza paret gand hini ebed! ⁴⁴ Dond a ra beteg ennañ a zia-dreñv, hag e touch ouz fleñch e vantell. Raktal ec'h ehan he c'holl-gwad!

⁴⁵ Ha Jezuz a lavar: **“Piou an hini e-neus touchet ouzin ?”** Peogwir e nac'h an oll, e lavar Pèr: **“Mestr! Kalz tud a zo ouz ho kwas-ka hag ouz ho moustra!”** ⁴⁶ Med Jezuz a lavar: **“Touchet e-neus unan bennag ouzin, rag goud a ouzon ez eus eet eun nerz diouzin!”** ⁴⁷ O weled n'eo ket hi chomet kuzet, e teu ar vaouez en eur gréna da stoui dirazañ, hag e tispleg dirag ar bobl a-bez perag he-deus-hi touchet outañ ha penaoz eo bet paret war an taol! ⁴⁸ Eñ avad a lavar dezi: **“Va merc'h! Da feiz he-deus da zaveteet! Kee e peoc'h!”**

Mz 8,10

⁴⁹ O komz ema c'hoaz, pa zeu eun dén euz ti rener ar zinagog da lavared dezañ: **“Marvet eo da verc'h! Na dregas ket pelloc'h ar Mestr!”** ⁵⁰ O kleved kement-se, e respont Jezuz dezañ: **“N'az-pezh ket aon! kred hepkén! hag e vezo-hi saveteet!”** ⁵¹ O vond en ti, ne lez dén da vond d'e heul, nemed Pèr, Jakez ha Yann, ha tad ar baotrez hag he mamm.

Mk 1,34

⁵² An oll a zo o ouela hag oc'h ober kañv dezi! Hag Eñ a lavar: **“Na ouelit ket! N'eo ket marvet, med kousket eo-hi!”** ⁵³ Hag e c'hoar-zont dezañ, pa ouezont mad eo-hi marvet! ⁵⁴ Eñ avad a grog en he dorn hag e sav e vouez da lavared: **“Paotrez! Sav en da zav!”** ⁵⁵ Enni e tistro he spered, hag e sav raktal! Hag e kemenn rei dezi da zebri! ⁵⁶ Chom a ra sebezet an dud! Difenn a ra outo lavared da zén kement a zo c'hoarvezet!

9

Mz 10, 1...
Mk 6, 7...

O C'HAS A RA DA EMBANN ROUANTELEZ DOUE!

¹ Ken-voda a ra an Diskibien, rei dezo nerz ha galloud war an droug-sperejou ha da barea ar c'hleñvejou, ² hag o c'has a ra da embann Rouantelez Doue ha da barea an dud eet fall. ³ Dezo e lavar: **“Na gemerit netra evid an hent, na baz, na sac'h, na bara, nag arhant, ha n'ho-pet ket diou zae pep hini!** ⁴ **E ti pe di ez eoc'h, chomit eno, hag ahano ez eoc'h pelloc'h!** ⁵ **D'ar re n'ho tegemerint ket, en eur vond er-mêz euz ar gêr-ze, hejit ar boultrenn diouz ho treid, da veza eun testeni a-eneb dezo!”** ⁶ Mond a reont, hag e pep kêriadenn e tremenont en eur embann ar C'helou-Mad, hag en eur rei ar pare e pep lec'h...

BEZ' EMA HERODEZ O KLASK E WELED!

Mz 14,1...
Mk 6,14...

⁷ Herodez, an tetrark, a glev ano euz an oll draou c'hoarvezet, hag e chom nehet! Rag lod a lavar: **“Adsavet eo Yann a-douez ar re varo!”** ⁸ Lod all avad: **“Eli a zo deuet da bara!”**; ha lod all: **“Adsavet eo eur profed a-wechall!”** ⁹ Med Herodez a lavar: **“Yann am-eus-me dibennet! Daoust ha piou eo Hemañ a glevan ar seurt traou diwar-e-benn ?”** Hag e klask e weled!

ROIT DEZO DA ZEBRI!

Mz 14, 13...
Mk 6, 30...
Yn 6, 1...

¹⁰ Pa zistro an Ebestel, e tisplegont dezañ kement o-deus greet! Hag Eñ o c'hemer gantañ, hag e tec'h diouz e du, da gichenn eur gêr galvet Betsaid. ¹¹ Deuet da c'houzoud, ez a an dud war e lerc'h; dezo e ro degemer: komz a ra diwar-benn Rouantelez Doue, ha parea an dud o-deus ezomm a bareañs!

¹² Pa z'eo eet izel an deiz, e teu an Daouzeg da lavared dezañ: **“Kasit an dud kuit, dezo mond d'ar c'hêriadennou ha war ar mêziou tro-war-dro da loja ha da gavoud bevañs, rag en eur gouelec'h emaom-ni amañ!”** ¹³ Eñ avad a lavar dezo: **“Roit dezo da zebri, c'hwi!”** Hag e lavaront: **“N'eus ket deom ouspenn pemp baraenn ha daou besk! Nemed mond a rafem on-unan da bréna magadur evid an oll dud-ze!** ¹⁴ **Rag bez' ez eus anezo wardro pemp mil gwaz!”** Hag e lavar d'e Ziskibien: **“Grit dezo gourvez a rummajou a hanter-kant pe dost!”** ¹⁵ Evel-se e reont, hag e lakont an oll da c'hourvez.

¹⁶ Kemer a ra ar pemp baraenn hag an daou besk, hag en eur zevel e zaoulagad warzu an Neñv, o benniga a ra hag o rei d'e Ziskibien evid o c'hinnig d'an dud! ¹⁷ An oll a zebr hag a zo maget! Hag e tastumer ar pez a jom war o lerc'h: daouzeg panerad tammou...

¹⁸ Eun deiz, eet a-gostez da bedi, ema gantañ e Ziskibien, hag e ra outo eur goulenn o lavared: **“Piou, eme an dud, piou on-me ?”** ¹⁹ Respont a reont o lavared: **“Yann-Vadezour! Re all ‘Eli’, lod all ‘Eur profed a-wechall, adsavet da veo!”** ²⁰ Hag e lavar dezo: **“Piou, emezoc’h-c’hwi, piou on-me ?”** Pèr avad a respont o lavared: **“Mesiaz Doue!”** ²¹ Eñ a ra trouz dezo, hag e kemenn dezo diwall da lavared an dra-ze da zén! ²² Ha lavared a ra: **“Mab-an-Dén a rank gouzañv kalz poaniou, beza disprizet gand ar Gozidi, ar Veleien-Vraz hag ar Skribed, beza lakeet d’ar maro, hag adsevel d’an trede deiz!”**

²³ Ha d’an oll e lavar: **“Ma fell da unan bennag dond d’am heul, dezañ en em nac’h e-unan, samma e groaz bemdez ha dond d’am heul! ²⁴ Rag an néb a fell dezañ savetei e vuez, hennez he c’hollo! An hini avad a gollo e vuez evidon-me, hennez he zaveteio! ²⁵ Rag petra a dalvez d’eun dén gounid ar béd a-bez, ma z’a e-unan d’ar maro pe da goll ?... ²⁶ Rag an néb e-neus méz ganin-me pe gand va C’homzou, gand hennez e-no méz Mab-an-Dén pa zeuio en e c’hloar hag e gloar an Tad hag an êlez santel.**

²⁷ E gwirionez e lavaran deoc’h: e-touez an dud a zo amañ, ez eus lod ha ne dañvint ket ar maro, ken n’o-do gwelet Rouantelez Doue!”

²⁸ Tremenet a zo wardro eiz devez goude ar C’homzou-ze, pa gemer gantañ Pèr, Yann ha Jakez, hag e sav war ar Menez da bedi! ²⁹ A-greiz pedi, e teu doare e zremm da veza disheñvel, hag e zillad da veza gwenn-kann ha skeduz! ³⁰ Ha setu daou waz o komz gantañ: Moizez eo hag Eli! ³¹ En eur bara e-kreiz gloar, e tivizont diwar-benn e Dremenvan, ema o vond da beur-echui e Jeruzalem! ³² Pèr avad hag ar re a zo gantañ a zo maro gand ar c’hoant-kousked, med chomet int dihun, hag e welont e c’hloar hag an daou a zo gantañ!

³³ P’ema an daou-mañ o vond kuit dioutañ, e lavar Pèr da Jezuz: **“Mestr! Kaer eo deom-ni beza amañ! Ha graom teir deltenn: unan deoc’h-c’hwi, unan da Voizez hag unan da Eli!”** Ne oar ket petra lavared! ³⁴ Epad ma lavar kement-se, e teu eur goabrenn d’ober skeud warno, hag e krog aon enno en eur vond er goabrenn! ³⁵ Euz ar goabrenn e teu eur vouez hag a lavar: **“Hemañ eo va Mab-dibabet! Deoc’h E zelaou!”** ³⁶ Pa zav ar Vouez-ze, en em gav Jezuz e-unan penn!... Hag e chom int-i sioul: en deveziou-ze, ne zisplegont da zén an disterra tra euz kement o-deus gwelet!...

TAOLIT EUR ZELL WAR VA MAB!

³⁷ En deiz war-lerc'h, pa ziskennont diwar ar Menez, e teu leun a dud d'o diambroug. ³⁸ Ha setu eun dén o youhal a-douez an dud, o lavared: **“Mestr! Ho pedi a ran da daoler eur zell war va mab, rag penn-hêr eo din!** ³⁹ Setu eur spered krog ennañ! A greiz-oll e ra dezañ youhal ha difreta gand eonenn en e c'henou! Ne z'a kuit dioutañ nemed gand poan, ouz e vrevi! ⁴⁰ Pedet am-eus ho Tiskibien d'e stlepel ermêz! Med n'o-deus ket gellet!”

⁴¹ Respont a ra Jezuz o lavared: **“Ô! rummad diskredig ha troet da fall! Beteg peur e vezin en ho kichenn hag e vo din d'ho kouzañv ? Degas amañ da vab!”** ⁴² O tond ema c'hoaz, pa zeu an droug-spered d'e stlepel d'an douar ha d'e zifreta! Jezuz avad a ra trouz d'ar spered hudur, a bare ar pôtr hag e ro d'e dad! Strafuillet eo an oll diwar braster Doue!

⁴³ Pa z'eo souezet an oll gand ar pezh a ra, e lavar d'e Ziskibien: **“C'hwi, lakait 'ta en ho tiskouarn ar C'homzou-mañ: Mab-an-Dén a zo o vond da veza roet etre daouarn tud!”** ⁴⁵ Int-i avad ne intentont ket al lavar-ze! Kuzet eo diouto, evid na intentint ket! Ha ne gredont ket ober outañ goulennou diwar-benn al lavar-ze!...

PIOU AR BRASA ANEZO ?

⁴⁶ Sevel a ra diviz en o zouez da c'houzoud piou eo ar brasa anezo! ⁴⁷ Jezuz, anad dezañ diviz o c'halon, a gemer gantañ eur bugel, e laka gantañ en e zav en e gichenn, ⁴⁸ hag e lavar dezo: **“An hini a zegemer ar bugel-mañ em Ano-me, am degemer va-unan! Hag an hini am degemer, a zegemer an Hini e-neus va c'haset! Hag an hini a zo ar bianna ahanoc'h, hennez eo ar brasa!”**

⁴⁹ Yann a zav e vouez da lavared: **“Mestr! Gwelet on-eus eun dén o kas droug-sperejou kuit en hoc'h Ano, ha ni on-eus miret outañ, pa ne zeu ket ganeom d'hoc'h heul!”** ⁵⁰ Jezuz avad a lavar dezañ: **“Na virit ket outañ: rag an néb n'eo ket a-eneb deoc'h, hennez a zo a-du ganeoc'h!”**

PA DOSTA E AMZER DA ZEVEL D'AN NEÑV!

⁵¹ Pa z'eo deuet mad an Amzer evitañ da veza douget d'an Neñv, e reuta ivez e zremm en eur vond da Jeruzalem! ⁵² Kannaded a gas en e raog, hag en eur vond, e tegouezont en eur gêriadenn a Zamariz evid aoza dezañ an traou. ⁵³ Med ne fell ket d'an dud e zegemer, rag anad eo warnañ ema o vond warzu Jeruzalem! ⁵⁴ O weled kement-se, e lavar e Ziskibien Jakez ha Yann: **“Aotrou! Ha c'hoant ho-peus e lavarfem d'an tan diskenn euz an neñv hag o fulluha ?”** ⁵⁵ Trei a ra warzu enno evid ober trouz dezo... ⁵⁶ Hag ez eont d'eur gêriadenn-all...

⁵⁷ Kerzed a reont gand o hent, pa lavar eun dén dezañ: “**D’hoc’h heul ez in-me, da be-lec’h bennag ez afec’h!**” ⁵⁸ Jezuz a lavar dezañ: “**Al lern o-deus toullou, ha laboused an neñv o-deus o c’hlud, Mab-an-Dén avad n’e-neus lec’h ebed da boueza e benn!**” ⁵⁹ Da unan all e lavar: “**Deus d’am heul!**” Hag an dén a lavar: “**Aotrou! Va lezit, da genta, da vond da zebelia va zad!**” ⁶⁰ Eñ avad a lavar: “**Lez ar re varo da zebelia o re varo! Te avad, kee da embann Rouantelez Doue!**” ⁶¹ Lavared a ra unan all c’hoaz: “**D’hoc’h heul ez in-me, Aotrou! Med, da genta, va lezit da gimiadi diouz tud va zi!**” ⁶² Ha dezañ e lavar: “**An néb a grog en alar hag a zell a-dreñv, n’eo ket tuet mad da Rouantelez Doue!**”.

10

EVEL DEÑVED E-TOUEZ BLEIZI!

Mz 10, 7...
Mk 11, 21...
Mz 13, 16

¹ Goude-ze e tibab an Aotrou daouzeg-ha-tri-ugent- all, evid o c’has daou ha daou en e raog e peb kêr hag e peb lec’h ema e-unan o vond enno. ² Dezo e lavar: “**An Eost a zo stañk, rouez avad al labourerien! Pedit ’ta Aotrou an Eost ma kaso labourerien d’e Eost!**” ³ Kit! Setu m’ho kasan evel Deñved e-touez Bleizi! ⁴ Na zougít na yalc’h, na sac’h, na sandalennou! Na zaludit dén en hent! ⁵ E kement tí ez eoc’h, lavarít da genta: ‘**Peoc’h d’an ti-mañ!**’ ⁶ Ha ma z’eus eno eun dén a beoc’h, e tiskenno warnañ ho peoc’h! Ma n’eus ket, e tistroio warnoc’h-c’hwi! ⁷ En ti-ze eo deoc’h chom, o tebri hag oc’h eva ar pezh a ginnigor, rag dîn eo an oberour euz e c’hopr! N’it ket euz an eil tí d’egile!”.

Mz 9,37

1 Tim 5,18

⁸ “**E kement kêr ez eoc’h hag e vezoc’h degemeret enni, debrit ar pezh a vo kinniget deoc’h.**” ⁹ Pareit an dud eet fall enni, ha lavarit: “**Deuet eo tost Rouantelez Doue!**” ¹⁰ E kement kêr ez eoc’h ha na vezoc’h ket degemeret enni, kit war al leuriou-kêr da lavared: ¹¹ “**Ar boultrenn zoken euz ho kêr, staget ouzom, war on treid, he heja a reom warnoc’h! Koulskoude, deoc’h gouzoud kement-mañ: deuet eo tost Rouantelez Doue!**” ¹² Lavared a ran deoc’h: da Zodom, en deiz-ze, ne vo ket ken kriz eged d’ar gêr-ze!”

Mz 11,21

¹³ “**Siwaz dit, Korozain! Siwaz dit, Betsaïd! Rag ma vije bet c’hoarvezet e Tir hag e Sidon ar burzudou greet ennoc’h-c’hwi, abaoe pell’zo o-defe troet o c’halon ouz Doue, gwisket gand sehier hag azezet war ludu!**” ¹⁴ Da Dir ha da Zidon ne vo ket ken kriz eged deoc’h-c’hwi da Zeiz ar Varn! ¹⁵ Ha te, Kafarnaom, daoust ha beteg an neñv e vezi uhelleet ? **Beteg an iferniou e vezi diskennet!**”.

Yn 13,20

¹⁶ “**An néb ho selaou, am zelaou-me ive! An néb ho tistaol, am distaol me ive! An néb am distaol, a zistaol an Hini e-neus va c’haset!**”

HO MEULI A RAN, TAD!

Mz 11, 25...

¹⁷ Distrei a ra an Daouzeg-ha-tri-ugent, leun a levez, o lavared: **“Aotrou! An droug-sperejou zoken a zuj deom en hoc’h Ano!”** ¹⁸ Eñ avad a lavar dezo: **“Gweled a reen Satan o koueza euz an neñv evel eul luhedenn! ¹⁹ Setu m’am-eus roet deoc’h galloud da vale war naered ha kruded, ha war peb nerz an Enebour! Nann, ne noazo tamm ebed deoc’h! ²⁰ Med na vezit ket laouen ablamour ma suj deoc’h an droug-sperejou! Bezit avad laouen ablamour ma z’eo hoc’h ano enskrivet en Neñv!”**

Mk 16,18

Disk 20,13

Mz 11,25...

²¹ D’an eur-ze, en eur dridal a levez dre nerz ar Spered Santel, e lavar: **“Ho meuli a ran, Tad, Aotrou an Neñv hag an douar,**

da veza kuzet an traou-ze ouz tud fur ha speredeg,

ha d’o diskulia da Vugaligou!

Ya! Tad! Evel-se eo bet plijet deoc’h!”

²² **“Pep tra a vez roet din gand va Zad:**

Dén ne anavez piou eo ar Mab nemed an Tad!

na piou eo an Tad, nemed ar Mab,

hag an hini a blij d’ar Mab E ziskulia dezañ!”

Mz 13,16

²³ Troet warzu e Ziskibien, e lavar, dezo hepkén: **“Eüruz an daou-lagad a wél kement a welit! ²⁴ Rag me a lavar deoc’h: C’hoanteet o-deus kalz profeded ha rouaned gweled kement a welit-c’hwi, ha n’o-deus ket gwelet! ha kleved kement a glevit-c’hwi, ha n’o-deus ket klevet!...”**

PETRA EO DIN OBER EVID KAOD BUEZ PEURBADUZ ?

Mz 22, 35...

Mk 12, 28...

²⁵ Ha setu eur skrib o sevel evid e denti, o lavared: **“Mestr! Petra eo din ober a-benn kaoud buez peurbaduz da lod-hêrez ?”** ²⁶ Hag Eñ a lavar dezañ: **“El lezenn, petra a zo skrivet ? Penaoz e lennez ?”** ²⁷ Respont a ra o lavared: **“Kared a ri an Aotrou, da Zoue, a-greiz da galon, a-greiz da ene, a-greiz da nerz hag a-greiz da spered, ha da nesa eveldout da-unan!”** ²⁸ Hag Eñ a lavar dezañ: **“Eun az-peus respontet! Gra kement-se hag e vevi!”**

²⁹ Eñ avad, o klask en em justiza, a lavar da Jezuz: **“Ha piou eo va nesa ?”** ³⁰ Jezuz avad a stag da lavared: **“Eun dén, a-greiz diskenn euz Jeruzalem da Jeriko, a gouez etre daouarn torfetourien! Ar re-mañ a ziframm kement a zo warnañ, a ro dezañ taoliou hag a gerz kuit ouz e lezel hanter-varo! ³¹ Degouezoud a ra d’eur beleg diskenn dre an hent-ze: o weled an dén, e tremen dre an tu-all d’an hent! ³² Evel-se ive, eul Leviad degouezet war al lec’h, ouz e weled, a dremen dre an tu-all! ³³ Eur Zamariad avad, o redeg bro, a zegouez war al lec’h!**

Ouz e weled, eo rannet e galon! ³⁴ Mond a ra davetañ, liena e c'houliou en eur skuill warno eoul ha gwin! E lakaad a ra war gein e loen e-unan evid e gas d'an ostaliri: eno ec'h intent outañ! ³⁵ En deiz warlerc'h, e tispak daou ziner hag o ro d'an ostiz en eur lavared: "Intent mad outañ! Ar pez a zispigni ouspenn, d'am distro, a rentin-me dit me va-unan!"

³⁶ "Pehini euz an tri-ze, a gav dit, a zo bet nesa d'an dén kouezet etre daouarn an dorfetourien?" ³⁷ Eñ a lavar: "An hini e-neus diskouezet dezañ trugarez!" Ha Jezuz a lavar dezañ: "Kee! Ha te ive, gra evel-se!"

Yn 11, 1...
Yn 12, 2...

MARI HE-DEUS DIBABET AL LODENN VAD!

³⁸ En eur ober hent, e tegouez da Jezuz mond en eur gêriadenn: eur vaouez, anvet Marta, e zegemer en he zi. ³⁹ Bez' ez eus dezi eur c'hoar, galvet Mari: chom a ra azezet e-harz treid Jezuz da zelaou e Gomz. ⁴⁰ Marta a zo avad nehet gand liez servich! Chom a ra a-zav hag e lavar: "Aotrou! Ne rit forz ebed ma talc'h va c'hoar d'am lezel ouzin va-unan da zervicha? Lavarit 'ta dezi dond d'am skoazella!" ⁴¹ Respont a ra an Aotrou o lavared dezi: "Marta! Marta! bez' ez out nehet ha trubillet gand berniou traou! ⁴² Unan hepkén a zo ezomm anezañ! Rag Mari he-deus dibabet al Lodenn Vad, an Hini ne vo ket lamet diganti!"

11

Mz 6, 9...
Mz 7,7...

AOTROU! DESKIT DEOM PEDI!

¹ D'eun deiz bennag, en eul lec'h bennag, ema-Eñ o pedi! Pa ehan, e lavar dezañ unan euz e Ziskibien: "Aotrou! Deskit deom-ni pedi, evel m'e-neus Yann e-unan desket d'e Ziskibien!" ² Hag e lavar dezo: "Pa bedoc'h, lavarit:

"Tad! Hoc'h Ano bezet santelleet!

"Ho Rouantelez deuet deom!

³ **"Roit deom hirio or bara pemdezieg!**

Mk 7, 24...

⁴ **"Pardonit deom or pehejou,**

"Rag on-unan e pardonom da gement-hini a vank deom!

"Ha n'or c'hasit ket en tentadur!"

⁵ Hag e lavar dezo: "Unan ahanoc'h e-neus eur mignon, ha davetañ ez a e-kreiz an noz da lavared dezañ: 'Mignon! Prest din teir varaenn, ⁶ rag eur mignon din a zegouez euz eur pennad hent, ha

n'am-eus netra da ginnig dezañ!' ⁷ Egile, euz diabarz an ti a respont o lavared: 'Ehan d'am hegasi! A-vremañ eo prennet an nor! Va bugale a zo ganin er gwele! Ne c'hellan ket sevel da rei dit!' ⁸ Lavared a ran-me deoc'h: ma ne zav ket da rei dezañ ablamour ma z'eo e vignon, en abeg d'e hardizegez e savo da rei dezañ kement e-neus ezomm!"

⁹ "Lavared a ran deoc'h: goulennit, ha roet e vo deoc'h! Klaskit, hag e kavoc'h! Skoit, ha digoret e vo deoc'h! ¹⁰ Rag kement-hini a c'houlenn, a reseo! An néb a glask, a gav! D'an néb a sko, e vez digoret! ¹¹ En ho touez, pehini an tad, ma c'houlenn e vab bara digantañ, daoust ha dezañ e roio eur mên ? Pe ma c'houlenn eur pesk, daoust hag e lec'h eur pesk, dezañ e roio eun naer ? ¹² Pe ma c'houlenn eur vi, daoust ha dezañ e roio eur grug ? ¹³ Ma ouezit-c'hwi eta, goude deoc'h beza droug, rei donezonou mad d'ho pugale, na pegement muioc'h e roio ho Tad euz an Neñv e Spered Santel d'ar re a c'houlenn digantañ..."

Yn 14,13

Mz 12, 22...
Mk 3, 22...

DEGOUEZET EO ROUANTELEZ DOUE DAVEDOC'H

¹⁴ Hag ema Jezuz o kas kuit eun droug-spered, hag unan mud eo. Eet an droug-spered er-mêz, e komz mad an dén, hag e chom souezet an dud! ¹⁵ Lod avad a lavar: "**Dre Veelzeboub, mestr an droug-sperejou, e kas kuit an droug-sperejou!**" ¹⁶ Re-all, evid e denti, a c'houlenn digantañ eur zin euz an neñv! ¹⁷ Eñ avad, anad dezañ o divizou, a lavar dezo: "**Peb rouantelez, rannet enni hec'h-unan, a ia da netra! Hag enni e kouez ti war di!**" ¹⁸ Ma z'eo Satan ive rannet ennañ e-unan, penaoz e chomo e rouantelez en he zav, pa lavarit eo dre Veelzeboub e kasan-me an droug-sperejou er-mêz ? ¹⁹ Ha ma z'eo dre Veelzeboub e kasan an droug-sperejou er-mêz, ho pugale-c'hwi, dre biou o c'hasont er-mêz ? Rag-se e vezint o-unan ho parnerien! ²⁰ Ma z'eo avad dre nerz biz Doue e kasan-me an droug-sperejou er-mêz, neuze 'ta eo degouezet Rouantelez Doue davedoc'h!"

²¹ "Pa vez an Hini-Kreñv harnezet o tiwall e di, e vez e peoc'h kement a zo dezañ! ²² Ma teu Unan-Kreñvoc'h egetañ ha ma vez trec'h warnañ, Hemañ a lamo an harnez a lake ennañ e fiziañs, hag e lodenno e breiz!"

Mk 8, 11...

²³ An néb n'ema ket ganin, a zo a-eneb din! Hag an néb ne zatum ket ganin, a zo o fouilleza! ²⁴ Pa zegouez d'eur spered hudur mond er-mêz euz eun dén, e red dre lehiou dizec'h da glask distan! Pa ne gav ket, e lavar: "**Distrei a rin d'am zi ez on deuet er-mêz anezañ!**" ²⁵ Pa zeu, e kav an ti skubet ha kempennet brao! ²⁶ Neuze ez a da gemer gantañ seiz spered all, droukoc'h egetañ, hag e teuont da jom eno! Ha stad diweza an dén-ze a zo gwasoc'h eged an hini kenta!"

Mz 12,45

²⁷ P'ema o lavared kement-se, e teu eur vaouez a-douez an dud da

zevel he mouez ha da lavared: “Eüruz ar c’hov e-neus ho touget, hag an divronn ho-peus sunet!”²⁸ Eñ avad a lavar: “Eüruz kentoc’h an dud a zelaou Komz Doue hag he mir!”.

Mz 12, 38...

SETU AMAÑ KAEROC’H EGED SALOMON!

Yn 6,30

²⁹ Kalz tud a zo diredet, hag e stag da lavared: “Ar rummad-mañ a zo eur rummad fall! Goulenn a ra eur zin, ha sin ebed ne vo roet dezañ nemed sin Jonaz!”³⁰ Rag evel m’eo bet Jonaz eur zin evid an Niniviz, evel-se e vezo Mab-an-Dén eur zin evid ar rummad-mañ!³¹ Rouanez ar C’hreisteiz a adsavo d’ar Varn gand gwazed ar rummad-mañ hag hi o barno! Deuet eo-hi euz harzou pella ar bed da zelaou furnez Salomon! Ha setu amañ kaerroc’h eged Salomon!

³² Gwazed Niniv a adsavo d’ar Varn gand ar rummad-mañ, hag int-i o barno: troet o-deus o c’halon ouz Doue diwar embann Jonaz! Ha setu amañ kaerroc’h eged Jonaz!”

Mz 5, 15
Mk 4, 21
Lk 8, 16

LAMP DA GORV EO DA LAGAD...

³³ “Ne z’a dén da dana eul lamp evid e lakaad e-kuz, med war eur c’hantolor, d’ar re a zeu en ti gweled sklêrijenn!”³⁴ Lamp da gorf eo da lagad... Ma z’eo glan da lagad, sklêr eo ive da gorf a-bez! Ma z’eo fall da lagad, eo ive teñval da gorf!³⁵ Gwel ’ta ma na vo ket teñvalijenn ar sklêrijenn a zo ennout!³⁶ Rag-se, ma z’eo sklêr da gorf a-bez heb tamm teñval ebed, neuze e vo sklêr a-bez evel pa vez eul lamp ouz da sklêrijenna gand e sked!”

Mz 23, 1...

SIWAZ DEOC’H, FARIZEIZ!. SKRIBED!

³⁷ O komz ema c’hoaz, pa zeu eur Farizead d’e bedi da breja en e di.

Mz 15,2
Mk 7,2

Degouezet en ti, ez a da astenn ouz taol...³⁸ Ar Farizead, ouz e weled, a zo souezet, pa n’e-neus ket da genta en em welhet araog ar pred.³⁹ An Aotrou a lavar dezañ: “Bremañ, c’hwi, ar Farizeiz, c’hwi a c’hlana diavêz ar c’hanaf hag ar plad, med ho tiabarz a zo leun a skraperez hag a zrougiez!”⁴⁰ Tud sod! Daoust hag an Hini e-neus greet an diavêz n’e-neus ket greet ive an diabarz ?⁴¹ Nemed rei a rafec’h ho tañvez en aluzenn ha setu glan pep tra evidoc’h ?”

⁴² “Siwaz deoc’h-c’hwi, Farizeiz! rag paea a rit an deog diwar ar vent, ar ruz ha peb legumaj!. Hag e tilezit ar justiz, ha karantez Doue! An traou-mañ a oa red ober heb dilezel ar re-ze!”

⁴³ “Med siwaz deoc’h-c’hwi! Farizeiz! Rag kared a rit ar gador genta er zinagogou hag ar zaludou war al leuriou-kêr!”⁴⁴ Siwaz

deoc'h! Rag bez' ez oc'h evel béziou diverket! Warno e vale an dud heb gouzoud dezo!"⁴⁵ Respont a ra eur Skrib o lavared dezañ: "Mestr! o lavared kement-se, on dismega a rit, ni ive!"⁴⁶ Eñ avad a lavar: "Siwaz deoc'h-c'hwi ive, Skribed! Rag samma a rit an dud gand sammou landrammuz, ha c'hwi ne douchit ket hoc'h-unan ouz ar zammou gand eun unan euz ho pizied."

⁴⁷ "Siwaz deoc'h-c'hwi, rag sevel a rit béziou ar Brofeded: ho tadou avad o-deus o lazet! ⁴⁸ Evel-se ez oc'h-c'hwi test: asanti a rit da oberou ho tadou! Int-i o-deus o lazet, ha c'hwi a zav o béziou! ⁴⁹ Rags e ive e lavar Furnez Doue: "*Kas a rin dezo Profeded hag Ebestel! Lod anezo a lazint hag a heskinint,* ⁵⁰ *ma vo goulennet digand ar rummad-mañ Gwad an oll Brofeded a zo bet skuillet abaoe m'eo bet krouet ar Bed,* ⁵¹ *adaleg gwad Abel beteg gwad Zakari, bet lazet etre an aoter hag ar zantual. Ya, me 'lavar deoc'h: bez' e vo goulennet digand ar rummad-mañ!*"

⁵² "Siwaz deoc'h, Skribed! Rag paket ho-peus alhwez ar Ouiziegezh! Ne z'it ket enni hoc'h-unan! Hag eur skoill a lakit dirag ar re a glask mond enni!"

⁵³ P'ema o vond kuit, e krog ar Farizeiz hag ar Skribed da wallziroll a-eneb dezañ, ha d'ober dezañ komz diwar kalz traou, en eur lakaad dezañ stignou a-benn paka eun tamall bennag euz e c'henou...

12

N'HO-PET KET AON...

¹ War-ze ez eus bodet tud a vilierou beteg bresa an eil egile. Hag e krog da lavared d'e Ziskibien da genta: "Diwallit diouz goell ar Farizeiz, da lavared eo an douellerez! ² N'eus netra c'holoet ha na vefe ket dizoloet! ha netra guzet ha na vefe ket gouezet! ³ En eneb, ar pez a lavaroc'h en deñvalijenn a vo klevet er sklêrijenn! hag ar pez a lavaroc'h e pleg ar skouarn, er c'haou, a vo klevet war al leuriou-doenn!"

⁴ "Deoc'h avad, va Mignoned, e lavaran: n'ho-pet ket aon rag ar re a laz ar c'horv, ha ne c'hellont goude-ze ober netra ouspenn! ⁵ Deoc'h e tisklêrian rag piou eo deoc'h kaoud aon: ho-pet aon rag an hini a c'hell, goude al laza, stlepel e jeen an tan! Ya, me 'lavar deoc'h: ho-pet aon rag hennez!"

⁶ "Daoust ha ne vez ket gwerzet pemp filip evid daou wenneg? Ha ne vez ankounaheet hini anezo gand Doue! ⁷ Med bleo ho penn a zo oll kontet! N'ho-pet ket aon! Dreist eur bern filiped e talvezit-c'hwi!"

⁸ "Deoc'h avad e lavaran: Piou bennag am anzavo dirag an dud, Mab-an-Dén ive e anzavo dirag êlez Doue! ⁹ An néb avad am naho

Mz 12,32 **dirag an dud, a vo nahet dirag êlez Doue! ¹⁰ Piou bennag a lavaro eur gomz a-eneb Mab-an-Dén, dezañ e vo pardonet! Med an hini a vlasfemo a-eneb d'ar Spered Santel, dezañ ne vo ket pardonet!”**

Mz 10,17 **¹¹ “Pa vezoch kaset dirag ar zinagogou, dirag ar gouarnourien hag ar vistri, na vezit ket nehet da c’houzoud penaoz ha petra respont pe lavared, ¹² rag ar Spered Santel a zesko deoc’h, d’ar poent-se, petra eo red lavared!”**

Mz 6, 25...
Lk 9, 43

DIWALLIT DIOUZ AR SKRAPEREZ!

¹³ Lavared a ra dezañ eun dén a-douez an dud: “Mestr! lavarit d’am breur ranna ganin an hêrez!” ¹⁴ Eñ avad a lavar dezañ: “Va dén! Piou e-neus va lakeet da varner pe da lodenner warnoc’h ?” ¹⁵ Hag e lavar dezo: “Gwelit! Diwallit diouz ar skraperez! Rag goude ma ’z eo eun den pinvidig, ne zeu ket e vuez euz e vadou!” ¹⁶ Hag e tislep eur barabolenn o lavared: “Douarou eun dén pinvidig o-deus da-vad roet frouez! ¹⁷ Hag e soñj ennañ-e-unan o lavared: “Petra rin-me, pa n’am-eus lec’h ebed da c’horren va eost ?” ¹⁸ Hag e lavar: “Evel-mañ e rin: va grignolou a ziskarin, re vrasoc’h a zavin! Enno e tastumin va éd ha va madou! ¹⁹ Ha d’am ene e lavarin: “Va ene! Bez’ az-peus kalz madou berniet evid meur a vloavez! Dit eta diskuiza! Debri, eva, ober fest!” ²⁰ Doue avad a lavar dezañ: “Dén sod! En noz-mañ, e c’houlennor da ene diganit! Hag ar pez az-peus-te lakeet a-gostez, da biou e vo?””.

Mz 6,19...
Disk 3,17...

²¹ Evel-se e tegouez d’an néb a vez o teñzoriza evitañ e-unan, ha ne glask ket pinvidikaad e Doue!

Mz 6,25...

²² Ha d’e Ziskibien e lavar: “Rag-se e lavaran-me deoc’h: na vezit ket nehet evid ho puez gand ar pez a zebroc’h, nag evid ho korv gand ar pez a wiskoc’h! ²³ Rag muioc’h eo ar vuez eged ar bevañs, ha muioc’h ar c’horv eged ar wiskamant! ²⁴ Gwelit ar brini: ne hadont na ne eostont! N’eus dezo na kao na grignol! Ha Doue a zalc’h d’o maga! Pegement muioc’h eged laboused ne dalvezit-c’hwi ket!”

²⁵ “Pehini ahanoc’h, dre veza nehet, a c’hell kreski e vent euz eun ilinad ? ²⁶ Ma ne c’hellit ket eta nag an disterra tra, perag beza nehet gand an traou-all ? ²⁷ Gwelit al lili, penaoz e kreskont! Neza ne reont ket na gwia! hag e lavaran deoc’h: Salomon zokén, e-kreiz e c’hloar, ne veze gwisket par da unan anezo! ²⁸ Ma vez Doue o wiska evel-se ar c’hlanzvez a zo hirio er park hag a vo warhoaz taolet er forn, pegement muioc’h e teuo d’ho kwiska, krederien laosk! ²⁹ Ha c’hwi, na glaskit ket petra a zebroc’h na petra a evoc’h! Na vezit ket pennou skañv! ³⁰ Rag an oll draou-ze a vez Paganed ar Bed o klask! Ho Tad-c’hwi avad a oar ho-peus ezomm anezo! ³¹ Rag-se, klaskit e Rouantelez! ha kement-se a vo roet deoc’h ouspenn!”

Yn 10,21

³² “N’az-peuz ket aon! Tropell disterig! rag plijet eo d’an Tad rei

Mz 6,20 deoc'h ar Rouantelez! ³³ Gwerzit ho madou ha roit aluzenn! Grit deoc'h hoc'h-unan yalhou ha ne gosaont ket, eun teñzor paduz en Neñv, el lec'h na dosta laer ebed, ha n'eus ennañ tartouz ebed o c'hri-gnal! ³⁴ Rag el lec'h m'ema ho Teñzor, eno ive e vo ho kalon!"

Mz 24, 42...
Mz 10, 34...

HEÑVEL OUZ TUD O C'HORTOZ O AOTROU!

Yn 13,4 ³⁵ "Ra jomo gourizet ho kroaz-lêz hag entanet ho lampou! ³⁶ Ha c'hwi, bezit heñvel ouz tud o c'hortoz o Aotrou pa zistroio euz al Lein-Eured, dezo da zigeri dezañ kerkent ha ma skoio! ³⁷ Eüruz ar zervicherien-ze, ma tegouez d'ar Mestr o c'havoud dihun pa zistroio! Me 'lavar deoc'h: lakaad a raio e c'houriz, ober dezo mond ouz taol hag o zervicha o vond euz an eil d'egile! ³⁸ Ha ma tegouez d'an eil pe d'an trede beilladenn, ha m'o c'hav evel-se, eüruz an dud-ze!"

³⁹ "Deoc'h gouzoud kement-mañ: ma ouezfe mestr an ti da bed eur e teufe al laer, ne lezfe ket toulla e di! ⁴⁰ C'hwi ive, bezit prest, rag d'an eur na gav ket deoc'h e teuio Mab-an-Dén!"

⁴¹ Pèr avad a lavar: "Aotrou! Hag evidom-ni e lavarit ar barabolen-ze ? Pe evid an oll ?" ⁴² Hag e lavar an Aotrou: "Pehini eo ar merour feal ha fur a lakaio an Aotrou e penn e zervicherien, da rei dezo, er poent, o muzuliad gwiniz ? ⁴³ Eüruz ar zervicher-ze a vo kavet gand e Aotrou oc'h ober evel-se, pa zistroio! ⁴⁴ E gwirionez e lavaran deoc'h: e lakaad a raio war e oll vadou!"

⁴⁵ "Med ma lavar ar zervicher-ze en e galon: "Dalea a ra va Aotrou da zond en dro!", ha ma teu da skei gand ar zervicherien hag ar zervicherezed, da zebri ha da eva ha da vezvi, ⁴⁶ ec'h erruo Aotrou ar zervicher-ze d'an deiz n'ema ket o c'hortoz ha d'an eur na oar ket! An Aotrou e gaso diwar e dro hag e lako e lod gand an dud diskredig!"

⁴⁷ "Ar zervicher-ze hag a anavez bolontez e vestr, ha na aoz ha na ra netra hervez e volontez, hennez a bako kalz taoliou! ⁴⁸ An hini avad n'he anavez ket hag a ra traou da veza kastizet gand kalz taoliou, hennez ne bako nemed nebeud! Kement-hini a vez roet e-leiz dezañ, a vez goulennet e-leiz digantañ! Hag an hini a vez fiziet e-leiz ennañ, a vez goulennet muioc'h digantañ!"

"TAOLER TAN WAR AN DOUAR!"

Mk 10,36 ⁴⁹ "Tan on-me deuet da daoler war an douar! Ha petra glaskan nemed e vefe krog a-vremañ! ⁵⁰ Dre eur Vadeziant am-eus da veza badezet, ha pegen enkrezet on-me ken na vezo peur-zevenet! ⁵¹ Kavoud a ra deoc'h ez on deuet da rei peoc'h war an douar! Nann avad, e lavaran deoc'h, med disrann kentoc'h! ⁵² Rag hiviziken, pemp en eun ti a vo disrannet: tri a-eneb daou, ha daou a-eneb tri! ⁵³

Disrannet e vint, tad a-eneb mab, mab a-eneb tad! Mamm a-eneb merc'h, merc'h a-eneb mamm! Mamm-gaer a-eneb he merc'h-kaer ha merc'h-kaer a-eneb he mamm-gaer!”

Mz 16, 2...

NE ANAVEZIT KET AN AMZER-MAÑ ?

⁵⁴ D’an dud avad e lavar ive: “Pa welit eur goabrenn o sevel er C’huz-heol, e lavarit raktal: “Erru ar glao-arne!”, hag e tegouez evel-se! ⁵⁵ Pa welit avel ar C’hreisteiz o c’hweza, e lavarit: “Tomm-bac’h e vo!”, hag evel-se e vez! ⁵⁶ Touellourien! Diouz doare an douar hag an neñv ec’h anavezit an amzer! Ha penaoz ne anavezit ket an Amzer-mañ ? ⁵⁷ Ha perag ne varnit ket ive drezoc’h hoc’h-unan ar pezh a zo just? ⁵⁸ Rag pa ’z ez gand da enebour dirag ar gouarnour, dit poania en hent d’en em zizober dioutañ gand aon na vefez kaset gantañ dirag ar barner, ha roet gand ar barner etre daouarn ar gward, ha taolet gand ar gward er prizon! ⁵⁹ Me a lavar dit: ne ’z i ket er-mêz ahano ken n’az-po rentet beteg ar gwenneg diweza...”

13

MA NE DROIT KET HO KALON OUZ DOUE, EZ EOC’H OLL DA GOLL!

Yn 9,3

Yn 8,24

¹ D’ar poent-se e tegouez eno tud da rei dezañ kelou euz ar C’halileiz e-neus Pilat mesket o gwad gand o frovou! ² Respont a ra o lavared dezo: “Ha kavoud a ra deoc’h e oa ar C’halileiz-ze gwasoc’h peherien eged an oll C’halileiz, p’o-deus gouzañvet kement-se ? ³ Nann da! e lavaran deoc’h! Nemed troet ho-pefe ho kalon ouz Doue, ez eoc’h oll koulz all da goll! ⁴ Pe an triwec’h-se a zo kouezet warno an tour e Siloe, hag a zo bet lazet, ha kavoud a ra deoc’h e oant gwasoc’h peherien eged an oll dud a oa o chom e Jeruzalem ? ⁵ Nann da! Nemed troet ho-pefe ho kalon ouz Doue, ez eoc’h oll koulz all da goll!”

⁶ Hag Eñ da lavared ar barabolenn-mañ. “Eur wezenn-fiez e-neus eun dén plantet en e winieg. Dond a ra da glask frouez enni, ha ne gav ket! ⁷ Hag e lavar d’e winiegour: “Setu ma ’z-eus tri bloaz abaoe ma teuan da glask frouez war ar wezenn-fiez-mañ, ha ne gavan ket! Dit d’he zroha! Hag evid petra ema-hi o suna an douar ?” ⁸ Eñ avad a respont o lavared dezañ: “Aotrou! Dit d’he lezel er bloaz-mañ c’hoaz, ken n’am-bo toullet, ha lakeet teil en dro dezi! ⁹ Emechañs e tougo frouez! Ma ne ro ket, dit d’he zroha diwezatoc’h!”

Mz 13, 31...
Mk 4, 30...

D’AR ZABAD, E TILIAMM PEP HINI E EJENN PE E AZEN!

¹⁰ D’ar zabad ema o kelenn en unan euz ar zinagogou. ¹¹ Ha setu eur vaouez dezi eur spered a wander abaoe triwec’h vloaz: daou-bleget eo-hi

ha ne c'hell ket sevel mad he fenn! ¹² Ouz he gweled, e sav Jezuz e vouez da lavared dezi: **“Maouez! Diliammet out diouz da wander!”** ¹³ Astenn a ra e zaouarn warni: raktal e sav-hi sounn, hag e toug gloar da Zoue!

¹⁴ Renner ar zinagog a zav e vouez, eet droug ennañ p'e-neus Jezuz roet ar pare d'ar zabad, hag e lavar d'an dud: **“C'hwec'h devez a zo, a rank enno beza greet al labour! Enno eta eo deoc'h dond da veza pareet, ha n'eo ket da zeiz ar zabad!”** ¹⁵ An Aotrou avad a respont o lavared: **“Touellourien! Daoust ha d'ar zabad ne zeu ket pep hini ahanoc'h da zilamma e ejenn pe e azen diouz e laouer evid o c'has da eva dour ?** ¹⁶ **Hag ar vaouez-mañ, merc'h da Abraham, hag e-neus Satan liammet triwec'h vloaz a zo bremañ, daoust ha ne ranke ket beza diliammet diouz al liamm-ze da zeiz ar zabad ?”** ¹⁷ Pa lavar an dra-ze, o-deus méz e oll enebourien! Ar Bobl a-bez a zo avad laouenneet dre an oll vuzudou greet gantañ!

Mz 13, 31...
Mk 4, 30...

ROUANTELEZ DOUE A ZO HEÑVEL OUZ EUN HADENN ZEZO!

¹⁸ Lavared a ra eta: **“Ouz petra eo heñvel Rouantelez Doue ? Ouz petra eo din heñvellaad ?** ¹⁹ **Heñvel eo ouz eun hadenn zezo a gemer eun dén da daoler en e liorz. Kreski a ra beteg dond da veza eur wezenn, a zeu laboused an neñv da gluda en he skourrou.”** ²⁰ Ha c'hoaz e lavar: **“Ouz petra ec'h heñvellain-me Rouantelez Doue ?** ²¹ **Heñvel eo ouz goell he-deus eur vaouez kemeret ha sanket e tri vuzuliad toaz, ken na vo goet a-bez!”**

Mz 7, 13...
Mz 25, 11...

STOURMIT DA VOND E-BARZ DRE AN NOR STRIZ!

²² Tremener a ra dre gêriou ha kêriadennou en eur gelenn, hag oc'h ober hent warzu Jeruzalem! ²³ Hag eun dén a lavar dezañ: **“Aotrou! Daoust ha rouez e vo an dud salvet ?”** ²⁴ Eñ avad a lavar dezo: **“Stourmit da vond e-barz dre an nor striz! Rag me a lavar deoc'h: kalz tud a glasko mond e-barz ha ne c'hellint ket!** ²⁵ **Kerkent hag adsavet Mestr an Ti hag alhwezet an nor, e vezoc'h-c'hwi en ho sav er-mêz o skei war an nor en eur lavared: ‘Aotrou! Aotrou! Digorit deom!’ Hag e responto deoc'h: “N'ouzon ket a-be-lec'h ez oc'h-c'hwi!”**

²⁶ **“Ha neuze e stagoc'h da lavared: “Debret hag evet on-eus dirazoc'h, ha war on leuriou-kêr ho-peus kelennet!”** ²⁷ **Hag e lavaro: “Lavared a ran deoc'h: n'ouzon ket a-be-lec'h ez oc'h-c'hwi! Tehit pell diouzin, c'hwi oll, oberourien an dizurz!”** ²⁸ **Eno e vo goueladeg ha skrignadeg dent, pa weloc'h Abraham, Izaag ha Jakob hag an oll Brofeded e Rouantelez Doue, ha c'hwi stlapet er-mêz!** ²⁹ **Dond a raio tud euz ar Zav-heol hag euz ar C'huz-heol da astenn ouz taol e Rouantelez Doue.** ³⁰ **Setu ma vo lod euz ar re ziweza da genta, ha lod euz ar re genta da ziweza!”**

NA PED KWECH AM-EUS KLASKET BODA DA VUGALE!

Mz 23, 37...

³¹ D’an eur-ze, e teu eun nebeud Farizeiz da lavared dezañ: “**Kit kuit ha kerzit ahalenn! Rag ema Herodez o klask ho laza!**” ³² Hag e lavar dezo: “**Kit da lavared d’al Louarn-ze: ‘Setu ma kasan er-mêz an droug-sperejou ha ma roan ar pare hirio ha warhoaz, ha d’an trede deiz e vezin peur-echu!...’** ³³ Med réd eo din kerzed hirio ha warhoaz ha d’an deiz war-lerc’h! Rag ne dle ket eur profed beza lazet er-mêz euz Jeruzalem!”

Mz 16,14

³⁴ “**JERUZALEM! JERUZALEM! Te hag a laz ar Brofeded, hag a labez an dud kaset davedout! Na pet kwech am-eus-me klasket boda da vugale, evel ma vod eur vamm-yar he neziad dindan he diouaskell, ha n’eo ket bet fellet deoc’h!...’** ³⁵ Setu ma vo ho Ti lezet ganeoc’h! Me a lavar deoc’h avad: N’am gweloc’h mui, ken na zeuio deoc’h an deiz da lavared: ‘Meuleudi d’an Hini a zeu en Ano Doue!’”

14

Mz 12, 11...

HAG AOTREET EO PAREA D’AR ZABAD ?

¹ Mond a ra e ti unan euz renerien ar Farizeiz da zebri eur pred, d’eun deiz sabad! Ha warnañ e paront o zellou! ² Ha setu ma teu dirazañ eun dén klañv gand an dour-goeñv... ³ Jezuz a zav e vouez da lavared d’ar Skribed ha d’ar Farizeiz: “**Hag aotreet eo parea d’ar zabad, pe n’eo ket?**” ⁴ Chom a reont sioul! Hag Eñ da gemer gantañ an dén, d’e barea ha d’e gas kuit! ⁵ Hag e lavar dezo: “**Pehini ahanoc’h, ma kouez e vab pe e ejenn en eur puñs, ne grogo ket d’e denna raktal da zeiz ar zabad ?**” ⁶ Ne c’hellont ket dislavared kement-se!

NA Z’A KET DA AZEZA ER REÑK KENTA!

⁷ Lavared a ra eur barabolenn d’an dud galvet d’eul lein, pa wel penaoz e tibabont ar reñkou kenta! Dezo e lavar: ⁸ “**Pa vezez galvet gand unan bennag d’eul lein-eured, na z’a ket da astenn ouz taol er reñk kenta, gand aon na vefe eun dén uhelloc’h egedout-te galvet ive gantañ;** ⁹ ha neuze, an hini e-neus ho kalvet, ho taou, te hag egile, a zeufe da lavared dit: ‘Ro plas da hemañ!’ hag ez afez neuze, leun a véz, da gemer ar plas diweza”.

Mk 7, 24...

¹⁰ Med pa vezi galvet, kee da astenn er plas diweza ; evel-se, pa zeuio an hini e-neus da c’halvet, e lavaro dit: “**Va mignon! sav uhelloc’h!**” Neuze e vo dit eun enor dirag an oll dud astennet ganit ouz taol! ¹¹ Rag kement-hini en em laka uhel, a vo izelleet! Hag an hini en em laka izel, a vo uhelleet!...”

Mz 23,12

¹² Lavared a ra neuze d’an hini e-neus e c’halvet: “**Pa rez eul lein**

Mk 6,1... pe eur goan, arabad dit pedi da vignoned na da vreudeur, na da gerent, na da amezeien pinvidig, gand aon na zeufent, int-i ive, d'az pedi endro, hag an dra-ze a rafe eun digoll dit! ¹³ Med pa rez eul lein vraz, galv tud paour, mahagnet, kamm, dall! ¹⁴ Hag e vezi eüruz, rag n'o-deus ket da renta dit! Rag rentet e vo dit da zeiz Adsao an dud just!”

Mz 22,1...

DEUIT D'AL LEIN! PREST EO PEP TRA!

¹⁵ Ouz e glevet, e teu unan euz an dud astennet gantañ ouz taol da lavared dezañ: “Eüruz an hini a zebro Bara e Rouantelez Doue!” ¹⁶ Eñ avad a lavar dezañ: “Eun dén a ra eul Lein vraz: galvet e-neus kalz tud! ¹⁷ Da eur al Lein e kas e zervicher da lavared d'an dud bet galvet: “Deuit! rag a-vremañ eo prest an traou!”

¹⁸ Oll a-unan e stagont da glask digareziou; an hini kenta a lavar: “Eur park am-eus prénet! Ezomm am-eus da vond d'e weled! Da bedi a ran d'am digarezi!” ¹⁹ Unan all a lavar: “Pemp koublad ohen am-eus-me prénet! Hag ez an d'o amproui! Da bedi a ran d'am digarezi!” ²⁰ Hag unan all a lavar: “Nevez-dimezet on-me! Rag-se ne c'hellan ket mond!”

²¹ Deuet en dro, e tegemenn ar zervicher kement-se d'e Aotrou. Neuze, leun a gounnar, e lavar ar Mestr d'e zervicher: “Kerz buan war leuriou ha strêjou kêr! An dud paour, mahagnet, dall ha kamm, degas amañ an dud-ze!” ²² Hag e lavar ar zervicher: “Greet eo ar pez ho-peus kemennet, hag e chom c'hoaz plas!” ²³ Hag an Aotrou a lavar d'e zervicher: “Kerz war an heñchou hag a-hed ar c'hleuziou, ha gra d'an dud dond amañ, ma vo leun va zi! ²⁴ Rag lavared a ran deoc'h: nikun euz ar wazed a oa bet galvet ne dañvo va Lein!”

Mz 10, 37...
Mk 8,34
Yn 12,26

AN HINI A ZEU DAVEDON-ME

²⁵ D'e heul avad ez a leun a dud... En eur zistrei, e lavar dezo: ²⁶ “An néb a zeu davedon heb kasaad e dad hag e vamm hag e wreg hag e vugale hag e vreudeur hag e c'hoarezed ha c'hoaz ive e vuez e-unan, ne c'hell ket beza diskib din! ²⁷ An néb na zoug ket e groaz e-unan ha na zeu ket war va lerc'h, ne c'hell ket beza diskib din!”

²⁸ “Pehini ahanoc'h, c'hoant dezañ da zével eun tour-ged, ne azez ket da genta da brizachi ar mizou, da weled ha peadra e-neus da gas da benn, ²⁹ gand aon na rafe an diazez heb gelloud echui, ha na zeufe an oll re e welje, da c'hoarzin goap warnañ, ³⁰ o lavared: “An dén-ze e-neus kroget da zével eun tour ha n'e-neus ket gelllet echui!”

³¹ Pe c'hoaz: pe roue, o vond da zigeri ar brezel, gand eur roue

all, ne azez ket da genta da weled ha gouest eo gand deg mil dén, da zelher penn ouz an hini a zeu dezañ gand ugent mil! ³² Anez-da-ze, e-keid m'ema egile c'hoaz pell, e kas kannaded da c'houlenn ober peoc'h! ³³ Evel-se 'ta, kement hini ahanoc'h na zilez ket e oll vadou, ne c'hell ket beza diskib din-me!"

Mz 5,13
Mk 9,50

³⁴ "Kaer eo an holenn! Ma teu avad an holenn ive da zizaoura, gand petra e vo saouret ? ³⁵ Nag evid an douar, nag evid an teil n'eo mui mad! Er-mêz e vo stlapet!"

"An néb e-neus diskouarn da glevet, ra glevo."

Mz 18, 12...

15

HENNEZ A ZEGEMER AR BEHERIEN!

¹ Bez' ema an oll Bublikiz hag ar Beherien o klask tostaad outañ evid e zelaou! ² Hag ar Farizeiz hag ar Skribed a c'hrozmol: "**Hennez a zegemer ar Beherien, ha debri a ra ganto!**". ³ Dezo e tispleg ar barabolenn-mañ o lavared:

⁴ "Pehini ahanoc'h, ma z'eus dezañ kant dañvad ha ma koll eun hinienn, ne zilez ket an naonteg-ha-pevar-ugent all er gouelec'h, evid mond warlerc'h an hini kollet ken na vo kavet! ⁵ Deuet a-benn d'e gavoud, e lakaad a ra laouen war e ziskoaz! ⁶ Degouezet er gêr, e c'halv davetañ e vignoned hag e amezeien, o lavared dezo: 'Laouennait a-unan ganin, rag kavet am-eus an dañvad, an hini kollet!' ⁷ Me a lavar deoc'h: "Bez' e vo levenez evel-se en Neñv diwar eur peher troet ouz Doue, kentoc'h eged diwar naonteg-ha-pevar-ugent ha n'o-deus ket ezomm da drei o c'halon!"

⁸ Ha c'hoaz: pehini ar vaouez, ma z'eus dezi deg drakm ha ma koll eun drakm nemetkén, na skub ket he zi ha na glask ket gand aket beteg dezi he c'havoud ? ⁹ Ha deuet d'he c'havoud, e c'halv daveti he mignonezed hag hec'h amezegezed en eur lavared: 'Laouennait a-unan ganin, rag kavet am-eus an drakmenn am-oa kollet!' ¹⁰ Evel-se ive, me a lavar deoc'h, e tegouez levenez dirag êlez Doue diwar eur peher nemetkén pa dro e galon ouz Doue!"

AR MAB-MAÑ DIN A OA MARO! BEO EO ADARRE!

¹¹ Hag Eñ da lavared: "Eun dén bennag a oa dezañ daou vab! ¹² Ar yaouanka anezo a lavar d'e dad: 'Tad! roit din al lodenn a zeu din euz ho tañvez!' ¹³ Ranna a ra e beadra etrezo, ha goude eun nebeud deveziou, dastumet gantañ e oll vadou, e kerz ar mab yaouanka d'eur vro bell, ha forani a ra eno e zañvez o veva en diroll! ¹⁴ Dispignet gan-

tañ e oll vadou, e tegouez eur gernez vraz war ar vro-ze, hag ennañ ive e krog an dienez! ¹⁵ Mond a ra da sklav gand eun aotrou euz ar vro-ze: hemañ a ra dezañ mond en e barkeier da basturi moc'h!

¹⁶ C'hoant awalc'h e-neus da garga e gov gand ar c'hlosou a zebr ar moc'h, med nikun ne ro dezañ! ¹⁷ Eet ennañ e-unan, e lavar: "Nag a zervicherien d'am zad o-deus forz pegement a vara, hag emañ-me amañ o vervel dre ar gernez! ¹⁸ Sevel a rin, mond daved va Zad, ha lavared dezañ: "Tad! pehet am-eus a-eneb an Neñv hag en ho keñver! ¹⁹ N'on ket kén dîn da veza galvet mab deoc'h! Grit din beza evel unan euz ho servicherien!"

²⁰ Sevel a ra da vond daved e Dad. P'ema c'hoaz pell, e Dad, ouz e weled, a zo rannet e galon! D'ar réd ez a d'e vriata ha da bokad dezañ! ²¹ Hag ar mab a lavar dezañ: "Tad, pehet am-eus a-eneb an Neñv hag en ho keñver! N'on ket kén dîn da veza galvet mab deoc'h!..." ²² An Tad avad a lavar d'e zervicherien: "Buan! kerhit ar gaerra sae d'e wiska! Lakait eur walenn en e zorn! ha sandalennou en e dreid! ²³ Degasit, ha lazit al leue, an hini lard! Deom-ni debri hag ober fest! ²⁴ Rag ar mab-mañ din a oa maro, ha beo eo-eñ adarre! Kollet e oa, ha kavet eo!" Hag e krogont d'ober fest!

²⁵ E vab kosa avad a zo er park. War e zistro, pa zegouez tost d'an ti, e klev sonadeg ha korollou! ²⁶ Gerver a ra davetañ unan euz ar zervicherien hag e c'houlenn digantañ petra eo kement-se! ²⁷ Hemañ a lavar dezañ: "Da vreur a zo erruet! Ha da Dad e-neus lazet al leue lard, peogwir e-neus e adkavet yac'h!" ²⁸ Droug ennañ, ne fell ket dezañ dond en ti. Hag e Dad a ia er-mêz d'e bedi... ²⁹ Respont a ra o lavared d'e Dad: "Setu n'ouz-ped bloavez din d'ho servicha, ha bis-koaz n'am-eus breset ho kourhemennou! Ha din-me n'ho-peus biskoaz roet eur c'havrig evid ober fest gand va mignoned! ³⁰ Med pa zeu endro ar mab-ze deoc'h, debret gantañ ho tañvez gand serhed, evitañ ho-peus lazet al leue lard!" ³¹ Eñ avad a lavar dezañ: "Mab! Bepred emañ-te ganin! ha va oll vadou a zo dit! ³² Ober fest avad ha laouennaad a ranker, rag ar breur-ze dit a oa maro, ha beo eo adarre! Kollet e oa, ha kavet eo!"

16

BUGALE AR BED A ZO FURROC'H...

¹ Lavared a ra c'hoaz d'e Ziskibien: "bez' ez eus eun dén pinvidig, ha dezañ eur merour hag a zo tamallet dirazañ da forani madou e vestr. ² En eur zevel e vouez, e lavar dezañ: "Petra ar pezh a glevan-me diwar-da-benn ? Rent kont euz da veradur, rag ne c'helli ket kén chom da verour!"

³ Ennañ e-unan e lavar ar merour: 'Petra eo din ober, pa zilam

va aotrou ar meradur diganin ? N'am-eus ket a nerz da balad! Méz am-bo da glask aluzenn!'.
4 'Kavet am-eus petra eo din ober evid kaoud tud d'am degemer pa vin dibradet euz va c'harg a verour!' 5 Gelver a ra, hini hag hini, dleourien e Aotrou! D'ar c'henta e lavar: 'Pegement a zleez d'am Aotrou ?' 6 Lavared a ra: 'Kant barillad eoul!' Dezañ e lavar ar merour: 'Kemer da skrid, azez ha skriv buan 'Hanter Kant'!' 7 Goudeze e lavar da unan all: 'Te avad, pegement a zleez ?' Hemañ a lavar: 'Kant muzuliad gwiniz'. Dezañ e lavar: 'Kemer da skrid, ha skriv 'Pevar-Ugent'. 8 Hag an Aotrou a ro meuleudi d'ar merour dizonest, peogwir e-neus greet gand furnez! Rag Bugale ar Bed-mañ a zo furroc'h eged Bugale ar Sklêrijenn e-keñver o rummad o-unan...

9 "Hag e lavaran-me deoc'h: grit mignoned deoc'h hoc'h-unan dre Arhant dizonest! Evel-se, pa raio diouer, e vo tud d'ho tegemer en teltennou peur-baduz! 10 An dén feal e traou dister, e traou braz ive e vo feal! An dén dizonest e traou dister, e traou braz ive e vez dizonest! 11 Ma n'oc'h ket feal war an arhant dizonest, piou a roio deoc'h ar Mad gwirion ? 12 Ma ne vezoc'h ket feal war Dañvez unan-all, piou a roio deoc'h ho tañvez deoc'h-c'hwi ?"

Mz 6,24

13 "Ne c'hell servicher ebéd servicha daou aotrou: pe e kasaio unan hag e karo egile, pe ouz unan e stago hag e tisprizo egile! Ne c'hellit ket servicha Doue hag an Arhant!" 14 Kleved a ra kement-se ar Farizeiz, a zo kalonou-arhant anezo, hag e c'hoarzont goap warnañ! 15 Hag e lavar dezo: "C'hwi eo ar re en em laka just dirag an dud! Doue avad a anavez ho kalonou: ar pezh a zo uhel evid an dud a zo eun euzadenn dirag Doue!"

Mz 23,28

Mz 11, 12...

PIK EBED EUZ AL LEZENN NE GOUEZO!

16 "Al Lezenn hag ar Brofeded a ia beteg Yann! Abaoe neuze eo embannet Rouantelez Doue, ha pep hini a wash evid mond enni! 17 D'an neñv ha d'an douar eo êsoc'h tremen, eged d'eur pik euz al Lezenn koueza d'an traoñ! 18 Kement dén a gas kuit e wreg hag a zimez gand unan all a ra avoultriez! Hag an dén a zimez gand eur wreg, bet kaset kuit gand he gwaz, a ra avoultriez!"

Mz 5, 32
Mz 19, 9

BEZ' O DEUS MOIZEZ HAG AR BROFEDED.

19 "Bez' ez eus eun dén pinvidig, gwisket gand mezer moug ha lin euz ar gwella, hag a ra bemdez fest gand stroñs! 20 Eur paour-kêz avad, anvet Lazar, a vez taolet dirag e borched: goloet eo a c'houliou, 21 ha c'hoant e-neus da veza maget gand ar pezh a gouez diwar taol an dén pinvidig... med ar chas eo a zeu da lipad e c'houliou! 22 Ha setu ma varv ar paour, ha douget eo-eñ gand an êlez war galon Abraham. Mervel a ra ive an dén pinvidig, hag en eur béz ez eo lakeet..."

Lk 14, 16...

²³ En iferniou, o sevel e zaoulagad e-kreiz poaniou kriz, e wél Abraham a-bell, ha Lazar war e galon. ²⁴ O sevel e vouez, e lavar: “Tad Abraham! Ho-pet truez ouzin! Kasit Lazar da zouba beg e viz en dour ha da zistana din va zeod, rag poan a ziwaskan e-kreiz an tan-flamm-mañ!” ²⁵ Abraham avad a lavar dezañ: “Va mab! Dalc’h soñj az-peus degemeret da vadou epad da vuez, ha Lazar koulz all e zrougou! Bremañ avad eo-eñ frealzet amañ, ha te gwasket a boan! ²⁶ Ouspenn-ze, etre c’hwi ha ni, ez eus lakeet eun isloñk braz: evel-se, ne c’hell ket an néb a garfe tremen ahalenn davedoc’h, ha ne dremener ket ive davedom-ni...”

²⁷ Eñ avad a lavar: “Ho pedi a ran eta, Tad, d’e gas da di va zad ²⁸ -rag me am-eus pemp breur!-, da rei dezo testeni, evid na zeuint ket, int-i ive, amañ e Bro-ar-C’hastiz!” ²⁹ Ha dezañ e lavar Abraham: “Bez’ o-deus Moizez hag ar Brofeded, dezo o zelaou!” ³⁰ Eñ a lavar: “Nann da! Tad Abraham, med ma ’z a daveto unan bennag a-douez ar re varo, e troint ouz Doue!” ³¹ Dezañ e lavar: “Ma ne zelaouont ket Moizez hag ar Brofeded, goude da unan bennag adsevel a-douez ar re varo, ne zeuint ket da gredi!”.

Yn 5,46

17

Mz 18, 6...
Mk 15, 21...

SERVICHERIEN DIDALVEZ OM-NI!

¹ Lavared a ra d’e Ziskibien: “Ne c’heller ket miroud ma vefe mein-skoill! Siwaz avad d’an hini a zeufe d’o lakaad! ² Gwelloc’h eo dezañ e vefe lakeet eur mên-milin en dro d’e c’houzoug hag e vefe stlapet er mor, eged dezañ skoilla unan hepkén a-douez ar re vian-mañ! ³ Taolit evez warnoc’h hoc’h-unan!”

“Ma pec’h da vreur, dit-te ober trouz dezañ, ha ma tistro, dit pardoni dezañ! ⁴ Ma pec’h seiz kwech bemdez a-eneb dit, ha ma tistro davedout seiz kwech en eur lavared: ‘Distrei a ran!’, pardon dezañ!”

Mz 8,10...

⁵ Lavared a ra an Ebestel d’an Aotrou: “Grit d’or feiz mond war gresk!” ⁶ Hag e lavar an Aotrou: “M’ho-pefe feiz evel eun hadenn zezo, e lavarfec’h d’ar wezenn-vouar-mañ: ‘Bez diwriziennet ha bez plantet er mor!’, hag e sentfe ouzoc’h!”

⁷ “Pehini ahanoc’h, dezañ eur zervicher bet oc’h arad pe o pasturi, a lavaro dezañ, pa zeuio d’ar gêr euz ar park: “Deus dioustu da astenn ouz taol!” ⁸ Daoust ha ne lavaro ket dezañ: “Aoz din va c’hoan! Stard da c’houriz evid va zervicha, ken n’am-bo debret hag evet! Goude-ze e tebri hag ec’h evi!” ⁹ Daoust hag anaoudegez-vad e-neus d’ar zervicher-ze, ablamour m’e-neus greet an traou gourhemennet dezañ ?”

¹⁰ Evel-se, c’hwi ive, greet ganeoc’h an oll draou gourhemennet deoc’h, lavarit: “Servicherien didalvez om-ni! Kement a zleem ober

on-eus greet heb mui kén!”

Mz 8,4

JEZUZ! HO-PET TRUEZ OUZOM-NI!

¹¹ Oc'h ober hent warzu Jeruzalem, e tremen dre greiz ar Samari hag ar Galile. ¹² Pa zegouez en eur gêriadenn, e teu a-benn dezañ deg gwaz lôr! A-zia-bell e chomont a-zav, ¹³ hag e savont o mouez da lavared: **“Mestr Jezuz! Ho-pet truez ouzom!”** ¹⁴ Ouz o gweled, e lavar dezo: **“Kit d'en em ziskouez d'ar veleien!”** Hag en eur vond e tegouez dezo beza glaneet! ¹⁵ Unan anezo, o weled ez eo pareet, a zeu war e giz en eur gana gloar da Zoue a vouez kreñv! ¹⁶ Koueza a ra, e dal d'an douar, e-harz treid Jezuz, ouz e drugarekaad! Eur Zamariad a zo anezañ! ¹⁷ Jezuz a zav e vouez da lavared: **“Daoust hag int-i o-deg n'int ket bet glaneet ? An nao all, pelec'h emaint ?** ¹⁸ **N'int ket gwelet o tond endro da renta gloar da Zoue ? N'eus bet nemed an estren-mañ ?”** ¹⁹ Ha dezañ e lavar: **“Sav en da zav ha kerz! Da feiz he-deus da zaveteet!”**

Yn 18, 36...

PEUR E TEGOUezo ROUANTELEZ DOUE ?

²⁰ Pa c'houlenn ar Farizeiz: **‘Peur e tegouezo Rouantelez Doue ?’**, e respont dezo o lavared: **“Ne zegouez ket Rouantelez Doue gand stroñs!** ²¹ **Ne lavaror ket: ‘Sed m'ema-hi amañ’, pe ‘aze!’ Setu m'ema Rouantelez Doue en ho touez!”**

²² D'e Ziskibien avad e lavar: **“Dond a raio deveziou m'ho-po c'hoant da weled unan euz deveziou Mab-an-Dén, ha ne weloc'h ket!** ²³ **Ha deoc'h e lavaror: ‘Sed-Eñ aze!’, pe ‘Sed-Eñ amañ!’”. N'it ket da glask!** ²⁴ **Rag evel ma luc'h al luhedenn euz eun tu d'an neñv ha ma sked beteg an tu-all d'an neñv, evel-se ive e vo Mab-an-Dén d'e Zeiz!** ²⁵ **Da genta avad e rank gouzañv kalz poaniou ha beza disprizet gand ar rummad-mañ!** ²⁶ **Evel ma oe e deveziou Noe, evel-se e vo e deveziou Mab-an-Dén!** ²⁷ **Edo an dud o tebri, oc'h eva, o kemer gwreg, o kemer gwaz, beteg an deiz da Noe da vond en Arc'h ha d'an dour-beuz d'o c'has oll d'ar maro...”**

²⁸ **“Bez'e vo ive evel m'eo degouezet e deveziou Lot: debri, eva, préna, gwerza, planta, sevel ti a ree an dud!** ²⁹ **D'an deiz-ze avad m'eo eet Lot er-mêz euz Sodom, ez eus kouezet eur gaouad tan ha soufr euz an neñv, hag he-deus o c'haset oll da goll!** ³⁰ **Evel-se ive e vo d'an Deiz ma paro Mab-an-Dén!**

³¹ **“D'an deiz-ze, an néb a vo war e leur-doenn hag a vo e draou en traoñ, arabad dezañ distrei d'o c'hemer! Hag an néb a vo er park, arabad dezañ kennebeud distrei war e giz!** ³² **Dalhit koun euz gwreg Lot!** ³³ **An néb a glasko espern e vuez, he c'hollo! Hag an néb he c'hollo, he c'havo beo-buezeg!** ³⁴ **Deoc'h e lavaran: en noz-ze, daou zén a vo war eur gwele: unan a vo kemeret, egile lezet!** ³⁵ **Diou vaouez a vo o vala en eul lec'h:** ³⁶ **unan a vo kemeret, eben lezet!”** ³⁷ **Hag e savont o mouez da lavared dezañ: “Pe-lec'h, Aotrou ?” Hag e lavar: “El lec'h ma**

Mz 24,28

vo ar C'horv maro, eno ive e vo bodet ar Guped!"

18

PEDI DALHMAD HEP KOLL KALON!

¹ Hag e lavar dezo eur Barabolenn, da gelenn ez eo red dezo pedi dalhmad hep koll kalon! ² Lavared a ra: **"Bez' e oa, en eur gêr bennag, eur barner na zouje ket Doue ha na ree forz euz dén!** ³ Bez' e oa ive er gêr-ze, eun intañvez hag a zeue bepred davetañ o lavared: **"Ro din va gwir diouz va enebour!"** ⁴ Ne felle ket dezañ epad hir amzer! Da-c'houde avad e lavaras ennañ e-unan: **"Goude na zoujan ket Doue ha na ran forz euz dén,** ⁵ koulskoude, torret din va fenn gand an intañvez-ze, ez an da rei dezi he gwir, gand aon na zeufe 'benn ar fin da bersdua din eul lagad! ⁶ Hag e lavar an Aotrou: **"Klevit petra lavar ar barner direiz!** ⁷ Ha Doue ne rofe ket o gwir d'an dud dibabet gantañ, hag a zo o youhal noz ha deiz ? Ha dalea a rafe ganto ? ⁸ Me a lavar deoc'h: dizale e roio dezo o gwir! Evelato, pa zistroio Mab-an-Dén, daoust ha kavoud a raio ar feiz war an douar ?"

Disk 6,9

Mz 8,10

EVID AN DUDOU A GRED DEZO BEZA JUST!

⁹ Lavared a ra ive ar Barabolenn-mañ evid an dudou a gred stard enno o-unan ez int tud just hag a zismeg ar re-all! ¹⁰ **"Daou zén a zav d'an Templ da bedi: unan a zo Farizead hag egile Publikad!** ¹¹ Ar Farizead, en e zav, a ra ennañ e-unan ar bedenn-mañ: **"Doue! Ho trugarekaad a ran pa n'on ket evel ar rest euz an dud, a zo skraper, direiz, avoultret...nag ive evel ar Publikad-ze!** ¹² Yuni a ran diou wech ar zizun, ha rei an deog euz kement a c'hounezan..." ¹³ Ar Publikad avad, en e zav pell ahano, ne gred ket zoken sevel e zaoulagad warzu an Neñv! Med skei a ra war boull e galon en eur lavared: **"Doue! Ho-pet truez ouzin, peher ma z'on!"** ¹⁴ Deoc'h e lavaran: **Hemañ a ziskenn d'e di, justizet e-kichenn egile! Rag kement-hini en em uhella a vo izelleet, hag an hini en em izella a vo uhelleet!"**

Mz 19, 13...

Mk 10, 13...

LEZIT AR VUGALE DA ZOND DAVEDON!

¹⁵ Degaset e vez davetañ beteg ar vugaligou, dezañ da douch outo...

Ouz o weled, e ra an Diskibien trouz dezo. ¹⁶ Jezuz avad o c'halv davetañ o lavared: **"Lezit ar vugale da zond davedon, ha na virit ket outo! Rag d'an dud heñvel outo eo Rouantelez Doue.** ¹⁷ E gwirionez e lavaran deoc'h: **An néb na zegemer ket Rouantelez Doue evel ma ra eur bugel, nann! ne z'aio ket enni!"**

Mz 19, 16...
Mk 10, 17...

PEGEN DIËZ EO MOND E ROUANTELEZ DOUE

Dt 2,5

¹⁸ Eur rener a ra outañ eur gouleñ o lavared: **“Mestr mad! Petra eo din ober a-benn kaoud buez peurbaduz da hêrez ?”** ¹⁹ Dezañ e lavar Jezuz: **“Perag e rez ‘Mad’ ahanon ? N’eus Hini Mad ebed nemed Doue hepken!”** ²⁰ Ar Gourhemennou a anavezez: **ne ri ket avoultriez! Ne lazi ket! Ne laeri ket! Ne ri ket fals-testeni! Da dad, da vamm a enori!”** ²¹ Eñ avad a lavar: **“Kement-se a viran abaoe va yaouankiz!”**

²² Ouz e glevet, e lavar dezañ Jezuz: **“Eun dra a ra c’hoaz diouer dit: Gwerz kement a zo dit evid rei da beorien, hag az-po eun Teñzor en Neñv! Ha deus d’am heulia!”** ²³ O klevet kement-se, e teu da veza glaharet-dreist, rag pinvidig mor eo-eñ! ²⁴ Ouz e weled, e lavar Jezuz: **“Pegen diêz eo, d’ar re o-deus madou, mond e Rouantelez Doue! 25 Êsoc’h eo d’eur c’hañval mond dre eun toull nadoz eged d’eun dén pinvidig mond e Rouantelez Doue!”**

²⁶ Hag ar re a zelaou da lavared: **“Ha piou a c’hell beza saveteet ?”** ²⁷ Eñ avad a lavar: **“An traou a zo dreist galloud an dén a zo e galloud Doue!”** ²⁸ Pèr avad a lavar: **“Setu dilezet ganeom-ni or madou, ha ni deuet d’hoc’h heul!”** ²⁹ Dezo avad e lavar: **“E gwirionez e lavaran deoc’h: N’eus dén ebed, dilezet gantañ ti pe wreg pe vreudeur pe vugale evid Rouantelez Doue, 30 ha ne zegemerfe ket kalz muioc’h en amzer-mañ, ha Buez peurbaduz en Amzer-da-zond!”**

Mz 20, 17...
Mk 10, 32...
Lk 9, 22...

MAB-AN-DÉN A VO ROET ETRE DAOUARN AR BAGANED.

Mz 4,13

³¹ Hag e kemer gantañ an Daouzeg, da lavared dezo: **“Setu ma savom da Jeruzalem ha ma vo peur-zevenet kement a zo skrivet dre ar Brofeded diwar-benn Mab-an-Dén! 32 Rag roet e vo etre daouarn ar Baganed, ha goapeet e vo, ha dismegañset e vo, ha warnañ e vo tufet! 33 ha goude e skourjeza, e laza a reint! Ha d’an trede deiz ec’h adsavo!”** ³⁴ Int-i avad ne intentont ket petra a zo lavaret!...

Mz 20, 29...
Mk 10, 46...

AOTROU! GRIT MA WELIN SKLÊR!

Mk 13, 1
Lk 21, 5

³⁵ P’ema o tostaad ouz Jeriko, ez eus eun dén dall war ribl an hent, o klask aluzenn... ³⁶ Hemañ, o klevet kalz tud o tremen, a c’houlenn petra eo an dra-ze! ³⁷ Hag e tisleger dezañ: **“Jezuz-an-Nazaread eo a zo o tremen!”** ³⁸ Hag e stag da youhal o lavared: **“Jezuz-mab-David! Ho-pet truez ouzin!”** ³⁹ An dud a vale en a-raog a ra trouz dezañ ma chomo sioul! Eñ avad a youc’h kalz kreñvoc’h: **“Mab-David! Ho-pet truez ouzin!”**

Mz 8,10

⁴⁰ Chomet a-zav, e c’houlenn Jezuz ma vefe degaset davetañ. Pa ’z eo deuet tost, e c’houlenn outañ: ⁴¹ **“Petra a fell dit e rafen evidout ?”** Eñ avad a lavar: **“Aotrou! Ma welin sklêr!”** ⁴² Ha Jezuz a lavar dezañ: **“Gwel sklêr! Da feiz he-deus da zaveteet!”** ⁴³ Raktal e wél sklêr hag ez a d’e

heul en eur gana gloar da Zoue! Hag ar Bobl, ouz e weled, a gan meuleudi da Zoue!

19

ZACHE A GLASK GWELED PIOUS EO JEZUZ!

Mz 5,46

¹ Degouezet e Jeriko, ema-Eñ o treuzi kêr! ² Ha setu eno eur gwaz, galvet dre an ano a Zache, unan euz renerien ar Publikiz, eun dén pinvidig anezañ. ³ Klask a ra gweled piou eo Jezuz, ha ne zeu ket da-benn en abeg d'ar bern tud, rag bian eo-eñ a vent! ⁴ Hag e réd en a-raog, hag e pign war eur wezenn-zikomor evid e weled, rag dre eno ema da dremen! ⁵ Pa zegouez war al lec'h, Jezuz, en eur zewel e zaoulagad, a lavar dezañ: **“Zache! Diskenn dillo d'an traoñ, rag hirio eo réd din chom en da di!”** ⁶ Ha diskenn a ra dillo hag e zegemer gand levenez.

Mz 21,31

⁷ O weled kement-se, e c'hrozmol an oll o lavared: **“E ti eur gwaz peher eo eet da ziskuiza!”** ⁸ Zache avad, en e zav, a lavar d'an Aotrou: **“Setu ma roan an hanter euz va madou d'ar beorien, Aotrou! Ha m'am-eus skrapet tra-pe-dra digand unan bennag, e rentan dezañ peder gwech muioc'h!”** ⁹ Jezuz avad a lavar dezañ: **“Hirio ez eus deuet silvidigez d'an ti-mañ, pa z'eo hemañ ive mab da Abraham! ¹⁰ Rag deuet eo Mab-an-Dén da glask ha da zavetei ar pez a zo eet da goll!”**

Mz 25, 14...

NE FELL KET DEOM E TEUFE DA RÉN WARNOM!

Mz 13,34

¹¹ P'emaint o selaou kement-se, e lavar ouspenn dezo eur Barabolenn, rag degouezet eo tost da Jeruzalem, hag e kav dezo e vo dizale diskouezet Rouantelez Doue! ¹² Lavared a ra eta: **“Eun dén uhel a ia d'eur vro-bell da zegemer evitañ e-unan ar rouantelez ha da zond en dro goude-ze!”**

Yn 19,15...

¹³ **“Gelder a ra deg euz e zervicherien, ha rei dezo deg pez aour, en eur lavared dezo: “Grit marhjou a-benn ma teuin!” ¹⁴ E gen-vroiz avad o-deus kas outañ hag e kasont kannaded war e lerc'h da lavared: “Ne fell ket deom e teufe hennez da rén warnom!”**

Mk 7, 24...

¹⁵ Distrei a ra pa z'eo deuet da-benn da gaoud ar rouantelez, hag e laka gelver davetañ ar zervicherien-ze e-neus roet dezo an arhant, da c'houzoud piou e-neus greet marhjou ha pe-re! ¹⁶ Dond a ra an hini kenta, hag e lavar: **“Aotrou! Ar pez-aour e-neus gounezet deg all!”** ¹⁷ Hag e lavar dezañ: **“Mad-tre! Servicher mad! Pa z'out bet feal war eun dra zister, bez rener war zeg kêr!”** ¹⁸ Dond a ra an eil o lavared: **“Ho pez-aour, Aotrou, e-neus greet pemp!”** ¹⁹ Da hemañ ive e lavar: **“Bez rener, te, war bemp kêr!”** ²⁰ Hag e teu unan all o lavared: **“Aotrou! Setu ho pez-aour, am-eus-me dalhet paket en eul lienenn! ²¹ Aon am-oa razoc'h, pa z'eus ahanoc'h eun dén kaled: paka a rit ar pez n'ho-peus**

ket lakeet! hag easti ar pez n'ho-peus ket hadet!" ²² Dezañ e lavar: "Da varn a ran diouz lavar da c'henou, servicher fall! Goud a ouiez ez on-me eun dén kaled, e pakan ar pez n'am-eus ket lakeet! ec'h eostan ar pez n'am-eus ket hadet! ²³ Perag n'az-peus ket roet va arhant d'eun ti-bañk ? Ha me, d'am distro, am-befe e dennet, gand frouez diwarnañ!"

Mz 13,12

²⁴ Hag e lavar d'ar re a zo eno: "Tennit digantañ e bez-aour evid e rei d'an hini e-neus deg!" ²⁵ Hag e lavaront dezañ: "Aotrou! Henez e-neus deg pez-aour!" ²⁶ "Me a lavar deoc'h: da gement-hini e-neus, e vezo roet! An néb n'e-neus ket avad, ar pez e-neus zokén a vo lamet digantañ! ²⁷ Med va enebourien, an dud-ze ha ne felle ket dezo e vefen-me Roue warno, o degasit amañ, hag o lazit dirazon!"

Mz 21, 1...
Mk 11, 1...
Yn 12, 12...

MEULEUDI D'AN HINI A ZEU EN ANO DOUE!

²⁸ Diwar ar c'homzou-ze, e kerz er penn-araog, en eur zevel da Jeuzalem. ²⁹ Degouezet tost da Vetfaje ha da Vetani, e-harz ar menez anvet Menez-an-Olived, e kas daou euz e Ziskibien, ³⁰ o lavared: "**Kit d'ar gêriadenn a zo dirazom! Eet enni, e kavoc'h eun azenig ouz ar stag, ha n'eus bet c'hoaz dén azezet war e gein! Distagit-eñ, ha degasit amañ!** ³¹ **Ma c'houlenn unan bennag diganeoc'h: "Perag e tistagit ?"**, e lavaroc'h evel-henn: 'An Aotrou e-neus ezomm anezañ!'"

³² Mond a ra ar gannaded, hag an traou a gavont evel m'e-neus lavarret dezo. ³³ Distaget ganto an azenig, e teu e vistri da lavared dezo: '**Perag e tistagit an azenig ?**' ³⁴ Hag e lavaront: '**An Aotrou e-neus ezomm anezañ!**' ³⁵ Hag int d'e zegas da Jezuz, da daoler warnañ o mantilli ha da lakaad Jezuz war e gein. ³⁶ Dre ma 'z a war-raog, e led an dud o mantilli war an hent. ³⁷ Pa dosta mad ouz diribin Menez-an-Olived, e krog oll rum-mad an Diskibien, leun a levenez, da veuli Doue a vouez uhel evid an oll vurzudou o-deus gwelet, ³⁸ o lavared:

Salm 118,6

"Meuleudi d'an hini a zo o tond,

"Eñ or Roue, en ano an Aotrou!

"Peoc'h en Neñv, ha Gloar e lein an Neñv!"

³⁹ Hiniennou euz ar Farizeiz, a-douez an dud, a lavar dezañ: "**Mestr! Grit trouz d'ho Tiskibien!**" ⁴⁰ Respont a ra o lavared: "**Me a lavar deoc'h: Ma chom ar re-mañ sioul, ar mein eo a youho!**"

Mz 13, 14...
Yn 12, 38...

O WELED KÊR, E SKUILL DAELOU WARNI!

⁴¹ En em gavet tost, o weled Kêr, e skuill warni daelou, ⁴² en eur lavared:

"Ma ouijes, en Deiz-mañ, Te ive, petra 'zegas Peoc'h!

"Bremañ avad e chom kement-se kuzet ouz da zaoulagad!

43 **Dond a raio deveziou ma savo da enebourien mogeriou en dro dit!**

“Da gelhia a reint ha da waska tro-dro!

44 **Da flastra a reint, Te, ha da Vugale en da greiz!**

Ha ne lezint ket ennout mên war vên,

Peogwir n’anavezvez ket an Amzer ma teu (Doue) d’az kweled!”

Ma 21, 12...
Mk 11, 15...

45 Eet en Templ, e stag da stlepel er-mêz ar varhadourien, 46 o lavared dezo: **“Skrivet eo: ‘Va Zi a vezo eun Ti-Pedi! Anezañ e rit eun toull torfetourien!”** 47 Bemdez e vez o kelenn en Templ! Ar Veleien-Vraz hag ar Skribed a glask d’e gas d’ar maro, hag ive Kozidi ar Bobl! 48 Nemed ne gavont ket petra eo dezo ober, rag ar Bobl a-bez a jom dibradet ouz e zelaou!...

20

Mz 21, 23...
Mk 12, 1...

BADEZIAN YANN: EUZ AN NEÑV PE EUZ AN DUD ?

1 Da unan euz an deveziou-ze, p’ema o kelenn ar Bobl en Templ hag oc’h embann ar C’helou-Mad, e teu ar Veleien Vraz hag ar Skribed gand ar Gozidi, 2 ha dezañ e lavaront: **“Lavarit deom: Dre be-seurt galloud e rit kement-se ? Piou eo an Hini e-neus roet deoc’h ar galloud-ze ?”** 3 Respont a ra o lavared dezo: **“Diganeoc’h e c’houlennan-me ive eur gér! Lavarit din: 4‘Badeziant Yann, daoust hag euz an Neñv e oa pe euz an dud ?”** 5 Int-i avad a ziviz etrezo o lavared: **“Ma lavarom ‘euz an Neñv’, e lavaro: ‘Perag n’ho-peus ket kredet ennañ ?’** 6 Ma lavarom ‘euz an dud’, e teuio ar Bobl d’on labeza, rag kredi stard a reont e oa Yann eur profed!” 7 Hag e lavaront: **“N’ouzom-ni ket a-belec’h e oa!”** 8 Ha dezo e lavar ive Jezuz: **“Na me kennebeud, ne lavarin ket deoc’h dre be-seurt galloud e ran kement-se!”**

Mz 21, 33...
Mk 12, 1...

DEOM D’E LAZA, MA VO DEOM-NI AN HÊREZ!

9 Ha d’ar Bobl e lavar ar Barabolenn-mañ: **“Eun dén e-neus plantet eur winieg ; he feurmi a ra da winierien hag e kuita ar vro evid pell-amzer... 10 D’ar poent, e kas eur zervicher daved ar winierien, ma roint dezañ lod euz frouez ar winieg. Ar winierien avad, goude skei gantañ, a gas an den kuit ez c’houllo! 11 Divizoud a ra kas eur zervicher all. Goude lopa warnañ hag e zismega, hemañ ive a gasont kuit ez c’houllo! 12 Divizoud a ra kas eun trede servicher! Int-i avad, goude e wall-c’hloaza, a stlap hemañ er-mêz! 13 Hag e lavar Aotrou ar winieg: “Petra eo din ober ? Kas a rin va Mab muia-karet! Hemañ marteze a zoujint!” 14 Ouz e weled, e tiviz ar winierien kenetrezo o lavared: **“Hemañ eo ar Penn-Hêr! Deom d’e laza, ma vo deom-ni an Hêrez!”** 15**

Heb 13,12

Hag int-i d'e stlepel er-mêz euz ar winieg, ha d'e laza! Petra 'ta a raio Aotrou ar Winieg ? ¹⁶ Dond a raio d'o lakaad d'ar maro, ha da dud all e roio ar winieg!" Ouz e gleved, e lavaront: **"Arabad dezañ!"**

¹⁷ Hag Eñ, en eur bara warno e zell, a lavar:

"Petra eo eta ar pennad Skritur-mañ:

Salm 118,22

"Ar Mên o-deus disprizet ar Vañsonerien,

"Hennez a zo deuet da veza Mên-Korn-uhella!

¹⁸ **"Kement-hini a gouezo war ar Mên-ze a vo brevet!**

"Hag an néb a gouezo ar Mên-ze warnañ a vo bruzunet!"

¹⁹ Ar Skribed hag ar Farizeiz a glask neuze taoler warnañ o daouarn, war-an-taol! Med aon o-deus rag ar Bobl, rag goud a ouzont e-neus-Eñ lavaret evito ar barabolenn-ze...

Mz 22, 15...

Mk 12, 13...

HAG AOTREET EO REI TRUAJ DA ZEZAR ?

²⁰ Pa z'int stag da daoler evez warnañ, e kasont spierien - tud hag a ra van, dre douellerez, da veza tud just!- evid e baka en eul lavar bennag, a-benn e lakaad dindan mestroni ha galloud ar Gouarnour! ²¹ Outañ e c'houlennont: **"Mestr! emezo, goud a ouzom e komzit hag e kelennit eeun! Ne rit ket diouz dremm an dud, med e gwirionez e kelennit Hent Doue! ²² Daoust hag aotreet eo deom rei truj da Zesar pe n'eo ket ?"** ²³ Anad dezañ o c'horvigell, e lavar dezo: ²⁴ **"Diskouezit din eun diner! Euz piou eo e skeudenn hag e enskriz ?"** - **"Euz Sezar"**, emezo. ²⁵ Ha dezo e lavar: **"Neuze 'ta, rentit da Zesar kement a zo da Zesar! Ha da Zoue, kement a zo da Zoue!"** ²⁶ Ne c'hellont ket e baka diwar e lavar dirag ar bobl, ha souezet gand e respont, e chomont dilavar!

Ma 22, 23...

Mk 12, 18...

DOUE N'EO KET EUN DOUE TUD VARO!

Dt 25,5...

²⁷ Dond a ra davetañ eun nebeud Sadukeiz (ar re-mañ a zalc'h da lavared n'eus adsao ebed!), hag outañ e c'houlennont: ²⁸ **"Mestr! emezo, skrivet e-neus evidom Moizez: 'Ma teu breur unan bennag da vervel, ha dezañ eur wreg med bugel ebed, e tle e vreur kemer e wreg ha sevel eul lignez d'e vreur!"** ²⁹ Bez' e oa eta seiz breur: Ar c'henta a gemer gwreg, hag e varv heb lezel bugel ebed. ³⁰ Hag an eil, ³¹ hag an trede he c'hemer, hag evel-se ive o zeiz: n'o-deus ket lezet a vugale hag ez int marvet. ³² Da ziweza eo marvet ive ar wreg. ³³ Ar vaouez eta, d'an Adsao, da behini anezo e vo-hi gwreg ? Rag o zeiz o-deus bet ar vaouez-ze da wreg ?" ³⁴ Jezuz a lavar dezo: **"Tud ar bed-mañ a gemer gwreg pe waz! ³⁵ Ar re a vo kavet mad da gemer perz er Bed-all hag en Adsao a-douez ar re varo, ne gemerint ket gwreg pe waz, ³⁶ rag ne c'hellint ket mervel! Par d'an êlez e vint, ha bugale e vezint da Zoue, o**

veza Bugale-an-Adsao!”.

³⁷ “E teuio ar re varo da adsevel, henn diskleria a ra Moizez e-unan, e ‘Danevell ar Vojenn-Dan’ pa ra euz an Aotrou ‘Doue Abraham ha Doue Izaag ha Doue Jakob’! ³⁸ N’eo ket eun Doue tud varo med Hini tud veo, rag drezañ e vev an oll!”.

DIWALLIT DIOUZ AR SKRIBED!

Mz 22, 41...
Mk 12, 35...

³⁹ Skribed a zav o mouez da lavared: “Mestr! kaer ho-peus komzet!” ⁴⁰ Rag ne gredont ket ober goulennoù outañ! ⁴¹ Eñ avad a lavar dezo: “Penaos e lavaront ez eo ar Mesiaz Mab da Zavid ? ⁴² Rag David e-unan a lavar e Leor ar Zalmou:

Salm 110,1

“*Lavaret e-neus an Aotrou d’am Aotrou: ‘Azezit en tu-dehou din,*

⁴³ “*Ken n’am-bo lakeet hoc’h enebourien da skabell evid ho treid’!*

⁴⁴ *David eta a ra ‘Aotrou’ anezañ! Penaos eo-Eñ Mab dezañ ?”*

Mz 23, 5...
Mk 12, 38...

⁴⁵ P’ema ar Bobl ouz e zelaou, e lavar d’e Ziskibien: ⁴⁶ “**Diwallit diouz ar Skribed, a fell dezo bale gand diou zae, hag a blij dezo ar zaludou war al leuriou-kêr, ar c’hadoriou kenta er zinagogou, ar renkou kenta er prejou!**

⁴⁷ **Debri a reont tiez an intañvezed, war zigarez e reont pedennoù hir. Ar re-ze a bako gwasoc’h barn...”**

21

Mk 12, 41...

AN INTAÑVEZ-ZE HE-DEUS TAOLET MUIOC’H.

¹ O sevel e zaoulagad, e wél tud pinvidig o taoler o frovou en Teñzor. ² Gweled a ra ive eun intañvez baour o taoler eno daou bezig bian! ³ Hag e lavar: “Evid gwir e lavaran deoc’h: an intañvez-ze, ar baourez-ze he-deus taolet muioc’h eged an oll! ⁴ Rag int-i oll o-deus taolet diwar o êzant evel provou da Zoue! Hi avad he-deus taolet diouz he dienez, kement he-doa da veva...”

Mz 24, 1...
Mk 13, 1...

NE VO KET LEZET MËN WAR VËN!

⁵ P’ema lod o lavared, diwar-benn an Templ, ez eo bet kaerreet gand mein kaer ha taolennou gouestlet, e lavar-Eñ: ⁶ “**Euz an oll draou-ze emaooc’h o selled outo, e teuio deveziou ma na vo lezet anezo mên war vên ha na vefe ket diskaret!”** ⁷ Hag outañ e c’houlennont: “Mestr, emezo, peur ’ta e tegouezo kement-se, ha peseurt sin a zegouezo, pa vo

kement-se war-nes c'hoarvezoud ?”.

⁸ Hag e lavar dezo: “**Diwallit da veza touellet! Dond a raio meur a hini em Ano, o lavared: ‘Me-eo-a-zo’, hag ‘Deuet tost ar Poent!’! N’it ket d’o heul!** ⁹ Pa glevoc’h trouz brezelioù ha taolioù-dispac’h, na spouronit ket! Rag bez’ e rank kement-se c’hoarvezoud, med ne vo ket raktal ar Fin...”

Ob 7,57...
Ob 8,1-3
Disk 10-11

¹⁰ Neuze e lavar dezo: “**Sevel a raio pobl a-eneb pobl, rouantelez a-eneb rouantelez!** ¹¹ Bez’e vo meur a grén-douar braz, hag amañ-hag-ahont bosenn ha kernez! Traou spontuz ha sinou braz deuet euz an neñv a zegouezo ive! ¹² Araog an oll draou-ze, e taolint warnoc’h o daouarn, evid hoc’h heskina, evid ho sacha d’ar zinagogou ha d’ar prizonioù, evid ho kas dirag rouaned ha gouarnourien ablamour d’am Ano! ¹³ Kement-se a c’hoarvezo ganeoc’h, deoc’h beza eun testeni!”

Heb 10,36

¹⁴ “**Lakait en ho kalonou: na vezit ket nehet o klask ho tifenn!** ¹⁵ Rag Me va-unan a roio deoc’h eur Gomz hag eur furnez na c’hello ket hoc’h enebourien herzel outo nag o dislavared! ¹⁶ Roet e vezoc’h gand ho tud, ho preudeur, gand ho kerent hag ho mignoned! Lod ahanoc’h a lazint! ¹⁷ Kasaet e vezoc’h gand an oll ablamour d’am Ano! ¹⁸ Nemed blevenn ebed war ho penn ne vo kollet. ¹⁹ Dre ho talc’h e vo saveteet hoc’h eneu!”

Disk 11, 1-3

²⁰ “**Pa weloc’h Jeruzalem kelhiet gand brezelourien, deoc’h neuze gouzoud ez eo tost he dismantr!** ²¹ An dud a vo er Jude, dezo tehed d’ar Menezioù! Ar re a vo e-diabarz Kêr, dezo mond er-mêz! Hag ar re a vo dre ar mêzioù, dezo miroud da zond enni, ²² rag devezioù a-gastiz e vo ar re-ze, ma vo sevenet kement a zo skrivet! ²³ Siwaz d’ar gwragez a vo dougerez pe o vaga en devezioù-ze, rag bez’ e vo dienez vraz war ar Vro ha kounnar a-eneb ar Bobl-mañ! ²⁴ Koueza a raint dre zremm eur c’hleze! Kaset e vint da sklav en oll vroioù pagan! Ha Jeruzalem a vo breset gand ar Baganed, ken na vo peur-echuet Amzerioù ar Baganed!...

²⁵ “**Bez’ e vo sinou en heol, el loar hag er stered, ha war an douar, anken ar Baganed, nehet diwar trouz ar mor hag an tarzioù.** ²⁶ An dud a vo dialanet gand ar spont hag o c’hortoz an traou war-nes degouezoud war ar Vro, rag nerzioù an neñvou a vo brallet! ²⁷ Hag e vo gwelet Mab-an-Dén o tond en eur goabrenn gand kalz a nerz hag a c’hloar! ²⁸ Pa grogo kement-se da c’hoarvezoud, diblegit! Savit ho penn! Rag tostaad a ra ho frankiz!”

²⁹ Dezo e lavar eur barabolenn: “**Gwelit ar wezenn-fiez ha peb gwezenn:** ³⁰ Pa vroñsont, diouz o gweled, drezoc’h hoc’h-unan e ouezit ez eo tost an hañv! ³¹ Evel-se, c’hwi-ive, pa weloc’h an traou-ze o c’hoarvezoud, deoc’h gouzoud ema tost Rouantelez Doue! ³² E gwirionez e lavaran deoc’h: Ne dremeno ket ar rummad-mañ ken na vo degouezet an oll draou-ze! ³³ An neñv hag an douar a dremeno, va

C'homzou-me avad ne dremenint ket!”.

³⁴ “Taolit evez warnoc’h hoc’h-unan, gand aon na vefe sammet ho kalonou gand gadaliez, mezventi ha nehamant ar vuez, ha ma tegouezfe trumm an Deiz-ze warnoc’h! ³⁵ Evel eur roued e teuio war an oll re a vo o chom war an Douar a-bez! ³⁶ Beillit en eur bedi e peb amzer, evid gelloud tehed diouz an oll draou-ze a zo da zond, ha chom en ho sav dirag Mab-an-Dén!”

³⁷ Epad an deveziou-ze, e vez-Eñ o kelenn en Templ. An nozveziou avad, pa vez eet euz kêr, a dremen dindan an amzer war ar menez anvet ‘Menez-an-Olived’. ³⁸ Ar Bobl a-bez a zeu abred davetañ, en Templ, evid e zelaou...

22

Mz 26, 1...
Mk 14, 1...
Yn 13, 1...

C’HOANTEET AM-EUS DEBRI AR PASK GANEOC’H!

¹ Tostaad a ra Gouel ar Bara-Dihoell, anvet Pask. ² Ar Veleien-Vraz hag ar Skribed a glask penaoz e gas da goll, rag bez’ o-deus aon rag ar Bobl! ³ Med eet eo Satan e Judaz, anvet Iskariotad, a zo unan euz an Daouzeg! ⁴ Mond a ra da zivizoud gand ar Veleien-Vraz hag ofiserien ar Gward diwarbenn an tu da rei Jezuz etre o daouarn. ⁵ Hag int-i, lakeet laouen, a ziviz rei arhant dezañ! ⁶ Rei a ra e c’hér, hag ema o klask eur poent mad evid e rei etre o daouarn heb gouzoud d’an dud!

⁷ Ha setu deuet Deiz ar Bara-Dihoell, ma rank Oan-Pask beza lid-lazet. ⁸ Hag Eñ a gas Pèr ha Yann en eur lavared dezo: “**Kit da aoza deom ar Pask, deom e zebri!**” ⁹ Dezañ e lavaront: “**Pe-lec’h e fell deoc’h ez afem da aoza ?**” ¹⁰ Hag e lavar dezo: “**Oc’h erruoud e kêr, setu ma tegouezo ganeoc’h eun dén o tougen eur podad dour! Kit d’e heul en ti ma’ z aio!**” ¹¹ Lavarit da vestr an ti: “**Dit e lavar ar Mestr: ‘Pe-lec’h ema ar Zal a c’hellin-me enni debri ar Pask gand va Diskibien ?**” ¹² Hemañ a ziskouezo deoc’h eur zal en nec’h, braz ha palennet! Aozit eno an traou!”...

¹³ Pa z’eont, e kavont an traou evel m’e-neus lavaret dezo, hag int-i da aoza ar Pask...

Mz 26, 20..
Mk 14, 17...
1 Ko 11, 23

GRIT KEMENT-SE EVID OBER KOUN AHANON!

¹⁴ Deuet an eur, ez a da astenn ouz taol, hag an Ebestel d’e-heul! ¹⁵ Hag e lavar dezo: “**C’hoanteet ha c’hoanteet am-eus debri ar Pask-mañ ganeoc’h araog din gouzañv!**” ¹⁶ Rag deoc’h e lavarant: “**Nann, e zebri ne rin mui, ken na vezo peur-zevenet e Rouantelez Doue!**” ¹⁷ Kemeret gantañ eur c’halirad en eur lavared trugarez, e lavar: “**Kemerit ha lodennit kement-mañ etrezoc’h,**” ¹⁸ rag me ’lavar deoc’h: nann, ne evin mui hiviziken euz frouez ar winienn, ken na vo deuet Rouantelez Doue!”

¹⁹ Kemeret gantañ eur varaenn en eur lavared trugarez, he ranna a ra hag he rei dezo en eur lavared: “**Kement-mañ a zo va C’horv, an Hini roet evidoc’h! Grit kement-se evid ober koun ahanon!**” ²⁰ Gand ar C’halirad e ra kemend-all, goude koan, en eur lavared: “**Ar c’halirad-mañ a zo an Emgleo Nevez em Gwad, an Hini skulilet evidoc’h! Evelato, setu m’ema ganin, war an daol, dorn an hini a zo o vond d’am rei!**” ²² Mab-an-Dén avad a zo o vond kuit, hervez ar pezh a zo merket, med siwaz d’an hini a zo war-nes e rei!” ²³ Hag e klaskont etrezo piou’ta a vefe en o zouez o vond d’ober an taol-ze!

Mz 20, 25...
Mk 10, 42...

EN HO TOUEZ, EMAON EVEL AR ZERVICHER...

²⁴ Sevel a ra ive rendael etrezo da c’houzoud pehini, evid doare, eo ar brasa anezo! ²⁵ Eñ avad a lavar dezo: “**Rouaned ar Baganed a ra o aotronez warno, hag o renerien a vez galvet ‘Madoberourien!’** ²⁶ C’hwi avad, na rit ket evel-se! Med ar brasa en ho touez, dezañ beza evel ar yaouanka! Hag ar rener evel ar zervicher!” ²⁷ Rag pehini eo ar brasa, an hini a zo astennet ouz taol pe ar zervicher ? Daoust ha n’eo ket an hini astennet ouz taol ? Me avad, en ho touez, me a zo evel ar zervicher!”

²⁸ C’hwi eo ar re a zo chomet ganin em zentaduriou! ²⁹ Ha me a ziazezo deoc’h -evel m’e-neus va Zad diazezet din-me!- eur Rouantelez ³⁰ deoc’h debri hag eva ouz va Zaol, em Rouantelez, ha deoc’h azeza war drônou da varn Daouzeg Veuriad Izrael!”

Mz 26, 31...
Mk 14, 27...
Yn 13, 36...

ME AM-EUS PEDET EVIDOUT!

³¹ “**Simon! Simon! Setu Satan o klask ho koueria evel ar gwiniz!**

³² Me avad am-eus pedet evidout, evid na varvo da feiz! Ha te, pa vezi distroet, kennerz da Vreudeur!” ³³ Hemañ avad a lavar dezañ:

“**Aotrou! Ganeoc’h ez on-me prest da vond ha d’ar prizon ha d’ar maro!**” ³⁴ Hag Eñ a lavar: “**Me a lavar dit, Pèr! Ne gano ket hirio eur c’hillig ken n’az-po, teir gwech, nahet va anavezoud-me!**”...

³⁵ Dezo e lavar c’hoaz: “**P’am-oa ho kaset heb yalc’h na bisac’h na zandalennou, daoust ha diouer ho-peus bet a dra-pe-dra ?**” Hag e lavaront: “**A netra!**” ³⁶ Hag e lavar dezo: “**Med bremañ, an hini e-neus eur yalc’h, dezañ he c’hemer! ha koulz all eur bisac’h! Hag an hini n’eus dezañ kleze ebed, dezañ gwerza e vantell ha prena unan!**” ³⁷ Rag deoc’h e lavaran: ar Skritur-mañ a rank beza peur-zevenet ennon-me: *‘Ha gand tud direiz eo bet reñket!’*. Gand-ze, e teu da benn peb Skritur diwar va fenn!” ³⁸ Int-i avad a lavar: “**Setu amañ daou gleze!**” Hag e lavar dezo: “**Awalc’h eo!**”

Iz 53,12

N’EO KET VA BOLONTEZ, MED HOC’H HINI-C’HWI!

Mz 26, 30...
Mk 14, 26...
Yn 18, 1...

³⁹ Hag eet er-mêz, e kerz hervez e gustum warzu Menez an Olived: d'e heul ez a ive e Ziskibien. ⁴⁰ Degouezet war al lec'h, e lavar dezo: "**Pedit, evid miroud da vond en tentadur!**" ⁴¹ Tehed a ra e-unan diouto war-hed bann eur mên. Eet war e zaoulin, e stag da bedi, ⁴² o lavared: "**Tad! Ha bez' e fell deoc'h pellaad ar C'halirad-ze diouzin ? Koulskoude, ra vezo greet, n'eo ket va bolontez, med hoc'h hini-C'hwi!**".

Mz 6,10
Yn 6,38...

⁴³ Dirazañ e teu eun êl euz an Neñv da bara, ha d'e gennerza! ⁴⁴ Kouezet en anken, e ped startoc'h, hag ema e c'hwezenn, evel beradou gwad, o koueza war an douar. ⁴⁵ Savet euz e bedenn, e teu daved e Ziskibien: o c'havoud a ra kousket, diwar ar glahar! ⁴⁶ Lavared a ra dezo: "**Perag e kouskit ? Savit da bedi evid miroud da vond en tentadur!**".

GAND EUR POK EMAOUT O REI MAB-AN-DÉN!

Mz 26, 47...
Mk 14, 43...
Yn 18, 2...

⁴⁷ O komz ema c'hoaz, ha setu leun a dud! An dén anvet Judaz, unan euz an Daouzeg, a vale en o fenn, hag e tosta ouz Jezuz da bokad dezañ! ⁴⁸ Ha Jezuz a lavar dezañ: "**Judaz! Gand eur pok eo e roez Mab-an-Dén!**" ⁴⁹ O weled petra a c'hoarvez, e lavar dezañ an dud a zo endro dezañ: "**Aotrou! Ha ma skofem gand ar c'hleze ?**" ⁵⁰ Hag unan anezo a sko gand mevel ar Beleg-Braz, hag e tistag dezañ e skouarn zehou! ⁵¹ Jezuz avad a zav e vouez da lavared: "**Lezit da zond beteg amañ!**" O touch ouz e skouarn, e ro dezañ ar pare!...

⁵² Jezuz avad a lavar d'ar re a zo deuet dezañ, Beleien-Vraz, Ofiserien an Templ ha Kozidi: "**Evel d'eun torfetour ez oc'h-c'hwi deuet gand klezeier ha bizier!**" ⁵³ Bemdez e vezen ganeoc'h en Templ, ha n'ho-peus ket taolet ho taouarn warnon! Med ema bremañ hoc'h Eur, ha diroll an Deñvalijenn..." ⁵⁴ A-unan e tapont krog ennañ: e gas a reont ganto, hag e zegas da di ar Beleg-Braz. Pèr avad a vale d'e heul, a-bell...

⁵⁵ An dud o-deus greet tan e-kreiz ar porz hag a-unan ez int azezet... Pèr a azez en o zouez. ⁵⁶ Eur zervicherez, ouz e weled azezet er sklêrijenn, en eur bara warnañ he zellou, a lavar: "**Hemañ ive a oa gantañ!**" ⁵⁷ Eñ avad a nac'h o lavared: "**N'anavezan ket an Dén-ze, Maouez!**" ⁵⁸ Nebeud goudeze, unan all, ouz e weled, a lavar: "**Te ive a zo unan anezo!**". Pèr avad a lavar: "**Va dén! N'on ket!**" ⁵⁹ Tremenet wardro eun eurvez, unan all a laka nerz da lavared: "**Evid gwir! Hemañ ive a oa gantañ, rag Galilead eo-eñ!**" ⁶⁰ Pèr avad a lavar: "**Va dén! N'ouzon ket petra lavarez!**". Raktal, hag eñ c'hoaz o komz, e kan eur c'hillog! ⁶¹ En eur zistrei, e par an Aotrou e zellou war Bèr... hag e teu soñj da hemañ euz ar Gomz e-neus an Aotrou lavared dezañ: "**Araog d'eur c'hillog kana hirio, teir gwech az-po va nahet!**" ⁶² Mond a ra er-mêz ha gouela c'hwero!...

⁶³ Ar wazed a zo ouz e ziwall a stag d'e c'hoapaad, en eur skei gantañ: ⁶⁴ e voucha a reont en eur c'houlenn outañ: "**Profedit, emezo, piou an hini a sko ganeoc'h ?**" ⁶⁵ Kalz traou all a lavaront dezañ o vlasfemi...

MA Z'OC'H AR MESIAZ, LAVARIT DEOM!

Mz 26, 59...
Mk 14, 55...

⁶⁶ Pa zeu an deiz, ez eo bodet Breuriez Kozidi ar Bobl, Beleien-Vraz ha Skribed! E gas a reont ganto d'o Zanedrin. ⁶⁷ Hag e lavaront: "**Ma z'oc'h-c'hwi ar Mesiaz, lavarit deom!**" Eñ avad a lavar dezo: "**Ma lavaran deoc'h, nann! ne gredoc'h ket!**" ⁶⁸ **Ma ran ouzoc'h eur goulenn, nann! Ne respontoc'h ket!** ⁶⁹ Adal bremañ avad, e vezo Mab-an-Dén azezet azehou da **C'halloud Doue!**" ⁷⁰ Hag int-i oll a lavar: "**C'hwi eo eta Mab Doue ?**" Eñ a lavar dezo: "**Mad e lavarit: 'Me eo a zo!'**" ⁷¹ Int-i avad a lavar: "**Perag on-eus-ni c'hoaz ezomm a destou ? Rag on-unan on-eus klevet euz e c'henou!**"

23

NE GAVAN TAMALL EBED EN DÉN-MAÑ!

Mk 27, 1...
Mk 15, 1...
Yn 18, 28...

¹ Hag e sav an oll dud a zo eno hag e kasont Jezuz dirag Pilat. ² Staga a reont d'e damall o lavared: "**Hennez on-eus kavet o tispaha or Pobl, o viroud da rei taillou da Zesar, hag o lavared ez eo Eñ e-unan ar Roue Mesiaz!**". ³ Pilat avad a c'houlenn outañ: "**Ha bez' ez oc'h Roue ar Juzevien ?**". Dezañ e respont o lavared: "**Mad az-peus lavaret!**" ⁴ Ha Pilat a lavar d'ar Veleien-Vraz ha d'an dud: "**Ne gavan tamall ebed en Dén-mañ!**" ⁵ Med int-i a laka nerz da lavared: "**Dispaha a ra ar Bobl o kelenn dre ar Jude a-bez, ha kroget e-neus adal ar Galile beteg amañ!**" ⁶ Ouz o c'hleved, e c'houlenn Pilat: "**Daoust ha Galilead eo an Dén ?**". ⁷ Klevet gantañ ema dindan galloud Herodez, e gas a ra daved Herodez, a zo eñ ive e Jeruzalem en deveziou-ze...

HERODEZ A RA ANEZAÑ EUN DÉN A NETRA!

⁸ Herodez, o weled Jezuz, a zo laouen kenañ! Abaoe pell-amzer e c'hoantae d'e weled: anezañ e-noa klevet ano, ha fiziañs e-noa da weled eur zin bennag greet gantañ! ⁹ Staga a ra d'e c'houlennata gand kalz komzou: Eñ avad ne respont seurt dezañ! ¹⁰ Ar Veleien-Vraz hag ar Skribed a jom eno d'e damall gand nerz! ¹¹ Herodez, gand e zoudarded, a ra anezañ eun dén a netra: e c'hoapaad a ra o lakaad warnañ eur pezh dillad splann, hag e gas endro daved Pilat. ¹² Hag e teu Herodez ha Pilat da veza etrezo mignoned en deiz-ze zoken: beteg-henn o-doa kas an eil ouz egile...

DILIAMM DEOM BARABAZ!

¹³ Pilat a c'halv a-unan davetañ ar Veleien-Vraz, ar Renerien hag ar Bobl, ¹⁴ ha dezo e lavar: "**Degaset ho-peus din an dén-mañ, evel eun dén a vefe o tispaha ar Bobl! Setu greet ganin eun enklask dirazoc'h, ha n'ameus kavet en Dén-mañ tamall ebed euz ar re a damallit dezañ!**" ¹⁵ Nag Herodez kennebeud, rag e zigaset e-neus deom endro! Setu ma n'eus ket eun unan euz e oberou da dalvezoud ar maro! ¹⁶ Mond a ran eta d'e gas-

tiza ha d'e ziliamma!".

¹⁷ Red e vez dezañ diliamma dezo unan bennag da geñver ar gouel. ¹⁸ Med youhal a ra an dud o lavared: **"Kas Henez d'ar maro ha diliamm deom Barabaz!"** ¹⁹ Hemañ a zo bet stlapet er prizon en abeg d'eun taol-dispac'h greet e Kêr, ha d'eur muntr! ²⁰ Pilat a gomz dezo adarre, c'hoant dezañ da ziliamma Jezuz! ²¹ Med sevel a reont o mouez da lavared: **"Ouz ar groaz! Stag Henez ouz ar groaz!"** ²² Evid an trede gwech e lavar dezo: **"Peseurt droug 'ta e-neus greet hemañ ? Netra da gastiza dre varo n'am-eus kavet ennañ! Mond a ran eta d'e gastiza ha d'e ziliamma!"** ²³ A-bouez penn e talhont da c'houlenn e vefe staget ouz ar groaz, ha war greñvaad ez a o moueziou! ²⁴ Pilat a ziviz selaou o goulenn: ²⁵ Diliamma a ra an hini stlapet er prizon en abeg d'eun taol-dispac'h ha d'eur muntr, an hini a c'houlennont!... Ha rei a ra Jezuz etre o daouarn hervez o bolontez...

TAD! PARDONIT DEZO!...

Mz 27, 32...
Mk 15, 21...
Yn 19, 17...

²⁶ P'emaint ouz e gas ganto, e pakont krog e Simon, -eur Sirenad o tond diwar ar-mêz-, evid e lakaad da zougen ar groaz a-dreñv Jezuz. ²⁷ D'e heul e vale leun a dud euz ar Bobl, ha leun a verhed: ar re-mañ a zo o skei war boull o c'halon hag oc'h hirvoudi warnañ! ²⁸ Eñ avad a zistro warzu enno da lavared: **"Merhed Jeruzalem, na ouelit ket warnon-me! Gouelit avad warnoc'h-hoc'h-unan, ha war ho pugale!"** ²⁹ Rag setu deveziou o tond, ma vo lavaret: **"Eüruz ar gwragez difrouez, ar re n'o-deus ket ganet, an divronn n'o-deus ket maget!"** ³⁰ Neuze e stagor da lavared d'ar menezioù **"Kouezet warnom!"** ha d'an tergen* **"Deuit d'or c'huzad!"**. ³¹ **Ma vez greet kement-se d'ar c'hoad glaz, petra zegouezo gand an hini sec'h?"**.

Mz 23, 37...
Mz 24, 15...

³² Ha d'e heul ez eus kaset daou all, torfetourien, da veza lakeet d'ar maro. ³³ Degouezet d'al lec'h galvet Golgota (Klopenn), eno e stagont ouz ar groaz, Eñ hag ive an dorfetourien, unan a-zehou hag egile a-gleiz. ³⁴ Jezuz avad a lavar: **"Tad! Pardonit dezo: n'ouzont ket petra a reont"**. Lodenna a reont e zillad, o tenna al Lod! ³⁵ Ar Bobl a jom da zelled. Ar Renerien avad a c'hoarz goap warnañ, o lavared: **"Re all e-neus saveteet! Dezañ en em zavetei e-unan, ma z'eo Mesiaz Doue, an Hini dibabet!"** ³⁶ E c'hoapaad a ra ive ar zoudarded o tond davetañ da ginnig dezañ gwin treñk ³⁷ hag o lavared: **"Ma z'oc'h-c'hwi Roue ar Juzevien, en em zaveteit hoc'h-unan!"**.

³⁸ A-zioc'h e-benn, ez eus ive eur skrid-tamall, e lizerennou gresianeg, latin hag hebreeg: 'Roue ar Juzevien'. ³⁹ Unan euz an dorfetourien staget ouz ar groaz a wall-gomz a-enebtañ o lavared: **"Daoust ha n'oc'h-c'hwi ket ar Mesiaz ? En em zaveteit hoc'h-unan ha ni ganeoc'h!"** ⁴⁰ Hag egile da respont ha d'ober trouz dezañ: **"Ne zoujez ket Doue zoken, emezañ, p'emaout-te e dalc'h eun heveleb kastiz ?** ⁴¹ Evidom-ni ez eo just, rag diouz ar pez on-eus greet e pakom! Hemañ avad n'e-neus greet netra a zroug" ⁴² Hag e lavar: **"Jezuz! Ho-pet soñj ahanon pa zeuoc'h en ho Rouantelez!"** ⁴³ Hag e lavar Jezuz dezañ: **"Hirio e vezi ganin er Baradoz!"**.

* Torgennou

ETRE HO TAOUARN E LAKAN VA SPERED!

Mz 27,45...
Mk 15,33...
Yn 19,25...

⁴⁴ Hag ez eo bremañ wardro ar c’hwehved eur! Dond a ra teñvalijenn war an Douar a-bez, beteg an naved eur, ⁴⁵ dre eur fallaenn euz an heol ; ha freget eo gouél ar zantual dre an hanter! ⁴⁶ O sevel uhel-kenañ e vouez, e lavar Jezuz: **“Tad! Etre ho taouarn e lakan va Spered!”** En eur lavared kement-se e ro e Spered...

⁴⁷ O weled an darvoud, e ro ar c’hantener gloar da Zoue o lavared: **“Evid gwir, bez’ e oa Hemañ eun Dén just!”** ⁴⁸ An oll dud a zo diredet eno da zelled, goude beza gwelet ar pezh a zo c’hoarvezet, a sko war boull o c’halon en eur vond kuit... ⁴⁹ A-bell e chom oll anaoudeien Jezuz, hag ive ar merhed a zo deuet d’e heul adal ar Galile, hag a zo o selled ouz kement-se...

EN EUR BÉZ KLEUZET ER ROC’H.

Mz 27, 57...
Mk 15, 42...
Yn 19, 38...

⁵⁰ Ha setu eur gwaz, anvet Jozef, eur zanedrinad, eur gwaz mad ha just... ⁵¹ N’e-neus ket asantet na d’o mennad na d’o oberou! Euz Arimati eo-eñ, eur gêr euz ar Jude, hag ema o c’hortoz Rouantelez Doue! ⁵² Mond a ra daved Pilat da c’houlenn Korv Jezuz. ⁵³ Hag e ziskenn a ra, e liena en eul liñsel hag e lakaad en eur béz kleuzet er roc’h, ha n’eus bet c’hoaz lakeet dén ebed e-barz... ⁵⁴ Deiz-ar-Ragaoza (Derhent-ar-zabad) eo, ha goulou a ra dija goulou ar Zabad! ⁵⁵ A-dost e teu ar merhed da-heul, ar re a zo deuet gantañ adal ar Galile: selled mad a reont ouz ar béz, ha penaoz eo lakeet e Gory! ⁵⁶ Eet endro, ec’h aozont louzeier ha balzamour.

Hag epad ar zabad e chomont peoc’h, hervez ar gourhemenn...

24

N’EMA KET AMAN ! ADSAVET EO !

Mz 28, 1...
Mk 16, 1...
Yn 20, 1...

¹ Da zeiz kenta ar zizun, kerkent ha goulou-deiz, e teuont d’ar béz, en eur zegas al louzeier o-deus aozet. ² Ar Mên a gavont ruillet a-zirag ar béz! ³ Eet e-barz, ne gavont ket Korv Jezuz an Aotrou! ⁴ Neuze, e-pad ma chomont nehet dre gement-se, setu daou waz en o zav dirazo, luheduz o dillad! ⁵ Kroget aon enno, e plegont o fenn warzu an douar, ha dezo e lavar ar wazed: **“Perag e klaskit an Hini-Beo e-touez ar re varo ? ⁶ N’ema ket amañ! Med adsavet eo! Soñjit penaoz e-neus komzet deoc’h p’edo c’hoaz er Galile, ⁷ pa lavare: “Mab-an-Dén a rank beza roet etre daouarn pehrien, beza staget ouz ar groaz, hag adsevel d’an trede deiz!”** ⁸ Hag e teu soñj dezo euz e Gomzou...

Mz 16,21...
Mz 17,22...
Mz 20,17...
Mz 21,38...

⁹ Distroet euz ar béz, e kemennont ar C’HELOU-MAD-se d’an Unneg ha d’an oll re all! ¹⁰ Bez’ ez eus anezo Mari Madalen, Joanna, Mari mamm

Jakez, hag ar merhed all a zo ganto a lavar an heveleb traou d'an Ebestel. ¹¹ Med anad eo d'ar re-mañ n'eus nemed sorhennou euz al lavarou-ze... ha ne gredont ket ar merhed. ¹² Pêr avad a zav hag e red d'ar béz. En eur blega, ne wél nemed al lienennou... hag ez a kuit, souezet ennañ e-unan gand kement a zo c'hoarvezet...

Yn 20,3...

O! TUD POU D A SPERED, TEUC'H DA GREDI!

Mk 16, 12...

¹³ Ha setu daou anezo, en deiz-ze ive, o vale warzu eur gêriadenn anvet Emmauz, war-hed tri-ugent stad euz Jeruzalem. ¹⁴ Etrezo e tivizont diwar-benn an oll darvoudou-ze. ¹⁵ Epad ma tivizont ha ma rendaelont, e tosta Jezuz e-unan evid ober hent ganto. ¹⁶ O daoulagad avad a zo miret outo d'e anavezoud.

Mz 2,23

¹⁷ Lavared a ra dezo: **“Petra eo ar C'homzou-ze a stlapit an eil d'egile en eur vond ?”** Hag e chomont a-zav, teñval o fenn. ¹⁸ Respont a ra unan, anvet Kleofaz, o lavared dezañ: **“E Jeruzalem, n'eus perhirin ebed nemedoc'h-c'hwi da jom heb gouzoud an traou c'hoarvezet e Kêr en deveziou-mañ!”** ¹⁹ Hag e lavar dezo: **“Pe-re!”**. Dezañ e lavaront: **“An traou diwar-benn Jezuz-an-Nazaread, a zo bet eur Profed galloudeg en Ober hag er Gomz, dirag Doue ha dirag ar Bobl a-bez!”** ²⁰ Penaoz or Beleien-Vraz hag or renerien o-deus e roet da veza barnet d'ar maro hag o-deus e staget ouz ar groaz. ²¹ Ni avad a espere e oa-Eñ an Hini a dlee savetei Izrael!... Med a dra-zur, gand kement-se, ez eo an trede devez abaoe m'eo tremenet an traou... ²² Med gwir eo: merhed euz on touez o-deus or strafuillet! Eet d'ar béz d'ar goulou-deiz, ²³ n'o-deus ket kavet ar C'horv! Ha deuet int da lavared o-deus int-i gweled êlez o para dirazo hag a lavare ez eo-Eñ beo! ²⁴ Eet a zo unan bennag ahanom-ni d'ar béz: kavet o-deus an traou evel ma lavare ar merhed! Eñ avad, n'o-deus ket e welet!”

Mk 4,18
Mz 8,10
Lk 18,31

²⁵ Hag e lavar dezo: **“Tud poud a spered ha teuc'h a-galon da gredi kement o-deus lavaret ar Brofeded!”** ²⁶ Daoust ha ne ranke ket ar Mesiaz gouzañv kement-se arag mond en e C'hloar ?” ²⁷ Hag o staga gand Moizez hag an oll Brofeded, e tispleg dezo, en oll Skrituriou, kement a zo diwar-e-benn...

1 Pêr 1,11

²⁸ Pa zegouezont tost ouz ar gêriadenn ma z'eont, e ra-Eñ van da vond larkoc'h... ²⁹ Med int-i a zalc'h warnañ, o lavared: **“Chomit ganeom! Rag deuet an abardaez hag eet izel an deiz!”** Hag ez a en ti da jom ganto. ³⁰ Neuze, astennet ganto ouz taol, e kemer ar varaenn en eur lavared trugarez: he ranna a ra hag he rei dezo... ³¹ Digoret eo dezo avad o daoulagad, hag e teuont d'e anavezoud! Med mond a ra diwar o gwel... ³² Etrezo e lavaront: **“Daoust ha ne oa ket entanet ennom or c'halon, pa oa o komz deom en hent hag o tigeri deom ar Skrituriou ?”**

³³ D'an eur-ze end-eeun e savont da zistrei da Jeruzalem, hag e kavont bodet an Unneg hag ar re a vez ganto. ³⁴ Hag ar re-mañ da lavared: **“E gwirionez! Adsavet eo an Aotrou! ha deuet eo da bara dirag Simon!”** ³⁵ Hag

int-i o-unan da zisplega an traou degouezet en hent, ha penaoz e-neus en em ziskuliet dezo dre ar Rann-Vara!

1 Kor 15,5

GWELIT VA DAOUARN HA VA ZREID!

Mk 16, 14...
Yn 20, 19...

³⁶ Epad ma komzont, setu Jezuz en e zav, en o zouez, ha dezo e lavar: **“Peoc’h deoc’h-c’hwi!”** ³⁷ Spontet int ha spouronet, hag e kav dezo gweled eur spered! ³⁸ Hag e lavar dezo: **“Perag ez oc’h-c’hwi trubuillet, hag e sav divizou en ho kalonou ?** ³⁹ **Gwelit va daouarn ha va zreid! Rag Me va-unan eo an hini a zo! Touchit ouzin! Ha gwelit: eur spered n’e-neus na korv nag askorn evel ma welit mad ez eus din-me!”** ⁴⁰ En eur lavared, e tiskouez dezo e zaouarn hag e dreid. ⁴¹ Pa jomont c’hoaz diskredig, hag ive sebezet dre levenez, e lavar dezo: **“Daoust ha bez’ ho-peus amañ eun dra bennag da zebri ?”** ⁴² Dezañ e kinnigont eun tamm pesk bet grillet. ⁴³ Kemer a ra ha debri dirazo...

Yn 21,5...

C’HWI EO AN TESTOU EUZ AN OLL DRAOU-SE!

⁴⁴ Eñ avad a lavar dezo:

“Ar C’homzou-mañ din am-eus lavaret deoc’h pa oan c’hoaz ganeoc’h:

Bez’ e rank beza sevenet kement a zo skrivet diwar va fenn:

“E Lezenn Voizez, er Brofeded hag er Zalmou!”

⁴⁵ Digeri a ra neuze o spered da intent ar Skrituriou, hag e lavar dezo:

⁴⁶ **“Evel-henn ez eo skrivet:**

“Ar Mesiaz a ziwasko poan!

“Ha d’an trede deiz ec’h adsavo a-douez ar re varo ;

⁴⁷ **“D’an oll boblou, o kregi gand Jeruzalem,**

“e vo prezeget, en e Ano,

“Treï ar galon ouz Doue evid kaoud pardon ar pehejou.

⁴⁸ **“C’HWI eo an TESTOU euz an oll Draou-se!**

⁴⁹ **“Ha setu ma kasin-me warnoc’h PROMESA va ZAD!**

“C’hwi avad, chomit er Gêr-mañ,

“Ken na vezoc’h gwisket gand eun NERZ euz an Neñv!”

⁵⁰ Eñ avad o c’has gantañ da gichenn Betani,

Hag e sav e zaouarn d’o benniga...

⁵¹ A-greiz benniga, e tec’h diouto hag ez eo douget d’an Neñv!...

⁵² Hag int-i, goude stoui dirazañ, a zistro da Jeruzalem, leun a levenez!

Mk 4,13

Ob 10,40

Mz 28,18...
Mk 16,15...
Ob 1,8...

Mk 16,19...
Ob 1,9...

⁵³ Dalhmad e vezont en Templ, o kana gloar ha meuleudi da Zoue!

Yann hag e Aviel

Hervez an darn vrasa, an Abostol Yann, breur Jakez, eo an hini e-neus skrivet evidom ar pevare Aviel wardro ar bloavez 80. Galvet eo gand Jezuz, p'ema o kempenn ar rouejou gand Jakez hag e dad (Mz 4, 2 ; Mk, 1, 19). Heulia a ra Jezuz gand eur galon birvidig; D'ar Goan diweza, e c'hell soubla war galon e Aotrou, eñ, an diskib muia-karet! Heulia a ra e Vestr beteg ar Golgota, ha chom en e zav e tal ar groaz beteg Maro e Vestr, e kichenn Mari, Mamm Jezuz (Yn 13, 25 ; 19, 25).

Karget gand Jezuz da gemer Mari da Vamm, Yann he c'hemer en e di; unan ganti, e c'hell evelse delher ha trei en e galon an traou burzuduz o-deus o-daou gwelet ha klevet, ar "zinou" greet gand Jezuz evid degas an dud da gredi ha da gaoud Buez Ennañ... Dre e Aviel e teu d'or sikour da intent mad ar 'zinou-ze'...

Evid gwir, evel ma lavar Yann, Jezuz a ra sin d'an dud:

1°) O trei an dour e gwin-dreist, e Kana, da geñver eun eured. Deuet eo Jezuz da drei an Emgleo-Koz en eun Emgleo-Nevez ha Peurvad, eun Emgleo a-Garantez etre Doue hag an dud heñvel ouz emgleo prijou er briedelez (Yn 2, 1)

2°) O tiwall diouz ar maro mab eun ofiser. N'eus nemed Jezuz da rei deom eur Vuez hag on diwallo diouz ar maro peurbaduz... (Yn 4, 49 ; 6, 69...)

3°) O rei bara da vaga eur bern tud da boent Pask. Deuet eo Jezuz da vaga an dud dre e Gomz, dezo kredi ennañ ha kaoud Buez ennañ! Dre-ze, e ra c'hoaz sin pelloc'h: d'ar Pask diweza, e roio Jezuz d'e Ziskibien, ha drezo d'an dud, Bara euz an Neñv, Bara-Doue: e Gorv hag e Wad (Yn 6, 48 ; Mz 26, 26).

4°) O para daoulagad eun den ganet dall. Jezuz hepkén a zo Sklêrijenn ar Bed! Dall e vez an oll o tond er Bed, ha ne deuont da weled sklêr ha da veza 'tuda-sklêrijenn', nemed dre gredi e Mab Doue! An dud diskredig a jom en Deñvalijenn hag er Maro (Yn 8, 12 ; 9, 40)

5°) O rei buez da Lazar, er béz abaoe pevar devez : Jezuz, hag Eñ hepkén, a zo an Adsao hag ar Vuez! Ober a ra e Vestr war ar Maro, o tiframma Lazar euz ar béz, hag an oll, d'an deiz diweza! Ar re a gred ennañ a adsavo evid ar Vuez! Ar re na gredont ket a adsavo evid koueza er Maro (Yn 5, 29 ; 11, 23)

6°) Oc'h adsevel e-unan d'an trede Deiz. Kalz Juzevien a glask eur Zin euz an neñv! Ne vo roet dezo nemed Sin Jonaz, deuet d'ar vuez goude tri devez e korv ar valum... Tri devez goude e varo, Jezuz a adsavo er c'hloar!

Ha roet dezo ar seurt sinou, an dud ne gredont ket Ennañ!

Evid echui, e lavar deom Yann:

“Kalz a zinou all e-neus c’hoaz greet Jezuz!

“Ar re-mañ a zo bet skrivet deoc’h-c’hwi,

“Deoc’h kredi ez eo Jezuz ar Mesiaz, Mab Doue,

“Ha deoc’h, dre gredi, kaoud Buez en e Ano!”

“Euruz ar re n’o-deus ket gwelet hag o-deus kredet”

(Mz 12, 39 ; Yn 12, 37; Yn 20, 30).



E chapel Santez-Anna, e Lambaol-Gwimilio.
Sk Albert Pennec.

**Aviel Jezuz Krist
hervez
Sant Yann**



Sant Yann, Pleiber-Krist. Sk J. F.

AR VERB (KOMZ DOUE) A ZO DEUET DA VEZA DÉN!

Yn 17,5
 Heb 1,2
 1 Yn 1,1...

¹ Er Penn-Kenta e oa ar Verb, hag ar Verb a oa daved Doue hag ar Verb a oa Doue. ² Er Penn-kenta e oa daved Doue. ³ Drezañ eo bet greet an oll draou, hag hebtañ n'eus ket bet greet eun unan euz an traou greet! ⁴ Ennañ e oa Buez, hag ar Vuez a oa Sklêrijenn an dud ; ⁵ ar Sklêrijenn a sked en Deñvalijenn, hag an Deñvalijenn n'he-deus ket he dalhet...

Yn 3,19

⁶ Degouezet e oe eun dén, kaset a-berz Doue, Yann e ano. ⁷ Henez a oa deuet evid eun testeni, da rei testeni d'ar Sklêrijenn, d'an oll dond da gredi drezañ. ⁸ Ne oa ket ar Sklêrijenn, med deuet e oa da rei testeni d'ar Sklêrijenn.

Yn 1,20

Gal 3,26

⁹ Bez' e oa ar Sklêrijenn wirion, -an hini a sklêrra peb dén-, o tond er Béd. ¹⁰ Er Béd e oa, drezañ eo bet greet ar Béd, hag ar Béd n'e-neus ket e anavezet! ¹¹ E-touez e dud eo deuet, hag e dud n'o-deus ket e zegemeret. ¹² D'ar re avad o-deus e zegemeret, e-neus roet galloud da zond da veza bugale da Zoue, d'ar re o-deus kredet en e Ano! ¹³ Ar re-ze avad, n'eo ket euz gwad, na diwar volontez an natur-dén, na diwar youl eur gwaz, med euz Doue eo ez int ganet! ¹⁴ Hag ar Verb a zo deuet da veza Dén! Kampet e-neus en on touez, ha gwelet on-eus e C'hloar, Gloar deuet digand an Tad, dezañ evel Mab-Unganet, leun a c'hras hag a wirionez...

Yn 3,5...

Mz 3,11

¹⁵ Yann a ro testeni diwar-e-benn hag a youc'h o lavared: **“Hemañ eo an Hini am-eus lavaret diwar-e-benn: ‘An Hini a zeu war va lerc’h a ia em raog, rag araozon e oa anezañ!’”** ¹⁶ Euz e leunder on-eus, ni oll, resevet, ha gras a-eneb gras. ¹⁷ Rag al Lezenn a zo bet roet dre Voizez ; ar c'hras hag ar wirionez a zo c'hoarvezet dre Jezuz Krist! ¹⁸ Doue, dén n'e-neus biskoaz e welet! An Doue Mab-Unganet, hag a zo war galon an Tad, e-neus e zisklêriet.

Kol 1,19
 Rom 6,4
 Mz 11,27
 Lk 10,22

SETU OAN DOUE!

Lk 3,15

¹⁹ Hag hemañ eo testeni Yann, pa gas ar Juzevien davetañ, euz Jeruzalem, Beleien ha Levidi da c'houlenn outañ: **“Piou out-te ?”** ²⁰ Disklêria a ra ha ne nac'h ket, disklêria a ra: **“N'on-me ket ar Mesiaz!”** ²¹ Hag e c'houlennont outañ: **“Petra 'ta ? Ha bez' ez out Eli ?”** Hag e lavar: **“N'on ket!”** - **“Ha bez' ez out ar Profed ?”** Hag e respont: **“Nann!”** ²² Dezañ e lavaront eta: **“Piou out-te, deom da rei eur respont d'ar re o-deus or c'haset! Petra lavarez diwar-**

Mz 17,10
 Mz 16,14

Mz 3,3... **da-benn da-unan ?”** ²³ Lavared a ra : **“Me eo mouez an hini a youc’h er gouelec’h: ‘Eeunit hent an Aotrou!’**, evel ma lavar ar profed Izai !...”

Mz 21,25 ²⁴ Lod kannaded a zo a-douez ar Farizeiz, ²⁵ hag e reont outañ eur gouleñn o lavared: **“Perag ’ta e vadezez, ma n’out nag ar Mesiaz nag Eli nag ar Profed ?”** ²⁶ Dezo e respont Yann o

Mz 3,11 lavared: **“Me a vadez en dour!... En ho touez ez eus Unan n’anevezit-c’hwil ket, ²⁷ an Hini a zeu war va lerc’h ha n’on-me ket mad da ziskoulma lèrenn e zandalennou!...”** ²⁸ Kement-se a c’hoarvez e Betani, en tu-all d’ar Jordan, el lec’h m’ema Yann o vadezi.

²⁹ En deiz war-lerc’h, e wél Jezuz o tond davetañ, hag e lavar:

Iz 53,7 **“Setu Oan Doue, an Hini a zilam pehed ar Béd! ³⁰ Hemañ eo an Hini a lavaren diwar-e-benn: ‘War va lerc’h e teu eun Dén hag a zo eet em raog, rag araozon e oa anezañ!’ ³¹ Hag E**

Mz 3,16 anavezoud ne reen-me ket, med evid ma vefe disklêriet da Mk 1,10 Izrael, evid-se ez on-me deuet da vadezi en dour!” ³² Ha Yann a

Lk 3,22 ro testeni o lavared: **“Gwelet am-eus ar Spered o tiskenn evel eur goulm euz an Neñv hag o chom warnañ! ³³ Hag e anavezoud ne reen-me ket, med an Hini e-neus va c’haset da vadezi en dour, Hennez e-neus lavaret din: “An hini a weli ar Spered o tiskenn warnañ hag o chom warnañ, Hennez eo an Hini a vadez er Spered Santel!”** ³⁴ Ha me am-eus gwelet, hag e testenian ez eo Hennez Mab Doue!”

Mz 3,17
Lk 9,35

KAVET ON-EUS AR MESIAZ!

Mz 4,18 ³⁵ En deiz war-lerc’h adarre, ema eno Yann ha daou euz e ziskibien! ³⁶ O selled ouz Jezuz o tond hag o vond, e lavar: **“Setu Oan Doue!”** ³⁷ An daou Ziskib a glev e gomz, hag ez eont da heul Jezuz. ³⁸ Jezuz avad, o tistrei hag o weled e teuont d’e heul, a lavar dezo: **“Petra emaoe’h o klask ?”** Dezañ e lavaront: **“Rabbi! (da lavared eo: Mestr), pe-lec’h emaoe’h o chom ?”** ³⁹ Dezo e lavar: **“Deuit ha gwelit!”** Mond a reont eta hag e welont pe-lec’h ema o chom, hag en e gichenn e chomont en deiz-ze: wardro an naved eur eo neuze...

⁴⁰ Andre, breur Simon-Pèr, a zo unan euz an daou o-deus klevet komzou Yann hag a zo eet da heul Jezuz. ⁴¹ Kavoud a ra da

Mz 16,18
Lk 6,14

genta Simon, e vreur, hag e lavar dezañ: **“Kavet on-eus ar Mesiaz!”** (da lavared eo ar C’hrist!), ⁴² hag e zegas a ra daved Jezuz. En eur bara e zell warnañ, e lavar Jezuz: **“Te eo Simon-Mab-Yann! Te a vo galvet Kefaz (da lavared eo ‘Roc’h’)!”**.

Mz 9,9

Dt 18,18

Yn 7,47
Mz 13,54

⁴³ En deiz war-lerc’h, e fell da Jezuz mond d’ar Galile, hag e kav Filip. Dezañ e lavar Jezuz: **“Deus d’am heul!”** ⁴⁴ Filip avad a zo euz Betsaid, euz kêr Andre ha Pèr! ⁴⁵ Filip a gav Natanael, hag e lavar dezañ: **“An Hini a zo skrivet diwar-e-benn gand Moizez el Lezenn, ha gand ar Brofeded, e gavet on-eus-ni: Jezuz-Mab-Jozef, euz Nazared!”**. ⁴⁶ Hag e lavar dezañ Natanael: **“Daoust hag euz Nazared e c’hell dond eun dra bennag a vad ?”** Dezañ e lavar Filip: **“Deus! ha gwel!”**

Rom 8,28

Yn 6,69
Mz 14,33

Mz 4,11

Mz 8,20

⁴⁷ Jezuz a wél Natanael o tond hag e lavar diwar-e-benn: **“Setu evid gwir eun Izraelad ha n’eus ket a gorigell ennañ.”** ⁴⁸ Natanael a lavar dezañ: **“A be-lec’h am anavezit ?”** Jezuz a respont o lavared dezañ: **“Araog m’e-neus Filip da c’halvet, pa oas dindan ar wezenn-fiez, da welet am-eus!”** ⁴⁹ Dezañ e respont Natanael: **“Rabbi!... C’hwi eo Mab Doue! C’hwi eo Roue Izrael!”** ⁵⁰ Respont a ra Jezuz o lavared dezañ: **“Peogwir am-eus lavaret dit ‘Da welet am-eus dindan ar wezenn-fiez’ e kredez! Brasoc’h eged-se a weli!”** ⁵¹ Hag e lavar dezañ: **“E gwirionez, e gwirionez e lavaran deoc’h: Gweled a reoc’h an Neñv digor! hag êlez Doue o sevel hag o tiskenn a-zioc’h da Vab-an-Dén!”**

2

C’HWI HO-PEUS DALHET AR GWIN MAD...

Mz 12,48

Mk 7,3

¹ D’an trede deiz, ez eus eul Lein-Eured e Kana, er Galile, hag ema Mamm Jezuz eno ; ² galvet eo ive Jezuz hag e Ziskibien d’al Lein-Eured. ³ Deuet ar gwin d’ober diouer, e lavar Mamm Jezuz dezañ: **“N’o-deus ket a win!”** ⁴ Hag e lavar Jezuz dezi: **“Petra a zo etre Me ha c’hwi, Maouez ? N’eo ket c’hoaz deuet va Eur!”** ⁵ Lavared a ra e Vamm d’ar zervicherien: **“Petra bennag a lavarfe deoc’h, grit!”** ⁶ Bez’ ez eus eno c’hwec’h laouer-vên, lakeet d’ar Juzevien d’en em c’hlanaad: mond a ra e pep hini daou pe dri vuzuliad! ⁷ Dezo e lavar Jezuz: **“Kargit al laoueriou a zour!”** Hag o c’harga a reont beteg an nec’h! ⁸ Hag e lavar dezo: **“Tennit bremañ ha kasit d’an ostiz!”** Hag e kasont! ⁹ P’e-neus an

Mz 26,29 ostiz tañvêt an dour deuet gwin (ne oar ket a-belec'h e teu! ar zervicherien avad a oar, int-i hag o-deus tennet an dour) e c'halv an ostiz an Dén-Nevez, ¹⁰ Hag e lavar dezañ: **“Peb dén a ginnig da genta ar gwin mad, ha pa vez mezet an dud, neuze ar gwin dis-terroc'h! C'hwi avad ho-peus dalhet ar Gwin Mad beteg bremañ!”**

Mk 4,13 ¹¹ An digor euz e zinou a ra Jezuz e Kana, er Galile! Disklêria a ra e c'hloar, hag ennañ e kred e Ziskibien! ¹² Goude-ze, e tiskenn da Gafarnaom, Eñ e-unan, e Vamm, e Vreudeur hag e Ziskibien ; hag eno e chomont eun nebeud deveziou...

EN EUR OBER TRI DEVEZ, ME E ADSAVO!

Mz 21,12...
Mk 11,11...
Lk 19,45... Salm 69,10 ¹³ Hag ema tost Pask ar Juzevien, hag e sav Jezuz da Jeruzalem. ¹⁴ En Templ, e kav an dud a vez o werza ejenned, deñved ha koulmed, hag an drokerien arhant en o c'hoazez. ¹⁵ Hag Eñ ober eur skourjez euz kerdin, ha stlepel an oll dud er-mêz euz an Templ, hag ive an deñved hag an ejenned, ha skigna arhant an eskemmerien ha taoler o zaoliou d'an traoñ! ¹⁶ Ha d'ar re a werz ar c'houlmed e lavar: **“Lamit kement-se ahalenn! Na rit ket euz Ti va Zad eun ti-kenwerz!”** ¹⁷ Dond a ra koun d'an Diskibien ez eo skrivet: *“Va debri a ra ar gred evid ho Ti!”*

Mz 21,23
Mz 26,61 1 Kor 6,19 ¹⁸ Ar Juzevien a zav o mouez da lavared dezañ: **“Peseurt sin a ziskouezit deom, pa rit an dra-ze ?”** ¹⁹ Jezuz a respont o lavared dezo: **“Diskarit ar Zantual-mañ, hag en eur ober tri devez, me e adsavo!”** ²⁰ Ar Juzevien eta a lavar: **“En eur ober c'hwec'h bloaz ha daou-ugent eo bet savet ar zantual-mañ! Ha c'hwi e adsavo en eur ober tri devez ?”** ²¹ Eñ avad a gomz euz Santual e Gory! ²² Goude e Adsao a-douez ar re varo, e teu soñj d'an Diskibien e-neus-Eñ lavaret an dra-ze, hag e kredont er Skrituriou hag er Gomz e-neus lavaret dezo...

Lk 16,25 ²³ P'ema e Jeruzalem, da geñver Gouel ar Pask, e teu kalz tud da gredi en e Ano, o weled ar zinou a ra. ²⁴ Jezuz avad ne gred ket outo! ²⁵ Anavezoud a ra an oll; ha n'e-neus ket ezomm e rofe unan bennag testeni diwar-benn an dén, rag Eñ e-unan a anavez petra 'zo en dén!...

3

RED EO BEZA GANET EUZ AN NEÑV!

Yn 19,19 E-touez ar Farizeiz ez eus eun dén anvet Nikodem, unan
 Mz 22,16 euz renerien ar Juzevien. ² Dond a ra daved Jezuz epad an noz hag
 Mz 18,3 e lavar dezañ: “**Mestr! Goud a ouzom ez oc’h deuet a-berz Doue
 1 Pêr 1,23 evel Kelenner, rag ne c’hell dén ober ar zinou a rit ma ne vez
 ket Doue gantañ!**” ³ Respont a ra Jezuz o lavared: “**E gwirionez, e
 Ez 26,35 gwirionez e lavaran dit: ma ne vez ket eun dén ganet euz an
 Ef 5,2 Neñv, ne c’hell ket gweled Rouantelez Doue!**” ⁴ Dezañ e lavar
 Nikodem: “**Penaoz e c’hell eun dén dond da veza ganet pa vez
 eet koz ? Daoust ha mond a c’hell adarre e korv e vamm ha
 beza ganet ?**” ⁵ Respont a ra Jezuz: “**E gwirionez, e gwirionez e
 lavaran dit: Ma ne vez ket eun dén ganet euz Dour ha Spered,
 ne c’hell ket mond e Rouantelez Doue!**” ⁶ An néb a zo ganet euz
 1 Kor 15,44 an dén, a zo dén! Hag an hini a zo ganet euz ar Spered, a zo
 Spered! ⁷ Na vez ket souezet ma lavaran dit “**Red eo deoc’h
 beza ganet euz an Neñv!**” ⁸ An Avel a c’hwez el lec’h ma kar:
 he mouez a glevel, med n’ouzout ket a-be-lec’h e teu na da be-
 lec’h ez a! Evel-se e vez an hini a zo ganet euz ar Spered!”

Yn 7,16...
 Yn 8,26...
 Yn 6,60 ⁹ Respont a ra Nikodem o lavared dezañ: “**Penaoz e c’hell
 kement-se c’hoarvezoud ?**” ¹⁰ Jezuz a respont o lavared dezañ:
 “**Te eo Kelenner Izrael, ha n’ouzout ket an traou-ze ?**” ¹¹ E gwir-
 rionez, e gwirionez e lavaran-me dit: **Ar pez a ouzom a lava-
 rom! Ar pez a welom a desteniom! ha ne zegemerit ket on teste-
 ni!** ¹² Ma ne gredit ket pa gomzan euz traou an douar, penaoz e
 kredoc’h ma komzan euz traou lein-an-Neñv ? ¹³ Nikun n’eo
 savet d’an Neñv, nemed an Hini diskennet euz an Neñv, Mab-
 an-Dén!”.

Rom 4,3...
 Rom 5,8...
 Rom 8,12
 1 Yn 4,9 ¹⁴ “**Evel m’e-neus Moizez savet uhel an Naer er gouelec’h,
 evel-se e ranko Mab-an-Dén beza savet uhel,**” ¹⁵ da gement-hini
 a gred ennañ kaoud buez peurbaduz. ¹⁶ Rag kement-se e-neus
 Doue karet ar Béd, m’e-neus roet e Vab-Unganet evid na vo
 kollet kement-hini a gred ennañ, med evid m’e-no buez peurba-
 duz! ¹⁷ Rag Doue n’e-neus ket kaset e Vab er Béd da varn ar
 Béd, med evid ma vo ar Béd salvet drezañ!”.

Lk 16,10 ¹⁸ “**An hini a gred ennañ ne vez ket barnet ; an néb avad
 na gred ket a zo a-vremañ barnet, pa ne gred ket en Ano Mab-**

Yn 8,12 **Unganet Doue!** ¹⁹ Setu avad ar Varn: ar Sklêrijenn a zeu er Béd, hag an dud a gar an Deñvalijenn kentoc'h eged ar Sklêrijenn, rag fall eo o oberou. ²⁰ Rag kement-hini a ra an droug e-neus kas ouz ar Sklêrijenn, ha ne zeu ket d'ar Sklêrijenn gand aon na vefe tamallet e oberou! ²¹ An hini avad a ra ar Wirionez a zeu d'ar Sklêrijenn, evid ma vo anad ez eo e oberou greet e Doue!”

DEZAÑ EO RED KRESKI!

Mz 4,12 ²² Goude-ze, ez a Jezuz hag e Ziskibien d'ar Jude ; eno e chom ganto, ha badezi a ra... ²³ Yann a zo ive o vadezi en Aion e-kichenn Salim, pa z'eus eno doureier e-leiz, ha davetañ e teu tud da veza badezet: ²⁴ rag n'eo ket c'hoaz Yann taolet er prizon...

BEZ'E RANK-EÑ KRESKI!

Heb 5,4
1 Kor 4,7
Mz 11,10
Mz 9,15
Disk 21,10
Ef 5,25...

²⁵ Hag e sav eta rendael etre diskibien Yann hag eur Juzeo diwar-benn glanadur. ²⁶ Dond a reont daved Yann hag e lavaront dezañ: “**Rabbi! An Hini a oa ganit en tu-all d'ar Jordan, an Hini az-peus-te roet dezañ testeni, setu-Eñ ive o vadezi, hag an oll o vond davetañ!**” ²⁷ Yann a respont o lavared: “**Ne c'hell dén kemer netra, ma ne vez ket roet dezañ euz an Neñv!**” ²⁸ C'hwil hoc'h-unan a ro din testeni em-eus lavaret: “**Me n'on ket ar Mesiaz, med kaset on-bet en e raog!**” ²⁹ An Hini a zo dezañ ar Plac'h-Nevez eo an Dén-Nevez! Mignon an Dén-Nevez avad, chomet tost da gleved e vouez, a drid a levenez diwar vouez an Dén-Nevez! Al levenez-ze din-me a zo peur-leuniet! ³⁰ Bez' e rank-Eñ kreski! ha me disterraad!”

Mz 11,27
Mz 28,28
1 Yn 5,12
Mz 3,7...

³¹ An Hini a zeu euz an Neñv a zo dreist an oll. An néb a zo euz an douar a zo douarel, hag a gomz euz an douar. An Hini avad a zeu euz an Neñv a zo dreist an oll. ³² Kement a wél hag a glev, da gement-se e ro testeni, ha nikun ne zegemer e desteni! ³³ An hini a zegemer e desteni a warrant ez eo Doue gwirieg! ³⁴ Rag an Hini e-neus Doue kaset , a lavar komzou Doue, rag n'eo ket diouz muzul e ro Doue ar Spered. ³⁵ An Tad a gar ar Mab, hag e laka pep tra en e zorn! ³⁶ An hini a gred er Mab e-neus Buez peur-baduz! An néb a ziskred diouz ar Mab ne welo ket ar Vuez, med warnañ e chom kounnar Doue!”

4

AOTROU! ROIT DIN AN DOUR-ZE!

Lk 9,52 ¹ Dond a ra eta an Aotrou da c'houzoud o-deus ar Farizeiz klevet lavared: **“Jezuz a c’hounid hag a vadez muioc’h a ziskibien eged Yann!”**, ² - E gwirionez, Jezuz e-unan ne vadez ket, med e Ziskibien! - ; ³ neuze e kuita ar Jude hag ez a adarre d’ar Galile. ⁴ Red eo dezañ avad treuzi ar Samari. ⁵ Degouezoud a ra eta en eur gêr euz ar Samari, anvet Sikar, harp ouz an douar e-neus Jakob roet d’e vab Jozef. ⁶ Eno ema eienenn Jakob. Jezuz eta, skuizet oc’h ober hent, a azez evel-se a-zioc’h an eienenn: wardro ar c’hwec’h-ved eur eo neuze!...

Lk 9,53
Lk 10,29
Lk 17,11 ⁷ Dond a ra eur vaouez euz ar Samari da denna dour. Dezi e lavar Jezuz: **“Ro din da eva!”** ⁸ -rag eet eo e Ziskibien e kêr da brena boued-. ⁹ Dezañ e lavar eta ar vaouez, ar Zamariadez: **“Penaos e teuit, Juzeo ma z’oc’h, da c’houlenn da eva diganin-me, maouez samariad ma z’on ?”** (rag ar Juzevien ne gemeront netra gand ar Zamariz!). ¹⁰ Respont a ra Jezuz o lavared dezi: **“Ma ouezfes Donezon Doue ha piou eo an Hini a lavar dit ‘Ro din da eva’, e c’houlennfes-te digantañ hag e rofe dit eun ‘Dour-Beo’...**

Yn 6,31...
Yn 6,27 ¹¹ Dezañ e lavar ar vaouez: **“Aotrou! N’ho-peus saill ebed, hag ar puñs a zo don! A be-lec’h eta ho-peus-c’hwi an Dour a zo beo ?”** ¹² Daoust ha c’hwi a zo brasoc’h eged on Tad Jakob, e-neus roet deom ar puñs hag e-neus e-unan evet anezañ, hag ive e vugale hag e loened ?”. ¹³ Respont a ra Jezuz o lavared dezi: **“Kement hini a ev euz an dour-ze e-no adarre sehed. ¹⁴ An hini avad a zeuio da eva euz an dour a roin-me dezañ, nann! n’e-no biken sehed! Med an Dour a roin-me dezañ a zeuio da veza ennañ eur stivell a zo he dour o strinka e Buez peurbaduz!”** ¹⁵ Hag ar vaouez a lavar dezañ: **“Aotrou! Roit din an Dour-ze, din da jom heb kaoud sehed, hag heb dond amañ da denna dour!”**

Yn 6,34 ¹⁶ Eñ a lavar dezi: **“Kee da c’helver da bried ha deus amañ!”** ¹⁷ Respont a ra ar vaouez o lavared dezañ: **“N’eus din pried ebed!”** Jezuz a lavar dezi: **“Gwir e lavarez ‘N’eus din pried ebed’! ¹⁸ Rag pemp pried az-peus bet, hag an hini az-peus bremañ n’eo ket pried dit! Gwir e lavarez aze!”** ¹⁹ Hag ar vaouez

I Kor 14,24

Mz 16,14

lavared dezañ: **“Aotrou! Gweled a ran ez oc’h-c’hwi eur Profed! ²⁰ On Tadou-ni o-deus adoret war ar Menez-mañ! Ha c’hwi a lavar: E Jeruzalem ema al Lec’h e ranker mond da adori!...” ²¹ Dezi e lavar Jezuz: **“Kred din, Maouez! Erru an Eur ma ne adoro-c’h ket kén an Tad na war ar Menez-ze, nag e Jeruzalem! ²² C’hwi a ador ar pezh n’anavezit ket! Ni a ador ar pezh a anavezom, rag ar Zilvidigez a zeu euz ar Juzevien! ²³ Rag erru an Eur -hag ema bremañ!-, ma vezo ar gwir adorerien oc’h adori an Tad a spered hag e gwirionez! Hag ema ive an Tad o klask heveleb adorerien! ²⁴ Doue a zo eur Spered! Hag an dud e ador a rank E adori a spered hag e gwirionez!”****

Rom 9,4...

Rom 12,1
2 Kor 3,17

²⁵ Ar vaouez a lavar dezañ: **“Gouzoud a ran eo erru ar Mesiaz (da lavared eo ar C’hris). Pa zeuio Hennez, e tegemenno deom pep tra!” ²⁶ Ha Jezuz a lavar dezi: **“Me-eo-a-zo’, me hag a gomz ganit!”...****

²⁷ Ha war an taol, e tegouez e Ziskibien. Souezet e chomont, m’ema o komz gand eur vaouez... Ne lavar nikun koulskoude: **“Petra emaoc’h o klask?”** pe: **“Perag emaoc’h o komz ganti ?”**
²⁸ Dilezet eta ganti e fod-dour, ez a ar vaouez e kêr, hag e lavar d’an dud: ²⁹ **“Deuit ha gwelit eun Dén hag e-neus lavaret din kement am-eus greet! Daoust ha n’eo ket Hennez ar Mesiaz ?”**
³⁰ Mond a ra an dud er-mêz euz kêr hag e teuont davetañ!

Yn 17,4

³¹ Etretant, ema an Diskibien ouz e bedi o lavared: **“Rabbi! Debrit’ta!” ³² Eñ avad a lavar dezo: **“Bez’ em-eus da zebri eur vagadurez n’anavezit-c’hwi ket!” ³³ An diskibien avad a lavar etrezo: **“Daoust hag unan bennag e-neus degaset dezañ da zebri ?”****
³⁴ Dezo e lavar Jezuz: **“Va magadur-me eo ober bolontez an Hini e-neus va c’haset ha peur-echui e Oberenn!”****

Mz 9,37

Lk 10,2

³⁵ **“Daoust ha ne lavarit ket: **“C’hoaz pevar miz all, hag e vo an east!”** Setu ma lavaran-me deoc’h: **“Savit ho taoulagad ha sellit ouz ar mêziou: bez’ ez int gwenn evid an East! A-vremañ, ³⁶ an Eoster a zegemer e c’hopr ha dastum a ra frouez evid ar Vuez peurbaduz, ma laouennaio an Hader a-unan gand an Eoster! ³⁷ Rag dre-ze eo gwirion ar c’hrenn-lavar: **‘Unan a vez o hada, hag unan all oc’h easti!’ ³⁸ Me am-eus ho kaset da easti ar pezh n’ho-peus ket poaniet warnañ! Tud all o-deus poaniet, ha c’hwi a grog war-lerc’h o foan!”******

Ob 8,14

Yn 1,49
Yn 6,69
Mz 14,33

³⁹ Euz ar gêr-ze, e kred ennañ kalz a Zamariz diwar gomz ar vaouez he-deus roet an testeni-mañ: **“Lavaret e-neus din kement**

1 Yn 4,14 **am-eus greet!”** ⁴⁰ Pa zeu davetañ ar Zamariz, e c’houlennont digantañ chom ganto: ha chom a ra eno daou zevez! ⁴¹ Ha kalz muioc’h a gred Ennañ diwar e Gomz, ⁴² hag e lavaront d’ar vaouez: **“N’eo ket kén diwar da lavar-te e kredom-ni, rag ni on-unan on-eus e glevet! Ha gouzoud a reom eo Hemañ evid gwir Salver ar Béd!”**.

Mz 8,5...
Mz 4,12
Mz 13,57
Lk 7,1

KEE! DA VAB A ZO BEO-BUEZEG!

Yn 2,23

⁴³ Daou zevez goude-ze, ez a ahano d’ar Galile, ⁴⁴ rag Jezuz e-unan a ro an testi: **“Eur Profed ne vez ket enoret en e vro e-unan!”** ⁴⁵ Pa zegouez er Galile, ar C’halileiz e zegemer mad: gwelet o-deus pebez traou e-neus greet e Jeruzalem epad ar Gouel, rag eet e oant ive d’ar Gouel.

Yn 2,1...

Mz 12,38
1 Kor 1,22

⁴⁶ Dond a ra eta adarre da Gana, er Galile, el lec’h m’e-neus troet an dour e gwin! Eno ez eus eun ofiser bennag d’ar roue, hag a zo klañv e vab e Kafarnaom! ⁴⁷ Pa glev eo deuet Jezuz euz ar Jude d’ar Galile, e teu davetañ: e bedi a ra da ziskenn evid para e vab, rag o vond da vervel ema! ⁴⁸ Jezuz a lavar dezañ: **“Nemed sinou ha burzudou ho-pefe gwelet, nann, ne gredoc’h ket!”** ⁴⁹ Dezañ e lavar ofiser ar roue: **“Aotrou! Diskennit araog d’am mabig mervel!”** ⁵⁰ Jezuz a lavar dezañ: **“Kee! Da vab a zo beo-buezeg!”** An dén a gred er Gomz e-neus Jezuz lavaret dezañ hag ez a kuit. ⁵¹ P’ema-eñ war an diskenn, e teu ar zervicherien d’e ziambroug o lavared dezañ eo beo-buezeg e vugel! ⁵² Diganto e c’houlenn eta da béd eur e oa gwelleet! Dezañ e lavaront: **“Dec’h, d’ar zeisved eur, he-deus an derzienn e zilezet!”** ⁵³ Anavezoud a ra an tad ez eo d’an eur-ze e-neus Jezuz lavared dezañ: **“Da vab a zo beo-buezeg!”** Hag e kred, eñ e-unan hag e di a-bez! ⁵⁴ Jezuz a ra an eil sinze, pa zeu euz ar Jude d’ar Galile...

5

KEMER DA WELE HA KEE!

Mz 1,20 ¹ Goude-ze e tegouez Gouel ar Juzevien, hag e sav Jezuz da Jeruzalem. ² E Jeruzalem, e-kichenn Dor-an-Deñved, ez eus eul Lenn, anvet Betezda en hebreeg, a zo dezi pemp porched. ³ Er remañ e vez gourvezet leun a dud klañv: tud dall, re gamm, tud sei-

zet... o c'hedal bourbouill an dour... ⁴ Rag eun êl d'an Aotrou a zis-kenn beb an amzer el Lenn hag e vourbouill an dour: kenta hini a ziskenn goude bourbouill an dour a vez pareet, n'eus forz gand peseurt kleñved e vefe dalhet...

Mz 9,6 ⁵ Bez' ez eus eno avad eun dén dalhet gand e gleñved abaoe eiz vloaz ha tregont! ⁶ O weled an dén gourvezet, hag o klevet ema evel-se abaoe pell amzer, e lavar Jezuz dezañ: **“Ha bez' e fell dit dond da veza yac'h ?”** ⁷ Respont a ra dezañ an dén klañv: **“Aotrou! Pa vourbouill an dour, n'am-eus dén d'am stlepel en dour! Epad ma vezan-me o vond, e tiskenn unan all araozon!”** ⁸ Jezuz a lavar dezañ: **“Sav! Kemer da wele ha kee!”** ⁹ Hag ez eo raktal pareet an dén: kemer a ra e wele ha mond kuit! Sabad a zo avad en deiz-ze!

Lk 6,2 ¹⁰ Ar Juzevien a lavar eta d'an dén pareet: **“Sabad a zo! Ha n'eo ket aotreet ganit dougen da wele!”** ¹¹ Eñ avad a respont dezo: **“An hini e-neus roet din ar yehed, hennez e-neus lavaret din: “Kemer da wele ha kee kuit!”** ¹² Goulenn a reont eta outañ: **“Piou eo an dén e-neus lavaret dit ‘Kemer ha kee kuit!’”** ¹³ An dén pareet ne oar ket piou eo, rag Jezuz e-neus tehet dre laer, pa oa eno kalz tud! ¹⁴ Diwezatoc'h e kav Jezuz an dén en Templ, hag e lavar dezañ: **“Setu te deuet yac'h! Na bec'h ket kén, gand aon na zegouezfe gwasoc'h ganit!”**

Mz 12,14 ¹⁵ Mond a ra an dén da lavared d'ar Juzevien: **“Jezuz eo an Hini e-neus roet din ar pare!”** ¹⁶ Ha setu aze perag ema ar Juzevien o wall-gas Jezuz, p'e-neus greet kement-se d'ar zabad! ¹⁷ Jezuz avad a respont dezo: **“Va Zad a zo beteg amañ oc'h oberia, hag oberia a ran-me ive!”** ¹⁸ Setu perag eta ema ar Juzevien muioc'h c'hoaz o klask e laza: nann hepkén peogwir e torr ar zabad, med ive peogwir e ra, euz Doue, e Dad gwirion, ouz en em lakaad par da Zoue!

Yn 3,11...
Yn 8,28

AR MAB A RO BUEZ D'AR RE A GAR!

Ob 10,42 ¹⁹ Jezuz a zav e vouez da lavared: **“E gwirionez, e gwirionez e lavaran deoc'h: Anezañ e-unan ne c'hell ar Mab ober netra nemed ar pez a wél an Tad oc'h ober: kement tra a ra Hemañ, e ra koulz all ar Mab! ²⁰ Rag an Tad a gar ar Mab ha dezañ e tiskouez an oll draou a ra e-unan! Ha brasoc'h oberou eged ar re-mañ a ziskouezo dezañ, deoc'h-c'hwil da zouezi! ²¹ Rag evel ma adsao an Tad ar re varo, hag evel ma ro dezo buez,**

Fil 2,10
Lk 10,10

evel-se ive, ar Mab a ro buez d'ar re a gar! ²² An Tad ne varn dén ebed: peb barn e-neus roet d'ar Mab, ²³ d'an oll douja ar Mab evel ma toujont an Tad! An néb na zouj ket ar Mab, ne zouj ket an Tad e-neus e gaset!

1 Yn 3,14
Rom 4,1...

²⁴ E gwirionez, e gwirionez e lavaran deoc'h: an hini a zelaou va C'homz hag a gred en Hini e-neus va c'haset, henez e-neus Buez peurbaduz, ha ne gouez ket dindan ar varn, med tremenet eo euz ar maro d'ar Vuez! ²⁵ E gwirionez, e gwirionez e lavaran deoc'h: Erru an Eur -hag ema bremañ!-, ma klevo ar re varo mouez Mab-an-Dén, hag ar re o-do selaouet a vevo!”

Mz 8,22
Ef 2,5

Mz 16,27

²⁶ Hag evel m'e-neus an Tad Buez ennañ e-unan, evel-se ive e-neus roet d'ar Mab kaoud Buez ennañ e-unan, ²⁷ ha dezañ e-neus roet galloud d'ober ar Varn, pa z'eo Mab-an-Dén. ²⁸ Na vezit ket souezet gand kement-mañ: Erru an eur d'ar re oll a zo er béziou da glevet e vouez, ²⁹ ha da zond er-mêz: ar re o-deus greet ar Mad a adsavo er Vuez, ar re o-deus greet an Droug a adsavo er maro! ³⁰ Ne c'hellan-me ober netra ahanon va-unan! Diouz ma klevan e varnan, ha just eo va barn, rag ne glaskan ket va bolontez, med bolontez an Hini e-neus va c'haset.”

AN TAD E-UNAN A RO DIN TESTENI!

Yn 1,19...

Lk 1,17
Yn 1,8

³¹ “Ma roan-me testeni diwar-va-fenn, n'eo ket gwirieg va zesteni! ³² Unan all a zo o rei testeni diwar-va-fenn, ha gouzoud a ran eo gwirieg an testeni a ro din. ³³ Kaset ho-peus tud daved Yann, ha douget e-neus testeni d'ar wirionez! ³⁴ Me avad ne zegemeran ket an testeni digand eun dén, med kement-se a lavaran deoc'h, deoc'h da veza salvet! ³⁵ Henez a oa al lamp o tevi hag o sklêrijenna! C'hwi avad ho-peus c'hoanteet tridal eur pennadig en e sklêrijenn!

1 Yn 5,9
Yn 1,33...
Yn 3,2...
Mz 3,13

³⁶ “Me avad am-eus brasoc'h testeni eged hini Yann: an oberou e-neus va Zad roet din d'ober, an oberou a ran, int-i o-unan a ro an testeni e-neus va Zad va c'haset. ³⁷ Rag an Tad hag e-neus va c'haset, Eñ a ro testeni diwar-va-fenn: n'ho-peus biskoaz klevet e Vouez, ha n'ho-peus ket gwelet e zremm! ³⁸ N'ho-peus ket ive e Gomz o chom ennoc'h, rag ne gredit ket en Hini e-neus kaset! ³⁹ Furchal a rit ar Skrituriou, peogwir e kav deoc'h kaoud enno buez peurbaduz. Ar re-ze ive a ro testeni diwar-va-fenn, ⁴⁰ ha ne fell ket deoc'h dond davedon evid kaoud Buez...”

Lk 24,27...
1 Pêr 1,11

Yn 1,14

⁴¹ “Digand an dud ne zegemeran ket a c’hloar, ⁴² med hoc’h anavezoud a ran: n’ho-peus ket karantez Doue ennoc’h hoc’h-unan! ⁴³ Me a zeu en Ano va Zad, ha c’hwi n’am degemerit ket! Ma teu unan all en e ano e-unan, hennez a zegemeroc’h!

Mz 24,5
Rom 2,29
1 Tes 2,6

⁴⁴ Penaoz e c’hellfec’h kredi, pa zegemerit gloar an eil digand egile, ha ne glaskit ket ar c’hloar a zeu digand Doue hepkén ?”

Lk 16,31

⁴⁵ “Na zoñjit ket ez in-me d’ho tamall dirag an Tad! Ho tamaller eo Moizez, a lakit ennañ ho fiziañs! ⁴⁶ Rag ma kredfec’h e Moizez, e kredfec’h ennon-me, rag diwar-va-fenn e-neus skrivet. ⁴⁷ Ma ne gredit ket avad en e skridou, penaoz e kredoc’h em lavarou-me ?”

6

PE-LEC’H E PRENIM-NI BARA ?

Mz 14,13...
Mk 6,32...
Lk 9,10...

¹ Goude-ze ez a Jezuz en tu-all da Vor-ar-Galile, a zo Mor Tiberiad! ² D’e heul, ez a leun a dud, rag gwelet o-deus ar zinou e-neus greet war an dud klañv. ³ Sevel a ra Jezuz war ar Menez, hag ec’h azez eno gand e Ziskibien. ⁴ Tost avad eo ar Pask, Gouel ar Juzevien. ⁵ O sevel eta e zaoulagad, e wél Jezuz leun a dud o tond davetañ, hag e lavar da Filip: **“Pe-lec’h e prenim-ni baraennou, ma tebro an dud-mañ ?”** ⁶ Lavared a ra an dra-ze evid e denti, rag bez’ e oar e-unan petra ema o vond d’ober... ⁷ Filip a respont dezañ: **“Daou c’hant dinerad a varaennou ne rafent ket awalc’h dezo, a-benn kaoud pep hini eun tammig!”** ⁸ Dezañ e lavar unan euz e Ziskibien, Andre, breur da Zimon-Pêr: ⁹ **“Bez’ ez eus amañ eur paotrig a zo dezañ pemp baraenn ha daou besk, med petra an dra-ze evid kemend-all a dud!...”**

Lk 22,1

¹⁰ Jezuz avad a lavar dezo: **“Grit d’an dud gourvez!”** Founnuz eo ar yeot en dachenn-ze: gourvez a ra eta ar wazed, war-dro pemp mil a zo anezo! ¹¹ Jezuz a gemer eta ar baraennou, a lavar trugarez, hag o ro d’an dud gourvezet ; evel-se e ro ive ar pesked, kement ha ma karont! ¹² P’o-deus leiz-kov, e lavar d’e Ziskibien: **“Dastumit an tammou a jom, evid na z’αιο netra da goll!”** ¹³ Dastum a reont eta ha karga daouzeg paner gand an tammou a jom a-zilerc’h an dud o-deus debret. ¹⁴ O weled eta ar zin e-neus greet, e lavar an dud: **“Hemañ eo evid gwir ar Profed a zo da zond er**

Yn 18,36
Mk 1,14

Béd!” ¹⁵ Jezuz eta, anad dezañ emaint o vond da baka krog ennañ evid e lakaad da Roue, a dec’h adarre kuit e-unan-penn warzu ar Menez...

PA WELONT JEZUZ O VALE WAR AR MOR!

Mz 14,22...
Mk 6,42...

¹⁶ Deuet an abardaez, e tiskenn e Ziskibien beteg ar mor ; ¹⁷ hag e savont en eur vag evid mond d’an tu-all d’ar mor, da Gafarnaom. Deuet eo bremañ an deñvalijenn, ha n’eo ket c’hoaz deuet Jezuz daveto. ¹⁸ Gand ar gorventenn a zo o c’hweza, ema ar mor o wagenna! ¹⁹ Roeñvet o-deus a-hed wardro pemp stad war’n-ugent pe dregont, pa welont Jezuz o vale war ar mor hag o tostaad outo: hag e krog aon enno! ²⁰ Eñ avad a lavar dezo: “**‘Me-eo-a-zo’! N’ho-pet ket aon!’**” ²¹ Bez’ e fell dezo e gemer er vag, ha raktal e tegouez ar vag d’an douar, el lec’h ma z’eont...

‘ME-EO-A-ZO’ BARA AR VUEZ!

²² En deiz war-lerc’h, an dud chomet en tu-all d’ar mor a wél na oa eno bag all ebed nemed unan, ha ne oa ket eet Jezuz er vag gand e Ziskibien: ne oa eet kuit nemed an Diskibien! ²³ Dond a ra bagou all euz Tiberiad, a zo tost ouz al lec’h m’o-deus debret ar bara goude d’an Aotrou beza lavaret trugarez! ²⁴ Pa wél eta an dud n’ema ket Jezuz eno nag e Ziskibien, e savont ive er bagou hag ez eont da Gafarnaom da glask Jezuz. ²⁵ Hag e gavout a reont en tu-all d’ar mor hag e lavaront dezañ: “**Rabbi! Peur oc’h-c’hwí deuet amañ ?**”

Mz 8,10
Mz 16,12

²⁶ Jezuz a respont dezo: “**E gwirionez, e gwirionez e lavar-an deoc’h: Va c’hlask a rit, n’eo ket ablamour m’ho-peus gwel-let sinou, med ablamour m’ho-peus debret ar baraennou ha ma z’oc’h bet maget!**” ²⁷ Deoc’h oberia, n’eo ket evid ar vagadurez a ia da fall, med evid ar Vagadurez a jom beteg ar vuez peurbaduz, an Hini a roio deoc’h Mab-an-Dén! Hemañ e-neus Doue an Tad merket gand e ziell!” ²⁸ Dezañ e lavaront eta: “**Petra eo deom-ni seveni evid ober oberou Doue ?**” ²⁹ Respont a ra Jezuz o lavared dezo: “**Setu amañ Oberenn Doue: rei deoc’h kredi en hini e-neus-Eñ kaset!**” ³⁰ Dezañ e lavaront: “**C’hwí eta, peseurt sin a rit, deom da weled ha da gredi ennoc’h ? Peseurt oberenn a rit-c’hwí ?**” ³¹ On Tadou o-deus debret ar Mann er gouelec’h, evel m’eo skrivet: *‘Bara euz an Neñv a roas dezo da zebri!’*” ³²

Rom 3,30...
1 Yn 3,21
Gal 3,11...
Mk 8,11
Lk 11,29

Salm 78,24

Jezuz eta a lavar dezo: “E gwirionez, e gwirionez e lavaran deoc’h: n’eo ket Moizez e-neus roet deoc’h ar Bara euz an Neñv, med va Zad a ro deoc’h ar Bara euz an Neñv, an Hini gwirion! ³³ Rag Bara Doue eo an Hini a ziskenn euz an Neñv hag a ro Buez d’ar Béd!” ³⁴ Hag int-i lavared dezañ: “Aotrou! Roit deom-ni bepred ar Bara-ze!” ³⁵ Jezuz a lavar dezo: “Me-eo-a-zo’ Bara ar Vuez! An hini a zeu davedon, nann! n’e-no ket naon! Hag an hini a gred ennon, nann! n’e-no biken sehed! ³⁶ Med lavared a ran deoc’h: Va gweled a rit! ha ne gredit ket!”

Mz 11,28 ³⁷ “Kement hini a ro din va Zad a zeuio davedon! hag an hini a zeu davedon, ne z’in ket d’e daoler er-mêz, ³⁸ rag n’ou ket diskennet euz an Neñv evid ober va bolontez, med bolontez an hini e-neus va c’haset! ³⁹ Ha setu amañ bolontez an Hini e-neus va c’haset: euz kement e-neus roet din, din-me diwall da goll eun unan, med d’e adsevel d’an Deiz diweza! ⁴⁰ Rag setu amañ bolontez va Zad: Ma teuio kement hini a wél ar Mab hag a gred ennañ da gaoud Buez peurbaduz, hag e adsevel a rin-me d’an Deiz diweza!”

Mz 13,54...
Lk 4,22...
Mk 6,1...
1 Tim 2,4
Mz 16,17
Jer 31,33...
Yn 1,18
⁴¹ Hag ar Juzevien eta da c’hrozmolad diwar-benn e Gomz, peogwir e-neus lavaret: “ ‘Me-eo-a-zo’ ar Bara diskennet euz an Neñv!” ⁴² Hag e lavaront: “Daoust ha n’eo ket Hemañ Jezuz-Mab-Jozef, a anavezom-ni e dad hag e vamm ?... Penaoz e lavar bremañ: “Euz an Neñv ez on-me diskennet ?” ⁴³ Respont a ra Jezuz o lavared dezo: “Na c’hrosmolit ket etrezoc’h! ⁴⁴ Ne c’hell dén dond davedon, ma ne vez ket sachet gand an Tad e-neus va c’haset! ha me e adsavo d’an deiz diweza! ⁴⁵ Skrivet eo er Brofeded: “Bez’ e vezint oll kelennet gand Doue!” Kement hini a zelaou an Tad hag a zesk digantañ a zeu davedon! ⁴⁶ N’eo ket e-nije unan-bennag gwelet an Tad, nemed an Hini a zeu euz Doue: Hennez a wél an Tad!”

Rom 4,1...
1 Kor 10,3...
Lk 22,19
1 Kor 11,24
Heb 10,5
⁴⁷ “E gwirionez, e gwirionez e lavaran deoc’h: an hini a gred e-neus Buez peurbaduz! ⁴⁸ ‘Me-eo-a-zo’ Bara ar Vuez! ⁴⁹ Ho Tadou o-deus debret ar Mann er gouelec’h, hag ez int bet marvet! ⁵⁰ Evel-henn eo ar Bara a ziskenn euz an Neñv: an hini a zebr anezañ, nann! ne varvo ket! ⁵¹ ‘Me-eo-a-zo’ ar Bara-Beo diskennet euz an Neñv: ma tebr unan bennag euz ar Bara-ze, hennez a vevo da viken! Hag ar Bara a roin-me eo va C’horv roet evid Buez ar Béd!”

⁵² Hag ar Juzevien eta da rendael kenetrezo o lavared: “Penaoz e c’hell Hemañ rei deom e Gorv da zebri ?” ⁵³ Dezo e

Mz 8,20 lavar Jezuz: **“E gwirionez, e gwirionez e lavaran deoc’h: Ma ne zebrit ket Korv Mab-an-Dén ha ma ne evit ket e Wad, n’ho-peus ket Buez ennoc’h hoc’h-unan! ⁵⁴ An hini a zebr va C’horv hag a ev va Gwad e-neus Buez peurbaduz, ha me e adsavo d’an Deiz diweza!”.**

1 Yn 2,24 ⁵⁵ **“Rag va C’horv a zo gwir Vagadurez, ha va Gwad a zo gwir Evaj! ⁵⁶ An hini a zebr va C’horv hag a ev va Gwad a zo o chom ennon ha me ennañ! ⁵⁷ Evel m’e-neus va c’haset an Tad leun a Vuez, ha ma vevan-me dre an Tad, an hini a zeu d’am debri, hennez ive a vevo drezon-me. ⁵⁸ Evel-henn eo ar Bara diskennet euz an Neñv: n’eo ket evel an hini o-deus debret an Tadou, rag marvet int bet! An hini a zebr ar Bara-mañ a vevo da viken!”.**

⁵⁹ Kement-se a lavar o kelenn en eur zinagog e Kafarnaom...

C’HWI EO HO-PEUS KOMZOU BUEZ PEURBADUZ!

2 Kor 3,6
Yn 1,33
Yn 1,48 ⁶⁰ Ouz e glevet, e lavar kalz euz e Ziskibien: **“Kaled eo ar Gomz-ze! Piou a c’hellfe he zelaou ?” ⁶¹ Gouzoud a ra Jezuz ennañ e-unan ema e Ziskibien o c’hrozmolad diwar goust an draze, hag e lavar dezo: “Kement-se a zo deoc’h eur skoill ? ⁶² Ha ma weloc’h eta Mab-an-Dén o sevel d’al lec’h m’edo a-ziaraog ? ⁶³ Ar Spered eo a ro Buez: an natur-den ne dalvez da netra! Ar C’homzou a lavaran-me deoc’h a zo Spered hag a zo Buez! ⁶⁴ Med bez’ ez eus en ho touez tud ha ne gredont ket!”.** Rag adal ar penn-kenta e ouie Jezuz pe re eo a ziskred, ha piou eo an hini a zo o vond d’e rei, ⁶⁵ hag e lavar: **“Ablamour da-ze em-eus lavaret deoc’h: ’Ne c’hell dén dond davedon, ma ne vez ket roet dezañ gand va Zad!”.**

Mz 14,33
Mz 16,16
Yn 17,19
Yn 13,10 ⁶⁶ Diwar neuze, ez a kalz euz e Ziskibien war o c’hiz ha ne valeont ket kén gantañ! ⁶⁷ Jezuz a lavar eta d’an Daouzeg: **“Daoust ha ne fell ket deoc’h-c’hwil ive mond kuit ?...” ⁶⁸ Dezañ e respont Simon-Pèr: “Aotrou! Daved piou ez aim-ni ? C’hwil eo ho-peus komzou a Vuez peurbaduz! ⁶⁹ Ha ni a oar hag a gred ez oc’h-c’hwil Sant Doue!” ⁷⁰ Jezuz a respont dezo: “Daoust ha n’am-eus-me ket ho tibabet, c’hwil, ho-taouzeg ? Hag ahanoc’h, unan a zo eun diaoul!” ⁷¹ Komz a ra euz Judaz-Mab-Simon-Iskariod, rag hemañ a zo o vond d’e rei, hag eñ beza unan euz an Daouzeg!...**

7

PERAG E KLASKIT VA LAZA ?

Mk 9,30

¹ Diwar neuze, e chom Jezuz da vale er Galile, rag ne fell ket dezañ bale er Jude, p'ema ar Juzevien o klask e laza. ² Deuet eo tost Gouel ar Juzevien, Gouel an Teltennou. ³ Dezañ e lavar eta e vreudeur: **“Kerzit ahalenn ha kit d’ar Jude, ma welo ive ho Tiskibien an oberou a rit! ⁴ Rag ne ra dén netra e-kuz pa glask beza gwelet frêz! Ma rit an traou-ze, en em ziskouezit d’ar Béd!”** ⁵ E vreudeur zoken ne gredont ket ennañ! ⁶ Jezuz eta a lavar dezo: **“N’eo ket c’hoaz ar poent din-me! Deoc’h-c’hwi avad e vez ar poent mad bepred! ⁷ Ne c’hell ket ar Béd ho kasaad! Med va c’hasaad a ra, pa destenian-me diwar-e-benn ez eo fall e oberou! ⁸ C’hwi eta, savit d’ar Gouel-ze! Me ne zavan ket c’hoaz d’ar gouel-ze, rag ar poent din-me n’eo ket c’hoaz deuet da-vad!”** ⁹ Evel-se e lavar dezo, hag e chom er Galile...

Mz 5,15
Mz 12,46Mz 27,63
Yn 13,9
Yn 19,38

¹⁰ Goude m’eo savet e vreudeur d’ar Gouel, neuze e sav ive, n’eo ket a-wél, med evel dre guz! ¹¹ Ar Juzevien avad a zo ouz e glask epad ar Gouel, en eur lavared: **“Pelec’h ema Henez ?”** ¹² Ha diwar-e-benn ez eus kalz a c’hrozmol e-touez an dud: lod a lavar: **“Mad eo an Dén!”**, lod all avad a lavar: **“N’eo ket! med touella a ra an dud!”** ¹³ Nikun koulskoude ne gomz frêz diwar-e-benn, gand aon rag ar Juzevien...

Mz 7,28

¹⁴ Hanteret mad eo bremañ ar Gouel, pa zav Jezuz d’an Templ, hag e stag da gelenn. ¹⁵ Chom a ra eta souezet ar Juzevien, hag e lavaront: **“Penaoz e oar ema ar Skrituriou, pa n’e-neus ket studiet ?”** ¹⁶ Dezo eta e respont Jezuz o lavared: **“Va C’helennadurez n’eo ket va hini-me, med hini an Tad e-neus va c’haset! ¹⁷ Ma klask unan bennag ober bolontez Doue, henez a anavezo pe euz Doue e teu va C’helennadurez, pe ahanon va-unan e komzan! ¹⁸ An hini a gomz anezañ e-unan a glask e c’hloar e-unan! An hini avad a glask gloar an Hini e-neus e gaset, Henez a zo gwirieg, ha n’eus ket ennañ a zisleald!”**

Yn 5,41...

Rom 2,17-29

Mk 3,21...

¹⁹ **“Daoust ha n’eo ket Moizez e-neus roet deoc’h al Lezenn ? Ha nikun ahanoc’h ne vir al Lezenn! Perag emac’h o klask va laza ?”** ²⁰ Respont a ra an dud: **“Daoust hag eun diaoul a zo ennoc’h ? Piou a glask ho laza ?”** ²¹ Jezuz a respont o lavared dezo: **“Eun oberenn hepken am-eus greet, hag emac’h oll o**

Ob 7,8

souezi! ²² Gand-se e-neus Moizez roet deoc’h an amdroc’h -ha c’hoaz, ne zeu ket euz Moizez, med euz an Tadou-meur-, ha d’ar zabad zoken ec’h amdrohit eun dén ; ²³ ma tegemer eun dén an amdroc’h d’ar zabad evid na vo ket torret Lezenn Voizez, perag ho-peus-c’hwi droug ouzin p’am-eus pareet eun dén en-e-bez da zeiz ar zabad ? ²⁴ Na varnit ket diouz an dremm! Med barnit ar varn reiz!”.

Mz 12,1...

Lk 13,5...

HA GOUZOUZ A RIT A-BE-LEC’H EZ ON!

²⁵ Lavared a ra eta lod euz ar Jeruzalemiz: “Daoust ha n’eo ket Hemañ emaint o klask laza ? ²⁶ Setu Eñ o komz a-wél d’an oll, ha ne lavaront netra dezañ! Daoust hag eur wech evid gwir o-deus ar renerien anavezet eo Hemañ ar Mesiaz ? ²⁷ Med Hemañ ec’h ouzom a-be-lec’h e teu! Ar Mesiaz avad, pa zeuio, ne ouezo dén ebed a-be-lec’h e vo!” ²⁸ Jezuz eta a youc’h o kelenn en Templ: “Ha va anavezoud a rit, ha gouzoud a rit ive a-be-lec’h ez on-me ? N’on-me ket deuet ahanon va-unan, ha gwirion eo an Hini e-neus va c’haset, Eñ ha n’anavezit-c’hwi ket! ²⁹ Me e anavez, rag dioutañ e teuan , hag Eñ e-neus va c’haset!” ³⁰ Klask a reont eta paka krog ennañ, med ne daol dén e zorn warnañ, rag n’eo ket c’hoaz deuet e Eur! ³¹ E-touez an dud avad, kalz a gred ennañ, en eur lavared: “Ar Mesiaz, pa zeuio, daoust ha muioc’h a zinou a raio eged na ra Hemañ ?” ³² Ar Farizeiz a glev an dud o c’hrozmolad kement-se diwar-e-benn: hag ar Veleien-Vraz hag ar Farizeiz a gas gwarded da baka krog ennañ...

Mz 11,27

Lk 12,27

Yn 8,30...

Yn 10,42...

Yn 12,42...

Yn 8,21

Yn 16,16

³³ Jezuz eta a lavar: “Evid berr amzer emeon c’hoaz ganeoc’h, hag ez an kuit daved an Hini e-neus va c’haset! ³⁴ Va c’hlask a reoc’h ha n’am c’havoc’h ket! Rag d’al Lec’h ez an-me, ne c’hellit ket dond!” ³⁵ Lavared a ra eta ar Juzevien an eil d’egile: “Da be-lec’h ez a Henez, pa ne c’hellom-ni ket e gavoud ? Daoust hag o vond ema daved ar Juzevien skignet e-touez ar C’hrezianed, ha da gelenn ar C’hrezianed ? ³⁶ Petra eo ar Gomz-e-neus-Eñ lavaret: “Va c’hlask a reoc’h ha n’am c’havoc’h ket!” hag ive “D’al Lec’h ez an-me, c’hwi, ne c’hellit ket dond!”.

EUZ E GREIZ E REDO STÈRIOU A ZOUR BUEZEG!

³⁷ D’an deiz diweza ha d’ar brasa euz ar Gouel, ema Jezuz en e zav: youhal a ra o lavared: “An hini e-neus shed, ra zeuio

Iz 44,3
Iz 55,1
Disk 22,1

davedon ha ra evo! ³⁸ **An hini a gred ennon, evel ma lavar ar Skritur, ‘euz e greiz e redo stêriou a Zour-Beo’**” ³⁹ Kement-se a lavar diwar-benn ar Spered ema o vond da zegemer ar re a gred ennañ ; rag n’eus ket c’hoaz a Spered, pa n’eo ket c’hoaz Jezuz peurleniet a c’hloar!

Mz 7,5
Lk 2,4

⁴⁰ Lod euz an dud eta, o kleved ar C’homzou-ze, a lavar: **“Evid gwir, Hemañ eo ar Profed!”** ⁴¹ Lod all a lavar: **“Hemañ eo ar Mesiaz!”** Re all avad a lavar: **“Daoust hag euz ar Galile e teuo ar Mesiaz ?** ⁴² **Daoust ha ne lavar ket ar Skritur: “Euz lignez David, hag euz Betleem, ar gêriadenn m’edo David o chom enni, e teuo ar Mesiaz!”** ⁴³ Freuz a zo eta e-touez an dud diwar-e-benn! ⁴⁴ Lod avad a fell dezo paka krog ennañ, med nikun ne daol warnañ e zaouarn...

Mz 7,28

Mz 13,54...

Mz 16,14

⁴⁵ Dond a ra eta ar warded daved ar Veleien-Vraz hag ar Farizeiz, hag ar re-mañ a lavar dezo: **“Perag n’ho-peus ket e zegaset ganeoc’h ?”** ⁴⁶ Respont a ra ar warded: **“Biskoaz n’e-neus dén komzet evel-se, evel ma komz an dén-ze!”** ⁴⁷ Dezo e lavar ar Farizeiz: **“Daoust ha c’hwi ive a zo bet touellet ?** ⁴⁸ **Daoust hag unan bennag euz ar renerien e-neus kredet ennañ ? Pe euz ar Farizeiz ?** ⁴⁹ **Med an dudachou-ze ha ne anavezont ket al Lezenn, a zo anezo tud milliget!”** ⁵⁰ Dezo e lavar Nikodem, an hini a zo bet kent ouz e gavoud, hag a zo unan anezo: ⁵¹ **“Daoust hag al Lezenn a varn an dén heb kleved da genta digantañ hag heb gouzoud petra e-neus greet ?”** ⁵² Respont a reont o lavared dezañ: **“Daoust ha te ive a zo euz ar Galile ? Furch ha gwél: euz ar Galile ne zav Profed ebed!”** ⁵³ Ha pep hini mond diouz e du...

8

DIWAR VREMAÑ, NA BEC’H KET KEN!

Lk 21,37

Lk 7,57...

¹ Jezuz a zav war Menez-an-Olived! ² Kerkent ha deiz, e teu adarre d’an Templ ; davetañ e teu an oll, hag Eñ, azezet, a stag d’o c’helenn. ³ Ar Skribed hag ar Farizeiz a zegas dezañ eur vaouez paket e-kreiz avoultri. He lakaad a reont en he zav, er c’hreiz, ⁴ en eur lavared dezañ: **“Mestr! ar vaouez-mañ a zo bet paket war-an-taol, e-kreiz avoultri!** ⁵ **El Lezenn avad e-neus Moizez gourhemennet deom labeza seurt merhed! C’hwi eta, petra lavarit ?”**

Yn 8,6-24

Mz 22,18
Lk 20,20

6 An dra-ze a lavaront evid e denti, a-benn gelloud e damall! Jezuz avad, daou-bleget, a skriv gand e viz war an douar! 7 Pa zal-hont gand o goulenn, e teu da ziblega hag e lavar dezo: **“An hini dibec’h en ho touez, dezañ da genta taoler eur mên!”** 8 Adarre daou-bleget, e talc’h da skriva war an douar! 9 Ouz e gleved avad, e tehont kuit an eil goude egile, ar re gosa da genta, beteg ar re ziwe-za! Lezet eo Jezuz e-unan-penn, hag ar vaouez en he zav, e-kreiz!

Mz 22,22

Rom 2,22

10 Diblega a ra Jezuz hag e lavar dezi: **“Maouez! Pe-lec’h emaint ? Nikun n’e-neus da varnet ?”** 11 Hi avad a lavar: **“Nikun! Aotrou!”** **“Na me kennebeud, me n’az-parnan ket! Kee! Ha diwar-vremañ, na bec’h ket kén!”**

Yn 5,14

NE ANAVEZIT NA ME NA VA ZAD!

Yn 1,5
Yn 12,46

12 Adarre e komz dezo Jezuz o lavared: **“ ‘Me-eo-a-zo’ Sklêrijenn ar Béd! An hini a zeu d’am heul, nann! ne vale ket en Deñvalijenn, med bez’ e-no Sklêrijenn ar Vuez!”** 13 Dezañ e lavar ar Farizeiz: **“C’hwi a ro testeni diwar-ho-penn! Ho testeni n’eo ket gwirieg!”** 14 Jezuz a respont o lavared dezo: **“Ha goude-din rei testeni diwar-va-fenn, gwirieg e vez va zesteni, rag gouzoud a ran a-be-lec’h e teuan ha da be-lec’h ez an! Med c’hwi ne ouezit ket nag a-be-lec’h e teuan na da-be-lec’h ez an-me! 15 C’hwi a varn hervez an natur-dén! Me ne varnan dén ebed! 16 Ha ma varnan, gwirion e vez va barn, rag n’emaon ket ouzon va-unan, med ganin e vez an Tad e-neus Va c’haset! 17 Hag en ho Lezenn-c’hwi eo skrivet: ‘Testeni daou zén a zo gwirieg!’ 18 Me a ro testeni diwar-va-fenn, ha diwar-va-fenn e ro testeni an Tad e-neus va c’haset!”** 19 Dezañ e lavaront: **“Pe-lec’h ema ho Tad ?”** Respont a ra Jezuz: **“Ne anavezit na Me na va Zad!”** 20 Ar C’homzou-ze a lavar dirag an Teñzor, o keleñn en Temp! Ne grog nikun ennañ! N’eo ket c’hoaz deuet e Eur!

Dt 17,6
1 Yn 5,9

Lk 22,53

NEUZE E OUEZOC’H EO ‘ME-EO-A-ZO’!

Yn 13,33
Mz 12,31

21 Adarre e lavar dezo: **“O vond kuit emañ! Va c’hlask a reoc’h hag en ho pehed e varvoc’h! D’al lec’h ez an-me, c’hwi, ne c’hellit ket dond!”** 22 Lavared a ra ar Juzevien: **“Daoust ha mond a ra d’en em laza, pa lavar: ‘D’al lec’h ez an, c’hwi ne c’hellit ket dond ?’ 23 Hag e lavar dezo: ‘C’hwi a zo euz an traoñ! ‘Me-eo-a-zo’ euz an Nec’h! C’hwi a zo euz ar Béd-mañ! Me n’on ket euz ar Béd-mañ! 24 Deoc’h eta am-eus lavaret:**

Yn 3,31

Gal 3,11... **“Mervel a reoc’h en ho pehejou! Rag ma ne gredit ket ‘Me-eo-a-zo’, e varvoc’h en ho pehejou!”** ²⁵ Dezañ e lavaront: **“Piou a zo ahanoc’h-c’hwi?”** Jezuz a lavar dezo: **“Adal ar penn-kenta, ar pezh a lavaran deoc’h! ²⁶ Kalz am-eus da lavared diwar-ho-penn ha da varn! Med an Hini e-neus va c’haset a zo gwirieg hag ar pezh a glevan gantañ, an dra-ze a lavaran d’ar Béd!”**

²⁷ Ne ouezont ket ema o komz dezo euz an Tad...

Yn 12,32 ²⁸ Jezuz eta a lavar: **“Goude m’ho-po savet uhel Mab-an-Dén, neuze e ouezoc’h ez eo ‘Me-eo-a-zo’, rag ne ran netra ahanon va-unan, med evel ma tesk din an Tad, evel-se e lavaran! ²⁹ Ganin ema an Hini e-neus va c’haset, rag ar pezh a blij dezañ a ran-me bepred!”** ³⁰ Pa lavar kement-se, e teu kalz tud da gredi ennañ...

Mz 3,9 ³¹ Jezuz eta a lavar d’ar Juzevien a zo deuet da gredi ennañ: **“Ma kendalhit em C’homzou-me, evid gwir ez oc’h va diski-bien! ³² C’hwi a anavezo ar wirionez, hag ar wirionez ho frankizo!”** ³³ Dezañ e respontont: **“Lignez Abraham ez om-ni! Ha n’om-ni bet biskoaz sklaveet da zén! Penaoz e lavarit ; ‘frankizet e vezoc’h!’”** ³⁴ Jezuz a respont dezo: **“E gwirionez, e gwirionez e lavaran deoc’h: kement hini a ra ar pehed, a zo sklav d’ar pehed! ³⁵ Ar sklav avad ne jom ket en Ti da viken! Ar Mab a jom da viken! ³⁶ Ma teu eta ar Mab d’ho frankiza, evid gwir e vezoc’h frank!”**

1 Yn 3,8 ³⁷ **“Gouzoud a ran ez oc’h-c’hwi Lignez Abraham! Med emaoc’h o klask va laza, pa ne gav va C’homz digor ebed ennoc’h! ³⁸ Me a lavar ar pezh a welan gand va Zad, ha c’hwi a ra ar pezh a glevit gand ho tad!”** ³⁹ Respont a reont o lavared dezañ: **“On tad deom-ni eo Abraham!”** Ha Jezuz a lavar dezo: **“Ma vefec’h bugale da Abraham, e rafec’h oberou Abraham! ⁴⁰ Bremañ avad emaoc’h o klask va laza, me, eun dén hag a lavar deoc’h ar wirionez am-eus klevet gand Doue! An dra-ze, Abraham n’e-neus ket greet! ⁴¹ C’hwi a ra oberou ho tad!”** Hag e lavaront dezañ: **“Ni n’om ket ganet diwar zerherez! N’eus deom nemed eun Tad: Doue!”**

1 Yn 5,1
Rom 9,6...
Mz 12,34
Rom 8,7
Rom 5,12 ⁴² Dezo e lavar Jezuz: **“Ma vefe Doue ho Tad, va c’hared a rafec’h, rag euz Doue on-me deuet hag e tegouezan! Rag n’om ket deuet ahanon va-unan! Eñ e-neus va c’haset! ⁴³ Perag ne anavezit ket va lavarou-me? Ablamour na c’hellit ket selaou va C’homz! ⁴⁴ C’hwi a denn d’ho tad, an Diaoul! ha c’hoantege-**

1 Yn 3,8
2 Pêr 2,4

2 Kor 5,21

1 Yn 4,6

Mk 3,21...

ziou ho tad a fell deoc'h ober: hennez a zo eul lazer-tud abaoe ar penn-kenta! N'e-neus ket dalhet ar Wirionez, rag n'eus ket ennañ eun tamm gwirionez! Pa zeu gevier gantañ, e tibun traou euz e zanvez e-unan, rag gaouiad eo ha tad ar gaou.⁴⁵ Ablamour ma lavaran ar wirionez, c'hwi n'am c'hredit ket!⁴⁶ Piou en ho touez a ziskouezo anad ez on-me peher? Ha ma lavaran ar wirionez, perag n'am c'hredit ket?⁴⁷ An Hini a zo euz Doue a zelaou lavarou Doue! Setu perag n'am zelaouit ket: n'oc'h ket euz Doue.”⁴⁸ Respont a ra ar Juzevien o lavared dezañ: “Daoust ha ne lavarom-ni ket gand gwir ez eus ahanoc'h eur Zamariad, hag ez eus ennoc'h eun droug-spered?”⁴⁹ Respont a ra Jezuz: “N'eus ennon-me droug-spered ebed! Med douja a ran va Zad, ha c'hwi am dispriz!⁵⁰ Me ne glaskan ket va gloar: bez' ez eus Unan ouz he c'hlsk hag o varn!”

EVID ABRAHAM, ARAOG MA OA ANEZAÑ, 'ME-EO-A-ZO'!

Mz 13,17
Lk 17,22

⁵¹ “E gwirionez, e gwirionez e lavaran deoc'h: an hini a vir va C'homz, nann! ne welo biken ar maro!”⁵² Dezañ e lavar ar Juzevien: “Bremañ ec'h ouzom ez eus ennoc'h eun droug-spered! Abraham a zo bet marvet! Ar Brofeded ive! Ha c'hwi a lavar: ‘an hini a vir va C'homz, nann, ne dañvo biken ar maro!’⁵³ Daoust ha c'hwi a zo brasoc'h eged an Tad-Meur Abraham, hag a zo bet marvet! Piou a rit ahanoc'h hoc'h-unan?”⁵⁴ Respont a ra Jezuz: “Ma roan gloar din va-unan, va gloar n'eo netra! Va Zad eo a ro gloar din, Eñ hag a zo, emezoc'h, ho Toue!⁵⁵ C'hwi n'e anavezit ket! Me avad e anavez, ha ma teuan da lavared ‘N'e anavezan ket!’, e vezin eur gaouiad heñvel ouzoc'h! Med e anavezoud a ran hag e Gomz a viran!⁵⁶ Abraham, ho Tad-Meur, e-neus tridet o soñjal gweled va Deiz-me! E wetet e-neus hag e-neus c'hoarzet!”⁵⁷ Dezañ e lavar eta ar Juzevien: “N'oc'h ket c'hoaz hanter-kant vloaz, hag ho-peus gwelet Abraham!”⁵⁸ Ha Jezuz a lavar dezo: “E gwirionez, e gwirionez e lavaran-me deoc'h: Evid Abraham, araog ma oa anezañ, ‘Me-a-zo!’”⁵⁹ Tapoud a reont eta mein da stlepel warnañ!...

Lk 4,29

Jezuz avad a ia da guzad hag e kuita an Templ...

9

DALL E OAN-ME! BREMAÑ E WELAN!

Ob 3,2
Lk 13,2...
Yn 8,12
Mk 8,23

¹ En eur dremen, e wél Jezuz eun dén ganet-dall! ² Hag e Ziskibien a c'houlenn outañ: **“Rabbi, emezo, piou e-neus pehet ? Hemañ pe e dud, dezañ da veza ganet dall!”** ³ Jezuz a respont: **“Nag hemañ n’e-neus pehet, nag e dud! Degouezet eo ma vo oberou Doue disklêriet ennañ!** ⁴ Din-me eo red ober oberou an Hini e-neus va c’haset, keid ha m’eo Deiz! Erru an noz, pa ne c’hell dén oberia! ⁵ Keid ha m’emaon er Béd, ‘Me-eo-a-zo’ Sklêrijenn ar Béd!”

Mz 12,10
Lk 13,10

⁶ Diwar ar C’homzou-ze, e tuf Jezuz d’an douar, e ra pri gand e halo, e led ar pri war e zaoulagad, ⁷ ha dezañ e lavar: **“Kee d’en em welhi el ‘Lenn Siloe’ (da lavared eo: Lenn ar C’hannad).”** Mond a ra d’en em welhi, hag e teu en dro en eur weled sklêr! ⁸ E amezeien hag an dud o-deus e welet araog (rag bez’ e oa kester!), a lavar: **“Daoust ha n’eo ket hennez a veze azezet o kestal ?”** ⁹ Lod a lavar: **“Henez an hini eo!”** Lod all a lavar: **“N’eo ket! Med unan heñvel outañ!”** Eñ avad a lavar: **“Me an hini eo!”** ¹⁰ Dezañ e lavaront: **“Penaoz’ ta eo bet digoret dit da zaoulagad ?”** ¹¹ Respont a ra: **“An Dén galvet Jezuz e-neus greet pri, hag e ledet e-neus war va daoulagad, ha din e-neus lavaret: “Kee da Lenn Siloe d’en em welhi !” Eet on eta d’en em welhi, hag e welan sklêr!”** ¹² Dezañ e lavaront: **“Pe-lec’h ema Hennez ?” - “N’ouzon ket!”** emezañ...

Mz 12,10
Lk 13,10

¹³ Daved ar Farizeiz e kasont an dén-ze a oa kent* dall! ¹⁴ Bez’ e oa sabad d’an deiz m’e-neus Jezuz greet pri ha digoret dezañ e zaoulagad. ¹⁵ D’o zro eta e c’houlenn digantañ ar Farizeiz penaoz eo deuet da weled sklêr. Dezo e lavar: **“Pri e-neus lakeet din war va daoulagad, en em welhet am-eus hag e welan sklêr!”** ¹⁶ Lod euz ar Farizeiz a lavar eta: **“N’eo ket an Dén-ze a-berz Doue, pa ne vir ket ar zabad!”** Re all a lavar: **“Penaoz e c’hell eun dén peher ober ar seurt sinou ?”** Hag ez eus freuz etrezo...

Mz 16,14

¹⁷ D’an dén dall eta e lavaront adarre: **“Petra lavarez-te diwar-e-benn, p’e-neus digoret dit da zaoulagad ?”** Hag e lavar: **“Eur profed a zo anezañ!”** ¹⁸ Ar Juzevien ne gredont ket ez eo bet dall an dén-ze hag ez eo deuet da weled sklêr, ken na c’halvont tud an dén deuet da weled sklêr, ¹⁹ hag outo e c’houlennont o lavared: **“Daoust hag hemañ eo ho mab a lavarit eo bet ganet dall ? Penaoz’ta e wél**

* gwechall, araog.

Yn 7,13
Yn 12,42
Yn 16,2

sklêr bremañ ?”²⁰ Respont a ra e dud o lavared: **“Goud a ouzom eo hemañ or mab, hag eo bet ganet dall!** ²¹ **Penaos avad e wêl sklêr bremañ, n’ouzom ket! Pe biou e-neus digoret e zaoulagad, n’ouzom-ni ket! Goulennit digantañ: Oad e-neus! Eñ e-unan a gomzo diwar-e-benn.”** ²² Evel-se e lavar e dud, peogwir o-deus aon rag ar Juzevien! Rag ar Juzevien o-deus a-vremañ divizet: an néb a anzav eo Jezuz ar Mesiaz a vo taolet er-mêz euz ar Zinagog! ²³ Setu perag o-deus e dud lavaret: **“Oad e-neus-eñ! Goulennit digantañ”**.

Ob 10,35

²⁴ Gelper a reont eta evid an eil gwech an dén a zo bet dall, ha dezañ e lavaront: **“Ro gloar da Zoue!. Gouzoud a reom-ni eo an dén-ze eur peher!”** ²⁵ Eñ eta a respont: **“Daoust hag eur peher a zo anezañ ? N’ouzon-me ket! Eun dra a ouzon: dall ma oan, bremañ e welan sklêr!”** ²⁶ Hag int-i a lavar dezañ adarre: **“Petra e-neus greet dit ? Penaos e-neus digoret dit da zaoulagad ?”** ²⁷ Dezo e respont: **“Lavaret awalc’h am-eus deoc’h, ha n’ho-peus ket selaouet! Perag e fell deoc’h klevet eur wech all ? Daoust ha c’hwi ive a fell deoc’h dond da veza e ziskibien ?”** ²⁸ Hag int-i d’e vallozi o lavared: **“Te a zo diskib da Hennez! Ni avad a zo diskibien da Voizez!** ²⁹ **Ni a oar e-neus Doue komzet da Voizez! Hemañ avad, n’ouzom ket a-be-lec’h ez eo!”** ³⁰ An dén a respont hag a lavar dezo: **“Evid gwir eo an dra-ze souezuz! Ne ouezit ket a-be-lec’h eo, hag e-neus-Eñ digoret din va daoulagad!** ³¹ **Ni a oar: Doue ne zelaou ket peherien! Med ma teu unan bennag da zouja Doue ha d’ober e volon-tez, hennez a zelaou!** ³² **A oll viskoaz, n’eus ket bet klevet e-nefe unan bennag digoret e zaoulagad d’eun dén ganet dall!** ³³ **Ma ne vefe ket Hennez a-berz Doue, ne c’hellfe ober netra!”** ³⁴ Respont a reont o lavared dezañ: **“E-kreiz pehejou out-te ganet a-bez, hag emaout-te oc’h ober skol deom!”** Hag int-i d’e stlepel er-mêz...

Mz 8,20

³⁵ Klevet a ra Jezuz o-deus int-i e stlapet er-mêz! Pa zeu d’e gavoud, e lavar dezañ: **“Te, daoust ha kredi a rez e Mab-an-Dén ?”** ³⁶ Respont a ra o lavared: **“Ha piou eo, Aotrou, ma kredin ennañ ?”** ³⁷ Dezañ e lavar Jezuz: **“Eñ eo a welez! An Hini a gomz ganit, Hennez an hini eo!”** ³⁸ - **“Kredi a ran, Aotrou!”** Hag e stou dirazañ...

Mz 13,11...

Mz 23,16
Mz 15,14

³⁹ Ha Jezuz da lavared: **“Evid eur varn on-me deuet er Béd-mañ: ma teuio da weled sklêr ar re na welont ket! ha da veza dall ar re a wêl!”** ⁴⁰ Klevet a ra kement-se lod euz ar Farizeiz a zo gantañ, hag e lavaront dezañ: **“Daoust ha ni ive a zo dall ?”** ⁴¹ Ha Jezuz a lavar dezo: **“Ma vefec’h dall, n’ho-pefe ket a behed! Peogwir avad e lavarit ‘Gweled mad a reom’, e chom deoc’h ho pehed!”**

10

‘ME-EO-A-ZO’ AR PASTOR KAER!

¹ “E gwirionez, e gwirionez e lavaran deoc’h: an néb na z’ a ket dre an nor e kloz an Deñved, med a zav dre eul lec’h all, hennez a zo eul laer hag eun torfetour! ² An Hini avad a ia dre an nor, Hennez eo Pastor an Deñved! ³ Dezañ e tigor ar porzier. An Deñved a zelaou e vouez: gelver a ra e Zeñved dezañ, pep hini dre e ano, hag o c’has er-mêz. ⁴ P’e-neus bountet e oll re er-mêz, e kerz en o raog: an Deñved a ia d’e heul, rag anavezoud a reont e vouez! ⁵ Da heul eun diaveziad, nann, ne z’aint ket: dioutañ e tehint, rag ne anavezont ket mouez an diaveziad!” ⁶ Ar barabolennze a lavar Jezuz dezo, med n’anavezont ket pe-re eo an traou a lavar evito!

Yn 14,6

⁷ Jezuz a lavar c’hoaz dezo: “E gwirionez, e gwirionez e lavaran deoc’h: ‘Me-ee-a-zo’ Dor an Deñved! ⁸ An oll re a zo deuet arazon a zo laeron ha torfetourien! Med an Deñved n’o-deus ket o zelaouet! ⁹ ‘Me-ee-a-zo’ an Nor! An hini a ia drezon e-barz a vezo salvet! Mond ha dond a raio, ha peuri a gavo! ¹⁰ Al laer ne zeu nemed da laerez, da laza ha da gas da netra! Me a zo deuet, dezo da gaoud Buez, ha da gaoud Buez founnuz!”

Salm 23,1...
Lk 15,4...
Yn 15,3...
Mz 10,16...
1 Pêr 2,25

¹¹ “Me eo a zo ar Pastor kaer! Ar Pastor kaer a ro e vuez evid e Zeñved! ¹² Ar gopread, an néb n’eo ket pastor ha n’eo ket dezañ an Deñved, pa wêl ar Bleiz o tond, a zilez an Deñved hag a dec’h kuit (ar Bleiz neuze a skrap hag a skign!), ¹³ rag n’eo nemed eur gopread, ha ne ra forz ebed euz an Deñved! ¹⁴ ‘Me-ee-a-zo’ ar Pastor kaer: anavezoud a ran va re, ha va re am anavez! ¹⁵ evel ma z’on anavezet gand an Tad, ha ma anavezan-me an Tad, ha va buez a roan evid va Deñved!”

Mz 11,25

Yn 5,25
Yn 18,17

¹⁶ “Deñved all am-eus ha n’int ket euz ar C’hloz-mañ! Ar re-ze ive a rankan heñcha: va mouez a zelaouint, hag e vezo eun Tropell hepkén hag eur Pastor hepkén! ¹⁷ Va c’hared a ra an Tad, ablamour da gement-mañ: rei a ran va buez evid he c’hemer endro! ¹⁸ Nikun n’he dilam diganin: med he rei a ran ahanon vanan! Galloud am-eus d’he rei ha galloud d’he c’hemer endro! Setu ar gourhemenn am-eus degemeret digand va Zad!”

Yn 8,29

¹⁹ Adarre e sav freuz e-touez ar Juzevien diwar ar C’homzou-

Mk 3,21
Yn 7,20... ze. ²⁰ Kalz anezo a lavar: **“Sujet eo d’eun droug-spered, ha koll a ra e benn! Perag e chomit d’e zelaou ?”** ²¹ Lod all a lavar: **“N’eo ket aze lavarou eun dén sujet d’eun droug-spered! Daoust hag eun droug-spered a c’hell digeri daoulagad tud dall ?”**

EMA AN TAD ENNON HA ME EN TAD!

Lk 22,67
Yn 6,64
Yn 10,3...
Yn 17,12
Yn 1,1
²² Degouezoud a ra neuze Gouel an Dedi, e Jeruzalem: deuet ar goañv! ²³ Ha Jezuz a zo o vale en Templ dindan Porched Salomon. ²⁴ Bodet endro dezañ, e lavar dezañ ar Juzevien: **“Beteg peur e lamoc’h diganeom ar vuez ? Ma z’oc’h-c’hwi ar Mesiaz, lavarit deom!”** ²⁵ Jezuz a respont dezo: **“Lavaret am-eus deoc’h ha ne gredit ket! An oberou a ran en Ano va Zad a ro testeni em c’heñver; ²⁶ med c’hwi ne gredit ket pa n’oc’h ket euz va Deñved! ²⁷ Va Deñved a zelaou va mouez hag o anavezoud a ran: dond a reont d’am heul! ²⁸ Dezo e roan buez peurbaduz: ne z’aint ket da goll, ha dén n’o diframmo euz va dorn! ²⁹ Va Zad, hag e-neus o roet din, a zo brasoc’h eged an oll: nikun ne c’hell diframma tra euz dorn va Zad! ³⁰ Me hag an Tad a zo Unan!”**

Lk 22,10
Salm 82,6
Mz 5,17
Yn 14,11...
³¹ Ar Juzevien a dap adarre mein evid e labeza! ³² Dezo e respont Jezuz: **“Kalz oberou kaer, deuet euz va Zad, am-eus diskouezet deoc’h! En abeg da behini euz an oberou-ze e klaskit va labeza ?”** ³³ Respont a ra ar Juzevien: **“N’eo ket en abeg d’eun oberenn gaer e klaskom ho labeza, med en abeg d’eur blasfem: Dén ma z’oc’h, c’hwi en em laka hoc’h-unan Doue!”** ³⁴ Dezo e respont Jezuz: **“Daoust ha n’eo ket skrivet en ho Lezenn: ‘lavaret am-eus: C’hwi a zo doueou!’ ³⁵ Ma lavar eta ar Skritur ez eo ‘doueou’ ar re a gomz Doue dezo, (hag ar Skritur ne c’hell ket beza torret!), ³⁶ an Hini e-neus an Tad santelleet ha kaset er Béd, perag e lavarit eta dezañ ‘Blasfemi a rit!’ p’am-eus lavaret ‘Mab Doue on-me’ ? ³⁷ Ma ne ran ket oberou va Zad, n’am c’hredit ket! ³⁸ Ma ran avad an oberou-ze, ha goude deoc’h chom heb va c’hredi, kredit en oberou, deoc’h gouzoud hag anavezoud ema an Tad ennon hag emeon-me en Tad.”**

Lk 4,30
Mz 19,1
³⁹ Adarre e klaskont paka krog ennañ! Med mond a ra a-dre o daouarn! ⁴⁰ Hag adarre ez a en tu-all d’ar Jordan, d’al lec’h m’edo da genta Yann o vadezi: hag e talc’h da jom eno. ⁴¹ Davetañ e teu kalz a dud, en eur lavared: **“Yann n’e-neus greet sin ebed! Med gwir eo kement e-neus lavaret Yann diwar-benn Hemañ!”** ⁴² Eno e teu kalz tud da gredi ennañ...

11

‘ME-EO-A-ZO’ AN ADSAO HAG AR VUEZ!

Lk 10,38
Yn 12,1...
Lk 7,37

¹ bez' ez eus avad eun dén kouezet klañv, Lazar, euz Betani, kêriadenn Mari hag he c'hoar Marta. ² Mari eo an hini he-deus skuillet balzam war an Aotrou ha sehet e dreid gand he bleo, hag he breur eo a zo kouezet klañv. ³ Ar c'hoarezed eta a gas tud da lavared dezañ: **“Aotrou! Setu kouezet klañv an dén a garit.”** ⁴ Ouz o c'hleved, e lavar dezo Jezuz: **“Ar c'hleñved-ze n'eo ket evid ar maro, med evid gloar Doue, da Vab Doue beza karget a c'hloar drezañ!”**

Yn 12,35

⁵ Jezuz avad a gar Marta, hag he c'hoar Mari, ha Lazar! ⁶ Pa glev eta eo kouezet klañv, neuze e chom c'hoaz daou zevez el lec'h m'ema. ⁷ Goude-ze e lavar d'e Ziskibien: **“Skoom adarre warzu ar Jude!”** ⁸ E Ziskibien a lavar dezañ: **“Nevez 'zo, e klaske ar Juzevien ho laza! Hag ez it adarre di ?”** ⁹ Respont a ra Jezuz: **“Daoust ha n'eus ket daouzeg eurvez en eun devez ? An hini a vale en deiz ne stoko ket ouz ar mein, rag gweled a ra sklêrijenn ar béd-mañ!** ¹⁰ Ma teu avad unan bennag da vale en noz, henez a stoko ouz ar mein, rag n'ema ket ar sklêrijenn ennañ!”

Mz 9,24
Lk 8,52

¹¹ Diwar ar c'homzou-ze, e lavar dezo: **“Lazar, or mignon, a zo kousket! Med mond a ran d'e zihuna!”** ¹² Dezañ eta e lavar e Ziskibien: **“Aotrou! Ma z'eo kousket e vo saveteet!”** ¹³ Jezuz e-neus komzet euz e varo, med kavoud a ra dezo e-neus komzet euz kousk an hun. ¹⁴ Neuze e lavar Jezuz dezo frêz: **“Lazar a zo marvet!** ¹⁵ **Hag ablamour deoc'h, e laouennaan, pa ne oan-me ket eno, deoc'h dond da gredi! Med skoom warzu ennañ!”** ¹⁶ Tomaz, lesanvet Gevell, a lavar d'e gen-diskibien: **“Skoom-ni ive, deom-ni da vervel gantañ!”**

Lk 10,39...
Yn 11,41...

¹⁷ Pa zegouez, e kav Jezuz Lazar lakeet er bez abaoe pevar devez! ¹⁸ Betani a zo tost da Jeruzalem, a-hed wardro pemzeg stad. ¹⁹ Kalz euz ar Juzevien a zo deuet daved Marta ha Mari, d'o frealzi e-keñver o breur. ²⁰ Pa glev ema Jezuz o tond, ez a Marta d'e ziambroug: Mari avad a jom azezet en ti. ²¹ Lavared a ra Marta da Jezuz: **“Aotrou! Ma vijec'h bet amañ, ne vije ket bet marvet va breur!** ²² **Bremañ avad, me a oar: Kement-tra a c'houlennoc'h digand Doue, gand Doue e vo roet deoc'h!”** ²³ Jezuz a lavar dezi: **“Da vreur a adsavo!”** ²⁴ Dezañ e lavar Marta: **“Me a oar ec'h adsavo d'an Adsao, d'an Deiz diweza!”** ²⁵ Hag e lavar Jezuz dezi: **“Me-**

Mz 22,23 **eo-a-zo' an Adsao hag ar Vuez! An hini a gred ennon, goude ma varfe, a vevo!** ²⁶ **Ha kement hini a vev hag a gred ennon, nann! ne varvo biken! Daoust ha kredi a rez an dra-ze ?** ²⁷ Ha dezañ e lavar-hi: **“Ya! Aotrou! Kredi a ran ez-oc’h-c’hwari ar Mesiaz, Mab Doue, an Hini a zeu er Béd!”**.

²⁸ Diwar ar c’homzou-ze, ez a-hi da c’helver he c’hoar Mari, dre-guz, o lavared: **“Aze ema ar Mestr! Da c’helver a ra!”** ²⁹ Kerkent ha klevet avad, e sav honnez dילו hag ez a davetañ. ³⁰ N’eo ket c’hoaz degouezet er gêriadenn, med ema c’hoaz el lec’h m’eo deuet Marta d’e ziambroug.

Yn 11,21 ³¹ Ar Juzevien a zo ganti en ti, ouz he frealzi, o weled Mari o sevel hag o vond dילו er-mêz, a ia d’he heul: kavoud a ra dezo ez a d’ar bez, dezi eno da ouela! ³² Pa zegouez el lec’h ema Jezuz, ouz e weled, e kouez Mari e-harz e dreid, en eur lavared dezañ: **“Aotrou! Ma vijec’h bet amañ, va breur ne vije ket bet marvet!”** ³³ Pa wél eta Mari o ouela, hag ar Juzevien a zo d’he heul o ouela ive, e skrij Jezuz en e spered, hag ennañ e-unan, ez eo strafuillet! ³⁴ Hag e lavar: **“Pe-lec’h ho-peus e lakeet ?”**.

Mz 27,6
Mk 15,46 Dezañ e lavaront: **“Deuit ha gwelit!”** ³⁵ Ha Jezuz da ouela! ³⁶ Ar Juzevien avad a lavar: **“Gwelit penaoz e kare an dén-ze!”** ³⁷ Lod avad a lavar: **“Hemañ hag e-neus digoret e zaoulagad d’an hini dall, daoust ha ne c’helle ket ive miroud ouz henez da ver-vel!”** ³⁸ En eur skrijal adarre ennañ e-unan, e teu eta Jezuz d’ar béz: eur c’hao a zo anezañ, ha warnañ ez eus bet lakeet eur mên.

Mz 14,19... ³⁹ Lavared a ra Jezuz: **“Tennit ar mên kuit!”** Dezañ e lavar Marta, c’hoar an hini maro: **“Aotrou! C’hwez a zo gantañ, rag ar pevare devez eo dezañ!”** ⁴⁰ Jezuz a lavar dezi: **“Daoust ha n’am-eus ket lavaret dit: ‘Ma kredez e weli gloar Doue!’”** ⁴¹ Taoler a reont eta kuit ar mên! Jezuz avad a zav e zaoulagad d’an uhel en eur lavared: **“Tad! Ho trugarekaad a ran, peogwir ho-peus va zelaouet! ⁴² Me ’oar: Va zelaou a rit bepred! Med ablamour d’an dud a zo amañ e komzan, dezo kredi ho-peus-c’hwari va c’haset!”** ⁴³ Diwar ar c’homzou-ze, e youc’h a vouez kreñv: **“Lazar! Deus er-mêz!”** ⁴⁴ Er-mêz e teu an dén maro, liammet e zaouarn hag e dreid gand lurennigou, ha paket e benn gand eul lie-nenn! Jezuz a lavar dezo: **“Diliammit ha lezit-eñ da vond!”**.

Lk 16,31 ⁴⁵ Kalz eta euz ar Juzevien -ar re a zo deuet daved Mari hag o-deus gwelet ar pez e-neus greet-, a zeu da gredi ennañ! ⁴⁶ Med lod anezo a ia daved ar Farizeiz, hag a lavar dezo kement e-neus greet

Mz 26,3... Jezuz! ⁴⁷ Ar Veleien-Vraz hag ar Farizeiz a gen-vod ar zanedrin, hag e lavaront: **“Petra reom-ni? Rag an dén-ze a ra kalz traou!”** ⁴⁸ **Ma lezom Henez evel-se, e kredo an oll ennañ, hag e teuo ar Romaned da skrapa hag al Lec’h Santel hag or Broad!”** ⁴⁹ Unan anezo, Kaifaz -pa z’eo-eñ Beleg-Braz ar bloavez-ze-, a lavar dezo: **“C’hwi ne intentit seurt!”** ⁵⁰ **Daoust ha ne bouezit ket ez eo gwelloc’h e varvfe eun Dén hepkén, evid ar Bobl, ha na ’z afe ket ar Vroad a-bez da goll!”** ⁵¹ N’e-neus ket lavaret kement-se anezañ e-unan, med, pa z’eo Beleg-Braz er bloavez-ze, e-neus profedet ema Jezuz o vond da vervel evid ar Vroad, ⁵² ha n’eo ket hepkén evid ar Vroad, med evid ken-voda ive, en-unan, bugale Doue skignet dre oll! ⁵³ Adaleg an deiz-ze eta, a-unan e tivizont d’e laza...

Mz 12,14 ⁵⁴ Jezuz eta ne vale ket ken a-ouez d’an oll, e-touez ar Juzevien, med mond a ra ahano warzu eur vro tost d’ar gouelec’h, d’eur gêr anvet Efraim ; eno e chom gand e Ziskibien. ⁵⁵ Deuet eo tost avad Pask ar Juzevien! Kalz tud a zo savet euz ar vro da Jeruzalem, araog Pask, evid en em c’hланаad. ⁵⁶ Klask a reont Jezuz, hag e lavaront ken-etrezo, bodet en Templ: **“Petra a gav deoc’h ? Daoust ha ne zeuio ket d’ar Gouel ?”** ⁵⁷ Ar Veleien-Vraz avad hag ar Farizeiz o-deus roet gourhemennou: Ma teu unan bennag da c’houzoud pe-lec’h ema an Dén, dezañ e zisklêria, ma pakint krog ennañ!

12

AR BEORIEN HO-PO BEPRED GANEOC’H.

Mz 26,6... ¹ C’hwec’h devez araog ar Pask, e teu Jezuz da Vetani, el lec’h m’ema o chom Lazar, e-neus Jezuz adsavet a-douez ar re varo... ² Eno ec’h aozont dezañ eur pred: o servicha ema Marta, Lazar a zo unan eus an dud astennet gantañ ouz taol. ³ Mari a gemer eta eul luriad a valzam nardig, glan ha talvouduz-braz: eoulia a ra treid Jezuz hag o zehi gand he bleo... Karget eo an ti gand c’hwezvad ar balzam! ⁴ Ha Judaz-an-Iskariotad, -unan eus e Ziskibien, an hini a zo o vond d’e rei-, a lavar: ⁵ **“Perag n’eo ket bet gwerzet ar balzam-ze tri c’hant diner da veza roet d’ar beorien ?”** ⁶ Evel-se e lavar, n’eo ket ma rafe forz euz ar beorien, med dre ma z’eo laer: gantañ e vez ar yalc’h, hag e skrap ar peziou lakeet enni! ⁷ Jezuz avad a lavar: **“Lez-hi, dezi da veza dalhet ar balzam-ze a-benn**

Lk 8,3
Yn 13,20

**deiz va zebeliadur-me! ⁸ Rag ar beorien ho-po bepred ganeoc'h!
Me avad n'ho-peus ket bepred!"**

⁹ Kalz tud eta a-douez ar Juzevien a zeu da c'houzoud emana eno, hag e teuont, n'eo ket ablamour da Jezuz hepken, med ive da weled Lazar e-neus-Eñ adsavet a-douez ar re varo. ¹⁰ Etrezo e kendiviz eta ar Veleien-Vraz da laza ive Lazar... ¹¹ rag ablamour dezañ e teu kalz Juzevien da dehed sioulig ha da gredi e Jezuz...

MEULEUDI D'AN HINI A ZEU EN ANO AN AOTROU!

Mz 21,1...
Mk 11,1...
Lk 19,29...
Salm 118,25

¹² En deiz war-lerc'h, ar berniou tud deuet d'ar Gouel, o klevet e tegouez Jezuz e Jeruzalem, ¹³ a dap skourrou lore hag a ia d'e ziambroug en eur youhal: **"Hozanna! Meuleudi d'an Hini a zeu en Ano an Aotrou, Roue Izrael!"** ¹⁴ Jezuz a gav eun azenig hag ec'h azez warnañ evel m'eo skrivet:

Zak 9,9

¹⁵ *"N'az-pezh ket aon, Merc'h Sion!"*

"Setu da Roue o tond, azezet war hini-bian eun azenez!"

Yn 2,22

¹⁶ E Ziskibien ne intentont ket kement-se war an taol, med pa z'eo Jezuz karget a c'hloar, neuze e teu soñj dezo ez eo skrivet kement-se diwar-e-benn, hag o-deus int-i greet kement-se dezañ! ¹⁷ Dezañ e ro testeni an dud a oa gantañ p'e-neus galvet Lazar er-mêz euz ar béz hag e adsavet a-douez ar re varo. ¹⁸ Rag-se ez a an dud d'e ziambroug, pa glevont e-neus greet ar zin-ze!

Ob 8,27

¹⁹ Etrezo avad e lavar ar Farizeiz: **"Gweled a rit! Ne c'hounezom seurt ebed! Setu ar béd o vond war-e-lerc'h!"** ²⁰ Bez' ez eus Gresianed e-touez an dud a zo savet da adori da geñver ar Gouel. ²¹ Dond a reont eta daved Filip, a zo euz Betsaid, er Galile, evid e bedi o lavared: **"Aotrou! Ni a garfe gweled Jezuz!"** ²² Filip a zeu da lavared da Andre, Andre ha Filip a ia da lavared da Jezuz.

Lk 19,3

Mz 8,20

²³ Jezuz a respont o lavared dezo: **"Deuet eo an Eur evid Mab-an-Dén da gaoud gloar! ²⁴ E gwirionez, e gwirionez e lavaran deoc'h: ar c'hreunenn winiz kouezet war an douar, ma ne varv ket, a jomo outi-hec'h-unan! Med ma varv, e toug frouez e-leiz! ²⁵ An néb a gar e vuez, he c'hollo! An néb a gasa e vuez er béd-mañ, he miro evid Buez peurbaduz!"**

Mz 14,9
1 Kor 15,36

Mz 10,30
Lk 14,26

Mz 26,38

²⁶ **"Ma teu unan bennag d'am zervicha, ra zeuio d'am heul, hag el lec'h m'emaon-me, eno ive e vo va zervicher. Ma teu unan bennag d'am zervicha, va Zad e enoro..."**

Yn 5,37
Mz 3,17
Lk 22,43
Lk 10,18
Yn 8,28

27 Bremañ ez eo strauillet va ene! Ha petra lavarin ? Tad, va zaveteit euz an Eur-ze ? Med evid-se ez on deuet d'an Eur-mañ! 28 Tad! Roit gloar d'hoc'h Ano!" Eur Vouez a zeu eta euz an Neñv: **"Ha gloar am-eus roet dezañ ha gloar a roin c'hoaz!"** 29 Ouz he c'hleved, e lavar an dud a zo eno: **"Eun taol kurun eo!"** Lod all a lavar: **"Eun êl e-neus komzet dezañ!"** 30 Jezuz a respont o lavared: **"N'eo ket evidon eo deuet ar Vouez-ze, med evidoc'h!..."**

Lk 10,18
Yn 8,28

31 Bez' ema bremañ Barn ar Béd-mañ! Bremañ e vo Rener ar Béd-mañ taolet er-mêz! 32 Ha Me, pa vezin savet uhel diwar an douar, me a zacho an oll davedon!" 33 An dra-ze a lavar da verka dre be-seurt maro ema o vond da vervel...

Salm 110,4
Yn 8,12
Yn 9,5
Ef 5,8
Mz 23,39

34 Dezañ e respont an dud: "Ni on-eus klevet gand al Lezenn e chomo ar Mesiaz da virviken! Penaoz e lavarit e rank Mab-an-Dén beza 'savet uhel' ? Piou 'ta eo ar Mab-an-Dén-ze ?" 35 Jezuz a lavar dezo: **"Evid c'hoaz eur berr-amzer e chom ar Sklêrijenn en ho touez! Deoc'h bale epad m'ho-peus ar Sklêrijenn, gand aon na zeufe an Deñvalijenn d'ho paka! An néb a vale en Deñvalijenn ne oar ket da be-lec'h ez a! 36 Peogwir ho-peus ar Sklêrijenn, kredit er Sklêrijenn, evid beza 'tud-a-sklêrijenn!'"**.

Evel-se e lavar Jezuz, hag ez a kuit da guzad outo!...

PIOU E-NEUS KREDET OR C'HELOU-MAD ?

37 Goude dezañ beza greet ken braz sinou, dirazo, ne gredont ket ennañ, **38** evid ma vefe sevenet ar Gomz e-neus lavaret ar profed Izai:

Iz 53,1
Rom 10,16
Mz 13,14
Iz 6,9...

"Aotrou! Piou e-neus kredet or C'helou-Mad ?
"Ha brec'h nerzuz an Aotrou, da biou eo bet diskuliet ?"
39 Setu perag ne c'hellont ket kredi, rag Izai a lavar c'hoaz:
40 *"Dallet e-neus o daoulagad ha kaledet e-neus o c'halon,*
"Dezo da jom heb intent gand o c'halon ha da zistrei..."
"Ha me o fareo..."

Iz 6,1
Yn 7,48

41 An dra-ze e-neus lavaret Izai, p'e-neus gwelet e c'hloar ha komzet diwar-e-benn. **42** Koulskoude, kalz renerien a gred ennañ, med en abeg d'ar Farizeiz ne anzavont ket, gand aon da veza taolet

Yn 5,44 er-mêz euz ar zinagog! ⁴³ Gloar an dud a garont muioc'h eged gloar Doue...

Mz 10,40 ⁴⁴ Jezuz avad a youc'h o lavared: **“An hini a gred ennon, ne gred ket ennon-me, med en Hini e-neus va c’haset! ⁴⁵ Hag an hini am gwel, a wél an Hini e-neus va c’haset. ⁴⁶ Evel Sklêrijenn ez on-me deuet er Béd, evid na jomo ket en Deñvalijenn kement-hini a gred ennon. ⁴⁷ Ma klev unan bennag va lavarou ha ma n’o mir ket, e varn ne rin-me ket! N’on ket deuet da varn ar Béd, med da zalvi ar Béd! ⁴⁸ An néb am distaol ha na zegemer ket va lavarou, henez e-neus e varner: ar Gomz am-eus lavaret, honnez e varno d’an deiz diweza ; ⁴⁹ rag n’am-eus ket komzet ahanon va-unan, med an Tad hag e-neus va c’haset a c’hourhemenn din ar pez a lavarann hag ar pez a brezegann. ⁵⁰ Ha me a oar eo e c’hourhemenn Buez peurbaduz! An traou a lavarann eta, evel ma lavar an Tad, evel-se e lavarann...”**

13

ME, AOTROU HA MESTR, AM-EUS GWALHET HO TREID!

Mz 26,17...
Yn 15,13
Gal 2,20

Lk 22,3

Yn 3,35

Mz 11,29
Lk 12,37

¹ Araog Gouel ar Pask, Jezuz, o c’houzoud eo deuet e Eur da dremen euz ar Béd-mañ daved e Dad, goude beza karet an dud a zo er Béd, o c’har beteg penn! ² Goude koan, p’e-neus an diaoul lakeet e kalon Judaz ar menoz d’e rei, ³ Jezuz, -o c’houzoud e-neus an Tad roet pep tra en e zaouarn, hag ez eo deuet euz Doue hag ez a daved Doue!-, ⁴ a zav diouz taol, a denn e vantell, hag a gemer eul lienenn da lakaad endro d’e zar-greiz. ⁵ Goude-ze e taol dour en eur gibellig hag ez a da walhi treid e Ziskibien ha d’o zehi gand al lienenn a zo endro dezañ.

⁶ Dond a ra daved Simon-Pèr, hag hemañ a lavar dezañ: **“Aotrou! C’hwi a walc’h din va zreid!”** ⁷ Jezuz a respont o lavared dezañ: **“Ar pez a ran, te, ne c’hellez ket bremañ intent: diwezatoc’h avad ec’h intenti!”** ⁸ Pèr a lavar dezañ: **“Nann! ne zeuoc’h biken da walhi din va zreid!”** Respont a ra Jezuz dezañ: **“Ma n’az kwalhan ket, n’az-po lod ebed ganin!”** ⁹ Ha Simon-Pèr a lavar dezañ: **“Aotrou! N’eo ket hepkén va zreid, med ive va daouarn ha va fenn!”** ¹⁰ Dezañ e lavar Jezuz: **“An dén a zo bet gwalhet e gorr n’e-neus ezomm nemed da walhi e dreid: med**

bez' e vez glan en-oll! C'hwi ive a zo glan, med n'oc'h ket oll!".

Yn 6,64

¹¹ Anavezoud a ra an hini a zo o vond d'e rei: setu perag e lavar: **"N'oc'h-c'hwi ket oll glan!"**

Mz 23,8...

Lk 22,27

Fil 2,5...
Kol 3,13
Mz 10,24

Mz 7,24

¹² Gwalhet gantañ o zreid ha kemeret e vantell, ec'h astenn adarre ouz taol, hag e lavar dezo: **"Daoust hag intent a rit ar pez am-eus greet deoc'h ?** ¹³ Va gelver a rit 'Ar Mestr!' hag 'An Aotrou', ha gwir e lavarit: rag bez' ez on! ¹⁴ M'am-eus eta gwalhet deoc'h ho treid, me, an Aotrou hag ar Mestr, c'hwi ive, c'hwi ho-peus da walhi ho treid an eil d'egile! ¹⁵ Rag eur skwer am-eus roet deoc'h, deoc'h-c'hwi ive d'ober evel m'am-eus-me greet deoc'h. ¹⁶ E gwirionez, e gwirionez e lavaran deoc'h: ne vez ket eur zervicher brasoc'h eged e Aotrou! Nag eur c'hannad brasoc'h eged an Hini e-neus e gaset! ¹⁷ Ma ouezit kement-se, e vezoc'h eüruz ma reoc'h evel-se!"

UNAN AHANOC'H A ZO O VOND D'AM REI!

Salm 41,10

¹⁸ **"N'eo ket diwar-benn ahanoc'h oll e komzan, -gouzoud a ran pe re am-eus dibabet!- med evid ma vo sevenet ar Skritur: "An hini a zebr va bara a zav e zeul a-eneb din!"**

Mz 10,40

¹⁹ **"A-vremañ e lavaran deoc'h an dra-ze, araog ma tegouezo, deoc'h kredi, pa zegouezo, eo 'Me-eo-a-zo'!** ²⁰ E gwirionez, e gwirionez e lavaran-me deoc'h: an néb a zegemer an hini a gasan, am degemer, hag an néb am degemer, a zegemer an Hini e-neus va c'haset."

Mz 26,21...
Mk 14,18...
Lk 22,21...Yn 19,26
Yn 21,7...

²¹ Diwar ar C'homzou-ze, ez eo Jezuz strafuillet en e spered, hag e ro testiñ o lavared: **"E gwirionez, e gwirionez e lavaran deoc'h: ema unan ahanoc'h o vond d'am rei!"** ²² Hag an diskibien da zelled an eil ouz egile o klask euz piou e-neus komzet! ²³ Unan avad euz an Diskibien a zo soublet war galon Jezuz, an hini karet gand Jezuz. ²⁴ Gwignal a ra dezañ Simon-Pèr ha lavared dezañ: **"Goulenn piou eo an hini ema o komz diwar-e-benn!"** ²⁵ En eur zoubla evel-se war galon Jezuz, e lavar dezañ: **"Aotrou! Piou an hini eo ?"** ²⁶ Jezuz eta a respont: **"Henez eo an hini emaon o vond da zouba evitañ ha da rei dezañ an tamm-mañ!"** Ha souba a ra an tamm, e gemer hag e rei da Judaz-mab-Simon-Iskariot...

Yn 13,2...
Lk 22,3

²⁷ Ha diwar an tamm-ze, neuze, ez a Satan e kalon an dén-ze... Dezañ eta e lavar Jezuz: **"Ar pez a rez, gra dillo!"** ²⁸ Nikun

avad euz an dud astennet ouz taol ne oar perag e-neus lavaret an dra-ze dezañ, ²⁹ rag p'ema ar yalc'h gand Judaz, lod a gav dezo e lavar dezañ Jezuz: **“Prén ar pez a zo red evid ar gouel!”**, pe dezañ rei eun dra bennag d'ar beorien! ³⁰ Kemeret gantañ an tamm, ez a er-mêz: noz-dall eo!...

Mz 8,20 ³¹ Pa z'eo eet er-mêz, e lavar Jezuz: **“Bremañ eo Mab-an-Dén leuniet a c'hloar! ³² Ha ma vez roet gloar da Zoue ennañ, e roio Doue dezañ ive gloar ennañ e-unan, ha dizale e roio...”**

EVEL M'AM-EUS-ME HO KARET!

Yn 15,12
Yn 17,34
1 Yn 2,8... ³³ **“Bugaligou, evid eur pennadig emañ c'hoaz ganeoc'h! Va c'hask a reoc'h, hag evel m'am-eus lavaret d'ar Juzevien: ‘D'al lec'h ma z'an, c'hwi ne c'hellit ket dond’, evel-se e lavaran deoc'h ive bremañ. ³⁴ Eur gourhemenn nevez a roan deoc'h: ‘Karit an eil egile! Evel m'am-eus ho karet, c'hwi ive, karit an eil egile! ³⁵ Diouz an dra-mañ e ouezo an oll ez oc'h Diskibien din: m'ho-peus karantez an eil evid egile!”**

Mz 26,33...
Mk 14,29...
Lk 22,31...
Lk 21,28... ³⁶ Dezañ e lavar Simon-Pèr: **“Aotrou! Da be-lec'h emañ c'hoaz o vond ?”** Jezuz a respont dezañ: **“D'al lec'h emañ o vond, ne c'hellez ket bremañ dond d'am heul! Va heulia a ri avad diwezatoch!”** ³⁷ Pèr a lavar dezañ: **“Perag ne c'hellan ket hoc'h heulia bremañ ? Va buez a roin evidoc'h!”** ³⁸ Respont a ra Jezuz: **“Da vuez a roi evidon ? E gwirionez, e gwirionez e lavaran dit: nann! ne gano ket eur c'hilloz, ken n'az-po va nahet teir gwech!”**

14

‘ME-EO-A-ZO’ AN HENT, AR WIRIONEZ, AR VUEZ!

Mk 11,22 ¹ **“Arabad d'ho kalon beza strafuillet! E Doue e kredit! Kredit ive ennon-me! ² E Ti va Zad ez eus kalz plasou! Anez-daze am-befe lavaret deoc'h! Rag mond a ran d'ober deoc'h eur plas. ³ Ha ma z'an d'ober deoc'h eur plas, e teuin endro d'ho kemer em c'hichen, deoc'h da veza ive el Lec'h m'emaon-me! ⁴ Ha d'al Lec'h ez an e ouezit an Hent!”** ⁵ Dezañ e lavar Tomaz: **“Aotrou! n'ouzom ket da be-lec'h ez it! Ha penaoz e c'hellfem gouzoud an Hent!”** ⁶ Jezuz a lavar dezañ: **“Me-ao-a-zo' an Hent**

Heb 6,19...
Yn 13,36
Heb 10,19

Heb 10,20
Mz 11,27
Rom 5,1...

hag ar Wirionez hag ar Vuez! Ha ne z'a dén daved an Tad nemed drezon! ⁷ M'ho-peus va anavezet, ec'h anavezit ive an Tad! A-vremañ e anavezoud a rit, hag e welet ho-peus!”.

Mz 17,17

⁸ Filip a lavar dezañ: “Aotrou! Diskouezit deom an Tad, **hag ez eo awalc’h evidom!”** ⁹ Jezuz a lavar dezañ: “Keid-all-a-zo emañ ganeoc’h, ha n’am anavezet ket, Filip? An hini am gwel, a wél an Tad! Ha penaoz e lavarez-te: ‘Diskouezit deom an Tad’.

Mk 16,19
Mz 8,10

¹⁰ Daoust ha ne gredez ket emañ-me en Tad hag emañ an Tad ennon-me ? Ne lavaran ket ahanon va-unan ar C’homzou a lavaran deoc’h: an Tad, hag a zo o chom ennon, a ra an oberou e-unan. ¹¹ Va c’hredit ’ta: Me a zo en Tad hag an Tad a zo ennon-me! Anez-da-ze, kredit ablamour d’an oberou o-unan! ¹² E gwirionez, e gwirionez e lavaran deoc’h: an hini a gred ennon a raio ive an oberou a ran-me! Ha re vrasoc’h a raio, peogwir ez an-me daved an Tad! ¹³ Ar peza a c’houlenoc’h em Ano, an draze a rin, d’an Tad kaoud gloar er Mab. ¹⁴ Ma c’houlenoc’h eun dra bennag em Ano, henn ober a rin...”

Mk 11,24
Mz 7,7...

N’HO LEZIN KET EMZIVAD!

1 Yn 5,5
1 Yn 2,3
Yn 16,13
Rom 8,26

¹⁵ “Ma talhit d’am c’hared, e viroc’h va gourhemennou! ¹⁶ Me a bedo an Tad, ha deoc’h e roio eur Skoazeller-all, da veza ganeoc’h da virviken, ¹⁷ Spered ar Wirionez : ar Béd ne c’hell ket e zegemer, rag ne c’hell nag e weled nag e anavezoud. C’hwi e anavez, rag ganeoc’h e chom hag ennoc’h e vezo!”

2 Kor 3,18
1 Yn 2,3

¹⁸ “Ne z’an ket d’ho lezel emzivad! Davedoc’h e teuan. ¹⁹ C’hoaz eur pennadig, ha n’am gwelo mui ar Béd! C’hwi avad am gwelo pa z’on-me beo-buezeg ha ma vezoc’h, c’hwi ive beo-buezeg! ²⁰ D’an deiz-ze e ouezoc’h emañ-me en Tad ha c’hwi ennon ha me ennoc’h! ²¹ An hini a zalc’h va gourhemennou hag o mir, hennez eo an hini a zalc’h d’am c’hared; an hini a zalc’h d’am c’hared, hennez a vezo karet gand va Zad, hag e gared a rin-me ha dezañ en em ziskouezin-me va-unan!”

Ob 10,41

²² Judaz (n’eo ket Judaz-Iskariot an hini eo!) a lavar dezañ: “Aotrou! Ha perag emañ o vond d’en em ziskouez deom ha n’eo ket d’ar Béd ?” ²³ Jezuz a respont o lavared dezañ: “Ma talc’h unan bennag d’am c’hared, hennez a viro va C’homz, ha va Zad e garo! Ha dond a raim davetañ ha da jom ennañ! ²⁴ An néb n’am c’har ket, ne vir ket va C’homzou! Ar Gomz a glevit n’eo ket va Hini, med Hini an Tad e-neus va c’haset!”.

Yn 14,23
Mz 18,20

2 Kor 6,16

Yn 16,13...
Fil 4,7
Lk 24,52
Ef 2,3
Mz 26,46
Mk 14,42

25 “Kement-se am-eus lavaret deoc’h, epad m’emaon o chom en ho kichenn! 26 Ar Skoazeller, ar Spered Santel kaset gand an Tad em Ano, Hennez a zesko deoc’h pep tra, ha deoc’h e tegaso soñj euz kement am-eus lavaret deoc’h! 27 Peoc’h a lezan ganeoc’h! Va Feoc’h-me a roan deoc’h! N’eo ket evel ma ro ar Béd e roan-me deoc’h! Arabad d’ho kalon beza strafuillet na spontet! 28 Klevet ho-peus am-eus lavaret deoc’h: ‘Mond a ran kuit, hag e teuan davedoc’h!’ Ma vefec’h deuet d’am c’hared, e tridfec’h ablamour ma z’an daved an Tad, rag an Tad a zo brasoc’h egedon! 29 Bremañ em-eus lavaret deoc’h, araog ma tegouezo, deoc’h da gredi pa zegouezo! 30 Ne lavarin ket kén kalz tra ganeoc’h, rag ema Rener ar Béd o tond! Med ennon-me n’e-neus seurt ebed! 31 Med evid ma ouezo ar Béd e karan an Tad hag e ran evel m’e-neus an Tad gourhemennet din, savit! Deom ahalenn!”.

15

‘ME-EO-A-ZO’ AR WINIENN GWIRION!

Salm 80,9...
Jer 2,21
Mz 13,23

1 “Me-eo-a-zo’ ar Winienn, an hini wirion, ha va Zad eo ar Gwiniennour! 2 Lemel a ra kuit kement skourr ennon na zoug ket a frouez, ha glanaad a ra kement hini a zoug frouez, ma tougo muioc’h a frouez! 3 A-vremañ ez oc’h-c’hwi glan diwar ar Gomz am-eus lavaret deoc’h! 4 Chomit ennon ha me ennoc’h! Evel ma ne c’hell ket ar skourr dougen frouez anezañ e-unan, ma ne jom ket war ar winienn, evel-se na c’hwi ive, ma ne jomit ket ennon!

1 Kor 12,12
2 Kor 3,2
Mz 3,10

5 “Me-eo-a-zo’ ar Winienn, c’hwi eo ar skourrou! An hini a jom ennon ha me ennañ, hennez a zoug kalz frouez, rag hebdon-me, ne c’hellit netra! 6 Ma vez unan na jom ket ennon, hennez a vez stlapet kuit evel ar skourr, hag e teu da zizehi: dastu-met e vez ha stlapet e vez en tan da zevi...

Mz 11,24
Mz 5,16

7 Ma chomit ennon ha ma chom ennoc’h va C’homzou, ar pez a garit a c’houlennoc’h, ha deoc’h e tegouezo! 8 Dre-ze e teu gloar d’an Tad, deoc’h da zougen kalz frouez ha da veza Diskibien din!

1 Yn 2,4...

9 Evel m’e-neus an Tad va c’haret, evel-se ho karan-me ive! Chomit em c’harantez! 10 An hini a viro va gourhemennou a

Fil 4,4
Mk 12,30
Yn 13,34
1 Yn 3,16
Mz 12,50

jomo em c'harantez, evel ma viran-me gourhemennou va Zad ha ma choman en e garantez! ¹¹ Kement-se a lavaran deoc'h, ma vezo ennoc'h va Levenez ha ma vo peur-leuniet ho levenez! ¹² Setu va gourhemenn-me: Karit an eil egile evel m'ho karan-me! ¹³ N'eus dén da gaoud eur garantez vrasoc'h eged homañ: e rofe eun dén e vuez evid e vignoned! ¹⁴ C'hwi a zo mignoned din, ma rit ar pez a c'hourhemennan deoc'h! ¹⁵ Ne ran mui ahanoc'h 'Servicherien', rag ne oar ket ar zervicher petra 'ra e Vestr! Ahanoc'h e ran 'Mignoned', rag kement a glevan gand va Zad a zegemennan-me deoc'h!".

¹⁶ N'eo ket c'hwi ho-peus va dibabet, med me eo am-eus ho tibabet, hag o lakeet am-eus e karg, deoc'h da vond, deoc'h da zougen frouez, ha d'ho frouez padoud, ma roio deoc'h an Tad kement a c'houlennoc'h digantañ! ¹⁷ "Kement-mañ a c'hourhemennan deoc'h: karit an eil egile!"

Yn 17,14
Lk 6,22

¹⁸ "Ma teu ar Béd d'ho kasaad, deoc'h gouzoud e-neus-eñ va c'hasaet da genta. ¹⁹ Ma vefec'h euz ar Béd, e vefe douget ar Béd d'ar pez a vefe dezañ! Pa n'oc'h ket euz ar Béd, -rag Me am-eus ho tibabet diouz ar Béd!-, rag-se e-neus ar Béd kas ouzoc'h! ²⁰ Dalhit soñj euz ar Gomz am-eus-me lavaret deoc'h: "Ne vez ket ar zervicher brasoc'h eged an Aotrou!" M'o-deus int-i va heskinet, ho heskina a raint ive! M'o-deus miret va C'homz, hoc'h hini-c'hwi a virint ive! ²¹ Kement-se a raint en ho keñver ablamour d'am Ano, pa n'anavezont ket an Hini e-neus va c'haset! ²² Ma ne vefen ket deuet, ha ma n'am-befe ket komzet dezo, n'o-defe ket a behed! Bremañ avad n'o-deus digarez ebed d'o fehed!"

Mz 10,24

Yn 16,3
Mz 10,22
Mk 13,13

Lk 10,16

Yn 14,11

Salm 35,19

²³ "An néb am c'hasa, a gasa ive va Zad! ²⁴ Ma n'am-befe ket greet en o zouez an oberou n'e-neus greet dén all ebed, n'o-defe ket a behed! Bremañ avad goude dezo beza gwelet, e kasaont ha me ha va Zad! ²⁵ Kement-se a zegouez, ma vo sevenet ar Gomz skrivet en o Lezenn: "*Va c'hasaet o-deus evid netra!*"

Lk 24,40

Lk 1,2
Ob 1,8

²⁶ Pa zeuio ar Skoazeller a gasin deoc'h digand va Zad, -Spered ar Wirionez hag a zeu euz an Tad-, Hennez a roio testeni diwar-va-fenn ; ²⁷ ha c'hwi ive a roio testeni, p'emaoc'h ganin abaoe ar penn-kenta!"

16

TALVEZOU D A RA DEOC'H EZ AFEN KUIT!

Yn 14,29

¹ “Kement-se am-eus lavaret deoc’h gand aon na vefec’h skoillet! ² Ho stlepel a raint er-mêz euz ar zinagog! Erru zoken an Eur ma teuio an hini ho lazo da gavoud dezañ kinnig eur brovadenn da Zoue! ³ Kement-se a raint deoc’h, pa n’anavezont nag an Tad na me! ⁴ Med an traou-ze a lavaran deoc’h, m’ho-po soñj, -pa zegouezo o eur- em-eus-me lavaret deoc’h! Kement-se avad n’am-eus ket lavaret deoc’h adal ar pennkenta, peogwir e oan ganeoc’h.

Mz 5,11
Lk 6,2

Lk 22,53

⁵ “Bremañ avad ez an daved an Hini e-neus va c’haset! Hag hini ahanoc’h ne c’houlenn ouzin: “Da be-lec’h emaoch-c’hwil o vond ?” ⁶ Med p’am-eus lavaret deoc’h kement-se, he-deus ar glahar karget ho kalon! ⁷ Med ar wirionez a lavaran deoc’h: talvezoud a ra deoc’h ez afen kuit, rag ma ne z’an ket kuit, ne zeuio ket davedoc’h ar Skoazeller! Ma z’an kuit avad, e kasin deoc’h (ar Spered)! ⁸ Hag Hennez, pa zeuio, a zegaso ar Béd da anzav Pehed ha Justiz ha Barn! ⁹ Pehed da genta: pa n’o-deus ket kredet ennon! ¹⁰ Ha Justiz avad: rag mond a ran daved an Tad, ha n’am gweloc’h mui! ¹¹ Ha Barn ive: rag barnet eo rener ar Béd-mañ!”

Yn 14,16

1 Kor 14,24
Heb 4,12
Rom 1,18
Rom 4,25

¹² “Kalz traou am-eus c’hoaz da lavared deoc’h, med ne c’hellit ket o dougen bremañ! ¹³ Pa zeuio Hennez avad, Spered ar Wirionez, hoc’h heñcha a raio er wirionez a-bez, rag ne gomzo ket anezañ e-unan, med kement a glev a lavaro, hag an traou-da-zond a lavaro deoc’h! ¹⁴ Hennez a roio din gloar, rag euz ar pez a zo din e kemero hag e tisklêrio deoc’h. ¹⁵ Kement a zo d’an Tad a zo din-me! rag-se e lavaran deoc’h: Euz ar pez a zo din e kemero hag e tisklêrio deoc’h...”

1 Kor 3,1
Yn 14,26

Yn 7,10

¹⁶ “Eur pennadig, ha n’am gweloc’h mui! Hag adarre eur pennadig, ha c’hwil am gwelo!” ¹⁷ Ha lod euz e Ziskibien da lavared: “Petra eo ar pez a lavar deom: ‘Eur pennadig, ha n’am gweloc’h mui! Hag adarre eur pennadig, ha c’hwil am gwelo!’ hag ive: ‘Mond a ran daved va Zad!’”. ¹⁸ Lavared a reont eta: “Petra eo ar ‘pennadig’ a lavar ? N’ouzom ket petra lavar!” ¹⁹ Anad dezañ o-deus int-i c’hoant d’ober goulenn outañ, e lavar dezo Jezuz: “Klask a rit etrezoc’h petra am-eus lavaret: ‘Eur

pennadig ha n'am gweloc'h mui, hag adarre eur pennadig ha c'hwi am gwelo!' ²⁰ E gwirionez, e gwirionez e lavaran deoc'h: gouela hag hirvoudi a reoc'h-c'hwi, ar Béd avad a laouennaio! C'hwi a vo glaharet, med ho klahar a droio e levenez! ²¹ Ar vaouez, pa vez o wilioudi, he-deus glahar, rag deuet eo eviti hec'h Eur! Eur wech ganet he bugelig, ne zalc'h soñj ebed kén euz hec'h anken, diwar al levenez ma z'eus ganet eun dén er béd! ²² C'hwi eta ho-peus ive bremañ glahar! Med d'ho kweled e teuin adarre hag e laouennaio ho kalon! Hag ho levenez, ne vo dén d'he lemel diganeoc'h!"

Fil 4,4

Yn 14,20

Mz 7,7

Mk 11,24

Yn 15,5

²³ "En deiz-ze, ne c'houlennoc'h netra diganin! E gwirionez, e gwirionez e lavaran deoc'h: petra bennag a c'houlennoc'h digand va Zad em Ano, deoc'h e roio! ²⁴ Beteg bremañ, n'ho-peus goulennet seurt ebed em Ano! Goulennit hag e tegenderoc'h, ma vo peur-leuniet ho levenez!"

²⁵ "Kement-se am-eus lavaret deoc'h e parabolennou! Erru an Eur na gomzin ket kén deoc'h e parabolennou! Med frêz e komzin diwar-benn va Zad! ²⁶ En deiz-ze e c'houlennoc'h em Ano, ha ne lavaran ket deoc'h e pedin an Tad evidoc'h! ²⁷ Rag an Tad e-unan ho kar, ablamour m'ho-peus va c'haret, ha m'ho-peus kredet ez on-me deuet euz Doue! ²⁸ Eet on euz an Tad ha deuet on er Béd! Bremañ e kuitaan ar Béd hag ez an daved an Tad!"

²⁹ Lavared a ra e Ziskibien: "Setu ma komzit frêz bremañ, ha ne lavarit parabolenn ebed! ³⁰ Gouzoud a reom bremañ ec'h anavezit pep tra ha n'ho-peus ket ezomm e teufe unan bennag d'ober ouzoc'h goulennou! Dre-ze e kredom ez oc'h deuet euz Doue!" ³¹ Jezuz a respont dezo: "Bremañ e kredit ? ³² Setu ma teu an Eur, -ha deuet eo!- deoc'h da veza skignet pep hini en e du, ha deoc'h d'am lezel ouzon-va-unan-penn! Med ne vezan ket va unan, peogwir e vez an Tad ganin! ³³ Kement-se a lavaran deoc'h, evid m'ho-pezo peoc'h ennon! Er Béd ho-po trubuill! Med bezit kaloneg: me am-eus trehet d'ar Béd!"

Mz 26,31...

Mk 14,27

Yn 8,29

Rom 5,1

1 Yn 5,4

17

TAD! ROIT GLOAR D'HO MAB!

Yn 11,41
Yn 13,31
Mz 11,27
Yn 6,39
1 Yn 5,20
1 Tes 1,9

¹ Diwar ar c'homzou-ze, e sav Jezuz e zaoulagad warzu an Neñv hag e lavar: **“Tad! Deuet eo an Eur! Roit gloar d’ho Mab, ma roio ive ho Mab gloar deoc’h, ² hag ive, - hervez m’ho-peus roet dezañ galloud war beb dén! - ma roio Buez peurbaduz da gement-hini ho-peus roet dezañ! ³ Kement-mañ eo avad ar Vuez peurbaduz: Hoc’h anavezoud, C’hwi, an Doue gwirion hepkén-all, hag an hini ho-peus kaset, Jezuz ar Mesiaz!”**.

Fil 2,6
Yn 1,1...
Mz 6,9
Mz 16;17
Yn 20,28
Yn 16,15
Lk 15,31

⁴ **“Gloar am-eus roet deoc’h war an douar, dre beur-ober an Oberenn ho-peus roet din d’ober! ⁵ Ha bremañ, C’hwi, Tad, roit din en ho kichenn ar C’hloar am-oa en ho kichenn araog d’ar Béd beza anezañ! ⁶ Disklêriet am-eus hoc’h Ano d’ar re ho-peus roet din a-greiz ar Béd: deoc’h e oant ha din ho-peus o roet, hag ho Komz o-deus miret! ⁷ Bremañ ec’h ouzont e teu diganeoc’h kement ho-peus roet din. ⁸ Ar C’homzou ho-peus roet din am-eus roet dezo, hag int-i o-deus o degemeret. Evid gwir ec’h ouzont ez on-me deuet ahanoc’h, hag e kredont ho-peus-c’hwi va c’haset. ⁹ Evito eo e pedan! Ne bedan ket evid ar Bed, med evid ar re ho-peus roet din, peogwir ez int deoc’h! ¹⁰ Kement-re a zo din a zo deoc’h, ha kement-re a zo deoc’h a zo din! Hag enno e kavan gloar! ¹¹ N’emaon ket kén er Béd ; int-i avad a zo er Béd, ha me a zo o vond davedoc’h! Tad santel! Diwallit en hoc’h Ano ar re ho-peus roet din: dezo da veza Unan eveldom-ni! ¹² P’edon ganto, e tiwallen en hoc’h Ano ar re ho-peus roet din: o diwallet am-eus, ha n’eus eet hini anezo da goll nemed ar ‘Mab kollet’, d’ar Skritur beza sevenet...”**

Mz 6,13
Lk 22,32
Heb 10,10

¹³ **“Bremañ avad ez an davedoc’h, ha kement-se a lavaran er Béd, dezo kaoud va levezet peur-leuniet enno o-unan! ¹⁴ Roet am-eus dezo ho Komz, hag ar Béd o c’hasa pa n’int ket euz ar Béd, evel ma n’on-me ket euz ar Béd! ¹⁵ Ne c’houlennan ket diganeoc’h o zenna euz ar Béd, med o diwall diouz an droug! ¹⁶ N’int ket euz ar Béd evel ma n’on-me ket euz ar Béd. ¹⁷ Deoc’h o zantellaad er wirionez: Gwirionez eo ho Komz-c’hwi! ¹⁸ Evel m’ho-peus va c’haset er Béd, me ive o c’has er Béd! ¹⁹ Hag evito en em zantellaan-me, ma vint ive santelleet e gwirionez!”**

²⁰ **“N’eo ket evid ar re-mañ hepkén e pedan, med ive evid**

Gal 3,29 ar re a gredo ennon diwar o C'homz, ²¹ dezo oll da veza Unan: evel m'emaoc'h ennon, C'hwi, Tad, ha me ennoc'h, ra vezint int-i ive Unan ennom-ni, ma kredo ar Béd ho-peus-c'hwi va c'haset. ²² Ar C'hloar ho-peus roet din am-eus roet dezo, ma vezint Unan evel ma z'om-Ni Unan, ²³ Me enno ha C'hwi ennon-me, ma teuint da veza peur-unan, d'ar Bed anavezoud ho-peus-c'hwi va c'haset, hag ho-peus-c'hwi ive o c'haret evel m'ho-peus va c'haret.”

Ef 1,24 ²⁴ “Tad! Ar re ho-peus roet din, me a fell din e vefe ar re-ze ive ganin el Lec'h m'emaon-me, dezo gweled va Gloar, an hini ho-peus roet din ablamour m'ho-peus va c'haret araog d'ar Béd beza krouet! ²⁵ Tad just! Hag ar Béd n'e-neus ket hoc'h anavezet! Me avad am-eus hoc'h anavezet, hag ar re-mañ o-deus anavezet ho-peus-c'hwi va c'haset! ²⁶ Ha disklêriet am-eus ha disklêria a rin dezo hoc'h Ano, ma vo enno ar garantez ho-peus va c'haret drezi, ha ma vezin-me enno!”

18

PIOU EMAOC'H O KLASK ?

Mz 26,36
Mk 14,32
Lk 22,39

Mz 26,47
Mk 14,43
Lk 23,47
Lk 21,37
Yn 8,1

Yn 19,28

Yn 6,39
Yn 10,28

¹ Diwar ar C'homzou-ze, ez a Jezuz gand e Ziskibien en tu-all d'ar froud Sedron: eno ez eus eul liorz, hag enni ez a gand e Ziskibien. ² Judaz ive, an hini a zo o vond d'e rei, a anavez al lec'h-ze, rag alièz eo bet bodet eno Jezuz hag e Ziskibien. ³ Judaz eta e-neus kemeret gantañ ar Gohortenn, hag ive gwarded a-berz ar Veleien-Vraz hag a-berz ar Farizeiz, hag e teu eno gand leterniou, torchadou hag armou! ⁴ Jezuz eta, o c'houzoud ar pez a zo da zegouezoud gantañ, a ia er-mêz hag e lavar dezo: **“Piou emaoc'h o klask ?”** ⁵ Dezañ e respontont: **“Jezuz-an-Nazaread!”** Jezuz a lavar dezo: **“Me-eo-a-zo!”** Eno ema ive Judaz, a zo e-tu d'e rei! ⁶ Pa lavar eta dezo **‘Me-eo-a-zo!’**, ez eont war o c'hiz hag e kouezont d'an douar! ⁷ Adarre e c'houlenn outo: **“Piou emaoc'h o klask ?”**, hag e lavaront **‘Jezuz-an-Nazaread!’** ⁸ Respont a ra Jezuz: **“Lavaret am-eus deoc'h: ‘Me-eo-a-zo!’ M'emaoc'h eta ouz va c'hlask, lezit ar re-mañ da vond kuit!”** ⁹ An dra-ze, evid ma vo sevenet ar Gomz e-neus lavaret: **“Ar re ho-peus roet din, n'am-eus ket kollet eun unan anezo!”** ¹⁰ Simon-Pèr eta a denn ar c'hleze a zo gantañ, a sko mevel ar Beleg-Braz, ha dezañ e troc'h e skouarn

Mz 26,39 zehou: Malkuz eo ano ar mevel-ze! ¹¹ Ha Jezuz a lavar da Bèr: **“Laka da gleze er feur! Ar C’halirad e-neus va Zad roet din, daoust ha ne zeuin ket d’e eva ?...”**

DAVED ANNAZ HA KAIFAZ.

Mz 26,57...
Mk 14,53...
Lk 22,54...
Lk 3,2
Yn 11,50
¹² Ar Gohortenn eta, hag ar C’homandant ha gwarded ar Juzevien a bak krog e Jezuz: e liamma a reont, ¹³ hag e gas ganto da genta daved Annaz, rag tad-kaer eo da Gaifaz a zo Beleg-Braz ar bloavez-ze. ¹⁴ Kaifaz avad eo an hini e-neus roet d’ar Juzevien ar c’huzul-mañ: **“Gwelloc’h eo e varfe eun dén hepkén evid ar Bobl!”**

Yn 20,3
Yn 21,7
Ob 3,1
¹⁵ Da heul Jezuz ez a Simon-Pèr hag eun diskib all ; an diskib-mañ avad a zo eun anaoudeg d’ar Beleg-Braz hag ez a gand Jezuz e Porz ar Beleg-Braz.

¹⁶ Pèr avad a jom er-mêz, dirag an nor. An diskib-all-ze, anaoudeg d’ar Beleg-Braz, a ia er-mêz, a gomz d’ar borzieren hag e tegas Pèr en diabarz! ¹⁷ Lavared a ra ar borzieren yaouank da Bèr: **“Daoust ha n’out ket te ive euz Diskibien an Dén-ze ?”** Eñ a lavar: **“N’on ket!”** ¹⁸ Stag eo ar zervicherien hag ar warded d’ober eun tan-glaou, -rag yén eo!-, ha da domma! Pèr a zo ive en e zav ganto o tomma!

Yn 7,14
Ob 23,2
¹⁹ Hag ar Beleg-Braz da c’houlennata Jezuz diwar-benn e Ziskibien ha diwar-benn e gelennadurez. ²⁰ Respont a ra dezañ Jezuz: **“Gand hardisegez am-eus komzet d’ar Béd! Bepred am-eus-me kelennet er zinagog hag en Templ, el lec’h ma vez bodet an oll Juzevien, hag e-kuz n’am-eus lavaret netra! ²¹ Perag va goulennata ? Goulenn digand ar re va zelaoue petra am-eus lavaret dezo! Setu ma oar ar re-ze kement am-eus-me lavaret!”** ²² P’e-neus lavaret an dra-ze, e teu unan euz ar warded da rei eur garvanad da Jezuz en eur lavared: **“Evel-se e respontit d’ar Beleg-Braz ?”** ²³ Dezañ e respont Jezuz: **“M’am-eus lavaret droug, bez test euz an droug! M’am-eus komzet kaer, perag e skoez ganin ?”** ²⁴ Annaz eta e gas liammet daved Kaifaz, ar Beleg-Braz...

²⁵ Simon-Pèr avad a zo en e zav o tomma. An dud eta a lavar dezañ: **“Daoust ha n’out-te ket ive euz diskibien Hennez ?”** Nac’h a ra ha lavared: **“N’on ket!”** ²⁶ Lavared a ra unan euz servicherien ar Beleg-Braz, kar d’an hini e-neus Pèr trohet dezañ e

skouarn: **“Daoust ha n’am-eus-me ket da welet el liorz gantañ ?”**
 27 Pèr a nac’h adarre ha raktal e teu eur c’hillig da gana...

NE GAVAN TORFED EBED DA DAMALL DEZAÑ!

Mz 27,2...
 Mk 15,1...
 Lk 23,1...

28 Kas a reont eta Jezuz euz ti Kaifaz d’ar Pretor-Di. Mintin eo, ha ne z’eont ket ebarz ar Pretor-Di, evid na vint nammet ha ma tebrint ar Pask! 29 Pilat a zeu eta daveto er-mêz hag e lavar: **“Peseurt tamall a zougît a-eneb an Dén-mañ ?”** 30 Respont a reont o lavared dezañ: **“Ma ne vije ket Hennez oc’h ober droug, n’or-bije ket e roet etre da zaouarn!”** 31 Dezo e lavar Pilat: **“Deoc’h e gemer hag e varn hervez ho Lezenn!”** Ar Juzevien a lavar dezañ: **“Deom-ni n’eo ket aotreet laza dén ebed!”** 32 An dra-ze, evid ma vefe peur-zevenet ar Gomz e-neus Jezuz lavaret da verka dre be-seurt maro ema o vond da vervel...

Ob 18,15

Yn 3,14
 Mz 20,19

33 Adarre ez a Pilat er Pretor-Di: gelver a ra Jezuz ha lavared dezañ: **“Ha c’hwi eo Roue ar Juzevien ?”** 34 Jezuz a respont: **“Hag ahanout da-unan e lavarez an dra-ze, pe re all o-deus lavaret dit diwar-va-fenn ?”** 35 Respont a ra Pilat: **“Daoust hag eur Juzeo on-me ? Da bobl hag ar Veleien-Vraz o-deus da lakeet etre va daouarn. Petra az-peus greet ?”** 36 Jezuz a respont: **“Va Rouantelez-me n’eo ket euz ar Béd-mañ! Ma vije bet va Rouantelez-me euz ar Béd-mañ, o-dije va zoudarded-me stourmet evid na vefen roet etre daouarn ar Juzevien! Bremañ avad va Rouantelez-me n’eo ket ahalenn!”** 37 Dezañ e lavar eta Pilat: **“Daoust ha C’hwi n’oc’h ket Roue ?”** Respont a ra Jezuz: **“Te ’lavar ez on-me Roue! Evid kement-mañ ez on-me ganet hag ez on deuet er Béd: evid rei testeni d’ar wirionez! Kement-hini a zo euz ar wirionez, a zelaou va mouez!”** 38 Ha Pilat da lavared dezañ: **“Petra eo ar Wirionez ?”** Ha diwar ar C’homzouze, ez a Pilat adarre daved ar Juzevien hag e lavar dezo: **“Me ne gavan tamall ebed ennañ! 39 Kustum eo deoc’h avad e lakfen diliamma deoc’h eun dén da geñver ar Pask. Ha c’hoant hopeus eta e lakfen diliamma deoc’h Roue ar Juzevien ?”** 40 Hag int-i a youc’h adarre o lavared: **“N’eo ket Hennez! med Barabaz!”** Barabaz avad a zo eun torfetour.

Mz 16,13
 Mz 20,13

Yn 6,15

1 Tim 6,13
 Yn 8,47
 Yn 10,27

19

SETU AN DEN!

Mz 27,27...
Mk 15,16...

¹ Pilat a gemer eta Jezuz evid e skourjeza. ² Hag ar zoudarded a vlañson eur gurunenn gand bodou spern hag he lakont war e benn! Eur vantell voug a daolont ive warnañ, ³ hag e teuont dirazañ en eur lavared: **“Salud! Roue ar Juzevien!”** Ha dezañ e roont taoliou! ⁴ Adarre e teu Pilat er-mêz hag e lavar **“Setu ez an d’e zegas er-mêz, deoc’h gouzoud ne gavan ennañ tamall ebed!”** ⁵ Dond a ra eta Jezuz er-mêz o tougen ar gurunenn spern hag ar vantell voug, hag e lavar dezo Pilat: **“Setu an DEN!”**...

Lk 24,16
Yn 10,11...

⁶ Ouz e weled, e youc’h ar Veleien-Vraz hag ar Warded, o lavared: **“Stag ouz ar groaz! Stag ouz ar groaz!”** Dezo e lavar Pilat: **“Kemerit-Eñ, c’hwi, ha stagit ouz ar groaz, rag me ne gavan ennañ tamall ebed!”**. ⁷ Respont a ra dezañ ar Juzevien: **“Ni on-eus eul Lezenn, ha diouz al Lezenn-ze, e tle mervel, rag en em lakeet e-neus e-unan da Vab Doue!”**...

Yn 10,18
Ob 2,23

⁸ Pa glev eta ar gomz-ze, e krog brasoc’h aon e Pilat! ⁹ Mond a ra adarre er Pretor-Di hag e lavar da Jezuz: **“A-be-lec’h ez oc’h-c’hwi?”** Jezuz avad ne ro dezañ respont ebed! ¹⁰ Dezañ e lavar eta Pilat: **“Ne gaozit ket din ? Daoust ha ne ouezit ket am-eus galloud d’ho tiliamma, hag am-eus galloud d’ho staga ouz ar groaz?”**. ¹¹ Respont a ra Jezuz: **“N’az-pefe galloud ebed a-eneb din, ma ne vefe ket bet roet dit euz an Neñv! Rag-se, an hini e-neus va roet etre da zaouarn e-neus brasoc’h pehed!”**.

SETU HO ROUE!

Ob 17,7

¹² Diwar neuze, ema Pilat o klask e ziliamma, med ar Juzevien a youc’h o lavared: **“Ma tiliammez Henez, n’out ket ‘Mignon da Zezar’! Kement-hini en em laka da roue a zav a-eneb Sezar!”** ¹³ Pa glev eta Pilat ar c’homzou-ze, e tegas Jezuz er-mêz hag ec’h azez war ar Gador-Varn, el lec’h anvet ‘Litostrototz’ (Paveadur), en hebreeg Gabata. ¹⁴ Deiz-rag-aoza-Pask eo, wardro ar c’hwec’hved eur, hag e lavar d’ar Juzevien: **“Setu ho Roue!”** ¹⁵ Hag ar re-mañ da youhal: **“Lam kuit! Lam kuit! Stag ouz ar groaz!”** Dezo e lavar Pilat: **“Ho Roue deoc’h-c’hwi ez in da staga**

Mz 26,47

ouz eur groaz ?” Respont a ra ar Veleien-Vraz: **“N’eus deom-ni Roue ebed nemed Sezar!”** ¹⁶ Hag e rei a ra neuze etre o daouarn da veza staget ouz ar groaz...

“JEZUZ-AN-NAZAREAD, ROUE AR JUZEVIENT”.

Mz 27,31...
Mk 15,20...
Lk 23,26...

Ganto e kemeront eta Jezuz. ¹⁷ En eur zougen dezañ e-unan e groaz, ez a d’al Lec’h anvet ‘Klopenn’, Golgota en hebreeg. ¹⁸ E staga a reont eno ouz ar groaz, ha daou all d’e heul, unan a bep tu ha Jezuz e-kreiz! ¹⁹ Pilat a ra ive eur skrid-tamall hag e laka ouz ar groaz ; warnañ ez eus skrivet: **“Jezuz an Nazaread, Roue ar Juzevien”**. ²⁰ Euz ar Juzevien, kalz a lenn ar skrid-tamall-ze, pa z’eo harp ouz Kêr al lec’h m’eo stag Jezuz ouz ar groaz, ha pa z’eo skrivet en hebreeg, e latin hag e gresianeg. ²¹ Da Bilat e lavar Beleien-Vraz ar Juzevien: **“Na skriv ket ‘Roue ar Juzevien’, med e-neus-Eñ lavaret: ‘Roue ar Juzevien on-me!’”** ²² Respont a ra Pilat: **“Ar pez am-eus skrivet am-eus skrivet!”**.

Salm 22,19

²³ P’o-deus eta staget Jezuz ouz ar groaz, e kemer ar zoudarded e zillad hag e reont peder lodenn, da bep soudard eul lodenn, hag ar zae. Ar zae avad n’eus gwri ebed enni: gwiadet eo en eun tamm adaleg an nec’h! ²⁴ Etrezo e lavaront: **“Arabad deom he frega! Med tennom warni al Lod, da c’houzoud da biou e vo!”** An dra-ze, evid ma vo sevenet ar Skritur: *“Lodennet o-deus va dillad, evito o-unan, ha war va zae o-deus tennet al Lod!”* Evel-se e ra ar zoudarded...

EN EUR ZOUBLA E BENN, E RO AR SPERED...

Mz 27,48...
Mk 15,16...
Lk 23,46...

²⁵ E-kichenn kroaz Jezuz e chom, en o zav, e Vamm, c’hoar e Vamm, Mari, gwreg Klopaz, ha Mari Madalen. ²⁶ O weled eta e Vamm, hag en e zav en he c’hichenn an Diskib karet gantañ, e lavar Jezuz d’e Vamm: **“Maouez! Setu aze ho Mab!”** ²⁷ Goude-ze e lavar d’an Diskib: **“Sed aze da Vamm!”** Hag adaleg an Eur-ze, ez a an diskib d’he c’hemer en e di...

Salm 69,22

²⁸ Da-c’houde, pa oar Jezuz eo bremañ peur-zevenet pep tra, evid peur-zeveni ar Skritur e lavar: **“Sched am-eus!”** ²⁹ Bez’ ez eus eno eur pod leun a winegr. Eur spoueenn leun a winegr a lakont eta e penn eur raosklenn hag a dostaont ouz e c’henou. ³⁰ Kemeret gantañ ar gwinegr, e lavar Jezuz: **“Peur-zevenet eo!”** hag en eur zoubl e Benn, e ro ar Spered!...

Job 19,26
Mz 8,20

KERKENT E TIVER DIOUTAÑ GWAD HA DOUR!

Dt 21,23

³¹ Peogwir ema Derhent ar zabad, evid na jomfe ket ar c'horvou war ar groaz epad ar zabad, -rag eun Deiz braz eo ar zabad-ze!-, e c'houlenn ar Juzevien digand Pilat ma vo torret dezo o diwesker ha ma vint lamet kuit. ³² Mond a ra eta ar zoudarded: d'an hini kenta e torrout e ziwesker, hag ive d'an eil bet staget ouz ar groaz d'e heul. ³³ Degouezet dirag Jezuz, pa welont ez eo a-vremañ marvet, ne dorrout ket dezañ e ziouhar, ³⁴ med unan euz ar zoudarded, gand eun taol goaf, a zigor dezañ e gostez, ha kerkent e tiver dioutañ Gwad ha Dour! ³⁵ An hini e-neus gwelet a ro testeni, ha gwirion eo e desteni, rag gouzoud a ra e lavar ar wirionez, deoc'h-c'hwil ive dond da gredi! ³⁶ Rag degouezet eo kement-se ma vo sevenet ar Skritur: "*Askorn ebed dezañ ne vo torret!*". ³⁷ Hag eur Skritur-all c'hoaz a lavar: "*Selled a raint ouz an hini o-deus treuzet dezañ e galon!*".

Salm 34,21
Zak 12,10

EN EUR BÉZ NEVEZ!

Mz 27,57...
Mk 15,42...
Lk 23,50...

Mz 2,11

³⁸ Goude kement-se, Jozef euz Arimati -hag a zo diskib da Jezuz, med o chom dindan-guz gand aon rag ar Juzevien-, a c'houlenn digand Pilat gelloud lemel Korv Jezuz: ha Pilat a lez ober. Mond a ra eta da lemel kuit e Gorv. ³⁹ Dond a ra ive Nikodem -hag a oa eet d'e gavoud en noz da genta-, o tegas gantañ eur mesk mîr hag aloèz, eur c'hant lur bennag a bouez! ⁴⁰ Kemer a reont eta Korv Jezuz hag e liamma gand lurennoù, en eur skuill warnañ balzamoù, hervez ar c'hiz da liena gand ar Juzevien...

⁴¹ El lec'h m'eo bet staget ouz ar groaz, ez eus eul liorz, hag el liorz-ze, ez eus eur Béz nevez ha n'eus bet biskoaz lakeet dén ebed ennañ! ⁴² Pa z'eo derhent ar zabad d'ar Juzevien, ha p'ema harp ar Béz, eno eta eo e lakont Jezuz...

20

GWELET AM-EUS AN AOTROU!...

Mz 28,1...
Mk 16,1...
Lk 24,1...

¹ D'an deiz kenta euz ar zizun, abred diouz ar mintin, pa z'eo c'hoaz teñval, ez a Mari Madalen d'ar béz, hag e wél ar mên tennet kuit euz ar béz! ² D'ar red eta e teu daved Simon-Pêr hag an diskib-

all, an hini karet gand Jezuz, ha dezo e lavar: **“Tennet o-deus an Aotrou euz ar béz, ha n’ouzon ket pe-lec’h o-deus e lakeet!”** ³ Sevel a ra Pèr hag an diskib-all, hag e kerzont warzu ar béz. ⁴ Redeg a reont o-daou a-unan, med an diskib-all a gerz buannoc’h eged Pèr hag e tegouez da genta d’ar béz. ⁵ O soubla, e wél al lurennoù ledet, med ne ’z a ket e-barz. ⁶ Simon-Pèr a zegouez ive war-e-lerc’h hag ez a e-barz ar béz. Gweled a ra al lurennoù ledet, ⁷ hag al lienenn a zo bet war e benn, ha n’eo ket ledet gand al lurennoù, med rollet en eul lec’h a-gostez. ⁸ Neuze e teu ive an diskib-all e-barz, an hini degouezet da genta d’ar béz: Gweled a ra hag e kred! ⁹ Ne intentont ket c’hoaz ar Skritur a lavar: *“Bez’e rank adsevel a-douez ar re varo!”* ¹⁰ Hag ez a an diskibien adarre d’ar gêr...

MARIAM! RABOUNI!

¹¹ Mari avad a jom e-kichenn ar béz, er-mêz, o ouela... Epad ma ouel, e soubl warzu ar béz: ¹² gweled a ra daou êl gwisket e gwenn, azezet unan e tu ar penn, egile e tu an treid, el lec’h ma oa astennet Korv Jezuz. ¹³ Ha dezi e lavaront: **“Maouez! Perag e ouelez ?”** Dezo e lavar: **“Peogwir o-deus tennet kuit va Aotrou, ha n’ouzon ket pe-lec’h o-deus e lakeet!”** ¹⁴ Lavaret ganti an dra-ze e tro-hi war-dreñv hag e wél Jezuz en e zav, med ne oar ket ez eo Jezuz. ¹⁵ Jezuz a lavar dezi: **“Maouez, perag e ouelez ? Petra ’glaskez ?”** Kavoud a ra dezi ez eo al liorzour hag e lavar dezañ: **“Aotrou, m’az-peus-te e gaset kuit, lavar din pe-lec’h az-peus e lakeet hag ez in-me d’e gerhed!”** ¹⁶ Dezi e lavar Jezuz: **“Mariam!”** Hag hi distrei ha lavared dezañ en hebreeg: **“Rabouni!”** da lavared eo: **“Mestr!”** ¹⁷ Jezuz a lavar dezi: **“Mir da douch ouzin: rag n’ouzon ket c’hoaz savet daved va Zad! Kee daved va Breudeur ha lavar dezo: ‘Sevel a ran daved va Zad hag ho Tad, daved va Doue hag ho Toue!’”** ¹⁸ Mond a ra Mari Madalen da zegemenn d’an Diskibien: **“Gwelet am-eus an Aotrou! Ha kement-mañ e-neus lavaret din!”**

DEGEMERIT AR SPERED SANTEL!

¹⁹ Deuet eta an abardaez, d’an deiz-ze, ar c’henta euz ar zizun, ha goude m’eo prenet an norojou war al lec’h m’ema an Diskibien, gand aon rag ar Juzevien, e tegouez Jezuz: chom a ra en e zav, er c’hreiz, hag e lavar dezo: **“Peoc’h deoc’h-c’hwil!”** ²⁰ Lavaret gantañ an dra-ze, e tiskouez dezo e zaouarn hag e gostez.

Mz 28,19
Mz 16,19
Mz 198,18

Hag e laouenna an Diskibien o weled an Aotrou... ²¹ Adarre e lavar Jezuz dezo: **“Peoc’h deoc’h-c’hwil! Evel m’e-neus va Zad va c’haset, ho kas a ran-me ive!”** ²² Lavaret gantañ kement-se, e c’hwez warno hag e lavar dezo: **“Degemerit ar Spered Santel! ²³ An dud ho-po pardonet dezo o fehejou, dezo e vint pardonet!. An dud ho-po o dalhet dezo, dezo e vezint dalhet!”**.

VA AOTROU HA VA DOUE!

1 Pêr 1,8

²⁴ Tomaz, unan euz an Daouzeg, lesanvet ‘Gevell’, n’ema ket ganto pa zeu Jezuz. ²⁵ Dezañ e lavar an Diskibien all: **“Ni on-eus gwelet an Aotrou!”** Eñ avad a lavar dezo: **“Ma ne welan-me ket en e zaouarn merk an tachou, ma ne zankan ket va biz e gouli an tachou, ha ma ne zankan ket va dorn en e gostez, nann! ne gredin ket!”** ²⁶ Eiz-deiz goude-ze, ema adarre an Diskibien en ti, ha Tomaz ganto! Degouezoud a ra Jezuz, goude d’an norojou beza prenet! Chom a ra en e zav er c’hreiz, hag e lavar dezo: **“Peoc’h deoc’h-c’hwil!”** ²⁷ Goude-ze e lavar da Domaz: **“Degas amañ da viz, ha gwel va daouarn! Degas da zorn evid e zanka em c’hostez! Na vez ket diskredig, med kreder!”** ²⁸ Tomaz a respont o lavared dezañ: **“Va Aotrou ha va Doue!”** ²⁹ Jezuz a lavar dezañ: **“Dre m’az-peus va gwelet, e kredez! Eüruz ar re n’o-deus ket gwelet hag o-deus kredet!”**.

1 Yn 5,13
Rom 1,17

³⁰ Kalz a zinou-all e-neus c’hoaz greet Jezuz dirag e Ziskibien ha n’int ket skrivet el Leor-mañ! ³¹ Ar re-mañ a zo bet skrivet, deoc’h-c’hwil kredi eo Jezuz ar Mesiaz, Mab Doue, ha deoc’h, dre gredi, kaoud Buez en e Ano.

21

BEZ PASTOR WAR VA DEÑVED!

Mz 26,32...

¹ Goude-ze e teu adarre Jezuz da bara dirag e Ziskibien, war ribl Mor Tiberiad: evel-henn e teu da bara... ² Bez’ema bodet Simon-Pêr, Tomaz, anvet Gevell, Natanaël euz Kana er Galile, mibien Zebede ha daou all euz e Ziskibien! ³ Dezo e lavar Simon-Pêr: **“Mond a ran da besketa!”** Int-i a lavar dezañ: **“Mond a reom-ni ive ganit!”** Mond a reont hag e savont er vag: en nozvez-ze avad ne bakont seurt!

Lk 5,4-10

Yn 20,14
Lk 24,16
Lk 24,41
Lk 5,4...
Yn 13,23

⁴ Deuet bremañ ar mintin, ema Jezuz en e zav war an aod, med ne oar ket an Diskibien eo Jezuz an hini eo! ⁵ Dezo e lavar Jezuz: **“Paotred! Daoust ha n’ho-peus ket tra pe dra da zebri ?”** Respont a reont dezañ: **“Nann da!”** ⁶ Dezo e lavar: **“Stlapit ar roued en tu dehou d’ar vag hag e kavoc’h!”** Stlepel a reont eta, ha n’int ket kén evid e zacha, diwar bouez an druillad pesked! ⁷ Lavared a ra da Bèr an diskib karet gand Jezuz: **“An Aotrou an Hini eo!”** O kleved **‘An Aotrou an Hini eo!’**, e laka Simon-Pèr e zae endro dezañ (rag en noaz ema), hag en em daol er mor!... ⁸ An Diskibien-all a zeu gand eur vag -rag n’emaint ket pell diouz an douar, wardro daou c’hant ilinad-, hag e sachont ar roued leun a besked!

Lk 24,41

⁹ Pa ziskennont eta d’an douar, e welont eun tan-glaou war an douar, eun tamm pesked ledet warnañ, ha bara. ¹⁰ Jezuz a lavar dezo: **“Degasit euz ar pesked ho-peus paket bremaig!”** ¹¹ Sevel a ra Simon-Pèr ha sacha d’an douar ar roued leun a besked braz: kant-tri-hag-hanter-kant a zo anezo! Ha goude dezo beza ken niveruz, n’eo ket freget ar roued!

Yn 6,11
Yn 20,19

¹² Jezuz a lavar dezo: **“Deuit da leina!”** Ne gred hini euz an Diskibien goulenn outañ: **“Piou oc’h-c’hwí ?”** Goud a ouzont eo-Eñ an Aotrou! ¹³ Dond a ra Jezuz da gemer ar bara ha d’e rei dezo, hag ar pesked koulz all. ¹⁴ An trede gwech eo da Jezuz para dirag e Ziskibien, goude e Adsao a-douez ar re varo...

Yn 1,42
1 Pèr 5,2...
Mz 16,17

¹⁵ Kemeret eta ganto o lein, e lavar Jezuz da Zimon-Pèr: **“Simon-Mab-Yann, daoust ha va c’hared a rez muioc’h eged ar re-mañ!”** Dezañ e lavar: **“Ya! Aotrou! Gouzoud a rit: ho kared a ran!”** Hag e lavar dezañ: **“Bez Pastor war va oanigou!”** ¹⁶ Dezañ e lavar evid an eil gwech: **“Simon-Mab-Yann! Daoust ha va c’hared a rez ?” - “Ia! Aotrou! Gouzoud a rit: ho kared c’hwec’h a ran!”** Hag e lavar dezañ: **“Bez Pastor war va deñved!”** ¹⁷ Evid an trede gwech e lavar dezañ Jezuz: **“Simon-mab-Yann, daoust ha va c’hared c’hwec’h a rez ?”**. Glaharet eo Pèr pa lavar dezañ evid an trede gwech: **‘Daoust ha va c’hared c’hwec’h a rez ?’**, hag e lavar dezañ: **“Aotrou! C’hwí a oar pep tra! Her gouzoud a rit-c’hwí: ho kared c’hwec’h a ran!”** Dezañ e lavar Jezuz: **“Bez Pastor war va deñved!”**...

TE, DEUS D'AM HEUL!...

Mz 16,22
Mz 26,39

18 **“E gwirionez, e gwirionez e lavaran dit: pa oaz yaouan-koc’h, e lakees da-unan da c’houriz hag e valees d’al lec’h ma kares! Med pa vezi eet koz, ec’h astenni da zaouarn, hag unan all a lakaio dit da c’houriz ha da gaso d’al lec’h na fell ket dit!”**

19 An dra-ze avad a lavar dezañ da verka dezañ dre be-seurt maro e roio gloar da Zoue! Ha diwar ar c’homzou-ze, e lavar dezañ: **“Deus d’am heul!”**.

Yn 15,23

20 En eur zistrei, e wél Pèr, o tond d’e heul, an diskib karet gand Jezuz, an hini e-noa, epad ar Pred, soublet war e galon ha lavaret: **“Aotrou! Piou eo an hini a zo o vond d’Ho rei ?”** 21 O weled hennez eta, e lavar Pèr da Jezuz: **“Aotrou! Petra vezo anezañ ?”** 22 Jezuz a lavar dezañ: **“Ma fell din e chomfe beteg ma teuin, petra an dra-ze dit ? Te, deus d’am heul!”** 23 Sevel a ra eta ar vrud-mañ e-touez ar Vreudeur : an diskib-ze ne varvo ket!... Jezuz avad n’e-neus ket lavaret dezañ **‘Ne varvo ket!’**, med: **‘Ma fell din avad e chomfe beteg ma teuin, petra an dra-ze dit ?’**.

GOUD A OUZOM EO GWIR E DESTENI!

Yn 15,27

24 An Diskib-ze eo a ro testeni diwar-benn an traou-ze, hag e-neus o skrivet! Ha goud a ouzom ez eo gwir e Desteni...

Yn 20,30

25 Bez’ ez eus c’hoaz avad kalz traou-all bet greet gand Jezuz... Ma vefent skrivet hini hag hini, nag ar Béd e-unan, d’am meno, ne c’hellfe ket zokén ar Bed e-unan kaoud plas d’al Leoriou a vefe bet skrivet...

Lukaz hag Oberou Ebestel

En e Leor kenta, -an trede Aviel-, e tegas deom Lukaz Parabolenn an Hadenn Zezo:

“Ouz petra, eme Jezuz, eo heñvel Rouantelez Doue ?

“Heñvel eo ouz eun Hadenn Zezo a gemer eun den da daoler en e liorz:

“Kreski a ra beteg dond da veza eur wezenn,

“Hag e teu laboused an neñv da gluda en he skourrou! (Lk 13, 19)”

El Leor ‘Oberou Ebestel’, e tiskouez deom eo deuet da wir Komzou Jezuz, en eur ober tregont vloaz bennag...

Jezuz eo an Hadenn vuzuduz-ze, lakeet en douar da zeiz Gwener ar Groaz: eun Hadenn zister, eun Hadenn vruzunet, da weled, echu ganti!

Med tri devez goude-ze, setu-hi diwanet, leun a Vuez hag a Nerz!

Dre Nerz ar Spered Santel, e kresk dillo e Jeruzalem ha tro-war-dro! (Ob 2, 41-47 ; 4, 4 ; 6, 1-7)


Dizale ec’h astenn he skourrou beteg ar Samari ha Kêr Vraz Antioch (Ob 8-12). Goude Misionou Pèr, Lukaz a gont deom re Baol. Drezañ ha dre e skoazellerien e teu an Hadenn da astenn he skourrou dre an Azi gand Kêr Vraz Efez, ha goude-ze en tu-all d’ar mor, er Grês: Atên ha Korint... (Ob 13-26)

Evid Paol, n’eo ket c’hoaz a-walc’h! Poent eo mond da Rom, Penn an Impalaerez, el lec’h m’ema Trôn Sezar! Dre galz trubuillou, e tegouez eno, wardro ar bloavez 60, hag eno e tegouezo ive Pèr e-unan, en amzer-ze (Ob 27-28).

Evel-se, en eur ober eun tregont vloaz bennag, dre c’halloud ar Spered Santel, dre labour kaloneg an Ebestel hag ar gristenien, en desped da galz trubuillou hag heskinerez, eo deuet an Hadenn zisterig da astenn he skourrou beteg Kêr Rom, ha zoken beteg Ti an Impalaer Sezar, el lec’h m’eo dalhet Paol araog beza barnet.

Deuet eo an Hadenn da veza eur Wezenn Vraz, ha bez’e c’hell an oll dond da glask diskuiz, frealz, sklêrijenn ha peoc’h en he Skourrou!... (Lk 24, 46-49)

Oberou Ebestel



E Sant-Herbod, Ploneve-ar-Faou. Sk J. F.

- 1 -

JEZUZ, DOUGET D'AN NEÑV, A ZISTROIO EVELSE...

Lk 1,3...
Mz 28,19
Lk 24,51

¹ An danevell genta am-eus greet, Aotrou Teofil, diwar-benn kement e-neus Jezuz staget d'ober ha da gelenn, ² beteg an Deiz dezañ da rei kemen-nou, dre ar Spered Santel, d'an Ebestel e-noa dibabet, ha da veza douget d'an Neñv! ³ Dezo ive, goude e Basion, e-neus en em ziskouezet beo, dre rei kalz a verkou anad: a-hed daou-ugent devez eo deuet da bara dirazo ha da gomz diwar-benn Rouantelez Doue...

Lk 24,49
Mz 3,11

⁴ A-greiz preja ganto, e kemenn dezo diwall da guitaad Jeruzalem, med gortoz Promesa an Tad, **“an Hini, emezañ, ho-peus klevet ganin: ⁵ Yann e-neus badezet en dour! C’hwil avad a vezo badezet er Spered Santel, goude an nebeud deveziou-mañ!”**

Mz 24,36
Mz 28,39
Yn 15,27

⁶ P'emaint eta bodet, e c'houlennt outañ: **“Aotrou! emezo, daoust hag en Amzer-mañ ec’h adsavoc’h ar Rouantelez evid Izrael?”** ⁷ Dezo avad e lavar: **“N’eo ket deoc’h gouzoud an Amzeriou pe ar poeñchou e-neus an Tad merket en e c’halloud e-unan! ⁸ Med c’hwil a zegemero eun Nerz, Hini ar Spered Santel diskennet warnoc’h! Hag e vezoc’h din-me testou e Jeruzalem, hag er Jude a-bez, er Samari, ha beteg penn pella ar Bed!”**

Yn 20,17
Ef 4,8...

⁹ Lavaret gantañ kement-se, hag int-i o selled outañ, ez eo savet d'an Uhel, hag e teu eur goabrenn d'e guzad ouz o daoulagad... ¹⁰ Chomet o zellou troet warzu an Neñv, epad ma sav, setu en o c'hichenn daou waz, en o zav, dezo dillad gwenn, ¹¹ hag a lavar dezo: **“Gwazed! Galileiz! Perag e chomit da zelled warzu an Neñv! Ar Jezuz-ze, douget diganeoc’h d'an Neñv, a zeuio en doare m'ho-peus e welet o vond d'an Neñv!”**

Lk 24,4...
Mz 25,31

¹² Neuze e tistroont da Jeruzalem diwar ar menez galvet Menez-an-Olived, a zo tost da Jeruzalem, war-héd eur valeadenn-zabad! ¹³ Pa zegouezont, e savont d'an nec'h, el lec'h ma vez o chom: Pèr, Yann, Jakez, hag Andre, Filip ha Tomaz, Bartolome, ha Maze, Jakez hag Alfe, Simon ar 'Gredeg' ha Judaz-mab-Jakez! ¹⁴ Int-i oll, unan a-galon, a gendalc'h da bedi gand eun nebeud gwragez, gand Mari-mamm-Jezuz, ha gand e Vreudeur!...

HAG E KOUEZ AL LOD GAND MATIAZ!

Mz 16,18
Salm 41,10

¹⁵ En deveziou-ze, e sav Pèr e-kreiz ar Vreudeur, -wardro c'hwec'h-ugent den a zo bodet eno-, hag e lavar: ¹⁶ **“Gwazed! Breudeur! Peur-zevenet e ranke beza ar Skritur e-neus ar Spered Santel lavaret dre c'henou David, diwar-benn Judaz, bet o heñcha ar re o-deus paket krog e Jezuz!... ¹⁷ Kontet e oa ganeom-ni, ha da Lod e-noa ar vinistrerez-mañ! ¹⁸ Hennez e-neus eta prenet eur park gand gopr ar fallagriez! Kouezet war e benn, setu-eñ digoret dre e greiz ha ledet dezañ e oll vouzellou! ¹⁹ Anad eo kement-se d'ar re oll a vev e Jeruzalem, ken m'eo galvet ar**

park-se, en o yez dezo, ‘Akeldama’, da lavared eo ‘Park-ar-Gwad’. ²⁰ Rag skrivet eo e Leor ar Salmou:

Salm 69,26 *“Ra vo goullo e di ha na vezet den o chom ennañ!”*

Salm 109,8 *Ha c’hoaz: “Ra gemero unan all e eskobiez!”*

²¹ Neuze ’ta, euz ar wazed bet d’on heul a-héd an oll amzer m’eo an Aotrou deuet hag eet en or penn, ²² o staga gand badeziant Yann beteg an Deiz dezañ da veza savet diganeom d’an Neñv, e rank unan anezo beza ganeom-ni test euz e Adsao!” ²³ Degas a reont daou: Jozef, galvet Barsabaz ha lesañvet Just, ha Matiaz, ²⁴ hag en eur bedi e lavaront: **“Aotrou! C’hwí a lenn e kalon an oll! Diskouezit deom pehini ho-peus dibabet euz an daou-mañ, ²⁵ da gemer plas er ministrerez hag abostolerez-ze e-neus Judaz dilezet evid mond d’e blas e-unan!”** ²⁶ Ha dezo e roont al ‘lod’. Hag al lod a gouez war Matiaz, hag enskrivet eo-eñ gand an Unneg Abostol.

- 2 -

HAG E SKULLIN EUZ VA SPERED WAR BEB DEN!

¹ P’ema Deiz ar Pantekost o peur-dremen, ez int oll a-unan bodet en heveleb ti. ² En eun taol, e teu euz an Neñv eun trouz heñvel ouz diroll eur gorventenn: gantañ eo karget a-bez an ti ez int azezet ennañ! ³ Dirazo e teu da bara teodou distag, evel teodou-tan, a zeu da blava war bep hini anezo. ⁴ Bez’ ez int oll leuniet gand ar Spered Santel, hag e stagont da gomz e yezou-all, diouz ma ro ar Spered dezo da zistaga...

Yn 3,8...

Mk 16,18
Lk 2, 1...

⁵ Bez’ ez eus e Jeruzalem Juzevien, gwazed a-feiz euz peb broad euz ar re a zo dindan an neñv. ⁶ Pa dregern ar vouez-ze, e tired an dud a-unan; bez’ ez int strafuillet, rag pep hini o c’hlev o komz en e yez e-unan! ⁷ Estlammet ha souezet int, hag e lavaront: **“An oll re-ze a zo o komz, daoust ha n’int ket Galileiz? ⁸ Ha penaoz e teu pep hini ahanom d’o c’hlevet e yez or bro-hinidig ? ⁹ Partiz ha Mediz hag Elamiz, hag ar re a zo o chom e Mezopotami, Jude, Kapadoz, Pont, hag en Azi, ¹⁰ Friji, Pamfili, Ejipt, hag e lodenn al Libi warzu Siren, hag ar Romiz divroadet, ¹¹ Juzevien ha Prozelited, Kretiz hag Arabiz! Penaoz o c’hlevom o tisplega, en or yezou, burzudou Doue?”**

Mz 28,19

¹²Estlammet eo an oll, ha, lakeet nehet, e lavaront an eil d’egile: **“Petra c’hell an dra-ze merka ?”** ¹³ Lod all a ra goap hag a lavar: **“Bez’ ez int leun a win dous!”** ¹⁴ En e zav gand an Unneg, e sav Pèr e vouez da zistaga dezo: **“Gwazed! Juzevien ha c’hwí oll a zo e Jeruzalem, ra vo anad deoc’h an dra-mañ, ha digorit ho tiskouarn d’am lavarou! ¹⁵ Rag n’eo ket mezo an dud-mañ evel ma kav deoc’h! N’eo c’hoaz nemed trede eur an deiz! ¹⁶ Med kement-se eo ar pezh a zo lavaret dre a profed Joel:**

Ef 5,18

¹⁷ *“Bez’ e vo, en deveziou diweza, ma skuillin euz va Spered war beb den!*

Ob. 2,18-34

Joel 3,1...

“Profedi a raio ho pôted hag ho merhed!

Iz 2,2

“Ho yaouankizou a welo gweledigeziou, hag ho kozidi a huñvreo huñvreo!”

18 *“War va zervicherien ha va zervicherezed, en deveziou-ze,*

“E skuillin euz va Spered, hag e profedint!

19 *“Ha rei a rin-me marzou en neñv, d’an nec’h,*

“Ha sinou war an douar, d’an traoñ, gwad ha tan hag eun êzenn voged!

20 *“An heol a droio e teñvalijenn hag al loar e gwad,*

“Araog ma teuio Deiz an Aotrou, braz ha splann!”

21 *“Ha kement-hini a c’halvo Ano an Aotrou a vo salvet!”*

Mk 2,23...

22 Gwazed, Izraeliz, selaouit ar c’homzou-mañ! Jezuz-an-Naza-read, eur Gwaz bet merket deoc’h gand Doue dre vurzudou ha marzou ha sinou greet drezañ gand Doue en ho touez, evel ma ouezit, ²³ ha bet roet (a-bouez mennad stard ha rag-ouiziegez Doue!), dre zaouarn tud direiz, Henez ho-peus staget ouz ar groaz ha kaset d’ar maro! ²⁴ Henez e-neus Doue adsavet o lemel ereou ar Maro, pa ne c’helle ket beza e rafe ar Maro e vestr warnañ, ²⁵ rag evitañ e lavar David:

Salm 18,6

“Gweled a ran an Aotrou dirazon bepred,

Salm 16,8...

“Rag a-zehou din ema evid na vrallin ket!

Lk 3,3...

26 *“Rag-se e laouenna va c’halon hag e trid va zeod!*

“Ha va c’horv ive a jomo stard er fiziañs

27 *“Na zilezoc’h ket va ene da vond en iverniou,*

“Ha na lakoc’h ket ho Sant da weled ar vreinadurez!

28 *“Desket ho-peus din Heñchou ar vuez,*

“Ha va leunia a reoc’h a drugar gand ho tremm!” ...

Salm 132,11

29 Gwazed, Breudeur, aotreet eo lavared deoc’h gand hardisegez e-keñver on tad-meur David, ez eo ha marvet ha bet beziet, hag ema e Vên-bez beteg hirio en or c’hichenn! ³⁰ Peogwir e oa anezañ eur profed, ha ma ouie e-noa Doue, dre le, touet dezañ lakaad eur frouezenn euz e greiz da azeza war e drôn, ³¹ dre rag-weled, e-neus degemennet Adsao ar Mesiaz, Hemañ n’eo ket bet dilezet en iverniou hag e Gorv n’e-neus ket gwelet ar vreinadurez...

Salm 16,10

32 “Ar Jezuz-ze eta, Doue e-neus e adsavet: a gement-se ez om-ni oll test! ³³ Savet uhel eta gand dorn-dehou Doue, e-neus Eñ degemeret digand an Tad ar Spered Santel e-noa prometet; ha skuillet e-neus bremaig ar Spered-ze, a welit hag a glevit hoc’h-unan! ³⁴ Rag David n’eo ket savet d’an Neñv, med e-unan a lavar:

“Lavaret e-neus an Aotrou d’am Aotrou: ‘Azezit en tu-dehou din,

Salm 110,1...

³⁵ “Beteg ma lakin hoc’h enebourien da skabell evid ho treid!”

Fil 2,11

³⁶ **Ra ouezo difazi eta, Ti Izrael a-bez: Doue e-neus greet Aotrou ha Mesiaz, ar Jezuz-ze ho-peus c’hwi staget ouz eur groaz!”**

Lk 3,10...

³⁷ Ouz e gleved, ez eo treuzet o c’halon, hag e lavaront da Bèr ha d’an Ebestel all: “**Petra eo deom-ni ober, Breudeur?”** ³⁸ Ha Pèr dezo: “**Distroit ouz Doue, emezañ, ha ra vo badezet pep hini ahanoc’h en Ano Jezuz Krist evid pardon ho pehejou, hag e tegemeroc’h donezon ar Spered Santel,** ³⁹ **rag deoc’h ive eo ar Bromesa ha d’ho pugale, ha d’an oll re a zo pell-braz, kement bennag a c’halvo an Aotrou, on Doue!”**

Iz 57,19

⁴⁰ Gand kalz a Gomzou all e ro testeni, hag o erbedi a ra o lavared: “**Bezit salvet diouz ar rummad direiz-mañ!”** ⁴¹ Ar re a zegemer ar Gomz a vez badezet, hag en deiz-ze e teu en o zouez wardro tri mil den! ⁴² Bez’ e talhont da gelennadurez an Ebestel, d’ar Gomuniez, d’ar Rann-Vara, ha d’ar pedennou. ⁴³ E peb spered e krog aon, rag degouezoud a ra kalz marzou ha sinou dre zaouarn an Ebestel, ⁴⁴ An oll grederien a jom bodet, hag o zraou a zo oll ken-etrezo. ⁴⁵ O douarou hag o madou a werzont, hag ar priz a lodenont etre an oll, hervez m’e-neus ezomm pep hini. ⁴⁶ Bemdez e talhont, unan a galon, da vond d’an Templ, da ranna ar Bara er gêr, hag o boued a zebront gand eur galon laouen! ⁴⁷ Meuli a reont Doue, ha gwelet mad int gand ar Bobl a-bez! An Aotrou avad a gresk bemdez niver an dud salvet...

Dt 32,5

Ob 4,32...
Ob 5,12...

- 3 -

EN ANO JEZUZ KRIST, BALE!

Lk 8,51...

¹ Pèr ha Yann a zo avad o sevel d’an Templ evid pedenn an naved eur! ² Eur gwaz ganet kamm a vez douget di: bemdez e vez lakeet e-kichenn Dor an Templ anvet ‘Dor-Gaer’, dezañ da c’houlenn aluzenn digand an dud a ia en Templ. ³ O weled Pèr ha Yann o vond en Templ, e c’houlenn kaoud aluzenn. ⁴ Pèr ha Yann, en eur bara warnañ o zell, a lavar dezañ: “**Sell ouzom!”** ⁵ Eñ avad a bar warno e zaoulagad en eur c’hortoz eun dra bennag diganto. ⁶ Pèr avad a lavar: “**Aour hag arhant n’eus ket din! ar pez am-eus, an dra-ze a roan dit: En Ano Jezuz Krist an Nazaread, bale!”** ⁷ Hag en eur gregi en e zorn dehou, e ra dezañ sevel: raktal eo startet e dreid hag e uferniou! ⁸ En eul lamm e sav en e zav hag e vale! Mond a ra ganto en Templ o vale, o lammad hag en eur veuli Doue...

Mz 2,23...

Yn 10,23

⁹ Ar Bobl a-bez a wel an den o vale hag o veuli Doue! ¹⁰ E anavezoud a reont da veza an hini a glaske aluzenn, azezet dirag ‘Dor-Gaer’ an Templ, hag ez eo an dud leun a spouron hag a strafuill diwar ar pez a zo degouezet gantañ... ¹¹ Peogwir e talc’h an den krog e Pèr hag e Yann, e tired daveto ar Bobl a-bez er Porched anvet Porched Salomon. ¹² Ouz o gweled, e stag Pèr da lavared d’ar Bobl: “**Gwazed! Izraeliz! Perag e souezit diwar-ze? Ha perag para ho taoulagad warnom-ni, evel pa vefe dre or galloud on-unan**

pe dre or santelez on-nefe lakeet an den-mañ da vale? ¹³ Doue Abraham hag Izaag ha Jakob, Doue on Tadou e-neus roet gloar d'e Zervicher Jezuz ho-peus c'hwi roet hag ho-peus nahet dirag Pilat, goude da hemañ barn d'e laoskaad. ¹⁴ C'hwi avad ho-peus nahet ar Zant hag an Hini Just, ha goulennet ho-peus e vefe roet deoc'h dre c'hras eur muntre! ¹⁵ Mestr ar Vuez ho-peus lazet, ha Doue e-neus e adsavet a-douez ar re varo! A-gement-se ez om ni test! ¹⁶ Ablamour d'ar feiz en e Ano, e-neus e Ano kreñveet an den-mañ a welit hag a anavezit, hag ar feiz ennañ he-deus roet dezañ ar yehed peurvad, dirazoc'h oll"...

¹⁷ "Ha bremañ, Breudeur, goud a ouzom ho-peus greet kement-se heb gouzoud deoc'h, c'hwi hag ho renerien! ¹⁸ Doue avad, goude embann dre an oll Brofeded ar poaniou e-nefe ar Mesiaz da c'houzañv, e-neus dre-ze o beur-zevenet! ¹⁹ Distroit 'ta ha troit ho kalon ma vo lamet ho pehejou, ²⁰ a-benn ma tegouezo Amzeriou a zistan digand an Aotrou, ha ma kaso an Hini stummet evidoc'h, Jezuz, ar Mesiaz! ²¹ Hemañ a rañk an Neñv degemer beteg an amzeriou ma vo reizet an oll draou e-neus Doue komzet anezo dre c'henou e Brofeded santel a-vepred..."

²² "Moizez a lavar: 'An Aotrou, on Doue, a adsavo deoc'h, a-douez ho Preudeur, eur Profed evel don-me: Hennez a vo deoc'h selaou e kement a lavaro deoc'h! ²³ Kement den na zelaouo ket ar Profed-ze a vo lakeet d'ar maro a-douez ar Bobl!' ²⁴ Hag an oll Brofeded adal Samuel, hag ar re all o-deus profedet diwezatic'h, oll o-deus degemennet an deveziou-mañ! ²⁵ C'hwi eo Bugale ar Brofeded ha re an Emgleo e-neus Doue diazezet evid ho Tadou, o lavared da Abraham: "En da ligned e vo benniget oll rummadou ar Bed!" ²⁶ Evidoc'h da genta, e-neus Doue adsavet e Zervicher Jezuz, hag e-neus e gaset d'ho penniga dre zistrei pep hini ahanoc'h diouz e wall-oberou".

-4-

EN ANO JEZUZ EMA AN DEN YAC'H DIRAZOC'H!

¹ O komz d'ar Bobl emaint c'hoaz, pa zegouez warno ar Veleien, komandant an Templ hag ar Zadukeiz. ² Bez' ez int hegaset pa gelennont d'ar Bobl ha pa embannont, e Jezuz e-unan, an Adsao a-douez ar re varo! ³ Warno e taolont o daouarn hag er prizon o lakont beteg an deiz war-lerc'h, rag ema a-vremañ an abardaez-noz! ⁴ Kalz euz ar re o-deus klevet ar Gomz a zo deuet da gredi, ha niver ar wazed a zav da bep mil bennag...

⁵ D'an deiz war-lerc'h avad ez eo bodet, e Jeruzalem, o renerien, ar Gozidi hag ar Skribed, ⁶ hag ive Annaz ar Beleg-Braz, ha Kaifaz ha Yann hag Aleksandr, ha kement-re a zo euz rumm ar Beleg-Braz... ⁷ Lakeet ganto an Daou e-kreiz, outo e c'houlennont: "Dre beseurt galloud, pe c'hoaz e pe Ano ho-peus-c'hwi greet an dra-ze?!" ⁸ Pèr neuze, leuniet gand ar Spered Santel, a lavar dezo: "Renerien ar Bobl ha Kozidi! ⁹ Ma z'om-ni barnet

Mz 10,19... **hirio, en abeg d'eur madober greet d'eun den nammet, evid gouzoud gand piou eo bet saveteet, ¹⁰ ra vezo an dra-mañ anad deoc'h-oll ha da Bobl Izrael a-bez: en Ano Jezuz Krist an Nazaread, an Hini ho-peus c'hwi staget ouz ar groaz, an Hini e-neus Doue adsavet a-douez ar re varo, dre Hennez ema hemañ yac'h dirazoc'h!** ¹¹ *Hennez eo ar Mên bet lakeet da netra ganeoc'h, ar Vañsonerien, an Hini deuet da veza Mên-Korn-uhella!* ¹² **Ha n'eus Silvidigez e hini all ebed, rag n'eus ket roet d'an dud eun Ano all dindan an Neñv a rañkfem beza salvet drezañ...**

Mz 21,42
Salm 118,22

Mz 1,21 ¹³ O weled hardisegez Pèr ha Yann, hag o verzoud ez eus anezo tud dizek ha digelenn, e chomont souezet! Goud a ouzont e vezent da heul Jezuz, ¹⁴ med o weled an den pareet, en e zav, en o c'hichenn, ne gavont seurt da zislavared! ¹⁵ Kemenn a reont dezo mond er-mêz euz ar Zanedrin, hag etrezo e tivizont, ¹⁶ o lavared: **"Petra a rafem d'an dud-ze? Rag anad eo ar zin degouezet drezo, ha sklêr eo d'ar re oll a zo e Jeruzalem! Ne c'hellom ket nac'h!** ¹⁷ Med evid na vo brudet muioc'h mui e-touez ar Bobl, deom-ni o gourdrouz da viroud outo komz en Ano-ze da nikun e-touez an dud!" ¹⁸ Hag o gelver a reont, hag e tifennont striz outo komz pe gelenn en Ano Jezuz! ¹⁹ Pèr ha Yann avad a respont dezo o lavared: **"Daoust ha just eo dirag Doue senti ouzoc'h kentoc'h eged ouz Doue? Barnit!** ²⁰ **Rag ne c'hellom-ni ket chom heb displega kement on-eus gwelet ha klevet!"** ²¹ Int-i avad o c'hourdrouz adarre, hag o laoskaad a reont, pa ne gavont ket penaoz o c'hastiza, ablamour d'ar Bobl: an oll a ro gloar da Zoue diwar ar pez a zo c'hoarvezet, ²² rag ouspenn daou-ugent vloaz eo an den a zo degouezet ennañ ar pare-ze!

Yn 11,47

Ob 1,8...

²³ Kerkent ha laoskeet, ez eont daved o Breudeur: degemenn a reont dezo kement o-deus ar Veleien-Vraz hag ar Gozidi lavaret dezo... ²⁴ Ouz o c'hleved, unan a galon, e savont o mouez warzu Doue, o lavared: **"Mestr! C'hwi ho-peus greet an neñv hag an douar hag ar mor ha kement a zo enno!** ²⁵ **Dre ar Spered Santel, o komz dre c'henou ho Servicher David, e lavarit:** *"Perag ez eus Paganed o skrija ha Poblou oc'h intent ouz traouachou!* ²⁶ *Savet eo rouaned ar Bed ha bodet ar renerien a-eneb an Aotrou hag e Veziaz!"*

Salm 2,1...

Lk 23,12 ²⁷ **Rag evid gwir, er Gêr-mañ, a-eneb ho Servicher Santel Jezuz, bet olevet ganeoc'h-c'hwi, eo bet bodet Herodez ha Ponz-Pilat a-unan gand ar Baganed ha Pobl Izrael, ²⁸ evid seveni kement o-deus ho torn hag o Mennad divizet da veza sevenet!** ²⁹ **Ha bremañ, Aotrou, taolit eur zell war o gourdrouzou, ha grit d'ho servicherien embann ho Komz gand an oll hardisegez, ³⁰ oc'h astenn ho Torn da zegas pareañsou, sinou ha burzoudou en Ano ho Servicher Santel Jezuz!"**

Mk 16,20

³¹ Echuët ganto o fedenn, e teu da grena al lec'h m'emaint ennañ. Leuniet int oll gand ar Spered Santel, hag ec'h embannont Komz Doue gand hardisegez. ³² Poblad braz ar Grederien a zo unan a-galon hag a-spered, ha n'eus ket eun unan da lavared eo dezañ tra-pe-dra euz e vadou! Med an oll draou a zo kenetrezo. ³³ Gand nerz e-leiz e ro an Ebestel testeni da

Ob 2,44 Adsao Jezuz an Aotrou, hag ez int gwelet mad-tre gand an oll. ³⁴ N'eus den ezommeg ebed en o zouez: kement-re o-deus douarou pe diez o gwerz, evid degas priz an traou gwerzet ³⁵ hag e lakaad e-harz treid an Ebestel: roet e vez e lod da bep hini hervez e ezomm. ³⁶ Jozef, lesañvet Barnabe gand an Ebestel, - da lavared eo: Mab-ar-Frealz -, eul Leviad, ginnidig euz Enezenn Chipr, ³⁷ a zo dezañ eur park; e werza a ra, ha degas an arhant e-harz treid an Ebestel...

-5-

ANANI! PERAG LAVARED GEVIER D'AR SPERED SANTEL!

Yn 8,44 ¹ Eur gwaz anvet Anani, gand Safir e wreg, a werz eur park. ² Eul lodenn euz ar priz a laka a-du, - hag e wreg a zo ken-ouizieg! -, hag al lodenn-all a zegas evid he lakaad e-harz treid an Ebestel! ³ Pèr avad a lavar dezañ: **“Anani! Perag e-neus Satan leuniet da galon, dit lavared gevier d’ar Spered Santel, o lakaad a-gostez eul lodenn euz priz ar park? ⁴ Dit e chome ar park hag e chome! Ha goude ar werz, e chome ar priz en da c’halloud! Perag az-peus lakeet en da galon ar seurt taol ? N’az-peus ket lavaret gevier da dud, med da Zoue!”** ⁵ O kleved ar c’homzou-ze, e kouez Anani en eur denna e uhanadenn ziweza! Hag e krog aon braz en oll re a glev kement-se! ⁶ Dond a ra tud yaouank d’e zebelia ha d’e gas ganto evid e vezia...

⁷ Tremen a ra wardro teir eurvez, hag e tegouez e wreg, heb gouzoud an darvoud-ze! ⁸ Ha Pèr lavared dezi: **“Lavar din: daoust ha kement-mañ ho-peus gwerzet ar park?”** Hi avad a lavar: **“Ya! Kement-se!”** ⁹ Ha Pèr a lavar dezi **“Perag ho-peus divizet tenti Spered an Aotrou? Sed ema e toull an nor treid ar re o-deus beziet da bried! Emaint o vond d’az kas ganto!”** ¹⁰ Raktal e kouez-hi e-harz e dreid en eur denna hec’h uhanadenn ziweza! Ar re yaouank, o tegouezoud, he c’hav maro; hag he c’has a reont ganto evid he bezia e-kichenn he gwaz... ¹¹ Aon braz a grog en Iliz a-bez, hag e kement-hini a glev kement-se...

MA Z’INT EUZ A ZOUE, N’HELLOC’H KET O DISKAR...

¹² Dre zaouarn an Ebestel, e c’hoarvez sinou ha marzou e-leiz e-touez ar Bobl. Bez’ e vezont oll bodet, unan a-galon, dindan Porched Salomon. ¹³ Den all ebed ne gred mond en o zouez, med o meuli a ra ar Bobl.

Mz 6,56 ¹⁴ Muioc’h mui a Grederien a zo gounezet d’an Aotrou, gwazed, hag ive merhed, ¹⁵ ken ma teuont zoken da zegas ar glañvourien war al leuriou-kêr ha d’o lakaad war gweleou pe gravasou, ma teuio da vianna skeud Pèr, pa dremeno, da skeudenna war unan bennag anezo! ¹⁶ Diredeg a ra ive leun a dud euz ar c’hêriou endro da Jeruzalem, en eur zegas klañvourien ha tud

sujet da sperejou hudur: oll e vezont saveteet...

Mk 6,56

¹⁷ Sevel a ra ar Beleg-Braz hag an oll re a zo gantañ, -rummad ar Zadukeiz-, leun a c'hred. ¹⁸ Taoler a reont o daouarn war an Ebestel hag o stlepel e prizon-kêr! ¹⁹ Eun êl d'an Aotrou, e-kreiz an noz, a zigor dorjoug ar prizon hag o c'has er-mêz en eur lavared: ²⁰ **“Kerzit! ha chomit en Templ da zisplega d'ar Bobl oll gomzou ar Vuez-ze!”**

²¹ Dezo da zenti outañ, kerkent ha goulou-deiz, ez eont d'an Templ hag e stagont da gelenn! Degouezet ar Beleg-Braz hag an dud euz e du, e c'halvont ar zanedrin hag an oll Gozidi a-douez Bugale Izrael, hag e kasont tud da brizon-kêr evid o degas ganto. ²² Ar zervicherien, erruet eno, n'o c'havont ket er prizon! Deuet endro, e tisklêriont ²³ o lavared: **“Prizon-kêr on-eus kavet prennet stard, hag ar warded en o zav dirag an norojou! P'on-eus digoret avad, n'on-eus kavet den en diabarz!”** ²⁴ O klevet kement-se, e chom komandant an Templ hag ar Veleien-Vraz nehet diwar-o-fenn, hag e klaskont petra eo kement-se! ²⁵ Hag e teu eun den da zisklêria dezo: **“Ar wazed ho-peus lakeet er prizon, setu int-i en Templ o kelenn ar Bobl!”** ²⁶ Mond a ra neuze ar C'homandant gand ar warded d'o c'herhed, n'eo ket dre nerz avad, rag aon o-deus rag ar Bobl, aon da veza labezet! ²⁷ O degas a reont hag o lakaad dirag ar zanedrin. Hag outo e c'houlenn ar Beleg-Braz ²⁸ o lavared: **“Kemennet ha kemennet striz on-eus-ni deoc'h miroud da gelenn en Ano-ze! Ha setu c'hwi o leunia Jeruzalem gand ho kelennadurez, hag o klask degas warnom Gwad an Den-ze!”** ²⁹ Respont a ra Pêr hag an Ebestel o lavared: **“Red eo senti ouz Doue kentoc'h eged ouz an dud!”** ³⁰ Doue on Tadou e-neus adsavet Jezuz ho-peus c'hwi lazet gand ho taouarn ouz e staga ouz eur postkoad! ³¹ Henez, Doue e-neus e zavet uhel-uhel gand e zorn-dehou, dezañ beza Penn-Rener ha Salver, da rei Distro da Izrael ha pardon ar pehejou! ³² Ha ni a zo test euz kement-se, hag ive ar Spered Santel e-neus Doue roet d'ar re a zent outañ!”

Mz 27,25

Lk 24,48
Yn 15,26

³³ Ouz o c'hleved, e fuloront hag e klaskont o laza! ³⁴ Er zanedrin avad e sav eur Farizead en e zav, Gamaliel e ano, eur C'helenner war al Lezenn, enoret gand ar Bobl a-bez! Kemenn a ra kas an dud er-mêz evid eur pennadig! ³⁵ Dezo e lavar: **“Gwazed! Izraeliz! Gwelit petra emac'h o vond d'ober d'an dud-ze!”** ³⁶ Rag, eun nebeud deveziou 'zo, e savas Teudaz, en eur lavared e oa eun den anezañ! D'e heul ez eas eur bodad a bevar-c'hant gwaz bennag. Bet eo-eñ lazet, hag ar re oll o-doa kredet ennañ a zo eet amañ hag ahont, hag eet int da netra!”

³⁷ War o lerc'h eo bet savet Judaz-ar-Galilead, en amzer an enskrivadeg: sachet e-neus ive eur bern tud war e lerc'h. Henez ive a zo bet lazet, hag an oll re o-deus kredet ennañ a zo eet a-gleiz hag a-zehou! ³⁸ Ha bremañ e lavaran deoc'h: tehit diwar-dro an dud-ze hag o lezit! Ma teu euz an dud ar mennad-ze pe an oberenn-ze, e kouezo! ³⁹ Ma teu euz Doue avad, ne c'helloc'h ket he diskar! Ha diwallit da veza kavet o vrezelia a-eneb Doue!” Gounezet int avad gantañ. ⁴⁰ Gelver a

Mz 7,24...
Mz 15,13...
Mz 16,18

reont an Ebestel, lopa warno, kemenn dezo miroud da gomz en Ano Jezuz hag o lezel da vond...

⁴¹ Ar re-mañ a gerz eta a-zirag ar zanedrin, en eur laouennaad da veza bet kavet mad da veza disprizet ablamour d'an Ano! ⁴² Bemdez avad, en Templ hag en tiez, ne ehanont ket da gelenn ha da embann Kelou-Mad Jezuz Krist...

Mz 5,10

-6-

HAG E TIBABONT STEFAN, FILIP...

Mz 28,19

¹ En deveziou-ze, eet niver an Diskibien war gresk, e c'hrozmol ar C'hresianed a-eneb an Hebreegerien, pa vez sellet a-dreuz ouz o intañvezed er zervich pemdezieg. ² An Daouzeg a c'halv daveto poblad an Diskibien o lavared: **“N'eo ket deread deom dilezel Komz Doue evid servicha ouz an taoliou! ³ Klaskit 'ta, Breudeur, euz ho touez, seiz gwaz brudet-mad, leun a spered hag a furnez, ha ni o lakaio e karg war ar zervich-ze! ⁴ Ni avad a jomo aketuz d'ar bedenn ha da vinistrerez ar Gomz!”** ⁵ Ar gomz-ze a blij d'an oll hag e tibabont: Stefan, eur gwaz leun a feiz hag a Spered Santel, Filip, Prokor, Nikanor, Timon, Parmenaz ha Nikolaz, eur prozelit euz Antioch. ⁶ O degas a reont dirag an Ebestel, hag ar re-mañ, en eur bedi, a astenn warno o daouarn. ⁷ Komz Doue a ia war gresk... Kreski mad a ra niver an Diskibien e Jeruzalem, hag eur bodad braz a veleien ive a zouj d'ar feiz.

Lk 21,15

Mz 26,60

⁸ Stefan avad, leun a c'hras hag a c'halloud, a ra marzou ha sinou braz e-touez ar Bobl. ⁹ Lod euz tud ar zinagog anvet 'Sinagog ar Frankizidi, ar Sirenez hag an Aleksandriz' hag ive tud euz ar Silisi hag an Azi, a zav da zaela gand Stefan, ¹⁰ med ne c'hellont ket stourm ouz ar furnez hag ouz ar Spered a ra dezañ komz! ¹¹ Neuze e prenont gwazed da lavared: **“Klevet on-eus an den-ze o lavared komzou a vlasfem a-eneb Moizez hag a-eneb Doue!”** ¹² Atiza a reont ar Bobl, ar Gozidi hag ive ar Skribed! En eur goueza trumm warnañ, e tapont krog ennañ evid e gas ganto d'ar zanedrin! ¹³ Fals-testou a zegasont da lavared: **“An den-mañ ne ehan ket da lavared komzou a-eneb al Lec'h-Santel-mañ hag a-eneb al Lezenn! ¹⁴ Hag e glevet on-eus o lavared: “Jezuz-an-Nazaread a ziskaro al Lec'h-mañ, hag e kemmo ar C'hustumou roet deom gand Moizez!”** ¹⁵ Hag en eur bara warnañ o zell, e teu an oll dud azezet er zanedrin da weled e zremm evel dremm eun êl...

-7-

AOTROU! NE ZALHOC'H KET DEZO AR PEHED-ZE!

¹ Ar Beleg-Braz avad a lavar: “Daoust hag evelse ema an traou?!” ² Eñ avad a lavar: “Gwazed! Breudeur ha Tadou, selaouit! An Doue-a-C’hloar e-neus paret dirag on Tad Abraham p’edo er Mezopotami, araug dezañ dond da jom e C’harrañ! ³ Dezañ e lavar: “Kerz euz da Vro hag euz da Rummad, ha deus d’ar Vro a ziskouezin dit!” ⁴ Ha kerzed a ra neuze euz Bro ar Galdeiz hag e teu da jom e C’harrañ. Ahano, goude maro e dad, e ra Doue dezañ dond da jom er Vro-mañ, emaac’h-c’hwi hirio o chom enni! ⁵ Ne ro dezañ hêrez ebed enni, nag eun troatad douar, med prometi a ra rei ar Vro-mañ da hêrez dezañ ha d’e lignez war e lerc’h, daoust ha n’eus dezañ bugel ebed! ⁶ Evel-mañ avad e komz Doue: ‘Bez’ e vo da lignez diaveziad en eur vro estren! Eno e vint sklaveet ha gwall-gaset epad pevar-c’hant vloaz! ⁷ Hag ar vro bagan a vint dezi sklav, me he barno, eme Doue, ha da c’houde e teuint er-mêz d’am zervi-cha el Lec’h-mañ! ⁸ Dezañ e ro Emgleo-an-Amdroc’h, hag evelse, pa z’eo ganet dezañ Izaag, e teu d’e amdrouha d’an eizved devez! Izaag a ra kemend-all da Jakob, ha Jakob ive d’an daouzeg Tad-Meur!”

⁹ “An Tadou-Meur, dre warizi outañ, a werz Jozef da vond d’an Ejipt! Doue a zo gantañ, ¹⁰ evid e denna diouz an oll drubuillou! Dezañ e ro furnez ha gras dirag Faraon, roue an Ejiptiz: hemañ e laka da rener war an Ejipt ha war e diegez a-bez. ¹¹ Degouezoud a ra kernez war an Ejipt a-bez hag ive war C’hanaan, ha trubuill braz ouspenn! Hag on tadou ne gavent ket a voued. ¹² Kleved a ra Jakob ez eus éd en Ejipt, ha di e kas on Tadou-Meur da genta. ¹³ D’an eil tro, e teu Jozef d’en em zisklêria d’e vreudeur, hag ema gouenn Jozef anad da Faraon! ¹⁴ Jozef a gas tud da gerhed e dad hag e oll rummad: pemzeg den ha tri-ugent a zo anezo! ¹⁵ Diskenn a ra Jakob d’an Ejipt: eno e varv, hag ive on Tadou. ¹⁶ Degaset int bet da Zichem, ha lakeet er béz e-noa Abraham prenet a briz-arhant digand pôtrede Emmor, e Sichem...”

¹⁷ Pa dosta an amzer da zeveni ar Bromesa e-neus Doue touet da Abraham, e teu ar Bobl da greski hag he niver da vrasaad en Ejipt, ¹⁸ ken na zav war an Ejipt eur roue all ha n’e-neus ket anavezet Jozef. ¹⁹ Henez, o touella or ouenn, a wall-gas on Tadou dezo da zilezel er-mêz o bugale nevez-ganet, da viroud outo chom beo! ²⁰ D’ar poent-se eo ganet Moizez, eun drugar da Zoue! Epad tri miz ez eo maget e ti e dad... ²¹ Pa z’eo dilezet er-mêz, e teu merc’h Faraon d’e gemer ganti ha d’e vaga, dezañ da veza mab dezi hec’h-unan! ²² Bez’ e vez kelennet Moizez war oll furnez an Ejiptiz, ha barreg eo-eñ en e lavarou hag en e oberou...

²³ Deuet dezañ poent e zaou-ugent vloaz, e sav d’e galon ar youl da weled e Vreudeur, Bugale Izrael. ²⁴ O weled unan anezo gwall-gaset, e krog d’e zifenn! Taeri a ra evid an den gwall-gaset, beteg skei ha laza an Ejiptiad! ²⁵ Kaoud a ra dezañ ec’h intent e Vreudeur e teu Doue dre e

zaouarn da rei dezo ar zilvidigez! Int-i avad ne intentont ket! ²⁶ En deiz warlerc'h, e kav daou zen o kanna kenetrezo. Evid o adunvani er peoc'h, e lavar dezo: “Gwazed! Bez' ez oc'h Breudeur! Perag ober droug an eil d'egile?” ²⁷ An hini a ra droug d'e nesa, e zistok o lavared: “Piou e-neus da lakeet da rener ha da varner warnom? ²⁸ Daoust ha c'hoant az-peus d'am laza evel m'az-peus lazet dec'h an Ejiptiad?!” ²⁹ Diwar ar gomz-ze, e tec'h Moizez kuit hag ez a da ziaveziad e Bro-Madian: eno ez eus ganet dezañ daou vab.

Erm 3...

³⁰ “Peur-dremenet e zaou-ugent vloaz, e gouelec'h Menez-Sinai, e par dirazañ eun êl e-kreiz flamm eur vodenn-dan! ³¹ Ouz e weled, eo estlammet Moizez diwar ar weledigez! Pa dosta da zelled piz, e sav mouez an Aotrou: ³² “Me-eo-a-zo' Doue da Dadou, Doue Abraham hag Izaag ha Jakob!” Moizez, deuet da grenna, ne gred ket selled! ³³ Doue avad a lavar dezañ: “Diskoulm da zandalennou diouz da dreid, rag al Lec'h m'emaout warnañ a zo eun Dachenn zantel! ³⁴ Gwelet ha gwelet am-eus va Fobl a zo en Ejipt, ha klevet am-eus o c'hlemmadeg! Diskennet on evid o dieubi! Ha bremañ, deus! Da gas a ran d'an Ejipt!”

Erm 7...

Dt 18,15

1 Kor 10,6

Erm 32,1...

³⁵ “Ar Moizez-ze o-doa int-i nahet o lavared: ‘*Piou e-neus da lakeet da rener ha da varner warnom-ni?*’, henez ema Doue o kas evid beza rener ha dasprener, dre zorn an êl e-neus paret dirazañ er Vodenn! ³⁶ Henez o degas er-mêz dre ober marzou ha sinou en Ejipt, er Mor-Ruz hag er Gouelec'h, epad daou-ugent vloaz! ³⁷ Ar Moizez-ze eo an hini a lavar da Vugale Izrael: ‘Doue a adsavo evidoc'h, a-douez ho preudeur, eur profed evel don-me!’ ³⁸ Henez eo, epad ar Vodadeg er Gouelec'h, a zo gand an êl a gomze outañ war ar Menez, ha gand on Tadou, hag a zegemer Komzou-Beo da rei deom. ³⁹ Ouz an den-ze, ne fell ket d'on Tadou chom sentuz, med e gas a reont diwar o zro, evid distrei, en o c'halonou, d'an Ejipt, ⁴⁰ o lavared da Aaron: ‘*Gra deom doueou da vale dirazom! Rag Moizez, hag e-neus on degaset er-mêz euz an Ejipt, n'ouzm ket petra a zo degouezet gantañ!*’ ⁴¹ Hag en deveziou-ze, e reont eul Leue! Eur zakrifiz a ginnigont d'an idolenn-ze, hag int-i da laouennaad diwar oberou o daouarn! ⁴² Doue a zistro neuze diouto, hag o lez adori Strollad-an-neñv, evel m'eo skrivet e Leor ar Brofeded:

Amoz 5,25...

“Daoust ha loened ha sakrifisou ho-peus kinniget din-me

“Epad daou-ugent vloaz er Gouelec'h, Ti Izrael?

⁴³ “Douget ho-peus Teltenn Molok ha Steredenn Doue Refan,

“Skeudennou ho-peus greet deoc'h d'o adori!...

“Setu perag e teuin d'ho tivroada en tu-all da Vabilon!...”

Heb 8,5

⁴⁴ Bez' e oa d'on Tadou, er Gouelec'h, Teltenn an Testeni hervez m'e-neus an hini a gomze da Voizez kemennet ober diwar skwer an hini e-neus gwelet. ⁴⁵ Honnez o-deus on Tadou degemeret: he degaset o-deus, dre Jozue, er Vro gounezet war ar Baganed e-neus Doue kaset kuit a-zirag on Tadou: beteg amzer David... ⁴⁶ Hemañ a gav gras dirag Doue

hag a c'houleñn kaoud eur Zantual evid Doue Jakob! ⁴⁷ Salomon a zav dezañ eun Ti, ⁴⁸ med ne vez ket an Uhel-Meurbed o chom e savaduriou-dorn, hervez ma lavar ar profed:

Iz 66,1...

⁴⁹ “An Neñv a zo trôn din, hag an douar eo skabell va zreid!

“Peseurt Ti a zavoc’h din-me? eme an Aotrou...

“Ha pe-hini eo Lec’h va Diskuiz?!”

⁵⁰ “Daoust ha n’e-neus ket va Dorn-me greet an oll draou-ze?”

Mz 23,31
Yn 8,44
Rom 2,12...

⁵¹ “Tud reud ho choug, ha diamdroc’h ho kalonou hag ho tis-kouarn! Atao emaoe’h o stourm ouz ar Spered Santel! Evel ho Tadou, c’hwi ive koulz all! ⁵² Pehini euz ar Brofeded n’o-deus ket ho Tadou gwall-gaset? Lazet o-deus ar re a embanne Donedigez ar Just, an Hini oc’h deuet bremañ da rei ha da laza! ⁵³ C’hwi hag ho-peus degemeret al Lezenn, dre gemennou an êlez, n’ho-peus ket he miret!”

Mz 26,64...

⁵⁴ O kleved kement-se, e skrijont en o c’halonou hag e skrignont o dent a-enebtañ! ⁵⁵ Pa z’eo leun a Spered Santel, o sevel e zell warzu an Neñv e wel Gloar Doue, ha Jezuz en e zav a-zehou da Zoue, ⁵⁶ hag e lavar: “**Setu ma welan an Neñv digor ha Mab-an-Den en e zav a-zehou da Zoue!**”

Gal 1,13

Salm 31,6

Lk 23,34

⁵⁷ En eur youhal a vouez kreñv, e stouvont o diskouarn, hag unan-a-galon e lammont warnañ! ⁵⁸ E stlepel a reont er-mêz euz Kêr, ha staga d’e labeza! An Destou a laka o dillad e-harz treid eur pôtr yaouank anvet Saol! ⁵⁹ Epad ma labezont Stefan, hemañ a bed o lavared: “**Aotrou Jezuz! Degemerit va spered!**” ⁶⁰ En eur zaoulina avad, e lavar a vouez kreñv: “**Aotrou! Ne zalhoc’h ket dezo ar pehed-ze!**” Diwar ar c’homzou-ze, ez eo kousket en Aotrou...

-8-

FILIP A EMBANN AR MESIAZ ER SAMARI!

Yn 16,2

¹ Saol e-neus asantet ganto laza Stefan... En deveziou-ze, e tegouez eur wall-heskinerez a-eneb an Iliz a zo e Jeruzalem! An oll, nemed an Ebestel, a zo skignet dre mêziou ar Jude hag ar Samari! ² Gwazed santel a zeu da zebelia Stefan, ha dezañ e tougont kañv braz...

Gal 1,13

³ Drasta a ra Saol an Iliz! Mond a ra en tiez, hini hag hini, hag e sach er-mêz gwazed ha merhed evid o c’has d’ar prizon.

Mz 8,29...

Mk 16,17.

⁴ An dud, skignet, a gerz eta amañ hag ahont en eur embann Komz Doue! ⁵ Filip, diskennet da Gêr Samari, a embann dezo ar C’hris. ⁶ Rummou tud a ro skouarn d’ar peza a lavar Filip: emaint unan a-galon ouz e zelaou hag o selled ouz ar zinou a ra, ⁷ rag euz kalz tud, sujet da sperejou hudur, ez a ar re-mañ kuit en eur youhal a vouez kreñv! Ha kalz tud seizet ha kamm a vez pareet. ⁸ Levenez vraz a zegouez er gêr-ze.

PA ZOÑJEZ PRENA DONEZON DOUE GAND ARHANT!

⁹ Eur gwaz, Simon e ano, a zo abaoe pell-zo er gêr-ze oc'h ober ar strobinnell hag o sebeza pobl Samari! Lavared a ra ez eus anezañ eun den braz bennag! ¹⁰ Fizioud a ra an oll ennañ, euz ar bianna beteg ar brasa, o lavared: **“Henez eo ‘Galloud Doue’, anvet an ‘Hini Braz!’”** ¹¹ Fizioud a reont ennañ, rag o zebeza a ra abaoe pell 'zo dre e strobinnellou! ¹² Pa gredont avad e Filip, - a brezeg dezo diwar-benn Rouantelez Doue hag Ano Jezuz Krist -, e teu gwazed ha merhed da veza badezet! ¹³ Simon e-unan a zeu da gredi, hag eur wech badezet, e talc'h tost da Filip: o weled sinou ha burzudou braz o c'hoarvezoud, e chom sebezet!

¹⁴ Pa glev an Ebestel a zo e Jeruzalem he-deus Samari degemeret Komz Doue, e kasont daveto Pêr ha Yann: ¹⁵ Diskennet daveto, evito e pedont, ma resevint ar Spered Santel, ¹⁶ Rag n'eo ket c'hoaz ar Spered kouezet war hini anezo, badezet ma z'int hepken en Ano Jezuz an Aotrou. ¹⁷ Neuze ec'h astennont warno o daouarn hag e tegemeront ar Spered Santel... ¹⁸ Pa wel e vez roet ar Spered Santel dre astenn daouarn an Ebestel, e kinnig Simon dezo arhant, ¹⁹ en eur lavared: **“Roit din ive ar galloud-ze ma tegemero ive ar Spered Santel kement-hini a astennin warnañ va daouarn!”** ²⁰ Pêr avad a lavar dezañ: **“Ra z'aio da arhant ouz da heul da goll! pa zoñjez prena Donezon Doue gand arhant!”** ²¹ N'eus dit na lodenn nag hêrez en dra-ze, rag n'eo ket eeun da galon dirag Doue! ²² Distro 'ta diouz da zrougiez ha ped an Aotrou! Marteze e vezo pardonet dit ar menoz a zo deuet d'az kalon! ²³ Gweled a ran emaut e bestl ar c'hwerder hag e kevren ar fallagriez!” ²⁴ Respont a ra Simon o lavared: **“Pedit hoc'h-unan evidon an Aotrou, evid na zegouezo warnon netra euz ar pez a lavarit!”**

²⁵ Int-i eta, testeniet hag embannet ganto Komz an Aotrou, a zistro da Jeruzalem en eur embann ar C'helou-Mad e kalz kêriadennou euz ar Zamariz.

PETRA A VIR OUZIN DA VEZA BADEZET?

²⁶ Eun êl d'an Aotrou a gomz da Filip o lavared: **“Sav ha kee warzu ar C'hreisteiz, war an hent a ziskenn euz Jeruzalem da C'haza! N'eus den warnañ!”** ²⁷ Hag eñ sevel ha kerzed... Ha sed eur gwaz Etiopiad, eur spazard, a zo anezañ merour-meur Kandaz, rouanez an Etiopi, e karg war he zeñzor a-bez: deuet eo da adori, da Jeruzalem. ²⁸ O vond d'ar gêr ema, azezet war e garr ha stag da lenn ar profed Izai. ²⁹ Lavared a ra ar Spered da Filip: **“Kee! hag heuill a-dost ar c'harr-ze!”** ³⁰ Filip a red hag e klev an den o lenn ar profed Izai: dezañ e lavar: **“Daoust hag anaoud a rez ar pez a lenne?”** ³¹ Eñ a lavar: **“Ha penaoz e c'hellfen, ma ne zeu den d'am heñcha?”** Pedi a ra Filip da zavel ha da azeza en e gichenn. ³² Setu ar pennad Skritur ema o lenn:

“Evel eun Dañvad eo kaset d'ar maro!

“Hag evel eun Oan divouez dirag e douzer!

“Evelse ne zigor ket e c’henou!

³³ *“Diwar e izelder eo douget e varn! Piou a zisplego e lignez?*

“Ha dilamet eo e vuez diwar an douar!”

³⁴ O sevel e vouez, e lavar ar spazard: **“Mar plij, diwar-benn piou e lavar kement-se ar profed? Diwar-e-benn e-unan pe diwar-benn unan all?”** ³⁵ Filip a stag da gomz, hag o kregi gand ar Skritur-ze, ec’h embann dezañ Kelou-Mad Jezuz. ³⁶ En eur vond gand an hent, e tegouezont war eur poull-dour! Hag e lavar ar spazard: **“Setu amañ dour! Petra ’vir ouzin da veza badezet?”** ⁽³⁷⁾ ³⁸ Ober a ra d’ar c’harr chom a-zav; en dour e tiskennont o daou, Filip hag ar spazard, hag e vadezi a ra. ³⁹ Savet int-i er mêz euz an dour, e teu Spered an Aotrou da lemel Filip ahano: ar spazard ne c’hell ket kén e weled, hag ez a gand e hent en eur dridal a levenez! ⁴⁰ Filip avad a zegouez en Azod: o vond amañ hag ahont, ec’h embann ar C’helou-Mad d’an oll gêriou, ken na zegouez e Sezare.

-9-

ME EO A ZO JEZUZ, AN HINI A HESKINEZ!

Ob 22,3...
Ob 26,9...
Gal 1,12...

1 Kor 15,8

¹ Saol avad a zo c’hoaz o virvi a c’hourdrouz hag a lazerez a-eneb Diskibien an Aotrou: mond a ra daved ar Beleg-Braz ² da c’houlenn digantañ lizeri evid ar zinagogou e Damaz, a-benn dezañ gelloud, - ma kav eno tud, gwazed pe verhed, o heulia an Hent-ze -, o degas chadennet da Jeruzalem! ³ Oc’h ober hent, e tosta ouz Damaz. En eun taol, e luc’h endro dezañ eur sklerijenn euz an Neñv. ⁴ Kouezet d’an douar, e kev eur vouez o lavared dezañ: **“Saol! Saol! Perag am heskinez!”** ⁵ Hag eñ a lavar: **“Piou oc’h-c’hwí, Aotrou?!”** Eñ avad: **“Me eo a zo Jezuz, an Hini a heskinez! ⁶ Med sav en da zav ha kee e kêr, ha lavaret e vezo dit petra rankez ober!”**

⁷ Ar wazed a vale d’e heul a jom a-zav, dilavar: kleved a reont ar vouez, med ne welont dén!

⁸ Saol a zav diwar an douar, ha goude d’e zaoulagad beza digor, ne wel netra hag e gas a reont war bouez e zorn evid mond e kêr Damaz. ⁹ Epad tri devez e chom heb gweled, hag ive heb debri hag heb eva.

1 Tim 4,14
Gal 1,13

¹⁰ Bez’ ez eus e Damaz eun diskib, Anani e ano, ha dezañ e lavar an Aotrou dre eur weledigez: **“Anani!”** Hag e lavar: **“Setu-me, Aotrou!”** ¹¹ Ha dezañ an Aotrou: **“Sav ha kee d’ar stread anvet ‘Stread-Eeun’! E ti Judaz, goulenn war-lerc’h eun den anvet ‘Saol-an-Tarsead’. Setu-eñ o pedi, ¹² ha dre eur weledigez e wel eur gwaz anvet Anani o tond en ti hag oc’h astenn warnañ e zaouarn, dezañ gweled sklêr adarre”.** ¹³ Anani avad a respont: **“Aotrou! gand kalz tud am-eus me klevet, diwar-benn an den-ze, pegement a zroug e-neus greet d’ho tud santel e**

Jeruzalem! ¹⁴ Hag amañ e-neus galloud digand ar Veleien-Vraz da jadenna kement-hini a c’halv hoc’h Ano!” ¹⁵ Dezañ avad e lavar an Aotrou: **“Kee! rag hennez a zo din-me eur benveg a-zibab da gas va** ^{1 Kor 4,13} **Ano dirag Paganed, Rouaned ha Bugale Izrael!** ^{2 Kor 11,32} **Rag dezañ e tiskouezin pegement e ranko gouzañv evid va Ano!”** ¹⁷ Mond a ra Anani hag ez a en ti: astenn a ra e zaouarn warnañ en eur lavared: **“Saol, va Breur! An Aotrou eo am c’has, - Jezuz, an Hini e-neus paret dirazout en hent a zeues gantañ, - dit da weled adarre ha beza leuniet gand ar Spered Santel!”** ¹⁸ Raktal e kouez diouz e zaoulagad evel krohennou: gweled a ra adarre hag e sav da veza badezet. ¹⁹ Kemer a ra boued hag e teu nerz dezañ, hag e chom eun nebeud deveziou gand an Diskibien a zo e Damaz...

²⁰ Raktal, er zinagogou, ec’h embann Jezuz, o prezeg eo Eñ Mab Doue. ²¹ Chom a ra strafuillet an oll re a glev, hag e lavaront: **“Daoust ha n’eo ket hennez a walle e Jeruzalem an oll re a c’halv an Ano-ze, hag a zo amañ evid-ze: evid o c’has chadennet daved ar Veleien-Vraz?”** ²² Saol avad a hardisa muioc’h mui: divarha a ra ar Juzevien a zo e Damaz, o tiskouez ez eo Hennez ar Mesiaz! ²³ A-benn kalz deveziou e tiviz ar Juzevien d’e laza! ²⁴ Kaset ez eus kelou euz o diviz da Zaol, med diwall a reont dorjou kêr, noz-deiz zoken, a-benn e laza! ²⁵ E Ziskibien avad e gemer eun nozvez evid e ziskenn dre eur voger ouz e ruza en eur baner...

²⁶ Erruet e Jeruzalem, e klask staga ouz an Diskibien. Hag an oll o-deus aon razañ: ne gredont ket e vefe eun Diskib anezañ! ²⁷ Barnabe e gemer gantañ hag e zegas daved an Ebestel: dezo e tispleg penaoz, en hent, e-neus gwelet an Aotrou hag e-neus Hemañ komzet dezañ, ha penaoz ive e Damaz e-neus hardiseet da anzav Ano Jezuz! ²⁸ Mond ha dond a ra ganto e Jeruzalem hag hardisaad da anzav Ano an Aotrou! ²⁹ Komz ha ren-daela a ra gand ar C’hresianegerien: ar re-mañ avad a glask e laza! ³⁰ Deuet da c’houzoud, ar vreudeur e ambroug beteg Sezare hag a ra dezañ mond da Darz.

³¹ Dre ar Jude, ar Galile hag ar Samari a-béz ema an Iliz eta er peoc’h: e doujañs an Aotrou e vez skweriet hag e vale! Ha leuniet e vez gand frealz ar Spered Santel.

³² Degouezoud a ra da Bèr, o tremen dre oll, da ziskenn ive daved an dud santel a zo o chom e Lida. ³³ Eno e kav eun dén anvet Ene, astennet war eur gwele abaoe eiz vloaz: seizet eo-eñ. ³⁴ Ha Pèr a lavar dezañ: **“Ene! Jezuz Krist a ro dit ar pare! Sav en da zav, ha fich da wele da-unan!”** Ha raktal e sav en e zav! ³⁵ Dond a ra d’e weled ar re oll a zo o chom e Lida hag e Saron, hag e tistroont d’an Aotrou!

³⁶ E Jope avad, e-touez an Diskibien, ez eus eur vaouez, Tabita hec’h ano, da lavared eo ‘Dorkaz’ (Gazelenn). Karget eo-hi a oberou mad hag a aluzennou bet greet ganti. ³⁷ En deveziou-ze, e tegouez dezi kleñvel ha mervel. He gwelhi a reont hag he lakaad en nec’h: ³⁸ Pa z’eo Lida tost da Jope, e klev an Diskibien ema Pèr eno, hag e kasont daou waz davetañ evid e aspedi: **“Na zamant ket dond beteg ennom-ni!”** ³⁹ Pèr a zav hag ez a d’o heul. Degouezet eno, ez eo kaset d’an nec’h; endro dezañ e tired an oll

Mk 5,40
Mk 16,18
Lk 7,15

intañvezed: en eur ouela, e tiskouezont dezañ ar zaeou hag an dillad he-deus greet Dorkaz p'edo hi ganto! ⁴⁰ Pèr avad a daol an oll er-mêz: eet war e zaoulin, e ra eur bedenn, ha troet warzu ar c'horv, e lavar: **“Tabita! Sav en da zav!”** Digeri a ra he daoulagad, hag o weled Pèr, e sav war he c'hoazez! ⁴¹ Rei a ra dezi e zorn, hag e ra dezi sevel en he zav! Gelver a ra an dud santel, hag an intañvezed, evid he diskouez dezo beo! ⁴² Dond a ra kement-se da veza anavezet dre Joep a-bez, hag e teu kalz tud da gredi en Aotrou! ⁴³ Chom a ra Pèr kalz deveziou e Joep, e ti eur c'hivijer bennag, Simon e ano.

-10-

NE C'HELLER LAKAAD DÉN DIZAKR PE ZIHLAN

Mz 8,5...
Lk 7,2...
Lk 12,13...

Mz 1,20

¹ Bez' ez eus o chom e Sezare, eur gwaz, Korneli e ano, kantener er Gohortenn galvet 'Italiad'. ² Eun dén just a zo anezañ, doujer-Doue eo gand e di a-béz; aluzenn a ro d'ar Bobl, ha bepred e ped Doue. ³ Dre eur weledigez wardro naved eur an deiz, e wel frêz eun êl a Zoue o tond dave-tañ hag o lavared dezañ: **“Korneli!”** ⁴ E zell paret warnañ, ha kroget aon ennañ, e lavar: **“Petra 'zo, Aotrou?”** Dezañ e lavar: **“Da bedennou ha da aluzennou a zo savet e koun dirag Doue! ⁵ Ha bremañ, kas gwazed da Joep, da gerhed eun dén anvet Simon, lesañvet Pèr! ⁶ Hennez a zo ostizet e ti eur c'hivijer bennag, anvet Simon, a zo e di war ribl ar mor.”** ⁷ Eet kuit an êl a gomz dezañ, e c'halv daou euz e vevelien hag eur zoudard a-feiz a-douez ar re a zo d'e heul. ⁸ Displega a ra dezo pep tra hag o c'has da Joep.

Gen 1,31
Mz 15,11

⁹ D'an deiz war-lerc'h, p'ema ar re-ze oc'h ober hent hag o tostaad ouz Joep, e sav Pèr war al leur-doenn da bedi, wardro ar c'hwec'hved eur. ¹⁰ Bez' e teu naon dezañ ha c'hoant da dañva tra-pe-dra. Epad ma aozer, e c'hoarvez gantañ beza gourzavet: ¹¹ gweled a ra ez eo digor an neñv, hag e teu d'an traoñ eun dra heñvel ouz eul linser vraz, diskennet dre e fevar gorn beteg an douar. ¹² Enni e weler an oll loened pevar-droadeg, loened stlej an douar ha laboused an neñv. ¹³ Ha dezañ e lavar ar vouez: **“Sav, Pèr! Laz! Ha debr!”** ¹⁴ Pèr avad a lavar: **“Tamm ebed, Aotrou! Rag biskoaz n'amus debret tra dizakr pe zihlan!”** ¹⁵ Hag ar vouez adarre da lavared dezañ evid an eil gwech: **“An traou e-neus Doue glaneet, diwall d'o lakaad dizakr!”** ¹⁶ Kement-se a c'hoarvez teir gwech, hag ema kerkent savet an dra-ze d'an neñv...

¹⁷ Ennañ e-unan ema Pèr o klask petra eo ar weledigez e-neus gwelet, ha setu ar wazed, kaset gand Korneli ha klasket ganto ti Simon, en o zav dirag an nor-dal, ¹⁸ hag o c'houlenn a vouez kreñv: **“Daoust ha Simon, lesañvet Pèr, a zo ostizet amañ?!”** ¹⁹ Pèr a rodell soñjou diwar-benn e weledigez pa lavar dezañ ar Spered: **“Setu tri waz ouz da glask! ²⁰ Sav! Diskenn ha kee ganto heb nehi! rag me va-unan am-eus o c'haset!”** ²¹ Diskennet daved ar wazed, e lavar Pèr dezo: **“Setu ez on-me an hini a**

glaskit! Peseurt tra a ra deoc'h dond amañ?!" ²² Int-i avad a lavar: **"Ar c'hantener Korneli, eun dén just ha doujer Doue, brudet mad e-touez Pobl ar Juzevien a-bez, a zo kemennet dezañ, dre eun êl zantel, d'az kerhed d'e di ha da zelaou traou ganit-te!"** ²³ Hag o degemer a ra Pèr hag o ostiza...

Disk 19,10
Mz 5,10

Yn 4,9...

Lk 4,15

D'an deiz war-lerc'h, e sav da vond ganto, ha d'e heul ez a darn Vreudeur euz Jope. ²⁴ D'an deiz war-lerc'h, e tegouezont e Sezare: Korneli a zo ouz o gortoz; endro dezañ e-neus galvet e gerentiez hag e vignoned tosta. ²⁵ P'ema Pèr o tond en ti, e teu Korneli d'e ziambroug: koueza a ra e-harz e dreid ha stoui dirazañ! ²⁶ Pèr avad a ra dezañ sevel, o lavared: **"Sav en da zav! Ha me va-unan a zo eun dén ahanon!"** ²⁷ En eur gomz gantañ, ez a en ti: eno e kav kalz tud ken-vodet, hag e lavar dezo: ²⁸ **"Gouzoud a rit pegen direiz eo d'eur gwaz juzeo darempredi gand eur gwaz estren ha mond davetañ! Din-me avad e-neus Doue diskouezet ne c'heller lakaad dén ebed dizakr pe zihlan! ²⁹ Rag-se ez on-me deuet ive direndael pa z'on bet kerhet! Goulenn a ran eta: evid petra ho-peus c'hwi va c'herhet?"**

³⁰ Ha Korneli a lavar: **"Pevar devez 'zo, d'an eur-mañ, edon-me d'an naved eur o pedi em zi, ha setu, en e zav dirazon, eur gwaz gwisket gwenn-kann, ³¹ hag a lavar: *"Korneli! Klevet eo bet da bedenn, ha savet eo da aluzennou e koun dirag Doue! ³² Kas eta tud da Jope, da gerhed davedout Simon, lesañvet Pèr: hennez a zo ostizet e ti Simon, eur c'hivijer, war ribl ar mor!"*** ³³ War an taol eta, em-eus kaset tud davedout, ha te az-peus greet kaer o tond davedon! Bremañ eta emaom-ni oll dirag Doue evid selaou kement a zo kemennet dit gand an Aotrou!"

Rom 2,10
Yn 9,31

Fil 2,10...
Mz 4,12...

1 Kor 15,4...

Yn 14,9

Mz 25,31

³⁴ Pèr a stag da gomz hag e lavar: **"Evid gwir, ec'h intentan ne ra ket Doue diouz dremm an dud, ³⁵ med e pep pobl, an hini e zouj hag a ra ar justiz, a vez degemeret mad gantañ. ³⁶ Setu ar Gomz e-neus kaset da Vugale Izrael, oc'h embann Kelou-Mad ar peoc'h dre Jezuz Krist! Hemañ a zo Aotrou war an oll! ³⁷ Gouzoud a rit kement a zo c'hoarvezet dre ar Jude a-bez, o loha euz ar Galile, goude ar Vadeziant embannet gand Yann: ³⁸ Jezuz-an-Nazaread: penaoz e-neus Doue e olevet gand ar Spered Santel ha gand galloud! Tremenet eo en eur ober vad hag en eur barea an oll re a oa gwasket gand an diaoul, rag Doue a oa gantañ! ³⁹ Ha ni 'zo test euz kement e-neus greet e Bro ar Juzevien hag e Jeruzalem... Hennez o-deus int-i lazet ouz e staga ouz eur post-koad! ⁴⁰ Hennez, Doue e-neus e adsavet d'an trede deiz; ha dezañ e-neus roet da bara, ⁴¹ n'eo ket dirag ar Bobl a-bez, med dirag testou rag-stummet gand dorn Doue, dirazom-ni eta, ni hag on-eus debret hag evet gantañ goude e Adsao a-douez ar re varo! ⁴² Kemennet e-neus deom embann d'ar Bobl ha testenia: Hennez eo a zo diazezet gand Doue da Varner war ar re veo ha war ar re varo! ⁴³ Dezañ e ro an oll Brofeded an testi-ni-mañ: kement-hini a gred ennañ a zegemer dre e Ano pardon ar pehejou!"**

Mk 16,17
Mk 10, 12...
 44 Pèr a zo c'hoaz o komz, pa gouez ar Spered Santel war an oll re a zelaou ar Gomz! 45 Ha strafuillet eo ar Grederien amdrohet, deuet da heul Pèr, pa z'eo skuillet war ar Baganed ive Donezon ar Spered Santel! 46 Rag o c'hleved a reont o komz e yezou hag o kana gloar da Zoue! Pèr neuze a zav e vouez: 47 **“Daoust hag unan bennag a c'hell nac'h dour, da viroud badezi ar re-mañ hag o-deus resevet ar Spered Santel eveldom-ni?”** 48 Kemenn a ra e vefent badezet en Ano Jezuz Krist! Ha digantañ e c'houlennont chom ganto eun nebeud deveziou.

-11-

PIOU E-OAN ME DA C'HELLOUD ENEBI OUZ DOUE?

Lk 4,27
Lk 13,29
 1 Kleved a ra an Ebestel hag ar Vreudeur a zo o chom er Jude, o-deus ar Baganed ive degemeret Komz Doue. 2 Pa zav Pèr avad da Jeruzalem, e teu an dud amdrohet da rendael gantañ, 3 o lavared: **“Te a zo eet e ti tud diam-droc'h, ha ganto az-peus te debret”**. 4 Pèr a stag da zisplega dezo an traou diouz reñk, o lavared:

Lk 10, 21...
 5 **“Bez' e oan-me, e kêr Jope, stag da bedi, hag epad eur gourzav em-eus bet eur weledigez: d'an traon e teu eun dra evel eul linsr vraz, diskennet euz an neñv dre he fevar gorn, ha dond a ra beteg ennon.** 6 O para warni va daoulagad, e sellan! hag e welan loened pevar-droadeg an douar, hag al loened gouez, hag al loened stlej, ha laboused an neñv! 7 Kleved a ran ive eur vouez o lavared din: **“Sav en da zav! Pèr! Laz! Ha debr!”** 8 Me avad a lavar: **“Tamm ebed, Aotrou! Rag n'eus eet biskoaz em genou tamm dizakr pe zihlan ebed!”** 9 Evid an eil gwech, e respont ar vouez euz an Neñv: **“An traou e-neus Doue glaneet, diwall d'o lakaad dizakr!”** 10 Kement-se a c'hoarvez teir gwech, hag adarre eo skrapet pep tra d'an Neñv!

Ob 15,8...
Mz 16,23...
 11 Ha kerkent, setu tri waz o tond dirag an ti edon-me ennañ: kaset int euz Sezare davedon. 12 Ar Spered avad a lavar din mond d'o heul heb nehi. Ganin eta e teu ive ar c'hwec'h breur-mañ, hag ez eom e ti ar gwaz... 13 Deom e tispleg penaoz e-neus gwelet eun êl a-zav, en e di, hag e-neus lavaret: **“Kas tud da Jope da gerhed Simon, lesañvet Pèr! 14 Hennez a lavaro dit traou a vezi salvet drezo, te ha da di a-bez!”** 15 Pa stagan-me da gomz, e kouez ar Spered Santel warno, evel ive warnom-ni er penn-kenta! 16- Din avad e teu koun euz Komz an Aotrou, a lavare: **“Yann a vadez gand dour! C'hwil avad a vezo badezet er Spered Santel!”** 17 M'e-neus eta an Aotrou roet dezo an heveleb Donezon, evel ive deom, evid beza kredet e Jezuz Krist, on Aotrou, piou e oan-me evid gelloud enebi ouz Doue!” 18 Klevet ganto kement-se, e chomont sioul, hag e rentont gloar da Zoue, o lavared: **“Evel-se 'ta, d'ar Baganed ive e ro Doue an Distro, dezo da gaoud buez!”**
 Yn 3,16...
Yn 12,51-52

HA BARNABE A IA DA DARZ DA GLASK SAOL

Ob 8,9

¹⁹ Ar re a zo bet skignet eta, -dre an drubuil degouezet a-eneb Stefan-, a dremen betek ar Fenisi, Chipr hag Antioch. Ne lavaront ar Gomz da zén nemed d’ar Juzevien. ²⁰ Lod gwazed anezo, Chipriz ha Sireniz, eet da Antioch, a gomz ive d’ar C’hresianed, oc’h embann Kelou-Mad Jezuz, an Aotrou. ²¹ Ganto e vez dorn Doue, ha kalz tud, deuet da gredi, a zistro ouz an Aotrou. ²² Kelou diwar-o-fenn a zeu da ziskouarn an Iliz a zo e Jeruzalem, hag e kasont Barnabe betek Antioch. ²³ O tegouezoud hag o weled gras Doue, e laouenna, hag alia a ra an oll da jom stard en Aotrou, a-wir galon. ²⁴ Rag eur gwaz mad a zo anezañ, leun a Spered Santel, hag a feiz; hag eur boblad vraz a zo gounezet d’an Aotrou.

Mk 16,20

Ob 6,5...

Ob 9,30
Gal 2,11
1 Pèr 4,15

²⁵ Mond a ra da Darz da glask Saol. ²⁶ E gavoud a ra hag e zegas gantañ da Antioch: degouezoud a ra dezo zokén ken-veva en Iliz-ze epad eur bloavez a-bez ha kelenn eur boblad vad a dud; ablamour da-ze, e Antioch da genta oll, eo an Diskibien lesañvet ‘Kristenien’!

Gal 2,10
Tit 1,5...

²⁷ En deveziou-ze, e tiskenn profeded euz Jeruzalem da Antioch. ²⁸ Unan anezo, Agabuz e ano, a zav evid merka, dre ar Spered, e c’hoarvezo dizale eur gernez vraz war an Douar a-bez! Degouezoud a ra honnez en amzer Glaoda. ²⁹ Pep hini euz an Diskibien, hervez e beadra, a ziviz kas eur skoazell d’ar vreudeur a zo er Jude. ³⁰ Hag henn ober a reont o kas o donezon d’ar Gozidi, dre zaouarn Barnabe ha Saol...

-12-

KASET E-NEUS E ÊL EVID VA DIFRAMMA DIOUZ DORN HERODEZ!

Mz 20,22...

¹ Wardro ar poent-se, e taol ar roue Herodez e zaouarn da walla hiniennou euz tud an Iliz. ² Laza a ra Jakez, breur Yann, dre ar c’hleze. ³ O weled e plij an dra-ze d’ar Juzevien, e klask ouspenn paka Pèr ive! Bez’ ema deveziou ar Bara Dihoell. ⁴ Deuet d’e baka, e lakaad a ra er prizon, en eur garga peder skouadenn a bevar zoudard pep hini d’e ziwall, c’hoant dezañ d’e zegas dirag ar Bobl goude ar Pask.

Jak 5,16

⁵ Pèr a zo eta diwallet mad er prizon, med heb ehan, euz an Iliz e sav warzu Doue ar bedenn evitañ! ⁶ P’ema Herodez o vond d’e zegas dirag al lez-varn, en nozvez-ze, ema Pèr kousket etre daou zoudard, ereet gand diou jadenn, ha gwarded dirag an nor o tiwall ar prizon! ⁷ Ha setu eun êl d’an Aotrou o tegouezoud trumm, hag eur sklêrijenn o skedi er prizon... Skei a ra war gostez Pèr d’e zihuna, en eur lavared: **“Sav dillo!”** Hag e kouez ar chadennou diouz e zaouarn. ⁸ Hag an êl a lavar dezañ: **“Laka da c’houriz ha da zandalennou!”** Ober a ra evelse! Hag e lavar c’hoaz an êl: **“Gwisk**

da vantell ha deus d'am heul!" ⁹ Hag ez a er-mêz d'e heul, ha ne oar ket eo gwirion ar pezh a c'hoarvez dre an êl! Kaoud a ra dezañ gweled eur weledigez! ¹⁰ Tremen a reont a-biou d'ar gward kenta ha d'an eil, hag ec'h erruont dirag an nor-houarn a gas e kêr: anezi hec'h-unan e tigor dirazo! Eet er-mêz, e kerzont en eur stread, ha kerkent e tec'h an êl dioutañ...

Ob 13,9...
Mk 3, 22...
Lk 11, 14...

¹¹ Pèr avad, deuet ennañ e-unan, a lavar: **"Bremañ ec'h ouzon evid gwir e-neus an Aotrou kaset e êl d'am diframma diouz dorn Herodez ha diouz kement a c'hortoze Pobl Izrael!"** ¹² Goude eun taol-lagad tro-war-dro, ez a da di Vari, mamm Yann, lesañvet Mark, el lec'h ez eus kalz tud bodet da bedi! ¹³ Pa sko war an nor-dal, e teu eur vatez yaouank anvet Rode da zelaou; ¹⁴ anavezoud a ra mouez Pèr, ha diwar al levenez, ne zigor ket an nor, med d'ar red ez a da zegemenn ema Pèr dirag an nor-dal. ¹⁵ Int-i avad a lavar dezi: **"Te a zo sod!"** Hi avad a zalc'h stard ema evelse! Int-i a lavar: **"E êl dezañ eo an hini eo!"** ¹⁶ Pèr avad a zalc'h da skei! Hag int-i digeri hag e weled! Chom a reont estlammet! ¹⁷ O heja e zorn, e laka chom sioul! hag e tispieg dezo penaoz e-neus an Aotrou e dennet er-mêz euz ar prizon, hag e lavar dezo: **"Degemennit kement-se da Jakez ha d'ar Vreudeur!"** Ha mond a ra kuit ha kerzed d'eul lec'h all...

¹⁸ Deuet an deiz, e sav trouz, ha n'eo ket eun tammig, e-touez ar zoudarded: **"Petra 'ta eo deuet Pèr da veza?!"** ¹⁹ Herodez, goude dezañ e glask mad ha chom heb e gavoud, a ra goulennata ar warded hag o lakaad d'ar maro. Goude-ze e tiskenn euz ar Jude da Zezare hag e chom eno...

Mz 1,20

²⁰ Fuloret eo Herodez a-eneb Tiriz ha Sidoniz! Unan a-galon, e teu ar re-mañ davetañ: gounezet ganto Blastuz, kambrelan ar roue, e c'houlennot ar peoc'h, peogwir e teu bevañs o bro euz bro ar roue! ²¹ D'an deiz-ze, gwisket gand e zillad-a-roue hag azezet war ar gador-varn, ema eñ o prezegenna dezo! ²² Hag ar bobl da youhal: **"Mouez eun doue eo ha n'eo ket hini eun den!"** ²³ War an taol, e teu eun êl d'an Aotrou d'e skei, pa ne zoug ket gloar da Zoue! Debret gand ar preñved, e ro e spered!

Ob 6,7...

²⁴ Komz Doue avad a gresk hag a founnusa! Barnabe ha Saol, echuet ganto o zervich, a zistro euz Jeruzalem, en eur gemer ganto Yann, lesañvet Mark...

-13-

Lk 6, 43...

DIBABIT DIN SAOL HA BARNABE!

¹ En Iliz a zo e Antioch, ez eus avad profeded ha kelennerien, Barnabe, ha Simon galvet Nijer, Lusiuz ar Sirenad, Manahen, breur ken-eil da Herodez an Tetrark, ha Saol. ² P'emaint o lida d'an Aotrou hag o yuni, e teu ar Spered Santel da lavared: **"Dibabit din Saol ha Barnabe evid an oberenn am-eus o galvet da ober!"** ³ Hag int-i yuni, pedi hag astenn warno o daouarn, hag o lezel da vond.

Mz 4,23

⁴ Int-i eta, kaset da bell gand ar Spered Santel, a ziskenn da Zeleusi, hag ahano e vordeont warzu Chipr. ⁵ Degouezet e Salamin, ec'h embannont Komz Doue e sinagogou ar Juzevien: Yann a zo dezo da skoazeller. ⁶ Treuzet ganto an enezenn a-bez beteg Pafoz, e kavont eur gwaz, eur strobinneller hag eur 'fals-profed anezañ, eur juzeo, Bar-Jezuz e ano. ⁷ Bez' e vez da heul ar pro-konsul Serjiuz Paoluz, a zo eur gwaz skianteg: hemañ a c'halv davetañ Barnabe ha Saol, o klask kleved Komz Doue. ⁸ Med outo ec'h eneb Elimaz (ar Strobinneller: evelse e vez intentet e ano) o klask distrei ar pro-konsul diouz ar feiz! ⁹ Saol avad (hag a zo Paol), leuniet gand ar Spered Santel, a bar warnañ e zell, ¹⁰ hag e lavar: **“O den! leun a beb gwidre hag a bep touellerez! mab d'an diaoul, enebour da beb justiz! daoust ha ne ehani ket da blega heñchou eeun an Aotrou?”** ¹¹ Ha bremañ, setu dorn Doue warnout! Ha bez' e vezi dall, heb gweled an heol evid eur pennad!” War an taol e kouez warnañ kohenn ha teñvalijenn! Hag e tro endro, o klask tud d'e vlenia war bouez e zorn... ¹² Neuze, o weled an taol, e teu ar pro-konsul da gredi, estlammet gand kelennadurez an Aotrou.

Yn 8,44
Yn 9,9

Mz 22,33

¹³ O vordei euz Pafoz, ez a Paol hag e dud da Berje, er Panfili; Yann a dec'h diouto evid distrei da Jeruzalem. ¹⁴ Int-i avad a dreuz ar vro adal Perje hag e tegouezont e Antioch, er Pisidi; mond a reont d'ar zinagog, da zeiz ar zabad, hag ec'h azezont. ¹⁵ Greet lennadenn al Lezenn hag ar Brofeded, e kas renerien ar zinagog tud da lavared dezo: **“Ma z'eus en ho kalon eur Gomz bennag a frealz evid ar Bobl, deoc'h he lavared!”** ¹⁶ Paol a zav hag e lavar: **“Gwazed! Izraeliz ha Doujerien-Doue, selaouit! ¹⁷ Doue Pobl Izrael e-neus dibabet on Tadou ha kresket ar Bobl epad an harlu e Bro Ejipt: o sevel e vrec'h, e-neus o degaset er-mêz anezi! ¹⁸ Epad wardro daou-ugent vloaz e-neus o gouzañvet er Gouelec'h. ¹⁹ Seiz poblad e-neus diskaret e Kanaan, hag o douar e-neus roet dezo da lod, ²⁰ epad wardro pevar c'hant vloaz hag hanter kant! Goudeze e ro dezo Barnerien, beteg ar profed Samuel. ²¹ Diwar neuze, e c'houlennont eur roue, ha Doue a ro dezo Saul-mab-Kiz, euz meuriad Benjamin, epad daou-ugent vloaz! ²² Taolet hennez kuit, e laka warno David da roue: ha da hemañ e ro testeni o lavared: “Kavet am-eus David-mab-Jese, a zo anezañ eur gwaz diouz va c'halon: va bolontez a raio penn-da-benn!”** ²³ Euz lignez hemañ e-neus Doue, hervez e brome-sa, degaset da Izrael eur Zalver: Jezuz!”

Erm 3...

Dt 7,1...

1 Sam 8...

Salm 89,23

Mz 1,20-21

Mk 1,7...

Lk 3,3...

Yn 1,20...

²⁴ **“Araog dezañ dond, e-neus Yann embannet badeziant an Distro da bobl Izrael a-bez! ²⁵ Yann, war-nes echui e redadenn, a lavar: “An Hini a zoñjit ez on-me, n'on-me ket! Med setu-Eñ o tond war va lerc'h, an Hini n'on ket din da ziskoulma dezañ sandalennou e dreid!”**

²⁶ **“Gwazed! Breudeur! C'hwi, Bugale Lignez Abraham! Ha c'hwi, en ho touez, Doujerien-Doue! Deom eo bet kaset Komz ar Zilvidigez-ze! ²⁷ An dud a oa e Jeruzalem hag o renerien, o-deus e zianavezet! Ouz e varn, o-deus peur-zevenet moueziou ar Brofeded a vez lennet bep sabad! ²⁸ Heb kavoud ennañ eun abeg a varo, o-deus int-i goulennet digand Pilat e lakaad d'ar maro! ²⁹ Peur-echuet ganto kement a zo skrivet diwar-e-benn, o-deus e ziskennet diwar ar post-**

Yn 16,3...
Mz 27,22...

koad, hag e lakeet en eur béz! ³⁰ Doue avad e-neus e adsavet a-douez ar re varo! ³¹ Epad kalz deveziou e-neus paret dirag an dud savet gantañ euz ar Galile da Jeruzalem, hag a zo bremañ e destou dirag ar Bobl! ³² Ha ni a embann deoc'h Kelou-Mad ar Bromesa greet d'on Tadou! ³³ Honnez e-neus Doue peur-zevenet, - evidom-ni, bugale dezo -, dre Adsao Jezuz Krist, hervez m'eo skrivet en eil Salm: "*Mab oc'h c'hwi din! Ahanon-me ez oc'h bet hirio ganet!*" ³⁴ E teuio Doue d'e adsevel a-douez ar re varo evid na zistroio ket ken d'ar vreinadurez, kement-se e-neus lavaret: "*Deoc'h e roin Donezonou santel David, ar re wirion!*" ³⁵ Setu perag, en eur Skritur-all e lavar: "*Ne lezoc'h ket ho Sant da weled ar vreinadurez!*" ³⁶ Rag David, goude dezañ servicha en e amzer diouz mennad Doue, a zo bet marvet! Ha lakeet eo bet e-kichenn e dadou, ha gwelet e-neus ar vreinadurez! ³⁷ An Hini avad e-neus Doue adsavet, n'e-neus ket gwelet ar vreinadurez!..." ³⁸ Ra vezo anad deoc'h, Breudeur: dre Hennez eo degemennet deoc'h pardon ar pehejou! Hag an oll behejou na c'hellec'h ket beza justizet anezo dre Lezenn Voizez, ³⁹ en Hemañ e vez anezo justizet kement hini a gred Ennañ! ⁴⁰ Gwelit eta na zegouesfe ganeoc'h ar pez a zo lavaret er Brofeded: ⁴¹ "*Gwelit, goaperien! Souezit ha tehit diwar-wel! Rag ober a ran eun Oberenn en hoc'h amzer, eun Oberenn na gredoc'h ket dezi ma teu unan bennag d'he displega deoc'h!*"

⁴² P'emaint o vond er-mêz, e teu an dud da c'houlenn diganto displega dezo an traou-ze d'ar zabad war-lerc'h! ⁴³ Eur wech divodet ar zinagog, ez a kalz euz ar Juzevien hag euz ar Brozelited doujerien-Doue da heul Paol ha Barnabe: ar re-mañ, o prezeg dezo, o degas da gendelher e gras Doue...

⁴⁴ D'ar zabad war-lerc'h, ez eo ken-vodet kêr a-bez pe dost, evid kleved Komz Doue. ⁴⁵ O weled ar boblad tud, ema ar Juzevien entanet a c'hred, hag e tislavaront an traou lavaret gand Paol, en eur vlasfemi. ⁴⁶ Hag en eur hardisaad, e lavar Paol ha Barnabe: "**Bez' e ranke Komz Doue beza lavaret deoc'h-c'hwi da genta! Pa zalhit d'he distaoler, ha pa zoñjit n'oc'h ket hoc'h-unan dîn ouz ar vuez peurbaduz, setu ni o vond da drei warzu ar Baganed.**" ⁴⁷ Rag kement-se e-neus an Aotrou kemennet deom: "*Da lakeet am-eus da sklêrijenn ar Baganed, dit da gas ar zilvidigez beteg penn pella ar bed!*"

⁴⁸ Ouz o c'hleved avad, e laouenna ar Baganed, hag e tougont gloar da Gomz an Aotrou: dond a ra da gredi kement-hini a zo merket evid ar vuez peurbaduz. ⁴⁹ Hag ez eo skignet Komz an Aotrou dre ar vro a-bez.

⁵⁰ Ar Juzevien avad a atiz ar gwragez uhel a zouj Doue, hag ive uhelidi-kêr: sevel a reont heskinerez a-eneb Paol ha Barnabe, hag o stlepel er-mêz euz o bro! ⁵¹ Int-i avad a hej warno poultren o zreid hag a gerz da Ikoniom. ⁵² Ha leuniet eo an Diskibien gand al levenez ha gand ar Spered Santel.

-14-**AN DOUEOU A ZO DISKENNET DAVEDOM!**

¹ En Ikoniom, evelse ive, e tegouez dezo mond da zinagog ar Juzevien ha da gomz e doare ma teu kalz Juzevien ha Gresianed da gredi! ² Ar Juzevien chomet diskredig a zeu da atiza ha da daerraad spered ar Baganed a-eneb ar Vreudeur. ³ Eno eta e chomont eur pennad mad a amzer en eur hardisaad en Aotrou, dre ma ro testeni da Gomz e c'hras o lakaad sinou ha marzou da c'hoarvezoud dre o daouarn. ⁴ Rannet eo tud kêr: lod a zo a-du gand ar Juzevien, lod all a-du gand an Ebestel. ⁵ Pa zeu ar Baganed hag ar Juzevien a-unan gand o renerien d'ober eur stourmadeg evid o wall-gas hag o labeza, ⁶ ouz o weled, e tehont kuit warzu kêriou al Likaoni, Listr ha Derbe, ha tro-war-dro, ⁷ hag eno ec'h embannont ar C'helou-Mad...

⁸ Hag e Listr, ez eus eur gwaz, seizet dezañ e dreid: atao e vez azezet, rag kamm eo abaoe m'eo ganet ha n'e-neus biskoaz baleet. ⁹ Bez' e selaou Paol o komz. Hemañ a bar warnañ e zell, hag o weled e-neus an dén feiz da veza pareet, ¹⁰ e lavar dezañ a vouez kreñv: **“Sav sonn war da dreid!”** Hag an dén a lamm hag a vale! ¹¹ O weled ar pez e-neus greet Paol, e sav an dud o mouez da lavared en o yez likaoneg: **“An doueou, deuet heñvel ouz tud, a zo diskennet davedom!...”** ¹² Barnabe a c'halvont Zeus, ha Paol Hermez, peogwir e rén war ar Gomz!

¹³ Beleg an doue 'Zeus-dirag-Kêr' a zegas tirvi gand garlantez dirag dorojou kêr: a-unan gand an dud, e fell dezañ kinnig eur zakrifiz! ¹⁴ O kleved kement-se, an Ebestel Barnabe ha Paol a freg o dillad, hag a lamm warzu an dud o youhal, ¹⁵ o lavared: **“Gwazed! Perag e rit an dra-ze ? Ni ive a zo ahanom tud heñvel ouzoc'h-c'hwi, deuet da embann deoc'h distrei, diouz an traou-a-netra-ze, warzu an Doue-Beo, e-neus greet an neñv hag an douar hag ar mor ha kement-tra a zo enno!...”** ¹⁶ A-hed ar rummadou tremenet, e-neus lezet an oll Baganed da vond o heñchou! ¹⁷ Koulskoude, n'e-neus ket en em lezet e-unan heb testeni, oc'h ober vad, o rei deoc'h euz an neñv glaoeier ha poeñchou da rei frouez, o karga ho kalonou a vagadurez hag a levenez!” ¹⁸ Ha goude dezo lavared kement-se, a-vec'h ma viront ouz an dud kinnig dezo eur zakrifiz!

¹⁹ Euz Antioch hag Ikoniom e teu Juzevien; gounezet ganto an dud, e labezont Paol: e stleja a reont er-mêz euz kêr, en eur zoñjal ez eo marvet! ²⁰ Pa zeu an Diskibien endro dezañ, e sav en e zav hag e tistro e kêr. En deiz war-lerc'h ez a kuit gand Barnabe warzu Dere. ²¹ Embannet ganto ar C'helou-Mad er gêr-ze ha kelennet ganto kalz tud, e tistroont da Listr, Ikoniom hag Antioch, ²² en eur gennerza eneou an Diskibien, en eur alia da gendelher er feiz hag o lavared: **“Dre galz trubuillou e rankom mond e Rouantelez Doue!”** ²³ Evito, e peb Iliz, ec'h astennont o daouarn war ar Gozidi, ha goude pedi ha yuni, o fizioud a reont en Aotrou o-deus

Mz 7,14 int-i kredet ennañ!

²⁴ Treuzet ganto ar Pisidi, e tegouezont er Pamfili. ²⁵ Prezeget ganto ar Gomz e Perje, e tiskennont da Atali. ²⁶ Ahano e vordeont da Antioch: ahano int eet, bet fiziet e gras Doue evid an oberenn o-deus peur-c'hreet. ²⁷ Pa zegouezont, e vodont an Iliz: embann a reont kement e-neus Doue greet ganto, ha penaoz e-neus digoret dor ar feiz d'ar Baganed! ²⁸ Chom a reont eno eur pennad mad gand an Diskibien...

-15-

KAVOUD A RA D'AR SPERED SANTEL HA DEOM-NI!

Gen 12,10
Gal 5,2

Gal 2,1

¹ Tud diskennet euz ar Jude a gelenn d'ar Vreudeur; **“Ma ne vezit ket amdrohet hervez Kustum Voizez ne c'hellit ket beza salvet!”** ² Sevel a ra rendael ha breutadeg kaled a-berz Paol ha Barnabe ganto, hag e tivizont ober da Baol ha da Varnabe ha da unan bennag all euz o zouez sevel da Jeruzalem daved an Ebestel hag ar Gozidi, diwar-benn ar gudenn-ze! ³ Int-i eta, ambrouget gand an Iliz, a dremen dre ar Fenisi hag ar Samari, en eur gonta Distro ar Baganed, hag o rei evelse levenez vraz d'an oll Vreudeur.

Ob 10,1...
Ob 11,15...

Gal 5,1
Mz 23,4...
Rom 7...
Mz 11,30...
Rom 2,17

⁴ Erruet e Jeruzalem, ez int degemeret mad gand an Iliz, gand an Ebestel hag ar Gozidi, hag ec'h embannont kement e-neus Doue greet ganto... ⁵ Med sevel a ra tud deuet da gredi a-douez rumm ar Farizeiz hag a lavar: **“Red eo o amdroha ha kemenn dezo mired Lezenn Voizez!”** ⁶ Hag ez eo bodet an Ebestel hag ar Gozidi da weled diwar-benn ar gudenn-ze. ⁷ Goude eun enklask mad, e sav Pèr da lavared dezo: **“Gwazed, Breudeur! Gouzoud a rit: adal an deveziou kenta, e-neus Doue va dibabet en ho touez, d'ar Baganed kleved euz va genou Komz ar C'helou-Mad ha dond da gredi!** ⁸ Doue, hag a lenn er c'halonou, e-neus testeniet evito o rei dezo ar Spered Santel koulz ha deom-ni! ⁹ N'e-neus greet kemm ebed etrezo ha ni: dre ar feiz e-neus glaneet o c'halonou! ¹⁰ Bremañ eta, perag deoc'h tenti Doue o lakaad war jouk an Diskibien eur yeo ha n'o-deus gellet dougen nag on Tadou na ni on-unan! ¹¹ Med kredi a reom ez om-ni bet salvet dre c'hras Jezuz on Aotrou en heveleb doare hag ar re-ze ive!”

Rom 9,26

¹² Sioul e chom an oll! Hag e selaouont Barnabe ha Paol o konta pegement a zinou hag a varzou e-neus Doue greet drezo e-touez ar Baganed! ¹³ Pa jomont sioul, e stag Jakez da lavared: **“Gwazed, Breudeur! Va zelaouit!** ¹⁴ **Simon e-neus displeget deoc'h penaoz eo bet Doue da genta aketuz da gemer a-douez ar Baganed eur Bobl evid e Ano!** ¹⁵ Gand-se e ken-son komzou ar Brofeded, hervez m'eo skrivet:

Amoz 9,11...

¹⁶ *“Goude-ze e tistroin hag ec'h adsavin Teltenn David bet diskaret!*

“He dismantrou a adsavin hag hec'h adsonna a rin!

¹⁷ *“Evid ma teuio ar Rest euz an dud da glask an Aotrou,*

“Hag ive an oll Baganed a vez galvet warno va Ano!”

Evelse e komz an Aotrou a ra an traou-ze, ¹⁸ “Traou anad dezañ a-viskoaz”? ¹⁹ Rag-se e varnan-me evel-mañ: Arabad tregasi ar re a zistro da Zoue a-douez ar Baganed, ²⁰ med skriva dezo diwall ouz loustoniou an idolou, ouz ar zerherez, ouz tammou-kig chatal mouget, hag ouz ar gwad! ²¹ rag abaoe an amzeriou kent, bez’ e-neus Moizez e peb kêr tud ouz e embann, lennet ma vez er zinagogou da bep sabad.”

²² Mad e kav neuze an Ebestel hag ar Gozidi, gand an Iliz a-bez, kas da Antioch, da heul Paol ha Barnabe, gwazed dibabet en o zouez: Jud, lesañvet Barsabaz, ha Silaz, gwazed brudet mad e-touez ar Vreudeur, ²³ ha skriva kement-mañ dre o daouarn:

Gal 2,12
Ob 15,1

“Ar Vreudeur, Ebestel ha Kozidi, d’ar Vreudeur deuet a-douez ar Baganed a zo e Antioch, er Siri hag er Silisi: Salud deoc’h! ²⁴ Klevet on-eus ez eus eet tud euz on touez d’ho strafuilla ha da drubuilla ho sperejou gand o c’homzou, heb beza kemennet ganeom-ni! ²⁵ Rag-se, unan a-galon, e tivizom kas gwazed dibabet davedoc’h, da heul or Breudeur karet Barnabe ha Paol, ²⁶ tud hag o-deus gouestlet o buez da Ano Jezuz Krist on Aotrou! ²⁷ Kas a reom eta Jud ha Silaz: deoc’h e tispakint an traou dre c’hér! ²⁸ Rag kaoud a ra d’ar Spered Santel ha deom-ni n’eus samm all ebed da lakaad warnoc’h eged an traou-red-mañ: ²⁹ en em ziwall diouz traou bet kinniget da idolou, diouz gwad, diouz kig chatal mouget, diouz serherez. Oc’h en em vired diouz kement-se e reoc’h mad! Salud deoc’h!”

1 Kor 5,4

Mz 23,4
Yn 26,13

³⁰ Ar re-ze, en eur vond kuit, a ziskenn da Antioch: eno e vodont ar Bobl evid rei dezo al lizer. ³¹ En eur lenn, e laouennaont diwar ar frealz! ³² Jud ha Silaz, hag a zo ive Profeded, a zeu gand eur brezegenn hir da frealzi ha da gennerza ar Vreudeur. ³³ Tremenet ganto eur pennad amzer, ez int er peoc’h lakeet gand ar Vreudeur en hent, daved ar re o-deus o c’haset. ³⁴ Silaz a gav mad chom eno: Jud hepkén a zistro da Jeruzalem. ³⁵ Paol ha Barnabe a jom e Antioch: gand kalz re all ive e kelennont hag ec’h embannont Komz an Aotrou.

2 Tes 3,5

2 Kor 11,28
Ob 20,28

³⁶ Goude eun nebeud deveziou, e lavar Paol da Varnabe: **“Distroom ’ta da weled ar Vreudeur e kement kêr on-eus ni prezeget enni Komz an Aotrou, da weled penaoz ez eont!”** ³⁷ Barnabe a fell dezañ kemer ive Yann, lesañvet Mark! ³⁸ Paol avad ne gav ket mad dezo kemer ganto an den-ze a zo eet kuit diouto adal ar Pamfili, ha n’eo ket deuet a-unan ganto d’al labour! ³⁹ Sevel a ra taerijenn, ken ma tehont an eil diouz egile! Barnabe a gemer gantañ Mark, ha mordei a ra warzu enezenn Chipr! ⁴⁰ Paol a zibab Silaz, hag e kemer an hent, fiziet e gras an Aotrou gand ar Vreudeur. ⁴¹ Mond a ra dre ar Siri hag ar Silisi en eur gennerza an Ilizou...

-16-**AN DUD-MAÑ A ZO O TISPAC'H OR C'HÊR!**

2 Tim 1,5
Fil 2,19

¹ Degouezoud a ra e Derbe hag e Listr, ha setu eno eun diskib anvet Timote mab d'eur Juzevez deuet da gredi, ha d'eun tad gresian. ² Bez' e-neus an den testeni mad digand ar Vreudeur a zo e Derbe hag e Listr. ³ Paol a fell dezañ e teufe gantañ: e gemer a ra hag e amdroha en abeg d'ar Juzevien a zo en tachadou-ze, rag gouzoud a ra an oll ez eus eur Gresian euz e dad. ⁴ En eur dreuzi ar c'hêriou, e roont dezo da viroud ar reolennoù reizet gand an Ebestel hag ar Gozidi e Jeruzalem. ⁵ Starteet eo eta an Ilizou er feiz, hag hervez an niver, e founnusaont bemdez! ⁶ Treuzet ganto ar Friji ha Bro-Galati, ez eo miret outo gand ar Spered Santel mond da embann ar Gomz en Azi. ⁷ Pa zegouezont war harzou ar Mizi, e klaskont mond er Bitini, med Spered Jezuz ne ro ket dezo an aotre! ⁸ Treuzet ganto ar Mizi, e tiskennont beteg Troaz.

Gal 4,13...
Fil 1,19
Rom 8,9

⁹ E kreiz an noz, e teu eur weledigez da bara dirag Paol: eur gwaz Makedoniad bennag a zo en e zav ouz e aspedi o lavared: **“Treuz warzu ar Makedoni ha ro deom skoazell!”** ¹⁰ Kerkent ha gwelet gantañ ar weledigez-ze, e klaskom raktal mond warzu ar Makedoni, anad deom e-neus Doue or galvet da embann dezo ar C'helou-Mad! ¹¹ O vordei euz Troaz, e redom war-eeun da Zamotraz, hag en deiz war-lerc'h da Neapoliz, ¹² ahano da Filip, a zo ar brasa kêr el lodenn-ze euz ar Makedoni: eun drevadenn roman a zo anezi; er gêr-ze e chomom eun nebeud deveziou. ¹³ Da zeiz ar zabad, ez eom ermêz euz dor-kêr, war ribl eur stêr, el lec'h ma soñjom e vez ar Bedenn. Eet da azeza, e komzom gand ar merhed bodet eno. ¹⁴ Eur vaouez, Lidia hec'h ano, - a zo eur varhadourez moug euz Tiatir, eun doujerez-Doue -, a zo o selaou; hag an Aotrou a zigor dezi he c'halon, dezi evesaad ouz kement a lavar Paol. ¹⁵ Kerkent ha badezet, hag hi hag he zi, e teu d'or pedi o lavared: **“M'ho-peus c'hwi barnet ez on me feal d'an Aotrou, deuit da jom em zi!”** Hag ober a ra deom mond di!

Yn 6,44

¹⁶ Eun deiz, ganeom o vond d'ar bedenn e tegouez eur vatez yaouank, dezi eur spered a-ziougan: kalz gounidegez a zegas d'he mistri o tiougan! ¹⁷ Dond a ra war-lerc'h Paol ha ni, hag en eur youhal, e lavar: **“An dud-mañ a zo anezo servicherien an Doue Uhel-Meurbed, hag emaint o tegemenn deoc'h Hent ar Zilvidigez!”** ¹⁸ Evelse e ra meur a zevvez. Hegaset, Paol a zistro hag e lavar d'ar spered: **“En Ano Jezuz Krist, e kemennan dit mond er-mêz anezi!”** Ha war an taol, ez a er-mêz!

Mk 1,24

Mk 16,18

¹⁹ Pa wel he mistri eo teuzet esper o gounidegez, e pakont krog e Paol ha Silaz, evid o zacha ganto war al Leur-Kêr dirag ar renerien! ²⁰ O degas a reont dirag ar varnerien, o lavared: **“An dud-mañ a zo o tispac'h or c'hêr! Bez' ez int Juzevien, hag e kemennont kustumou ha n'eo ket aotreet ganeom-ni na degemer nag heulia, pa z'om-ni Romiz!”** ²² A-unan ganto e stourm ive ar bobl a-bez! Ar varnerien, goude beza diframmet dezo o dillad, a c'hourhemenn o bazata! ²³ Kalz taoliou a skoont ganto, hag o stlepel a

2 Kor 11,25
Fil 1,30
1 Tes 2,2.

reont er prizon, en eur gemenn d'ar gward o diwall striz! ²⁴ Hemañ, diwar eun heveleb gourhemenn, o stlap en toull donna, en eur startaad o zreid er pej-koad.

Kol 3,16 ²⁵ Wardro hanter-noz, ema Paol ha Silaz o pedi dre gana Salmou da Zoue: ar brizonidi avad a zo ouz o zelaou. ²⁶ En eun taol, e tegouez eur c'hren-douar kreñv ken ma hej diazevou ar prizon! War an taol eo digoret oll zorojou ar prizon, ha distaget ereou an oll! ²⁷ Pa zihun, e wel ar gward eo digor oll zorojou ar prizon, hag e tifeur e gleze evid en em laza, o soñjal o-deus an oll brizonidi kemeret an tec'h! ²⁸ Paol avad, o sevel uhel e vouez, a lavar: **“Na ra droug ebed dit da-unan! Rag emaoim-ni oll amañ!”** ²⁹ Goulenn a ra goulou hag e teu en diabarz: en eur greña e kouez dirag Paol ha Silaz, ³⁰ hag o c'has a ra er-mêz, en eur lavared: **“Aotrounez! Petra eo din ober evid beza salvet?”** ³¹ Int-i a lavar: **“Kred e Jezuz, an Aotrou, hag e vezi salvet, te ha da di ive!”** ³² Dezañ e lavaront Komz an Aotrou, hag ive da oll dud e di. ³³ O degemer a ra d'an eur-ze euz an noz, evid o gwelhi diouz an taoliou, ha kerkent eo eñ badezet, eñ e-unan hag e oll dud! ³⁴ Hag eñ d'o c'has gantañ d'e di ha da lakaad dezo traou war an daol: gand e di a-bez e trid a levenez diwar veza deuet da gredi!

Yn 8,34 ³⁵- Deuet an deiz, ar varnerien a gas ar vazaterien da lavared: **“Laoska an dud-ze!”** ³⁶ Ar gward avad a zegemenn ar c'homzou-ze da Baol: **“Ar varnerien o-deus degaset tud, deoc'h beza laosket! Bremañ eta, kit er-mêz, ha kerzit er peoc'h!”** ³⁷ Paol avad a lavar dezo: **“Dirag ar bobl o-deus or bazatet, heb deom beza bet barnet! Ni hag a zo Romiz! Or stlapet o-deus er prizon, ha bremañ e lakont or stlepel er-mêz dre guz! Nann avad! Dezo dond o-unan d'or c'has er-mêz!”** ³⁸ Ar vazaterien a zegemenn d'ar varnerien ar c'homzou-ze: aon a grog enno o klevet ez int Romiz! ³⁹ Dond a reont d'o aspedi ha d'o c'has er-mêz en eur c'houlenn diganto kuitaad o c'hêr! ⁴⁰ Eet euz ar prizon, ez eont da Lidia: goude beza gwelet ha kennerzet ar Vreudeur, ez eont kuit...

-17-

ATENIZ! AN 'DOUE DIANAV' A EMBANNOM NI DEOC'H!

1 Tes 2,2

¹ Tremenn a reont dre Amfipoliz hag Apolloniz ha degouezoud e Tesalonig: eno ez eus eur zinagog Juzevien. ² Hervez e gustum, ez a Paol daveto; epad tri zabad, e tiviz ganto adaleg ar Skrituriou, ³ o tisplega hag o tiskouez dezo e ranke ar Mesiaz gouzañv hag adsevel a-douez ar re varo: **“Ar Mesiaz-se eo Jezuz, an Hini a embannan-me deoc'h!”** ⁴ Ha lod anezo a zo gounezet hag a zo degouezet da lod gand Paol ha Silaz, hag ive eur boblad vad euz ar C'hresianed a zouj Doue ha kalz euz ar gwraez a reñk uhel. ⁵ Gredusaad a ra ar Juzevien, hag e kemeront ganto eun toullad gwazed droug a-douez lamponed al Leur-kêr: bodet ganto leun a dud, e reont tousmac'h e kêr! Chom a reont dirag ti Jazon, o klask Paol ha Silaz, evid o degas dirag ar bobl. ⁶ Pa n'o c'havont ket, e sachont Jazon hag eun nebeud

Lk 24,26...
1 Tes 2,14

Lk 23,2
Yn 19,12

Breudeur dirag renerien-kêr, eun eur youhal: **“Ar re o-deus lakeet dispac’h er bed, ema ar re-ze amañ ive! 7 Ha Jazon a ro dezo degemer! Int-i oll a ra a-eneb reoladuriou Sezar o lavared ez eus eur roue all, Jezuz!”** 8 Strafuilla a reont ar bobl, hag ive renerien-kêr, pa glev ar re-mañ kement-se! 9 Arhant-kred a c’houlennont digand Jazon hag ar re all araog o laoskaad! 10 Ar Vreudeur avad, raktal epad an noz, a ra da Baol ha da Zilas mond kuit warzu Bere. Erruet eno, ez eont da zinagog ar Juzevien. 11 Ar re-mañ a zo kalonekoc’h eged re Desalonig: degemer a reont ar Gomz a-greiz kalon, o studia bemdez ar Skrituriou da weled hag evelse ema ganto. 12 Kalz anezo a zeu da gredi, hag ive a-douez ar C’hresianed, gwragez a reñk uhel, hag ive gwazed niveruz.

Yn 5,39

13 Pa glev Juzevien Tesalonig eo embannet Komz Doue gand Paol e Bere ive, e teuont di da zispaha ha da strafuilla ar bobl! 14 Raktal avad, e teu neuze ar Vreudeur da gas Paol kuit, dezañ mond beteg ar mor! 15 Ar re a ambroug Paol a ia d’e gas beteg Aten: degemeret ganto evid Silaz ha Timote ar gourhemenn da zond davetañ buanna ma c’hellont, ez eont endro!

1 Kor 4,12

16 E Aten, ouz o c’hortoz, Paol a daerra e spered ennañ e-unan o weled eo Kêr gouestlet d’an idolou! 17 Divizoud a ra eta er zinagog gand ar Juzevien hag gand ar re a zouj Doue, ha war an Agora bemdez gand ar re a zegouez gantañ! 18 Darn ive euz ar Brederourien, epikuriz ha stoaz, a gen-diviz gantañ! Lod a lavar: **“Petra a glask lavared ar c’hlabouser-mañ?”** Lod all: **“Eun embanner doueou estren a zo anezañ, da weled!”**... rag embann a ra ‘Jezuz’ hag an ‘Adsao’! 19 Ennañ e pakont krog evid e gas dirag an Areopaj, en eur lavared: **“Daoust hag anavezoud a c’hellom petra eo ar gelennadurez-nevez-ze a vez displeget ganit ? 20 Rag traou estren a zegasez d’on diskouarn! Ni a fell deom gouzoud petra a c’hell beza kement-se!”** 21 An oll Ateniz koulz hag an diavezourien o chom eno, ne lakont o amzer da netra all nemed da lavared pe da gleved eun nevezenti bennag!...

Mz 11,25
Rom 1,18...
Ob 7,43
Salm 50,10

22 Paol avad, en e zav e-kreiz an Areopaj, a lavar: **“Gwazed, Ateniz! Dreist-oll e welan ez oc’h-c’hwi tud relijiuz-dreist! 23 Rag en eur vond ha dond, hag o selled ouz ho savaduriou sakr, am-eus zoken kavet eun aoter a zo enskrivet warni ‘D’an doue dianav’! Ar pez a enorit-c’hwi eta heb henn anavezoud, kement-se a zegemennan-me deoc’h. 24 An Doue e-neus greet ar Bed ha kement-tra a zo ennañ, Eñ, Aotrou an Neñv hag an douar, n’ema ket o chom e santualiou greet gand an dorn, 25 ha ne vez ket ive servichet gand daouarn tud, evel p’e-nefe ezomm a dra-pe-dra, Eñ hag a ro, d’an oll, buez, alan ha kement-tra! 26 Diwar eun den hepkén e-neus greet da bep poblad tud mond da jom war beb dachenn euz ar bed, o verka dezo amzeriou divizet hag harzou o demeurañs, 27 dezo da glask Doue, ma teuont da dostaad outañ a-dastorn ha d’e gavoud. Evid gwir, n’ema ket pell diouz hini ahanom, 28 rag ennañ e vevom, e kreskom hag ez eus ahanom, evel m’o-deus lavaret hiniennou euz ho parzed: ‘Rag e ouenn dezañ zoken ez om-ni!’ 29 Pa z’om eta Gouenn Doue, ne dleom ket soñjal ez eo an Douegez heñvel ouz aour, pe arhant pe vên, kizellez diwar ijin ha meno eun den!”**

Yn 1,3...

30 **“En eur zistrei eta e zell diouz Amzeriou an Diouiziegez, ema**

Lk 13,1 bremañ Doue o tegemenn d'an dud eo red, dezo oll ha dre oll, distrei! ³¹ Rag merket e-neus an Deiz ma teuio ennañ da varn ar Bed a-bez hervez ar justiz dre eun Den e-neus Eñ diazezet! Ha kred euz kement-se e-neus roet d'an oll oc'h ober dezañ adsevel a-douez ar re varo!”

1 Kor 15,12. ³² O kleved ano euz ‘Adsao tud varo’, e ra lod goap, lod all a lavar dezañ: “**Da glevet a raim eun dro all diwar-benn an dra-ze!**”... ³³ Neuze ez a Paol kuit euz o-zouez... Eun nebeud gwazed avad a stag outañ, hag a zeu da gredi: en o zouez, Denez an Areopajad, eur vaouez anvet Damariz, ha re all ganto...

-18-

EUR BOBL NIVERUZ A ZO DIN E KORINT!

Rom 16,3 ¹ Da c'houde, eet kuit euz Aten, ez a eñ da Gorint. ² Eno e kav eur
1 Kor 16,19 Juzeo, Akilaz e ano, ginnidig euz ar Pont, nevez-deuet euz an Itali gand
2 Tes 4,19 Prisilla, e wreg, rag Glaoda e-neus kemennet d'an oll Juzevien kuitaad Rom!
1 Kor 4,12 Hag ez a Paol daveto. ³ Pa z'eo heñvel-micher ganto, ez a da jom ganto hag e
stag da labourad, rag bez' ez int teltennerien a vicher. ⁴ Divizoud a ra er zina-
gog bep sabad, hag e c'hounid Juzevien ha Gresianed. ⁵ Pa ziskenn Silaz ha
Timote euz ar Makedoni, e talc'h Paol gand ar Gomz, o testenia d'ar
Juzevien ez eo Jezuz ar Mesiaz. ⁶ Pa ne reont nemed dislavared ha blasfemi,
Mz 27,24 en eur heja e zillad e lavar dezo: “**Ho kwad a vo war ho penn! Anezañ ez
on-me glan! A-vremañ ez in daved ar Baganed!**” ⁷ Goude beza dilohet
ahano, ez a da di eun den anvet Tisiuz Justuz, eun doujer-Doue a zo e di stag
1 Kor 1,14 ouz ar zinagog. ⁸ Krispuz avad, rener ar zinagog, a zeu da gredi en Aotrou
1 Kor 2,3 gand e di a-bez! Ha kalz Korintiz, o kleved ano, a zeu da gredi ha da veza
badezet. ⁹ Eun nozvez, e lavar an Aotrou da Baol en eur weledigez: “**N'az-
pez ket aon! Med komz ha na dav ket!**” ¹⁰ Rag me a zo ganit, ha ne daolo
Yn 10,16 dén e zorn warnout d'ober droug dit! Rag eur Bobl niveruz a zo din er
Gêr-mañ!” ¹¹ Ha war al lec'h e chom bloaz-hanter en o zouez da brezeg
Komz Doue! ¹² P'ema Gallion Pro-Koñzul en Akai, e sav ar Juzevien unan-
a-galon, a-eneb Paol: e zegas a reont dirag al Lez-varn, ¹³ o lavared: “**Hemañ
1 Tes 2,14 a zegas an dud da zouja Doue a-eneb al Lezenn!**” ¹⁴ P'ema Paol o vond da
gomz, e lavar Gallion d'ar Juzevien: “**Ma vije bet ano euz eur felladenn
bennag, pe euz eun taol-fall, ô Juzevien! evel just, me ho tegemerfe!**” ¹⁵
Med ma'z eus rendaelou diwar-benn komzou, anoïou, ha diwar-benn al
Yn 18,31 Lezenn hervezoc'h-c'hwi, deoc'h-c'hwi gweled hoc'h-unan! Ne fell ket
1 Kor 1,1 din beza barner war gement-se!” ¹⁶ Hag eñ d'o c'has kuit a-zirag al Lez-
varn! ¹⁷ An oll C'hresianed avad a bak krog e Sosten, penn-rener ar zinagog,
ha warnañ e lopont dirag ar zinagog: Gallion avad ne ra van ebed euz
kement-se...

Rom 16,1 ¹⁸ Paol a jom c'hoaz eno kalz deveziou... Kimiadi a ra diouz ar
Rom 1,10 Vreudeur ha mordei warzu ar Siri, ha d'e heul, Prisilla hag Akilaz. E Sañkre,
e ra touza e benn, rag greet e-neus eur gouestl! ¹⁹ Degouezet en Efez, o lezel

a ra eno, hag ez a e-unan d'ar zinagog da zivizoud gand ar Juzevien. ²⁰ Ar re-mañ a c'houlenn digantañ chom pelloc'h amzer, med ne asant ket ganto. ²¹ En eur gimidi, e lavar: **“Adarre e tistroin davedoc'h, ma plij da Zoue!”** Hag e kuita Efez! ²² Diskennet e Sezare, e sav da zaludi an Iliz hag e tiskenn da Antioch.

²³ Tremenet eur pennad amzer, ez a en hent, o treuzi diouz reñk Bro-Galati hag ar Friji, en eur gennerza an Diskibien. ²⁴ Eur Juzeo, Apoloz e ano, ginnidig euz Aleksandri, eur gwaz helavar anezañ, a zegouez en Efez: gouizieg eo eñ war ar Skrituriou. ²⁵ Desket eo war Hent an Aotrou, ha pa z'eo birvidig a-galon, e lavar hag e kelenn spiz pep tra diwar-benn Jezuz, goude dezañ anavezoud hepkén badeziant Yann! ²⁶ Dond a ra da hardisaad er zinagog. Ouz e glevet, e teu Prisilla hag Akilaz d'e gemer ganto, da zisplega spisoc'h dezañ Hent Doue. ²⁷ Pa fell dezañ treuzi da vond en Akai, ema ar Vreudeur ali gantañ hag e skrivont d'an Diskibien, dezo e zegemer mad! Erruet eno, e kennerz mad ar Grederien dre ar c'hras, ²⁸ rag gand nerz, a-wel d'an oll, e tivarc'h ar Juzevien, o tiskouez dre ar Skrituriou eo Jezuz ar Mesiaz.

-19-

BRAZ EO ARTEMIZ AN EFEZIZ!

¹ Epad m'ema Apoloz e Korint, e treuz Paol an uhelennou: erruet e Efez, e kav eno eun nebeud Diskibien; ² ha dezo e lavar: **“Daoust ha degemeret ho-peus ar Spered Santel, pa z'oc'h-c'hwi deuet da gredi!”** Hag int-i dezañ: **“N'on-eus ket zoken klevet ez eus eur Spered Santel!”** ³ Hag e lavar: **“E petra 'ta ez oc'h bet badezet ?”** Hag e lavaront: **“E badeziant Yann!”** ⁴ Ha Paol a lavar: **“Yann e-neus badezet en eur vadeziant a Zistro, en eur lavared d'ar Bobl kredi en Hini a zeue war e lerc'h, da lavared eo Jezuz!”** ⁵ P'o-deus klevet an dra-ze, ez int badezet en Ano Jezuz an Aotrou! ⁶ Pa astenn Paol e zaouarn warno, e tiskenn warno ar Spered Santel: komz a reont e yeizou-all ha profedi! ⁷ Daouzeg gwaz bennag a zo anezo.

⁸ Mond a ra d'ar zinagog, ha, gand hardisegez, epad tri miz, e tiviz diwar-benn Rouantelez Doue, en eur glask gounid tud. ⁹ Pa z'eo lod kaledet ha pa ziskredont en eur wall-gomz euz an Hent, dirag ar bobl, e tec'h e-unan diouto; ha kas a ra an Diskibien a-gostez evid divizoud bemdez ganto e Skol Tirannoz! ¹⁰ An dra-ze a bad daou vloaz, hag evelse, ar re oll a zo o chom en Azi o-deus klevet Komz an Aotrou, Juzevien hag ive Gresianed! ¹¹ Burzudou -ha n'eo ket re gustum- a ra Doue dre zaouarn Paol, ¹² ken ma vez zoken degaset lienennou ha gouzougennou, bet war e gorr, da veza lakeet war ar re glañv, ha diouto e tistag an oll gleñvejou hag ez a ive kuit an droug-sperejou!

¹³ Hag euz ar Juzevien a red bro da argas droug-sperejou, e teu lod da glask eñvel Ano Jezuz an Aotrou war an dud sujet da zroug-sperejou, o lavared: **“Me hoc'h asped en Ano ar Jezuz-ze ema Paol oc'h embann!”**

Mk 1,34 14 Bez' ez eus seiz mab da Skeva, eur beleg-braz juzeo, oc'h ober evelse! 15 Respont a ra an droug-spered o lavared dezo: **“Jezuz a anavezan! Ha Paol ec'h ouzon piou eo! C'hwi avad, piou oc'h-c'hwi ?”** 16 Hag an dén ema ennañ an droug-spered da zailla ganto! Deuet mestr d'an eil ha d'egile, ez a dezo dre nerz ken ma tehont euz an ti-ze en noaz ha gwall-c'hloazet! 17 Anavezet eo an taol-ze gand an oll Juzevien hag ive gand ar C'hresianed o chom e Efez! Kregi a ra aon en oll, hag e kanont braster Ano Jezuz an Aotrou!

18 Kalz euz ar Grederien a zeu da anzav ha da zisklêria o oberou fall. 19 Meur a hini avad, euz an dud a ra divinouriez, a zegas o leoriou da zevi dirag an oll. Prizachi a reont o zalvoudegez, hag e kavont hanter-kant mil pez arhant! 20 Evelse, dre Nerz an Aotrou, e kresk hag e kreñva Komz an Aotrou! 21 Deuet kement-se da-benn, e tiviz Paol, er Spered, treuzi ar Makedoni hag an Akai evid mond da Jeruzalem; ha lavared a ra: **“Goude beza bet eno, e rankin ive gweled Rom!”** 22 Warzu ar Makedoni e kas daou euz e zerviche-rien: Timote hag Erast. Eñ avad a jom eur pennad en Azi...

1 Kor 16,1... Rom 15,22 2 Kor 1,8 23 En amzer-ze, e sav eur stourmadeg, ha n'eo ket eun tammig, diwar-benn an Hent! 24 Rag eun dén anvet Demetriuz, eun orfeber anezañ, oc'h ober as-santualiou arhant da Artemiz, a ro d'ar gizellerien labour frouezuz, ha n'eo ket eun tammig!

25 Boda a ra an dud-ze hag ar re a labour war-dro an traou-ze, hag e lavar: **“Gwazed! Gouzoud a rit eo diwar al labour-ze e teu deoc'h ar peadra! 26 Gweled ha klevet a rit: n'eo ket en Efez hepkén, med dre an Azi a-bez pe dost, ema ar Paol-ze o c'hounid hag o tistrei leun a dud, o lavared: ‘N'int ket evid gwir doueou, ar re a vez greet gand an dorn!’ 27 An dra-ze a c'hell lakaad, n'eo ket hepkén or micher da vond en diskred, med ive santual an Doueez-Vraz-Artemiz da veza lakeet da netra, hag he meurder ive da veza gwallet, doujet ma z'eo-hi en Azi hag er bed a-bez!”**

28 Diwar glevet, e krog an dud, leun a fulor, da youhal, o lavared: **“Braz eo Artemiz an Efeziz!”** 29 Hag ema kêr leun a dousmac'h! Unan a galon, ez a an dud a-lamm d'ar C'hoari-Lec'h, en eur skrapa ganto Gaiuz hag Aristark, a zo anezo Makedoniz ha ken-veajourien da Baol. 30 Paol a glask mond e-touez ar bobl, med an Diskibien n'e aotreont ket da vond. 31 Lod euz ar renerien aziadeg ive, mignoned dezañ, a gas tud da lavared dezañ miroud da vond er C'hoari-Lec'h!

32 An dud eta a youc'h an dra-mañ-an-dra-hont! Rag strafuillet eo ar vodadeg, hag an darn vrasa n'ouzont ket perag ez int bodet! 33 A-douez ar maread tud, e tennont Aleksandr, poulzet ma z'eo gand ar Juzevien! Aleksandr avad, o heja e zorn, a fell dezañ displega d'an dud! 34 Deuet an dud da c'houzoud ez eo eur Juzeo, ne zav nemed eur vouez hepkén euz an oll, krog ma z'int da youhal epad wardro diw eur: **“Braz eo Artemiz an Efeziz!”**

35 Deuet da-benn da reisaad an dud, e lavar dezo ar Skrivagner: **“Gwazed, Efeziz! Piou 'ta, e-touez an dud, ne oar ket eo Kêr an Efeziz**

eveziadez war zantual an Artemiz-Vraz, ha war ar Skeudenn kouezet euz an neñv ? ³⁶ Pa ne c'hell ket kement-se beza dislavaret, eo red deoc'h-c'hwi chom reiz, heb ober netra direiz! ³⁷ Rag degaset ho-peus ar wazed-mañ ha n'o-deus na preizet he zantual na blasfemet on doueez-ni! ³⁸ M'o-deus eta Demetriuz hag ar gizellerien a zo gantañ eur gudenn bennag gand unan bennag, breujou a vez renet, ha bez' ez eus prokonsuled: dirazo eo dezo tamall an eil egile! ³⁹ Ma taelit war eun dra bennag all, e vezo diluziet en eur vodadeg lezenneg! ⁴⁰ Rag tamallet a zispac'h a c'hellom-ni beza evid ar vodadeg greet hirio, heb digarez ebed dezi! War-ze, ne c'hellim rei gwir abeg ebed d'ar vodadeg-mañ!" Diwar ar c'homzou-ze, e tivod ar vodadeg...

-20-

EVID BEZA DA ZEIZ AR PENTEKOST E JERUZALEM

2 Kor 2,13 ¹ Pa baouez an tousmac'h, e c'halv Paol an Diskibien evid o c'hennnerza hag o zaludi: hag eñ mond kuit ha kerzed warzu ar Makedoni. ² Treuzi a ra ar broiou-ze en eur gennerza ar Vreudeur gand liez-komz, hag e tegouez er Gres. ³ Greet gantañ tri miz eno, e teu ar Juzevien da irienni a-eneptañ, p'ema war-nes mordei warzu ar Siri: neuze eo-eñ a c'hrad da zistrei dre ar Makedoni... ⁴ Beteg an Azi, e veaj a-unan gantañ Sopatroz, mab da Birruz, eur Beread, an Desalonigiz Aristark ha Sekonduz, Gaiuz, eun Derbead, Timote, hag an Aziiz Tichig ha Trofim. ⁵ Ar re-ze, eet araozom-ni, a jom d'or gortoz e Troaz...

1 Kor 16,2
Mz 28,1...
Mk 16,9... ⁶ Mordei a reom euz Filip goude deveziou ar Bara-Dihoell, hag e teuom daveto e Troaz a-benn pemp devez: eno e chomom eiz devez. ⁷ Da zeiz kenta ar zizun, pa z'om-ni bodet da ranna ar Bara, e tiviz Paol gand an dud. War-nes mond kuit en deiz war-lerc'h, ec'h astenn e gomz beteg hanter-noz! ⁸ Bez' ez eus avad kalz lampou er zolier m'emaom bodet enni. ⁹ Eur paotr yaouank, Eutikoz e ano, azezet war ar preneustr, a gouez en eur c'houisk don, epad ma tiviz Paol muioc'h mui! Diwar bouez e gousk, e kouez d'an traoñ euz an trede estaj, ha tennet eo kuit maro! ¹⁰ Paol a ziskenn, a bleg warnañ evid e gemer etre e ziwrec'h, en eur lavared: **“Na vezit ket strafuillet! Rag e vuez a zo ennañ!”** ¹¹ Sevel a ra d'an nec'h, ranna ar Bara hag e dañva, prezeg pell-amzer beteg goulou-deiz; evelse ez a kuit. ¹² An dud avad a gas ar paotr yaouank, beo, d'ar gêr: frealzet int, ha n'eo ket eun tammig!

¹³ Ni avad a zav war eul lestr, evid mordei warzu Asoz, el lec'h m'eo deom kemer Paol, rag evelse e oa mennet dond e-unan war e droad! ¹⁴ Degouezet ganeom e Asoz ha kemeret war al lestr, ez eom da Vitilen. ¹⁵ O verdei ahano, en deiz war-lerc'h, e tegouezom dirag Kio. En deiz war-lerc'h e skoom etrezeg Samoz, hag en devez war-lerc'h e teuom da Vilet,

16- rag Paol e-neus divizet mordei e-biou Efez, gand aon da zalea re hir amzer en Azi: hasta affo a ra evid beza, ma c'hell, da zeiz ar Pantekost e Jeruzalem.

17 Euz Milet, e kas tud da Efez da c'helver davetañ Kozidi an Iliz.

1 Tes 2,10...
Fil 2,3...
2 Kor 11,23...

18 Pa zegouezont e lavar dezo: **“Gouzoud a rit, adal an deiz kenta din da daoler va zreid en Azi, penaoz on-me bet ganeoc’h e peb amzer, ¹⁹ o servicha an Aotrou en izelder a-galon, e-kreiz daelou hag e-kreiz tenta-duriou degaset din dre iriennou ar Juzevien; ²⁰ evelse n’am-eus ket tavet eun hinienn euz an traou a oa mad da brezeg ha da gelenn deoc’h, war ar plasennou hag en tiez, ²¹ en eur destenia d’ar Juzevien hag ive d’ar Baganed an Distro ouz Doue hag ar feiz e Jezuz an Aotrou!... ²² Ha bremañ, setu me, ereet er Spered, o vond da Jeruzalem, heb gouzoud petra a zegouezo ganin eno, ²³ nemed ema ar Spered Santel o testenia din e peb kêr, o lavared ez eus chadennou ha trubuillou ouz va gortoz! ²⁴ En neb doare ne lakan va buez da veza talvoudeg evidon, gand ma kasin da benn va redadenn hag ar vinistrerez am-eus degemeret digand Jezuz, an Aotrou: Testenia Kelou-Mad Gras Doue!”**

2 Tim 4,2
Mk 1,15

2 Tim 4,6

25 Ha bremañ, setu ec’h ouzon na weloc’h mui va zremm, c’hwi oll hag ez on tremenet en ho touez en eur embann ar Rouantelez! ²⁶ Rag-se e testenian deoc’h en deiz a-hirio: glan on-me ouz gwad an oll! ²⁷ Rag n’am-eus ket kizet da embann deoc’h mennad Doue en e bez! ²⁸ Taolit evez warnoc’h hoc’h-unan ha war an tropell a-bez e-neus ar Spered Santel ho lakeet ennañ da episkobed, deoc’h da basturi Iliz Doue, e-neus Eñ dasprenet dre e Wad e-unan! ²⁹ Gouzoud a ran: pa vezin eet kuit, e teuio davedoc’h Bleizi kriz ha n’o-do damant ebed d’an tropell! ³⁰ Rag euz ho touez deoc’h hoc’h-unan e savo gwazed, ganto komzou fallagr da zacha an Diskibien war o lerc’h!”

1 Pèr 5,2
1 Pèr 2,9

Mz 7,15
Yn 10,12
1 Yn 2,19

Mk 13,35

Mz 10,8

1 Tes 2,9

1 Kor 11,1
Ef 4,28

31 **“Rag-se, beillit en eur zelher koun n’am-eus ket ehanet epad tri bloaz, noz-deiz, gand daelou, da gentelia pep hini! ³² Ha bremañ, ho fizioud a ran e Doue, hag e Komz e c’hras, en Hini a zo gouest da skweria ha da rei an herez d’an oll dud santelleet! ³³ Arhant pe aour pe zillad unan bennag n’am-eus ket c’hoanteet! ³⁴ Gouzoud a rit hoc’h-unan: d’am ezommou-me ha d’ar re an dud a oa ganin o-deus pourvezet an daouarn-mañ! ³⁵ Kement-mañ am-eus diskouezet deoc’h: dre gemer poan evelse eo red degemer an dud gwan, en eur zelher koun euz Komzou Jezuz an Aotrou, rag lavaret e-neus e-unan: “Brasoc’h trugar eo rei eged degemer!”**

36 Diwar ar c’homzou-ze, eet war e zaoulin, e stag ganto oll da bedi.

Rom 16,16
1 Kor 16,20

37 Ha setu goueladeg vraz a-berz an oll, hag int-i en em daol da gerhenn Baol da bokad dezañ! ³⁸ Glaharet int dreist-oll diwar ar gomz e-neus lavaret: **“Ne zeufent ket kén da weled e zremm!”** Hag e ambroug a reont beteg al lestr...

-21-***PREST ON DA VERVEL EVID AN AOTROU!***

¹ Deuet d'en em ziframma diouto ha da vordei, e skoom war-eeun warzu Koz, en deiz war-lerc'h etrezeg Rod, hag ahano da Batar. ² Pa gavom eul lestr da vond d'ar Fenisi, e savom warnañ hag e vordeom. ³ P'emaom awel euz Chipr, e lezom an enezenn a-gleiz: mordei a reom warzu ar Siri ha diskenn e Tir, rag eno eo d'al lestr diskarga e lestrad. ⁴ Kavoud a reom an Diskibien hag e chomom eno e-pad eiz devez! Da Baol e lavaront dre ar Spered miroud da zével da Jeruzalem! ⁵ Tremenet ganeom an deveziou-ze, ez eom kuit hag e kerzom en hent: an oll on ambroug gand o gwragez hag o bugale beteg er-mêz euz kêr. Bet daoulinet war an aot da bedi, ⁶ e kimiadom an eil diouz egile hag e savom war al lestr: int-i avad a zistro d'ar gêr...

⁷ Oc'h echui da vordei e tiskennom euz Tir da Btoleme: ar Vreudeur a zaludom, ha ganto e chomom eun devez. ⁸ En deiz war-lerc'h ez eom kuit evid mond da Zezare. Degouezet e ti Filip, an Avieler, unan euz ar zeiz, e chomom eno. ⁹ Dezañ ez eus peder verc'h, gwerhezad ha profedezed anezo.

¹⁰ Pa jomom eno kalz deveziou, e tiskenn euz ar Jude eur profed, Agabuz e ano. ¹¹ Dond a ra davedom, kemer gouriz Paol, eren dezañ e-unan treid ha daouarn en eur lavared: **“Setu ma lavar ar Spered Santel: ‘Ar Juzevien e Jeruzalem a ereo evelse an den a zo dezañ ar gouriz-mañ, hag e rei a rint etre daouarn Paganed!’”**.

Mz 16,22

Yn 21,18
Mz 6,10
Lk 22,42...

¹² O klevet kement-se, ni hag an dud a zo eno, ni a zeu d'e erbedi da jom heb sevel da Jeruzalem! ¹³ Paol a respont neuze: **“Petra a rit o ouela hag o ranna din va c'halon! Rag me a zo prest, n'eo ket hepkén da veza ereet, med ive da vervel e Jeruzalem evid Ano Jezuz an Aotrou!”** ¹⁴ Pa n'eus pleg ebed ennañ, e chomom peoc'h, en eur lavared: **“Bolontez an Aotrou bezet greet!”** ¹⁵ Goude an deveziou-ze, greet ganeom ar pourchasou, e savom da Jeruzalem! ¹⁶ Ganeom e teu ive hiniennou euz Diskibien Sezare: ar re-mañ or c'has da di an hini on ostiz: Mnason, eur Chipriad ben-nag, unan euz an Diskibien genta...

Gal 1,19

Rom 10,4

Mk 7,1...

¹⁷ Pa zegouezom e Jeruzalem, a galon vad on degemer ar Vreudeur! ¹⁸ En deiz war-lerc'h, ez a Paol ganeom-ni daved Jakez: eno ema ive an oll Gozidi. ¹⁹ O zaludi a ra ha displega dezo hini hag hini an traou e-neus greet Doue e-touez ar Baganed dre e vinstrezeg! ²⁰ Ouz e zelaou, e tougont gloar da Zoue, hag e lavaront dezañ: **“Gweled a rez, Breur, ped milier ha milier a Grederien a zo e-touez ar Juzevien, hag oll e chomont leun a c'hred evid al Lezenn!”** ²¹ Desket a zo dezo avad, diwar-da-benn, e kellennez an disrann diouz Moizez d'an oll Juzevien a vev e-touez ar Baganed, o lavared dezo miroud da amdrouha o mibien ha miroud da heulia ar C'hustumou! ²² Penaoz eta ema an traou ? A-dra-zur e klevint ez out-te degouezet amañ! ²³ Gra eta ar pez a lavarom dit! Bez' ez eus deom

pevar gwaz sujet d'eur gouestl: ²⁴ dit d'o c'hemer ganit, d'en em c'hla-naad ganto, ha da baea evito evid touza o fenn! Evelse e ouezo an oll n'eo seurt ar pez o-deus desket diwar-da-benn! med e valeez-te ive en eur vired al Lezenn! ²⁵ Diwar-benn ar Baganed deuet da gredi, on-eus ni skrivet da c'houlenn diganto diwall ouz kig bet kinniget da idolou, ouz gwad, ouz kig chatal mouget, hag ouz serherez!" ²⁶ Paol neuze a gemer gantañ ar wazed; en deiz war-lerc'h, eur wech glaneet a-unan ganto, ez a d'an Templ, hag e tispieg e vezo echu amzer ar c'hlanidigez pa vezo kinniget ar brovadenn evid pep hini anezo...

1 Kor 9,20

²⁷ P'ema ar seiz devez o vond da echui, e tegouez d'ar Juzevien euz an Azi e weled en Templ: hag int-i da zispaha ar Bobl ha da daoler warnañ o daouarn ²⁸ en eur youhal: **"Gwazed, Izraeliz! Deuit d'or skoazella! Hemañ eo an dén a zo dre-oll o kelenn an oll a-eneb ar Bobl, a-eneb al Lezenn, hag a-eneb al Lec'h-Santel-mañ! Kaset e-neus zokén Gresianed en Templ ha dizakret al Lec'h-Santel-mañ!"** ²⁹ Rag araog, o-deus gwelet an Efeziad Trofim gantañ e Kêr, hag e kav dezo e-neus Paol e gaset e-barz an Templ. ³⁰ Dispahet eo Kêr a-bez ha strafuillet ar Bobl! Paka a reont krog e Paol hag e zacha er-mêz euz an Templ, ha raktal eo prenet an norojou! ³¹ Emaint o klask e laza, pa glev komandant ar Gohortenn eo dispahet Jeruzalem a-bez! ³² Raktal e kemer gantañ soudarded ha kantenerien, hag e tiskennont a-lamm daveto. O weled ar C'homandant hag ar zoudarded, ec'h ehanont da lopa war Baol! ³³ Hag ar C'homandant a dosta da baka krog ennañ: kemenn a ra d'e liamma gand diou jadenn, hag e c'houlenn piou eo ha petra e-neus greet! ³⁴ An dud, ar bobl a youc'h an dra-mañ-an-dra-hont! Pa ne zeu ket da c'houzoud ar wirionez, en abeg d'an tousmac'h, e kemenn e vefe kaset er c'hastell. ³⁵ Degouezet war an diri, e rank beza douget gand ar zoudarded, en abeg da vountadeg an dud! ³⁶ Rag war e lerc'h ez a ar Bobl en eur youhal: **"Lam hennez kuit!"**

2 Tim 4,20

Lk 23,18

³⁷ War-nes beza kaset er c'hastell, e lavar Paol d'ar C'homandant: **"Hag aotreet eo din lavared dit eun dra?"** Hag e lavar: **"Te a oar gresianeg?"** ³⁸ N'eo ket te eta an Ejiptiad e-neus lakeet, araog an deveziou-mañ, pevar mil forban da zavel ha da vond d'ar gouelec'h?" ³⁹ Paol avad a lavar: **"Me a zo eur Juzeo, euz Tarz, er Silisi, Kêriad euz eur Gêr ha n'eo ket dianav!... Mar plij! Aotre ganin komz d'ar Bobl!"** ⁴⁰ Aotren a ra. Ha Paol, en e zav war an diri, a ra sin d'ar Bobl gand e zorn, hag e tegouez eur zioulder vraz... Hag e komz a vouez kreñv er yez hebreeg hag e lavar:

-22-

DILAM DIWAR AN DOUAR AR SEURT DÉN!

Ob 9,1-29

¹ **"Gwazed! Breudeur ha Tadou! Selaouit an diskleriadenn a ran dirazoc'h!"** ² Pa glevont e komz dezo kreñv er yez hebreeg, e chomont siuoloc'h c'hoaz! Hag e lavar:

Ob 9,1...
Ob 26,9...
1 Kor 11,22...

Gal 1,13...
Fil 3,5...
Ob 8,3...

³ “Me a zo eur Juzeo, ganet e Tarz, er Silisi, savet avad er Gêrmañ, kelennet striz, e-harz treid Gamaliel, war Lezenn on Tadou, ha leun a c’hred evid Doue evel ma z’oc’h-c’hwil oll hirio! ⁴ An Hent-ze ameus heskinet beteg ar maro, o chadenna hag o lakaad taoler er prizon gwazed ha merhed! ⁵ Euz kement-se e-neus ar Beleg-Braz roet din testeni hag ive Breuriez ar Gozidi! Diganto am-oa degemeret lizeri evid ar Vreudeur, hag e kerzen da Zamaz evid chadenna ive ar re a oa eno hag o degas da Jeruzalem da veza kastizet!

Mz 2,23

⁶ Edon avad o vond hag o tostaad ouz Damaz, wardro kreisteiz: en eun taol, euz an Neñv e sked endro din eur sklêrijenn greñv! ⁷ Kouezet d’an douar, e klevan eur vouez o lavared din: ‘Saol! Saol! Perag am heskinez?’ ⁸ Respont a ran: ‘Piou oc’h c’hwil, Aotrou?’ Hag e lavar din: ‘Me eo a zo Jezuz-an-Nazaread! An Hini emaout-te o heskina!’ ⁹ An dud a zo ganin a wel ar sklêrijenn, med ne glevont ket mouez an Hini a gomz din. ¹⁰ Me avad a lavar: ‘Petra eo din ober, Aotrou?’ An Aotrou a lavar din: ‘Sav! Ha kee da Zamaz! Eno e vo komzet dit diwar-benn kement a zo merket dit d’ober!’ ¹¹ Pa ne welan ket sklêr diwar-goust ar sklêrijenn-ze, ez on bleniet war-bouez va dorn gand an dud a zo ganin evid mond e Damaz. ¹² Anani, eur gwaz just hervez al Lezenn, brudet mad gand an oll Juzevien a zo e Damaz, ¹³ a zeu davedon, hag, en e zav dirazon, e lavar din: ‘Saol, va Breur! Gwel sklêr adarre!’ Ha d’an eur-ze e teuan da weled. ¹⁴ Eñ avad a lavar: ‘Doue on Tadou e-neus da zegaset gand e zorn da anavezoud e volonteiz, da weled an Hini just ha da glevet e vouez euz e c’henou, ¹⁵ dit beza test dezañ dirag an oll euz kement az-peus gwelet ha klevet! ¹⁶ Ha bremañ, perag dit dalea? Sav! Bez badezet ha gwelhet euz da behejou dre c’helver e Ano!’

¹⁷ Pa oan distroet da Jeruzalem, hag epad m’edon o pedi en Templ, ez eo degouezet ganin kaoud eur gourzav ha gweled (Jezuz) o lavared din: ¹⁸ ‘Hast affo ha kuita buan Jeruzalem, rag ne zegemerint ket da desteni diwar-va-fenn!’ ¹⁹ Ha me a lavar: ‘Aotrou! Gouzoud a reont e oan me o taoler er prizon hag o skourjeza dre ar zinagogou ar re a gred ennoc’h! ²⁰ Ha pa z’eo bet skuillet gwad Stefan, ho test-merzer, e oan va-unan war al lec’h, ken-asant ganto hag o tiwall o dillad d’ar re a oa ouz e laza!’ ²¹ Hag e lavar din: ‘Kee, rag me da gaso da bell, warzu ar Baganed’.”

²² Int-i a zelaou beteg ar c’homzou-ze. Hag e savont uhel o mouez da lavared: “**Dilam eur seurt den diwar an douar, rag ne dle ket chom beo!**” ²³ Peogwir e talhont da youhal, da vanna o mantilli, da strinka poultrenn en êr, ²⁴ e kemenn ar C’homandant e vefe kaset er c’hastell, en eur lavared d’e jahina gand skourjez, dezañ dond da c’houzoud diwar beseurt tamall e youhont warnañ evelse! ²⁵ Pa zeuont d’e starda gand lêrennou, e lavar Paol d’ar c’hantener a zo eno: “**Eun den, eur Romad ha c’hoaz di-varn, daoust hag aotreet eo deoc’h e skourjeza?**” ²⁶ Ouz e glevet, e kerz ar c’hantener daved ar C’homandant, da zisplega dezañ o lavared: “**Petra emaout o vond d’ober! Rag an den-ze a zo eur Romad!**” ²⁷ Davetañ e teu ar C’homandant

ha dezañ e lavar: **“Lavar din: daoust ha Romad out te ?”** Hag e lavar: **“Ya vad!”** ²⁸ Respont a ra ar C’homandant: **“Me am-eus prenet ar ‘Gêriadelez-ze’ gand eur bern arhant!”** Paol avad a lavar: **“Evidon-me avad, ganti end-eeun ez on ganet!”** ²⁹ Kerkent ez a diwar e dro ar re a dlee e jahina! Ar C’homandant ive a zo kroget aon ennañ, o c’houzoud ez eus anezañ eur Romad hag ez eo bet ouz e jadenna... ³⁰ En deiz war-lerc’h, o klask gouzoud difazi petra ’zo tamallet dezañ gand ar Juzevien, e laka e zichadenna, hag e kemenn boda ar Veleien-Vraz hag ar zanedrin a-bez: degas a ra Paol d’an traoñ hag e lakaad dirazo...

-23-

EVELSE E RANKEZ REI DIN TESTENI E ROM!

Yn 18,22
Mz 23,27

¹ En eur bara e zell war ar zanedrin, e lavar Paol: **“Gwazed, Breudeur! Gand eur goustiañs vad-oll am-eus stourmet evid Doue beteg hirio!”** ² Ar Beleg-Braz Ananiaz a gemenn d’ar re a zo en e gichenn skei war e c’henou. ³ Paol neuze a lavar dezañ: **“Doue a zo o vond da skei ganit, Moger-razet! Diazezet out evid va barn hervez al Lezenn, hag a-eneb al Lezenn e kemennez skei ganin!”** ⁴ Hag ar re a zo en e gichenn a lavar dezañ: **“Ha d’ar Beleg-Braz e teuez da grozal!”** ⁵ Ha Paol a lavar: **“Ne ouien ket, Breudeur, e oa-eñ ar Beleg-Braz! Rag skrivet eo: ‘A-eneb Rener da Bobl ne wall-gomzi ket!’”**.

Mz 22,23

⁶ O c’houzoud ez eus eno eur rumm Sadukeiz hag eur rumm Farizeiz, e youc’h Paol er zanedrin: **“Breudeur! Me a zo eur Farizead, mab da Farizeiz! Diwar-benn esperañs hag adsao ar re varo ez on me barnet!”** ⁷ A-vec’h lavaret gantañ kement-se, e sav dispac’h etre ar Farizeiz hag ar Zadukeiz, ha rannet eo an dud: ⁸ ar Zadukeiz a lavar n’eus nag adsao nag êl na spered ebed! Ar Farizeiz avad a anzav an eil hag egile. ⁹ Ha setu youhadeg vraz! Sevel a ra Skribed, euz lodenn ar Farizeiz, da stourm o lavared: **“Ne gavom netra fall en dén-ze! Ha m’e-nije eur spered komzet dezañ, pe eun êl ?”**.

¹⁰ Deuet braz an dispac’h, e teu aon d’ar C’homandant e vefe divempret Paol ganto! Kemenn a ra d’ar zoudarded diskenn d’e ziframma euz o zouez ha d’e gas d’ar c’hastell. ¹¹ En nozvez war-lerc’h, en e zav dirazañ, e lavar dezañ an Aotrou: **“Dalc’h mad! Rag evel m’az-peus roet testeni diwar va fenn e Jeruzalem, evelse e rankez rei din testeni e Rom ive!”**

1 Tes 2,14

Yn 16,2...

¹² Deuet an deiz, reizet ganto eur gorvigell, e tou ar Juzevien dindan boan a varo, ne zebrint na ne evint ken n’o-do lazet Paol! ¹³ Ouspenn daou-ugent a zo euz ar re o-deus aozet an irienn-ze! ¹⁴ Mond a reont daved ar Veleien-Vraz hag ar Gozidi, o lavared: **“A valloz on-eus ni en em vallozet o lavared ne dañvom ni netra ken n’or-bo lazet Paol!”** ¹⁵ Bremañ eta, deoc’h displega d’ar C’homandant, a-unan gand ar zanedrin, ma tis-

kenno Paol davedoc'h evel pa vefec'h oc'h enklask spisoc'h an traou diwar e benn! Ni avad, araog dezañ tostaad, ni a zo barreg d'e laza!"

¹⁶ Mab c'hoar Paol avad a glev ano euz an trapped! Mond a ra d'ar c'hastell hag eet e-barz, e ro kelou da Baol! ¹⁷ Paol a c'halv unan euz ar c'hantenerien hag e lavar: **"Kas ar paotr yaouank-mañ daved ar C'homandant, rag bez' e-neus eun dra da zegemenn dezañ!"** ¹⁸ Kemer a ra ar paotr hag e gas gantañ daved ar C'homandant en eur lavared: **"Paol, ar prizoniad, e-neus va galvet ha goulennet diganin kas ar paotr yaouank-mañ davedout: eun dra e-neus da lavared dit!"** ¹⁹ Ar c'homandant a gemer e zorn, hag eet a-gostez, e c'houlenn: **"Petra az-peus da zegemenn din?"** ²⁰ Hag e lavar: **"Ar Juzevien o-deus reizet goulenn diganin diskenn Paol warhoaz d'ar zanedrin, evel pa vefent oc'h enklask spisoc'h tra pe dra diwar e benn!"** ²¹ Te eta, mir da fizioud enno, rag oc'h antell dezañ rouejou ez eus en o zouez ouspenn daou-ugent gwaz! Ar re-mañ o-deus en em vallozet o-unan ma ne jomont ket heb debri hag heb eva ken n'o-do e lazet! Ha prest int, o c'hortoz da bromesa!" ²² Ar C'homandant a gas ar paotr kuit, en eur gemenn dezañ: **"Na lavar da zén az-peus diskuliet din kement-se!"**

²³ Gelver a ra davetañ daou euz e gantenerien, ha dezo e lavar: **"Dalhit prest daou-c'hant soudard da vond beteg Sezare,** ²⁴ **hag ive deg-marheg-ha-tri-ugent, ha daou-c'hant goafeg, adaleg trede eur an noz!"** ²⁵ **Ha dalhit prest loened da lakaad Paol warno, evid e gas beo ha yac'h daved ar Gouarnour Feliz!"** ²⁶ Skriva a ra eul lizer, dezañ an doare-mañ: **"Klaodiuз Liziaz d'ar Gouarnour, an aotrou Feliz, Salud!"** ²⁷ **An dén-mañ, paket gand ar Juzevien, ha war-nes beza lazet ganto, o tegouezoud gand va zoudarded, am-eus me diframmet, p'am-eus klevet ez eus anezañ eur Romad!"** ²⁸ **C'hoant din da anavezoud mad ar rebech a damallont dezañ, em-eus e ziskennet d'ar zanedrin!"** ²⁹ **Ha kavet am-eus eo eñ tamallet diwar-benn kudennou o Lezenn, med en o zamall, n'eus netra din a varo pe a jadennou!"** ³⁰ **Diskuliet eo bet din eun taol-fall savet a-eneb an dén: raktal am-eus e gaset dit, en eur gemenn ive d'e damallerien mond dirazout-te da lavared e abadenn! Salud dit!"**

³¹ Ar zoudarded eta, hervez ar gourhemenn roet dezo, a gemer Paol evid e gas epad an noz da Antipatriz. ³² En deiz war-lerc'h, e lezont ar varheien da vond gantañ pelloc'h, hag int-i a zistro d'ar c'hastell. ³³ Degouezet e Sezare, e ro ar varheien al Lizer d'ar Gouarnour, hag e tegasont ive Paol dirazañ. ³⁴ Hag eñ da lenn, ha da c'houlenn euz peseurt bro eo ginidig. Klevet gantañ eo eñ euz ar Silisi, ³⁵ e lavar: **"Da zelaou a rin, pa vezo ive amañ da damallerien!"** Kemenn a ra e vefe diwallet e Pretordi Herodez...

NE C'HELLONT KET DELHER AR PEZ A DAMALLONT DIN!

¹ Pemp devez goude-ze e tiskenn Ananiaz, ar Beleg-Braz, gand eun nebeud Kozidi, hag eur breutaer, eun Tertulluz bennag! Mond a reont dirag ar Gouarnour a-eneb Paol! ² Eur wech galvet hemañ, e stag Tertulluz d'e damall o lavared: **“Peoc’h vraz a zo deom-ni a drugare dit, ha gwella-du-riou a zo deuet d’or Pobl a drugare d’az preder!** ³ E peb amzer hag e peb lec’h, Aotrou Feliz, e tegemerom-ni kement-se gand an oll anaoudegez vad! ⁴ Evid miroud da derri dit da benn, pelloc’h amzer, e c’houlennan stard diganit or selaou ez-verr, hervez da habaster! ⁵ Rag kaoud a ra deom eo ar gwaz-mañ eur vosenn, eur fourgaser dispahou e-touez an oll Juzevien, hag ive penn-rener rann-gredenn an Nazareiz. ⁶ Tentet e-neus zoken dizakra an Templ, ha ni on-eus paket krog ennañ! ⁽⁷⁾⁸ Dre e c’houlennata e c’helli da-unan anavezoud digantañ an oll draou-ze a damallom dezañ!” ⁹ Asanti gantañ a ra ive ar Juzevien, o lavared: **“Evelse ema an traou!”**

Ob 16,20...
Lk 23,2
Mz 2,23

¹⁰ Ha Paol a respont, pa zeu ar Gouarnour d’ober dezañ sin da gomz: **“En eur c’houzoud emaut-te abaoe kalz bloaveziou barner war ar Bobl-mañ, ez an me a galon vad d’en em zidamall!** ¹¹ Gouzoud a c’heller n’eus ket din ouspenn daouzeg devez abaoe ma z’on savet da adori e Jeruzalem! ¹² N’o-deus ket int-i va c’havet nag o tivizoud en Templ gand unan bennag, nag o ken-voda tud er zinagogou pe e Kêr! ¹³ Ne c’hellont ket anataad dit ar pezh a damallont din-me bremañ!”

¹⁴ **“An dra-mañ avad a anzavan dit: hervez an Hent (anezañ e ra ar re-ze eur ‘rann-gredenn’!), evelse e servichan Doue on Tadou, dre gredi e kement a zo skrivet dre al Lezenn, hag er Brofeded,** ¹⁵ en eur esperoud e Doue ar pezh a c’hortoz ive ar re-mañ: **Adsao a zo da veza evid an dud just hag ive evid ar re zireiz!** ¹⁶ Evid-se e klaskan, me ive, kaoud atao eur goustiañs direbech dirag Doue hag an dud!”

Mz 5,15
Yn 5,29
1 Kor 11

¹⁷ **“Goude kalz bloaveziou ez on deuet da zegas aluzennou d’am Fobl, hag ive da ginnig provadou.** ¹⁸ Pa oan me wardro ar re-mañ, o-deus int-i va c’havet en Templ: glaneet e oan, med ne oan ket e-touez tud, nag e-kreiz tousmac’h! ¹⁹ Eur re bennag euz Juzevien an Azi o-defe ranket ive dond dirazout, ha va damall, m’o-deus tra pe dra a-eneb din! ²⁰ Pe d’ar re-mañ o-unan lavared peseurt torfed e kavent ennon pa oan dirazo er zanedrin, ²¹ pe lavared diwar-benn ar Gomz-ze am-eus me youhet pa oan em zav en o zouez: **‘E-keñver Adsao ar re varo ez on-me barnet hirio dirazoc’h c’hwi!’”**

²² Feliz o c’has kuit, rag gouzoud a ra resiz pep tra diwar-benn an Hent, hag e lavar: **“Pa ziskenno ar C’homandant Liziaz e varnin ar pezh a zell ouzoc’h c’hwi!”** ²³ Kemenn a ra d’ar c’hantener e zelher ereet, rei dezañ peoc’h, heb miroud hini euz e dud d’e zervicha!

Mk 6,17...
Mz 25,31...

²⁴ Eun nebeud deveziou goude-ze, e teu Feliz, ha Druzilla e wreg, eur Juzevez: ober a ra kerhed Paol evid e zelaou diwar-benn ar feiz e Jezuz Krist! ²⁵ Pa zeu-eñ da zivizoud war ar justiz, ar reizadurez hag ar varn-azeu, e krog aon e Feliz, hag e sav e vouez da lavared: **“Evid an dro-mañ, kee kuit! Pa gavin me tro, e lakin da c’helver adarre!”** ²⁶ Ha da heul e-neus ive fiziañs e vefe roet arhant dezañ gand Paol! Ablamour da-ze e laka e gerhed aliesoc’h evid divizoud gantañ...

²⁷ Peur-dremenet daou vloaz, e teu Porziuz Festuz e-lec’h Feliz. O klask gounid gras ar Juzevien, Feliz a lez Paol en ereou...

-25-

DIRAG SEZAR EZ I!

¹ Degouezet er vro, e sav Festuz, a-benn tri devez goude-ze, euz Sezare da Jeruzalem. ² Ar Veleien-Vraz hag Uhelidi ar Juzevien a zispleg dezañ o zamallou a-eneb Paol, ³ hag e aspedi a reont o c’houlenn a-eneptañ ar c’hras e vefe kaset da Jeruzalem: emaint oc’h aozu eun trapped evid e laza en hent... ⁴ Festuz avad a respont ez eo Paol prizoniet e Sezare, hag ez aio e-unan kuit dizale... ⁵ **“Ar re ahanoc’h a zo eta gouest, emezañ, dezo diskenn ganin, ha ma z’eus en dén-ze eun dra bennag dizeread, dezo e damall!”** ⁶ Chomet ganto eiz pe zeg devez hepkén, e tiskenn da Zezare. En deiz war-lerc’h, deuet da azeza war e gador-varn, e kemenn degas Paol.

⁷ Pa zegouez, e teu endro dezañ ar Juzevien diskennet euz Jeruzalem, o tougen a-eneptañ tamallou niveruz ha grevuz, na c’hellont ket difenn! ⁸ Rag Paol en em zidamall: **“Nag a-eneb Lezenn ar Juzevien, nag a-eneb an Templ, nag a-eneb Sezar n’am-eus me faziet!”** ⁹ O klask ober eur c’hras d’ar Juzevien, e respont Festuz da Baol o lavared: **“Ha c’hoant az-peus da zavel da Jeruzalem evid beza barnet dirazon-me war gement-se?”** ¹⁰ Paol avad a lavar: **“Dirag kador-varn Sezar emeon-me! Eno e rankan beza barnet! N’am-eus me gwallet e netra ar Juzevien, evel ma ouzout-te kaerroc’h da-unan!”** ¹¹ Ma z’on eta direiz, ha m’am-eus greet tra pe dra din a varo, ne dehan ket diouz ar maro! Med ma ne jom netra euz an traou a damall din ar re-ze, ne c’hell dén va rei etre o daouarn dre c’hras! **Da Zesar e ran-me galv!”** ¹² Neuze, goude beza ken-divizet gand e Guzul, e respont Festuz: **“Da Zesar as-peus greet galv! Dirag Sezar ez i-te!”**

¹³ Eun nebeud deveziou goude-ze, e tegouez e Sezare ar roue Agripa ha Bereniz, da zaludi Festuz. ¹⁴ Pa jomont eno kalz deveziou, e tiskouez Festuz d’ar roue ar pezh a zell ouz Paol, o lavared: **“Bez’ ez eus amañ eur gwaz, lezet ereet gand Feliz. Pa z’on me eet da Jeruzalem, o-deus ar Veleien-Vraz ha Kozidi ar Juzevien displeget din an traou diwar-e-benn, en eur c’houlenn eur barn a-eneptañ!”** ¹⁶ Dezo em-eus respontet:

“N’eo ket kustum d’ar Romiz rei eun dén dre c’hras, araog d’an tamallad kaoud dirazañ e damallerien, hag araog dezañ ive kaoud tro da zislavared an tamallou!”¹⁷ Deuet int eta amañ d’am heul, ha me, heb ober dale, en deiz war-lerc’h, azezet war va gador-varn, me am-eus kemennet kerhed ar gwaz.¹⁸ En o zav endro dezañ, n’o-deus an damallerien degaset gwall-damall ebed euz ar re a zoñje-din:¹⁹ dael diwar-benn o c’hredennou dezo o-deus gantañ, hag ive diwar-benn eur Jezuz bennag, a zo marvet, ha Paol a lavar ez eo beo!²⁰ Tapet nehet oc’h enklask war an traou-ze, am-eus lavaret ha c’hoant e-noa da vond da Jeruzalem evid beza barnet eno diwar-benn kement-se!²¹ P’e-neus Paol greet galv da veza dalhet evid barnedigez Sezar, am-eus me neuze kemennet e zelher beteg din e gas da Zesar”.²² Agripa avad a lavar da Festuz: “Me va-unan ive a garfe kleved an dén-ze!” “Warhoaz, emezañ, e c’helli e gleved!”

Lk 23,8

Mz 10,18

Yn 18,37

²³ En deiz war-lerc’h eta e teu Agripa ha Bereniz gand eur bern stroñs: mond a reont d’al Lez-Varn gand Komandanted ha Pennou-Braz kêr! Hag e kemenn Festuz ma vefe degaset Paol.²⁴ Hag e lavar Festuz: “Roue Agripa! Ha c’hwi oll, gwazed bodet amañ! Gweled a rit an den-mañ: diwar e benn eo deuet davedon Pobl ar Juzevien a-bez, e Jeruzalem ha beteg amañ, en eur youhal ne dle ket an den-ze chom pelloc’h beo!²⁵ Deuet on me avad da weled n’e-neus eñ greet netra dîn a varo! Greet gantañ galv da Zesar, em-eus me barnet e gas davetañ.²⁶ Diwar e benn avad, n’am-eus netra zur da skriva d’an aotrou! Ablamour da-ze, am-eus e zegaset dirazoc’h, ha dreist-oll dirazout-te, Roue Agripa, din gouzoud petra skriva, diwar an enklask greet amañ!²⁷ Rag kaoud a ra din ez eo diskiant kas eur prizoniad heb merka ive an tamallou douget a-eneptañ!”

-26-

NE GOLLAN KET VA FENN, AOTROU FESTUZ!

¹ Agripa avad a lavar da Baol: “Aotreet eo dit komz evidout da-unan!” Paol neuze, astennet gantañ e zaouarn, en em zidamall o lavared:² “Diwar-benn an oll draou tamallet din gand ar Juzevien, Roue Agripa, en em gavan eüruz da zond dirazout-te hirio d’en em zidamall,³ dreist-oll pa z’out-te anaoudeg euz an oll Gustumou ha rendaelou e-touez ar Juzevien... Rag-se, da bedi a ran d’am zelaou gand habaster:

⁴ Va buez eta adal va yaouankiz, an hini am-eus renet adal he digor e-kreiz va Fobl hag e Jeruzalem, hec’h anaoud a ra an oll Juzevien.⁵ Va anaoud a reont adaleg ar penn-kenta, - ma fell dezo rei testen! - da veza bevet hervez ar strisa rummad euz ar Grederien, e-giz eur Farizead!⁶ Ha bremañ, ablamour d’an esperañs er Bromesa greet

Fil 3,5...

gand Doue d'on Tadou, emañ da veza barnet! ⁷ On Daouzeg Meuriad, stag ma z'int da veuli Doue noz-deiz, a zo o c'hortoz ar Bromesa da veza sevenet! En abeg d'an esperañs-ze, ô Roue, ez on me tamallet gand ar Juzevien! ⁸ Ha perag e varner en ho touez na c'heller ket kredi e teufe Doue da adsevel re varo? ⁹ Ha me eta, me a gave din va-unan e oa red din ober kalz traou a-eneb Ano Jezuz-an-'Nazaread'?! ¹⁰ Hag evelse am-eus greet e Jeruzalem: kalz a dud santel am-eus stlapet er prizon, goude beza degemeret aotre digand ar Veleien-Vraz! Ha pa vezent da gas d'ar maro, am-eus degaset va mouez! ¹¹ Dre an oll zinagogou, meur a dro, ouz o c'hastiza, dezo am-eus greet blasfemi! Ha me, muioc'h-mui penn-follet, am-eus o wallgaset beteg ar c'hêriou diavêz zoken...

1 Kor 15,12

Ob 9,1...
Ob 22,3...Ob 9,1...
Ob 22,1...Iz 42,7
Yn 8,12
Kol 1,12

¹² Evelse, en eur vond da Zamaz, gand galloud hag aotre ar Veleien-Vraz, ¹³ da greisteiz, war an hent am-eus gwelet, ô Roue, o tis-kenn euz an Neñv, eur sklêrijenn dreist sked an heol o skedi warnon ha war ar re a gerze ganin. ¹⁴ Kouezet om-ni oll d'an douar, ha me am-eus klevet eur vouez o lavared din er yez hebreeg: 'Saol! Saol! Perag am heskinez? Kaled eo dit ourzal ouz ar broud!' ¹⁵ Me avad a lavar: 'Piou oc'h-c'hwî, Aotrou? An Aotrou a lavar: 'Me-eo-a-zo Jezuz, an Hini a heskinez! ¹⁶ Med sav! Ha chom sonn war da dreid! Rag evid kement-mañ e paran dirazout: evid ober ahanout eur zervicher diouz va dorn, hag eun test euz ar pezh a welez ahanon pe euz ar pezh a weli pa barin dirazout! ¹⁷ Da ziframma a rin a-dre zaouarn ar Bobl hag a-dre re ar Baganed! Da gas a rin daveto, ¹⁸ da zigeri o daoulagad, dezo distrei diouz an Deñvalijenn warzu ar Sklêrijenn, ha diouz galloud Satan warzu Doue, evid degemer pardon ar pehejou, ha kaoud lod e-touez an dud santelleet dre ar feiz ennon-me!'

Gal 1,15

Lk 3,8...

Lk 24,44...

2 Tim 1,12

1 Kor 15,20

¹⁹ Abaoe neuze, roue Agripa, n'on me ket bet dizenet ouz ar weledi-gez neñvel! ²⁰ Med d'an dud a zo e Damaz da genta, hag ive e Jeruzalem hag er Jude a-bez, ha d'ar Baganed, am-eus me kemennet distrei, ha trei warzu Doue oc'h ober oberou deread ouz an Distro! ²¹ Ablamour da-ze o-deus ar Juzevien va faketa en Templ, en eur glask va laza! ²² Gand ar skoazell eta a zeu din digand Doue, beteg an deiz a hirio e talhan da destenia d'an oll, bian ha braz, heb lavared netra estreged ar pezh o-deus ar Brofeded ha Moizez lavaret beza war-nes degouezoud, ²³ da lavared eo: ar Mesiaz e-nefe da c'houzañv poaniou, hag Eñ, ar C'henta euz Adsao ar re varo, a dle embann ar Sklêrijenn d'ar Bobl Zantel ha d'ar Baganed!"

Yn 18,17

²⁴ Displeget gantañ kement-se evid en em zidamall, e lavar dezañ Festuz a vouez kreñv: "Koll a rez da benn, Paol! Da zeskadurez vraz a ra dit koll da benn!" ²⁵ Ha Paol avad: "Ne gollan ket va fenn, Aotrou Festuz, emezañ, med Komzou a wirionez hag a reiz a zisklerian-me! ²⁶ Rag gouzoud mad a ra an traou-ze ar Roue emañ-me o komz dezañ gand hardisegez! Ne zoñjan tamm ebed e vefe dianav dezañ eun draig bennag euz kement-se, rag n'eo ket en eur c'horn eo c'hoarvezet kement-se! ²⁷ Daoust ha kredi a rez er Brofeded, Roue Agripa ? Me a oar e kredez!" ²⁸ Hag Agripa da Baol: "E berr amzer am c'hounevez d'en

em ober kristen ?” ²⁹ Ha Paol neuze: **“Goulennet am-eus digand Doue, n’eo ket hepkén evidout, med evid an oll re a zelaou hirio, e teufec’h da veza, e berr amzer pe e hir amzer, heñvel ouzin-me, heb ar chadennou-mañ avad!”**

³⁰ Sevel a ra ar Roue, hag ive ar C’homandant, Bereniz hag an oll re a oa azezet ganto. ³¹ Eet pelloc’h, e tivizont etrezo o lavared: **“N’e-neus an den-ze greet netra din a varo pe a ereou!”** ³² Agripa avad a lavar da Festuz: **“An den-ze a c’hellfe beza laoskeet, ma n’e-nefe ket greet galv da Zezar!”**

-27-

ÖBER DEOM MORDEI D’AN ITALI

¹ Eur wech divizet ganto ober deom mordei d’an Itali, e lakont Paol ha prizonidi all etre daouarn eur c’hantener anvet Juliuz, euz ar gohortenn ‘Aogusta’. ² Sevel a reom war eul lestr euz Adramet, war-nes gouelia warzu aochou an Azi, ha ni mond en donvor. Ganeom ema Aristark, eur Makedoniad euz Tesalonig. ³ D’an deiz war-lerc’h e tiskennom e Sidon, ha Juliuz a ra brao da Baol o rei dezañ aotre da vond daved e vignoned da gaoud skoazell diganto. ⁴ Ahano ez eom en donvor hag e tremenom dindan Chipr, rag an aveliyou a zo kontrol. ⁵ Treuzi a reom ar mor dirag ar Silisi hag ar Pamfili, hag e tiskennom e Mira, er Mizi. ⁶ Eno e kav ar c’hantener eul lestr euz Aleksandri o c’houelia warzu an Itali, hag e ra deom sevel warni.

Mz 8,23...
2 Kor 11,25

⁷ Epad kalz deveziou, ez eom goustadig, ha gand poan ec’h erruom dirag Knid. Pa vir ouzom an avel da dostaad, e vordeom dindan Kreta, dirag Salmon. ⁸ Gand poan ez eom a-hed dezi, hag e tegouezom en eul lec’h anvet ‘Porziou-kaer’: tost dezañ ema kêr Lasaia. ⁹ Kalz amzer a zo tremenet, ha riskluz eo bremañ mordei, pa z’eo ive bremañ tremenet mare ar ‘yun’. ¹⁰ Ha Paol d’o alia o lavared: **“Gwazed, gweled mad a ran: ema ar vordeadenn war-nes beza dindan gwall-amzer ha gand koll vraz, n’eo ket hepkén evid al lestrad hag al lestr, med ive evid or buez ni!”** ¹¹ Ar c’hantener a zelaou ar sturier hag ar paramanter kentoc’h eged komzou Paol...

¹² Pa ne dal netra ar porz-mor-ze da c’hoañvi, e ro an darn vrasa kuzul da vordei ahano da weled ha degouezoud a c’hellint, da c’hoañvi, e Feniz, eur porz-mor euz Kreta, troet d’ar mervent ha d’ar gwalarn. ¹³ Pa gavont eur mouch-avel euz ar c’hreizteiz, e kav dezo beza barreg da zeveni o menoz: sevel a reont an eor ha mond a-hed aochou an enezenn Kreta! ¹⁴ A-barz nemeur avad, e tiroll euz an enezenn eur gorventenn anvet ‘Eurakilon’! ¹⁵ Al lestr a zo kaset gand an avel, heb gelloud delher penn dezi! O lezel da vond, ez om kaset ganti! ¹⁶ Redeg a reom dindan eun enezenn anvet ‘Kaoda’, med a-vec’h deom kaoud nerz da zegas ar vag! ¹⁷ Deuet d’e zével, e kemeront dafarou da gelhia al lestr gand eur fard. Rag aon da skei er Sirten, e laoskont an eor, hag ez eom, kaset gand an dour! ¹⁸ Deuet deom da veza gwall-hejet,

gand an avel diroll, en deiz war-lerc'h e taolom traou er mor, ¹⁹ ha d'an trede deiz, gand o daouarn o-unan, e stlapont kerdin al lestr! ²⁰ Pa ne zispak nag heol na stered abaoe meur a zevez, ha pa gendalc'h ar gorventenn, ha n'eo ket unan zister eo, diwar neuze eo lamet diganeom peb fiziañs da veza saveteet!

²¹ Deuet an dud da veza gwall-divouedet, e sav neuze Paol e-kreiz an dud, hag e lavar: **“O gwazed! Red e oa deoc'h va zelaou ha chom en enezenn Kreta da dehed diouz ar gorventenn hag ar c'holl-mañ! ²² Ha bremañ, ho pedi a ran da jom kaloneg! Ne vo kollet buez hini ebed ahanoc'h! Al lestr nemetken! ²³ Rag en noz-mañ, e-neus paret dirazon êl an Aotrou ez on me dezañ hag emañ o servicha, ²⁴ ha din e-neus lavaret: “N'az-pezh ket aon, Paol! Dirag Sezar e rankez mond, ha setu Doue o rei dit, dre c'hras, buez an oll re a zo o vordei ganit. ²⁵ Rag-se, bezit kaloneg, Gwazed! E Doue am-eus fiziañs e c'hoarvezo evel m'e-neus lavaret din. ²⁶ En eun enezenn bennag e rankom skei!”**

Ob 27,24

Ob 18,9...
Ob 19,21
Ob 23,11

²⁷ D'ar bevarzegved nozvez, pa z'om kaset er Mor Adriantel, wardro hanter-noz, ar vordeidi a gav dezo ez eus eun dachenn-zouar bennag o tostaad outo. ²⁸ Pa zondont, e kavont ugent gourhedad. Eet eun tammig pelloc'h, e sondont adarre, hag e kavont pemzeg gourhedad! ²⁹ Deuet dezo aon rag koueza en eun tu bennag war eun dachenn rehier, euz an diadrefiv e stlapont peder eor, en eur bedi an deiz da zond...

³⁰ Ar vordeidi avad a glask tehed diouz al lestr: emaint o tiskenn ar vag er mor war zigarez mond da zistenna ar peder eor euz an diaraog. ³¹ Paol avad a lavar d'ar c'hantener ha d'ar zoudarded: **“Ma ne jom ket ar re-ze war al lestr, ne c'helloc'h ket c'hwi beza saveteet!”** ³² Ar zoudarded a droc'h neuze kerdin ar vag hag he lez da goueza! ³³ Araog d'an deiz dond, e c'houlenn Paol digand an dud kemer boued, o lavared: **“Emaoc'h hirio oc'h echui ar pevarzegved devez deoc'h da c'hortoz, en eur jom divoued, heb kemer netra! ³⁴ Rag-se e c'houlennan diganeoc'h kemer boued, rag evid ho silvidigez eo! Rag ne vo ket kollet eur vlevenn euz penn hini ebed ahanoc'h!”** ³⁵ Diwar ar c'homzou-ze, e kemer eur varaenn en eur drugarekaad Doue, dirag an oll, he ranna a ra hag e stag da zebri! ³⁶ Deuet kalon d'an oll, o-unan e kemeront ive boued! ³⁷ Euz an oll dud a zo war al lestr ez eus daou c'hant c'hwezeg-ha-tri ugent! ³⁸ Goude dezo beza debret, e skañvaont al lestr o taoler ar gwiniz er mor...

Mz 10,30

Yn 6,11
Lk 22,19

³⁹ Deuet an deiz, ne anavezont ket an enezenn, med en eur pleg-mor, e kav dezo ez eus trêz! ⁴⁰ An eoriou a zistagont hag e lezont da vond er mor. Distarda a reont ereou ar sturiou ha sevel ar mizan-korneg d'an avel, hag e klaskont skei war an aod. ⁴¹ Kouezet avad en eun drêzenn etre diou revorenn*, e skoont al lestr! Ar penn-araog, sanket en trêz, a jom dilusk! An aroz* avad a zo dismantret gand nerz an tonnou!

⁴² Menoz ar zoudarded a zo da laza ar brizonidi, gand aon na dehfe unan bennag dre neuñvi... ⁴³ Ar c'hantener avad, c'hoant dezañ da zavetei Paol, a vir outo da zeveni o menoz! Kemenn a ra: d'ar re a c'hell neuñvi,

Ob 12,19
Ob 16,27-28

*Revorenn: gwazienn-zour war an aot. *Aroz: penn-araog eur vag.

en em daoler er mor da genta ha mond d'an douar! ⁴⁴ D'ar re all, mond lod war bleñch, lod all war tra pe dra euz la lestr! Hag evelse en em gav an oll, saveteet, d'an douar...

-28-

E ROM EC'H EMBANN ROUANTELEZ DOUE!...

¹ Eur wech saveteet, neuze e klevom ez eo an Enezenn galvet Malt! ² Ar Varbared o-deus evidom eur vadelez digustum! Ober a reont eun tantad-tan hag on degemer oll e-kichenn, en abeg d'ar glao a gouez ha d'ar yenienn!
2 Kor 11,27 ³ Paol a zastum eur bern keuneud hag hel laka war an tan; gand an dommder, e teu eun naer er-mêz hag e krog en e zorn! ⁴ Pa wel ar Varbared al loen kriz a-ispill ouz e zorn, e lavaront etrezo: **“A dra-zur, ez eus eur muntre euz an den-ze, rag goude dezañ beza saveteet euz ar mor, ar Justiz n’e lez ket da veva!”** ⁵ Eñ avad a hej an naer en tan, ha ne zegouez droug ebed gantañ! ⁶ Emaint ouz e c’hortoz da goeñvi pe da goueza maro-mig! Goude gortoz pell-amzer, e welont na zegouez droug ebed gantañ! Distroet diwar o meno, e lavaront ez eus anezañ eun doue!

Mk 16,18
Lk 10,19

⁷ War-dro al lec’h-ze, ez eus douarou da rener an enezenn, anvet Publiuz; hemañ e-neus on degemeret hag ostizet a-greiz kalon epad tri devez.
Lk 4,10
Lk 10,9
1 Tim 4,14 ⁸ Tad Publiuz avad a zo neuze war e wele, dalhet gand terzienn ha red-korv. Davetañ ez a Paol; en eur bedi ec’h astenn warnañ e zaouarn hag e ro dezañ ar pare. ⁹ Diwar-ze, e teu davetañ ar re oll, en enezenn, o-deus kleñvejou ha pareet e vezont! ¹⁰ On enori a reont gand kalz enoriou, ha pa zavom war al lestr, e roont deom traou evid on ezommou...

¹¹ Tri devez goude-ze e vordeom war eul lestr Aleksandriad: goañvet e-neus en enezenn, hag ardamezet eo gand ar ‘Gevelled’. ¹² Diskenn a reom da Zirakuz, hag e chomom eno tri devez. ¹³ Ahano, o vond a-hed an aochou, ec’h erruom e Rejio. Goude eun devez hepkén, e sav avel-houziz, hag en eur ober daou zezev e tegouezom e Pouzol. ¹⁴ Eno e kavom Breudeur hag ez om pedet da jom ganto eiz devez. Hag evelse ez om eet warzu Rom.

HAG E KERZOM WARZU ROM...

¹⁵ Ahano e klev ar Vreudeur ano diwar or penn! Hag e teuont d’on diambroug beteg forum Apiuz hag an Teir-Tavarn! Paol, ouz o gweled, a drugareka Doue hag e teu dezañ nerz-kalon! ¹⁶ Pa zegouezom e Rom, ez eo aotreet gand Paol da veva en e di gand ar zoudard a ra gward warnañ!

¹⁷ Tri devez goude-ze, e c’halv davetañ an dud uhella a-douez ar Juzevien. P’emaint bodet, e lavar dezo: **“Gwazed! Breudeur! N’am-eus me greet netra a-eneb ar Bobl, a-eneb Kustumou on Tadou! Ereet abaoe Jeruzalem, ez on bet lakeet etre daouarn ar Romaned!”** ¹⁸ Ar re-mañ, goude enklask diwar va fenn, a felle dezo va laoskaad, pa ne gavent

ennon tamall ebed dîn a varo! ¹⁹ Peogwir e talhe ar Juzevien da zislavared, am-eus ranket ober galv da Zezar, med n'eo ket evel p'am-bije eun dra bennag da rebech d'am Fobl! ²⁰ Ablamour da-ze eta, am eus goulennet ho kweled, ha komz ganeoc'h, rag ablamour da esperañs Izrael ez on me ereet gand ar chadennou-mañ!" ²¹ Int-i avad a lavar dezañ: "Evidomni, n'on-eus ket degemeret lizeri diwar da benn euz ar Jude! Ha n'eus Breur ebed degouezet amañ hag e-nefe degemennet pe lavaret eun dra bennag a fall diwar da benn! ²² Ni a garfe avad klevet ganit da zoñj rag evid an 'Dreuz-Kredenn-ze', anad eo deom e vez hi dislavaret e peb lec'h!"

Lk 4,44

²³ D'an deiz merket ganto, e teuont niverusoc'h davetañ en e ostalери... Displega a ra dezo ha testenia Rouantelez Doue, en eur glask o gounid, e keñver Jezuz, dre Lezenn Voizez hag ar Brofeded, ha se a veure da noz!... ²⁴ Lod a zo gounezet gand e lavarou, lod all a ziskred! ²⁵ Pa z'int dizunvouez, ez int lezet da vond kuit, ha ne lavar Paol nemed eur gér: "**Kaer e-neus ar Spered Santel komzet dre ar profed Izai d'on Tadou,** ²⁶ o lavared:

Ob 1,3...
Ob 2,23...

"Kee daved ar Bobl-ze, ha lavar:

"Kleved a reoc'h, hag e reoc'h! Ha n'intentoch ket!

"Selled a reoc'h hag e reoc'h! Ha ne weloc'h ket!

²⁷ *"Rag mouget eo kalon ar Bobl-mañ!*

"Ha pounner-gleo eo o diskouarn,

"Ha serret o-deus o daoulagad,

"Gand aon da weled gand o daoulagad,

"Ha da gleved gand o diskouarn,

"Ha da intent gand o c'halon ha da zistrei!...

"Ha Me o fareo..."

²⁸ "**Ra vezo deoc'h anad: d'ar Baganed eo kaset Silvidigez Doue! Hag int-i a zelaouo!**" ²⁹ Diwar ar C'homzou-ze, ez a ar Juzevien kuit, en eur rendael etrezo...

Lk 19, 12...

³⁰ Epad daou vloaz, penn-da-benn, e chom Paol en ostalери feurmet gantañ e-unan. Degemer a ra kement hini a zeu davetañ! ³¹ Embann a ra Rouantelez Doue ha kelenn pep tra diwar-benn Jezuz Krist, an Aotrou, gand an oll hardisegez, heb skoill ebed!

Lizeri an Ebestel

Lizeri an Ebestel henn diskouez frêz deom: an nehamant gand an oll Ilizou a zo evito eur bec'h pemdezieg, rag eme Paol: “Piou a gouez klañv, hebbin-me koueza klañv ? Piou a vez skoillet, hebbin-me dond da zevi ?” (2 Kor 11, 29)

Meur a wech e skrivont evid miroud ouz ar Gristenien da vond war-dreñv, da zistrei d'ar c'hustumou juzeo pe da lidou an idolou pagan (Ga 1, 6) Evel ma lavare Jezuz: “An den a zo oc'h eva gwin koz, ne fell ket dezañ hini nevez, rag lavared a ra: ‘An hini koz eo a zo c’hwek!’”... (Lk 5, 39)

Aliez avad e skrivont evid frealzi ha kennerza an Diskibien en o zrubuillou, ha dreist-oll da boent an heskinerez ; dezo beza kaloneg ha kemer skwer diwar an Ebestel o-unan, ha dreist-oll diwar Jezuz an Aotrou: Ennañ eo dezo lakaad o fiziañs, evid kaoud perz en e Vuez hag en e Adsao (2 Ko 1 ; 1 Kor 15).

Peurvuia e skrivont evid startaad an Diskibien en o feiz, evid displega dezo an Teñzoriou kuzet e Mister ar C'hrist, ma skedo war o zremm an anaoudegez o-deus euz gloar Doue a zo o skedi war zremm ar C'hrist (Ef 1 ; 3 ; Fil 2, 5 ; Kol 1, 5 ; Heb 1, 3).

N'eo ket awalc'h delher mad d'ar Feiz: red eo ive bale war roudou Jezuz, en eur 'ober ar wirionez er garantez', er garantez evid Doue hag evid an nesa, evid an dud reuzeudig dreist-oll ; bez' ez int skeudenn Jezuz e-kichenn pep hini ahanom (Ro 12 ; 1 Ko 14 ; 2 Ko 8). Siwaz! Had kaer an Aviel, a-vec'h hadet e kalon an den, a vez aliez tennet kuit gand an Droug-Spered, pe skotet gand an trubuill pe an heskinerez, pe vouget gand touellerez ar binvidigez pe gand an nehamant gand traou ar Bed (1 Ko 10, 1-13 ; 2 Ko 1, 1 ; Fil 3, 17-19). Red eo d'an Ebestel poania bepred ma vo kaerroc'h-kaerra douar ar c'halonou, dezo da zougen frouez founnuz, tregont, tri-ugent pe gant evid unan, evid gloar an Hader (Kol 2, 6).

“Peb Skrib desket war Rouantelez an Neñv, eme Jezuz, a zo heñvel ouz eur Penn-Tiegez a denn euz e Deñzor traou nevez ha traou koz!”

Dre o Lizeri, an Ebestel o-deus tennet evidom kalz traou skeduz ha presiuuz euz Teñzor an Aviel (Mz 13, 52).

Paol

An abostol Paol a zo ganet e kêr Darz, er Silisi (bremañ e Bro-Durki). Juzeo euz rummad Benjamin, savet eo bet en eun doare striz, hervez rumm ar Farizeiz, e doujañs Doue hag e doujañs al Lezenn juzeo. Evid dond da veza kelenner war al Lezenn, e teu da Jeruzalem, prest goude maro Jezuz, da studia e-harz treid Gamaliel, eur c'helenner brudet-braz d'ar poent-se.

Dre c'hred evid al Lezenn, e kemer perz e maro ar merzer Stefan, hag e stag da wall-gas ar Gristenien a gleiz hag a zehou... En eur vond da Gêr Zamaz evid o c'hastiza pe evid o zegas da Jeruzalem, wardro ar bloavez 36, e teu Jezuz d'en em ziskouez dezañ e-kreiz e c'hloar! Anani a zispleg dezañ en deiz war-lerc'h, menoz Doue en e geñver:

“Meur a wech e-neus Doue grêt dit gweled ar Just ha kleved e vouez euz e c'henou,

“Dit da veza test dirag an oll euz kement az-peus gwelet ha klevet!”
(Ob. 22, 14)

A-dra-zur e oa Paol eur spered lemm-kenañ! Med, evel ma lavar Jezuz da Bêr (Mz 16, 12), n'eo ket an natur-den eo a ro dezañ ar ouiziegezh speredel, med an Tad euz an Neñv! En abostol Paol ema da vad ar Spered Santel oc'h heñcha an Iliz warzu ar wirionezh penn-da-benn! Anavezoud a ree mad ar Skrituriou, ha bet e-neus meur a weledigezh: enno e-neus gwelet ha klevet traou dreist-lavar, ken uhel ma na c'hell den o displega (2 Kor 12, 4). Meuleudi da Zoue evid an donezon e-neus roet d'e Iliz dre Liziri an abostol Paol: **“Enno e sked kann gloar ar C'hrist a zo skeudenn Doue! Drezo e teu Doue da lugerni en or c'halon, ma skedo ar ouiziegezh euz gloar Doue war zremm ar C'hrist”** (2 Kor 4, 4).

Meuleudi da Zoue evid an oll Ilizou e-neus diazezet, kennerzet, ha sklêrijennet dre gomz pe dre skrid...

Meuleudi da Zoue evid ar skwer a c'hell pep kristen kavoud en e vuez. Da bep hini ahanom hirio e lavar ar pezh a lavare d'e ziskibien gwechall:

“Kemerit skwer diwarnon, evel ma kemeran-me skwer war ar C'hrist!” (I Kor 4, 16 ; 11, 8 ; Fil 3, 17).

Al lizer da Romiz

Rom 1, 1-17. El lizer skrivet gand an Abostol da Romiz, e kavom evid gwir “an Aviel hervez sant Paol”, Kelou-Mad or Zalver Jezuz, resevet gantañ digand Doue e-unan! Pa ’z eo bet dibabet da embann an Aviel d’ar Baganed, e-neus Paol mall braz d’henn ober e kêr Rom, Kêr an Impalaer, Kêr-benn ar béd d’ar poent-se! **“Siwaz din, emezañ, ma ne embannan ket an Aviel!”**

Rom 1,17 - 3,20. Ya! Bez’ema ar Baganed dindan kounnar Doue! N’o-deus ket anavezet, nag adoret an Doue gwirion! O servicha an idolou, ez int deuet da zizenori o c’horvou e diroll o c’hoantegeziou fall...

Ar Juzevien avad a gav dezo beza just dirag Doue, o seveni oberou o Lezenn. Dindan kounnar Doue emaint ive, rag ne vez justizet dén dre oberou al Lezenn juzeo. Evel-se, evel ma lavar Doue en eur zalm:

“N’eus den just ebed! N’eus ket eun unan!” (Salm 14,1)

Rom 3,21 - 4. Dre c’hras, ha netra kén, e teu Doue da justiza ar Grederien, Paganed koulz ha Juzevien, pa zeuont da gredi en e Vab Jezuz, ar Zalver n’eus nemetañ! Ha pa zalc’h ar Juzevien da gonta war oberou o Lezenn, e tispieg Paol dezo eur bern testennou euz ar Skritur Zakr: Enno e lavar Doue e-unan ne vezer salvet nemed dre ar feiz, hag Abraham e-unan n’eo ket bet justizet dre e oberou, med diwar e feiz!

Rom 5. Evel-se, diwar e garantez foll, e-neus Doue diazezet d’an dud eur Zalver nerzuz, e Vab, marvet war ar groaz hag adsavet da veo. Dre zizenti, e ano an oll, e-neus Adam, an dén kenta, gwallet stad mab-dén! Euz peb dén e-neus greet eun dén peher ha marvel! Dre zenti beteg ar maro e-neus Jezuz uhelleet-dreist stad an dén, o rei dezañ, dre ar feiz hag ar zakramañchou, ar justiz gwirion hag ar vuez peurbaduz..

Rom 6. Penaoz ’ta e c’hell Jezuz rei deom e vadou speredel ? Antreet e famill an dud, ne ra nemed ‘unan’, nemed eur C’horv, gand an oll dud! Dre ar feiz hag ar vadeziant, en eun doare misteriuiz, e ro d’ar Grederien beza unanet d’e varo evid mervel d’ar pehed, ha beza unanet d’e Adsao, dezo da reseo Buez Doue en o c’halon! Ha pa varvint evid gwir, e vezint unanet da vad d’e Adsao en Neñv!

Rom 7 - 8. D’ar Juzevien, diwall da zistrei d’o Lezenn goz! Jezuz hepkén a c’hell rei deom an trec’h war ar Pehed hag ar maro, dre rei deom e Spered. Ar Spered eo a ro deom beva evel gwir vugale da Zoue, hag adsevel d’ar fin.

Rom 9 - 11. Paol a glev ar Juzevien o lavared: “N’eo ket Jezuz ar gwir Vesiaz: n’eo ket bet resevet gand Pobl Doue!” Lod Juzevien, eme Paol, o-deus e resevet! Ha pa ’z eo chomet al lodenn vrasa er-mêz, kalz êsoc’h eo bet d’ar Baganed dond e-barz... Ha n’eus digarez vad ebed d’ar Juzevien: Jezuz e-neus klasket o gounid! Med fidel d’e Bromesaou, ’benn ar fin e teüo Doue d’o zegas endro!

Rom 13 - 16. Da fin e Lizer, e ro Paol kenteliou d’e Gristenien. Dezo kaoud karantez etre Breudeur, karantez zokén evid an enebourien, gwir zoujañs evid ar Galloudegeziou, ha madelez evid ar Vreudeur a zo gwan o c’houstiañs...

Da Zoue, dre Jezuz-Krist, gloar da virviken!

Da Romiz I

-I- MALL GANIN PREZEG AN AVIEL E ROM.

¹ Paol, servicher Jezuz Krist, galvet da abostol, dibabet evid Aviel Doue: ² an Aviel-se e-noa prometet dre ar Brofeded, er Skrituriou Sakr, ³ diwar-benn e Vab; deuet eo Hemañ euz lignez David, hervez e natur-den; ⁴ ha diazezet eo bet da Vab-Doue leun a c'halloud, hervez Spered ar Zantelez, dre e Adsao a-douez ar re varo, Jezuz Krist, on Aotrou; ⁵ Drezañ on-eus degemeret gras hag abostolerez, evid degas tud a-douez ar Baganed da zentidigez ar feiz, evid gloar e Ano: ⁶ euz o zouez ez oc'h ive, c'hwi, galvet gand Jezuz Krist!... ⁷ Da oll dud vuia-karet Doue a zo e Rom, d'an dud galvet da veza santel, deoc'h gras ha peoc'h digand Doue an Tad ha digand Jezuz Krist on Aotrou!

⁸ Da genta avad e trugarekaan va Doue, dre Jezuz Krist, evidoc'h oll, pa z'eo brudet ho feiz dre ar Bed a-bez: ⁹ Doue, Eñ hag a zervichan a-greiz va spered o prezeg Aviel e Vab, a zo din test e ran heb ehan koun ahanoc'h em fedennou! ¹⁰ Goulenn a ran dond a-benn, hervez bolontez Doue, d'ober hent beteg ennoc'h; ¹¹ c'hoant am-eus d'ho kweled evid rei deoc'h eun donezon speredel bennag, deoc'h beza kennerzet, ¹² da lavared eo: din beza frealzet en ho touez dre ar feiz a zo ennom oll, hoc'h hini ha va hini!

¹³ Ne fell ket din, Breudeur, ho lezel heb gouzoud em-eus-me aliez klasket mond davedoc'h, -ha beteg-henn ez eo bet miret ouzin- ma vo din eun tamm frouez bennag en ho touez ive, evel ive e-touez ar Baganed all! ¹⁴ Rag d'ar C'hresianed hag ive d'ar Varbared, d'an dud fur hag ive d'an dud diskiant ez on-me dleour! ¹⁵ Evel-se em-eus mall da brezeg an Aviel deoc'h-c'hwi ive, a zo e Rom! ¹⁶ Rag n'am-eus ket méz gand an Aviel: eun Nerz a Zoue a zo anezañ evid rei silvidigez da gement-hini a gred, d'ar Juzeo da genta, hag ive d'ar Gresian, ¹⁷ rag ennañ eo diskuliet Justiz Doue euz ar feiz d'ar feiz, hervez m'eo skrivet: "*An den just dre ar feiz a vevo!*".

RAG DISKULIET EO KOUNNAR DOUE...

¹⁸ Rag diskuliet eo kounnar Doue euz lein an Neñv war beb dizoujañs ha war beb diroll* a-berz tud hag a zalc'h ar wirionez en diroll! ¹⁹ Rag enno eo sklêr kement a c'heller anavezoud euz Doue, rag henn disklêria a ra Doue dezo... ²⁰ Kement n'eo ket a-wél Ennañ a vez gwelet dre ar Bed krouet, meizet ma vez en e oberou: e c'halloud peurbadel hag e Zoueegez... ken ma z'eo an dud heb digarez ebed! ²¹ Rag, goude dezo anavezoud Doue, n'o-deus ket e veulet nag e drugarekeet evel Doue! Med eet int skañv en o divizou, ha teñvalleet eo o c'halon diskiant! ²² En eur lava-

* Direiz pe diroll.

red ez int fur, ez int deuet da veza diskiant! ²³ Troet o-deus Gloar an Doue divarvel en eur skeudenn heñvel ouz eun den marvel hag ouz laboused hag ouz loened pevar-droadeg hag ouz naered...

Yn 4,20... ²⁴ Setu perag e-neus Doue o lezet, diwar c'hoantegeziou o c'halon, d'an hudurnez beteg dizenori o c'horvou enno o-unan, ²⁵ int-i hag o-deus troket gwirionez Doue evid eur gaou, hag o-deus adoret ha servichet ar Grouadelez el lec'h ar C'hrouer, Eñ hag a zo meulet a-hed ar c'hantvejou! Amen!

Mz 10,15 ²⁶ Setu perag e-neus Doue o lezet d'o c'hoantegeziou mézuz: o merhed o-deus troket an darempred naturel evid an hini a-eneb natur! ²⁷ Evelse ive, ar wazed, dilezet ganto an darempred naturel gand ar vaouez, a zo bet entanet dre o zech fall an eil evid egile: gwazed gand gwazed o-deus greet an dra vézuz, hag ar gopr red evid o diroll o-deus degemeret enno o-unan!...

²⁸ Ha pa n'o-deus ket kavet mad delher da anaoudegez Doue, e-neus Doue o lezet d'o fenn fall, d'ober traou dizonest! ²⁹ Bez'ez int leun a beb direiz, a zrougiez, a c'hoantegez, a fallentez, leun a avi, a vuntrezez, a rendael, a gorvigell, a fallagriez; glabouserien, ³⁰ tamallerien, faeüz ouz Doue, lorheg, dicheg, fougeüz, ijinerien taoliou-fall, dizent ouz o zud, ³¹ diskiant, disleal, digalon, didruez... ³² Goude dezo anavezoud barn Doue: 'Ar re a ra seurt traou a zo din a varo!', int-i n'o reont ket hepkén, med asanti a reont zoken gand ar re a ra kemend-all!...

-2-

AN AMDROC'H EO HINI AR GALON DRE AR SPERED!

Mz 7,2... ¹ Rag-se, n'eus digarez ebed dit, ô den, te hag a varn, piou bennag a zo ahanout! Rag o varn egile, en em varnez da-unan, pa rez kemend-all, te hag a varn! ² Goud a ouzom e vez barn Doue hervez ar wirionez war ar re a ra seurt traou! ³ O den! te hag a vez o varn ar re a ra seurt traou, hag a vez oc'h ober kemend-all, daoust ha kaoud a ra dit e tehi diouz barn Doue? ⁴ Pe daoust ha disprizoud a rez pinvidigez e vadelez, e basianted hag e hir-amzeri, heb gouzoud e tle madelez Doue da zegas d'an distro ouz Doue! ⁵ Hervez da galeter ha da galon digeuz, emaut o teñzoriza evidout kounnar, a-benn Deiz kounnar Doue, hag an Deiz ma vo diskuliet e varn reiz! ⁶ Eñ a rento da bep hini diouz e oberou: ⁷ d'ar re a zalc'h d'ober mad, o klask gloar, enor ha divarvelez, dezo buez peurbaduz; ⁸ d'ar re avad a zo, diwar rendael, dizuj d'ar wirionez ha sujet d'an direiz*, dezo kounnar ha fulor! ⁹ Trubuill hag anken e kalon kement den a ra an droug, er Juzeo da genta, hag ive er Gresian! ¹⁰ Gloar, enor ha pec'h da gement-hini a ra ar mad, d'ar Juzeo da genta, hag ive d'ar Gresian! ¹¹ Rag gand Doue, ne vez ket greet diouz dremm an dud! ¹² Hag ar re o-deus pehet heb Lezenn, heb Lezenn ive ez aint da goll. ¹³ Rag n'eo ket ar re a zelaou al Lezenn a vez just dirag Doue, med ar re a vir al Lezenn a vezo justizet... ¹⁴ Rag pa zeu Paganed, ha n'o-deus ket al Lezenn, d'ober, dre natur,

Mz 7,21

* Diroll

traou al Lezenn, int-i ha n'o-deus ket al Lezenn a vez Lezenn dezo o-unan! ¹⁵ Diskouez a reont ez eo Oberenn al Lezenn enskrivet en o c'halonou; o c'houstiañs a zo o testenia an dra-ze, ha da heul e vez o divizou an eil goude egile ouz o zamall pe ouz o zidamall, ¹⁶ a-benn an Deiz ma varno Doue traou kuzet an dud, hervez va Aviel, dre Jezuz Krist!

¹⁷ Ma z'out-te lesañvet Juzeo ha ma fiziez el Lezenn ha ma lorhez e Doue, ¹⁸ ec'h anavezez e volontez, hag e tibabez ar peb gwella, kelennet ma z'out dre al Lezenn... ¹⁹ Hag e kav dit ez out da-unan heñcher tud dall, sklerijenn tud beuzet en deñvalijenn, ²⁰ kenteliezh tud diskiant, kelennet bugale, pa z'eus dit, el Lezenn, reolenn ar Ouiziegezh hag ar Wirionezh! ²¹ Te eta hag a gelenn re all, n'en em gelennez ket da-unan! En eur embann '*Arabad laerez!*', te a vez o laerez! ²² En eur lavared '*Arabad avoultri!*', te a ra avoultriezh! En eur heugi ouz an idolou, e vez o walla o zemplou! ²³ En eur lorha gand al Lezenn, e tizenorezh Doue o vresa al Lezenn! ²⁴ Rag '*Ablamour deoc'h e vez Ano Doue blasfemet e-touez ar Baganed!*', evel m'eo skrivet...

Lk 18, 9...
Yn 8, 7...
Iz 52,5
Ez. 36,21

²⁵ Rag talvouduz eo an Amdroc'h, ma virez al Lezenn! Med ma z'eus ahanout eur breser-Lezenn, ez eo da amdroc'h deuet da ziamdroc'h! ²⁶ Ma teu eta an den diamdroc'h da vired oberou 'just' al Lezenn, daoust ha ne vo ket e ziamdroc'h kontet dezañ da Amdroc'h ? ²⁷ Rag an den diamdroc'h agorv, pa vir al Lezenn, hennez da varno, te hag a zo, gand ar Skritur ha gand an Amdroc'h, eur breser-Lezenn! ²⁸ Rag ar Juzeo n'eo ket an hini a zo a-wél, hag an Amdroc'h n'eo ket an hini a zo a-wél er c'horv ; ²⁹ med ar Juzeo eo an hini a zo e-kuz, hag an amdroc'h eo hini ar galon dre ar Spered, n'eo ket hervez ar Skritur! Dezañ e teu meuleudi, n'eo ket digand an dud, med digand Doue!

Yn 8, 15...

-3-

DRE AR FEIZ E VEZ JUSTIZET AN DEN!

¹ Petra eo eta emzao ar Juzeo? Pe c'hoaz: peseurt talvoudegezh e-neus an Amdroc'h ? ² Braz e peb doare! Rag, da genta, enno eo bet fiziet Lavarou Doue! ³ Rag petra ? M'o-deus lod diskredet, daoust hag o diskred a gaso da netra fealder Doue? ⁴ Arabad kredi! "*Ra vezo Doue gwirieg, ha peb den gaouiad*", evel m'eo skrivet: "*Deoc'h beza justizet en ho lavarou, ha deoc'h beza trec'h pa vezoc'h barnet!*" ⁵ Ma teu on direiz-ni da ziskouez Justiz Doue, petra a lavarim-ni? Daoust ha direiz e vefe Doue o tiroll e Gounnar ? (E doare an den e komzan!) ⁶ Arabad kredi! A-hend-all, penaoz e varno Doue ar Bed? ⁷ Ma teu avad gwirionezh Doue da founna dre va gaou-me, evid e c'hloar, perag ez on-me c'hoaz barnet evel peher? ⁸ Arabad lavared, -hervez ma vez tamallet deom, hag hervez ma lavarer e prezegfem-: 'Graom an Droug evid ma teuo ar Mad!' D'an dud-se eo reiz o c'hastiz!

Salm 116,11

Salm 51,6

⁹ Na petra 'ta ? Daoust ha tud dreist a zo ahanom-ni ? Tamm ebed,

Rom. 3, 9-31

peogwir on-eus tamallet Juzevien koulz ha Gresianed da veza oll dindan ar pehed,¹⁰ evel m'eo skrivet:

Rom 5, 12 “N’eus den just ebed, nag eun unan zoken!

Salm 14,2 11 “N’eus den fur ebed, n’eus ket eun unan o klask Doue!

12 “Oll o-deus kosteziet! Da heul ez int deuet didalvez!

“N’eus den ebed oc’h ober vad, n’eus ket eun unan zoken!

13 “Eur béz digor eo o c’hornaillen, gand o zeodou e touellont!

Salm 6,11 “Binim naer-aspig a zo dindan o muzellou.

Salm 140,4

14 “Leun o genou a valloz hag a gasoni;

Salm 10,7

15 “Buan e red o zreid da skuilla gwad!

Iz 59,7

16 “War o heñchou ez eus dismantr ha reuz,

17 “Ha ne anavezont ket hent ar peoc’h!

Salm 36,2

18 “Ne vez ket doujañs Doue dirag o daoulagad!”

¹⁹ Goud a ouzom ervad: ar pezh a lavar al Lezenn, d’ar re a zo dindan al Lezenn hel lavar, ma vezo serret peb genou ha ma teuio ar bed a-bez da veza sujet da Zoue! ²⁰ Rag-se, dre oberou al Lezenn, ne vezo justizet den ebed dirazañ, rag dre al Lezenn e vez hepkén anavezet ar pehed!

Rom 7,7...

²¹ Bremañ avad, heb al Lezenn eo disklêriet Justiz Doue, testeniet ma z’eo dre al Lezenn ha gand ar Brofeded, ²² Justiz Doue dre feiz e Jezuz Krist, d’an oll re a gred! ²³ Rag n’eus kemm ebed: oll o-deus pehet hag e tioueront gloar Doue! ²⁴ Justizet e vezont, evid netra, dre e c’hras, diwar an daspren sevenet e Jezuz Krist! ²⁵ Doue e-neus greet anezañ ‘Trôn-an-Drugarez’, dre ar feiz en e Wad, a-benn diskouez e Justiz e-keñver pardon ar pehejou a-wechall, ²⁶ d’ar poent ma talee, ha da ziskouez e Justiz en amzer a-vremañ, dezañ da veza just e-unan, ha da justiza an hini a vev dre ar feiz e Jezuz Krist.

Ob. 10,43

I Yn 2,2

²⁷ A-belec’h bremañ al lorchentez ? Ema alhwezet dezi! Dre beseurt lezenn? Hini an oberou? Nann da! med dre Lezenn ar feiz! ²⁸ Rag divizoud a reom e vez justizet an den dre ar feiz heb oberou al Lezenn! ²⁹ Daoust ha n’eo Doue nemed d’ar Juzevien? Daoust ha n’eo ket ive d’ar Baganed? Eo da! d’ar Baganed ive, ³⁰ pa n’eus nemed eun Doue hepkén, hag a justizo tud an Amdroc’h diwar ar feiz, ha tud an diamdroc’h dre ar feiz!

Gal 3,1...

Heb 11...

³¹ Daoust ha kas a reom al Lezenn da netra dre ar feiz? Arabad kredi, med diazeza a reom al Lezenn...

Mz 5,17

-4-

ABRAHAM E-NEUS KREDET E DOUE...

- Gal 3...
Jk 2,20 1 Petra 'lavarim 'ta e-nefe kavet Abraham, on tad-meur hervez an natur-den? 2 Rag ma z'eo bet Abraham justizet diwar oberou, e-neus digarez da lorhi, med n'eo ket dirag Doue. 3 Rag petra lavar ar Skritur? "*Abraham e-neus kredet e Doue, ha dezañ eo bet kontet an dra-ze da justiz!*" 4 An neb a ra eun oberenn, ne vez ket ar gopr kontet dezañ evel gras, med evel dle! 5 Med an neb na ra oberenn ebed, med a gred en Hini a c'hell justiza an den dizouj, hennez a vez kontet dezañ ar feiz da justiz! 6 Evelse end-eeun e komz ive David euz eurvad an hini a zeu Doue da gonta dezañ justiz heb oberou:
- Salm 32,1... 7 "*Eüruz an dud a zo bet pardonet dezo o oberou direiz!*
"*Hag a zo bet goloet dezo o fehejou!*
8 "*Eurvad d'ar gwaz na gonto an Aotrou pehed ebed dezañ!*"
- Gen 2,3 9 An eurvad-ze, eta, daoust hag evid tud an amdroc'h eo, pe ive evid tud an diamdroc'h ? Rag bez e lavarom: "*Da Abraham eo bet kontet ar feiz da justiz!*" 10 Dezañ pa oa en amdroc'h pe en diamdroc'h? N'eo ket en amdroc'h, med en diamdroc'h! 11 Rag degemeret e-neus sin an amdroc'h evel siell war ar justiz deuet dre ar feiz anzavet en diamdroc'h, dezañ da veza Tad d'ar re oll a zeu da gredi en diamdroc'h, -ma vezo ar justiz kontet dezo ive-; 12 hag ive da veza Tad d'an dud amdrohet, d'ar re n'int ket hepkén diwar an amdroc'h, med a zo ouspenn o vale striz war roudou ar feiz anzavet en diamdroc'h gand on Tad Abraham...
- Gen 22,17... 13 Ha n'eo ket diwar al Lezenn eo bet greet, da Abraham ha d'e liguez, ar Bromesa da veza hêr euz ar Bed, med diwar justiz ar feiz! 14 Rag ma vez hêred tud al Lezenn, ema kaset ar feiz da netra ha torret ar Bromesa! 15 Rag al Lezenn a zegas kounnar! El lec'h avad n'eus Lezenn ebed, ne vez bresadenn ebed ive! 16 Ablamour da-ze, e vezer hêr diwar ar feiz evid ma vezo dre c'hras ha ma vo stard ar Bromesa d'e liguez a-bez, n'eo ket hepkén d'an hini diwar al Lezenn, med ive d'an hini a zo diwar feiz Abraham: bez' ez eo Tad deom oll, 17 evel m'eo skrivet: "*Da lakeet am-eus da veza Tad da galz Paganed!*" , tad dirag an Hini e-neus-eñ kredet ennañ, Doue, Eñ hag a ro buez d'ar re varo hag a c'halv da veza an traou ha n'eus ket anezo! 18 Deuet da esperoud a-eneb peb esperañs, e-neus-eñ kredet evid dond da veza tad da galz Paganed, hervez m'eo skrivet: "*Evelse e vezo da liguez!*" .
- Gen 17,5... 19 Heb laoskaad en e feiz, e-neus-eñ soñjet en e gorv e-unan, neuze hanter-varo (en e gant vloaz e oa marteze!), hag ive e korv divuez Sara! 20 Dirag Promesa Doue, n'e-neus ket nehet dre zifiziañs, med kennerzet eo bet gand ar feiz da zougen gloar da Zoue, 21 o kredi stard eo-Eñ gouest ive da zeveni ar pez e-neus prometet! 22 Rag-se, *ez eo bet kement-se kontet dezañ da justiz!* 23 N'eo ket ablamour dezañ hepkén eo skrivet '*Dezañ eo bet kontet da justiz!*' , 24 med ive ablamour deom-ni, rag deom-ni ive e oa da veza kontet,
- Gen 15,5-6

1 Kor 15,17
Iz 53,4... pa gredom en Hini e-neus adsavet an Aotrou a-douez ar re varo, an Hini bet roet evid or mankou ha bet adsavet evid or justiza...

- 5 -

GRAS HA DONEZON DOUE O-DEUS FOUNNEET...

Iz 53,5

¹ Justizet eta diwar ar Feiz, bezom er peoc'h o vond daved Doue dre Jezuz Krist on Aotrou! ² Drezañ, diwar ar Feiz, ez om deuet ive da gaoud an digor er c'hras-ze a jomom stard enni, ha lorhet om ive oc'h esperoud gloar Doue. ³ N'eo ket dre-ze hepken, med lorhet om zoken en trubuillou, o c'houzoud kement-mañ: diwar an drubuill e sav dalc'h, ⁴ diwar an dalc'h, tentadur, diwar an dentadur, esperañs ; ⁵ an esperañs avad ne zegas ket da ruzia gand ar véz, pa z'eo skuillet karantez Doue en or c'halonou dre ar Spered Santel a zo bet roet deom!

Jak. 1,2...

Mz 5,10...

Yn 3,16

I Yn 4,10

Rom 8,10

⁶ Rag pa oam c'hoaz dinerz, d'ar poent merket, ez eo bet marvet ar C'hrist evid tud dizouj! ⁷ Rag a-vec'h ma varver evid eun den just! Rag evid eur c'haer a zen marteze e kred unan bennag mervel! ⁸ Doue avad a verk frêz e garantez evidom: rag evidom, -ha ni c'hoaz peherien!-, eo bet marvet ar C'hrist! ⁹ Kalz muioc'h eta, justizet ma z'om bet bremañ dre e Wad, e vezim salvet drezañ diouz ar Gounnar! ¹⁰ Rag pa oam peherien, ma z'om bet unvanet gand Doue dre varo e Vab, kalz muioc'h, bremañ unvanet, e vezim salvet dre e Vuez! ¹¹ N'eo ket hepken an dra-ze: med lorhet om ive e Doue dre Jezuz Krist on Aotrou, on-eus drezañ bremañ degemeret an unvaniez!

Gen 3,19...

Rom 6,23

¹² Rag-se, evel m'eo ar Pehed deuet er Bed dre eun den hepken, ha dre ar Pehed ar Maro, hag e-neus evelse ar Maro kroget en oll dud, dre m'o-deus oll pehet... ¹³ Rag beteg al Lezenn, bez' e oa pehed er bed, med ne veze ket lakeet e kont pa ne oa ket a Lezenn! ¹⁴ Ar Maro avad e-neus dalhet d'ober e roue adal Adam beteg Moizez, ha zoken war ar re n'o-deus ket pehet dre eur vresadenn heñvel ouz hini Adam, eñ hag a zo skeudenn an Hini-da-zond!

¹⁵ Med n'eo ket evel m'e-neus greet ar mañk, eo e ra an Donezon! Rag ma z'eo bet, dre Vañk unan hepken, marvet an oll dud, kalz muioc'h eo deuet Gras Doue hag e Zonezon, dre C'hras Unan hepken, Jezuz Krist, da fonna war an oll dud! ¹⁶ Rag ne ra ket evel m'eo degouezet dre eur peher hepken: ar varn diwar ar pehed-ze hepken a zegas kastiz; an donezon avad, diwar eur bern mañkou, a zegas justiz! ¹⁷ Renet e-neus ar maro dre vank unan hepken, ha dre an den-ze hepken; kalz muioc'h, an dud a reseo gand puillentez gras ha donezon ar justiz a vo roue er vuez dre unan hepken, Jezuz Krist!

¹⁸ Evelse 'ta: evel m'eo deuet ar C'hastiz war an oll dre Vañk unan hepken, evelse ive, dre Oberenn just Unan hepken, eo deuet war an oll ar Justiz er vuez! ¹⁹ Rag evel m'eo bet lakeet an oll da beherien gand dizentadenn eun den hepken, evelse ive, gand sentadenn Unan hepken e vo an oll lakeet da dud just! ²⁰ Al Lezenn a zo deuet dre laer evid d'ar Mañkou mond war gresk! El lec'h avad ez eo eet ar Pehed war gresk, he-deus ar C'hras

dreist-founneet! ²¹ Gand-se, evel m'e-neus ar Pehed greet e roue er Maro, evelse ive ra vezo ar C'hras rouanez, dre ar Justiz, e Buez peurbaduz, dre Jezuz Krist on Aotrou!...

- 6 -

MARVET GAND AR C'HRIST, A-UNAN GANTAÑ E VEVIM!

¹ Petra lavarim 'ta ? Ha chom a raim er pehed, ma kresko ar C'hras ? ² Arabad deom! Ni oll hag a zo bet marvet d'ar Pehed, penaoz e vevim c'hoaz ennañ ? ³ Daoust ha n'ouzit ket penaoz, ni oll hag a zo bet badezet e Jezuz Krist, en e varo eo ez om bet badezet ? ⁴ A-unan gantañ ez om eta bet beziet, dre ar vadeziant er maro. Diwar-ze, evel m'eo bet adsavet ar C'hris a-douez ar re varo dre c'hloar e Dad, evelse e vo deom-ni ive bale en eun nevez a vuez! ⁵ Ma z'om bet unanet gantañ en eur maro heñvel ouz e hini, e vezim ive en eun Adsao heñvel ouz e hini...

I Per 4,1
Gal 3,27

Fil 3,10

I Per 3,4
Kol 2,12
I Yn 3...

⁶ Goud a ouzom kement-mañ: an 'den-koz' ennom a zo bet staget a-unan gantañ ouz ar groaz, evid da gorr ar Pehed beza kaset da netra, ha deom-ni ehana da veza sklav d'ar Pehed: ⁷ an den marvet a zo justizet diouz ar Pehed! ⁸ Ma z'om-ni avad bet marvet gand ar C'hris, e kredom e vevim ive a-unan gantañ, ⁹ o c'houzoud an dra-mañ: ar C'hris bet adsavet a-douez ar re varo ne varv ket kén, ar Maro ne raio ket kén e aotrou warnañ! ¹⁰ Rag marvet eo bet, d'ar Pehed eo bet marvet eur wech evid mad! Beo eo-Eñ, beva a ra evid Doue! ¹¹ Evelse, c'hwi ive, en em lakit maro d'ar Pehed, ha stag da veva evid Doue e Jezuz Krist!

Gen 4,7

I Yn 3,6

2 Per 2,19

¹² Arabad eta d'ar Pehed ober e roue war ho korvou marvel, beteg deoc'h senti ouz e c'hoantegeziou! ¹³ Ha na roit ket hoc'h izili evel armou a ziroll d'ar Pehed! Med en em ginnigit da Zoue evel tud 'beo', adsavet a-douez ar re varo, ha kinnigit hoc'h izili da Zoue evel armou ar justiz! ¹⁴ Rag ne vo ket kén ar Pehed oc'h ober e aotrou warnoc'h, pa n'emaoc'h ket kén dindan al Lezenn, med dindan ar C'hras. ¹⁵ Ha petra 'ta? Deom-ni pehi pa n'emaom ket kén dindan al Lezenn, med dindan ar c'hras? Arabad deom! ¹⁶ Daoust ha ne ouezit ket kement-mañ: d'an neb en em roit da sklav evid senti outañ, e vezoc'h sklav d'an neb a zentit outañ, pe d'ar Pehed evid ar maro, pe d'ar zentidigez evid ar justiz! ¹⁷ Gras da Zoue! Bez' e oac'h sklav d'ar Pehed! Sentet ho-peus avad a-greiz kalon ouz ar reolenn a gelennadurez ez oc'h bet fiziet enni...

¹⁸ Bet frankizet diouz ar Pehed, deuet oc'h sklav d'ar justiz! ¹⁹ (En eun doare denel e komzan, pa z'eo dinerz ho natur-den!) Rag evel m'ho-peus kinniget hoc'h izili da veza sklav d'an hudurnez, hag euz an dizurz d'an dizurz, evelse ive bremañ e kinnigit hoc'h izili da veza sklav d'ar justiz, evid ar zantelez! ²⁰ Rag pa oac'h sklav d'ar Pehed, e oac'h frank e-keñver ar justiz! ²¹ Peseurt frouez ho-poa neuze 'ta diwar an traou ho-peus bremañ méz ganto? Rag termen an traou-ze eo ar maro! ²² Bremañ avad, frankizet diouz ar Pehed ha deuet sklav da Zoue, ho-peus frouez e santelez, hag an termen e Buez

Rom 5,12... peurbaduz! ²³ Rag gopr ar Pehed eo ar maro! Donezon Doue avad eo ar Vuez peurbaduz e Jezuz Krist on Aotrou!...

- 7 -

BREMAÑ EZ OM FRANKIZET DIOUZ AL LEZENN!

1 Daoust ha ne ouezit ket, Breudeur, (d'ar re a anavez al Lezenn e komzan!), e vez al Lezenn oc'h ober hec'h aotrou war an den e-keid ha ma vev ? ² Rag ar vaouez dimezet a vez liammet d'he gwaz, en e vuez, dre al Lezenn! Ma varv he gwaz avad, e vez-hi frankizet diouz lezenn he gwaz; ³ evelse eta, epad buez he gwaz, e vezo greet 'avoultrez' anezi ma vez-hi d'eur gwaz all! Ma varv he gwaz avad, eo-hi frank diouz al Lezenn, ken na vezo ket 'avoultrez' ma vez d'eur gwaz all! ⁴ Evelse, Breudeur, c'hwi ive a zo bet lakeet d'ar maro e-keñver al Lezenn dre Gorr ar C'hrist, evid beza da Unan all, d'an Hini adsavet a-douez ar re varo, deom da zougen frouez da Zoue!

1 Kor 7,39

Gal 2,19

⁵ Pa oam dindan an natur-den, edo ar youlou a gas d'ar pehejou dre al Lezenn o virvi en on izili, en eur zougen frouez d'ar Maro! ⁶ Bremañ avad ez om-ni bet frankizet diouz al Lezenn, o vervel d'ar pezh on dalhe, deom da zervicha e doare nevez ar Spered, ha n'eo ket e doare koz ar Skritur! ⁷ Petra 'lavarim-ni 'ta ? Daoust ha Pehed eo al Lezenn ? Arabad kredi! Med n'am-eus anavezet ar Pehed nemed dre al Lezenn! Rag n'am-befe ket gouezet ar c'hoantegez ma n'he-defe ket al Lezenn lavaret: "*Ne c'hoantai ket!*" ⁸ Kavet gantañ tro, e-neus ar Pehed, dre ar Gourhemenn, atizet ennon ar c'hoantegez, rag heb al Lezenn ez eo maro ar Pehed! ⁹ Me a oa beo heb al Lezenn gwechall! Deuet ar Gourhemenn, e-neus ar Pehed kavet buez, ¹⁰ me avad a zo marvet, hag evidon-me, ar Gourhemenn, lakeet da rei buez, a zo degouezet dezañ rei din ar maro: ¹¹ ar Pehed, kavet gantañ tro, dre ar Gourhemenn e-neus va zouellet, ha drezañ e-neus va lazet!

Yn 9, 40-41
Deut 5,18

¹² Evelse, ez eo al Lezenn santel, hag ez eo ar Gourhemenn santel, ha just ha mad! ¹³ Daoust 'ta hag ar mad a zo troet din-me e maro ? Arabad kredi! Med ar Pehed, evid en em zisklêria Pehed, e-neus, dre ar Mad, greet va maro, evid d'ar Pehed dre ar Gourhemenn dond da veza peher-dreist! ¹⁴ Rag gouzoud a reom-ni eo al Lezenn speredel, me avad a zo denel, gwerzet ha sujet d'ar Pehed! ¹⁵ Rag n'intentan-me ket ar pezh a ran! Ar pezh a c'hoantaan, an dra-ze ne ran-me ket! Med ar pezh a gasaan, an dra-ze eo a ran! ¹⁶ Ma teu avad ar pezh na c'hoantaan ket da veza ar pezh a ran, e tisklêrian a-unan gand al Lezenn ez eo-hi kaer! ¹⁷ Neuze, n'eo ket me eo her gra, med ar Pehed hag a zo o chom ennon! ¹⁸ Rag gouzoud a ran n'ema ket ar Mad o chom ennon, da lavared eo em natur-dén! Rag c'hoantaad an dra gaer, a zo dirazon, hec'h ober avad n'ema ket! ¹⁹ Rag ne ran ket ar Mad a c'hoantaan, med an Droug na c'hoantaan ket, an dra-ze eo a ran! ²⁰ Ma ran eta ar pezh na c'hoantaan ket, n'eo ket kén me eo her gra, med ar Pehed, hag a zo o chom ennon! ²¹ Kavoud a ran eta al lezenn-mañ pa c'hoantaan ober an dra gaer: dirazon ema an droug! ²² Kavoud a ran va dudi e Lezenn Doue hervez va diabarz a-

1 Per 2,11 zen! ²³ Med gweled a ran em izili eul lezenn all o vrezelia a-eneb Lezenn va spered, hag ouz va sklavaad da lezenn ar Pehed a zo em izili! ²⁴ Eun den reu-zeudig a zo ahanon! Piou va diframmo diouz ar c'horv-mañ a-varo ? ²⁵ Gras da Zoue dre Jezuz Krist on Aotrou! Evelse 'ta, ez on-me va-unan sklav da Lezenn Doue em spered, ha sklav da lezenn ar Pehed em natur-den...

- 8 -

AN DUD RENET GAND AR SPERED A ZO BUGALE DA ZOUÉ!

Rom 8,31-39 ¹ Bremañ 'ta, n'eus barn ebed a-eneb ar re a zo e Jezuz Krist: ² Lezenn Spered-ar-Vuez e Jezuz Krist he-deus da frankizet diouz Lezenn ar Pehed hag ar Maro! ³ Rag ar pezh na c'hell ket al Lezenn ober, dinerzet ma z'eo dre an natur-den, deuet eo Doue d'henn ober! Kaset gantañ e Vab e-unan, en eun natur heñvel ouz an natur-den a behed hag a varo, hag e-keñver abadenn ar Pehed, e-neus-Eñ barnet ar Pehed en natur-den, ⁴ da Justiz al Lezenn beza peurzevenet ennom-ni a zo o vale, n'eo ket hervez an natur-den, med hervez ar Spered.

Mz 5,17 ⁵ Ar re a vev hervez an natur-den a c'hoanta traou an natur-den, ar re a vev hervez ar Spered a c'hoanta traou ar Spered! ⁶ C'hoant an natur-den a gas d'ar maro! C'hoant ar Spered a gas d'ar Vuez ha d'ar Peoc'h! ⁷ C'hoant an natur-den a zo eneber da Zoue: n'eo ket sujet da Lezenn Doue, ne c'hell ket beza kennebeud! ⁸ Ar re a vale hervez an natur-den ne c'hellont ket plijoud da Zoue!

Mz 12,34
Yn 8, 43
1 Per 4,6 ⁹ C'hwi avad, ne valeit ket hervez an natur-den, med hervez ar Spered, da vianna m'ema Spered Doue o chom ennoc'h! Ma z'eus unan bennag ha n'e-neus ket Spered Doue, hennez n'eo ket dezañ! ¹⁰ M'ema avad ar C'hrist o chom ennoc'h, ez eo maro ar c'horv en abeg d'ar Pehed; ar spered avad a zo buez ablamour d'ar justiz! ¹¹ M'ema o chom ennoc'h Spered an Hini e-neus adsavet Jezuz a-douez ar re varo, an Hini e-neus adsavet ar C'hrist a-douez ar re varo, a roio ive buez d'ho korbou marvel, ablamour d'ar Spered a zo o chom ennoc'h...

Ef 4,22... Gal 4,5... Gal 4,7...
Disk 21,7... ¹² Evelse 'ta, Breudeur, ez om-ni dleourien, med n'eo ket d'on natur-den, deom da veva hervez an natur-den, ¹³ rag ma vevit hervez an natur-den, emac'h e par ar maro! Med ma lakit da veva dre ar Spered oberou ar c'horv, e vevoc'h! ¹⁴ Rag an oll re a zo rénet gand Spered Doue, ar re-ze a zo bugale da Zoue! ¹⁵ Rag n'ho-peus ket degemeret eur Spered da jom sklav, deoc'h da veva adarre en aon, med degemeret ho-peus eur Spered da veza mab, hag ennañ e youhom: 'Abba! Tad!' ¹⁶ Ar Spered e-unan a vez o testenia gand or spered ez om-ni mibien da Zoue! ¹⁷ Ma z'om mibien, ez om ive hêred*, hêred da Zoue, hêred a-unan gand ar C'hrist, da vianna ma c'houzañvom a-unan gantañ, deom beza ive kenlodeg en e C'hloar! ¹⁸ Rag

*hêred: heritourien.

2 Kor 4,17 kavoud a ra din ema poaniou an amzer-mañ pell-pell da dalvezoud ar C'hloar a vo prest diskuliet ennom-ni!...

¹⁹ Rag gortoz ar Grouadelez a c'hortoz gand mall ha gand anken e vefe diskuliet Mibien Doue. ²⁰ Rag d'an disterder eo bet sujet ar Grouadelez, n'eo ket a youl-vad, med dre an Hini e-neus he zujet, gand esperañs, ²¹ peogwir e vezo ar Grouadelez hec'h-unan frankizet diouz sklaverez ar Maro, dezi da zegouezoud e frankiz gloar bugale Doue! ²² Gouzoud a reom ema ar Grouadelez a-bez o hirvoudi hag o tiwaska ar gwentlou beteg bremañ. ²³ N'eo ket hi hepkén, med ni on-unan ive hag on-eus tañvad ar Spered, ni on-unan ive a zo ankeniet ennom on-unan o c'hortoz beza mab da vad, ha kaoud frankiz or c'horv! ²⁴ Rag n'om-ni salvet nemed en esperañs. Esperoud eun dra a weler, n'eo ket kén esperoud! Ar pez a wél eun den, perag esperoud c'hoaz ? ²⁵ Ma esperom ar pez na welom ket, gand habaster e c'hortozom.

Heb 11,1...

²⁶ Evelse ive e teu ar Spered da skoazella on dinerz, rag n'ouzom ket petra eo deom goulenn evel m'eo red! Med ar Spered e-unan a zalc'h da aspedi evidom dre hirvoudou dreist-lavar! ²⁷ An Hini a furch ar c'halonou a oar petra a c'hoanta ar Spered, rag hervez Doue ec'h asped evid an dud santel.

1 Kor 4,5

²⁸ Gouzoud a reom: d'ar re a gar Doue, e striv kement-tra evid o mad, d'an dud bet galvet hervez e vennad! ²⁹ Rag ar re e-neus anavezet, e-neus ive dibabet, dezo da veza stummet diouz skeudenn e Vab, da Hemañ beza ar C'henta-ganet e-touez leun a Vreudeur! ³⁰ Ar re e-neus dibabet, ar re-ze e-neus ive galvet! Hag ar re e-neus galvet, ar re-ze e-neus ive justizet! Hag ar re e-neus justizet, ar re-ze e-neus ive karget a c'hloar!

Ef 1,11...

³¹ Petra 'lavarim-ni da gement-se ? M'ema Doue a-du ganeom, piou a zo a-eneb deom? ³² Eñ hag evid gwir n'e-neus ket damantet d'e Vab e-unan, med e-neus e roet evidom oll, penaoz ne zeufe ket ive, dre c'hras, da rei deom pep tra d'e heul ? ³³ Piou a damallo an dud dibabet gand Doue? Doue? Eñ hag a zo o justiza? ³⁴ Piou a gondaono ? Jezuz Krist ? Eñ hag a zo bet marvet! Kaerroc'h c'hoaz, Eñ hag a zo adsavet, Eñ hag a zo ive a-zehou da Zoue hag a asped evidom ? ³⁵ Piou on distago diouz karantez ar C'hrist ? Trubuill, pe anken pe heskinerez pe gernez, pe noazder pe riskl pe gleze ? ³⁶ Evel m'eo skrivet:

Yn 3,16

1 Yn 2,1

Salm 44,22

“Ablamour deoc'h-c'hwi e vezom kaset d'ar maro a-hed an deiz!

“Kontet om-ni bet evel deñved da veza lazet!”

Yn 16,33

³⁷ Med e-kreiz kement-se, e c'hellom peurdrehi dre an hini e-neus or c'haret! ³⁸ Rag kredi stard a ran: nag ar maro, nag ar vuez, nag an êlez, nag an arhêlez, nag an traou a-vremañ, nag an traou da-zond, nag an Nerziou, ³⁹ na traou an-nec'h, na traou an-traoñ, na krouadelez all ebed ne c'hello on distaga diouz karantez Doue a zo er C'hrist Jezuz on Aotrou!...

- 9 -

TRUEZI A RA OUZ AN HINI A GAR!

¹ Ar wirionez a lavaran er C'hrist, ne lavaran ket gevier! Ha testenia a ra ganin va c'houstiañs, er Spered Santel! ² Bez' ez eus din glahar vraz ha rann-galon dibaouez! ³ Rag kared a rafen beza va-unan disrann diouz ar C'hrist evid mad va breudeur, ken-ouenn ganin hervez an natur! ⁴ Int-i eo an Izraeliz, ha dezo eo ar stad a Vab, hag ar C'hloar, hag an Emgleviou, hag al Lezenn, hag al Lidadeg, hag ar Promesaou... ⁵ Dezo an Tadou-Meur, diwarno ar C'hrist hervez an natur-den, Eñ hag a zo dreist an oll, Doue meulet a-hed ar c'hantvejou! Amen!

⁶ N'eo ket avad ma vefe kouezet Komz Doue d'an traoñ! Rag ar re a zo ganet diwar Izrael n'int ket oll Izrael! ⁷ Ha goude dezo beza lignez Abraham, n'int ket oll bugale dezañ. Med *'en Izaag e vezint galvet Lignez dit!'* ⁸ Da lavared eo: n'eo ket e vugale hervez an natur-den a vezo bugale da Zoue, med ar vugale hervez ar Bromesa a vezo kontet dezañ da lignez! ⁹ Rag setu amañ Komz ar Bromesa: *"D'ar poent-mañ e teuin-me endro ha da Zara e vezo eur Mab!"*

¹⁰ N'eus ket bet dezi hepkén, med ive da Rebeka diwar eun darempred hepkén gand he gwaz, on Tad-Meur Izaag. ¹¹ Ne oant ket c'hoaz ganet, ha n'o-doa c'hoaz greet na mad na droug, hag evid ma chomfe stard mennad Doue (sevenet ma vez hervez an Dibab, ¹² n'eo ket diwar oberou, med diouz an Hini a c'halv!), evid-se eo bet lavaret dezi: *"Ar brasa a vo sklav d'ar bianna!"*, ¹³ evel m'eo skrivet: *"Jakob am-eus-me karet, hag Ezaü am-eus kasaet!"*

¹⁴ Petra 'lavarim-ni 'ta ? Daoust ha direizder a vefe e Doue ? Arabad kredi! ¹⁵ Rag da Voizez e lavar: *"Truez am-bo ouz an hini am-bo truez ... Pardonni a rin d'an hini a bardonin !"* ¹⁶ Evelse 'ta, n'eus ano euz den o c'hoantaad pe o redeg, med hepkén euz Doue o kaoud truez... ¹⁷ Rag ar Skritur a lavar da Faraon: *"Evid kement-mañ am-eus-me da zavet, evid ma tiskouezin ennout va nerz ha ma vezo embannet va Ano er bed a-bez!"* ¹⁸ Evelse 'ta, truezi a ra ouz an neb a gar, ha kaletaad a ra an neb a gar!...

¹⁹ Lavared a ri din eta: "Ha perag e teuio c'hoaz da rebech? Ha piou a enebo ouz e volontez?" ²⁰ O den! Piou out-te evid dislavared Doue? Daoust ha lavared a raio ar pod-pri d'ar poder: "Perag az-peus va greet evelse ?" ²¹ Pe daoust ha n'e-neus ket ar poder aotre da ober, euz eur bern pri hepkén, al lestr-mañ da veza enoret, hag hennez da jom dizenor ? ²² Evelse avad, c'hoant dezañ da ziskouez e gounnar ha da zisklêria e c'halloud, e-neus Doue gouzañvet, gand kalz a habaster, listri-a-gounnar stummet da vond da goll; ²³ hag ive, evid diskulia pinvidigez e c'hloar war listri-a-drugarez, e-neus-Eñ or reizet evid ar c'hloar, ²⁴ ni hag e-neus ive galvet n'eo ket hepkén a-douez ar Juzevien, med ive a-douez ar Baganed, ²⁵ evel ma lavar dre ar profed Oze:

Oz 2,29... “An hini n’eo ‘ket va Fobl’, a c’halvin ‘va Fobl’!

“Hag an hini n’eo ‘ket karet’ a c’halvin ‘Va Muia-Karet’!

Oz 1,10 26 “Hag el lec’h ma vez lavaret dezo ‘N’oc’h ket va Fobl’,

“Eno e vezint galvet ‘Bugale an Doue-Beo’!”

Iz 10,27 27 Izai avad a youc’h war Izrael:

“Ha ma vefe niver Bugale Izrael evel trêz ar mor,

“Ar Rest eo a vezo salvet!”

28 Rag dond a raio Doue da beurzeveni ha da grenna e Gomz war an douar, 29 hag evel m’e-neus lavaret Izai:

Iz 1,9 “Ma n’e-nije ket Aotrou Sabaot dalhet deom eur ouenn,

“E vijem deuet da veza evel Sodom hag heñvel ouz Gomor!”

30 Petra ’lavarim-ni ’ta ? An dra-mañ: Paganed ha ne glaskent ket ar justiz o-deus degemeret ar justiz, an hini a zeu euz ar feiz! 31 Izrael avad, eñ hag a glaske eul Lezenn a-justiz, n’eo ket erruet d’eur seurt Lezenn! 32 Perag ? Pa ne oa ket euz ar feiz, med evel pa vefe euz an oberou! Asoupet* e-neus ouz ar mên-asoup, 33 hervez m’eo skrivet:

Mz 21,42 “Setu ma lakan e Sion eur Mên-Asoup hag eur Roc’h-Skoill!

1 Per 2,6 “An hini a gredo ennañ n’e-no ket da gaoud méz!”

- 10 -

GRED O-DEUS EVID DOUE! N’EO KET GAND SKIANT!

1 Breudeur! Youl va c’halon ha va fedenn evito a zo evid o zilvidigez!

Lk 18,10 2 Rag dezo e testenian: gred o-deus evid Doue, med n’eo ket hervez skiant. 3

Rom 9,31 Rag o tianavezoud justiz Doue, hag o klask diazeza o hini, n’o-deus ket sujet da justiz Doue! 4 Rag termen al Lezenn eo ar C’hris, dezañ da rei ar justiz da

Lev 18,5 gement-hini a gred! 5 Rag Moizez e-neus skrivet: “An neb a ra ar justiz a zeu euz al Lezenn, a vevo drezi!” 6 Ar justiz avad a zeu euz ar feiz a lavar evel-

Dt 30,12... mañ: “Na lavar ket en da galon: ‘Piou a bigno d’an Neñv?’, da lavared eo: ‘d’ober d’ar C’hris diskenn!’, 7 pe: ‘Piou a ziskennno d’an islonk?’, da lava-

Dt 30,14 red eo: ‘da lakaad ar C’hris da adsevel a-douez ar re varo!’”. 8 Med petra a lavar-hi? “Harp ouzit ema al Lavar, war da vuzellou hag en da galon!”

da lavared eo: lavar ar feiz emaom-ni oc’h embann! 9 Rag ma anzavez gand da vuzellou ez eo Jezuz ‘Aotrou’, ha ma kredez a-galon e-neus Doue e adsavet

a-douez ar re varo, e vezi salvet! 10 Rag gand ar galon e vez kredet evid kaoud ar justiz, ha gand ar muzellou e vez anzavet evid kaoud ar zilvidigez!

2 Kor 4,5 Iz 28,16 11 Rag lavared a ra ar Skritur: “Kement hini a gred ennañ, n’e-no ket da gaoud méz!” 12 Rag n’eus kemm ebed etre Juzeo ha Gresian. Dezo oll n’eus

* Strebota, beza strobet.

- Joel 2,22 nemed eun Aotrou, pinvidig e-keñver an oll re a zeu d'e c'helver: ¹³ *“Kement hini a c’halvo Ano an Aotrou a vezo salvet!”*
- 14 Penaoz ’ta e c’halvint an Hini n’o-deus ket kredet ennañ ? Penaoz e kredint en Hini n’o-deus ket klevet? Penaoz e klevint heb Embanner ebed? ¹⁵ Penaoz ec’h embannint ma ne vezont ket kaset? Evel m’eo skrivet: *“Na pegen kaer eo treid ar re a embann ar C’helou-Mad!”*
- Iz 52,7
- Iz 53,1 ¹⁶ Med n’eo ket an oll o-deus sentet ouz an Aviel, rag lavared a ra Izai: *“Aotrou! Piou e-neus kredet ouz or zelaou ?”*
- Yn 17,20 ¹⁷ Ar feiz a zo diwar Kelou, ar C’helou avad diwar Lavar ar C’hrist.
- ¹⁸ Med lavared a ran: *“Daoust ha n’o-deus ket klevet?”* - Eo da!
- Salm 19,5 *“Dre ar Bed a-bez eo eet trouz o mouez!
“Ha beteg harzou an douar o lavarou!”*
- ¹⁹ Med lavared a ran-me: *“Daoust ha n’eo ket deuet Izrael da c’houzoud?”*
- Dt 32,21 Moizez, eñ da genta, a lavar: *“Me ho lakaio da erezi* tud ha n’int ‘Ket- eur-Bobl!’
“Hag ouz eur Bobl diskiant e rin deoc’h kounnari!”*
- Iz 65,1 ²⁰ Izai avad a gred lavared: *“Kavet on bet gand ar re n’am c’hlaskent ket!
“Deuet on da bara dirag ar re na c’houlennent netra ouzin!”*
- Iz 65,2 ²¹ Da Izrael avad e lavar: *“A-hed an deiz penn-da-benn am-eus astennet va daouarn,
“Warzu eur Bobl diskredig ha rendaeler!”*

- 11 -

IZRAEL A-BEZ A VEZO SALVET!

- ¹ Lavared a ran eta: *“Daoust ha n’e-neus ket Doue taolet kuit e Bobl!”*
- Fil 3,5 Arabad kredi! Rag bez’ez on-me ive eun Izraelad, euz lignez Abraham, euz meuriad Benjamin! ² Doue n’e-neus ket taolet kuit ar Bobl e-neus-Eñ anavezet! Daoust ha n’ouzit-c’hwi ket petra ’lavar ar Skritur dre Eli, penaoz e klemm da Zoue a-eneb Izrael:
- 2 Kor 11,22
- 2 Rou 19,10 ³ *“Aotrou! Lazet o-deus ho profeded! Dismantret o-deus hoc’h aoteriou!
“Ha me a zo bet lezet war-lerc’h va-unan penn, hag emaint o klask va buez!”*

* Ezezi: avia, kaoud gwarizi.

4 Ha petra 'lavar dezañ ar respont?

2 Rou 19,18 *“Miret am-eus evidon seiz mil gwaz n'o-deus ket pleget o glin dirag Baal!”*

5 Evelse 'ta, en amzer a-vremañ, e chom eur Restad hervez eun Dibab greet dre c'hras! 6 Ma z'eo dre c'hras, n'eo ket kén diwar an oberou, rag ne jomfe ket kén ar C'hras da veza gras!

7 Petra 'ta ? Izrael n'eo ket deuet da gavoud ar pez a glaske! An dud dibabet avad a zo degouezet, ar re all a zo bet kaledet,⁸ evel m'eo skrivet:

Dt 29,4
Iz 29,10

“Doue e-neus roet dezo eur spered a-vored, daoulagad da jom heb gweled,

“diskouarn da jom heb kleved, beteg an deiz a-hirio!”

9 David ive a lavar:

Salm 70,23

“Ra vezo o zaol evito eur pej, hag eur roued, hag eur skoill hag eur c'hastiz!”

10 *“Ra deñvallaio o daoulagad evid chom heb gweled! Ha dalhit o c'hein pleget!”*

Dt 32,21

11 Lavared a ran: “Daoust ha n'o-deus ket asoupet evid koueza da vad?” Arabad kredi! Med dre o mañk eo deuet ar Zilvidigez d'ar Baganed, a-benn degas Izrael da erezi! 12 Ma z'eo o mañk Silvidigez evid ar Bed, hag o diskar pinvidigez evid ar Baganed, pegement muioc'h e vezo o Leunder!...

Ef 2,11...

13 Deoc'h-c'hwi, Paganed, e lavaran: e-keid ha ma z'on Abostol ar Baganed, ec'h enorin va Ministrerez, 14 ma tegasan tud va gwad da erezi, ha ma salvan lod anezo! 15 Rag ma z'eo deuet o distaol da veza unvaniez ar Bed, petra a vezo o distro, nemed buez a-douez ar re varo! 16 Ma z'eo santel an tamm kenta ez eo ive ar bern toaz! Ha ma z'eo santel ar wrizienn, ez eo ive ar skourrou! 17 Ma z'eo bet distaget lod euz ar skourrou, ha dit beza eun olivezenn c'houez, ez out-te bet imboudet warno hag ez out deuet da veza kenlodeg er wrizienn hag e seo druz an olivezenn! Diwall d'ober fae war ar skourrou-ze! 18 Ma teuez d'ober fae, gwel! Ne zougez-te ket ar wrizienn, ar wrizienn avad a zo ouz da zougen-te!...

Rom 12,16..

19 Lavared a ri eta: “Skourrou a zo bet distaget evid din-me beza imboudet!” 20 Kaer kenañ! Dre o diskred int bet distaget, ha te, dre ar feiz az-peus dalhet! Diwall d'en em blijoud e soñjou uhel! Az-peuz aon avad! 21 Rag ma n'e-neus ket Doue damantet d'ar skourrou-natur, dit-te ne zamanto ket ive! 22 Gwel 'ta madelez ha ruster Doue! E-keñver ar re a zo kouezet, e ruster! En da geñver-te, madelez Doue, ma chomez stard en e vadelez; anez-da-ze, e vezi distaget, te ive! 23 Rag ma ne gendalhont ket en o diskred, e vezo ar re-ze ive imboudet endro, rag gouest eo Doue d'o imboudi adarre! 24 Rag ma z'out-te bet distaget diouz eun olivezenn c'houez dre natur, ha bet imboudet a-eneb natur war eun olivezenn gaer, na pegement muioc'h e vezo ar re-ze imboudet hervez natur war o olivezenn dezo o-unan!

Yn 15,2

2 Kor 3,16

Lk 21,24
Yn 10,16
Mz 23,39

25 Rag ne fell ket din, Breudeur, e vefec'h heb anavezoud ar Mister-mañ, gand aon na vefec'h fur diouzoc'h hoc'h-unan! Kaleter a zo degouezet evid eul lodenn war Izrael, beteg ma vezo antreet Leunder ar Baganed. ²⁶ Hag evelse e vezo salvet Izrael a-bez, evel m'eo skrivet:

Salm 14,7

“Euz Sion e teuio ar Frankizer:

“Distrei a raio peb dizoujañs diouz Jakob!

Jer 31,33...

27 *“Ha setu an Emgleo a ziazezin-me ganto:*

“Dezo e pardonin o fehejou!”

Gal 3,22

28 Hervez an Aviel ez int eneberien ablamour deoc'h-c'hwi! Hervez dibab Doue avad, ez int Bugale muia-karet ablamour d'o Zadou-meur, ²⁹ rag digeuz e vez Donezonou ha Galv Doue! ³⁰ Rag evel m'ho-peus-c'hwi kent diskredet ouz Doue ha m'ho-peus bremañ kavet trugarez en abeg da ziskred ar re-ze, ³¹ evelse ive o-deus ar re-ze diskredet ablamour d'an drugarez ho-peus-c'hwi kavet, evid ma kavint trugarez int-i ive! ³² Rag paket e-neus Doue an oll en diskred, dezañ dond da gaoud truez ouz an oll...

Fur 8,1

33 O! Pegen don eo pinvidigez ha furnez ha gouiziegez Doue! Pegen pell eo diuzom furchal e varnou hag heulia e roudou war e heñchou! ³⁴ Rag piou e-neus anavezet Spered an Aotrou ? Pe ive: piou a zo bet kuzulier dezañ ? ³⁵ Pe c'hoaz: piou e-neus prestet dezañ, ma vo rentet dezañ endro ?”

Iz 40,13
Jer 23,18

36 Rag Anezañ ha Drezañ hag Evitañ eo pep tra!...

Dezañ ar C'hloar a-hed ar c'hantvejou! Amen!...

- 12 -

GWELED PETRA EO BOLONTEZ DOUE!

Yn 4,24
1 Per 2,5

¹ Breudeur! Ho pedi stard a ran eta, dre drugarez Doue, da ginnig ho korvou evel provadenn veo, santel, plijuz da Zoue, evel ho lidadeg reiz! ² Ha na vezit ket stummet diouz ar Bed-mañ, med bezit treuz-stummet dre nevester ho spered, deoc'h da weled petra eo bolontez Doue: kement a zo mad, ha plijuz dezañ, ha dreist!

1 Kor 12,4

³ Rag dre ar c'hras bet roet din, e lavaran da gement-hini a zo en ho touez: arabad prizoud dreist ar pezh eo red prizoud! Med prizoud da jom reiz, pep hini diouz m'e-neus Doue muzuliet dezañ e vuzul a feiz!

1 Kor 12,5..

⁴ Rag evel ma z'eus deom leiz izili en eur c'horv nemetkén, ha ma n'eus ket d'an oll izili an heveleb ober, ⁵ evelse ive, goude deom-ni beza e-leiz, n'eus ahanom-oll nemed eur C'horv er C'hrist! Gand-se avad, ez om pep hini ezel an eil euz egile! ⁶ Bez' ez eus deom avad donezonou disheñvel hervez ar c'hras bet roet deom: pe ar brofediez hervez skwer ar feiz, ⁷ pe ar zervich o servicha, pe ar c'helenner o kelenn, ⁸ pe ar frealzer o frealzi, pe an alu-

1 Per 4,10

zenner o ranna gand eeunder, ar rener o rén gand aked, an trugarezer o veza laouen.

Fil 2,3
1 Per 1,22
Heb 13,2
9 Ra vezo didouell ho karantez: deoc’h kasaad an droug ha chom stag d’ar mad; ¹⁰ dre vreudeuriez, beza karantezuz an eil evid egile, ha dougen doujañs an eil d’egile; ¹¹ beza aketuz heb leziregez, birvidig a spered, stag da zervicha an Aotrou; ¹² beza laouenneet dre an esperañs, gouest da badoud en drubuill, aketuz d’ar bedenn, ¹³ kenlodeg en ezommou an dud santel, dillo da zegemer an diavêzidi.

Mz 5,40
Lavariou 3.4.7.
14 Bennigit hoc’h heskinerien! Bennigit, ha na vallozit ket! ¹⁵ Deoc’h laouennaad gand ar re a zo laouen, gouela gand ar re a zo o ouela! ¹⁶ Prizit en heveleb doare kenetrezoc’h! Na brizit ket an traou uhel, med a-unan, klaskit an traou izel! N’it ket d’en em brizoud hoc’h-unan! ¹⁷ *“Na rentit ket droug a-eneb droug! Klaskit ober traou kaer dirag an oll!”* ¹⁸ Ma c’hell beza, diouz ma vezo deoc’h, bezit er peoc’h gand an oll!

Dt 32,35
Lav 25,21
19 Na gastizit ket drezoc’h hoc’h-unan, Breudeur karet! Med lezit lec’h d’ar gounnar, rag skrivet eo:

“Din-me ar c’hastiz: ‘Me eo an Hini’ a rento!” eme an Aotrou!

20 *“Med ma teu da enebour da gaoud naon, ro dezañ genaouadou da zebri! Ma teu da gaoud sehed, ro dezañ da eva! Oc’h ober evelse, e vezi o vernia glaou entanet war e benn!”*

21 Diwall da veza trehet gand an droug! Med bez trec’h war an droug gand ar mad!...

- 13 -

LEUNDER AL LEZENN EO AR GARANTEZ!

Mz 22,16
Yn 19,11
1 Per 2,13...
1 Ra zujo peb den d’ar galloudegeziou uhella, rag n’eus galloudegez ebed nemed digand Doue, rag ar re a-vremañ a zo bet urziet gand Doue! ² Evelse, an hini a eneb ouz ar galloudegez, a eneb ouz eun urz euz Doue! An eneberien a bako eur varn galed dezo o-unan; ³ rag ne vez ket ar renerien eur spont evid an oberou mad, med d’ar re fall! Ha c’hoant az-peus chom heb kaoud aon rag ar galloudegez? Gra ar mad, hag az-po meuleudi diganti! ⁴ Rag servicherez Doue eo-hi, en da geñver, evid ar mad! Ma teuez avad d’ober an droug, dit kaoud aon! Rag n’eo ket evid netra e toug ar c’hleze! Rag servicherez eo evid kastiza gand kounnar ar re a ra an droug...

Mz 22,21
5 Rag-se, red eo beza sujet n’eo ket hepkén en abeg d’ar Gounnar, med ive en abeg d’ar goustiañs. ⁶ En abeg dezi ive e tegasit an taillou, rag bez’ ez int servicherien Doue evid kaoud preder ouz kement-se. ⁷ Rentit ’ta da bep hini kement a zo dleet dezañ: an taillou d’an neb eo dleet an taillou, an truj d’an neb eo dleet an truj, an aon d’an neb eo dleet an aon, an enor d’an hini eo dleet an enor...

Mz 22,14... 8 Na dleit netra da zen nemed karantez an eil evid egile! Rag m'e-neus eun den karantez, hennez e-neus peurzevenet ar rest euz al Lezenn. 9 Rag kement-mañ: *'Ne avoultri ket! Ne lazi ket! Ne laeri ket! Ne c'hoantai ket!'* Hag eur gourhemenn bennag all e vefe, kendalhet eo kement-se el Lavar-mañ, a zo: 10 *"Kared a ri da nesa eveldout da-unan!"* Ar Garantez ne ra droug ebed da nesa! Leunder al Lezenn eo ar Garantez!

11 Anavezoud a rit an Amzer-mañ: a-vremañ ema deoc'h an eur da zével euz ho kousk! Rag tostoc'h eo deom bremañ ar zilvidigez eged pa oam-ni deuet da gredi! 12 Eet an Noz war-raog, tosteet an Deiz! Pellaom eta oberou an Deñvalijenn! Gwiskom armou ar Sklêrijenn! 13 Evel e-kreiz an Deiz, baleom direbech, n'eo ket er c'horvajou, n'eo ket er mezvaduriou, n'eo ket er riboderez, n'eo ket en hudurnez, n'eo ket er rendael, n'eo ket en avi, 14 med gwiskit Jezuz Krist an Aotrou! Ha mirit da gaoud preder d'an natur-den beteg ober he c'hoantegeziou!...

- 14 -

MA VEVOM, E VEVOM EVID AN AOTROU!

1 Degemerit mad an hini a zo dinerz er feiz, heb barn e zivizou! 2 Unan, hervez e feiz, a zebr pep tra! An hini dinerz na zebr nemed legumaj! 3 Arabad d'an hini a zebr ober eun den-a-netra gand an hini na zebr ket! An hini na zebr ket avad, arabad dezañ barn an hini a zebr, rag Doue e-neus e zegemeret mad! 4 Piou a zo ahanout-te, te hag a varn servicher eun Diaveziad? Dirag an Aotrou e chom en e zav pe e kouez! En e zav e chomo, avad, rag gouest eo Doue d'e zelher en e zav.

5 Rag dibab a ra hemañ etre devez ha devez! Egile a zibab peb devez! 6 Ra vezo pep hini peur-starteet en e zoñj e-unan! An neb a zibab an devez, a zibab evid an Aotrou ; an hini a zebr, a zebr evid an Aotrou, hag e trugareka an Aotrou ; an neb na zebr ket, a jom heb debri evid an Aotrou, hag e trugareka an Aotrou... 7 Rag ne vev nikun ahanom evitañ e-unan, ha ne varv nikun evitañ e-unan! 8 Rag ma vevom, e vevom evid an Aotrou, ha ma varvom, e varvom evid an Aotrou. Daoust deom eta da veva pe deom da vervel, ez om d'an Aotrou! 9 Rag evid kement-mañ eo deuet ar C'hrist da vervel ha da adveva, dezañ da veza Aotrou war ar re varo koulz hag ar re veo.

10 Te avad, perag e varnez da vreur ? Pe c'hoaz: perag e rez-te gand da vreur eun den-a-netra ? Rag oll e teuim dirag Lez-varn Doue, 11 rag skrivet eo:

"Beo on-me, eme an Aotrou! Dirazon e plego peb glin!"

"Ha peb teod a anzavo Doue!"

12 Evelse eta, diwarnañ e-unan e rento pep hini kont da Zoue.

Mz 15,11
Ob 10,15

¹³ Na zeuom ket kén da varn an eil egile, med barnit kentoc’h kement-mañ: “*diwall da lakaad d’az preur eur mên-asoup pe eur skoill!*” ¹⁴ Dre Jezuz on Aotrou ec’h ouzom hag e kredom stard: n’eus netra dihlan drezañ e-unan! Med d’an neb a ziviz eo dihlan eun dra, da hennez eo dihlan! ¹⁵ Rag ma vez da vreur glaharet diwar da voued, ne valeez ket kén hervez ar garantez. Arabad dit, dre da voued, kas da goll an den-ze a zo bet evitañ marvet ar C’hris! ¹⁶ Arabad eta e vefe blasfemet ho mad! ¹⁷ Rag n’eo ket Rouantelez Doue e boued hag evaj, med e justiz ha peoc’h ha levenez er Spered Santel: ¹⁸ an hini a zervich dre-ze ar C’hris, a blij da Zoue hag a vez kavet mad gand an dud! ¹⁹ Evelse ’ta, klaskom kement a zegas ar peoc’h hag ar skwer-vad en on touez!

1 Kor 8,13

²⁰ En abeg d’eun tamm boued, diwall da ziskar oberenn Doue! Glan eo pep tra, med eun dra fall eo d’eun den debri en eur asoupa e vreur! ²¹ Kaer eo avad chom heb debri kig hag heb eva gwin hag heb ober tra pe dra a vefe drezi da vreur asoupet pe skoillet pe dinerzet! ²² Te, ar feiz az-peus, dit he delher evidout da-unan dirag Doue: eüruz an hini ne zeu ket d’en em varn e-unan er pez e-neus kavet mad! ²³ An neb avad a jom nehet, ma teu dezañ debri, ema-eñ barnet, rag ne ra ket diwar feiz! Kement-tra n’eo ket diwar feiz a zo pehed!

- 15 -

SAMMA SEMPLADUREZIOU AN DUD DINERZ!

1 Kor 9,19
1 Kor 10,24

¹ Ni avad, tud nerzuz ahanom, ni a dle samma sempladureziou an dud dinerz, ha n’eo ket klask ar pez a blij deom. ² Da bep hini ahanom klask plijoud d’e nesa evid ar mad, a-benn rei skwer-vad.

Salm 69,10
1 Kor 10,11

³ Rag n’e-neus ket greet ar C’hris ar pez a blij dezañ e-unan, med hervez m’eo skrivet: “*Rebechou ar re a rebech deoc’h-c’hwi a zo kouezet warnon-me!*” ⁴ Rag kement a zo bet skrivet, evid or c’helennadurez eo bet skrivet, deom-ni da gaoud esperañs dre an dalc’h hag ar frealz a ro ar Skrituriou! ⁵ Ra zeuio Doue an dalc’h hag ar peoc’h da rei deoc’h soñjal en heveleb doare kenetrezoc’h hervez Jezuz Krist, ⁶ deoc’h, unan a galon hag unan a vouez, dougen gloar da Zoue ha Tad Jezuz Krist on Aotrou.

Mz 15,24

⁷ Rag-se, degemerit mad an eil egile, evel m’e-neus ive ar C’hris ho tegemeret evid gloar Doue! ⁸ Rag lavared a ran: deuet eo ar C’hris da veza Servicher an Amdroc’h evid diskouez gwiriegez Doue, evid degas da wir ar promesaou greet d’on tadou! ⁹ Hag ar Baganed avad a zoug gloar da Zoue diwar e drugarez, hervez m’eo skrivet:

Salm 18,50

“*Ablamour da-ze, ho meuli a rin e-touez ar Baganed,*
“Ha Salmou a ganin d’hoc’h Ano!””

Dt 32,43

¹⁰ Ha c’hoaz e lavar: “*Laouennait, Paganed, a-unan gand e Bob!*”

Salm 117,1...

¹¹ Ha c’hoaz: “*C’hwi oll, Paganed, meulit an Aotrou!*”

“Ra vezo an oll boblou o kana dezañ meuleudi!”

¹² Hag e lavar c’hoaz Izai:

Iz 11,10
Mk 10, 12...

“Bez’ e chomo eur wrizienn da Jese,

“Hag an Hini a zavo diwarni a réno ar Baganed,

“Hag ennañ ec’h espero ar Baganed!”

¹³ Ra zeuio Doue an esperañs d’ho leunia a beb levenez hag a beoc’h diwar gredi, deoc’h da greñvaad en esperañs dre nerz ar Spered Santel!

Fil 2,17

¹⁴ Me ive, en ho keñver, me a gred stard ez oc’h-c’hwil ive leun a vadelez, leuniet a beb ouiziegez, gouest ive da alia an eil egile. ¹⁵ Hardisohig ameus-me skrivet deoc’h a dachadou, evid degas deoc’h koun euz an dra-mañ: diwar ar c’hras bet roet din gand Doue, ¹⁶ ez on-me deuet da veza ministr Jezuz Krist evid ar Baganed, da lida Servich sakr Aviel Doue, ma teuio Provadenn ar Baganed da veza plijuz-kaer, santelleet gand ar Spered Santel.

2 Kor 12,12

¹⁷ Al lorc’h am-eus-me eta, e Jezuz Krist, eo ar pezh am-eus greet evid Doue! ¹⁸ Rag ne gredin lavared seurt diwar-benn an traou n’e-neus ket ar C’hris sevenet drezon, evid degas ar Baganed da zentidigez ar feiz, dre Gomz ha dre Ober, ¹⁹ dre nerz sinou ha burzudou, dre nerz Spered Doue! ²⁰ Evelse am-eus klasket an enor da brezeg an Aviel el lec’h na veze ket c’hoaz galvet Ano ar C’hris, din miroud da zewel ti war eun diazez greet gand unan bennag all, ²¹ hervez m’eo skrivet:

Mk 16,17

Iz 52,15

“Ar re n’eus bet roet kelou ebed dezo diwar-e-benn a zeuio d’e weled!

“Hag ar re n’o-deus klevet seurt ebed, a intento!”

Rom 1,10...

²² Rag-se ive, meur a dro eo bet miret ouzin mond davedoc’h-c’hwil! ²³ Bremañ avad, pa n’eus mui lec’h din da jom er vro-mañ, ha pa z’eus din c’hoant braz da vond davedoc’h, abaoe kalz bloaveziou, ²⁴ pa vezin o vond warzu ar Spagn, en eur dremen, am-eus fiziañs d’ho kweled ha da veza ambrouget ganeoc’h beteg di, ma vezan bet da genta dudiet eun tammig ganeoc’h! ²⁵ Bremañ avad emañ o vond da Jeruzalem, da zervicha an dud santel, ²⁶ rag plijet eo d’ar Makedoni ha d’an Akai ober eur gest evid ar beorien a zo e-touez an dud santel e Jeruzalem. ²⁷ Plijet eo dezo henn ober, rag bez’ ez int dleour en o c’heñver: ar Baganed, deuet da veza lodeg en o madou speredel, a dle ive servicha dezo ar madou naturel...

Ob 18,21...

1 Kor 16...
2 Kor 8...

Fil 1,27
2 Tes 3,1...

²⁸ Kaset kement-se da benn, ha siellet ar Frouez-ze etre o daouarn, ez in-me dre ho Kêr d’ar Spagn! ²⁹ Gouzoud mad a ran: o vond davedoc’h, ez in gand leunder bennoz ar C’hris! ³⁰ Ho pedi stard a ran eta, Breudeur, dre Jezuz Krist on Aotrou, ha dre Garantez ar Spered: stourmit a-unan ganin dre ar pedennou a gasoc’h evidon da Zoue, ³¹ ma vezin diframmet diouz daouarn an dud diskredig a zo er Jude, ma vezo va ministrerez e Jeruzalem degemeret mad gand an dud santel, ³² ha ma c’hellin-me ive, eur wech degouezet davedoc’h el levenez, gand bolontez Doue, diskuiza a-unan ganeoc’h...

- 16 -

HO SALUDI A RA AN OLL ILIZOU ER C'HRIST!

- Ob 18,18 ¹ Erbedi a ran deoc'h ar c'hoar Febe, servicherez Iliz Kenkre, ² deoc'h d'he degemer er C'hrist, en eun doare deread ouz an dud santel, ha deoc'h d'he skoazella: skoazellet he-deus-hi kalz tud, ha me va-unan ive! ³ Saludit Priska hag Akile, va c'henlabourerien e Jezuz Krist: ⁴ evid savetei va buez-me, o-deus int-i risklet o gouzoug! N'eo ket me hepken o zrugareka, med ive oll Ilizou ar Baganed! ⁵ Saludit ive an Iliz a zo en o zi; saludit Epanet, va mignon karet, a zo kenta frouezenn an Azi evid ar C'hrist! ⁶ Saludit Mari, hi hag he-deus poaniet kemend-all evidoc'h! ⁷ Saludit Andronig ha Juni, kenouenn ganin ha kenhereidi ganin, brudet mad e-touez an Ebestel, ha degouezet araozon-me daved ar C'hrist! ⁸ Saludit Ampliat, va breur karet er C'hrist. ⁹ Saludit Urban, kenlabourer ganeom er C'hrist, va breur karet! ¹⁰ Saludit Apel, kavet mad er C'hrist. ¹¹ Saludit ar vreudeur euz Ti Aristobul; saludit Herodion, kenouenn ganin; saludit an dud euz ti Narkiz, ar re a zo en Aotrou! ¹² Saludit Trifen ha Trifoz: poaniet o-deus en Aotrou! Saludit Persiz, va c'hoar karet! Kemend-all he-deus poaniet en Aotrou! ¹³ Saludit Rufuz, bet dibabet en Aotrou, hag e vamm, a zo mamm din-me ive! ¹⁴ Saludit Asinkred, Flegon, Hermaz, Patrobe, Hermez hag ar Vreudeur a zo ganto! ¹⁵ Saludit Filolog ha Julia, Nere hag e c'hoar Olimp, hag an oll dud santel a zo ganto! ¹⁶ Etrezoc'h, saludit an eil egile dre eur pok santel! Ho saludi a ra an oll Ilizou er C'hrist!
- Mz 7,15 ¹⁷ Ho pedi a ran, Breudeur, da daoler evez ouz ar re a zav rendaelou ha
Fil 3,19 skoillou a-eneb ar Gelennadurez ho-peus-c'hwi desket, ha tehit diouto! ¹⁸
Gal 6,11 Rag tud ar seurt-se ne zervichont ket an Aotrou, ar C'hrist, med o c'hov o-unan!... Gand komzou brao ha komzou flour, e touellont kalonou an dud dizroug... ¹⁹ Rag ho sentidigez deoc'h-c'hwi a zo brudet e-touez an oll: laouennaad a ran eta ablamour deoc'h! Me a fell din avad e vefec'h fur evid ar mad, ha dinamm e-keñver an droug!
- 1 Kor 14,20 ²⁰ Doue ar peoc'h avad a flastro dizale Satan dindan e dreid!
Mz 10,16 Gras Jezuz Krist, on Aotrou, da veza ganeoc'h!
- Gen 3,16 ²¹ Ho saludi a ra Timote, va c'henlabourer, Lusiuz, Jazon, ha
Ob 16,1... Sozipater, kenouenn ganin! ²² Ho saludi a ran en Aotrou, me Tersiu, me hag am-eus skrivet al Lizer-mañ! ²³ Ho saludi a ra Gaiuz, va ostiz hag hini an Iliz a-bez! Ho saludi a ra Erast, merour-Kêr, hag ar breur Quartuz!
- ²⁴ Gras Jezuz Krist, on Aotrou, ra vezo ganeoc'h oll! Amen!
- ²⁵ D'an Hini a c'hell ho kennerza
Ef 1,9; 3,5... Hervez va Aviel ha Kelou-Mad Jezuz Krist,
Hervez diskuliadenn ar Mister

Bet tavet en Amzeriou a-oll-viskoaz

²⁶ Bet disklêriet bremañ dre Skrituriou ar Brofeded,

Hervez kemenn an Doue peurbadel,

Bet diskuliet d'an oll Baganed

Rom 1,5
1 Tim 1,17

Dezo dond da zentidigez ar feiz,

²⁷ D'an Doue leun a furnez ha n'eus nemetañ,

Dre Jezuz Krist,

Dezañ ar C'hloar a-hed ar c'hantvejou a gantvejou!

AMEN



Pred or Zalver, Lokmelar. Sk J. F.

Lizer I da Gorintiz

I Kor 1, 1-9. O kuitaad kêr Aten (Ob. 18,11), e kerz Paol da Gorint, wardro ar bloavez 50, hag e lavar Doue dezañ: **“Dalc’h da brezeg amañ! Bez’ ez-eus din er Gêr-mañ eur Bobl niveruz!”** En eur ober bloaz hanter e tiazez Paol eun Iliz birvidig er porz-mor braz-se.

I Kor 1, 10 - 4. Kêr Gorint a oa brudet da veza divergont: diêz e oa d’ar gristenien delher war an hent mad! Wardro ar bloavez 55, e rañk Paol skriva dezo e lizer kenta. D’an Iliz, emezañ, n’eus diazeze all ebed eged Jezuz, marvet war ar groaz hag adsavet da veo, eur follentez evid ar Baganed, eur skoill evid ar Juzevien, med evid gwir, Nerz Doue, Furnez Doue!... D’ar Vinistred, prezeg Aviel ar Groaz ha diwall da lorhi: n’int nemed servicherien didalvez!

I Kor 5 - 7. D’ar gristenien kouezet er c’hadaliez, e ro Paol da intent e tle pep hini diwall ouz an hudurnez: **“Ar c’horv n’eo ket evid ar c’hadaliez, med evid Doue! Ho korvou a zo anezo izili d’ar Christ, eur Zantual d’ar Spered Santel!”** An dimezi a zo eun dra zantel: d’ar priedou beva en emzalc’h hag er garantez beteg o maro! Esoc’h eo avad chom dizimez, evel Paol: a greiz kalon e c’heller klask plijoud da Zoue! Med Doue a ro da bep hini e zonezon, ha da bep hini soñjal eo berr ar vuez!

I Kor 8 - 10. Petra ober diouz tammou kig bet kinniget d’an idolou ? An idolou n’int seurt! An tammou kig bet kinniget dezo n’int ket cheñchet! Eur c’hristen a c’hell o debri heb nehi! Med ma vez skoillet eur breur ouz da weled, arabad dit debri: **“Arabad dit kas da goll eur breur a zo bet Jezuz marvet evitañ!”**

I Kor 11 - 14. Bodadegou ar Gristenien e Korint, e-lec’h beza emzavuz, a vez dezo noazuz: pep hini a zebr e bred, lod a vez mezo, lod a jom gand an naon! D’an oll koania er gêr, ha da-c’houde lida Pred or Zalver en Iliz o reseo Korv ha Gwad Jezuz gand eur goustiañs c’hlan...

Ar Spered Santel a skuill war an Iliz donezonou speredel, da bep hini evel ma kar! Peb donezon a vez roet evid mad an oll, evel ma labour pep ezel er c’horv evid mad an oll izili. Oll asamblez eo ar Gristenien Korv ar C’hris, izili an eil d’egile! D’an oll klask mad an donezon gwella: ar Garantez!

I Kor 15. Ar C’hresianed ne felle ket dezo kredi e adsao ar c’horv: ar c’horv, emezo, a vir ouz ar spered da bara e zell war ar Wirionez pur!... Ha Paol da zisklêria dezo: **“Adsavet eo Jezuz! Paret e-neus dirag Pêr ha kalz re all ha dirazon-me zokén!”** Ma ne vefe ket adsavet, ne dalfe seurt ebed or feiz hag e vefem tud reuzeudig! Med adsavet eo, ha ni a adsavo ive! Med penaoz ec’h adsavim-ni ? Eur mister eo, med endro deom ez eus meur a seurt korvou, hag ouspenn-ze, pegen disheñvel eo an hadenn diouz ar blantenn pe diouz ar wezenn a zav diwarni! Evelse e c’hoarvezo: diwar or c’horv dister ha marvel ec’h aozo Doue deom eur c’horv nerzuz ha divarvel, heñvel ouz hini Jezuz en e c’hloar!

Gras da Zoue a ro deom an trec’h war ar maro

Dre Jezuz-Krist on Aotrou!

I DA GORINTIZ

-1-

AR C'HRIST OUZ AR GROAZ A ZO NERZ HA FURNEZ DOUE!

Ob 18...¹ Paol, galvet da Abostol Jezuz Krist dre volontez Doue, hag ar breur Sostên,² da Iliz Doue a zo e Korint, d'an dud santelleet e Jezuz Krist ha galvet 'santel', a-unan gand an oll re a c'halv Ano Jezuz Krist on Aotrou, e peb lec'h, en hoc'h hini hag en on hini: ³ deoc'h gras ha peoc'h digand Doue an Tad ha Jezuz Krist on Aotrou!

1 Tes 3-5
1 Yn 1,3
Yn 17,20
Ob 4,32
⁴ Trugarekaad a ran bepred an Aotrou evidoc'h, ablamour da c'hras Doue bet roet deoc'h e Jezuz Krist, ⁵ rag ennañ ez oc'h bet pinvidikeet e pep tra, e peb komz hag e peb gouiziegez, ⁶ hervez m'eo bet kreñveet Testeni ar C'hris en ho touez! ⁷ Evelse, ne ziouerit donezon ebed o c'hortoz Diskuliadenn Jezuz Krist, on Aotrou. ⁸ Eñ ive ho kreñvaio beteg-penn, deoc'h beza direbech a-benn Deiz Jezuz Krist, on Aotrou! ⁹ Feal eo Doue, ez oc'h bet galvet gantañ d'ar gomuniez gand e Vab Jezuz Krist on Aotrou.

Mz 28,19
¹⁰ Ho pedi stard a ran, Breudeur, dre Ano Jezuz Krist: komzit oll a-unvouez, mougit an disrannou etrezoc'h, hag ho-pet heveleb reiz hag heveleb meno! ¹¹ Rag gand tud Kloe eo bet diskuliet din diwar-ho-penn, va Breudeur, ez eus dael* en ho touez! ¹² An dra-mañ a lavaran: en ho touez e vez pep hini o lavared 'Me a zo da Baol', -'Me avad da Apolloz!', -'Me avad da Gefaz!', -'Me avad d'ar C'hris!'... ¹³ Daoust ha rannet eo ar C'hris ? Daoust ha bet eo Paol staget ouz ar groaz evidoc'h? Pe daoust hag en ano Paol ez oc'h bet badezet ? ¹⁴ Trugarekaad a ran Doue: n'am-eus badezet hini ahanoc'h nemed Krispuz ha Gaiuz, ¹⁵ kén na c'hell dén lavared ez oc'h bet badezet em ano! ¹⁶ Badezet am-eus c'hoaz avad tiad Stefan: a-hend-all, n'ouzon ket hag unan bennag all am-befe badezet! ¹⁷ Rag n'e-neus ket ar C'hris va c'haset da vadezi, med da embann an Aviel, ha n'eo ket dre furnez ar gomz, gand aon na vefe Kroaz ar C'hris kaset da netra!

Iz 29,14
¹⁸ Rag Komz ar Groaz a zo follentez d'ar re a ia da goll! D'an dud galvet avad, deom-ni, eo-hi Nerz Doue, ¹⁹ rag skrivet eo:

“Da goll e kasin furnez an dud fur,

“Ha skiant an dud skianteg a ziskarin!”

Mz 11,25
Lk 8,12
Rom 1,19...
Mz 12,38
Yn 4,38
²⁰ Pelec'h ema an dén fur ? Pelec'h ema ar Skrib ? Pelec'h ema rendaeler ar Bed-mañ? Daoust ha n'e-neus ket Doue penfollet furnez ar Bed? ²¹ Rag pa n'eo ket deuet ar Bed, gand ar furnez, da anavezoud Doue dre furnez Doue, e-neus Doue kavet mad savetei ar Grederien dre follentez an Embann... ²² P'ema ar Juzevien o c'houlenn sinou, hag ar c'hrisianed o klask furnez, ²³ emao-ni avad oc'h embann eur C'hris staget ouz ar groaz, eur skoill evid Juzevien, eur follentez evid Gresianed! ²⁴ Evid an dud galvet o-

* Dael: disput, tabut.

unan avad, Juzevien ha Gresianed, ez eo ar Mesiaz, Nerz Doue ha Furnez Doue!

2 Kor 13,4

25 Rag Folladenn Doue a zo furroc'h eged an dud! Ha sempladenn

Jak 2,1...

Doue a zo kreñvoc'h eged an dud! 26 Rag gwelit ar bodad tud galvet a zo ahanoc'h-c'hwi! Breudeur, n'eus ket ahanoc'h kalz a dud fur hervez an natur-den! N'eus ket kalz a dud gouizieg, n'eus ket kalz a dud a uhel-ouenn!

27 Med ar re foll euz ar Bed e-neus Doue dibabet evid ober méz d'an dud fur!

Hag ar re zister euz ar Bed e-neus Doue dibabet evid ober méz d'ar re greñv!

28 Hag ar re zi-ligenez euz ar Bed, ar re lakeet da netra, e-neus Doue dibabet,

Yn 17,19

hag ive ar re n'eus ket anezo, evid kas da netra ar re a zo anezo, 29 evid na zeuio den da lorha dirag Doue! 30 Rag dre Zoue emaac'h er C'hrist Jezuz!

Hemañ a zo deuet, dre Zoue, da veza evidom-ni Furnez, Justiz, hag ive

Jer 9,23

Santelez ha Daspren, 31 evid ma tegouezo evel m'eo skrivet: "*An neb a lorho, dezañ lorha en Aotrou!*"

- 2 -

KOMZ A REOM EUZ FURNEZ DOUE ER MISTER!

1 Ha me, en eur zond davedoc'h, Breudeur, n'on ket deuet da zege-

Gal 6,14

menn Testeni Doue gand levezon ar gomz pe ar furnez, 2 rag n'am-eus soñjet

gouzoud netra en ho touez nemed Jezuz Krist, hag Eñ stag ouz ar groaz! 3 Ha

davedoc'h on-me degouezet dister hag aonig ha krenedig-kenañ! 4 Va c'homz

ha va embann ne reent ket gand komzou eur furnez touelluz, med o tiskulia

1 Tes 1,5

ar Spered hag e c'halloud, 5 d'ho feiz beza diazezet, n'eo ket war furnez tud,

med war C'halloud Doue!

6 Euz Furnez e komzom-ni gand tud peur-gelennet, euz eur Furnez

avad ha n'eo ket hini ar Bed-mañ, nag hini renerien ar Bed-mañ, renerien o

vond da goll! 7 Med komz a reom-ni euz Furnez Doue er Mister, Furnez dal-

Rom 16,25

het kuzet, Furnez reizet gand Doue araog ar c'hantvejou evid e c'hloar! 8

N'eo ket deuet hini ebed euz renerien ar Bed d'he anavezoud, rag m'e-nijet

Lk 23,34

hec'h anavezet, n'o-dije ket staget ouz ar groaz Aotrou ar C'hloar! 9 Med

Iz 64,4

evel m'eo skrivet:

"Ar pezh n'eo deuet lagad ebed da weled,

"Ar pezh n'eo deuet skouarn ebed da gleved,

"Ha n'eo savet da galon den ebed,

"Ar pezh e-neus Doue reizet evid ar re E gar",

Mz 13,11

10 Kement-se e-neus Doue diskuliet deom-ni dre ar Spered, rag ar

Spered a furch pep tra, donderiou Doue zoken! 11 Rag pehini e-touez an dud

a c'hell anavezoud traou an den, nemed spered an den hepkén, ar spered a zo

ennañ? Evelse ive, nikun ne anavez traou Doue nemed Spered Doue! 12 Ni

Yn 16,13

avad n'on-eus ket degemeret spered ar Bed, med ar Spered euz a Zoue,

deom gouzoud kement a zo bet roet deom, dre c'hras, gand Doue!...

Yn 3,15 13 An traou-ze ivez a brezegom, n'eo ket avad gand komzou desket
gand eur furnez a-zen, med gand komzou desket gand ar Spered, oc'h heñ-
vellaad traou speredel gand traou speredel. 14 Eun 'den-naturel' ne zegemer
ket Donezonou Spered Doue, rag follentez eo kement-se evitañ! Ne c'hell ket
Iz 40,13 16 "Rag piou e-neus anavezet meiz* an Aotrou hag a zeuio d'e gentelia?" Ni
avad on-eus meiz an Aotrou!...

- 3 -

FURNEZ AN DUD A ZO FOLLENTEZ DIRAG DOUE.

Yn 16,12 1 Ha me, va Breudeur, n'am-eus ket gellet komz deoc'h evel da dud
Heb 5,12 speredel; med evel da dud 'naturel', evel da vugaligou er C'hrist! 2 Deoc'h-
c'hwi am-eus roet lâz da eva, ha n'eo ket boued, rag ne c'hellec'h kemer
netra all! Ne c'hellit ket c'hoaz zokén! 3 Rag c'hoaz ez oc'h 'naturel'! Pa
z'eus en ho touez avi ha rendael, daoust ha n'oc'h ket 'naturel', ha daoust ha
ne valeit ket hervez an natur-den? 4 Pa vez unan o lavared 'Me a zo da
Baol!', egile avad 'Me a zo da Apolloz!', daoust ha n'eus ket 'tud naturel'
ahanoc'h?

Lk 17,10 5 Petra 'ta a zo euz Apolloz ? Petra euz Paol ? Ministred hag o-deus ho
tegaset da gredi, pep hini hervez m'e-neus an Aotrou roet dezañ! 6 Me am-
eus plantet! Apolloz e-neus douret! Med Doue eo e-neus lakeet da greski! 7
Evelse, n'eo ket an hini a blant a zo anezañ eun dra bennag, nag an hini a vez
o toura! Med an Hini a laka da greski! 8 An hini a blant hag an hini a vez o
toura ne reont nemed unan: pep hini a zegemero e c'hopr diouz e boan e-
unan! 9 Rag ken-labourerien gand Doue ez om-ni! C'hwi eo Park-labour
Mk 13,3... Doue, Savadur Doue!...

1 Pèr 2,4 10 Hervez ar c'hras bet roet din gand Doue, e-giz eur penn-saver fur,
am-eus-me lakeet an Diazez. Unan all a zav ti warnañ! Da bep hini gweled
penaoz e sav ti! 11 Ne c'hell nikun lakaad eun Diazez all estreged an Hini
lakeet, da lavared eo: ar C'hrist Jezuz! 12 Ma teu unan bennag, war an
Diazez, da zével aour, arhant, mein talvouduz, koad, foenn, plouz, 13 oberenn
pep hini a vo anad, rag an Deiz he diskouezo, pa vezo diskuliet en tan; hag an
2 Tes 1,8 tan a amprouo oberenn pep hini, petra bennag a vefe anezi! 14 An hini a jomo
en he zav an oberenn e-no eñ savet, hennez a zegemero eur gopr! 15 Ma vez
pulluhet oberenn unan bennag, hennez e-no koll, eñ avad a vo salvet, med
evel dre an tan...

1 Kor 6,19 16 Daoust ha ne ouezit ket ez oc'h-c'hwi Santual Doue ? Hag ema
Spered Doue o chom ennoc'h ? 17 Ma teu unan bennag da ziskar Santual
Doue, Doue a ziskaro an den-ze, rag Santual Doue a zo santel, ha kement-se
ez oc'h-c'hwi!

* Meiz: soñj.

Job 5,13
Salm 94,11

¹⁸ Arabad da zen en em douella: ma z'eus unan bennag en ho touez hag a gav dezañ beza fur hervez ar Bed-mañ, ra zeuio da veza foll evid dond da veza fur! ¹⁹ Rag furnez ar Bed-mañ a zo follentez dirag Doue, rag skrivet eo: “*Me a bak an dud en o gwidre!*” ²⁰ Ha c'hoaz: “*An Aotrou a anavez divizou an dud fur: bez' ez int goull!*” ²¹ Evelse 'ta, arabad da zen lorha gand tud! Rag deoc'h eo an oll draou: ²² Paol pe Apolloz, pe Gefaz, pe ar Bed, pe ar vuez, pe ar maro, pe an traou a-vremañ pe an traou-da-zond! Deoc'h eo an oll draou! ²³ C'hwi avad a zo d'ar C'hrist, ar C'hrist avad a zo da Zoue!

- 4 -

NI A ZO FOLL ABLAMOUR D'AR C'HRIST!

Tit 1,7

¹ Evelse, ra zeuio an dud d'or c'hemer evid servicherien ar C'hrist, ha Ministred Misteriou Doue! ² Diwar-ze e klasker e-touez ar Vinistred e vefe eun den kavet feal! ³ Eun dra euz an disterra eo din-me avad beza barnet ganeoc'h pe gand barnerien eul Lez-Varn! Med me va-unan n'en em varnan ket! ⁴ Evidon va-unan, n'on-me gouizieg a netra, med n'on ket justizet ablamour da-ze! An Hini am barn eo an Aotrou! ⁵ Evelse, mirit da varn tra-pe-dra araog ar poent, ken na zeuio an Aotrou! Eñ a sklêrijenno traou kuzet an Deñvalijenn hag e tisklêrio menozioù kuzet ar c'halonou, ha neuze e teuio ar veuleudi da bep hini digand Doue!

Lk 12,42

Yn 5,22

Rom 12,6
Jak 2,17

⁶ Kement-se eta, Breudeur, am-eus degaset da dalvoud ennon hag e Apolloz, ablamour deoc'h, deoc'h deski ennom-ni an dra-mañ: “*Netra dreist ar pezh a zo skrivet!*”, gand aon na zeufec'h da c'hweza gand al lorc'h, unan evid egile a-eneb unan all!... ⁷ Rag piou a ra dit beza dispar ? Petra a zo dit ha n'az-peus ket degemeret ? Ha m'az-peus degemeret, perag lorha evel pa n'az-pefe ket degemeret? ⁸ A-vremañ ez oc'h-c'hwi leuniet! A-vremañ ez oc'h pinvidikeet! Hebdom-ni ez oc'h deuet da rén! Mad-tre ma z'oc'h deuet da rén, deom-ni ive rén ganeoc'h!

Heb 10,33

2 Kor 11,23

⁹ Rag kaoud a ra din e-neus Doue on diskouezet, ni an Ebestel, evel tud dister, peuz-varo! Rag deuet om-ni da veza eun arvest evid ar Bed, evid êlez ha tud! ¹⁰ Ni a zo foll ablamour d'ar C'hrist, c'hwi avad a zo fur er C'hrist! Ni a zo dister, c'hwi avad a zo kreñv! C'hwi a zo brudet, ni avad a zo dizenoret! ¹¹ Beteg an eur-mañ e vezom-ni ha gand an naon ha gand ar zehed hag en noaz! Cholpadet* e vezom ha kaset amañ hag ahont! ¹² Hag e poaniom da labourad gand on daouarn! Pa vezom dismeget e vennigom! Pa vezom heskinet e talhom! Pa vezom mallozet e frealzom! ¹³ Evel skubachou ar Bed om-ni deuet da veza, evel lastez an oll beteg bremañ!

Gal 4,19
1 Tes 2,11

¹⁴ N'eo ket avad evid ober méz deoc'h e skrivan kement-se, med evid ho kentelia evel va bugale muia-karet! ¹⁵ Hag ho-pefe kelennerien a-vilierou er C'hrist, n'ho-peus ket meur a dad, rag er C'hrist Jezuz, dre an Aviel, me eo am-eus greet deoc'h genel! ¹⁶ Ho pedi stard a ran eta: kemerit skwer diwarnon-me!

* Cholpata: javedata, fasadi, skouarnata.

¹⁷ Ablamour da-ze, am-eus kaset davedoc'h Timote, a zo din eur mab karet ha feal en Aotrou, hag a zegaso deoc'h koun euz an heñchou a heulian-me er C'hrist, hervez ma kelennan e peb lec'h, e peb Iliz.

¹⁸ Evel pa vefe din chom heb mond davedoc'h, ez eo deuet lod da c'hweza gand lorc'h! ¹⁹ Med mond a rin dillo davedoc'h, ma fell d'an Aotrou! Hag ec'h anavezin, n'eo ket komz an dud c'hwezet-ze, med o galloud! ²⁰ Rag Rouantelez Doue n'ema ket e komz, med e galloud! ²¹ Petra a fell deoc'h ? Ma teuin-me davedoc'h gand ar vaz ? Pe er garantez hag en eur spered a zouster?

- 5 -

EUN TAMM GOELL A ZEU DA C'HOÏ AR BERN TOAZ!

¹ Dreist-oll e vez klevet ez eus en ho touez serherez*! Ha ker gwaz serherez ma na vez ket kavet kement-se e-touez ar Baganed zokén ha m'e-neus unan ahanoc'h kemeret gwreg e dad! ² Hag ez oc'h-c'hwi c'hwezet a lorc'h! Ha n'ho-peus ket kentoc'h hirvoudet evid ma vefe lamet diouz ho touez an hini e-neus greet ar seurt taol ?

Mz 16,19
Mz 18,18
1 Pèr 4,6

³ Rag me, -pell diouzoc'h a-gorv, med a-spered aze ganeoc'h-, evel pa vefen aze am-eus a-vremañ barnet an hini e-neus greet ar seurt taol: ⁴ en Ano Jezuz on Aotrou, bodet ni oll, c'hwi ha va spered-me, dre c'halloud Jezuz on Aotrou, ⁵ deom-ni rei ar seurt dén da Zatan, ma z'aio e gorv da fall ha ma vo salvet e spered da Zeiz on Aotrou!...

Gal 5,9

⁶ N'eo ket kaer ho tigarez da lorhi! Daoust ha ne ouezit ket e teu eun tammig goell da c'hoi ar bern toaz en e bez ? ⁷ Deoc'h en em c'hlinnaad piz diouz ar goell koz, deoc'h da veza eun Toaz nevez, hervez ma z'oc'h dihoell! Rag or Pask ive, ar C'hrist, a zo bet lid-lazet! ⁸ Evelse, lidom ar Gouel, n'eo ket gand goell koz, na gand goell an drougiez hag ar fallagriez, med gand baraennou dihoell ar c'hlander hag ar wirionez...

Mz 18,17

⁹ Skrivet am-oa deoc'h, em lizer, diwall da zarempredi gand tud serheg. ¹⁰ Med n'eo ket a-grenn gand tud serheg ar Bed-mañ, pe gand an das-tumerien pe ar skraperien pe an idolerien, peogwir e rankfec'h neuze kerzed er-mêz euz ar Bed-mañ! ¹¹ Skrivet am-oa neuze deoc'h diwall da zarempredi ma teu unan bennag anvet 'Breur' da veza serheg pe zastumer pe idoler pe damaller pe vezvier pe c'hoaz skraper! Gand ar seurt dén, diwall zoken da zebri gantañ...

Dt 13,5

¹² Rag perag din-me barn an dud-diavêz ? Daoust ha c'hwi ne varnit ket an dud-diabarz ? ¹³ An dud-diavêz, Doue o barno. "*Ha lamit an hini droug euz ho touez*"!

* Serherez: riboderez, gastaouèrèz...

- 6 -

HO KORV A ZO EUR ZANTUAL D'AR SPERED SANTEL...

Disk 3,21
Disk 20,4

¹ Unan bennag ahanoc'h, dezañ eur gudenn gand unan all, a gred beza barnet gand tud direiz ha n'eo ket gand 'tud santel'! ² Daoust ha ne ouezit ket e vezo an dud santel o varn ar Bed ? Ma vez ar Bed barnet ganeoc'h, n'oc'h ket gouest evid ar breujou disterra ? ³ Daoust ha ne ouezit ket e varnim an êlez ? Kentoc'h-a-ze avad traou ar vuez-mañ!

Mz 5,39

⁴ M'ho-peus eta breujou diwar draou ar vuez-mañ, da varn e lakit tud a dremen en Iliz da veza tud-a-netra! Evid ober méz deoc'h hel lavaran! ⁵ Evelse, n'eus ket en ho touez dén fur ebed a c'hellfe barn etre Breur ha Breur! ⁶ Med eur Breur gand eur Breur all a glask beza barnet, ha dirag tud diskredig! ⁷ A-vremañ avad eo deoc'h eur gizadenn, ho-pefe breujou etre-zoc'h! Perag ne c'houzañvit ket kentoc'h an direiz! Perag ne c'houzañvit ket kentoc'h beza laeret ? ⁸ Med c'hwi hoc'h-unan a ra an direiz hag al laeroñsi, ha kement-se d'ho Preudeur!

Gal 5,19

⁹ Daoust ha ne ouezit ket n'o-do ket an dud direiz Rouantelez Doue da hêrez? Diwallit da veza touellet! Na serheged, nag idolerien, nag avoultre-rien, na gadaled, na pôtrede ordeduz kenetrezo, ¹⁰ na laeron, na dastumerien, na mezverien, na tamallerien, na skraperien, n'o-do Rouantelez Doue da hêrez! ¹¹ Ha kement-se e oa lod ahanoc'h-c'hwi! Med justizet oc'h bet en Ano Jezuz Krist on Aotrou ha dre Spered on Doue!

2 Kor 4,14

¹² Pep tra a zo aotreet ganin, med n'eo ket pep tra talvouduz din! Pep tra a zo aotreet ganin, med n'eo ket din beza sujet d'eun dra bennag! ¹³ Ar bouejou a zo evid ar c'horv, hag ar c'horv evid ar bouejou. Doue avad a gaso da netra hag ar re-mañ hag hennez! Ar c'horv n'eo ket evid ar zerherez, med evid Doue, ha Doue evid ar c'horv.

1 Kor 12,27

¹⁴ Doue avad, hag e-neus adsavet an Aotrou, on adsavo ni-ive, dre e c'halloud! ¹⁵ Daoust ha ne ouezit ket eo ho korvou izili ar C'hrist ? Ha kemer a rafen eta izili ar C'hrist evid ober anezo izili eur zerc'h ? Arabad din! ¹⁶ Daoust ha ne ouezit ket e teu an neb a zo unanet d'eur zerc'h, da veza ganti eur c'horv nemetkén ? "*Rag, eme Doue, ne vezint o daou nemed eur c'horv hep kén!*" ¹⁷ An hini avad a zo unanet da Zoue a zeu da veza gantañ eur Spered nemetkén! ¹⁸ Diwallit diouz ar zerherez! Kement pehed a rafe eun dén a zo en diavêz d'e gorr! An neb a zerc'h a bec'h en e gorr e-unan...

Rom 3,24
Fil 1,20

¹⁹ Daoust ha ne ouezit ket ez eo ho korv eur zantual d'ar Spered Santel, a zo o chom ennoc'h hag ho-peus bet digand Doue, ha n'oc'h ket kén deoc'h hoc'h-unan? ²⁰ Rag dasprenet oc'h bet e priz! Dougit neuze gloar da Zoue en ho korv!

- 7 -

KAER EO CHOM EVEL MA Z'ON-ME!

Ef 5,21

¹ E-keñver ar pezh ho-peus skrivet din, kaer eo da eun den chom heb touch ouz ar vaouez. ² Evid diwall diouz serherez, red eo da beb gwaz kaoud e wreg, ha da beb maouez kaoud he gwaz. ³ D'ar gwaz rei he gwir d'e wreg, ha d'ar wreg koulz all e rei d'he gwaz. ⁴ Ar wreg n'he-deus ket galloud war he c'horv, med he gwaz! Evelse ive, ar gwaz n'e-neus ket galloud war e gorr e-unan, med e wreg. ⁵ Etrezoc'h, ne vo ket an eil dioueret diouz egile, -nemed diwar emgleo, evid eur pennadig, deoc'h d'en em lakaad da bedi-, ha bezit adarre asamblez, gand aon na zeufe Satan d'ho tenti dre c'hadaliez! ⁶ Kement-se a lavaran evel eur meno, ha n'eo ket evel eur gourhemenn! ⁷ Me a fell din avad e vefe an oll eveldon-me, med bez' e-neus pep hini e zonezon digand Doue, unan evel-henn, egile evelse...

Mz 19, 12

Mz 5,32
I Tim 5,14

Mz 19,9

⁸ Me a lavar avad d'an dud dizimez ha d'an intañvezed: kaer eo dezo ma chomont eveldon-me! ⁹ Ma n'int ket mestr warno o-unan, dezo dimezi: rag gwelloc'h eo dimezi eged beza entanet! ¹⁰ D'ar re zimezet e kemennan, -n'eo ket me avad, med an Aotrou!-: arabad d'eur wreg tehed kuit diouz he gwaz! ¹¹ Ma teu da dehed kuit, dezi chom dizimez pe ober peoc'h gand he gwaz! Hag arabad d'ar gwaz kas kuit e wreg...

¹² D'an oll e lavaran -me avad ha n'eo ket an Aotrou-: ma teu d'eur Breur kaoud eur wreg difeiz, ha ma asant-hi da veva gantañ, arabad dezañ he c'has kuit! ¹³ Ma tegouez d'eur wreg kaoud eur gwaz difeiz, ha ma asant hemañ da veva ganti, arabad dezi kas kuit he gwaz. ¹⁴ Rag santelleet e vez ar gwaz difeiz en e wreg, ha santelleet e vez ar wreg difeiz er Breur: a-hend-all e vefe ho pugale dihlan! Bremañ avad ez int santel! ¹⁵ Ma teu avad an hini difeiz da dehed kuit, ra deho kuit! Ne vez ket sujet ar Breur pe ar C'hoar, pa dro an traou evelse! D'ar peoc'h e-neus Doue ho kalvet! ¹⁶ Ha gouzoud a rez, maouez, ha bez' e salvi da waz ? Ha gouzoud a rez, gwaz, ha bez' e salvi da wreg ?

Rom 2,25
Gal. 5,6...

Filem 16

¹⁷ A-hend-all, evel m'e-neus an Aotrou muzulet da bep hini, evel m'e-neus Doue galvet pep hini, evelse eo da bep hini bale, hag evelse e kemennan-me en oll Ilizou! ¹⁸ Galvet eo bet eun den, hag eñ amdrohet ? Arabad dezañ klask beza aozet! Ha diamdroc'h eo bet galvet eun den ? Arabad dezañ beza amdrohet! ¹⁹ An amdroc'h n'eo netra! An diamdroc'h n'eo netra! Mired gourhemennou Doue eo! ²⁰ Er stad m'eo bet galvet pep hini, enni eo dezañ chom! ²¹ Sklav e oas pa z'out bet galvet ? Na vez ket nehet! Med ma c'hellez zokén dond da veza frank... tenn kentoc'h da vad! ²² Rag ar sklav, pa vez galvet en Aotrou, a zo eur frankizad d'an Aotrou! Evelse, an den frank, pa vez galvet, a zo eur sklav d'ar C'hrist! ²³ Dasprenet oc'h bet er priz! Na zeuit ket da veza sklav d'an dud! ²⁴ Er stad m'eo bet galvet pep hini, da bep hini chom enni dirag Doue!

- 25 E-keñver ar gwerhez, n'on-eus gourhemenn ebed digand an Aotrou. Eun ali mad a roan avad, e-giz eun den deuet, diwar drugarez an Aotrou, da veza kreder. ²⁶ Me a gav din eta ez eo an dra-mañ kaer, en abeg da drubuill an amzer-mañ: kaer eo d'eun den beza evel-henn. ²⁷ Ha liammet out ouz eur wreg ? Na glask ket an dro da veza diliammet! Ha diliammet out diouz ar wreg? Na glask ket a wreg! ²⁸ Ma z'out deuet da zimezi, n'az-peus ket pehet! Ha ma z'eo deuet ar werhez da zimezi, n'he-deus ket pehet! Med trubuill o-do an dud-ze en o c'horv, ha me am-eus damant deoc'h!
- Lk 21,23
- 29 Kement-mañ a lavaran, Breudeur: eet eo berr an Amzer! Neuze 'ta, ha d'ar re o-deus gwrazez beza evel ma n'o-defe ket! ³⁰ Ha d'ar re a zo o ouela, evel ma na ouelfent ket! Ha d'ar re a zo laouen, evel ma na vefent ket laouen! Ha d'ar re a brén, evel ma n'o-defe netra! ³¹ Ha d'ar re a zo oc'h ober gand ar Bed, evel ma na rafent ket! Rag ema stumm ar Bed-mañ o tremen! ³² Me a fell din avad e vefec'h dinec'h! An hini dizimez a vez nehet gand traou an Aotrou o klask penaoz plijoud dezañ! ³³ An hini dimezet a vez nehet gand traou ar Bed-mañ, o klask penaoz plijoud d'e wreg, ³⁴ hag e vez rannet! Ar vaouez dizimez hag ar werhez a vez nehet gand traou an Aotrou, dezo da veza santel hag a gorr hag a spered. An hini a zo dimezet a vez nehet gand traou ar Bed, o klask penaoz plijoud d'he gwaz! ³⁵ Kement-se a lavaran, evid ho mad, ha n'eo ket evid stlepel warnoc'h eur roued, med evid ar pez a zo kaer deoc'h ha mad d'ho staga dinec'h ouz an Aotrou!
- Lk 10,39
- ³⁶ Ma kav da unan bennag ez eo digempenn evid e werhez, m'ema-hi pell 'zo en oad-dimezi, hag ez eo red dezañ ober evel-se, dezañ ober evel ma kar: ne bec'h ket, dezo dimezi! ³⁷ An hini avad a zalc'h stard en e galon, pa n'eus dezañ netra red, an hini a zo dezañ galloud war e volontez e-unan hag e-neus divizet kement-mañ en e galon: delher gantañ e werhez, hennez a ra kaer! ³⁸ Evelse eta, an hini a zimez e werhez a ra kaer; hag an hini ne zimez ket a ra gwelloc'h!
- Rom 7,2
- ³⁹ Eur wreg a vez liammet e-keid ha ma vev he gwaz. Ma z'eo avad marvet he gwaz, ez eo-hi frank da zimezi gand an hini a gar, med en Aotrou hepkén! ⁴⁰ Eürusoc'h e vezo avad ma chom evelse, d'am meno ! Ha me ive a zoñj din kaoud Spered Doue!

- 8 -

AR GARANTEZ A RO SKWER VAD!

- Rom 15,2
- ¹ E-keñver ar c'hig bet kinniget d'an idolou, ec'h ouzom on-eus oll 'gouiziegez'! Ar 'ouiziegez' a laka da c'hweza, ar garantez avad a ro skwer vad! ² Ma soñj da unan bennag 'gouzoud', ne 'oar' ket c'hoaz evel m'eo red 'gouzoud'. ³ Ma teu unan bennag da gared Doue, ez eo bet hennez 'anavezet' gantañ.
- Yn 10,34
Ef 4,5-6...
Kol 1,16
- ⁴ E-keñver ar boued bet eta kinniget d'an idolou, gouzoud a reom-ni n'eus idolenn ebed er Bed, ha n'eus Doue ebed nemed Unan hepkén! ⁵ Ha

goude ma z'eus ano euz doueou en Neñv pe war an douar, hag evel ma z'eus ano euz meur a zoue ha meur a aotrou,⁶ evidom-ni avad n'eus nemed eun Doue hepkén, an Tad, a zeu anezañ pep tra hag ez om-ni evitañ, hag eun Aotrou hepkén, Jezuz Krist, a zo drezañ pep tra ha ni ive drezañ...

Rom 14...⁷ Med n'ema ket en oll ar 'ouiziegez'. Lod avad, dre gustum beteg-henn e-keñver an idolou, a zebr ar c'hig-se evel kig bet kinniget d'an idolou, hag o c'houstiañs, gwan ma z'eo, a vez nammet!⁸ N'eus avad boued ebed gouest d'or c'has dirag Doue! Goude deom chom heb debri, nann, ne vezom ket en diouer! Ha goude deom debri, nann, ne vezom ket er founnder!

Mz 18,6
Lk 17,2
⁹ Gwelit na zeufe marteze ho kwir da veza eur skoill evid an dud gwan!¹⁰ Rag ma teu unan bennag d'az kweled, -te hag az-peus ar 'ouiziegez'!-, astennet ouz taol e templ an idolou, daoust ha koustiañs an den gwanze ne vo ket skweriet da zebri kig bet kinniget d'an idolou?¹¹ Ha setu kaset da goll, diwar da 'ouiziegez'-te, ar Breur a zo bet marvet ar C'hrist evitañ!¹² Evelse, o pehi ouz ho Preudeur hag o c'hloaza o c'houstiañs gwan, emac'h o pehi ouz ar C'hrist!¹³ Rag-se, ma vez va boued o skoilla va Breur, nannzur, ne zebrin-me biken a gig, gand aon da skoilla va Breur!

- 9 -

D'AR RE A EMBANN AN AVIEL BEVA DIWAR AN AVIEL!

Rom 1,1...
Ob 26,16
¹ Daoust ha n'on-me ket frank ? Daoust ha n'on ket Abostol? Daoust ha n'am-eus ket gwelet an Aotrou ? Ha n'oc'h-c'hwi ket va oberenn en Aotrou ?² Ma n'on ket Abostol evid an oll, evidoc'h-c'hwi da vianna ez on, rag siell va Abostolegez ez oc'h-c'hwi en Aotrou!³ Honnez eo va skrid-difenn evid ar re a enklask diwar-va-fenn!⁴ Daoust ha n'on-eus-ni ket gwir da zebri ha da eva?⁵ Daoust ha n'on-eus-ni ket gwir da gas eur vaouez kristen d'ober an dro ganeom, evel m'o-deus ive an Ebstel all ha Breudeur an Aotrou ha Kefaz ?⁶ Daoust ha me hepkén ha Barnabe n'on-eus ket aotre da jom heb labourad ?⁷ Piou a vez o vrezelia diwar e goust e-unan ? Piou a blant eur winienn ha ne zebr ket euz he frouez ? Piou a gas eun tropell da beuri ha ne ev ket ive euz lêz an tropell ?

Dt 25,4
⁸ N'eo ket hepkén hervez an dud e lavaran kement-se: daoust hag al Lezenn ive ne lavar ket kemend-all ?⁹ Rag e Lezenn Moizez eo skrivet: "*Mir da vinella an ejen a zo o vresa êd!*" Daoust ha Doue a zo chalet gand an ohen ?¹⁰ Daoust ha ne lavar ket an dra-ze dreist-oll evidom-ni? Rag evidom-ni e-neus skrivet: "*Gand esperañs e tle an arour arad, hag ive an ejen bresa, gand an esperañs da gaoud e lod!*"

Rom 15,27
¹¹ M'on-eus-ni hadet ennoc'h an traou speredel, daoust ha braz eo deom-ni eosti ho traou denel ?¹² Ma z'eo re all kenlodeg er gwir-ze warnoc'h, daoust ha n'om-ni ket muioc'h c'hoaz? Med ganeoc'h-c'hwi n'on-eus ket greet hervez ar gwir-ze, med pep tra a ziwaskom gand aon da lakaad eur skoill da Aviel ar C'hrist!

Lk 10,7

¹³ Daoust ha ne ouezit ket ? Ar re a intent ouz an traou sakr, a zebr euz traou ar zantual, hag ar re a zo wardro an aoter, a vez kenlodeg en aoter! ¹⁴ Evelse ive e-neus an Aotrou kemennet, d'ar re a embann an Aviel, beva diwar an Aviel! ¹⁵ Me avad n'am-eus greet diouz hini euz an aliou-ze! Ne skrivan ket kement-se evid ma vefe greet evelse evidon: kaer e vefe din mervel kentoc'h eged an dra-ze! Den ne gaso va lorc'h da get! ¹⁶ Ma embannan an Aviel, n'eus din lorc'h ebed, rag eur garg eo hag a bouez warnon! Rag siwaz din, ma ne embannan ket an Aviel! ¹⁷ Ma ran an dra-ze, dre gaer, ambo eur gopr! Ma z'eo dre heg, ez eo eur vinistrez fiziet ennon! ¹⁸ Pehini eo din eta ar gopr? Oc'h embann an Aviel, e kinnigan an Aviel evid netra, gand aon da wall-ober gand ar gwir am-eus dre an Aviel...

¹⁹ Rag frank ma z'on e-keñver an oll, d'an oll am-eus en em c'hreet sklav a-benn gounid al lodenn vrasa! ²⁰ Gand ar Juzevien on deuet da veza evel eur Juzeo, a-benn gounid Juzevien! Gand an dud-dindan-Lezenn, evel pa vefen dindan-Lezenn, -ha n'on ket va-unan dindan-Lezenn!-, evid gounid an dud-dindan-Lezenn! ²¹ Gand an dud-dilezenn, evel eun den dilezenn (ha me n'on ket heb Lezenn Doue, med dindan Lezenn ar C'hrist!) a-benn gounid an dud-dilezenn! ²² Deuet on da veza gwan gand an dud gwan, a-benn gounid an dud gwan! Da bep hini on deuet da veza pep tra, a-benn gounid unan bennag e peb doare! ²³ Pep tra a ran ablamour d'an Aviel, ma vin-me kenlodeg ennañ!

²⁴ Daoust ha ne ouezit ket ? Ar rederien er stad, oll e redont! N'eus nemed unan avad da gaoud ar gurunenn! Redit e doare deoc'h d'he c'haoud! ²⁵ Kement-hini a striv, a ziouer pep tra! Int-i a-benn kaoud eur gurunenn buan gweñvet... Ni avad evid unan na weñvo ket! ²⁶ Redeg a ran-me e doare na vefe ket en teñval! Dornata a ran e doare na skoin ket en êr! ²⁷ Med bloñsa a ran va c'horv hag e lakaad da sklav, gand aon na zeufen da veza korbellet goude beza embannet an Aviel d'ar re all...

- 10 -

KEN-UNANET D'AN AOTROU!

¹ Ne fell ket din, Breudeur, e chomfec'h heb gouzoud an dra-mañ: On Tadou a zo bet oll dindan ar Goabrenn, hag oll o-deus treuzet ar Mor, ² hag e Moizez ez int oll bet badezet er Goabrenn hag er Mor, ³ ha debret o-deus oll an heveleb Boued speredel, ⁴ hag evet o-deus oll an heveleb Evaj speredel, -rag eva a reent euz ar Roc'h speredel a z'ae d'o heul, ar Roc'h avad a oa ar C'hrist!-; ⁵ med n'e-neus ket Doue kavet e drugar el lodenn vrasa anezo, rag bez' ez int gourvezet amañ-hag-ahont er gouelec'h!...

⁶ An oll draou-ze a zo degouezet evid beza skweriou evidom-ni, deom diwall da c'hoantaad traou fall evel m'o-deus c'hoanteet ar re-ze! ⁷ Na vezit

- Erm 32,6 ket idolerien evel lod anezo, hervez m'eo skrivet: "*Ar Bobl a azezas da zebri ha da eva, hag e savas an dud da c'hoari!*" ⁸ Na zerhom ket evel m'o-deus serhet lod anezo! Hag en eur ober eun devez, ez eus kouezet tri mil war'n-ugent anezo! ⁹ Na dentom ket an Aotrou, evel m'o-deus e dentet lod anezo, hag ez int bet kaset da goll gand an naered! ¹⁰ Na c'hrozmolit ket evel m'o-deus grozmolet lod anezo hag ez int bet kaset da goll gand ar Gwaster...
- 1 Per 4,7 ¹¹ Kement-se a zo c'hoarvezet ganto e-giz skwer, hag a zo bet skrivet evid or c'hentelia, ni hag a zo degouezet ganeom Fin-an-Amzeriou! ¹² Evelse, an neb a gav dezañ beza en e zav, dezañ diwall da goueza! ¹³ Tentadur ebed n'e-neus kroget ennoc'h ha na vefe ket diouz nerz an den! Feal eo Doue: ne aotre ket e vefec'h tentet dreist ar pezh a c'hellit, rag da-heul an tentadur, deoc'h e roio ive ar skoazell da c'helloud herzel! ¹⁴ Rag-se, Breudeur karet, tehit diouz an idolez! ¹⁵ Da dud fur e komzan: barnit hoc'h-unan ar pezh a lavaran! ¹⁶ Ar C'halirad a-vennoz a vennigom, daoust ha n'eo ket komuniez da Wad ar C'hrist ? Ar Bara a rannom, daoust ha n'eo ket komuniez da Gorv ar C'hrist ? ¹⁷ Pa n'eus nemed eur Bara hepkén, n'eus ahanom-ni oll, ha ni niveruz, nemed eur C'horv hepkén, rag kenlodeg om-ni oll en eur Bara hepkén!
- 2 Kor 6,15.. ¹⁸ Gwelit Izrael hervez an natur-den! Daoust hag ar re a zebr euz ar provad n'int ket unanet d'an aoter ? ¹⁹ Petra lavaran-me 'ta ? E vefe eun dra bennag ar provad d'an idolou ? Pe eun idolenn a vefe eun dra bennag ? ²⁰ Med ar provadou a ginnig ar Baganed, d'an diaoulou eo o c'hinnigont, ha n'eo ket da Zoue! Ne fell ket din avad e teufec'h da veza unanet d'an diaoulou! ²¹ Ne c'hellit ket eva Kalirad an Aotrou hag eva kalirad an diaoulou! Ne c'hellit ket beza kenlodeg e Taol an Aotrou hag e taol an diaoulou! ²² Daoust ha klask a reom degas an Aotrou da erezi? Daoust ha kreñvoc'h om-ni egetañ ?
- Dt 32,21 ²³ Pep tra a zo aotreet ganin, med n'eo ket talvouduz pep tra! Pep tra a zo aotreet, med pep tra ne ro ket skwer vad! ²⁴ Arabad da zen klask e vad e-unan, med mad egile! ²⁵ Debrit a gement a vez gwerzet er marhad, heb ober enklask en abeg d'ar goustiañs! ²⁶ Rag "*da Zoue eo an Douar hag e Leunder!*" ...
- Rom 15,2 ²⁷ Ma teu unan bennag euz an dud diskredig d'ho kolver ha ma fell deoc'h mond, debrit kement a vez kinniget deoc'h, heb enklask en abeg d'ar goustiañs! ²⁸ Ma teu avad unan bennag da lavared deoc'h: "*Eur provad d'an idolou eo an dra-mañ!*", mirit da zebri, ablamour d'an hini e-neus hen merket deoc'h, hag ablamour d'e goustiañs! ²⁹ Lavaret am-eus 'ablamour d'e goustiañs': n'eo ket ablamour d'hoc'h-hini eo, med da hini egile! Rag perag e vije va frankiz-me barnet gand eur goustiañs-all ? ³⁰ Ma kemeran-me lod er boued gand gras, perag e vijen mallozet evid ar pezh a gemeran en eur lavared trugarez warnañ? ³¹ Pe o tebri e vefec'h eta, pe oc'h eva pe oc'h ober tra bennag all, deoc'h ober pep tra evid gloar Doue! ³² Bezit di-skoill hag evid Juevien hag evid Paganed, hag evid Ilizou Doue, ³³ evel ma plijan-me da bep hini e pep tra, o klask, n'eo ket va mad, med hini an oll, ma vezint save-teet!
- Mz 26,27
Mk 14,22
Lk 22,19
1 Kor 11,23
Rom 14,6

- 11 -

*DALHIT D'AR C'HUSTUMOU AM-EUS ROET DEOC'H!*Ef 4,15
Ef 5,23

¹ Kemerit skwer diwarnon evel ma ran-me ive diwar ar C'hrist! ² Ho meuli a ran pa zalhit bepred koun ahanon, ha pa zalhit d'ar C'hustumou evel m'am-eus o roet deoc'h! ³ Me a fell din degemenn deoc'h kement-mañ: Penn ar gwaz eo ar C'hrist! Penn ar vaouez eo ar gwaz, Penn ar C'hrist avad eo Doue!

⁴ Kement gwaz a vez o pedi, pe o profedi, goloet e benn, a zizenor e Benn! ⁵ Kement maouez a vez o pedi pe o profedi, dizolo he fenn, a zizenor he fenn, rag ema an dra-ze evel dezi beza touzet! ⁶ Rag eur vaouez, ma ne laka ket eur ouel, ra vezo touzet! Ha ma z'eo mézuz d'eur vaouez beza touzet pe voalet, dezi laka eur ouel!

⁷ Eur gwaz avad ne dle ket lakaad eur ouel war e benn, pa z'eo-eñ skeudenn ha gloar Doue! Ar vaouez avad a zo gloar ar gwaz! ⁸ Rag n'eo ket deuet ar gwaz euz ar vaouez, med ar vaouez euz ar gwaz! ⁹ Rag n'eo ket bet ar gwaz krouet evid ar vaouez, med ar vaouez evid ar gwaz! ¹⁰ Ablamour da-ze, e tle ar vaouez kaoud merk eur galloud war he fenn ablamour d'an êlez!

¹¹ Koulskoude, ne vo maouez ebed heb gwaz, na gwaz ebed heb maouez, en Aotrou! ¹² Rag evel m'eo deuet ar vaouez euz ar gwaz, evelse e teu ive ar gwaz dre ar vaouez, ha pep tra a zeu euz Doue! ¹³ Barnit drezoc'h hoc'h-unan: daoust ha mad eo d'eur vaouez pedi Doue, dizolo he fenn ? ¹⁴ Daoust hag an natur hec'h-unan ne zesk ket deoc'h eo eur véz evid eur gwaz kaoud bleo hir ? ¹⁵ Evid eur vaouez, kaoud bleo hir a zo eur c'hloar eviti, rag dezi eo ar bleo roet da ouel...

¹⁶ Ma kav mad unan bennag beza rendaeler, n'eus ket deom-ni eur seurt kustum! Na da Ilizou Doue!

1 Yn 2,19

¹⁷ En eur gemenn an dra-ze, ne c'hellan ket ho meuli, rag ar Bodadegou a rit n'ho lakont ket da wellaad, med da fallaad! ¹⁸ Da genta, pa vezit bodet en Iliz, e klevan e vez disrann etrezoc'h, ha kredi a ran eun tam-mig! ¹⁹ Red eo e vefe rannou en ho touez, ma vo ive anad an dud kavet mad en ho touez! ²⁰ Pa vezit eta bodet en eun ti, ne vez ket ano da zebri Pred an Aotrou! ²¹ Epad an debri, e krog pep hini da zebri e bred e-unan, hag e chom unan gand an naon, egile avad a zo mezo! ²² Daoust ha n'ho-peus ket a diez da zebri ha da eva ? Daoust ha fae a rit war Iliz Doue ? Ha klask a rit divruda ar re n'o-deus seurt ? Petra 'lavarin-me deoc'h ? Daoust hag ho meuli a rin ? War ar poent-se n'ho meulin ket!

Mz 26,26...
Mk 14,22...
Lk 22,19...

²³ Rag degemeret am-eus-me digand an Aotrou, ha kement-se am-eus-me ive fiziet ennoc'h: Jezuz on Aotrou, en nozvez end-eeün m'eo bet roet, e-neus kemeret eur varaenn, ²⁴ ha lavaret gantañ trugarez, e-neus he rannet ha lavaret: "*Kement-mañ a zo va C'hory, an Hini roet evidoc'h! Grit kement-se*

avid ober koun ahanon!” ²⁵ Kemend-all e-neus greet ive gand ar C’halirad, goude koan, en eur lavared: “*Ar C’halirad-mañ a zo an Emgleo Nevez em Gwad-me! Grit kement-se, bewech ma evoc’h, evid ober koun ahanon!”* ²⁶ Rag bewech ma tebroc’h ar Bara-ze ha ma evoc’h ar C’halirad-ze, e tegemnoc’h Maro an Aotrou beteg ma teuio endro!

²⁷ Evelse, an neb a zebro ar Bara-ze hag a evo Kalirad an Aotrou en eun doare direiz, a vo kabluz e-keñver Korv ha Gwad an Aotrou! ²⁸ Da bep hini en em arnodi, hag evelse, dezañ debri euz ar Bara-ze hag eva euz ar C’halirad-ze! ²⁹ Rag an neb a zebr hag a ev, a zebr hag a ev e varn, ma ne zigemm ket ar C’horv! ³⁰ Ablamour da-ze, en ho touez, ez eus kalz tud gwan ha klañv, hag ez eus bet marvet meur a hini...

³¹ Ma ouezfem-ni en em varn on-unan, ne vefem ket barnet! ³² Barnet avad gand an Aotrou, gantañ e vezom reizet, gand aon na vefem barnet da heul ar Bed! ³³ Evelse, Breudeur, pa vezit bodet, evid debri, gortozit an eil egile. ³⁴ M’e-neus naon unan-bennag, dezañ debri er gêr, deoc’h miroud da veza bodet evid eur varn! An traou all a reizin pa zeuin davedoc’h...

- 12 -

C’HWI EO KORV AR C’HRIST!

¹ Ne fell ket din, Breudeur, e chomfec’h dianaoudeg war an Donezonou speredel! ² Gouzoud a rit: pa oac’h Paganed, e vezec’h kaset daved an idolou mud, hervez ma vezec’h renet! ³ Rag-se e tegemnan deoc’h: o komz dre Spered Doue, ne lavar nikun ‘Malloz da Jezuz!’. Ha ne c’hell den lavared ‘Jezuz a zo Aotrou!’, nemed dre ar Spered Santel!

⁴ Rummou Donezonou a zo: an heveleb Spered avad!

⁵ Rummou servichou a zo ive: hag an heveleb Aotrou!

⁶ Rummou oberiadou a zo: eun heveleb Doue avad, a ra pep tra e peb den!

⁷ Da bep hini e vez roet ar Spered da bara ennañ, evid mad an oll...

⁸ Da hemañ e vez roet dre ar Spered eur gomz a furnez, da unan all eur gomz a ouiziegez, hervez an heveleb Spered! ⁹ D’egile, avad, feiz, en heveleb Spered; da unan all donezonou a bareañs en heveleb Spered; ¹⁰ da unan all, burzudou, da unan all, profediez, da unan all, digemm ar sperejou, da unan all, meur a seurt yezou, da unan all, displega yezou... ¹¹ Oberia a ra kement-se an heveleb Spered ha n’eus nemetañ, o ranna evel ma kar, da bep hini en e du.

¹² Rag evel ma z’eo ar c’horv unan hepkén, ha m’e-neus kalz izili, ha ma ne ra oll izili ar c’horv -hag int-i niveruz- nemed eur c’horv hepkén, evelse ive eo ar C’hris! ¹³ Dre eur Spered hepkén ez om-ni bet badezet en eur C’horv hepkén, ni oll, pe Juzevien pe C’hresianed, pe sklaved pe dud frank,

Gal 3,28

ha da eva on-eus bet oll an heveleb Spered! ¹⁴ Hag ar C'hovr n'eo ket eun ezel hepken, med meur a hini! ¹⁵ Ma teu an troad da lavared: "Pa n'on-me ket dorn, n'on ket eta euz ar c'hovr!", an dra-ze ne vir ket outañ da veza euz ar c'hovr. ¹⁶ Ha ma teu ar skouarn da lavared: "Pa n'on ket lagad, me n'on ket euz ar c'hovr!" An dra-ze ne vir ket outi da veza euz ar c'hovr! ¹⁷ Ma vez lagad ar c'hovr a-bez, pelec'h ema ar c'hleo ? Ha ma vez kleo a-bez, pelec'h ema ar c'huesa ? ¹⁸ Bremañ avad e-neus Doue lakeet an izili, ha pep hini anezo, er c'hovr evel ma kare! ¹⁹ Ma vefe, euz an oll, eun ezel hepken, pelec'h e vefe ar c'hovr ? ²⁰ Bremañ avad ez eus leiz izili, med eur c'hovr hepken!...

²¹ Ne c'hell ket al lagad lavared d'an dorn: "Ezomm ahanout n'eus ket din!" pe c'hoaz ar penn d'an treid: "Ezomm ahanoc'h-c'hwi n'eus ket din!" ²² Med kalz kentoc'h: e-touez izili ar c'hovr, ar re a vez kavet an disterra, a zo ive red! ²³ Ar re a gav deom beza nebeutoc'h enoruz er c'hovr, d'ar re-ze e tougom brasoc'h enor! Hag an izili dizonest o-deus brasoc'h evez! ²⁴ An izili onest n'o-deus ket ezomm! Med Doue e-neus reizet ar C'hovr o rei brasoc'h enor d'an ezel a zo dizenor, ²⁵ evid na vefe freuz er C'hovr, med evid d'an izili kaoud preder an eil ouz egile! ²⁶ Ma tiwask poan eun ezel, a-unan e tiwask an oll izili! Ma vez enoret eun ezel, a-unan e laouenna an oll izili!

Rom 12,5
Ef 4,11
Ef 5,30

²⁷ C'hwi avad a zo Korv ar C'hrist hag e izili evid eul lodenn! ²⁸ Ha Doue, en Iliz, e-neus lakeet lod: da genta da Ebestel, d'an eil da Brofeded, d'an trede da Gelennerien; da-c'houde, donezon ar burzudou; goude-ze, donezonou da barea, da skoazella, da sturia, da gomz meur a seurt yezou... ²⁹ Daoust hag Ebestel int oll ? Ha Profeded int oll ? Ha Gelennerien int oll ? Ha burzudou a reont oll ? ³⁰ Hag oll o-deus donezonou da barea ? Hag oll e komzont yezou all ? Hag oll e tisplegant ar yezou ?

³¹ Deoc'h-c'hwi c'hoantaad avad an donezonou gwella! Ha bremañ ez an-me c'hoaz da ziskouez deoc'h eun Hent dreist!...

- 13 -

AR VRASA ANEZO EO AR GARANTEZ!

¹ Ma teuan da gomz e yezou an dud hag e re an êlez, ma n'am-eus ket a garantez, ez on deuet da veza eun drompill o seni, eur zimbalenn o tregerni! ² Ma teuan da gaoud ar brofediéz ha da anavezoud an oll visteriou hag an oll ouiziegez, ha da gaoud ar feiz-oll beteg diloha meneziou, ma n'am-eus ket a garantez, n'eus netra ahanon! ³ Ha ma teuan da lakaad va oll vadou da rei genaouadou vara d'ar beorien, ha ma teuan-me ive da rei va c'hovr evid beza devet, ma n'am-eus ket a garantez, din ne dalvez kement-se da netra!

Mz 7,22
Mz 17,20
Mz 6,2
Gal 5,14

⁴ Ar garantez a zo brokuz, madelezuz; ar garantez n'eo ket aviuz; ar garantez ne zeu ket da lorha ha da c'hweza! ⁵ Ne ra netra dizonest, ne glask ket he mad hec'h-unan, ne daerra ket, ne zalc'h kont ebed euz an droug; ⁶ ne z'a ket da laouennaad diwar an direiz, med laouennaad a ra gand ar wirionez!

Rom 12,9
Rom 15,1

⁷ Didamall a ra pep tra, ha kredi a ra pep tra, hag esperoud pep tra ha gouzañv pep tra!

2 Kor 5,7

Mz 22,36
Yn 13,34

⁸ Ar garantez biken ne gouezo! Pe ar brofediez, da netra ez aio! Pe ar yezou, paouez a raint! Pe ar ouiziegez, da netra ez aio! ⁹ Rag a-dammou ec'h anavezom, hag a-dammou e profedom! ¹⁰ Pa zegouezo ar stad peurvad, ar pez a zo a-dammou a vezo dilezet! ¹¹ Pa oa ahanon-me eur bugel, e komzen evel eur bugel, e soñjen evel eur bugel, e tivizen evel eur bugel! Med deuet gwaz, belbiachou ar bugel am-eus kaset da netra! ¹² Rag bremañ e welom, dre eur melezour, eun dam-skeud! Neuze avad, tal ouz tal! Bremañ ec'h anavezom a-dammou, neuze avad ec'h anavezin evel ma z'on anavezet! ¹³ Bremañ e chom ar Feiz, an Esperañs hag ar Garantez! An teir-ze! Ar vrasa anezo eo ar Garantez!

- 14 -

RA VO GREET PEP TRA EVID AR SKWER-VAD!

1 Kor 12...

¹ Dalhit da glask ar Garantez! C'hoantait an donezonou speredel, deoc'h dreist-oll da brofedi! ² Rag an hini a gomz e yezou, ne gomz ket d'an dud, med da Zoue! Den ne zelaou: dre ar Spered e lavar traou misteriu! ³ An hini avad a vez o profedi a lavar d'an dud komzou a skwer-vad, a frealz hag a gennerz! ⁴ An neb a gomz en eur yez all, en em skwer e-unan! An hini a vez o profedi a c'hell skweria an Iliz! ⁵ Me a garfe ho kweled oll o komz e yezou, med kentoc'h o profedi! Brasoc'h eo an hini a zo o profedi eged an neb a gomz e yezou, nemed displeget e vefe komzou hemañ, d'an Iliz degemer skwer-vad! ⁶ Bremañ, Breudeur, ma teuan-me davedoc'h o komz e yezou, peseurt vad a rin-me deoc'h, ma ne gomzan ket deoc'h pe dre ziskuliadenn pe dre ouiziegez pe dre brofediez pe dre gelenadurez ?

Lk 10,30

⁷ Evelse e vez ive gand ar binviou divouez a ro eur zon, pe fleüt pe delenn. Ma ne roont ket soniou disheñvel, penaoz e vo anavezet ar fleüterien pe an delennerien ? ⁸ Ha ma ro an drompill eur zon difrêz, piou a vo prest d'ar brezel ? ⁹ Evelse ive, c'hwi, ma ne roit ket gand ho teod eur gomz frêz, penaoz e vo anavezet ar pez a zo lavaret ? Bez' e vezoc'h neuze o komz en êr! ¹⁰ Na ped seurt moueziou a zo marteze dre ar bed, ha n'eus netra divouez! ¹¹ Ha ma ne ouezan-me ket talvoudegez ar vouez, e vezin eur barbar dirag an hini a gomz, hag hennez ive eur barbar evidon-me! ¹² Evelse, c'hwi ive, pa c'hoantait donezonou speredel, klaskit muioc'h-mui ar re a ro skwer-vad d'an Iliz! ¹³ Rag-se, an neb a gomz e yezou, dezañ pedi ma vezo displeget! ¹⁴ Rag ma pedan e yezou, ema va spered o pedi, va skiant avad a jom difrouez! ¹⁵ Ha petra 'ta ? Pedi a rin gand va spered, pedi a rin ive gand va skiant! Salmi a rin gand va spered, salmi a rin ive gand va skiant!...

¹⁶ Ha neuze, m'emaout o trugarekaad gand da spered, an hini e-neus reñk an dén dizesk, penaoz e lavaro 'Amen' d'ar bedenn a drugarez, ma ne oar ket petra 'lavarez ? ¹⁷ Trugarekaad a rez kaer, med egile n'eo ket skweriet

mad! ¹⁸ Trugarekaad a ran Doue, rag muioc'h egedoc'h oll e komzan e yezou! ¹⁹ Med en Iliz e fell din lavared pemp gér gand va skiant, din kelenn re all, kalz kentoc'h eged deg mil gér e yezou! ²⁰ Breudeur, na vezit ket bugaligou en ho santimañchou, chomit avad krouadurigou en drougiez! Hag en ho santimañchou, bezit peurvad!

²¹ Skrivet eo el Lezenn: "*E yezou estren, ha dre vuzellou tud estren e komzin d'ar Bobl-mañ! Hag e-giz-ze zoken, n'am zelaouint ket!*" e lavar an Aotrou! ²² Evelse e vez ar yezou eur zin, n'eo ket d'ar Grederien, med d'an dud difeiz! Ar brofediez avad a vez eur zin, n'eo ket d'an dud difeiz, med d'ar Grederien. ²³ Pa vez eta an Iliz a-bez bodet en eun ti, hag an oll o komz e yezou, ma teu en ti tud difeiz ha dizesk, daoust ha ne lavarint ket ez oc'h-c'hwi eet foll? ²⁴ Ma vez avad an oll o profedi, ha ma teu eun den difeiz ha dizesk, e vezo gounezet gand an oll, ha barnet gand an oll! ²⁵ Traou kuzet e galon a vezo disklêriet, hag evelse, en eur goueza e dal d'an douar, ec'h adoro Doue, en eur embann ema Doue evid gwir en ho touez...

²⁶ Ha petra 'ta! Breudeur, pa vezit bodet, da bep hini kaoud eur zalm, kaoud eur gentel, kaoud eun diskuliadenn, kaoud eur Gomz e yezou, kaoud eun displeg anezo! Ra vo greet pep tra evid ar skwer-vad! ²⁷ Ma vez komzet e yezou, ra gomzo daou pe dri d'ar muia, ha pep hini d'e dro, ha ra vo unan da zisplega! ²⁸ Ma n'eus displeger ebed, dezañ chom peoc'h en Iliz: dezañ komz outañ e-unan hag ouz Doue! ²⁹ Ra gomzo daou pe dri brofed, ha d'ar re all o barn! ³⁰ Ma teu eun diskuliadenn da unan euz an dud azezet, d'an hini kenta chom peoc'h! ³¹ Rag profedi a c'hellit oll, hini hag hini, d'an oll deski ha d'an oll beza frealzet! ³² Sperejou ar Brofeded a zo sujet d'ar Brofeded! ³³ Rag Doue n'eo ket eun Doue a zizurz, med a beoc'h!...

Evel ma vez greet e oll Ilizou an dud santel, ³⁴ ra jomo sioul ar merhed en Ilizou, rag n'eo ket aotreet dezo komz, med dezo beza sujet, evel ma lavar ive al Lezenn. ³⁵ Ma fell dezo deski tra pe dra, dezo goulenn digand o gwaz er gêr, rag mézuz eo d'eur vaouez komz en Iliz. ³⁶ Daoust hag euz ho touez eo deuet Komz Doue? Ha daoust ha davedoc'h hepkén eo-Hi degouezet?

³⁷ Ma kav da unan bennag ez eo-eñ eur profed pe eun den speredel, dezañ anavezoud eo ar peza a lavaran deoc'h eur gourhemenn euz an Aotrou! ³⁸ Ma teu avad unan bennag da zianavezoud, e vo e-unan dianavezet! ³⁹ Ragsse, Breudeur, klaskit profedi, ha na virit ket komz e yezou! ⁴⁰ Ra vo pep tra kempenn ha diouz reñk!

- 15 -

ADSAVET EO AR C'HRIST A-DOUEZ AR RE VARO!

¹ Disklêria a ran deoc'h, Breudeur, an Aviel am-eus embannet deoc'h, hag ho-peus-c'hwi degemeret! Hag ennañ e talhit mad, ² ha drezañ e vezoc'h salvet, ma teuit d'e zelher par d'ar Gomz am-eus embannet deoc'h! Anez-daze ho-peus kredet en aner! ³ Rag roet am-eus deoc'h dreist-oll kement am-

eus-me ive degemeret: ar C'hrist a zo bet marvet evid or pehejou, hervez ar Skrituriou; ⁴ sebeliet eo bet, hag adsavet eo bet d'an trede deiz hervez ar Skrituriou; ⁵ paret e-neus dirag Kefaz, da c'houde dirag an Daouzeg; ⁶ goudeze e-neus paret dirag ouspenn pemp kant Breur en eun taol: an darn vrasa anezo a jom beteg-henn, hiniennou avad a zo marvet; ⁷ da c'houde e-neus paret dirag Jakez, ha goude-ze dirag an oll Ebestel; ⁸ dirag an diweza avad euz an oll, evel dirag eur c'hollidig, e-neus paret dirazon-me! ⁹ Rag me eo an disterra hini euz an Ebestel, me ha n'on ket din da veza galvet abostol, p'am-eus heskinet Iliz Doue!... ¹⁰ Dre c'hras Doue avad ez on-me ar pez a zo ahanon! Hag e c'hras, bet roet din, n'eo ket bet difrouez, med founnusoc'h eged int-i oll am-eus poaniet, n'eo ket me avad, med gras Doue a-unan ganin!...

Lk 24,31
Mk 16,14

Lk 24,50

1 Kor 9,1
Ob 12...
2 Kor 11,5

¹¹ Pe me eta, pe ar re-ze, evelse ec'h embannom, hag evelse ho-peus kredet! ¹² Ma vez eta embannet ez eo bet ar C'hrist adsavet a-douez ar re varo, penaoz e lavar lod en ho touez n'eus adsao ebed evid re varo! ¹³ Ma n'eus adsao ebed evid re varo, ar C'hrist kennebeud n'eo ket bet adsavet! ¹⁴ Ma n'eo ket bet adsavet ar C'hrist, goullou eo eta on Embann, goullou ive ho feiz-c'hwil! ¹⁵ Ha setu-ni kavet fals-testou da Zoue, pa desteniom, a-eneb Doue, e-neus-Eñ adsavet ar C'hrist: Doue n'e-neus ket e adsavet, ma ne vez ket adsavet a dud maro! ¹⁶ Rag ma ne vez ket adsavet re varo, ar C'hrist kennebeud n'eo ket bet adsavet! ¹⁷ Ma n'eo ket bet adsavet ar C'hrist, difrouez eo ho feiz hag emaoe c'hoaz en ho pehejou! ¹⁸ Neuze ive, an dud marvet er C'hrist a zo eet da goll... ¹⁹ M'on-neus-ni lakeet on esperañs er C'hrist evid ar vuez-mañ nemetken, ez om-ni an druezusa euz an oll dud!...

Yn 11,21-27
Yn 20-21...
Mk 16,6...
Lk 24,1...
Rom 5,12...

1 Tes 4,16

Mz 22,44
Disk 20,14
Salm 110,1

²⁰ Bremañ avad ez eo bet ar C'hrist adsavet a-douez ar re varo, kenta Frouezenn a-douez an dud kousket en Aotrou! ²¹ Rag pa z'eo deuet ar Maro dre eun den hepkén, dre eun Den hepkén ive e teu Adsao re varo. ²² Rag evel ma varv an oll en Adam, evelse ive e vezo degaset an oll d'ar Vuez er C'hrist, ²³ pep hini en e reñk: ar Frouezenn genta eo ar C'hrist, ha goude-ze ar re a vo d'ar C'hrist d'an Deiz ma paro! ²⁴ Da c'houde e vo ar Fin, pa roio e Rouantelez da Zoue e Dad, ha pa ziskaro peb Renerez ha peb Galloud ha peb Nerz! ²⁵ Rag "*réñ a rank ken na lakaio an oll eneberien dindan e dreid!*" ²⁶ Diskaret e vezo an diweza eneber: ar Maro! ²⁷ Rag (Doue) "*e-neus sujet pep tra dindan e dreid*". Pa lavar: 'Dezañ eo bet sujet pep tra', anad eo e lavar: 'pep tra nemed an Hini e-neus sujet pep tra dezañ'! ²⁸ P'e-no sujet an oll draou dezañ, neuze ive e vo sujet ar Mab e-unan d'an Hini e-neus sujet an oll draou dezañ, evid ma vo Doue an Oll en oll...

Iz 22,13

Salm 4,5

²⁹ A-hend-all, petra ra an dud a vez badezet evid ar re varo ? Ma ne vez en neb doare adsavet a dud varo, perag e vez badezet tud evito ? ³⁰ Ha perag emao-m-ni ive en argoll da beb eur ? ³¹ Bemdez emao-m o vervel, ken gwir ha ma z'eo an dra-ze ho lorc'h, Breudeur, ar pez a zo ive va hini e Jezuz Krist on Aotrou! ³² M'am-eus-me, kement ha den hepkén, stourmet ouz al loened en Efez, petra eo va gounidegez ? Ma ne vez ket adsavet a dud varo, debrom! Hag evom! Rag warhoaz e varvim! ³³ Diwallit da veza touellet! Darempredou fall a goll kustumou mad! "*Distroit gand reiz ha na behit ket!*" ³⁴ Rag lod ne anavezont ket Doue! Evid ho Tistro* e lavaran deoc'h kement-se !

* Distro = "conversion"

Yn 12,24

35 Med unan bennag a lavaro: “Penaos ec’h adsavo ar re varo? E peseurt korv e teuont ?” 36 Den diskiant! Ar pezh a hadez-te, ne adsav ket ma ne vez ket bet marvet! 37 Hag ar pezh a hadez, n’eo ket ar c’horv a hadez eo a adsavo, med eur c’hreunenn noaz, marteze eur c’hreunenn winiz pe euz traou all! 38 Doue a ro dezo eur c’horv evel ma kar, ha da bep hini euz an hajou e gorr dezañ e-unan! 39 Peb korv n’eo ket heveleb korv, med disheñvel eo korv an dud, disheñvel korv al loened, disheñvel korv al laboused, disheñvel korv ar pesked... 40 Ha bez’ ez eus korvou en neñv, ha korvou war an douar, med disheñvel eo sked re an neñv, disheñvel sked re an douar. 41 Disheñvel eo sked an heol, disheñvel sked al loar, ha disheñvel sked ar stered, hag eur steredenn a zo disheñvel ouz eur steredenn all en he sked...

Yn 6,63
2 Kor 3,6

42 Evelse e vo ive adsao ar re varo. Hadet e vez breinuz, adsavet e vez divreinuz! 43 Hadet e vez er skeud, adsavet e vez er sked! Hadet e vez er gwander, adsavet e vez en nerz! 44 Hadet e vez eur c’horv beo dre an ene, adsavet e vez eur c’horv beo dre ar Spered! Ma z’eus eur c’horv beo dre an ene, bez’ ez eus ive eur c’horv beo dre ar Spered!

45 Deuet eo an den kenta, Adam, da veza eun ene beo; an Adam diweza a zo deuet da veza eur Spered hag a ro Buez! 46 Med n’eo ket an Hini beo dre ar Spered a zeu da genta, med an hini beo dre an ene, ha da c’houde an Hini dre ar Spered! 47 An dén kenta, tennet euz an douar, a zo douarel; an eil Dén a zeu euz an Neñv! 48 Evel m’eo an hini douarel, evelse ive ar re zouarel! Hag evel m’eo an Hini Neñvel, evelse ive ar re neñvel! 49 Hag evel m’on-eus-ni douget skeudenn an hini douarel, e tougim ive skeudenn an Hini neñvel...

50 Med kement-mañ a lavaran deoc’h, Bredeur: ar c’horv hag ar gwad ne c’hellont ket kaoud Rouantelez Doue da hêrez: ar pezh breinuz n’e-no ket ar stad divreinuz da lod! 51 Setu ar Mister a lavaran-me deoc’h: n’or-bo ket oll da vervel! Med oll e vezim-ni kemmet! 52 En eun taol, en eur serr-lagad, da zôn an drompill ziweza -rag seni a raio an drompill!-, hag ar re varo a vezo adsavet ha ni a vezo kemmet! 53 Rag ar pezh breinuz-mañ a rank beza degaset da zivreinuz, hag ar pezh marvel-mañ da zivarvel!

54 Pa vo divreinuz ar pezh breinuz-mañ,
ha divarvel ar pezh marvel-mañ,
neuze e vo sevenet ar Gomz a zo skrivet:

“Lonket eo ar Maro en trec’h!”

55 *“O Maro! Pelec’h ema da drec’h?”*

“Maro! Pelec’h ema da vroud?”

56 Broud ar Maro eo ar Pehed! Ha nerz ar Pehed eo al Lezenn!

57 Gras da Zoue, a ro deom an trec’h dre Jezuz Krist on Aotrou! 58 Evelse, Bredeur muia-karet, deoc’h beza diazezet mad, divrall, bepred founusoc’h da oberenn an Aotrou, o c’houzoud n’eo ket ho poan aner en Aotrou...

- 16 -

BEILLIT! KENDALHIT ER FEIZ!

Ob 11,29
2 Kor 8,9
Mz 28,1

¹ E-keñver ar gest a vez greet evid an dud santel, evel m'am-eus kemennet da Ilizou ar Galati, deoc'h-c'hwi ive ober evelse! ² Da zeiz kenta ar zizun, pep hini ahanoc'h, er gêr, a lakaio a-gostez ar pezh e-neus gellet espenn, evid na jomo ket ar gest da ober pa zegouezin-me! ³ Pa vezin degouezet, an dud ho-po dibabet, ar re-ze a gasin-me gand lizeri da gas da Jeruzalem gras ho madober! ⁴ Ha ma z'eo mad din mond ive, e teuint ganin-me!...

Ob 19,21

⁵ Dond a rin davedoc'h p'am-bo treuzet ar Makedoni, rag ar Makedoni a dreuzin! ⁶ Ganeoc'h marteze e chomin eur pennadig, pe ganeoc'h zoken e c'hoañvin, deoc'h va ambroug, da belec'h bennag ez in-me! ⁷ Rag ne fell ket din bremañ ho kweled en eur dremen hepkén! Fiziañs am-eus e chomin eur pennad amzer ganeoc'h, ma plij gand Doue! ⁸ En Efez avad e chomin beteg ar Pantekost, ⁹ rag digoret a zo din eun nor vraz ha frouezuz, hag eneberien niveruz...

¹⁰ Ma tegouez Timote, gwelit ma vezo dispont en ho touez, rag oberenn an Aotrou a ra koulz ha me! ¹¹ Arabad da unan bennag e lakaad da zén-a-netra! Deoc'h eo d'e ambroug er peoc'h, ma teuio davedon-me! Emaon ouz e c'hortoz gand ar Vreudeur! ¹² E-keñver ar Breur Apolloz avad, e aliet am-eus stard da vond davedoc'h gand ar Vreudeur, med ne oa dezañ tamm youl ebed da vond bremañ: mond a raio pa gavo mad...

Ef 6,10

¹³ Beillit! Kendalhit er feiz! Bezit kaloneg! Kreñvait bemdez! ¹⁴ Ra vezo greet pep tra er garantez! ¹⁵ Ho kentelia stard a ran, Breudeur: gouzoud a rit eo tiad Stefan ar Frouez kenta euz an Azi, hag o-deus int-i en em lakeet da zervicha an dud santel. ¹⁶ Deoc'h-c'hwi eo ive beza doujet da heveleb tud ha da gement-hini a labour hag a boagn a-unan ganto!

Fil 2,29

¹⁷ Laouenneet on-me p'ema ganin Stefan, Fortunad, hag Akaig: an diouer am-eus ahanoc'h o-deus int-i digollet mad! ¹⁸ Sedereet o-deus va spe-red hag hoc'h hini! Grit stad euz heveleb tud!

¹⁹ Ho saludi a ra Ilizou an Azi! Ho saludi a ra, en Aotrou, Akile ha Priska, gand an Iliz a zo en o zi. ²⁰ Ho saludi a ra an oll Vreudeur. En em saludit etrezoc'h dre eur pok santel!

²¹ Ar zalud-mañ a zo euz va dorn-me, Paol!


²² Ma z'eus unan bennag na gar ket an Aotrou, ra vezo anatem!

Disk 22,20

“Maran, ata!” - “Mestr! Distroit 'ta!”

²³ Gras Jezuz Krist, an Aotrou, ra vo ganeoc'h-c'hwi!

²⁴ Va c'harantez ganeoc'h-c'hwi oll er C'hrist Jezuz!



Jezuz savet da veo, alabastr, Rosko. Sk J. F.

An eil lizer da Gorintiz

A-barz nebeud amzer goude e lizer kenta, e rañk Paol skriva eul lizer all da Gorintiz, da ziskouez dezo e garantez, ha d'o delher stard en o feiz: fals-ebestel, a-douez ar Juzevien deuet d'ar feiz, a glask o distaga diouz or Zalver Jezuz...

1 - 7. Bez' e tegouez kalz trubuillou a varo gand Paol ha ministred an Aviel; Doue avad a zeu d'o frealzi ha d'o c'hennerza dre e c'hras ha dre ar Spered, dezo da gerzed bepred er garantez. Ha Doue eo a ro dezo an ampartiz da zeveni ministrerez an Aviel, kalz kaerroc'h hag uhelloc'h eged hini Moizez: drezi e teu ar Spered Santel da enskriva an Emgleo Nevez ha peurbaduz war daolennigou ar c'halonou... Drezi ive ema dremm ar Ministred o skedi, evel eur melezhour, gloar an Aotrou!

A-dra-zur, diwar ar vinistrerez-se e tegouez dezo kalz trubuillou... N'eus forz! An Doue e-neus adsavet Jezuz a-douez ar re varo, o adsavo, int-i ive, ha dezo ec'h aozo eun Ti, eur c'horv heñvel ouz hini Jezuz en e c'hloar! Ha mall braz o-deus da vond daved an Aotrou, rag bepred ema karantez Jezuz ouz o gwaska... Da Gorintiz e-neus Paol digoret frañk e galon; dezo ive digeri dezañ ken frañk all o hini!

8. Paol a zegas dezo soñj euz ar gest vraz greet evid peorien Jeruzalem. da bep hini kemer skwer war Jezuz: Eñ, pinvidig-mor, e-neus en em c'hreet paour evid or pinvidikaad! Eur c'hras eo ar gest, o rei tro d'ober vad! Ha Doue a vez brokuz gand ar re a ro a galon vad ha laouen.

10 - 13. Er Pennad-mañ dreist-oll e teu Paol da zigeri deom e galon a Abostol, eur galon evid gwir gwasket, enkrezet hag entanet gand karantez Jezuz!

Da Baol e vez rebechet e ruster a-bell hag e wander a-dost, hag ive e lorhentez... Ha Paol da zigeri adarre e galon. Klask a ra kinnig Iliz Korint d'ar C'hrist, evel eur Werhez d'he Fried. Siwaz! Diwar labour ar fals-ebestel, ema an Iliz-se warnes distaga diouz he gwir Fried! Rebechet e vez dezañ ober fae war Iliz Korint, pa ne gemer netra diganti... Nann! Ne gemer seurt diganti, ha ne gemero netra biken, da viroud lakaad eur skoill d'an Aviel; ouspenn-ze, daoust ha d'ar vugale eo teñzoriza evid o zud ?...

*Mond a raio dizale da Gorint... Siwaz! Marteze ne gavo ket Korintiz evel m'e-nefe karet! Ha Korintiz marteze ne gavint ket Paol evel m'o-defe kredet! **“Neuze 'ta, Breudeur, klaskit hag en em zikourit da veza peurvad!”***

II DA GORINTIZ

- 1 -

PROMESAOU DOUE O-DEUS ENNAÑ O 'YA'!

Ob 16,1 ¹ Paol, Abostol Jezuz Krist dre volontez Doue, hag ar Breur Timote, da Iliz Doue a zo e Korint, gand an oll dud santel a zo en Akai a-bez: ² deoc'h gras ha peoc'h digand Doue an Tad ha Jezuz Krist on Aotrou!

Ef 1,9
1 Pèr 2,3
Kol 1,24 ³ Ra vo meulet Doue ha Tad Jezuz Krist on Aotrou, Tad leun a duez ha Doue a beb frealz! ⁴ Or frealzi a ra e-doug on trubuill penn-da-benn, deom gelloud frealzi an dud e pep trubuill, dre ar frealz a resevom on-unan digand Doue! ⁵ Rag evel ma kouez founnuz warnom poaniou ar C'hrist, evelse ive, dre ar C'hrist e teu founnuz ive or frealz! ⁶ Pe drubillet e vezom, evid ho frealz deoc'h-c'hwi ez eo, hag evid ho silvidigez! Pe frealzet e vezom, evid ho frealz ez eo, an hini a ro deoc'h nerz da zelher e-kreiz heveleb poaniou hag ar re a c'houzañvom-ni ive! ⁷ Ha stard eo or fiziañs ennoc'h, rag gouzoud a reom: evel ma z'oc'h kenlodeg er poaniou, evelse ez oc'h ive er frealz!

⁸ Rag ne fell ket deom, Breudeur, e chomfec'h heb gouzoud an trubuill on-eus bet en Azi: dreist muzul, dreist nerz om-ni bet sammet, beteg deom kaoud darbar* zokén da jom beo! ⁹ Ennom on-unan on-eus bet ar varn d'ar maro, deom ive lakaad or fiziañs, n'eo ket ennom on-unan, med en Doue a adsao ar re varo! ¹⁰ Diouz eur seurt maro e-neus on diframmet hag on diframmo! Ennañ on-eus fiziañs: on diframma a raio c'hoaz! ¹¹ Rag c'hwi ive or skoazello dre ho pedenn: evelse, dre ar c'hras deuet deom dre galz tud, e vezo-Eñ trugarekeet ablamour deom, dre galz tud ive.

¹² Rag on lorc'h deom-ni eo an testeni-mañ a zoug or c'houstiañs ; e santelez hag e glander Doue, -ha n'eo ket hervez furnez an den, med hervez gras Doue-, on-eus renet or buez e-kreiz ar Bed, ha muioc'h c'hoaz en ho keñver. ¹³ Rag ne skrivom deoc'h netra estreged ar pezh a lennit hag a intentit ive: esperoud a ran ec'h intentoc'h beteg penn, ¹⁴ evel m'ho-peus intentet a-dammou! Ni eo ho lorc'h deoc'h-c'hwi, evel ma 'z oc'h ive on hini, a-benn Deiz Jezuz on Aotrou!

¹⁵ Gand ar fiziañs-ze e c'hoantaen-me da genta mond davedoc'h, deoc'h da gaoud eun eil gras, ¹⁶ hag euz du-ze mond d'ar Makedoni, hag euz ar Makedoni dond adarre davedoc'h da veza ambrouget ganeoc'h warzu ar Jude. ¹⁷ O c'hoantaad kement-se, daoust ha c'hoariet am-eus va fenn-skañv ? Pe an traou a c'hoantaan, daoust hag o c'hoantaad a ran hervez va natur-den, ma vo ganin 'ya-ya' ha 'nann-nann' da heul ? ¹⁸ Feal eo Doue! Ar gomz a lavarom deoc'h n'eo ket 'ya' ha 'nann', ¹⁹ rag Mab Doue, Jezuz Krist, embannet en ho touez ganeom, ganin-me ha gand Silvan ha Timote, n'eo ket 'ya' ha 'nann'! Med ar 'ya' a zo degouezet ennañ, ²⁰ rag

* Darbar: poan.

Ef 1,12
1 Yn 2,27
Rom 8,16

Ennañ o-deus oll Bromesaou Doue kavet o ‘ya’! Rag-se ive, drezañ e vez lavaret ‘Amen!’ da Zoue evid e c’hloar! ²¹ An Doue e-neus or c’hreñveet ganeoc’h er C’hris hag e-neus on olevet, ²² e-neus ive or siellet, ha lakeet e-neus arrez ar Spered en or c’halonou. ²³ Doue avad a c’halvan da dest war va buez: dre zamant ouzoc’h n’on-me ket eet da Gorint, ²⁴ rag ne glas-kom ket ober or mestr war ho feiz, med labourad evid ho laouennaad: er feiz e talhit mad!

- 2 -

C’HWEZ-VAD AR C’HRIST OM-NI!

¹ Drezon va-unan am-eus barnet an dra-mañ: miroud da vond dave-doc’h adarre e-kreiz ar glahar! ² Rag ma teuan-me d’ho klahari, piou va zederaio nemed an hini a zo glaharet ganin ? ³ Rag skrivet am-eus al lizerze, din, en eur zond, chom heb kaoud glahar a-berz ar re a ranke va laouennaad, rag ennoc’h oll em-eus fiziañs e vez va levenez hoc’h hini deoc’h oll! ⁴ Rag diwar drubuill ha rann-galon e skriven deoc’h, e-kreiz daerou, n’eo ket deoc’h da veza glaharet, med deoc’h da anavezoud ar garantez kaloneg am-eus evidoc’h.

⁵ M’e-neus eun den glaharet unan bennag, n’eo ket me e-neus glaharet, med eun tammig (n’eo ket din e zamma re!), c’hwi oll! ⁶ Awalc’h eo evid an den-ze ar rebechou greet dezañ gand an darn vrasa, ⁷ ken ma tleit kentoc’h pardoni dezañ hag e frealzi, gand aon na vefe lonket an den-ze gand eur glahar re founnuz! ⁸ Rag-se, hoc’h alia a ran da lakaad ar garantez da rén en e geñver...

Mz 18,18
Ef 4,27

⁹ Evid kement-mañ ive e skriven: evid hoc’h amproui, evid gouzoud ha bez’ ez oc’h sentuz e pep tra! ¹⁰ D’an hini e pardonit tra pe dra, dezañ e pardonan ive! Hag ar pezh am-eus pardonet, m’am-eus pardonet eun dra bennag, ablamour deoc’h em-eus greet dirag ar C’hris, ¹¹ rag aon na vefem-ni korvigellet gand Satan, rag n’emaom ket heb gouzoud e venoziou!

¹² En eur zegouezoud e Troaz evid Aviel ar C’hris, ha goude din kaoud eno eun nor zigor en Aotrou, ¹³ n’am-eus bet peoc’h ebed d’am spered, pa ne gaven ket eno va Breur Tit! Ha me eta d’o lezel ha da vond d’ar Makedoni. ¹⁴ Gras da Zoue, a ro deom bepred an trec’h er C’hris, hag e taol fresk drezom e peb lec’h c’hwez-vad an anaoudegez anezañ! ¹⁵ Rag bez’ ez om-ni c’hwez-vad ar C’hris dirag Doue, evid ar re a zo a-du da veza salvet, hag evid ar re a ia da goll! ¹⁶ Evid ar re-mañ, eur c’hwez a-varo evid ar maro! Evid ar re-ze, eur c’hwez a-vuez evid ar Vuez! ¹⁷ Hag evid kement-se, piou a zo barreg ? Rag n’om-ni ket evel kalz tud, a vez o falsa Komz Doue! Med evel dre wirionder, med evel dre Zoue ha dirag Doue, e komzom-ni er C’hris!

- 3 -

AMPARTIZ DA VEZA MINISTRED AN EMGLEO NEVEZ!

1 Daoust ha kregi a reom adarre d'en em erbedi ? Ha daoust hag ezomm on-eus, evel lod, lizeri-erbed evidoc'h pe ahanoc'h ? ² C'hwi eo on lizer-ni, skrivet en ho kalonou, anavezet ha lennet gand an oll! ³ Anad oc'h da veza eul lizer digand ar C'hrist, skrivet drezom-ni, enskrivet n'eo ket gand liou du, med gand Spered an Doue-Beo, n'eo ket war daolennigou-mên, med war daolennigou ho kalon a zen!...

4 Eur seurt fiziañs on-eus-ni avad dirag Doue er C'hrist, ⁵ rag drezom on-unan n'om ket ampart da zivizoud eun draig evel pa vefe ahanom: med on ampartiz a zeu euz Doue! ⁶ Eñ eo e-neus roet deom ampartiz da veza Ministred an Emgleo Nevez, eun Emgleo a-Spered ha n'eo ket a-skrid! Rag ar skrid a gas d'ar maro, ar Spered avad a ro buez!

7 Ma oa ar vinistrerez a-varo -enskrivet e skridou war vein-, karget a c'hloar, -ken na c'helle Bugale Izrael para o zellou war zremm Moizez en abeg da c'hloar e zremm, eur c'hloar dibad, -⁸ penaoz ne vefe ket Ministrerez ar Spered karget muioc'h c'hoaz a c'hloar ? ⁹ Rag m'eo bet ministrerez ar Varn renet gand gloar, pegement muioc'h e founno e gloar Ministrerez ar Justiz! ¹⁰ Rag ar c'hloar roet en tu-ze ne oa ket gloar e-kichenn ar C'hloar a zo dreist! ¹¹ Rag ma z'eo ar pezh a ia da netra tremenet e gloar, pegement muioc'h ar pezh a zo paduz a zo gand gloar!

12 Pa z'eus deom eur seurt esperañs, e reom gand kalz hardisegez! ¹³ Ha n'eo ket evel Moizez, a lakee eur ouel war e zremm da viroud ouz Bugale Izrael da weled ar pezh a 'z ae da get! ¹⁴ Med teñvalleet eo o menoziou, rag beteg an deiz a hirio e chom warno eur seurt gouel pa lennont an Testament Koz! Ne vez ket lamet ar ouel, rag er C'hrist hepken e vez kaset da netra! ¹⁵ Med beteg hirio, bep tro ma vez lennet Moizez, e vez eur ouel war o c'halon. ¹⁶ Bep tro avad ma troer warzu ar C'hrist e vez lamet ar ouel! ¹⁷ An Aotrou eo ar Spered: el lec'h m'ema Spered an Aotrou, eno ez eus frankiz! ¹⁸ Ni oll eta, dioueliet on dremm, dre weled Gloar an Aotrou evel en eur melezhour, ni a vez treuz-stummet en eun heveleb skeudenn, en eur C'hloar bepred war gresk, evel dre Spered an Aotrou!...

- 4 -

MOGIDELL ON TRUBUILL... EUR ZAMM A C'HLOAR!

Rom 1,16... 1 Rag-se, pa z'eo deom ar Vinistrerez-ze, hervez an drugarez diskouezet deom, ne fall-galonom ket! ² Nac'h a reom avad an traou kuzet direiz: ne valeom ket er gwidre, ne falsom ket Komz Doue, med o tisklêria ar wirionez, en em erbedom on-unan daved pep koustiañs dirag Doue! ³ Ma z'eus ive eur

2 Kor. 4,4 - 5,8

1 Kor 1,18 ouel war on Aviel, d'an dud o vond da goll eo e vez eur ouel! ⁴ E-touez an
Ef 2,3 dud-ze e-neus 'Doue-ar-Bed-mañ' dallet menoziou an dud diskredig evid na
Rom 8,29... welint ar Sklêrijenn euz Aviel gloar ar C'hrist, a zo Skeudenn Doue!

5 Rag n'eo ket ni on-unan emañ oc'h embann, med Jezuz Krist on
Aotrou, ha ni on-unan evel servicherien deoc'h ablamour da Jezuz! ⁶ Rag an
Gen 1,3 Doue e-neus lavaret: '*Euz teñvalijenn ra skedo Sklêrijenn!*', e-neus ive ske-
Heb 1,3 det en or c'halonou da rei ar Sklêrijenn euz anaoudegez Gloar Doue a zo o
skedi war zremm ar C'hrist...

7 Ni a zoug an teñzor-ze e listri-pri, ma vo anad e teu ar galloud
Yn 15,5 dreist-ze euz Doue ha n'eo ket ahanom-ni! ⁸ E peb doare e vezom trubuillet,
med ne vezom ket ankeniet! Nehet e vezom, med ne vezom ket luziet! ⁹
Fil 4,13 Heskinet e vezom, med ne vezom ket dilezet! D'an douar e vezom taolet,
Kol 1,24 med ne z'eom ket da goll! ¹⁰ Dalhmad e tougom tro-dro, en or c'horv, maro
Jezuz, ma paro ive Buez Jezuz en or c'horv! ¹¹ Rag ni, ar re veo, ni a vez
bepred roet d'ar maro ablamour da Jezuz, ma paro ive Buez Jezuz en or
c'horv marvel! ¹² Evelse e vez ar maro o labourad ennom-ni, hag ar Vuez
ennoc'h-c'hwi!

13 Pa z'eus deom-ni eta eur seurt spered a feiz, hervez ar Skritur:
Salm 116,10 "*Kredet am-eus, setu perag em-eus komzet!*", e kredom ni ive, ha rag-se e
komzom! ¹⁴ Rag gouzoud a reom: an Hini e-neus adsavet Jezuz on Aotrou,
1 Tes 4,14 on adsavo, ni ive, gand Jezuz, hag on lakaio ganeoc'h en e gichenn. ¹⁵ Bez' e
vo kement-se evid ho mad: ar c'hras, o vond war gresk dre bedennou an darn
vrasa, a gresko evid gloar Doue! ¹⁶ Ablamour da-ze, ne fallgalonom-ni ket,
Ef 3,16 med, goude d'an 'den-diavêz' ennom mond da fall, deiz-ha-deiz avad e vez
ennom neveseet an 'den-diabarz'! ¹⁷ Mogidell on trubuill en amzer-vremañ, a
aoz deom, dispar ha divuzul, eur zamm peurbaduz a c'hloar! ¹⁸ Ne barom ket
or sell war an traou a weler, med war ar re na weler ket! Amzeriad eo an
1 Kor 7,31 traou a weler! Peurbaduz ar re na weler ket!...

- 5 -

RAG EMA KARANTEZ AR C'HRIST OUZ OR GWASKA!

2 Pèr 1,13... ¹ Goud a ouzom: pa vez diskaret on ti euz an douar, teltenn or c'horv, e
Rom 8,23 vez deom eur zavadur euz Doue, eun Ti greet heb dorn an den, unan peurba-
duz en Neñv! ² Ha diwar gement-mañ ec'h hirvoudom: c'hoant on-eus da
wiska an Ti a zeu euz an Neñv war c'horre hemañ, ³ da vianna ma vezom
1 Kor 15,58 kavet gwisket ha n'eo ket diwisk! ⁴ Rag ni hag a zo e teltenn ar c'horv, ni a
zo oc'h hirvoudi: pa z'om gwisket, ne fell ket deom beza diwisket, med beza
Rom 8,16 gwisket war c'horre hemañ, ma vo ar pezh marvel lonket gand ar Vuez! ⁵ An
Ef 1,13... Doue e-neus or c'hreet evid kement-se eo an Hini a ro deom arrez* ar Spered!

⁶ Kaloneg e chomom eta bepred, ha deom gouzoud emañ o chom
pell diouz an Aotrou, e-keid ma chomom er c'horv! ⁷ Rag dre ar feiz e
Fil 1,23 valeom, ha n'eo ket dre weled! ⁸ Kaloneg e chomom avad, ha kaerroc'h e

* Arrez: eun tañvad euz...

kavom kuitaad ar c'horv ha mond da jom e-kichenn an Aotrou! ⁹ Ablamour da-ze e c'hoantaom a-galon plijoud dezañ, pe o chom amañ, pe o vond da jom eno! ¹⁰ Rag deom oll eo red dispaka dirag Kador-Varn ar C'hrist, da bep hini reseo ar gopr evid ar pezh e-no greet dre e gorv, pe vad, pe fall!

Mz 23,1-36

¹¹ Dre veva e doujañs an Aotrou, e klaskom gounid tud! Da Zoue avad, ez om diskuliet frêz! Esperoud a ran ez om ive diskuliet frêz d'ho koustiañs-c'hwi!

Rom 5,6

¹² Ne zeom ket adarre d'en em erbedi deoc'h, med da rei deoc'h tro da lorha ganeom, deoc'h da respont d'ar re a vez o lorha gand o dremm ha n'eo ket gand o c'halon! ¹³ Rag ma z'om bet diskiant, evid Doue e oa! Ma z'om fur, evidoc'h-c'hwi eo! ¹⁴ Rag ema karantez ar C'hrist ouz or gwaska, pa zoñjom en dra-mañ: Unan a zo bet marvet evid mad an oll! Neuze 'ta eo marvet an oll! ¹⁵ Rag evid an oll eo-Eñ bet marvet, ma vevo ar re veo, n'eo ket evito o-unan, med evid an Hini a zo bet evito marvet hag adsavet. ¹⁶ Evelse, a-vremañ, n'anavezom-ni dén hervez an natur-den; ha goude deom beza anavezot ar C'hrist hervez an natur-den, bremañ avad n'anavezom ket kén evelse...

Rom 8,1...
Gal 6,15...
Ef 2,10...
Disk 21,15

Yn 8,46
Heb 4,15
Fil 3,9
1 Pèr 2,22...

¹⁷ Evelse, m'ema unan bennag er C'hrist, anezañ ez-eus eur c'hrouadur nevez. Tremenet an traou koz, sed degouezet traou nevez! ¹⁸ Kement-se avad a zo euz Doue, Eñ hag e-neus on unvanet gantañ e-unan dre ar C'hrist, hag e-neus roet deom Ministrerez an unvaniez. ¹⁹ Rag edo Doue er C'hrist oc'h unvana ar Bed gantañ e-unan, o chom heb konta d'an dud o mankou, hag o lakaad ennom-ni Komz an Unvaniez! ²⁰ Evid ar C'hrist ez om-ni Ministred, peogwir ema Doue oc'h alia drezom! Evid ar C'hrist ec'h aspedom: "Deuit da veza unvanet gand Doue!" ²¹ Evidom-ni e-neus Doue greet 'Pehed' an Hini n'anavez ket ar pehed, deom-ni dond da veza Ennañ Justiz Doue!

- 6 -

DA ZEN EBED NE LAKOM EUR SKOILL!

Iz 49,8

¹ En eur labourad a-unan gantañ, e teuom ive d'hoc'h alia, gand aon n'ho-pefe degemeret gras Doue en aner! ² Rag lavared a ra:

Lk 4,18...

"En eur poent a vadelez em-eus da zelaouet!

"Ha d'eun Deiz a zilvidigez em-eus da skoazellet!"

Setu bremañ eur poent a vadelez! Setu bremañ eun Deiz a zilvidigez!

I Kor 4,13...

³ Da zen ebed ne lakom-ni eur skoill, evid na vo tamallet or ministrerez! ⁴ Med e pep tra en em erbedom evel ministred Doue, dre eun dalc'h mad-tre, e-kreiz trubuillou, ezommou, ankeniou, ⁵ dindan taoliou skourjez, er prizoniou, e taoliou dispac'h, e poaniou, e beilladegou, e yunou; ⁶ dre c'hlander, dre ouiziegezh, dre basianted, dre vadelez, dre Spered Santel, dre garantez didouell, ⁷ dre eur Gomz a wirionez, dre nerz Doue, dre armou ar Justiz a-

zehou hag a-gleiz, ⁸ e-kreiz gloar pe zizenor, e-kreiz brud-fall ha brud-vad, evel touellerien ha ni gwirieg, ⁹ evel tud dianav, ha ni anavezet mad, evel tud e par ar maro, ha setu-ni beo, evel tud kastizet ha ne vezom ket kaset d'ar maro, ¹⁰ evel tud glaharet, ha ni dalhmad o laouennaad, evel peorien-keiz ha ni o pinvidikaad kalz tud, evel tud heb eur siseurt! Hag ema deom pep tra!...

¹¹ Or spered on-eus dispaket deoc'h, ô Korintiz! Deoc'h on-eus digoret frank or c'halon! ¹² Ennom-ni n'emaoc'h ket war eñk, med war eñk emaooc'h en ho kalonou! ¹³ Deom-ni da gaoud eun heveleb digoll (komz a ran evel da vugale!), c'hwi ive, digorit frank ho kalonou!

¹⁴ Na rit ket eun dimezi digenseurt gand tud diskredig! Rag peseurt kenvreuriez euz ar justiz gand an direiz ? Ha c'hoaz: peseurt komuniez euz Sklêrijenn gand Teñvalijenn ? ¹⁵ Peseurt emgleo etre ar C'hrist ha Belial ? Peseurt darempred etre eur c'hreder hag eun den diskredig ? ¹⁶ Peseurt Emgleo etre Santual Doue gand an idolou ? Rag bez' ez om-ni Santual an Doue-Beo, evel ma lavar Doue:

1 Kor 3,16

Erm 37,27
Jer 51,45
Iz 52,11
Iz 43,6
Jer 43,6

“Bez' e vezin-me o chom hag o vale en o zouez!”

“Me a vezo o Doue hag int-i a vezo va Fobl!”

“Rag-se, kerzit kuit euz o zouez! Tehit diouto!” eme an Aotrou.

Jer 31,9
Oz 1,10

¹⁷ *“ Na douchit ouz hini dihlan ebed!”*

¹⁸ *“Ha me ho tegemero, ha deoc'h e vezin eun Tad,*

“Ha c'hwi a vo din mibien ha merhed!”, eme an Aotrou Oll-C'halloudeg!

- 7 -

GLAHARET OC'H-C'HWI BET A-BENN AN DISTRO!

¹ Pa z'eus deom ar promesaou-ze, Breudeur karet, deom en em c'hla-naad diouz peb namm a gorr hag a spered, en eur beurzeveni or santelez e doujañs Doue. ² Deoc'h on degemer: n'on-eus noazet da zén! N'on-eus gwallet dén ebed! N'on-eus laeret dén ebed! ³ Ne lavaran ket an dra-ze evid ho parn: lavaret am-eus emaooc'h-c'hwi en or c'halonou evid mervel ha beva a-unan ganeom! ⁴ Kalz a hardisegez am-eus dirazoc'h, ha kalz a lorc'h am-eus ganeoc'h! Bet am-eus leun a frealz! Peur-leuniet on a levenez e-kreiz an oll drubuillou! ⁵ Rag pa z'om degouezet er Makedoni, n'eus bet diskuiz ebed d'on natur-den, med trubuillet om bet e peb doare: stourmadou en diavêz, spoutadou en diabarz! ⁶ An Hini a frealz an dud izel, Doue, e-neus or frealzet dre m'eo degouezet Tit! ⁷ N'eo ket hepken ablamour m'eo degouezet, med ive ablamour d'ar frealz a zo deuet d'e frealzi en ho touez! Rag degemennet e-neus deom ho karantez vraz, ho klemmadeg, hoc'h aked evidom, ken ma z'om laouenneet kalz muioc'h!

Mz 5,10-12
Lk 6,22-29
Kol 1,24

⁸ Setu perag, m'am-eus ho klaharet dre va lizer, n'am-eus keuz ebed!

Ha m'am-befe keuz (rag gweled a ran e-neus al lizer-ze ho klaharet, ha ne vefe nemed eur pennadig!), ⁹ bremañ e laouennaan, n'eo ket avad ablamour ma z'oc'h bet glaharet, med pa z'oc'h bet glaharet beteg dond d'an Distro ouz Doue!

Mz 27,3

Heb 12,17

Rag glaharet oc'h-c'hwi bet hervez Doue: evelse, n'oc'h bet gwallet tamm ebed ganeom! ¹⁰ Ar glahar hervez Doue a laka da zistrei d'eur zilvidigez heb keuz! Glahar ar Bed avad a gas d'ar maro! ¹¹ Setu m'he-deus ar glahar-ze degaset ennoc'h ive aked, med ive breud, med ive taerder, med ive aon, c'hoant, gred, med ive kastiz! E peb doare ho-peus kendalhet da jom dinamm en abadenn-ze!

¹² M'am-eus eta skrivet deoc'h, n'eo ket ablamour d'ar gwaller, nag ablamour d'an den gwallet, med evid ma vo anad en ho touez dirag Doue hoc'h aked evidom. ¹³ Setu perag ez om-ni frealzet! Ouspenn diwar ar frealzet avad, laouenneet om bet kalz muioc'h dre levez Tit, rag sederreet eo bet e spered ganeoc'h! ¹⁴ Rag m'am-eus lorhet eun tammig diwar-ho-penn dirazañ, n'am-eus ket bet a véz! Med evel m'on-eus lavaret deoc'h kement-tra hervez ar wirionez, evelse ive, al lorc'h diskouezet ganeom dirag Tit a zo bet hervez ar wirionez! ¹⁵ Hag e galon a zo troet kalz muioc'h warzu ennoc'h pa zeu dezañ soñj euz ho sentidigez, ha penaoz ho-peus-c'hwi e zegemeret o krena gand an aon! ¹⁶ Ha laouenneet on-me ive, pa c'hellan e peb doare kaoud fiziañs ennoc'h...

- 8 -

JEZUZ E-NEUS EN EM GASET DA BAOUR-KÊZ!

Rom 15,26
Mz 25,35

¹ Degemenn a ran deoc'h, Breudeur, ar c'hras deuet euz Doue da Ilizou ar Makedoni. ² Goude dezo beza tentet gand trubuillou, ez eo deuet splannder o levez ha donder o faourentez da greski teñzor o madelez! ³ Hervez o galloud, -testenia a ran!-, dreist o galloud zoken, anezo o-unan, ⁴ en eur bedi stard, o-deus goulennet diganeom kaoud lod e gras hag e komuniez ar zervich-ze evid an dud santel. ⁵ Ha n'eo ket hervez ma c'hortozem, med en em roet o-deus o-unan da genta d'an Aotrou, deom-ni ive, dre volontez Doue.

⁶ Evelse on-eus goulennet an dra-mañ digand Tit: evel m'e-neus-eñ digoret ar c'hras-ze, evelse ive eo dezañ d'he c'has da-benn en ho touez ive! ⁷ Evel ma z'oc'h pinvidig e pep tra, e feiz, e komz, e gouiziegez hag e peb aked, hag er garantez eet diouzom ennoc'h, ez eo deoc'h ive beza brokuz er c'hras-ze! ⁸ Ne lavaran ket an dra-ze e-giz gourhemenn, med ablamour d'an aked diskouezet gand re all, hag evid amproui ar gwirieg m'eo ho karantez! ⁹ Rag anavezoud a rit gras Jezuz Krist on Aotrou: ablamour deoc'h e-neus en em gaset da baour-kêz, -hag Eñ pinvidig-mor!- deoc'h da veza pinvidikeet dre e baourentez-raz! ¹⁰ Hag eun ali a roan war gement-se: setu ar pezh eo mad deoc'h ober, c'hwi hag ho-peus kroget adal warlene, n'eo ket hepken da

zeveni, med ive da vennoud ar c'hras-ze; ¹¹ bremañ avad, echuit d'he zeveni! Evel ma oa kaloniez* er mennoud, ra vo kemend-all o peurechui, hervez ho peadra!

Mk 12,43

¹² Rag ma z'eus kaloniez, e vez degemeret pep hini diouz ar pez e-neus, ha n'eo ket diouz ar pez n'e-neus ket! ¹³ Rag n'eus ket ano da rei peoc'h d'ar re all, ha trubuil deoc'h-c'hwi! Med kement ha kement! ¹⁴ En amzer-vremañ, ho pinvidigez a bourvezo d'o dienez, evel m'eo deuet o finvidigez da bourvezi d'ho tienez-c'hwi, ma vo kement-ha-kement, ¹⁵ hervez m'eo skrivet:

Erm 16,18

"An hini e-neus dastumet kalz, n'e-neus ket muioc'h!"

"Hag an neb e-neus dastumet nebeud, n'e-neus ket nebeutoc'h!"

¹⁶ Gras avad da Zoue, a laka e kalon Tit eur seurt aked evidoc'h; ¹⁷ degemeret gantañ on ali, gand brasoc'h aked eo eet anezañ e-unan davedoc'h! ¹⁸ A-unan gantañ on-eus kaset or Breur a zo meulet en Aviel dre an oll Ilizou. ¹⁹ N'eo ket ablamour da-ze hepkén, med dre ma z'eo bet astennet warnañ an daouarn gand an Ilizou, dezañ da veza or c'henveajour evid ar c'hras emao m'eo servicha, ablamour da c'hloar an Aotrou ha d'or c'halonegez!

²⁰ Bez' e reizom kement-tra evid na zeuio den d'on tamall diwar-benn ar bern arhant a zo meret ganeom. ²¹ Klask a reom ober traou kaer, n'eo ket hepkén dirag Doue, med ive a-wel d'an dud! ²² Ganto on-eus kaset or Breur, an hini a zo bet kavet ganeom aketuz, meur a dro hag e pep tra! Bremañ avad e vo kavet aketusoc'h, diwar ar fiziañs vraz e-neus ennoc'h...

²³ Diwar-benn Tit: eur c'henvreuer eo-eñ din-me, ha deoc'h-c'hwi, eur c'henlabourer! Hag evid or Breudeur, bez' ez int kannaded Ilizou. ²⁴ Dirag an Ilizou eta, merkit mad dezo merk ho karantez, ha merk al lorc'h on-eus-ni ganeoc'h!

- 9 -

DOUE A GAR AN DEN LAOUEN O REI!

¹ Diwar-benn ar zervich evid an dud santel, n'eus ezomm ebed da skriva deoc'h! ² Rag anavezoud a ran ho kaloniez, hag ablamour dezi, ez on bet lorhet ganeoc'h dirag Makedoniz, peogwir eo an Akai prest adal warlene, ha p'e-neus ho kred entanet an darn vrasa! ³ Kaset am-eus avad ar Vreudeur - evid na vo ket an digarez a lorc'h am-eus diwar-ho-penn kaset da netra war an dachenn-ze!- deoc'h da veza prest hervez ma lavarent, ⁴ hag ive, -ma teu ganin Makedoniz ha ma n'ho kavont ket prest!-, deom-ni da jom heb ruzia gand ar véz (ni on-unan, heb deom lavared: c'hwi ive!), en abadenn-ze!

⁵ Soñjet am-eus eta e oa red din alia or Breudeur da vond davedoc'h en araog, ha da reiza en araog ar vennoz ho-peus prometet, d'ar Vennoz-ze

* Kaloniez: madelez kaloneg.

Rom 12,8 beza prest evel eur gwir vennoz, ha n'eo ket evel eur pizder! ⁶ Soñjit en dramañ: “An neb a had nebeudig, a eosto nebeudig! An hini a had brokuz, a eosto brokuz!” ⁷ Da bep hini rei, hervez m'e-neus divizet, a galon vad, ha n'eo ket dre c'hlahar na diwar red! Doue a gar an den laouen o rei!

⁸ Bez' e c'hell Doue skuill brokuz peb gras warnoc'h, deoc'h da gaoud pep tra red, e peb doare hag e peb amzer, deoc'h gwellaad e peb oberenn vad, ⁹ hervez m'eo skrivet:

“Strewet e-neus a-founn ha roet d'ar beorien!

Lk 6,38
Iz 55,19 *“E Justiz a bado a-hed ar c'hantvejou!”*

¹⁰ An Hini a ro brokuz an had d'an hader, ha bara da zebri, a roio hag a roio deoc'h had founnuz, hag e lako frouez ho justiz da greski. ¹¹ E peb doare ez oc'h pinvidikeet e peb madelez, hag homañ a ra drezom trugarekaad Doue. ¹² Rag mererez ar zervich-ze ne zeu ket hepkén da bourvezi da ezom-mou an dud santel, med ive da drei e kalz pedennou a drugarez da Zoue! ¹³ Peogwir e prizont ar vererez-ze, e veulont Doue evid ho toujañs oc'h anzav Aviel Jezuz Krist, evid ar vadelez a ziskouezit er gomuniez ganto ha gand an oll, ¹⁴ hag ive dre o fedennou evidoc'h: rag stag int ouzoc'h a-galon ablamour d'ar c'hras-dreist skuillet warnoc'h gand Doue! ¹⁵ Gras da Zoue evid e zonezon dreist-lavar!

- 10 -

BEZA LORHET ER C'HRIST!

Mz 11,29 ¹ Me va-unan, Paol, me ho ped, dre zouster hag habaster ar C'hrist, me hag a zo disterig da weled pa vezan en ho touez, hag a zeu, pa vezan pell, da
I Kor 4,21 hardisaad ganeoc'h! ² Pedi a ran na vo ket din, war al lec'h, hardisaad ganeoc'h dre an hardisegez a zoñjan kemer gand an hiniennou a gav dezo emaom-ni o vale hervez an natur-den! ³ Goude deom bale en natur-den, ne stourmom ket hervez an natur-den! ⁴ Rag armou on stourm, n'int ket euz an den, med dre Zoue o-deus galloud da ziskar kestel! Diskar a reom menoziou, ⁵ hag ive kement uhelder a zav a-eneb anaoudegez Doue. Paka a reom peb menoz, dezañ senti ouz ar C'hrist! ⁶ Ha bez' e vezom prest da gastiza peb dizentidigez, pa vo deuet peurvad ho sentidigez deoc'h-c'hwi!

⁷ Sellit mad a-benn ouz an traou! Ma 'z-eus eun den hag a gred stard dezañ beza d'ar C'hrist, dezañ adarre derhel kont euz an dramañ: evel ma z'eo-eñ d'ar C'hrist, evelse ez om-ni ive! ⁸ Ma teu din lorha amplig gand or galloud -ar galloud e-neus an Aotrou roet deom evid ho skweria ha n'eo ket evid ho tiskar!-, n'am-bo ket a véz, ⁹ gand na vezin ket, da weled, ouz ho spounta dre va lizeri! ¹⁰ “Al lizeri, emezo, a vez dezo pouez ha nerz! Med pa vez dirazom, ez eo e gorr disterig, hag e gomz ne dal netra!” ¹¹ D'ar seurt den delher kont euz kement-mañ: evel ma vezom en or c'homz dre lizeri, evelse e vezim ive en on ober war al lec'h!

¹² Rag ne gredom ket en em lakaad e reñk pe e skoaz gand tud en em erbed o-unan! Med int-i, oc'h en em vuzula diouto o-unan hag oc'h en em lakaad a-skoaz ganto o-unan, a zo o tiboelli...

Rom 12,3 ¹³ Ni avad, ne z'eom ket da lorha beteg an divuzul, med hervez muzul ar reolenn, ar muzul e-neus Doue muzulet gantañ evidom: erruoud beteg duze zoken! ¹⁴ Rag n'en em boulzom ket dreist-muzul, evel pa ne vefem ket erruet du-ze, rag du-ze end-eeün ez om erruet gand Aviel Jezuz Krist! ¹⁵ Ne lorhom ket beteg an divuzul gand poaniou tud all, med dre ma kresk ho feiz-c'hwi, ec'h esperom dond da veza brudet mad en ho touez, hervez ar reolenn, ¹⁶ oc'h embann an Aviel en tu-all d'ho pro, hag o viroud da veza lorhet gand labouriou kavet greet, hervez reolenn tud all! ¹⁷ *“An hini a zo o lorha, dezañ lorha en Aotrou!”* ¹⁸ An neb en em erbed e-unan, n'eo ket hennez a vez kavet mad, med an hini a vez an Aotrou oc'h erbedi!

- 11 -

HA MINISTRED INT DA C'HRIST ? ME KALZ MUIOC'H!

Ef 5,26...
Yn 3,29...
Disk 21,2...
Gal 1,8...
Ef 3,4

¹ Mad e vefe deoc'h gouzañv eun tammig diskiant euz va ferz! Med euz va ferz e c'houzañvit! ² Rag hoc'h erezi a ran a erez Doue! D'eur Pried hepkén am-eus ho timezet, evel eur werhez c'hlan da ginnig d'ar C'hrist! ³ Aon am-eus avad -evel m'e-neus an Naer touellet Eva dre e gorvigell!-, na vefe disterreet ho menoziou diouz o lealder hag o glander e-keñver ar C'hrist... ⁴ Rag ma embann ar c'henta-deuet eur Jezuz all, ha n'on-eus-ni ket embannet, ma tegemerit eur Spered-all, ha n'ho-peus ket degemeret, pe eun Aviel all, ha n'ho-peus ket resevet, an dén-ze a zegemerit kaer! ⁵ Kavoud a ra din n'on-me ket koll, e neb doare, gand an 'dreist-ebestel'-ze! ⁶ Ma z'on avad deskard war ar prezeg, war ar ouiziegez n'on ket! Rag e peb doare hag e pep tra am-eus hen disklêriet deoc'h!

Fil 4,10

⁷ Daoust ha greet am-eus eur pehed oc'h en em izellaad va-unan, deoc'h da veza uhelleet, p'am-eus embannet deoc'h Aviel Doue evid netra ? ⁸ Ilizou-all am-eus sunet o kemer va gopr, evid ho servich! ⁹ Pa vezen en ho touez, hag en diouer, n'am-eus sammet den ebed, rag d'am diouer o-deus pourvezet ar Vreudeur deuet euz ar Makedoni! Rag e peb doare am-eus kendalhet hag e kendalhin da veza va-unan divec'h evidoc'h-c'hwi...

Fil 3,2...
Mz 7,13...

¹⁰ Ennon ema gwirionez ar C'hrist: al lorc'h-ze ne vo ket lamet diganin e douarou an Akai! ¹¹ Ha perag 'ta ? Pa n'ho karan-me ket ? Doue a oar! ¹² Kement-se a ran hag e rin, da lemel peb digarez digand ar re a glask eun digarez da veza par deom-ni er poent a lorchont ennañ! ¹³ Rag ar seurt-tud-ze a zo anezo fals-ebestel, oberourien toueller, treuz-stummet en ebestel ar C'hrist! ¹⁴ N'eo ket souezuz: Satan e-unan a vez treuz-stummet en eun êl a sklêrijenn! ¹⁵ N'eo ket dreist eta, ma vez e zervicherien treuz-stummet e ministred a justiz: o fin dezo a vo diouz o oberou!

¹⁶ Adarre e lavaran, gand aon na gavje d'unan bennag ez on diskiant!

- Rom 7,5 Anez-da-ze, va degemerit evel eun den diskiant, din da c'helloud lorha eun tammig! ¹⁷ Ar pezh a lavaran, n'hel lavaran ket hervez an Aotrou, med evel eun den diskiant, da zisklêria digarez va lorc'h! ¹⁸ Pa z'eus kalz tud o lorha hervez an natur-den, ez an-me ive da lorha! ¹⁹ Laouen e c'houzañvit tud diskiant, ha c'hwi fur! ²⁰ Rag gouzañv a rit tud d'ho sklavaad, tud d'ho lonka, tud d'ho skrapa, tud d'ho kourdrouz, tud da zistaga deoc'h cholpadou! ²¹ Gand méz hel lavaran, evel pa vefem-ni bet laosk ganeoc'h! War an dachenn ema lod o hardisaad (en diskiant hel lavaran!), ez an-me ive da hardisaad!
- Fil 3,5
Gal 1,13... ²² Ha bez' ez int Hebreiz ? Me ive! Izraeliz int ? Me ive! Euz gouenn Abraham int ? Me ive! ²³ Ministred ar C'hrist int ? O tiskianta e lavaran-me: me kalz muioc'h! Muioc'h e poaniou, muioc'h e prizoniou, dreist-muzul e gloaziou, aliez e par ar maro! ²⁴ Digand ar Juzevien, pemp kwech am-eus paket daou-ugent taol skourjez nemed unan! ²⁵ Teir gwech on bet bazatet, eur wech on bet labezet, teir gwech on-eus peñseet, eun nozvez hag eun devez am-eus tremenet er mor! ²⁶ Dre ober hent aliez, risklou war stêriou, risklou a-berz laeron, risklou a-berz kenvroiz, risklou a-berz Paganed, risklou e kêr, risklou er gouelec'h, risklou war vor, risklou a-berz fals-vreudeur! ²⁷ E-kreiz labour ha skuizder, beilladegou aliez, naon ha sehed, yunou aliez, yenienn ha noazder! ²⁸ Ouspenn an traou diavêz, va bec'h pemdezieg: nehamant an oll Ilizou! ²⁹ Piou a gouez klañv, heb ma vezan-me klañv ? Piou a vez skoillet, heb ma vezan-me o tevi ?
- Ob 16,22... ³⁰ Ma ranker lorha, ez an da lorha gand va zaoliou a zempladurez! ³¹ Doue ha Tad Jezuz an Aotrou, -meulet ra vezo a-hed an oll gantvejou!- a oar ne lavaran ket gevier! ³² E Damaz, merour ar roue Aretaz a ree gward war Gêr an Damaskiz o klask paka krog ennon! ³³ Ha dre eur prenestr, en eur bouteg eo ez on-me diskennet dre ar voger hag am-eus tehet a-dre e zaouarn...
- Ob 9,24

- 12 -

AN DEN-ZE A ZO BET SKRAPET D'AN TREDE NEÑV!

- Disk 2,7 ¹ Bez' e ranker lorha, ha ne dal seurt! Dond a ran avad da zisplega e-neus an Aotrou paret dirazon, hag e-neus diskuliet din kalz traou! ² Goud a ouzon eo degouezet d'eun den er C'hrist, bremañ ez eus pevarzeg vloaz, (pe en e gorv, n'ouzon ket! Pe er-mêz euz e gorv, n'ouzon-me ket! Doue a oar!), d'an den-ze eo degouezet beza skrapet beteg an trede Neñv! ³ Goud a ouzon eo bet an den-ze (pe en e gorv, pe er-mêz euz e gorv, n'ouzon-me ket! Doue a oar!) ⁴ skrapet d'ar baradoz, hag e-neus klevet traou dreist-lavar, traou ha n'eo gouest dén da zisplega!
- ⁵ Gand traou ar seurt-ze ez an da lorha: ne vezin ket o lorha ganin v-unan, nemed gand va zempladureziou! ⁶ Ma karfen lorha, ne vefen ket diskiant, rag ar wirionez a lavarfen! Damanti a ran da-ze, gand aon e lakfe unan bennag war va c'hont kaerroc'h eged ar pezh a wel pe a glev ahanon...

Mz 26,39 7 Ablamour da uhelder an diskuliadennoù, da viroud ouzin sevel re uhel, ez eus roet din eun drên, eun êl a Zatan, dezañ d'am cholpata da viroud ouzin sevel re uhel! 8 Diwar-e-benn am-eus teir gwech aspedet an Aotrou ma vefe pelleet diouzin. 9 Ha lavaret e-neus din: "Tra a-walc'h eo dit va gras! Er zempladurez eo e vez degaset va Nerz en e wella!" Gand ar brasa dudi eta ez on kentoc'h lorhet gand va zempladureziou, ma vo Nerz ar C'hrist o chom warnon. 10 Rag-se, en em blijoud a ran er zempladureziou, en dismegou, en ezommou, en heskinou, en enkreziou, ablamour d'ar C'hrist, rag pa vezan dinerz, neuze e vezan galloudeg!

Rom 15,19 11 Deuet on diskiant! C'hwi eo ho-peus greet din dond evelse, rag dleet e oa din beza erbedet ganeoc'h-c'hwi, rag n'on ket disterroc'h eged an 'ebes-tel dreist-ze', goude din beza netra! 12 Rag sinou an Abostol a zo bet sevenet en ho touez dre beb dalc'h, dre zinou ha marzou ha burzudou! 13 War betra oc'h-c'hwi bet koll gand an Ilizou all, nemed n'am-eus-me ket ho sammet! Pardonit din an disgwir-ze!

Mz 10,8 14 Setu ma z'on prest da vond davedoc'h evid an trede gwech, ha n'ho sammin ket, rag ne glaskan ket ho madou, med c'hwi hoc'h-unan! N'eo ket d'ar vugale dastum evid o c'herent, med d'ar gerent evid o bugale. 15 Gand dudi avad e teuin da zispigna pep tra ha d'en em zispigna va-unan evid hoc'h eneou. Ha m'ho karan-me muioc'h, daoust ha nebeutoc'h e vezin-me karet ?

Yn 10,10
Fil 2,17 16 Lakom avad: me n'am-eus ket ho sammet! Med, korvigeller ma z'on, me am-eus ho paket dre douell! 17 Med ar re am-eus kaset davedoc'h, daoust ha dre unan bennag anezo am-eus ho sunet ? 18 Tit am-eus kaset davedoc'h, ha gantañ em-eus kaset or Breur: daoust ha Tit e-neus ho sunet ? Daoust ha ne valeom ket en eun heveleb spered ? Ha war an heveleb roudou ?

19 Pell 'zo e kav deoc'h emañ o klask en em zidamall dirazoc'h... Dirag Doue, er C'hrist, e komzom, ha kement-se, Breudeur karet, evid ho skweria mad! 20 Rag aon am-eus, o tegouezoud, d'ho kavoud a-seurt na fell ket din, ha da veza va-unan kavet evel na fell ket deoc'h! Aon am-eus ma vefe en ho touez rendael, erez, fulor, dizemgleo, kasoni, droug-komz, c'hwezadur, dispac'h! 21 Aon am-eus, o tegouezoud adarre, na zeufe va Doue d'am izellaad dirazoc'h, hag am-befe da ouela war e-leiz euz ar re o-deus pehet ha n'int ket distroet diouz ar c'hadaliez, diouz ar zerherez ha diouz an hudurnez o-deus greet...

- 13 -

NE C'HELLOM NETRA A-ENEB AR WIRIONEZ!

Mz 18,16 1 Evid an trede gwech ez an davedoc'h! Diwar lavar daou pe dri e vo reizet pep tra. 2 Lavaret am-eus, ha bremañ e lavaran adarre, -evel pa oan en ho touez d'an eil gwech, ha bremañ p'emaon pell diouzoc'h-, d'ar re o-deus pehet kent ha d'ar re all: ma teuan adarre, n'am-bo damant ebed, 3 peogwir e klaskit eun amprou da weled hag ennon ema ar C'hrist o komz, Eñ ha n'eo

Rom 1,4
Fil 2,10

ket dinerz evidoc'h, med ennoc'h e tiskouez e c'halloud! ⁴ Staget eo bet ouz ar groaz diwar e zempladurez, med beva a ra dre c'halloud Doue. Ni ive a zo dinerz ennañ, med gantañ e vevim dre c'halloud Doue evidoc'h!

⁵ Hoc'h-unan eo deoc'h en em amproui da weled hag er feiz emac'h, hag ive d'en em varn hoc'h-unan. Pe daoust ha n'anavezit ket ema Jezuz Krist ennoc'h? Nemed fall e vefec'h kavet gantañ ? ⁶ Fiziañs am-eus e ouezoc'h n'om-ni ket bet kavet fall...

⁷ Goulenn a ran digand Doue na rafec'h tamm droug ebed! N'eo ket avad deom-ni da veza diskouezet evel tud kavet mad, med deoc'h-c'hwi d'ober ar peç a zo kaer, ha deom-ni beza evel tud kavet fall!

⁸ Rag ne c'hellom netra a-eneb ar Wirionez, med evid ar Wirionez hepkén! ⁹ Laouennaad a reom pa vezom dinerz ha c'hwi nerzuz! Hag evid an dra-mañ e pedom: evid ho peur-reizder! ¹⁰ Ablamour da-ze e skrivan kement-se euz a-bell, evid n'am-bo ket, en ho kichenn, d'ober kriz deoc'h hervez ar galloud e-neus an Aotrou roet din evid sevel, ha n'eo ket evid diskar!

Fil 3,1...
Fil 4,4...
Mz 5,7...

¹¹ A-hend-all, Breudeur, bezit laouen, bezit peur-reizet! Frealzit! Deoc'h prizoud hevelep tra! Bevit er peoc'h! Ha Doue ar garantez hag ar peoc'h a vezo ganeoc'h!...

¹² Saludit an eil egile dre eur pok santel!

Ho saludi a ra an oll dud santel.

Gras Jezuz Krist an Aotrou,

Ha karantez Doue

Ha komuniez ar Spered Santel ra vezo ganeoc'h oll!...



Leor-overenn Plegad-Gweran. Sk J. F.

Al lizer da C'halatiz

Epad e eil beaj a visioner, e-neus Paol savet eun Iliz e-touez ar C'halatiz, or c'hendirvi keltieg a oa o chom e-kreiz an Turki a-vremañ! Ha deuet eo d'o c'hennerza epad e drede beaj. En Iliz-se, evel e kalz re all, e teu fals-ebestel (Juzevien, pe Gristenien kent Juzeo) da glask distaga ar Gristenien diouz an Abostol ha diouz ar feiz. Lavared a reont: "Evid beza saveteet, n'eo ket awalc'h kredi e Jezuz: red eo ive delher stard d'al Lezenn juzeo ha d'hec'h Oberou... Pa ne zalc'h ket da gement-se, n'eo ket Paol eur gwir abostol..." D'ar gudenn-ze, e-neus Paol roet eur respont hir-kenañ, en e Lizer da Romiz, hag er memez amzer, el Lizer-mañ d'ar C'halatiz.

1 - 2. Ar C'halatiz o-deus degemeret eun Aviel 'all', disheñvel diouz an hini prezeget gand Paol ha deuet digand Doue e-unan! "N'eus Aviel all ebed!" Paol e-unan a zo bet da genta leun a c'hred evid al Lezenn juzeo! P'e-neus Doue diskuliet dezañ e Vab, e-neus Paol sentet hag en em lakeet da embann an Aviel! Eet eo diwezatac'h da weled an Ebestel uhella; ar re-mañ o-deus kavet mad e Aviel; a-eneb Pêr zokén, e-neus eñ difennet stard frankiz ar Gristenien e-keñver al Lezenn Juzeo: ne vezer ket justizet dre Oberou al Lezenn, med dre ar feiz e Jezuz hepkén!

3 - 5. O Galatiz sod! Piou e-neus ho strobinellet ? Daoust ha diwar al Lezenn eo ho-peus resevet ar Spered ha grasou niveruz, ha gwelet burzudou en ho touez ? Ha dre ar feiz hepkén eo deuet on Tad-Meur Abraham da veza tad d'ar Juzevien ha d'ar Baganed a zeu d'ar feiz! Ar Skritur Zakr a lavar frêz: "Ar Just, diwar ar feiz a vevo! Ne vez justizet den dre Oberou al Lezenn..."

Ha neuze, da betra al Lezenn ? Bet eo bet roet evid reiza an dud evel bugale vian, dezo da veza savet mad ha da c'helloud eun deiz reseo ar Spered Santel evid beza mibien da Zoue en e Vab Jezuz, ha da lavared 'Tad!' a greiz o c'halon...

Dalhit mad d'ho feiz! D'ar re a zistro d'al Lezenn, ne zervicho mui Jezuz da netra! Ennañ ne gont nemed ar feiz a zalc'h da labourad er garantez... Med red eo diwall na vefe ar frankiz eun digarez evid diroll er c'hoantegeziou fall! D'an oll beza bleniet gand ar Spered...

6. Ar fals-ebestel a vez lorhet pa c'hellont distaga tud diouz Paol ha diouz ar feiz e Jezuz! Paol ne vez lorhet nemed er Zalver Jezuz: stag eo gantañ ouz ar Groaz, hag en e gorr e toug kleizennou Jezuz!

Da C'halatiz

- 1 -

N'EUS AVIEL ALL EBED!

- Rom 1,1... ¹ Paol, Abostol, -n'eo ket a-berz tud na dre eun den, med dre Jezuz Krist, ha dre Zoue an Tad e-neus E adsavet a-douez ar re varo-, ² hag ive an oll Vreudeur a zo gantañ, da Ilizou ar Galati: ³ Deoc'h gras ha peoc'h digand Doue an Tad ha digand Jezuz Krist on Aotrou! ⁴ Hemañ e-neus en em roet e-unan evid or pehejou, a-benn on diframma diouz ar Bed droug-mañ, hervez bolontez on Doue ha Tad. ⁵ Dezañ ar c'hloar a-hed ar c'hantvejou a gantvejou! Amen!...
- 1 Yn 5,19
- I Kor 11,4 ⁶ Souezi a ran e vefec'h ken buan-ze distroet diouz an Hini e-neus ho kalvet dre c'hras ar C'hris, warzu eun aviel all! ⁷ N'eus hini all ebed! N'eus nemed tud ouz ho strafuilla hag o klask trei tu da Aviel ar C'hris! ⁸ Med ma teufem, ni pe eun êl euz an Neñv, da embann deoc'h eun Aviel disheñvel ouz an hini on-eus embannet deoc'h, ra vezo anatem! ⁹ Evel m'emaon o paouez lavared deoc'h, e lavaran bremañ adarre: Ma teu unan bennag da embann deoc'h eun Aviel disheñvel ouz an hini on-eus embannet, ra vezo anatem! ¹⁰ Rag bremañ, daoust ha klask a ran gounid an dud pe Zoue ? Ha klask a ran plijoud d'an dud ? Ma plijfen c'hoaz d'an dud, ne vefen ket servicher d'ar C'hris!
- Mz 13,24
Yn 8,44
1 Kor 16,22
- Yn 8,29 ¹¹ Rag degemenn a ran deoc'h: an Aviel embannet ganin n'eo ket hervez an den; ¹² me kennebeud n'am-eus ket e zegemeret nag e zesket digand eun den, med dre ziskuliadenn Jezuz Krist! ¹³ Rag klevet ho-peus ano euz va buez kent, er Juzevieg: dreist-muzul ec'h heskine Iliz Doue, hag he drasta a reen! ¹⁴ Ha gwellaad a reen er juzevieg dreist kalz tud a-ouenn hag a-oad ganin, rag bez' e oan kalz gredusoc'h evid Kustumou va Zadou!...
- Mz 16,22
Ob 8,1...
Ob 26,4...
- Lk 1,13... ¹⁵ Med an Hini e-neus va dibabet adal kov va mamm, ha va galvet dre e c'hras, e-neus eun deiz kavet mad ¹⁶ diskulia ennon e Vab, din da embann an Aviel e-touez ar Baganed! War-an-taol, n'on-me ket eet da gaoud dén, ¹⁷ ha n'on ket savet da Jeruzalem daved ar re a oa Ebestel araozon! Med eet on d'an Arabi, ha distroet on adarre da Zamaz. ¹⁸ Goude-ze, tri vloaz diwezatac'h, ez on savet da Jeruzalem da weled Pèr: en e gichenn ez on chomet epad pemzeg devez. ¹⁹ N'am-eus gwelet hini all ebed euz an Ebestel, nemed Jakez, breur an Aotrou. ²⁰ Evid ar pez a skrivan deoc'h, setu ma testenian dirag Doue: Ne lavaran ket gevier! ²¹ Da c'houde ez on eet war harzou ar Siri hag ar Silisi. ²² E-keñver va dremm e oan chomet dianav d'an Ilizou a zo er C'hris er Jude. ²³ Klevet o-doa hepken lavared: 'An hini on heskine kent, a zo bremañ oc'h embann ar feiz a oa kent oc'h heskina!' ²⁴ Hag ennon-me e tougent gloar da Zoue...
- Mz 13,55

- 2 -

MA KENDALHO EVIDOC'H GWIRIONEZ AR C'HRIST!

- Ob 15,2
Ob 4,36 ¹ Goude-ze, a-benn pevarzeg vloaz, ez on adarre savet da Jeruzalem gand Barnabe, en eur gemer ive Tit ganin. ² Savet on avad hervez eun disku-liadenn. Displeget am-eus dezo an Aviel a embannen e-touez ar Baganed, -diouz o zu avad d'ar re a denne beza braz!-, gand aon da redeg pe da veza redet en aner! ³ Med na Tit kennebeud, eno ganin, -hag eñ Gresian!- n'e-noa ket ranket beza amdrohet, ⁴ kement-se (ablamour d'ar fals-vreudeur degaset en on touez dre laer, ha silet en on touez evid spia or frankiz, an hini on-eus er C'hrist) evid on degas da sklav! ⁵ Nag eur pennadig zoken n'on-eus-ni pleget dezo, ma kendalho evidoc'h gwirionez an Aviel!...
- Ob 16,3
- Gal 4,31
Gal 5,13 ⁶ Ar re a denne beza braz (piou bennag e oa anezo neuze, ne vern din netra: Doue ne ra ket diouz dremm an dud!), ar re a denne beza braz n'o-deus goulennet netra all diganin! ⁷ En-eneb avad, gwelet o-deus eo bet fiziet ennon an Aviel evid an Diamdroc'h, evel m'eo e Pèr an Aviel evid an Amdroc'h! ⁸ Rag an Hini e-neus kennerzet Pèr evid Abostolerez an dud amdrohet, e-neus ive va c'hennerzet evid hini ar Baganed! ⁹ O c'houzoud eta ar c'hras roet din, o-deus Jakez ha Kefaz ha Yann, ar re a denne beza ar pilierou, roet din-me ha da Varnabe dorn ar Gomuniez, deom-ni da vond daved ar Baganed, hag int-i daved an dud amdrohet, ¹⁰ nemed deom-ni kaoud soñj euz ar beorien! Ha kement-se ive on bet aketuz da ober!
- Ob 9,15...
Ob 15,22...
- 1 Kor 16,...
- Ob 15,1... ¹¹ Pa z'eo avad deuet Kefaz da Antioch, tal-ouz-tal am-eus enebet outañ: bez' e oa da rebech dezañ! ¹² Araog ma oa deuet hiniennou a-berz Jakez, e veze o tebri gand ar Baganed: pa z'int degouezet, e-neus tehet hag ez eo chomet a-gostez gand aon rag an dud amdrohet! ¹³ Hag ar Juzevien all da c'hoari kuzad a-unan gantañ, ken ma z'eo bet degaset Barnabe da c'hoari kuzad ganto! ¹⁴ P'am-eus-me gwelet ne valeent ket eeun diouz gwirionez an Aviel, em-eus lavaret da Bèr dirag an oll: **“Te, goude dit beza Juzeo, ma vezez e-giz ar Baganed ha n'eo ket e-giz ar Juzevien, penaoz e rez d'ar Baganed heulia giz ar Juzevien ?** ¹⁵ Ni on-unan, Juzevien a-ouenn ha n'eo ket peherien a-douez ar Baganed, ¹⁶ o c'houzoud ne vez justizet den dre oberou al Lezenn, med hepkén dre ar feiz e Jezuz Krist, ni ive on-eus kredet e Jezuz Krist, deom da veza justizet dre ar feiz er C'hrist ha n'eo ket dre oberou al Lezenn, rag dre oberou al Lezenn ne vo justizet den ebed! ¹⁷ Med o klask beza justizet er C'hrist, ma vezom-ni ive kavet peherien, daoust hag ar C'hrist a zo servicher d'ar pehed ? Arabad kredi! ¹⁸ Ma savan adarre an traou am-eus diskaret, en em lakan v-unan da vreser! ¹⁹ Rag me, dre al Lezenn, me a zo marvet d'al Lezenn evid beza da Zoue: a-unan gand ar C'hrist ez on bet staget ouz ar groaz! ²⁰ Bez' e vevan: n'eo ket me, med ema ar C'hrist o veva ennon! Kement a vevan bremañ em natur-den, a vevan dre ar feiz e Mab Doue, e-neus va c'haret hag en em roet evidon! ²¹ Ne daolan ket kuit gras Doue! Rag ma teufe Justiz dre al Lezenn, e vefe bet ar C'hrist marvet evid netra!”.
- Rom 3,28
- Rom 7,6
- Rom 6,11
- Yn 3,16

- 3 -

AN DÉN JUST DRE AR FEIZ A VEVO!

- Rom 3,16 ¹ O! Galatiz diskiant! Piou e-neus ho strobinellet, c’hwi hag a zo bet taolennet dirag ho taoulagad Jezuz Krist stag ouz ar groaz ? ² An dra-mañ hepkén a glaskan gouzoud diganeoc’h: daoust ha dre oberou al Lezenn ho-peus resevet ar Spered, pe dre Gelou ar feiz ? ³ Ha ken diskiant-ze ez oc’h-c’hwi ? Goude beza kroget gand ar Spered, ec’h echuit bremañ gand an natur-den! ⁴ Kement-se ho-peus gouzañvet evid netra ? Ha ma vefe c’hoaz evid netra! ⁵ An hini a ro eta deoc’h ar Spered hag a laka nerziou da virvi ennoc’h, daoust hag ober a ra kement-se diwar oberou al Lezenn pe diwar Gelou ar Feiz ? ⁶ Evel-henn eo skrivet: “*Abraham e-neus kredet e Doue, hag an dra-ze a zo bet kontet dezañ da Justiz!*” ⁷ Intentit ’ta: An dud a feiz, ar re-ze eo Bugale Abraham! ⁸ Ar Skritur e-neus gwelet en a-raog, e teufe Doue diwar ar feiz da justiza ar Baganed, ha kemennet he-deus ive da Abraham: “*Ennout-te e vezo benniget ar Baganed!*” ⁹ Evelse e vez an dud a feiz benniget gand Abraham, an dén a feiz!
- Dt 27,26 ¹⁰ Rag kement hini a laka e fiziañs e oberou al Lezenn a jom dindan eur valloz, rag skrivet eo: “*Malloz da gement-hini na zalc’h ket d’ober kement a zo skrivet e Leor al Lezenn!*” ¹¹ Rag anad eo ne vez dén, dre al Lezenn, justizet dirag Doue, peogwir “*An den just dre ar Feiz a vevo!*” ¹² Al Lezenn avad n’eo ket diwar ar feiz, med “*An neb a ra an traou-ze a vevo drezo!*” ¹³ Ar C’hrist e-neus on dasprenet euz malloz al Lezenn: evidom-ni eo deuet da veza ‘malloz’, rag skrivet eo: “*Malloz da gement-hini a zo stag ouz eur post-koad!*” ¹⁴ Evelse, d’ar Baganed e teu bennoz Abraham er C’hrist Jezuz, ha Promesa ar Spered a resevom-ni dre ar feiz!
- Gen 12,7 ¹⁵ Breudeur! E doare an dud e lavaran: evelse, testamant eun dén, pa vez aozet mad, ne c’hell dén e zistaoler nag e astenn! ¹⁶ Greet eo bet ar Bromesa da Abraham ha d’e ‘Ziskennad’; n’eo ket lavaret ‘D’an diskennidi’ evel pa vefe da veur a hini, med ‘D’e Ziskennad’, evel da ‘unan’ hepken, da lavared eo: d’ar C’hrist! ¹⁷ Hag e lavaran: An Testamant, rag-savet gand Doue, al Lezenn, deuet pevar c’hant vloaz ha tregont war-lerc’h, ne c’hell ket e ziskar beteg kas ar Bromesa da netra! ¹⁸ Rag ma teu an Hêrez dre al Lezenn, n’eo ket kén diwar ar Bromesa; da Abraham avad e-neus Doue roet ar C’hras dre ar Bromesa...
- Rom 11,6 ¹⁹ Perag eta al Lezenn ? En abeg d’ar bresadennoù eo bet roet ous-penn, ken na zeuio an ‘Diskennad’, a zo bet evitañ greet ha reizet ar Bromesa dre an êlez ha dre zorn an Hanterour! ²⁰ Ne vez ket avad a Hanterour evid unan hepkén, ha Doue a zo E-Unan kaer!
- Rom 5,20
Heb 2,2
Rom 7,7 ²¹ Al Lezenn a vefe eta a-eneb Promesaou Doue ? Arabad kredi! Rag ma vefe bet roet eul Lezenn gouest da rei Buez, euz al Lezenn evid gwir e teufe neuze ar justiz! ²² Med ar Skritur he-deus dalhet striz pep tra dindan ar Pehed, ma vefe roet ar Bromesa dre ar feiz e Jezuz Krist d’ar re a gred.
- Rom 3,9...
Rom 11,32

23 Araog m'eo deuet ar feiz, e oam-ni oll paket a-unan dindan gward al Lezenn, da c'hortoz ar feiz da veza diskuliet. 24 Evelse eo bet al Lezenn or blenier daved ar C'hrist, deom da veza justizet dre ar feiz. 25 Degouezet ar feiz, n'emaom ket ken dindan ar blenier, 26 rag bez' ez oc'h oll bugale da Zoue dre ar feiz e Jezuz Krist! 27 Rag c'hwi oll hag a zo bet badezet er C'hrist, warnoc'h ho-peus gwisket ar C'hrist: 28 n'eus mui amañ na Juzeo na Gresian, n'eus mui na sklav na den frank, n'eus mui na gwaz na maouez, rag bez' ez oc'h oll unan hepken er C'hrist Jezuz! 29 Ma z'oc'h euz ar C'hrist, ez oc'h eta 'Diskennad' Abraham hag Hêred hervez ar Bromesa...

Yn 1,12
Rom 8,17
1 Kor 12,13
Kol 3,11

Rom 10,12

- 4 -

MA Z'OUT MAB, EZ OUT IVE HÊR DRE ZOUÉ!

1 Lavared a ran avad: e-keid ha ma vez bugel, ne vez ar penn-hêr tamm dishêvel ebed ouz ar sklav, goude beza mestr war an oll draou! 2 Bez' e vez dindan gwarded ha merourien, beteg an amzer merket gand e dad. 3 Evelse e oam-ni ive: pa oa ahanom bugale, e oam dalhet sklav da draouachou ar Bed. 4 Pa z'eo deuet mad an 'Amzer', e-neus Doue kaset e Vab, ganet euz eur Vaouez, ganet dindan al Lezenn, 5 da zasprena ar re a oa dindan al Lezenn, deom da reseo reñk a Vab! 6 Pa z'oc'h eta Mibien dezañ, e-neus Doue kaset Spered e Vab en ho kalonou, hag enno e youc'h 'Abba! Tad!' 7 Evelse, n'out ket ken sklav, med Mab! Ma z'out Mab, ez out ive hêr dre Zoue!

Ef 1,10

Rom 8,15...
Yn 3,5...

8 Med kentoc'h, pa n'anavezec'h ket Doue, e oac'h sklav d'ar re ha n'eus ket 'doueou' anezo! 9 Bremañ avad, pa anavezit Doue, pe gentoc'h, pa z'oc'h anavezet gand Doue, penaoz distrei adarre d'an traouachou dister ha paour, a fell deoc'h beza sklav dezo a-nevez evel kentoc'h? 10 'Devezioù' ha 'Mizioù' hag 'Amzerioù' ha 'bloavezioù' a virit! 11 En ho keñver em-eus aon da veza poaniet evidoc'h en aner!

1 Tes 1,9
1 Kor 8,4...

Kol 2,14...

12 Deuit da veza eveldon-me, rag deuet on-me da veza eveldoc'h, Breudeur! N'ho-peus va gwallet tamm ebed! 13 Gouzoud a rit: e sempladurez va c'horv em-eus embannet deoc'h an Aviel en dro genta! 14 Goude d'am c'horv beza evidoc'h eun tentadur, n'ho-peus-c'hwi bet na dispriz nag heug! Med va resevet ho-peus evel eun êl a Zoue, evel ar C'hrist Jezuz! 15 Pelec'h eta ema hoc'h eurvad a-neuze? Rag deoc'h e roan an testeni: ma vije gellet, ho-pije tennet ho taoulagad evid o rei din-me! 16 Evelse, daoust ha deuet on deoc'h eun enebour oc'h heulia ganeoc'h ar Wirionez?

1 Kor 9,21

Mz 10,40

17 Bepred emaint war ho tro, med en eun doare n'eo ket kaer! Bez' e fell dezo ho tistaga diouzom, deoc'h da vond war o zro! 18 Kaer e vefe deoc'h beza bepred war va zro en eun doare kaer, ha n'eo ket hepken pa vezan en ho touez, 19 c'hwi, va Bugale! Evidoc'h e tiwaskan ar gwentlou, ken na vo stummet ennoc'h ar C'hrist! 20 Me a garfe beza bremañ en ho touez, da stumma va mouez, rag nehet-marzo on-me ganeoc'h!

1 Kor 4,15
Filem 10

- Gen 16,15 21 Lavarit din, c’hwi hag a glask beza dindan al Lezenn: daoust ha ne glevit ket al Lezenn ? 22 Rag skrivet eo: “*Abraham e-neus bet daou vab, unan euz e vatez, egile euz e wreg frank*”. 23 Med hini e vatez a zo ganet hervez an natur, hini e wreg frank avad hervez ar Bromesa. 24 An traou-ze a zo skeudennou: an diou vaouez-ze a zo skeudennou an daou Destamant-Emgleo. An hini genta, deuet euz Menez Sinaï, he-deus ganet evid beza sklav: honnez eo Agar! 25 Rag ar Sinaï a zo eur menez en Arabi: par eo d’ar Jeruzalem a-vremañ, rag sklav eo homañ gand he bugale! 26 Ar Jeruzalem-d’an-Nec’h avad a zo frank: Honnez eo or Mamm, 27 rag skrivet eo:
- Iz 54,1... “*Laouenna, Maouez difrouez chomet heb genel!*
“*Tarz ha youc’h, Maouez chomet heb gwentlou!*
“*Rag niverusoc’h eo Bugale an Hini dilezet,*
“*Eged re an hini he-deus he gwaz!*”
- Gen 21,9... 28 C’hwi avad, Breudeur, c’hwi eo Bugale ar Bromesa hervez Izaag! 29 Med evel m’eo neuze deuet an hini ganet hervez an natur da heskina an hini ganet hervez ar Spered, evelse e c’hoarvez ive bremañ! 30 Med petra ’lavar ar Skritur? “*Kas kuit ar vatez hag he mab! Rag mab ar vatez ne vezo ket hêr gand Mab ar Wreg frank!*” 31 Rag-se, n’om-ni ket bugale ar vatez, med Bugale ar Wreg frank...

- 5 -

AR FEIZ A LABOUR DRE AR GARANTEZ!

- Gal 4,5
Ob 15,10 1 Ar C’hrist e-neus or frankizet, deom da veva er frankiz! Kendalhit eta enni! Ha diwallit da veza adarre dalhet dindan yeo eur sklaverez! 2 Setu ma lavaran deoc’h, me Paol: ma teu deoc’h beza amdrohet, ne dalvezo deoc’h ar C’hrist da netra! 3 Adarre e testenian da gement hini a zeu da veza amdrohet: red eo dezañ heulia al Lezenn penn-da-benn. 4 Eet oc’h da netra pell diouz ar C’hrist, c’hwi oll hag a vez justizet el Lezenn! Kouezet oc’h c’hwi er-mêz euz ar c’hras! 5 Rag dre ar Spered hag euz ar feiz on-eus-ni bet esperañs ar Justiz! 6 Hag er C’hrist, hag an Amdroc’h hag an Diamdroc’h ne reont seurt, med hepkén ar Feiz a vez o labourad dre ar Garantez...
- 2 Kor 10,1 7 Redeg kaer a reec’h! Piou e-neus ho skoillet, da viroud ouzoc’h senti ouz ar Wirionez ? 8 Ar zoñj-ze ne zeu ket euz an Hini e-neus ho kalvet! 9 Eun tammig goell a zegas da c’hoi eur bern toaz a-bez! 10 En Aotrou em-eus evidoc’h fiziañs na brizit netra all! An neb ho trubuill avad a zougo e gastiz, piou bennag e vefe! 11 Me avad, Breudeur, ma embannan c’hoaz an amdroc’h, perag on-me c’hoaz heskinet, rag kaset eo neuze da netra skoill ar Groaz! 12 Ra zeuint zoken da veza spazet, ar re a laka dispac’h en ho touez!...
- 1 Kor 7,19 13 Rag d’ar frankiz ez oc’h bet galvet, Breudeur! Nemed arabad d’ar frankiz trei e digarez d’an natur-den! Med dre ar garantez, deoc’h servicha an eil egile! 14 Rag al Lezenn en he fez a zo peur-zastumet en eur Gomz hepkén,
- 1 Pèr 2,16
Rom 13,8...
Lk 10,28...

a zo: “*Kared a ri da nesa evel dout da-unan!*” ¹⁵ Med ma vezit o krignad hag o tebri an eil egile, diwallit da veza lonket an eil gand egile!

Rom 7,15... ¹⁶ Lavared a ran avad: dalhit da vale dre ar Spered ha ne zeuoc’h ket d’ober c’hoantegez an natur-den! ¹⁷ Rag an natur-den a c’hoanta a-eneb ar Spered, hag ar Spered a-eneb an natur-den! Enebi a reont an eil ouz egile, ken na zeuit ket d’ober ar pezh a fell deoc’h! ¹⁸ Ma vezit avad renet gand ar Spered, n’emaoc’h ket dindan al Lezenn. ¹⁹ Anad e vez oberou an natur-den; ar re-mañ int: serherez, dihländer, gadaliez, ²⁰ idolerez, sorserez, kasoni, rendael, gwarizi, fulor, dispac’h, dizunvaniez, disrann, ²¹ erez, mezventi, lontegez, ha traou a seurt-se! Hag e lavaran deoc’h, evel m’am-eus c’hoaz lavaret: an dud a ra ar seurt traou n’o-dezo ket Rouantelez Doue da Hêrez!

Ef 5,9... ²² Frouez ar Spered avad a zo anezo: karantez, levenez, peoc’h, habas-ter, hegarater, madelez, feiz, ²³ douster, reizder,... A-eneb da gement-se n’eus Lezenn ebed! ²⁴ Ar re a zo d’ar C’hrist o-deus staget ouz ar Groaz o natur-den, gand he youlou hag he c’hoantegeziou! ²⁵ Ma vevom dre ar Spered, deom ive bale dre ar Spered! ²⁶ Arabad deom beza lorhuz, o rendael etrezom, hag oc’h erezi an eil egile...

- 6 -

ARABAD LORHI NEMED E KROAZ JEZUZ KRIST!

Mz 18,15 ¹ Ha paket e vefe eun den en eur mank bennag ? Deoc’h-c’hwi, tud speredel, reiza ar seurt den en eur spered a zouster! Taol evez da-unan, gand aon da veza tentet, te ive! ² Dougit ho sammou an eil d’egile, hag evelse e peurzevenit Lezenn ar C’hrist. ³ Ma kav da eun dén ez eus anezañ eun dra bennag, -ha n’eus netra anezañ!-, ema e-unan o touella e spered! ⁴ Da bep hini amproui e ober e-unan, ha neuze e-no eun digarez a lorc’h ennañ e-unan, ha n’eo ket gand unan all! ⁵ Da bep hini dougen e zamm!

Rom 8,13 ⁶ An hini a zo anezañ eun diskib war ar Gomz, dezañ lodenna e oll vadou gand e gelenner! ⁷ Diwallit da fazia: Doue ne vez ket goapeet! Ar pezh e-neus hadet eun dén, an dra-ze ive ec’h eosto! ⁸ An neb a had en e natur-dén, euz an natur-dén ec’h eosto ar vreïnadurez... An hini a had er Spered, euz ar Spered ec’h eosto Buez peurbaduz! ⁹ Arabad deom fallaad d’ober ar pezh a zo kaer: d’ar poent, ec’h eostim heb distaga! ¹⁰ Neuze ’ta, epad m’on-eus tro, graom ar mad d’an oll, dreist-oll avad d’or Breudeur er feiz...

Fil 3,18 ¹¹ Gwelit gand pebez lizerennou e skrivan deoc’h gand va dorn... ¹² Ar re a fell dezo damanti d’an natur-dén, ar re-ze a ra deoc’h beza amdrohet, dezo nemetkén miroud da veza heskinet ablamour da Groaz ar C’hrist... ¹³ Rag an dud amdrohet o-unan ne viront ket al Lezenn, med c’hoant o-deus e vefec’h amdrohet, dezo da veza lorhet gand ho korv! ¹⁴ Evidon-me avad, ra ziwallin da veza lorhet, paneve gand Kroaz Jezuz Krist on Aotrou. Drezañ eo ar Bed staget ouz ar Groaz evidon, ha me ive evid ar Bed! ¹⁵ Rag er C’hrist Jezuz, ne gont nag an Amdroc’h, nag ive an Diamdroc’h, med ar Grouadelez Nevez!

1 Kor 7,10

Gal 6,16-18

¹⁶ Ha d'ar re a vale hervez ar reolenn-ze, Peoc'h ha Trugarez warno hag ive war Izrael Doue!

2 Kor 4,10
Fil 3,10

¹⁷ Ha bremañ, arabad da zén degas din trubuillou, rag gouliou Jezuz a zougan em c'horv...

¹⁸ Gras Jezuz Krist on Aotrou ra vo gand ho spered! Amen!



Jezuz, savet a varo da veo, kizellet war unan euz
staliou Iliz-Veur Kastell-Paol. Sk J. F.

Al Lizer da Efeziz

En e veajou a visioner eo bet tremenet Paol meur a dro dre Gêr Vraz Efez, hag a-wechou eo bet chomet enni hir amzer, e-kreiz gwall-drubuillou (1 Kor 15,32). Wardro ar bloavez 63, e-neus eñ skrivet al Lizer dispar-mañ, n'eo ket hepkén da Efeziz, med d'ar Gristenien euz ar c'horn-bro-ze a-bez. Tridal a ra e galon gand eul levenez speredel, o tispaka d'e ziskibien, ha deom-ni ive, Mister or Silvidigez, Mister or Zalver Jezuz, ar Segred e-neus Doue an Tad dalhet kuzet en e galon beteg bre-mañ...

1 - 3. *Ya, “Meuleudi da Zoue, Tad Jezuz-Krist, on Aotrou!”* A-viannig e-neus Paol kanet meuleudi da Zoue evid an oll c'hrasou skuillet gand Doue war ar Bobl zantel! Abaoe ma embann an Aviel d'ar Baganed, e wél frêz ema Doue o skuilla e c'hrasou war an oll Grederien, Paganed koulz ha Juzevien, dre e Vab Jezuz, marvet war eur groaz, adsavet leun a c'hloar! N'eus deuet dén da c'houzoud piou e-neus Doue dibabet evid savetei ar Béd, Juzevien ha Paganed! Jezuz eo ar zegred-ze, ar Mister-ze, diskuliet bremañ frêz dre an Ebestel...

Doue an Tad e-neus lakeet e c'halloud divent da adsevel Jezuz leun a c'hloar a-douez ar re varo. Lakeet e-neus ive ar galloud-ze da labourad evid an dud, oc'h ober dezo mervel hag adsevel a-unan gand e Vab, dezo da zond da veza a-unan gantañ, eun Dén Nevez, eur C'hory hepkén, ha da c'helloud sevel daved an Tad dre ar Spered... Ar Baganed n'o-doa beteg-henn lod ebed en Donezonou roet d'ar Bobl Juzeo. Dre Jezuz ez int bremañ kenlodeg en oll. Ra zeuio an Tad, dre ar Spered, d'ober dezo anavezoud mad braster karantez Jezuz evito, dezo da veza leuniet beteg leunder Doue!

4 - 6. *N'eus nemed eun Doue, eur Spered, eur C'hory, eur Vadeziant, eun esperañs... D'an oll Gristenien eta beza unan a galon, er feiz. Dezo oll, asamblez, kreski er feiz, ma teuint da veza Kory ar C'hrist en e vent!*

D'an oll diwiska 'an dén koz', an doare koz da veva! Dezo gwiska 'an Dén Nevez', gwiska doare Jezuz, beva er zantelez evel Jezuz e-unan, o kemer skwer war Zoue an Tad, ha war garantez Jezuz e-unan...

D'ar gwragez beza doujuz d'o fried, evel m'eo an Iliz da Jezuz.

D'ar gwazed kared o gwragez evel m'e-neus Jezuz karet e Iliz beteg mervel eviti, evid ober anezi eun Iliz leun a c'hloar, santel, direbech. Karantez ar wazed evid o gwragez a zo eur 'zin', eur merk frêz euz karantez Jezuz evid e Iliz, eur Zakramant...

D'ar vugale senti ouz o zud...

D'ar sklaved senti ouz o mistri, ha labourad evito evel d'ar C'hrist; Hemañ eo or Mestr, deom-oll!

Da bep hini stourm a-eneb Sperejou an Droug, gand skoazell armou Doue: ar Justiz, ar Wirionez, ar Spered, Komz Doue... hag ive Beilla ha Pedi!

Da Efeziz

- 1 -

DASTUM AN OLL DRAOU ER C'HRIST!

¹ Paol, Abostol Jezuz Krist dre volontez Doue, d'an oll dud santel a zo en Efez, hag a gred er C'hrist Jezuz: ² deoc'h gras ha peoc'h digand Doue an Tad ha Jezuz Krist on Aotrou!

³ Meuleudi da Zoue ha Tad Jezuz Krist on Aotrou!

Bez'e-neus or benniget a beb bennoz speredel er C'hrist, euz lein an Neñv,

⁴ hervez m'e-neus on dibabet ennañ araog krouidigez ar bed, deom da veza santel ha dinamm dirazañ er garantez.
Yn 15,16
Yn 17,24
Ef 5,27

⁵ Or reizet e-neus evid dond da veza Mibien dezañ er C'hrist Jezuz, hervez madelez e volontez,

⁶ ma vo meulet ar C'hras e-neus roet brokuz deom en e Vuia-Karet!
Lk 1,28

⁷ Ennañ on-eus an daspren, dre e Wad, ar pardon euz or mankou, diouz pinvidigez e c'hras,
1 Kor 1,13

⁸ e-neus-Eñ skuillet founnuz ennom e peb furnez hag e peb poell!

⁹ Disklêriet e-neus deom Mister e volontez,

hervez ar vadelez e-neus lakeet ennañ ¹⁰ evid urzia 'Leunder-an-Amzeriou':
Rom 16,24
Gal 4,4
Kol 1,16

Dastum er C'hrist an oll draou,

Kement a zo en Neñv ha kement a zo war an Douar!
Rom 8,28

¹¹ Ennañ ive ez om-ni bet dibabet da veza ragreizet,

-hervez menoz an Hini a ra pep tra diouz Mennad e volontez,-

¹² deom beza ar re o-deus gortozet ar C'hrist evid meuleudi e c'hloar!

¹³ Ennañ, ive, diwar gleved Komz ar wirionez ha dre gredi enni, ez oc'h-c'hwi bet siellet gand Spered Santel ar Bromesa:
Kol 1,5

¹⁴ Hemañ eo arrez an Hêrez,
2 Kor 5,5

a-benn daspren an dud gounezet gantañ evid meuleudi e c'hloar!
2 Kor 1,22

¹⁵ Rag-se ive, klevet ganin ano euz ho feiz e Jezuz on Aotrou hag euz ho karantez evid an dud santel, ¹⁶ ne baouezan-me ket da drugarekaad evidoc'h, oc'h ober koun ahanoc'h em fedennou... ¹⁷ Plijet gand Doue
Kol 1,4

Kol 1,10 Jezuz Krist on Aotrou, Tad leun a c'hloar, rei deoc'h Spered ar furnez hag an diskuliadenn evid e anavezoud! ¹⁸ Ra sklêrijenno daoulagad ho kalon, deoc'h da c'houzoud peseurt esperañs a ro e c'halv, peseurt teñzor a c'hloar a zegas e Hêrez en dud santel, ¹⁹ ha peseurt braster-dreist e-neus e c'halloud ennom-ni, hervez e nerz stard ha kreñv...

²⁰ An nerz-ze e-neus-Eñ lakeet da oberia er C'hrist: bez'e-neus e adsavet a-douez ar re varo, hag e ziazezet e-neus a-zehou dezañ e-unan, e lein an Neñv, ²¹ kalz uhelloc'h eged peb Pennadur, peb Aotronez, peb Galloudegez, peb Mestroni ha kement ano e vefe anvet, n'eo ket hepken er Bed-mañ, med ive er Bed-da-zond! ²² "*Ha lakeet e-neus pep tra dindan e dreid*", hag E roet e-neus evel Penn, dreist-oll d'an Iliz: ²³ Homañ eo e Gorv, ha Leunder an Hini a zo o leunia pep tra e pep hini...

- 2 -

DEGAS AN DAOU DA VEZA EUN DEN-NEVEZ!

Rom 1,18
Kol 2,13
Yn 12,21
Rom 2,1...
Yn 3,16...
Rom 5,5...
Rom 6,13...
Kol 2,13
Gal 2,16

¹ Bez' e oac'h maro dre ho mankou hag ho pehejou: ² enno e oac'h o vale da-heul tud ar bed-mañ ha da heul an hini a zo rener war galloudegez an êr, war ar spered a zo oc'h oberia bremañ e pôtre-d-an-diskred! ³ En o zouez ive e vezem-ni oll kent, dre c'hoantegeziou an natur-den, oc'h ober youlou an natur hag he divizou fall; dre natur e oam tud sujet d'ar gounnar koulz hag ar re all...

⁴ Doue avad, -pa z'eo pinvidig e trugarez diwar ar garantez vraz m'e-neus or c'haret drezi, ⁵ ha pa oa ahanom tud maro dre or mankou!- Doue e-neus roet deom buez a-unan gand ar C'hrist (dre c'hras ez oc'h bet salvet); ⁶ on adsavet e-neus ive hag on diazezet e lein an Neñv a-unan gand ar C'hrist! ⁷ Klasket e-neus diskouez frêz, a-hed ar c'hantvejou da zond, ez eo e c'hras pinvidig-mor e madelez en or c'heñver er C'hrist Jezuz! ⁸ Rag diwar e c'hras ez oc'h bet salvet dre ar feiz! Kement-se n'eo ket ahanoc'h! Donezon Doue eo! ⁹ N'eo ket ive diwar oberou, evid na zeuio den da lorhi! ¹⁰ Rag e oberenn dezañ ez om-ni, krouet er C'hrist Jezuz evid an oberou mad e-neus Doue ragreizet, deom bale enno!

Rom 9,4
Gal 3,26
2 Kor 5,17

¹¹ Rag-se, dalhit soñj e oac'h kent ar Baganed hervez natur, ar re lesañvet 'an Diamdroc'h' gand ar re a vez lesanvet 'Amdroc'h' diwar an oberatadenn greet en o c'horv gand dorn an den. ¹² Rag bez' e oac'h en amzer-ze heb Mesiaz, hag heb lod e kêriadelez Izrael, estren da emgleviou ar Bromesa; bez'e oac'h heb esperañs hag heb Doue er Bed-mañ! ¹³ Bremañ avad, er C'hrist Jezuz, ez oc'h deuet, c'hwi, gwechall pell, da veza tost dre Wad ar C'hrist! ¹⁴ Rag ar Peoc'h eo-Eñ e-unan! Anezo o Daou e-neus greet Unan hepken, dismantret e-neus moger an disrann, ar gasoni, hag en e Gorv, ¹⁵ e-neus kaset da netra Lezenn ar gourhemennou gand o reolennou! Klasket e-neus degas an Daou da veza ennañ eun Den-Nevez hepken, o lakaad peoc'h,

Kol 3,14 16 hag ive unvani an Daou gand Doue en eur C'horv hepken dre ar Groaz, o kas ennañ e-unan, ar gasoni d'ar maro!

Yn 14,6...
Heb 12,22 17 Ha deuet eo da embann Kelou-Mad ar peoc'h, deoc'h-c'hwi hag a zo pell, ha peoc'h d'ar re a zo tost! 18 Rag drezañ e c'hellom on Daou, dre an heveleb Spered, kaoud digor vad d'an Tad! 19 Neuze 'ta, n'oc'h ket kén tud estren ha diavezidi, med bez'ez oc'h kengêriz gand an dud santel, ha bez'ez oc'h Ti-Doue! 20 Savet oc'h bet war ziazez an Ebestel hag ar Brofeded, hag ar mên-korn-uhella eo ar C'hrist Jezuz e-unan! 21 Ennañ e kresk peb savadur kenurziet mad, beteg beza eur zantual zantel en Aotrou! 22 Ennañ ez oc'h-c'hwi ive savet a-unan, da veza Ti-Doue er Spered!

- 3 -

AR BAGANED A ZO KENLODEIEN EN HÊREZ...

Kol 1,26...
Rom 16,25
2 Kor 11,5... 1 Ablamour da-ze ez on-me, Paol, eread* ar C'hrist Jezuz evidoc'h-c'hwi, ar Baganed, 2 da vianna m'ho-peus klevet ano euz urziadur ar c'hras roet din gand Doue evidoc'h! 3 Dre eun diskuliadenn eo bet desket din ar Mister, hervez m'am-eus skrivet deoc'h ez verr! 4 Diwar-ze, ouz va lenn, e c'hellit intent ar skiant am-eus euz mister ar C'hrist. 5 A-hed ar rummadou-all, n'eo ket bet desket d'an dud evel m'eo bremañ diskuliet d'e Ebestel zantel ha d'e Brofeded, dre ar Spered.

Ob 10,1...
Mz 28,18 6 Ar Baganed a zo kenlodeien en Hêrez, kenizili er C'horv ha kenlodeien er bromesa, er C'hrist Jezuz, dre an Aviel! 7 Euz hemañ on-me deuet da veza ministr, hervez donezon ar c'hras roet din gand Doue diouz nerz e c'halloud! 8 Din-me, an disterra hini euz an oll dud santel, eo bet roet ar c'hras-mañ: embann d'ar Baganed pinvidigez-dreist-meiz ar C'hrist, 9 ha sklêrraad d'an oll pehini eo urziadur ar Mister-ze, dalhet kuzet, abaoe ar c'hantvejou, e Doue, Krouer an oll draou! 10 Dre-ze eo disklêriet bremañ, d'ar Pennaduriou ha d'ar Galloudegeziou e lein an Neñv, dre an Iliz, liesdoare furnez Doue, 11 hervez ar mennad peurbadel e-neus sevenet er C'hrist Jezuz on Aotrou! 12 En Hemañ on-eus an hardisegez da vond daved Doue gand fiziañs dre ar feiz ennañ! 13 Rag-se e c'houlennan diganeoc'h miroud da fall-galoni en abeg d'am zrubuilhou evidoc'h: setu aze ho kloar!...

14 Ablamour da-ze e plegan va daoulin dirag an Tad:

15 Anezañ e tenn peb tadelez hec'h ano, en neñv ha war an douar!

16 Dezañ ober deoc'h, hervez pinvidigez e c'hloar,

Rom 7,22 kreñvaad kaer, dre e Spered, en 'den diabarz';

Yn 14,23...
Yn 15,5... 17 D'ar C'hrist beza o chom dre ar feiz en ho kalonou;

Ha deoc'h-c'hwi chom gwriziet ha diazezet er garantez,

Yn 17,22... 18 Deoc'h gelloud, gand an oll dud santel,

* Eread: prizoniad.

intent pegement eo hirder ha ledander hag uhelder ha donder (karantez Jezuz),

Rom 16,25
Yn 3,16
Yn 13,1

¹⁹ Hag anavezoud karantez ar C’hris, a zo dreist peb anaoudegez, Deoc’h da veza leuniet beteg oll Leunder Doue!...

²⁰ D’an Hini a c’hell dreist-oll ober kalz founnoc’h eged ar pezh a c’houlennom pe a zoñjom-ni, hervez ar galloud a zo oc’h oberia ennom,

²¹ Dezañ ar c’hloar en Iliz hag er C’hris Jezuz a-hed oll rummadou eur c’hantved a gantvejou! Amen!

- 4 -

DILEZEL AN ‘DEN-KOZ’; GWISKA AN ‘DEN NEVEZ’!

Kol 1,10
Kol 3,10...

¹ Hoc’h alia a ran, me Paol, er ead ar C’hris, da vale en eun doare deread ouz ar galv ez oc’h bet galvet drezañ, ² izel a galon, leun a zouster hag a habaster, en eur c’houzañv an eil egile gand karantez, ³ aketuz da vired unaniez ar Spered e liamm ar peoc’h...

Yn 17,12...1

Yn 10,5...

⁴ Bez’ez eus eur C’horv hepken, eur Spered hepken, evel ma z’oc’h bet galvet d’eun esperañs hepken, an hini a zeu euz ho kalv*; ⁵ eun Aotrou hepken, eur vadeziant hepken, ⁶ eun Doue hepken, Tad d’an oll, hag a zo dreist an oll, evid an oll hag en oll!

1 Kor 12,11

⁷ Da bep hini ahanom eo bet roet ar c’hras hervez muzul donezon ar C’hris ⁸ rag-se e lavar:

Salm 68,19

*“En eur zevel d’an Uhel, e-neus preizet eur preiz:
“Ha roet e-neus donezonou d’an dud!”*

Yn 3,13
Yn 16,27...
1 Kor 12,48
1 Kor 14,20

⁹ Petra eo ‘sevel’, ma n’eo ket ive diskennet da izelennou an douar ? ¹⁰ An Hini a zo diskennet eo an Hini a zo savet a-uz d’an oll Neñv, dezañ da leunia pep tra! ¹¹ Ha roet e-neus lod da ebestel, lod all da brofeded, re all da avielerien, lod all avad da bastored, ha da gelennerien ; ¹² dezo da beurskweria an dud santel evid seveni ar vinistrerez, ma kresko Korv ar C’hris, ¹³ beteg deom-ni oll dond da veza unan er feiz hag en anaoudegez Mab Doue, dond da veza eur ‘Gwaz peurhreet’, beteg kaoud muzul ment ar C’hris en e leunder!...

Kol 3,11

1 Kor 14,20

¹⁴ Evelse, ne vezim ket kén bugaligou taolet-distaolet ha troidellet gand peb mouch-avel euz ar gelennadurez, diwar douellerez an dud ha diwar ar gorgigell a gas e trap ar fazi... ¹⁵ Med o seveni ar wirionez er garantez, e kreskim e peb doare hervez an Hini a zo ar Penn, ar C’hris! ¹⁶ Drezañ ema ar C’horv a-bez -reizet ha kenstrollet dre beb liamm a gas magadurez hervez an oberiad muzulet da beb lodenn- oc’h ober e gresk a-gorv evid sevel er garantez...

Kol 2,19

* galv Doue d’ar feiz.

- Rom 1,18...
Kol 1,21
I Pèr 1,14
- Rom 8,13...
Gal 6,8
Kol 3,5
- I Kor 12,12
Salm 4,5
- 1 Tes 4,11
- Mz 15,11
- Mz 6,14
Mz 18,22
- ¹⁷ Kement-mañ 'ta a lavaran hag a destenian: na valeit ket kén evel ma vale ar Baganed, goull o spered! ¹⁸ En deñvalijenn ema o spered, estren int da Vuez Doue, diouizieg ma z'int dre m'eo kaledet o c'halon! ¹⁹ Deuet da veza digeuz, o-deus int-i en em roet d'an hudurnez, beteg ober peb orged gand diroll! ²⁰ C'hwi avad, n'ho-peus ket desket evelse ar C'hrist, ²¹ da vian-na m'ho-peus e zelaouet ha ma z'oc'h bet kelennet ennañ, hervez m'eo ar wirionez e Jezuz. ²² Da eo deoc'h dilezel an 'den-koz' a oa ahanoc'h hervez ho puez tremenet, hag a zo o vond d'ar vreinadurez oc'h heulia e c'hoantegeziou touelluz! ²³ Ha deoc'h nevesaad ho spered hag o skiant, ²⁴ ha gwiska an 'Den-Nevez', krouet hervez Doue er justiz hag er zantelez gwirion...
- ²⁵ Rag-se, dilezit ar gevier, "lavarit ar wirionez pep hini d'e nesa, rag izili om-ni an eil d'egile"! ²⁶ "Kounnarit, med na behit ket!" Arabad d'an heol mond da guzad war ho kounnar! ²⁷ Na roit krog ebed d'an diaoul! ²⁸ An neb a laer, arabad dezañ laerez! Ra boanio kentoc'h d'ober ar mad gand e zaouarn e-unan, m'e-no peadra da rei d'an neb e-neus ezomm...
- ²⁹ Ne zeuio euz ho kenou komz louz ebed, med kentoc'h an hini a vo mad da skweria kement hini e-neus ezomm, a-benn rei eur c'hras bennag d'ar zelaouerien! ³⁰ Na c'hlaharit ket Spered Santel Doue: gantañ oc'h bet siellet a-benn Deiz an Daspren. ³¹ Ra vezo lamet euz ho touez peb c'hwervoni ha kounnar ha fulor ha youc'h ha blasfem, da heul peb drougiez! ³² Bezit avad kenetrezoc'h madelezuz, truezeg, o pardoni an eil d'egile evel m'e-neus Doue ive pardonet deoc'h er C'hrist Jezuz!

- 5 -

BALEIT ER GARANTEZ EVEL M'E-NEUS AR C'HRIST HO KARET!

¹ Kemerit 'ta skwer diwar Zoue evel bugale karet! ² Baleit er garantez evel m'e-neus ar C'hrist ive ho karet, hag e-neus evidom en em roet evel provadenn ha sakrifiz a-c'hwez-vad da Zoue! ³ Serherez ha peb hudurnez ha skraperez ne vezo ket kennebeud klevet ano anezo en ho touez, evel ma tere da dud santel, ⁴ nag euz viltañz pe ziotach pe c'hoaperez, -an traou-ze n'int ket deread!-, med kentoc'h euz an drugarekaad! ⁵ Gouezit hag intentit mad: den serheg ebed na den hudur ebed na skraper ebed -an dra-ze a zo beza idoler!-, n'e-neus hêrez e Rouantelez ar C'hrist hag hini Doue!

⁶ Arabad da zen ho touella gand komzou goull: en abeg da-ze e teu kounnar Doue war bôtred-an-difeiz! ⁷ Mirit eta da veza ken-lodeg ganto!

⁸ Bez' e oac'h kent teñvalijenn, bremañ avad Sklêrijenn en Aotrou! Baleit evel pôtre-ar-sklêrijenn, ⁹ rag ema frouez ar skêrijenn e peb madelez ha justiz ha gwirionez! ¹⁰ Gwelit 'ta petra a blij da Zoue; ¹¹ na vezit ket kenlodeg e oberou difrouez an deñvalijenn, med da eo deoc'h o disklêria kentoc'h! ¹² An traou greet ganto e-kuz, eur véz eo zoken o lavared! ¹³ Kement a vez disklêriet avad, gand ar sklêrijenn e vez sklêrreet, rag kement a vez sklêrreet a zeu da veza sklêrijenn, ¹⁴ rag-se e lavar:

Ef 5,14 - 6,8

Iz 26,19
Iz 60,1
Rom 13,11

“Dihun, ô den kousket!

“Ha sav a-douez ar re varo!

“Ha warnout e skedo ar C’hrist!”

Mz 15,10
Kol 4,5

¹⁵ Gwelit ’ta gand aked penaoz e valeit: grit na vo ket evel tud difur, med evel tud fur, ¹⁶ o klask evidoc’h ar poent mad, rag fall eo an amzer-mañ!
¹⁷ Rag-se, na vezit ket tud diboell, med intentit mad petra eo bolontez Doue!

Lk 21,34

¹⁸ Ha na vezit ket mezo diwar gwin (diwarnañ e teu diroll!), med bezit leuniet gand ar Spered Santel, ¹⁹ o vous-kana deoc’h hoc’h-unan gand salmou, meulganou, ha gwerzou speredel, o kana hag o salmi en ho kalonou d’an Aotrou, ²⁰ en eur drugarekaad bepred Doue an Tad evid an oll, en Ano Jezuz Krist on Aotrou!...

1 Pêr 3,1...

²¹ Bezit sujet an eil d’egile e doujañs ar C’hrist! ²² Ra vo ar gwrazez sujet d’o gwazed evel d’an Aotrou! ²³ Rag ar gwaz a zo penn d’e wreg evel m’eo ive ar C’hrist Penn d’an Iliz, Eñ, Salver e Gorv. ²⁴ Evel m’eo an Iliz sujet d’ar C’hrist, evelse e vo ive ar gwrazez d’o gwaz e pep tra...

²⁵ Gwazed, karit ho kwrazez evel m’e-neus ive ar C’hrist karet an Iliz, ha m’e-neus en em roet eviti, ²⁶ evid he zantellaad hag he c’hlanaad ouz he gwelhi en Dour ha dre eur Gomz, ²⁷ dezañ diskouez en e gichenn an Iliz, leun a c’hloar, heb namm na roufenn ebed dezi, na netra a-seurt-ze, med dezi da veza santel ha direbech! ²⁸ Evelse e tle ive ar wazed kared o gwrazez evel o c’horv-o-unan: an neb a gar e wreg, en em gar e-unan: ²⁹ rag n’e-neus biskoaz dén kasaet e gorr e-unan, med e vaga a ra hag intent outañ, evel ma ra ar C’hrist ouz an Iliz, ³⁰ pa z’om-ni izili e Gorv!

³¹ Diwar-ze, “*e tilezo eun den e dad hag e vamm, hag e vo unanet d’e wreg! Hag e teuint o daou da veza eur C’horv hepken!*” ³² Ar mister-ze a zo braz, me ’lavar avad e-keñver ar C’hrist hag an Iliz! ³³ Rag-se, red eo da bep hini ahanoc’h kared e wreg evel m’en em gar e-unan, ha d’ar wreg douja he gwaz.

- 6 -

GWISKIT HARNEZ DOUE!

¹ Bugale, sentit ouz ho kerent, en Aotrou! An dra-ze a zo just! ² “*Enor da dad ha da vamm* (setu ar gourhemenn kenta da gaoud eur bromesa d’e heul!), ³ *dit delher da jom hir-amzer war an Douar!*”

⁴ Ha c’hwi, Tadou, na hegasit ket ho pugale, med red eo deoc’h o zevel e kelennadurez ha reiz an Aotrou! ⁵ Sklaved, sentit ouz hoc’h aotronez hervez an natur-den, en eur grena gand an aon, e lealder ho kalon, evel ouz ar C’hrist! ⁶ Na rit ket ho servich evid tenna warnoc’h ar zellou, evel pa glaskfec’h plijoud d’an dud, med evel sklaved d’ar C’hrist, oc’h ober bolontez Doue a-greiz kalon! ⁷ Grit ho servich dre gaer, evel d’an Aotrou ha n’eo ket d’an dud, ⁸ o c’houzoud e tegemero pep hini e c’hopr digand an Aotrou, m’e-

Mz 6,4...
Mz 16,27

neus greet eun dra bennag a vad, sklav pe frank e vefe an den!...

⁹ Ha c’hwi, aotronez! grit evelse dezo ive: dilezit ar gourdrour, en eur c’houzoud emañ en Neñv o Aotrou dezo hag hoc’h Hini-c’hwi, ha gantañ ne vez ket greet diouz dremm an dud...

2 Kor 6,7

¹⁰ A-hend-all, kreñvait en Aotrou ha dre c’halloud e Nerz! ¹¹ Gwiskit harnez Doue en e bez, da c’helloud herzel ouz korvigellou an diaoul! ¹² N’ema ket deom ar stourm ouz an natur-den, med ouz ar pennaduriou, hag ar galloudegeziou, hag ouz mistri ar bed teñval-mañ, ouz sperejou an drougiez e lein an neñv! ¹³ Rag-se, kemerit harnez Doue evid gelloud enebi d’an deiz fall ha derhel da beur-ober pep tra...

Mz 16,18

Ob 1,8...

¹⁴ Dalhit mad eta, o c’houriza ho targreiz gand ar wirionez, “o wiska chupenn-houarn ar justiz, ¹⁵ o lakaad en ho treid sandalennou ar mall da embann Aviel ar peoc’h”, ¹⁶ ha dreist-oll o kemer skoed ar feiz da c’helloud mouga oll birou entanet an hini droug! ¹⁷ Ha degemerit tog-brezel ar zilvidigez ha kleze ar Spered, a zo Komz Doue!

Heb 4,12

Lk 18,1


¹⁸ E peb goulenn ha pedenn, pedit e peb amzer dre ar Spered; evid-se, beillit evid kenderhel da bedi evid an oll dud santel, ¹⁹ hag evidon-me ive, ma vezo roet din, p’am-bo tro da brezeg, komzou da ziskulia gand hardisegez Mister an Aviel! ²⁰ Evitañ, en ereou, e sevenan ar garg a gannad, din-me da hardisaad ennañ da gomz evel m’eo dleet!

Rom 16,25

²¹ Evid ma ouezoc’h ive penaoz ez a ganin-me ha petra a ran, e tiskulio deoc’h kement-se Tichig, va breur karet ha va zervicher leal en Aotrou. ²² Evid-se am-eus e gaset davedoc’h, evid degemenn deoc’h penaoz ez a ganeom-ni hag evid frealzi ho kalonou!

²³ Peoc’h d’ar Vreudeur, ha karantez da-heul ar feiz, digand Doue an Tad ha digand Jezuz Krist on Aotrou!

²⁴ Ar C’hras ra vezo gand ar re oll a gar Jezuz Krist on Aotrou en divarvelez!...



Jezuz war ar groaz, Gouezeg. Sk J. F.

Al Lizer da Filipiz

Epad e eil beaj a visioner, wardro ar bloavez 50, e-neus Paol diazezet eun Iliz e kêr Filip, er Makedoni. Degemeret mad eo bet eno Paol e-unan, hag an Aviel embannet gantañ! An Abostol e-no tro diwezatoc'h da weled e Iliz yaouank: n'eus ano ebed e-nefe bet eur rebech grevuz bennag d'ober d'ar Gristenien... Ablamour da-ze, e toug Paol d'an Iliz-ze eur garantez kreñv ha tener, e kalon Jezuz-Krist!

Diwar ar fiziañs e-neus enno, e kemer laouen diganto sikouriou evid e vuez hag e labour a visioner: ne fell ket dezañ reseo an disterra tra digand an Ilizou all.

Diêz eo gouzoud peur hag e pe-lec'h e-neus Paol skrivet al Lizer-mañ. Nevez degouezet ez-eus dezañ sikouriou fonnuz digand Kristenien Filip, ha Paol da lavared dezo "Bennoz Doue" a greiz kalon, ha da rei dezo eun nebeud kuzulioù evid o buez kristen.

Ya! Bennoz Doue dezo: dalhet o-deus d'e zikour evid e vuez hag e labour... Paol a zo en ereou! E ereou a dro da rei da lod nerz-kalon evid prezeg... Da Filipiz o-unan delher fiziañs en o zrubuillou, evel Jezuz e-unan:

Jezuz e-neus dilezet gloar an Neñv evid or savetei,

En em gaset e-neus da netra , e doare eun dén disterig,

Setet e-neus beteg mervel war eur groaz;

Doue avad e-neus e zavet dreist pep tra, a-zehou dezañ!

D'ar Gristenien skedi e-giz gouleier e-kreiz ar béd dirollet!

Dre garantez evid ar Filipiz e kas dezo Timote, da rei kelou dezo, hag Epafrodit, bet gwall-glañv ouz e zervicha...

D'ar Filipiz ive diwall diouz ar 'chas', ar fals-ebestel a gav dezo beza salvet dre al Lezenn juzeo! Homañ ne dalv mui da netra: ne vez dén justizet ha salvet nemed dre ar feiz e Jezuz...

Ha "Bennoz Doue" d'ar Filipiz karet,

evid o zikouriou fonnuz degaset gand Epafrodit:

an donezonou-ze a gresko o zantelez!

Ha meuleudi da Zoue!

Da Filipiz

- 1 -

AR VUEZ EVIDON ? AR C'HRIST EO! AR MARO ? EUR GOUNID!

Ob 9,33
Ob 16,1...

¹ Paol ha Timote, servicherien Jezuz Krist, d'an oll dud santel a zo er C'hris Jezuz e kêr Filip, gand o Episkobed ha Diagoned: ² deoc'h-c'hwi gras ha peoc'h digand Doue on Tad ha digand Jezuz Krist an Aotrou!

Rom 1,8

³ Trugarekaad va Doue a ran-me bep tro ma tegasan koun ahanoc'h: ⁴ bepred, e peb pedenn, evidoc'h oll gand levenez e savan va goulenn, ⁵ ablamour d'ho komuniez en Aviel, abaoe an devez kenta beteg bremañ ; ⁶ ha kredi stard a ran: an Hini e-neus boulhet ennoc'h an oberenn vad-ze, he feur-echui a raio ive a-benn Deiz ar C'hris Jezuz!

I Tes 2,5

⁷ Just eo din poella evelse diwar-ho-penn deoc'h oll: ho tougen a ran em c'halon, rag, koulz em ereou hag em striv da zifenn ha da startaad an Aviel, bez'e vezit oll kenlodeg em c'hras. ⁸ Doue a zo din test: c'hwi oll a c'hoantaan e kalon Jezuz Krist. ⁹ Ha setu va fedenn: ma kresko muioc'h mui ho karantez en anaoudegez hag e peb skiant, ¹⁰ deoc'h da zibab ar peb gwella, evid beza glan ha direbech a-benn Deiz ar C'hris, ¹¹ karget a frouez, ar frouez a justiz a zeu dre Jezuz Krist, evid gloar ha meuleudi Doue!

¹² Me a fell din degemenn deoc'h kement-mañ, Breudeur: deuet eo kentoc'h va stad da rei lañs d'an Aviel! ¹³ Evelse, da dud ar pretordi a-bez ha d'an oll dud all, ez eo anad emañ-me en ereou evid ar C'hris Jezuz ; ¹⁴ hag evelse ive, e teu an darn vrasa euz ar Vreudeur, hardiseet gand va ereou, da gredi kalz muioc'h prezeg heb aon Komz Doue! ¹⁵ Ha lod a embann ar C'hris dre avi pe dre heg, ha lod all a galon vad! ¹⁶ Ar re-mañ a embann ar C'hris dre garantez, o c'houzoud emañ lakeet da zifenn an Aviel! ¹⁷ Ar reze a ra dre heg, en eun doare displeal, gand ar zoñj da zewel din-me trubuil em ereou! ¹⁸ Rag petra an dra-ze ? Gand ma vo, e peb doare, pe war zigarez pe er wirionez, embannet ar C'hris! Ha diwar-ze ez on laouen, hag e laouennain c'hoaz! ¹⁹ Rag gouzoud a ran e troio an dra-ze d'am zilvidigez, dre ho pedennou ha dre skoazell Spered ar C'hris Jezuz! ²⁰ Evel ma c'hortozan ha mac'h esperan, ne zeuio din méz diwar netra, med gand peb hardisegez, bremañ ive evel bepred, e vezo diskuliet braster ar C'hris em c'horv, pe dre va buez pe dre va maro...

²¹ Rag ar Vuez evidon-me ? Ar C'hris eo! Hag ar Maro ? Eur gounid!
²² Ma tegas din ar vuez er c'horv frouez e oberou, n'ouzon ket petra dibab! ²³ Gwasket on-me euz an daou du! C'hoant braz am-eus da vervel ha da veza gand ar C'hris: kalz ha kalz gwelloc'h eo an dra-ze! ²⁴ Chom er c'horv a zo retoc'h ablamour deoc'h... ²⁵ O kredi stard en dra-ze, e c'houzon e chomin hag e talhin da jom ganeoc'h oll, da rei kresk ha levenez d'ho feiz, ²⁶ deoc'h kaoud er C'hris Jezuz kalz brasoc'h digarez a lorc'h ganin-me, pa zeuin adarre davedoc'h...

Kol 1,10
1 Tes 2,12

²⁷ Renit avad eur vuez deread ouz Aviel ar C'hrist, evid din-me, -deuet d'ho kweled pe jomet a-bell-, klevet diwar-ho-penn e chomit unan-a-spered o stourm unan-a-galon evid feiz an Aviel! ²⁸ Na vezit spontet tamm ebed gand hoc'h eneberien: an dra-ze a zo evito eur merk a emgoll, hag eur merk a zilvidigez evidoc'h-c'hwi, ha kement-se digand Doue. ²⁹ Rag deoc'h eo bet roet ar c'hras, evid gloar ar C'hrist, n'eo ket hepken da gredi ennañ, med ive da c'houzañv evitañ, ³⁰ rag emaac'h-c'hwi ive en eur stourm par d'an hini ho-peus va gwelet ennañ, ha par d'an hini emacon-me bremañ ennañ...

Lk 1,35
Mz 5,11-12

- 2 -

DA NETRA E-NEUS AR C'HRIST EN EM GASET!

2 Kor 13,13

¹ Ma z'eus eta frealz er C'hrist, ma z'eus skoazell er garantez, ma z'eus komuniez er Spered, ma z'eus da unan bennag kalon ha madelez, ² ez eo deoc'h leunia va levenez o prizoud heveleb tra, o kaoud heveleb karantez, o veza unan a-spered, en eur brizoud heveleb tra! ³ Na rit netra dre heg na dre fouge, med, gand izelder a-spered, kenetrezoc'h lakit ar re all uhelloc'h egedoc'h hoc'h-unan, ⁴ ha na vezit ket, pep hini ahanoc'h, eveziet ouz ho traou hoc'h-unan, med pep hini ive ouz traou ar re all.

Mz 20,27
Yn 13,12...

⁵ Prizit ennoc'h hoc'h-unan kement a zo bet ive er C'hrist Jezuz:

⁶ Eñ, goude beza e stumm Doue,

N'e-neus ket lakeet da breiz beza par da Zoue!

Yn 1,1...
Yn 10,30
Yn 13,4-15
Heb 1,3...
Heb 2,14
Heb 12,2...
Disk 5,13

⁷ Med da netra e-neus en em gaset,

Kemeret gantañ stumm eur Zervicher,

Deuet da veza heñvel ouz an dud!

Ha, diouz e zoare, bet kavet evel eun den,

⁸ En em izelleet e-neus e-unan,

O veza sentuz beteg ar maro, maro ar groaz!

Yn 14,31
Yn 15,10
Heb 12,2...

⁹ Rag-se ive e-neus Doue e zavet uhel-dreist,

Ha roet e-neus dezañ an Ano a zo dreist peb ano,

Iz 45,2
Disk 5,13

¹⁰ Ma plego peb glin en Ano Jezuz,

E lein an Neñv ha war an douar hag e Bro-ar-Marou,

Yn 15,8
Yn 20,28
Disk 1,13...

¹¹ Ha ma embanno peb teod: 'Aotrou eo Jezuz Krist!'

Evid gloar Doue an Tad!

Yn 15,5

¹² Evelse, Breudeur karet, evel m'ho-peus sentet bepred, n'eo ket hepken pa vezen en ho kichenn, med kalz muioc'h bremañ p'emaon pell, en eur grena gand an aon, grit ho silvidigez! ¹³ Rag em Doue oc'h oberia ennoc'h ar c'hoantaad hag an oberia, da ziskouez e vadelez! ¹⁴ Grit pep tra heb groz-

Mz 5,14
Dt 32,5
Gal 2,2
mol na rendael, ¹⁵ deoc'h da veza direbech ha glan, "*Bugale didamall da Zoue e-kreiz eur rummad trubard ha troet da fall*"; en o zouez, skedit evel gouleier e-kreiz ar Bed, ¹⁶ o kinnig Komz ar Vuez, deoc'h da veza din-me eun digarez a lorc'h a-benn Deiz ar C'hrist, rag n'am-eus ket kredet en aner! Ha n'am-eus ket poaniet en aner!

2 Tim 4,6
¹⁷ Med ma vez zoken skuillet va gwad war zakrifiz ha war zervich ho feiz, e vin laouen, hag a-unan ganeoc'h e laouennain! ¹⁸ Evelse, c'hwi ive, laouennait, ha laouennait a-unan ganin!

Yn 10,13
2 Kor 12,15
¹⁹ Fiziañs am-eus, e Jezuz an Aotrou, da gas dizale Timote davedoc'h, ma vo êz va spered, o c'houzoud penaoz ez a ganeoc'h! ²⁰ N'eus din dén all par dezañ a galon da c'helloud evid gwir kemer preder gand ho stal! ²¹ Rag ema an oll o klask o mad o-unan ha n'eo ket hini ar C'hrist Jezuz. ²² Gouzoud a rit ez eo bet amprouet, rag evel eur mab da heul e dad e-neus servichet an Aviel! ²³ Hennez am-eus eta fiziañs da gas davedoc'h, kerkent ha m'am-bo gwelet sklêr em stal! ²⁴ Fiziañs am-eus avad, en Aotrou, da vond ive hebdale...

²⁵ Soñjet am-eus avad e oa red din kas davedoc'h Epafrodid, va Breur, a-unan ganin el labour hag er stourm, ho kannad-c'hwi evid va zervicha em dienez! ²⁶ Rag c'hoant e-noa d'ho kweled, rag ankeniet e oa dre m'ho-poa klevet e oa klañv! ²⁷ Rag klañv eo bet, e par ar maro! Med Doue e-neus bet truez outañ, ha n'eo ket outañ hepken, rag ouzin-me ive, gand aon n'am-befe glahar war c'hlahar! ²⁸ Buan-buan eta am-eus e gaset, deoc'h da laouennaad ouz e weled, ha din-me da gaoud nebeutoc'h a c'hlahar! ²⁹ Degemerit-en eta, en Aotrou, gand kalz a levenez, ha diskouezit enor d'ar seurt tud! ³⁰ Rag ablamour da oberenn ar C'hrist ez eo eet beteg ar maro, o riskla e vuez evid seveni ar peza a ree diouer er zervich a dleit-c'hwi din-me...

- 3 -

AN OLL DRAOU A LAKAN DA LOUSTONI!

Mz 23,3...
2 Kor 13,11
Kol 2,11
Rom 2,25
2 Kor 11,21...
Ob 8,1...
¹ A-hend-all, Breudeur, laouennait en Aotrou! Skriva deoc'h heveleb traou n'eo ket din skuizuz, hag evidoc'h ez eo red! ² Gwelit ar chas! Gwelit an oberourien fall! Gwelit tud ar fals-amdroc'h! ³ Rag bez' ez om-ni tud an amdroc'h, ni hag a ador dre Spered Doue, ni hag a zo o lorhi gand ar C'hrist Jezuz ha ne lakom ket or fiziañs er c'horv, ⁴ goude din-me gelloud ive lakaad va fiziañs er c'horv! Ma 'z-eus unan bennag hag a gav dezañ lakaad e fiziañs er c'horv, me muioc'h c'hoaz: ⁵ amdrohet on bet d'an eizved deiz, ganet on euz gouenn Izrael, euz meuriad Benjamin, hebread diouz hebreiz! Farizead e oan e-keñver al Lezenn, ⁶ e-keñver ar gred, e oan oc'h heskina an Iliz, hag e keñver ar justiz e oan deuet direbech...

Mz 13,14
Lk 10,41
Lk 14,26...
⁷ Med an traou a oa din gounidou, anezo am-eus-me greet eur c'holl ablamour d'ar C'hrist! ⁸ Med evid gwir, euz an oll draou e ran eur c'holl, ablamour d'ar gounid dreist m'eo anaoudegez ar C'hrist Jezuz va Aotrou!

Ablamour dezañ e ran eur c'holl euz an oll draou, hag o lakaad a ran da loustoni, din dond da c'hounid ar C'hrist,⁹ ha beza kavet ennañ, n'eo ket gand va justiz-me deuet euz al Lezenn, med gand an hini a zeu euz ar feiz er C'hrist, gand justiz Doue diazezet war ar feiz...

¹⁰ Dre-ze e fell din E anavezoud, En e-unan hag ive nerz e Adsao, ha c'hoaz ar gomuniezh d'e boaniou, din da veza kenstummet gand e varo,¹¹ din degouezoud marteze d'an adsao a-douez ar re varo!¹² Ano ebed din da veza gounezet kement-se a-vremañ, na da veza deuet peurvad a-vremañ! Med redeg a ran da weled ha dond a rin da baka ar pezh on-me bet paket evitañ gand ar C'hrist Jezuz!

¹³ Breudeur karet, ne zoñjan ket e vefen c'hoaz deuet d'e baka! N'eus din nemed eun aked: en eur ankounahaad an traou a-dreñv din, hag o chom stignet warzu ar re a zo dirazon,¹⁴ emañ o redeg warzu ar pal, warzu ar gurunenn stag ouz ar galv deuet deom euz an Neñv, digand Doue dre ar C'hrist Jezuz...¹⁵ Ni oll eta, tud peurhreet, prizom an dra-ze; ha ma prizom eun dra bennag all, an dra-ze ive e teuio Doue da zisklêria deoc'h!¹⁶ Hogen, el lec'h ez om erruet, ez eo red deom kerzed gand eun heveleb Hent...

¹⁷ A-unan, kemerit skwer diwarnon-me, Breudeur, ha sellit mad ouz ar re a vale hervez ar skwer ho-peus ennom-ni!¹⁸ Rag bale a ra kalz tud hag am-eus evidoc'h aliez greet anezo, ha bremañ zoken en eur ouela e ran anezo 'Eneberien da groaz ar C'hrist'¹⁹ O fin dezo a vezo an emgoll, o doue eo o c'horv, o gloar a zo en o méz, ha ne brizont nemed traou an douar!²⁰ Rag en Neñv emañ or Mamm-Vro deom-ni, hag ahano e c'hortozom, evel Salver, Jezuz Krist an Aotrou!²¹ Eñ a zegaso doare or c'horv disterig da veza kensstummet gand e Gorv a-c'hloar, hervez an nerz e-neus da c'helloud suja an oll draou...

- 4 -

LAOUENNAIT BEPRED EN AOTROU!

¹ Evelse, va Breudeur karet ha c'hoanteet a-galon, va levezet ha va c'hurunenn, kendalhit evelse en Aotrou, va Breudeur karet!² Alia a ran Evodia, ha Suntike a alian ive da briza heveleb tra en Aotrou!³ Ha da bedi a ran ive, te, Suzigoz va mignon: dit skoazella ar gwragez-ze o-deus strivet evid an Aviell ganin-me ha gand Klemans, ha gand al labourerien a zo o ano e Leor ar Vuez!

⁴ Laouennait en Aotrou! Adarre e lavaran: laouennait!⁵ Ra vezo ho reizder anavezet gand an oll: tost emañ an Aotrou!⁶ Na vezit nehet gand netra, med dre bep pedenn ha dre beb goulenn, en eur drugarekaad, ra vezo displeget ho koulennou dirag Doue!⁷ Ha peoc'h Doue, hag a zo dreist pep tra, a viro ho kalonou hag ho sperejou er C'hrist Jezuz!

⁸ A-hend-all, Breudeur, kement a zo gwir, kement a zo reiz, kement a

Mz 28,20 zo just, kement a zo glan, kement a zo plijuz, kement a zo mad, ha ma z'eus eur vertuz bennag, ma z'eus meuleudi, kement-se eo deoc'h divizoud! ⁹ Ar pezh ho-peus a-unan desket ha degemeret ha klevet ha gwelet drezon-me, deoc'h henn ober, ha Doue ar peoc'h a vezo ganeoc'h!...

2 Kor 6,10... Heb 13,5 2 Kor 12,9 ¹⁰ Laouennaad a ran hag e ran, en Aotrou, p'e-neus ho preder evidon kavet tro da vleunia adarre! Evidon e oac'h prederiet, med ne gavec'h ket tro! ¹¹ Ne gomzan ket diwar zienez, rag desket am-eus ober gand ar pezh a zo din! ¹² Gouzoud a ran ive beva disterig, gouzoud a ran ive beva en êz! E peb doare hag e pep tra on bet desket da zebri ha da gaoud naon, da veva em êz pe en dienez! ¹³ Pep tra a c'hellan en Hini am c'hennerz. ¹⁴ Koulskoude, kaer ho-peus greet o veza ken-lodeg em zrubuill!

Ob 16,12 1 Kor 9,11 ¹⁵ Gouzoud a rit ive, c'hwi, Filipiz: da zigor an Aviel, p'edon-me o tond euz ar Makedoni, n'he-deus Iliz ebed kevrennet ganin en eur gont 'Roet-Degemeret', n'eus nemed c'hwi hepkén! ¹⁶ Ha da Desalonig ive, eur wech ha diou wech ho-peus-c'hwi degaset din traou evid va ezommou. ¹⁷ N'eo ket e klaskfen-me donezonou, med klask a ran frouez war-gresk evid ho kont deoc'h-c'hwi...

Heb 13,16 ¹⁸ Degemeret am-eus pep tra hag emañ em êz... Leun a draou am-eus abaoe m'am-eus degemeret digand Epafrodit ar pezh a zeu diganeoc'h: eul 'Louzou-c'hwez-vad'! Eur brovadenn deuet mad ha plijuz da Zoue! ¹⁹ Va Doue avad a beur-bourvezo d'hoc'h oll ezommou, hervez m'eo-Eñ pinvidig e Gloar, er C'hrist Jezuz...


²⁰ D'on Doue ha Tad, Gloar a-héd ar c'hantvejou a gantvejou! Amen!...

²¹ Saludit péb den santel er C'hrist Jezuz!

Ho saludi a ra ar Vreudeur a zo ganin!

²² Ho saludi a ra an oll dud santel, dreist-oll ar re euz Ti Sezar!

²³ Gras Jezuz Krist an Aotrou ra vo gand ho spered! Amen!...



Al Lizer da Goloziz

D'ar poent m'e-neus Paol skrivet e Lizer da Efeziz, wardro 63, e-neus ive skrivet al Lizer da Gristenien Koloz, eur gêr e-kreiz an Azi (an Turki a-vremañ).

E korn-bro Efez ha Koloz e tremene neuze, evel en eur c'hroaz-hent, leun a dud euz broiou ar Zav-Heol hag ar C'huz-Heol, koulz hag euz an Azi, lod o redez hent, lod oc'h ober kenwerz, lod avad o pirhîrina (Ob 19,23...). Pa oant peurvuia tud a relijion, koulz hag an Ateniz (Ob 17,16...), e tegoueze dezo komz euz o doueou hag o douezed, euz idolou a bep seurt, euz Sperejou lod droug ha lod madelezuz, euz êlez, euz Galloudegeziou an neñv... Pa zivizent diwar o fenn, n'eo ket souezuz e savfe trouz ha rendael: a dra-zur, pep hini a lake e zoue dreist ar re all! Ha n'e-noa dén galloud da lavared pehini euz ar Pennou-braz-ze a oa Mestr el lec'h-mañ lec'h, na pehini a oa evid gwir Aotrou war an oll, en neñv, war an douar hag en iferniou...

1 - 2. Doue an Tad, eme Paol, e-neus roet d'ar Gristenien kaoud lod e Hêrez an dud santel er Sklêrijenn: dezo tehed diouz ar rendaelou goullo-ze!

“Jezuz eo ar C'henta-ganet euz an oll Grouadelez;

“Drezañ hag evitañ eo bet greet kement tra;

“Eñ eo ar Penn euz ar C'horv, euz an Iliz;

“Eñ eo ar C'henta-ganet a-douez ar re varo...

“Plijet eo gand Doue lakaad an oll Leunder da jom ennañ.

“Ennañ eo kuzet oll deñzoriou ar furnez hag ar ouiziegez...”

D'ar Gristenien eta chom gwriziet ennañ, o tiwall da veza touellet gand koñchou goullo! Jezuz e-neus skrapet peb mestroni ha peb galloud!

3 - 6. Pa 'z int bet marvet hag adsavet da veo a-unan gand Jezuz, e tle ar Gristenien trei bepred o spered war-zu an Neñv, el lec'h m'ema Eñ o chom. Dezo kas ar pehed da netra en o izili, ha 'gwiska ar C'hris', ma vo gwelet enno santelez Jezuz e-unan!

D'ar priejou, d'ar vugale, d'ar sklaved ha d'o mistri, da bep hini rén eur vuez kristen, hag ober gand furnez en darempredou gand tud difeiz... Ha da Goloziz lenn al Lizer bet kaset da Laodiseiz.

Da Goloziz

- 1 -

AR MISTER, BET DALHET KUZET! BREMAÑ DISKULIET!

Ef 1,1-2

¹ Paol, Abostol Jezuz Krist dre volontez Doue, hag ar Breur Timote, ² d'ar Vreudeur a zo, e Koloz, santel ha leun a feiz er C'hrist, deoc'h gras ha peoc'h digand Doue an Tad!

Ef 1,15...

³ Trugarekaad a reom Doue ha Tad Jezuz Krist on Aotrou o pedi bepred evidoc'h, ⁴ rag klevet on-eus ano euz ho feiz er C'hrist Jezuz hag euz ar garantez ho-peus evid an oll dud santel, ⁵ ablamour d'an esperañs dalhet deoc'h en neñv: anezi ho-poa en-araog klevet ano dre Gomz wirieg an Aviel.

1 Pêr 1,4.

Ef 1,13

⁶ Hemañ a zo erruet beteg ennoc'h evel m'eo ive er bed-a-bez: dougen a ra frouez ha mond war gresk, evel ma ra ive en ho touez abaoe an deiz m'ho-peus klevet hag anavezet gras Doue e gwirionez, ⁷ hervez m'ho-peus desket gand Epafras, or c'henlabourer karet! Evidoc'h eo hemañ ministr feal ar C'hrist, ⁸ ha displeget e-neus ive deom-ni ho karantez er Spered...

Ef 1,8,20

⁹ Rag-se ive, abaoe an deiz m'on-eus klevet an dra-ze, ne ehanom-ni ket da bedi evidoc'h ha da c'houlenn deoc'h kaoud an anaoudegez euz e volontez e peb furnez hag e peb meiz speredel. ¹⁰ Evelse, deoc'h da vale en eun doare deread ouz an Aotrou, evid e vrasa trugar! Dougit frouez dre beb oberenn vad, ha kreskit en anaoudegez euz Doue; ¹¹ bezit kennerzet a beb nerz hervez galloud e c'hloar, evid kaoud dalc'h hag habaster ; gand levenez, ¹² trugarekait an Tad e-neus roet deom galloud da gaoud lod en Hêrez an dud santel er Sklêrijenn! ¹³ Bez'e-neus on diframmet diouz galloud an deñvalijenn, hag or c'haset e-neus e Rouantelez e Vab muia-karet, ¹⁴ on-eus ennañ an daspren, ar pardon euz or pehejou...

Yn 1,1...
Heb 1,3...
Ef 1,1...
Disk 1,5

¹⁵ Eñ eo Skeudenn an Doue na weler ket,

Ar C'henta-Ganet euz an oll Grouadelez!

¹⁶ Rag Ennañ eo bet krouet an oll draou,

Ar re a zo en Neñv hag ar re a zo war an douar,

Ar re a weler hag ar re na weler ket,

Trônou hag aotroneziou ha pennadureziou ha galloudegeziou:

Drezañ hag Evitañ eo bet krouet an oll draou!

¹⁷ Hag Eñ a zo anezañ araog pep tra,

Hag Ennañ e kendalc'h an oll draou en o roll!

Ef 1,21...
1 Kor 15,20

¹⁸ Hag Eñ eo ar Penn euz ar C'horv, euz an Iliz!

Eñ eo ar Penn-Kenta, ar C'henta-Ganet euz a-douez ar re varo,

Dezañ e-unan da goud ar reñk kenta e-touez an oll!

¹⁹ Rag plijet eo gand Doue lakaad an oll Leunder da jom Ennañ,

Rom 5,10
Ef 2,14
I Yn 2,2

²⁰ Ha drezañ unvani, gantañ e-unan, an oll draou,

Kement a zo war an douar ha kement a zo en Neñv,

O lakaad peoc'h dre Wad e Groaz!...

Ef 2,1
Ef 4,14...

Ef 5,27

Mk 16,15

Ef 3,17

²¹ Bez'e oac'h-c'hwi diagent estrenien hag eneberien a-spered diwar hoc'h oberou fall! ²² Bremañ avad e-neus (Doue) hoc'h unvanet e Korv-den (ar C'hrist) dre e varo, evid ho kaoud dirazañ santel, dinamm ha direbech! ²³ Evid-se, chomit avad diazezet ha stard er feiz, heb beza distaget diouz an esperañs a ro an Aviel ho-peus klevet: Hemañ a zo bet embannet dre ar Grouadelez a-bez a zo dindan an neñv, ha me, Paol, me a zo deuet da veza e zervicher!

Mz 5,11...

Rom 16,25
Ef 1,3

Lk 18,22

Ef 4,13

²⁴ Bremañ ez on laouen em foaniou evidoc'h, ha peurhouzañv a ran ar pez a ra diouer em c'horv da drubuillou ar C'hrist evid e Gorr, an Iliz ; ²⁵ anezi on-me deuet da veza Ministr, hervez an urz fiziet ennon evidoc'h gand Doue: peurzeveni Komz Doue, ²⁶ ar Mister kuzet abaoe ar c'hantvejou hag ar rummadou, disklêriet bremañ d'e dud santel! ²⁷ D'ar re-mañ eo plijet da Zoue degemenn peseurt teñzor a-c'hloar e-neus ar Mister-ze e-touez ar Baganed, da lavared eo: "Ar C'hrist eo, en ho touez, esperañs ar c'hloar!" ²⁸ Eñ eo emaom oc'h embann, dre gentelia peb den ha dre gelenn peb den e peb furnez, da zegas peb den da veza peurhreet er C'hrist! ²⁹ Evid-se e poanian-me ive, o stourm hervez e nerz-dezañ a zo o virvi ennon gand galloud!

- 2 -

ER C'HRIST EMA LEUNDER AN DOUEEGEZ!

Ef 3,19

Rom 16,18

¹ Me a fell din degemenn deoc'h pegen braz stourm am-eus evidoc'h hag evid re Laodise, hag evid ar re n'o-deus ket gwelet va zremm a-zen, ² ma vo kennerzet o c'halon, ha ma vint o-unan reizet er garantez, a-benn kaoud teñzor ar skiant en e leunder hag anaoudegez euz mister Doue hag ar C'hrist! ³ Ennañ eo kuzet oll deñzoriou ar furnez hag ar ouiziegez! ⁴ Kement-se a lavaran, evid na c'hello den ho touella gand komzou touelluz! ⁵ Rag m'emaon pell diouzoc'h a-gorr, a-spered avad emaon en ho touez, laouenneet o weled ez eus urz vad en ho touez hag e chom stard ho feiz er C'hrist...

Gal 4,3
Ef 1,23
Ef 4,12...

Yn 1,14
Ef 1,21

⁶ Evel m'ho-peus eta degemeret ar C'hrist, Jezuz an Aotrou, ennañ eo deoc'h bale: ⁷ chomit gwriziet ennañ ha diazezet warnañ, bezit stard er feiz hervez ma z'oc'h bet kelennet, ha founnuz da drugarekaad! ⁸ Gwelit na zeufe den d'ho paka dre brederouriez pe dre douellerez c'houllo, hervez kelennadurez an dud, hervez traouachou ar bed ha n'eo ket hervez ar C'hrist! ⁹ Rag en Hemañ ema o chom, en eur C'horv, oll Leunder an Doueegéz, hag Ennañ ez oc'h-c'hwi peurleuniet! ¹⁰ Eñ eo Penn peb mestroni ha peb galloud!

- Rom 2,25...
Rom 6,4...
Rom 4,23...
Ef 2,15
Rom 14,1...
Heb 8,5
Ef 4,15
Gal 6,4
Mz 15,9
- ¹¹ Ennañ ez oc'h-c'hwi bet amdrohet dre eun Amdroc'h a vez greet heb dorn an den hag a ra deom diwiska korv an natur-den: dre Amdroc'h ar C'hrist! ¹² Sebeliet a-unan gantañ dre ar vadeziant, a-unan gantañ ive ez om adsavet dre ar feiz e galloud an Doue e-neus e adsavet a-douez a re varo. ¹³ Ha c'hwi, maro ma oac'h dre ho mankou ha dre ziamdroc'h ho korv, deoc'h e-neus roet buez a-unan gantañ, o pardoni deoc'h hoc'h oll vankou. ¹⁴ Rasklet e-neus ar Skrid a oa a-eneb deom, eneber deom gand e reolennou: euz on touez e-neus e lamet hag e staget ouz ar groaz! ¹⁵ Skrapet gantañ peb mestroni ha peb galloud, gand hardisegez e-neus o diskouezet, en eur lida an trec'h e-neus gounezet warno, ennañ e-unan!
- ¹⁶ Arabad eta da zen ho parn e-keñver boued pe evaj, e-keñver eur gouel bennag pe eul loar-nevez pe eur zabad! ¹⁷ An traou-ze n'eus anezo nemed skeudenn an Traou-da-zond, da lavared eo: ar C'hrist! ¹⁸ Arabad d'eun den bennag hoc'h abegi dre glask ho tegas d'an 'Izelder a-spered', pe da 'Zoujañs-an-êlez'! Eur seurt den, dallet gand an traou e-nefe gwelet, c'hwez-zet en aner gand spered an natur-den, ¹⁹ ne zalc'h ket stard d'ar Penn: dre Hemañ e vez ar C'horv a-bez pourvezet ha kenaozet dre beb mell ha peb staggell, hag e kresk dre ar c'hras mennet gand Doue!
- ²⁰ Ma z'oc'h-c'hwi eta marvet da draouachou ar Bed, a-unan gand ar C'hrist, perag e sujit da reolennou evel pa vefec'h o veva er Bed ? ²¹ "Na douch ket!", -"Na dañv ket", -ha "Na gemer ket!". ²² An oll draou-ze a ia da netra dre ma vezont kemeret, hervez gourhemennou ha kemennou tud... ²³ Bez'ez int traou hag o-deus doare a-furnez dre fals-doujañs, dre 'izelder a-spered', dre veza dizamant ouz ar c'horv, heb evez ebed evid trugar an natur-den...

- 3 -

KLASKIT TRAOU AN NEC'H, EL LEC'H M'EMA AR C'HRIST!

- Ef 2,6
Mz 6,33
Rom 6,2
Rom 6,11...
Ef 2,3
Ef 4,22...
Gal 3,27...
- ¹ Ma z'oc'h-c'hwi eta adsavet a-unan gand ar C'hrist, klaskit 'Traouan-Nec'h', el lec'h m'eo ar C'hrist azezet a-zehou da Zoue! ² Prizit 'Traouan-Nec'h', ha n'eo ket traou an douar! ³ Rag marvet oc'h bet, ha kuzet eo ho Puez gand ar C'hrist e Doue! ⁴ Pa baro ar C'hrist, neuze e teuoc'h, c'hwi ive, da bara gantañ er c'hloar!
- ⁵ Lakait da vervel en hoc'h izili kement a zo euz an douar: serherez, hudurnez, diroll, gwall-c'hoantegez, hag ar skraperez, a zo anezi idolerez! ⁶ Diwar gement-se e teu kounnar Doue war an dud difeiz! ⁷ En dizurziou-ze e valeec'h diagent, pa vevec'h enno! ⁸ Bremañ avad, pellait kement-se diouz ho muzellou: kounnar, fulor, drougiez, blasfem, komzou louz! ⁹ Na lavarit ket a c'hevier kenetrezoc'h: diwisket ho-peus an 'den-koz' gand e oberou, ¹⁰ ha gwisket ho-peus an 'Den-Nevez', an Hini a zo neveseet en anaoudegez hervez skeudenn ar C'hrouer. ¹¹ Amañ n'eus ano ebed euz Grezian ha Juzeo, euz Amdroc'h ha Diamdroc'h, euz Barbar, Sitad, Sklav ha Den frank, med euz ar C'hrist, a zo an oll en oll!

Mz 6,14...
Mz 18,21...
Mz 5,53...
¹² Evel tud dibabet gand Doue, santel ha karet, gwiskit eta tenerderkalon, madelez, izelder-spered, douster, habaster; ¹³ deoc'h gouzañv an eil egile, ha pardoni kenetrezoc'h, m'e-neus unan bennag da glemm ouz unan all: evel m'e-neus ive an Aotrou pardonet deoc'h, deoc'h-c'hwi ive ober evelse!

1 Kor 13,8...
Mz 22,38-40
Yn 15,12
Lk 17,16...
¹⁴ Dreist kement-se avad, ho-pet ar garantez, a zo anezi al liamm peurvad! ¹⁵ Ra vezo peoc'h ar C'hrist o rén en ho kalonou: dezi ive ez oc'h bet galvet dre veza eur C'horv hepken! Ha bezit trugareg! ¹⁶ Ra vezo Komz ar C'hrist o chom ennoc'h en he finvidigez, deoc'h, gand peb furnez, kelenn ha kentelia an eil egile, ha deoc'h ive gand salmou, meulganou ha kanou spere-del, dre c'hras, kana da Zoue en ho kalonou. ¹⁷ Ha kement tra bennag a rafec'h, dre gomz pe dre ober, deoc'h ober pep tra en Ano Jezuz an Aotrou, en eur drugarekaad drezañ Doue an Tad!

Mz 15,5...
Mk 7,10...
Mz 22,17...
Mz 6,1-6
¹⁸ C'hwi, gwragez, bezit sujet d'ho kwazed evel ma tere en Aotrou! ¹⁹ C'hwi, gwazed, karit ho kwragez, ha na c'hwervait ket en o c'heñver! ²⁰ Bugale, sentit ouz ho tud e pep tra: kement-se a zo plijuz kenañ d'an Aotrou! ²¹ Tadou, na atizit ket ho pugale gand aon na zeufent da fallgaloni! ²² Sklaved, sentit e pep tra ouz ar re a zo hoc'h aotronez hervez an natur-den, heb ober ho servich evid tenna sellou, evel pa glaskfec'h plijoud d'an dud, med en eur zouja d'an Aotrou en eeunder ho kalon! ²³ Petra bennag a rafec'h, grit a-greiz kalon evel d'an Aotrou ha n'eo ket evid an dud, ²⁴ o c'houzoud e tegemeroc'h digoll an Hêrez! Ar C'hrist, an Aotrou eo deoc'h servicha! ²⁵ An neb e-no gwallet a vezo kastizet diouz m'e-no gwallet! Dirag Doue ne vezo ket greet diouz dremm an dud...

- 4 -

PEDIT EVIDOM, DEOM DA EMBANN MISTER AR C'HRIST!

¹ Aotronez, roit ar pezh a zo just ha reiz d'ho sklaved, o c'houzoud hopeus, c'hwi ive, eun Aotrou en Neñv!

Lk 18,1...
Mz 26,41
² Bezit aketuz d'ar bedenn, beillit o pedi en eur drugarekaad! ³ Da-heul, pedit ive evidom-ni, ma tigoro Doue deom Dor ar Gomz, deom embann Mister ar C'hrist (ablamour dezañ ez on-me chadennet), ⁴ ha din e zisklêria o prezeg evel m'eo red din! ⁵ Dalhit da vale gand furnez e-keñver an dud diavêz, en eur glask ar poent mad! ⁶ Ra vezo bepred ho komz leun a c'hras, saouret gand holen, o c'houzoud penaoz eo red deoc'h respont da bep hini!

Filem 11
⁷ Penaoz ema an traou ganin, kement-se a zegemenno deoc'h Tichig, va Breur karet, va skoazeller feal, va c'henlabourer en Aotrou! ⁸ Davedoc'h am-eus e gaset evid disklêria deoc'h penaoz ez a an traou ganin, hag evid frealzi ho kalonou! ⁹ D'e heul ez a Onezim, ar Breur feal ha karet, eñ hag a zo euz ho touez! Disklêria a reint deoc'h penaoz ema an traou amañ!

¹⁰ Ho saludi a ra Aristarg va c'hen-eread, ha Mark, kenderv da Varnabe (diwar-e-benn ho-peus bet gourhemennou: ma teu davedoc'h,

Kol 1,7 deoc'h e zegemer mad!) ¹¹ Ho saludi a ra ive Jezuz lesanvet Justuz ; a-douez an dud deuet euz an Amdroc'h, n'eus nemed ar re-ze da veza kenlabourerien din! Bet int evidon eur frealz! ¹² Ho saludi a ra Epafras, deuet euz ho touez, hag a zo eur zervicher d'ar C'hrist, bepred o stourm evidoc'h dre e beden-nou, deoc'h beza peurvad ha peurstarteet e peb bolontez Doue. ¹³ Ha dezañ e roan an testeni: kalz a boan a gemer evidoc'h, evid re Laodise hag evid re Ierapoliz! ¹⁴ Ho saludi a ra Lukaz, ar medisin karet, ha Demaz... ¹⁵ Saludit ar Vreudeur a zo e Laodise, ha Nimfe hag an Iliz a zo en e di...

¹⁶ Pa vezo bet lennet al Lizer-mañ dirazoc'h, grit ma vezo lennet ive e Iliz Laodise, ha c'hwi, lennit ive al Lizer degaset euz Iliz Laodise!

Filem 2
Mz 24,45... ¹⁷ Lavarit da Arkib: "Gwel mad ar vinistrerez az-peus-te degemeret digand an Aotrou: dit d'he feurzeveni!"

¹⁸ Ar zalud-mañ a zo euz va dorn-me, Paol! Dalhit koun euz va ereou!

Ar c'hras ra vezo ganeoc'h-c'hwi!



Al Liziri I ha II da Desalonigiz

I

1 - 4,12. Hervez al leor “Oberou Ebestel”, e-neus Paol diazezet an Iliz e kêr Tesalonig epad e eil beaj a visioner, er bloavezh 50. En e Lizer I, skrivet nebeud goudeze d’e Gristenien yaouank, e tegas dezo da zoñj o-deus int-i degemeret e Aviel evel Komz gwirion an Doue gwirion, hag o-deus ive e skignet en Akai hag er Makedoni dre skwer vad o buez kristen...

Deuet ar Juzevien da ziroll a-eneb dezañ, e-neus ranket Paol dilezel dillo e Iliz Yaouank. Chomet eo e galon enkrezet beteg m’e-neus Timote degaset kelou-mad anezi. Ha Paol d’o meuli ha d’o c’hennerza...

4,13 - 5. Med glaharet oll eo Kristenien Tesalonig gand o Breudeur eet dija da anaon! Evel ma c’houlenn Jezuz digand e ziskibien, e talc’h an Ebestel da c’houlenn digand ar Gristenien beza prest e peb amzer da vond da ambroug an Aotrou pa zeuio endro, peogwir ne oar dén nag an deiz nag an eur. Med ar Vreudeur eet da anaon, penaoz dezo beilla ha beza prest ? Neuze ‘ta n’o-dezo ket an eurvad da weled an Aotrou o tiskenn euz an Neñv, skeduz e-kreiz eur brosesion divent ha sebezuz!

Araog dezañ diskenn euz an Neñv, eme Paol dezo, ec’h adsavo Jezuz an oll re varo: ar re just, war eun dro, a vo treuz-stummet gantañ...

An dud just chomet beo beteg neuze, a vo neuze ive treuz-stummet gantañ heb tremen dre ar maro. Evelse, e c’hello an oll dud just mond asamblez da ambroug an Aotrou, hag antreal gantañ e Jeruzalem-an-Neñv, da lida gantañ da viken Eured Jezuz an Oanig gand e Bried, an Iliz (Disk 21,9...).

II

Prestig goude al Lizer Kenta e-neus ranket Paol skriva adarre da Gristenien Tesalonig evid diluzia eur gudenn all. Meuleudi a ro dezo da genta evid o feiz nerzuz, o c’harantez atao war gresk, evid o nerz-kalon e-kreiz an trubuilhou... hag e teu d’ar gudenn all.

Diouz ma vez klevet, en eul lizer pe en eur brezegenn bennag, e-nefe Paol kelenet ez eo dija degouezet Distro Jezuz en e c’hloar, hag ive c’hoarvezet Deiz an Aotrou!... Sorhennet int gand Fin ar Béd, hag e chomont heb labourad.

Ha Paol d’o dizorhenna. Araog Distro Jezuz, araog Deiz an Aotrou, e ranko dispaka Dén-ar-Pehed, ar Paotr-kollet, an Eneber! Dre zinou, marzou ha burzudou, e touello an dud o vond da goll... Hervez Jezuz (Mz 24,21...) ha sant Yann (Disk 20,7), e teuio an Eneber da voda ar Galloudegeziou fall evid eun tourtad iskiz a-eneb Doue hag e Iliz, o soñjal beza erfin trec’h warno! Paour-kêz galloudegeziou! Eun tammig c’hweza-denn euz genou Doue a vo tra-walc’h d’o skuba da viken...

Arabad beza sorhennet gand Distro an Aotrou, med derhel da labourad:

“An neb ne labour ket, dezañ ive chom heb debri!”

1 Da Desalonigiz

-1-

PENAOZ, DIOUZ AN IDOLOU, EZ OC'H DISTROET OUZ DOUE.

Ob 15,40

¹ Paol, Silvan ha Timote da Iliz an Desalonigiz a zo e Doue an Tad hag e Jezuz Krist an Aotrou: deoc'h gras ha peoc'h!

Kol 1,4

² Bepred e trugarekaom Doue evidoc'h oll, en eur ober koun ahanoc'h en or pedennou; ³ dalhmad e talhom koun euz oberiad ho feiz, euz striv ho karantez hag euz ho talc'h da c'hortoz Jezuz Krist on Aotrou, dirag Doue an Tad. ⁴ Gouzoud a reom ive, Breudeur karet gand Doue, doareou ho kalv: ⁵ rag n'eo ket deuet on Aviel davedoc'h dre Gomz hepken, med ive gand galloud ha dre ar Spered Santel, ha gand kalz a hardisegez, evel ma ouezit penaoz om-ni bet en ho touez ablamour deoc'h...

2 Tes 2,13

1 Kor 4,16
Fil 3,7

⁶ Ha c'hwi a zo deuet da gemer skwer diwarnom ha diwar an Aotrou, o tegemer ar Gomz e-kreiz kalz a drubuill, gand levenez ar Spered Santel, ⁷ beteg deoc'h dond da veza eur skwer evid oll grederien ar Makedoni hag an Akai! ⁸ Rag euz ho touez he-deus Komz an Aotrou tregernet, n'eo ket hepken er Makedoni hag en Akai, med e peb lec'h eo brudet ho feiz e Doue, ken n'eus ezomm ebed deom da lavared grig! ⁹ Rag an dud o-unan a zegemenn diwar-or-penn peseurt degemer on-eus bet en ho touez, ha penaoz, diouz an idolou, ez oc'h distroet ouz Doue, evid servicha an Doue Beo ha Gwirion, ¹⁰ hag evid gortoz euz an Neñv e Vab, an Hini e-neus adsavet a-douez ar re varo, Jezuz, an Hini on diframmo diouz ar C'hounnar-a-zeu...

Rom 1,8

Yn 17,3

Mz 3,7

-2-

REI DEOC'H AN AVIEL HAG IVE OR BUEZ.

Ob 16,20

¹ Rag gouzoud a rit hoc'h-unan, Breudeur, n'om-ni ket deuet davedoc'h en aner, ² rag goude beza gouzañvet poaniou ha dismegañs e kêr Filip, evel ma ouezit, en on Doue on-eus hardiseet da brezeg deoc'h Aviel Doue e-kreiz meur a stourm! ³ Rag or c'hentel n'eo ket diwar fazi na diwar hudurnez na diwar douellerez, ⁴ med pa z'om bet kavet mad gand Doue da veza fiziet ennom an Aviel, evelse e prezegom, n'eo ket o klask plijoud d'an dud, med d'an Doue e-neus kavet mad or c'halonou. ⁵ Rag n'om bet biskoaz gand komzou a lubanerez, evel ma ouezit, na gand digareziou a skraperez, Doue a zo test, ⁶ nag o klask gloar digand tud, na diganeoc'h na digand re all! ⁷ Goude gelloud beza eur bec'h evidoc'h evel Ebestel ar C'hrist, ez om bet

2 Kor 3,12
Gal 3,10

Mk 12,40
Yn 5,41

evel bugaligou en ho touez, evel pa vefe eur vagerez oc'h intent ouz he bugale dezi hec'h-unan!

Gal 2,20
Ob 18,3
8 Evelse ive, douget deoc'h a-galon, e kavem mad rei deoc'h, n'eo ket hepken Aviel Doue, med ive or buez-ni, rag deuet e oac'h da veza kér-kenañ deom! 9 Rag dalhit koun, Breudeur, euz or poan hag euz or skuizder: en eur labourad noz-deiz, da viroud samma unan bennag ahanoc'h, on-eus emban-net deoc'h Aviel Doue...

1 kor 4,15
2 Tes 1,5
10 C'hwi a oar, -ha Doue ive-, pegen santel ha just ha direbech eo bet or buez ganeoc'h-c'hwi, ar Grederien! 11 Gouzoud a rit koulz all penaoz on-eus greet evid pep hini ahanoc'h: evel ma ra eun tad evid e vugale, 12 on-eus-ni ho kenteliet hag ho kennerzet hag hoc'h aspedet, deoc'h bale en eun doare deread ouz an Doue e-neus ho kalvet d'e Rouantelez ha d'e Chloar!

Gal 1,11
1 Kor 11,2...
Heb 4,12
1 Kor 1,2
Mz 23,29
Rom 3,18...
13 Rag ablamour da-ze e vezom ive o trugarekaad Doue heb ehan, rag o tegemer diganeom Kelou-Mad Doue, degemeret ho-peus n'eo ket komz tud, med evel m'eo evid gwir, Komz Doue, a zo oc'h oberia ennoc'h-c'hwi, ar Grederien! 14 Rag deuet oc'h, Breudeur, da heulia Ilizou Doue a zo, er Jude, er C'hrist Jezuz, rag gouzañvet ho-peus ive a-berz ho kenvroiz an heveleb trubuillou hag int-i a-berz ar Juzevien! 15 Ar re-mañ o-deus zoken lazet Jezuz hag ar Brofeded, hag on heskinet o-deus ive! Ne blijont ket da Zoue, hag eneberien int d'an oll dud, 16 rag ouzom-ni e viront komz d'ar baganed evid d'ar re-mañ beza salvet! Evelse e peurverniont o fehejou e peb doare, med warno e tegouez ar Gounnar 'benn ar fin!

Rom 1,11
Fil 2,16
17 Ni avad, dispartiet diouzoc'h evid eur pennad amzer, a-zremm ha n'eo ket a-galon, ni on-eus bet brasoc'h mall da weled ho tremm diwar c'hoant braz! 18 Rag-se on-eus klasket mond davedoc'h, -ha me, Paol, eur wech hag eun eil gwech!-, ha deuet eo Satan d'or skoilla! 19 Rag piou a vezo deom esperañs ha levenez ha kurunenn a-lorc'h, daoust ha n'eo ket c'hwi ive, dirag Jezuz on Aotrou, d'an Deiz ma paro ? 20 Rag bez' ez oc'h-c'hwi or gloar hag on levenez!

-3-

EVID NA VEZO DEN BRALLET GAND AN TRUBUILLOU!

Ob 17,14
1 Kor 6,1...
Mz 5,10...
Heb 10,32
Ob 18,5
1 Rag-se, pa ne c'hellem ket herzel pelloc'h, on-eus kavet mad chom, ni on-unan, e kêr Aten, 2 hag on-eus kaset Timote, or Breur ha Ministr Doue evid Aviel ar C'hrist, d'ho kennerza ha d'ho kentelia evid mad ho feiz, 3 evid na vezo brallet den gand an trubuillou-ze: gouzoud a rit hoc'h-unan ez om-ni lakeet evid kement-se! 4 Ha pa oam en ho kichenn, on-eus lavaret deoc'h e oam war-nes beza trubuillet, hervez m'eo degouezet ha ma ouezit mad! 5 Ablamour da-ze, pa ne c'hellen ket herzel pelloc'h, am-eus-me va-unan e gaset davedoc'h a-benn kaoud kelou euz ho feiz, gand aon na vefe deuet an Tenter d'ho tenti, ha ma vefem-ni o poania en aner!

6 A-vremañ avad, davedom eo deuet Timote euz ho touez: degaset e-

1 Tes. 3,6 - 4,15

2 Tes 1,3 neus deom kelou-mad euz ho feiz hag euz ho karantez, en eur lavared e talhit bepred soñj mad ahanom hag ez euz deoc'h c'hoant braz d'or gweled, koulz ha deom-ni d'ho kweled!

Disk 2,9... ⁷ Ablamour da-ze ez om-ni bet frealzet ennoc'h, e-kreiz on oll enkreiz hag on trubuill, dre ho feiz, ⁸ rag bez'e vevom bremañ, peogwir e talhit mad en Aotrou! ⁹ Ha peseurt trugarez e c'hellom-ni renta da Zoue evidoc'h, evid al levenez a ra deom laouennaad ablamour deoc'h dirag Doue! ¹⁰Noz-deiz emaom o c'houlenn mond d'ho kweled ha da beurreizha kement a ra diouer d'ho feiz! ¹¹ Da Zoue an Tad e-unan ha da Jezuz on Aotrou kempenn on hent beteg ennoc'h! ¹² D'an Aotrou ober deoc'h kreski ha startaad er garantez kenetrezoc'h hag evid an oll, evel m'on-eus-ni evidoc'h! ¹³ Dezañ delher ho kalonou direbech er zantelez dirag Doue on Tad, a-benn an Deiz ma paro Jezuz on Aotrou gand e oll zent...

-4-

SETU BOLONTEZ DOUE: DEOC'H SANTELLAAD!

1 Kor 11,2 ¹ A-hend-all, Breudeur, ho pedi a reom hag hoc'h aspedi: hervez m'ho-peus degemeret diganeom penaoz eo deom bale evid plijoud da Zoue, hag ive hervez ma valeit, dalhit da vond war-raog muioc'h c'hoaz! ² Rom 12,1... Gouzoud a rit peseurt gourhemennou on-eus roet deoc'h digand Jezuz on Mz 6,10 Aotrou, ³ rag setu amañ Bolontez Doue: deoc'h santellaad, dre ziwall diouz ar zerherez; ⁴ da bep hini ahanoc'h gouzoud delher e gorr er zantelez hag en 1 Kor 6,12... doujañs, ⁵ ha n'eo ket e diroll ar c'hoantegez fall, evel ma ra c'hoaz ar baganed n'anavezont ket Doue! ⁶ Da bep hini miroud da vresa e Vreur ha da c'hounid warnañ er poent-ze: Doue a zeu da gastiza en abeg a gement-se, evel m'on-eus ive lavaret ha testeniet deoc'h. ⁷ Rag n'e-neus ket or galvet Yn 17,19 d'an hudurnez med d'ar zantelez. ⁸ Rag-se 'ta, an neb a zistaol kement-se, n'eo ket eun den a zistaol, med Doue, Eñ hag a laka ive e Spered ennom-ni.

Yn 6,45 ⁹ Diwar-benn ar garantez evid ar Vreudeur, n'ho-peus ket ezomm e Yn 13,34 teufem da skriva deoc'h, rag bez'e vezit hoc'h-unan desket gand Doue da gared an eil egile, ¹⁰ hag henn ober a rit e-keñver an oll Vreudeur a zo er Makedoni a-bez! Hoc'h alia a ran, Breudeur, da wellaad muioc'h c'hoaz; ¹¹ 2 Yes 3,6 ha klaskit an enor da veva er peoc'h, da gas endro pep hini e stal ha da labourad gand ho taouarn evel m'on-eus kemennet deoc'h, ¹² deoc'h da vale Ef 4,26 deread e-keñver an dud diavêz, ha deoc'h beva heb kaoud ezomm a zen!

HAG EVID ATAO E VEZIM GAND AN AOTROU!

1 Kor 15,20 ¹³ Ne fell ket deom avad, Breudeur, e chomfec'h diouiziegi diwar-benn an dud tremenet, gand aon na vefec'h glaharet evel ive ar re all ha n'o-deus ket a esperañs! ¹⁴ Rag ma kredom ez eo bet Jezuz marvet hag adsavet, evelse ive e tegaso Doue da-heul Jezuz ar re a zo bet marvet ennañ! ¹⁵ Setu ar pez a

lavarom deoch diwar Gomz an Aotrou: ni ar re veo, ni ar re lezet war-lerc'h beteg ma paro an Aotrou, ne z'aim ket d'ar pal araog an dud tremenet!

¹⁶ Rag war eur gér-urz, da vouez an Arhêl, pa zono trompill Doue, e tiskeno an Aotrou e-unan euz an Neñv, hag ar re varo a zo er C'hrist a vezo adsavet da genta. ¹⁷ Goude-ze, ni ar re veo, ni, ar re lezet war-lerc'h, a-unan ganto e vezim skrapet er goabr da ziambroug an Aotrou en êr, hag evelse e vezim evid atao gand an Aotrou! ¹⁸ Evelse, frealzit an eil egile dre ar C'homzou-ze...

-5-

ARABAD KOUSKED, MED BEILLA!...

Mz 24,36

¹ Diwar-benn an amzeriou hag ar poenchou, n'ho-peus ezomm ebed e vefe skrivet deoc'h, ² rag hoc'h-unan e ouezit sklêr: evel eul laer e-kreiz an noz, evelse ive e teuio an Aotrou! ³ Pa lavaro an dud: "setu peoc'h ha surentez!", neuze, en eun taol, e kouezo warno an dismantr evel ar gwentlou war ar vaouez dougerez, heb dezo gelloud tehed!

Mz 24,43

Mz 24,39
Yn 16,21

Rom 13,12
Ef 5,9

⁴ C'hwi avad, Breudeur, n'emaoc'h ket en Deñvalijenn, evid d'an Deiz-ze ho paka evel eul laer! ⁵ Rag bez' ez oc'h oll bugale ar sklêrijenn ha bugale an Deiz! N'om-ni ket tud an noz hag an deñvalijenn! ⁶ Neuze 'ta, arabad deom kousked, evel ma ra ar re all, med deom beilla ha beza dilonteg! ⁷ Rag en noz eo e vez ar gouskerien o kousked, hag en noz eo e vez ar vezverien o vezvi! ⁸ Ni avad, pa z'om euz an Deiz, bezom dilonteg, en eur wiska chupenn-houarn ar feiz hag ar garantez, hag esperañs ar zilvidigez evel tokbrezel! ⁹ Rag n'e-neus ket Doue on lakeet evid ar Gounnar, med evid gounid ar zilvidigez dre Jezuz Krist on Aotrou: ¹⁰ marvet eo bet Hemañ evidom, deom beva a-unan gantañ, pe zihun pe gousket e vefem! ¹¹ Rag-se, deoc'h frealzi an eil egile! Ha roit skwer-vad da bep hini, evel ma rit.

Ef 6,14...

Rom 14,8...

1 Kor 16,18

¹² Diganeoc'h avad, Breudeur, e c'houlennan kaoud anaoudegez-vad d'ar re a zo o poania en ho touez hag a zo karget d'ho rén en Aotrou, ha d'ho kentelia ; ¹³ ha diskouezit ive dezo kalz muioc'h a garantez ablamour d'ho oberiad: bezit er peoc'h ganto! ¹⁴ Hoc'h alia a reom, Breudeur: kenteillit an dud direiz, kennerzit an dud fall-galonet, skoazellit ar re zempl, bezit habask e-keñver an oll! ¹⁵ Gwelit na zeuio den da renta droug ouz droug! Med klas-kit bepred ar mad an eil evid egile hag evid an oll!

2 Tes 3,8...
Mz 5,43...
Rom 12,17

Kol 4,2
Ef 5,20

1 Yn 4,1

¹⁶ Laouennait bepred! ¹⁷ Pedit heb ehan! ¹⁸ E pep tra, trugarekait: setu aze bolontez Doue en ho keñver e Jezuz Krist! ¹⁹ Na vouguit ket ar Spered! ²⁰ Na zisprizit ket ar Brofediez! ²¹ Amprouit pep tra: dalhit ar pezh a zo kaer, ²² diwallit diouz peb drougiaj!

2 Tes 3,16

²³ Ra zeuio Doue ar peoc'h e-unan da zantellaad kement a zo ahanoc'h, ha ra vezo dalhet direbech ho spered hag hoc'h ene hag ho korv, a-benn ma paro Jezuz Krist on Aotrou! ²⁴ Feal eo an Hini e-neus ho kalvet:

henn ober a raio!

²⁵ Breudeur, pedit ive evidom-ni! ²⁶ Saludit an oll Vreudeur dre eur pok santel! ²⁷ Goulenn a ran diganeoc'h en Aotrou ma vezo lennet al Lizermañ d'an oll Vreudeur!...

²⁸ Ra vezo ganeoc'h gras Jezuz Krist on Aotrou!

2 Da Desalonigiz

-1-

TRUBUILL D'AR RE HO TRUBUILL...

¹ Paol ha Silvan ha Timote da Iliz an Desalonigiz a zo e Doue an Tad hag e Jezuz Krist on Aotrou: ² deoc'h gras ha peoc'h digand Doue an Tad ha digand Jezuz Krist an Aotrou!

Kol 3,15 ³ Trugarekaad Doue a dleom bepred diwar-ho-penn, Breudeur, evel m'eo deread, rag kreski dreist a ra o feiz, hag e pep hini e kresk ho karantez an eil evid egile! ⁴ Evelse ez om-ni on-unan lorhet ganeoc'h, en Ilizou Doue, diwar ho talc'h hag ho feiz e-kreiz an heskinou hag e-kreiz an oll drubuillou a ziwaskit: ⁵ bez ez' int eur merk euz barn reiz on Doue, a-benn deoc'h beza kavet din ouz Rouantelez Doue, emac'h o c'houzañv eviti! ⁶ Ha just eo endeeun da Zoue renta trubuil d'ar re a zo ouz ho trubuilla, ⁷ ha deoc'h-c'hwi, an dud trubuillet, diskuiz a-unan ganeom-ni, pa zeuio Jezuz on Aotrou d'en em ziskulia euz an Neñv gand e êlez nerzuz! ⁸ E-kreiz eun tan-flamm e kastizo ar re n'anavezont ket Doue ha na zentont ket ouz Aviel Jezuz on Aotrou...
 Rom 2,8
 Disk 20,13 ⁹ Ar re-ze, e-giz kastiz, a c'houzañvo eur maro peur-baduz, pell diouz dremm an Aotrou ha diouz gloar e c'halloud, ¹⁰ pa zeuio-Eñ da veza karget a c'hloar en e dud santel ha da veza kavet estlammuz en oll Grederien, rag ennoc'h eo bet fiziet an Testeni a-benn an Deiz-ze...

Fil 2,13 ¹¹ Evid-se ive e pedom evidoc'h bepred, d'on Doue ober ahanoc'h tud dîn ouz e c'halv, ha rei deoc'h, dre e c'halloud, peur-zeveni peb youl a vadelez ha peb oberenn a-feiz, ¹² ma vezo Ano Jezuz karget a c'hloar ennoc'h ha c'hwi ennañ, hervez gras on Doue, ha Jezuz Krist, an Aotrou!

Yn 17,10

-2-

WAR AR POENT MA PARO AN AOTROU

Mz 24,31...
 1 Kor 15,23 ¹ Goulenn a reom avad diganeoc'h, Breudeur, war ar poent ma paro Jezuz Krist on Aotrou ha ma vezim bodet gantañ: ² arabad deoc'h koll revuan ho penn! Na vezit strafuillet na dre eur spered na dre eur gomz pe eul lizer a vefe deuet diganeom, evel pa vefe deuet Deiz an Aotrou! ³ Arabad da zén ho touella e neb doare: ne zeuio ket, ma ne vez ket deuet da genta an disrann, ha ma ne vez ket diskuliet an Den-Peher, ar Mab-Kollet, ⁴ an Eneber a zo savet a-eneb kement-tra a vez anvet 'Doue' pe a vez adoret, beteg dezañ azeza e santual Doue, da ziskouez ez eus anezañ eun 'doue'!

1 Kor 1,8
 Disk 13,1

5 Daoust ha n'ho-peus ket soñj e lavaren-me deoc'h kement-se pa oan c'hoaz en ho touez ? 6 Gouzoud a rit petra' zalc'h warnañ, dezañ d'en em ziskulia en e amzer! 7 Rag Mister an Direiz a zo bremañ oc'h oberia, med an neb a zalc'h warnañ a jom war e hent beteg ma vo lakeet a-gostez! 8 Neuze e vo diskuliet an Den-direiz! Jezuz an Aotrou e ziskaro dre eur c'hwezadenn euz e c'henou: hag e gas a raio da netra pa baro en e splander! 9 Dond a raio hennez da bara, dre nerz Satan, gand bep seurt marzou ha sinou ha burzudou touelluz, 10 ha gand bep seurt touellerez direiz evid an dud kollet, pa n'o-deus ket degemeret karantez ar wirionez, dezo da veza salvet! 11 Rag-se e-neus Doue kaset dezo eun nerz touelluz, dezo kredi er gaou, 12 ma vo barnet ar re oll n'o-deus ket kredet er wirionez hag o-deus kavet mad an direiz!...

13 Ni avad a dle trugarekaad Doue diwar-ho-penn, Breudeur karet gand Doue, rag ho tibabet e-neus evid beza ar frouez-prim evid ar zilvidigez, dre zantelez ar spered ha dre ar feiz er wirionez! 14 Evid-se e-neus ho kalvet dre an Aviel da gaoud lod e Gloar Jezuz Krist on Aotrou. 15 Rag-se eta, Breudeur, dalhit mad, ha mirit stard ar c'henteliou a zo bet desket deoc'h ganeom-ni, pe dre gomz pe dre lizer! 16 Ra zeuio Jezuz Krist on Aotrou e-unan, ha Doue an Tad, -Eñ hag or c'har hag a ro frealz peurbaduz hag espe-rañs vad dre e c'hras!-, 17 da frealzi ho kalonou ha d'o c'hreñvaad e peb ober hag e peb komz vad!

-3-

MA NE LABOUR KET UNAN, DEZAÑ CHOM HEB DEBRI.

Kol 4,3 1 A-hend-all, Breudeur, pedit evidom ma redo Komz an Aotrou ha ma vezo ive meulet, evel en ho touez, 2 ha ma vezim-ni diframmet diouz an dud hegas ha droug! Ar feiz n'eo ket lod an oll! 3 Feal eo an Aotrou: Eñ ho startaio hag o tiwallo diouz an Droug! 4 En Aotrou on-eus fiziañs evidoc'h: ar pez on-eus kemennet, henn ober a rit, hag e reoc'h! 5 Ra vezo an Aotrou o rén ho kalonou e karantez Doue hag e gortoz ar C'hrist...

Mz 18,17 6 Breudeur, en Ano Jezuz Krist on Aotrou, e kemennan deoc'h tehed diouz kement Breur a vale direiz ha n'eo ket hervez ar Gelennadurez o-deus degemeret diganeom! 7 Rag hoc'h-unan e ouezit penaoz e rankit kemer skwer diwarnom, rag n'on-eus-ni ket baleet direiz en ho touez! 8 N'on-eus ket debret bara evid netra e ti unan bennag! Med er boan hag er skuizder, noz-deiz, edom o labourad evid miroud da zamma unan bennag ahanoc'h! 9 N'eo ket n'on-nefe ket aotre d'henn ober. Med deom en em rei deoc'h da skwer, ha deoc'h-c'hwi ober diouzom! 10 Rag pa oam en ho touez, on-eus kemennet deoc'h kement-mañ: ma ne fell ket da unan bennag labourad, dezañ chom heb debri!

1 Tes 5,14 11 Rag klevet a reom ez eus en ho touez lod o vale direiz, heb ober seurt, med o firbouchal! 12 Ar seurt-se a bedom hag a aliom, e Jezuz Krist on Aotrou, da zebri ar bara gounezet ganto o-unan o labourad er peoc'h!...

Gal 6,9


¹³ C'hwi avad, Breudeur, na fallgalonit ket oc'h ober ar mad! ¹⁴ Ma ne zent ket unan bennag ouz ar pezh a lavarom dre al Lizer-mañ, merkit an denze, mirit da gaoud darempred gantañ, ma teuio da gaoud méz! ¹⁵ Na rit ket gantañ eun enebour, med deoc'h e gentelia evel eur Breur!

1 Kor 5,9

¹⁶ Plijet gand Aotrou ar Peoc'h e-unan rei deoc'h ar Peoc'h e pep tra hag e peb doare! Ra vezo an Aotrou ganeoc'h oll!...

¹⁷ Ar Zalud a zo euz va dorn-me, Paol! Bez' ez eo eur merk e peb Lizer! Evelse e skrivan-me!...

¹⁸ Ra vezo ganeoc'h-oll gras Jezuz Krist on Aotrou...



Jezuz o walhi treid e ziskibien.
Kalvar Plougastell. Sk J. F.

Al Lizeri I ha II da Dimote

Al Lizer da Dit

An tri Lizer-mañ a zo bet moarvad skrivet e Rom, pa oa eno Paol prizoniad evid an dro genta, wardro ar bloavez 62. Ne oa eno gantañ, d'ar poent-se, nemed Lukaz, an Avieler: a-dra-zur e-neus Paol e gemeret da skrivagner evid an tri Lizer-mañ, hag ive evid al Lizer da Filemon.

En Ilizou e-neus diazezet dre ar béd, e-neus Paol laket kozidi hag episkobed, med eñ e-unan e-neus dalhet d'o rén gand e c'halloud a Abostol. Dond a ree d'o gweled ha da ziluzia war an dachenn ar c'hudennou a bep seurt! A-wechou e kase kannaded pe lizeri da sklêrijenna ar Gristenien, da reñka ha da gompeza an traou... Med tostaad a ra dezañ an eur da guitaad ar béd, ha deuet eo ar poent da lakaad ministred e karg, war an dachenn, da ziluzia war blas ar c'hudennou paduz, da lakaad urz ha peoc'h er c'hêriou birvidig.

Evid-se e tibab Paol daou euz e genlabourerien tosta, Timote ha Tit.

Timote a oa eur pagan euz kêr Listr, en Azi, p'e-neus Paol e zegaset d'ar feiz ha gret anezañ eur c'helabourer feal ha kaloneg: anezañ ez-eus ano e kalz euz e Lizeri! Ha Paol bremañ d'e gas da Gêr vraz Efez... Enni hag er vro a-bez, hervez al Lizeri da Efeziz ha da Goloziz, e vez dalhmad rendaelou heb fin etre Paganed ha Juzevien, diwarbenn doueou, idolou, êlez, galloudegeziou... Mad e vefe war an dachenn eur Ministr ampart da sklêrijenna ar Gristenien ha da vired outo beza touellet gand koñchou goullo!

Tit a zo degouezet war hent Paol e kêr Korint moarvad. Eno e-neus labouret hir amzer gand an Abostol; eno o-deus o-daou poaniet kaled evid diluzia kudennou a bep seurt, evid embann eur gelennadurez yac'h, evid delher ar Vreudeur war hent eur vuez kristen gwirion. Eur seurt kenlabourer a c'hello, a-dra-zur, reñka ha kompeza an traou war enezenn Kreta.

En daou Lizer da Dimote, hag el Lizer da Dit, e teu Paol da rei kuzulioù a bouez d'an daou genlabourer a reseo digantañ ar garg a Bastor: rag-se e vez al Lizeri-ze anvet aliez 'Lizeri a Bastor'.

Setu amañ ar c'huzulioù penna roet dezo gand Paol:

Rén eur vuez santel..., studia al Levriou Sakr...

Enebi ouz ar fals-ebestel, ouz ar fals-kelennerien...

Beza evezieg o tibab an episkobed, ar C'hozidi...

Prezeg e peb amzer eur gelennadurez yac'h...

Heñcha mad peb rummad kristenien

Poania kaloneg evid an Aviel, o kemer skwer diwar Jezuz...

Tehed diouz ar rendaelou goullo...

Douja ar galloudegeziou ha pedi evito...

1 Da Dimote

-1-

DEUET EO AR C'HRIST DA ZAVETEI PEHERIEN!

- Ob 16,1...
Rom 1,4 ¹ Paol, Abostol ar C'hrist Jezuz dre gemenn Doue or Zalver ha dre hini ar C'hrist Jezuz on esperañs, ² da Dimote, va gwir Vab er feiz, gras, trugarez ha peoc'h digand Doue an Tad ha digand Jezuz Krist on Aotrou!
- Ob 20,1 ³ Evelse, en eur vond d'ar Makedoni, am-eus kuzuliet dit chom e Kêr Efez evid miroud ouz lod da rei eur gelennadurez disheñvel diouz on hini, 4 ha da staga gand mojennou ha taolennou-ligenez di-vuzul; kement-se a gas endro ar rendael kentoc'h eged mennad Doue, a zegouez dre ar feiz! ⁵ Pal ar gourhemenn eo eur garantez a zav euz eur galon c'hlan hag euz eur goustiañs vad hag euz eur feiz didroidell! ⁶ En eur zistrei diouz kement-se, ez eus kouezet lod er randonerez, ⁷ c'hoant dezo da veza kelennerien war al Lezenn heb dezo intent nag ar pezh a lavaront na war betra e talhont stard!
- Rom 13,10 ⁸ Gouzoud a reom avad eo kaer al Lezenn, ma teuer d'he c'hemer da Lezenn, ⁹ o c'houzoud kement-mañ: n'eo ket lakeet al Lezenn evid tud just, med evid tud direiz ha dizent, dizouj ha peher, tud droug ha dizakr, lazerien o zad hag o mamm, muntrerien, ¹⁰ serheged, pôted orgeduz kenetrezo, sklavourien, gaouiaded, fals-touerien, hag ar re a ra eun dra all bennag a-eneb ar Gelennadurez yac'h, ¹¹ hervez Aviel gloriuz an Doue Eüruz, Aviel bet fiziet ennon-me...
- Rom 7,12... ¹² Trugarekaad a ran ar C'hrist Jezuz on Aotrou, e-neus va c'hennerzet, rag va c'havet e-neus feal, p'e-neus va lakeet er vinistrerez, ¹³ me hag a oa kent blasfemer hag heskiner ha dismeger! Med truez a zo bet ouzin, rag henn ober a reen en diskred, diouizieg ma oan! ¹⁴ Gras an Aotrou avad a zo bet founnuz-tre gand ar feiz hag ar garantez er C'hrist Jezuz! ¹⁵ Kreduz eo ar Gomz-mañ ha mad-tre da zegemer: deuet eo ar C'hrist Jezuz er Bed da zalvi ar Beherien, hag anezo ez on-me ar c'henta! ¹⁶ Med evid-se ez on bet pardonet: d'ar C'hrist Jezuz diskouez ennon-me da genta e oll galoniez, da skwer evid ar re a zo war-nes kredi ennañ a-benn kaoud buez peurbaduz!
- Ob 9,15...
Gal 1,19... ¹⁷ Da Roue ar c'hantvejou, d'an Doue na c'hell na mervel na beza gwelet, ha n'eus nemetañ, dezañ enor ha gloar a-hed ar c'hantvejou a gantvejou! Amen!...
- Lk 15,2...
1 Kor 15,9 ¹⁸ Setu ar c'hemenn a roan dit, va mab Timote: hervez ar profediezou bet lavaret diwar-da-benn, dit stourm hervezo ar stourmad kaer, ¹⁹ en eur zelher ar feiz hag eur goustiañs vad! Ouz he dilezel, ez eus eet lod da goll war dachenn ar feiz! ²⁰ En o zouez, ema Imene hag Aleksandr, am-eus-me roet da Zatan, dezo deski diwall da vlasfemi!

-2-***N'EUS NEMED EUN HANTEROUR!***

Rom 13,1...
Yn 8,32

¹ Da genta e c'houlenan diganeoc'h ober goulennoù, pedennoù ha pedennoù-a-drugarez hag aspedennoù evid an oll dud, ² evid ar rouaned hag evid an oll uhelidi, deom rén er peoc'h eur vuez habask ha sioul, e peb doujañs ha reizder. ³ Kaer ha plijuz eo an dra-ze da Zoue or Zalver, ⁴ a fell dezañ e teufe an oll da veza salvet ha da anavezoud ar Wirionez...

Rom 3,29
Gal 1,4...
Gal 2,7...

⁵ Rag n'eus nemed eun Doue, ha n'eus ive nemed eun Hanterour etre Doue hag an dud, ar C'hrist Jezuz, Dén gwirion, ⁶ an Hini e-neus en em roet evel Daspren evid an oll, hag e-neus en e amzer roet an Testeni. ⁷ Evid hemañ on-me bet lakeet da Embanner ha da Abostol (ar wirionez a lavaran ha ne lavaran ket gevier!), ha da Gelenner evid ar baganed, war ar feiz ha war ar wirionez.

1 Pêr 3,3...
1 Kor 14,34
2 Kor 11,3

⁸ Me a fell din e vefe ar wazed o pedi e peb lec'h, en eur zevel d'an Neñv daouarn santel, heb kounnar na rendael! ⁹ Ha koulz all ar merhed, e dillad kempenn, fichet gand furnez ha reiz, n'eo ket gand bleo rodillet, pe gand aour pe berlez pe wiskamant talvouduz, ¹⁰ med gand oberou mad, evel m'eo deread da verhed prometet ganto doujañs da Zoue! ¹¹ D'eur vaouez, en eur jom sioul, degemer ar Gelennadurez gand an oll zoujañs! ¹² Da gelenn avad, ne aotrean ket ar vaouez, na da reizha he gwaz, med da jom sioul. ¹³ Rag Adam a zo bet stummet da genta, Eva da c'houde. ¹⁴ Adam n'eo ket bet touellet; ar vaouez avad a zo bet touellet hag he-deus breset ar gourhemenn! ¹⁵ Salvete e vezo avad dre c'henel bugale, ma kendalc'h er feiz hag er garantez hag er zantelez gand reiz...

-3-***PENAOZ EO RED OBER E TI DOUE!***

Ob 20,28
2 Tim 2,24
1 Kor 3,2
1 Kor 5,12

¹ Kreduz eo ar Gomz-mañ: ma klask unan bennag an Episkobiez, e c'hoanta eun oberenn gaer! ² Red eo eta d'an Episkob beza direbech, bet pried d'eur wreg hepken, dilonteg, reiz, kempenn, degemeruz, kelenner, ³ nag ever-gwin na kanner, med habask, na rendaeler na piz! ⁴ Red eo dezañ rén kaer e di, ha delher e vugale en doujañs hag en oll reizder. ⁵ Ma ne oar ket eun den ren e di e-unan, ⁶ penaoz ec'h intentfe ouz Iliz Doue ? Arabad dezañ beza eun den nevez-badezet, gand aon na vefe dallet gand moged al lorc'h, ha na gouezfe dindan barn an Diaoul! ⁷ Red eo dezañ ive kaoud testeni mad a-berz an dud diavêz, evid na gouezo ket en dismeg nag e roued an Diaoul...

Ob 6,3
Rom 16,25

⁸ Red eo koulz all d'an Diagoned beza reiz, didroidell, nag everien-gwin na skraperien; ⁹ dezo delher Mister ar feiz en eur goustiañs c'hlan. ¹⁰ Ra

vezo an dud-ze amprouet da genta, dezo da c'houde beza kemeret da ziagoned, ma z'int direbech. ¹¹ Red eo koulz all d'o gwragez beza reiz: na divruder na lonker, med feal e pep tra. ¹² Ra vezo an diagoned bet pried d'eur wreg hepken, ha dezo ren kaer o bugale hag o zi! ¹³ Rag an diagoned o-do sevenet kaer o zervich, a c'hounezo dezo o-unan eur reñk kaer ha kalz hardisegez er feiz a zo er C'hrist Jezuz.

Ef 2,19... ¹⁴ Kement-se a skrivan dit, da c'hortoz mond buan davedout, ¹⁵ med ma talean, dit gouzoud penaoz eo red ober e Ti Doue, Ti hag a zo Iliz an Doue-Beo, pilier ha diazez ar Wirionez...

Yn 1,14... ¹⁶ Hag anad eo d'an oll ez eo braz Mister ar feiz:

Rom 1,4
Mk 16,19

Disklêriet eo bet en eun Den,
Justizet eo bet gand ar Spered,
Paret e-neus dirag an êlez,
Embannet eo d'ar Baganed,
Kredet e vez dre ar Bed,
Douget eo bet d'ar C'hloar!...

-4-

DOUJAÑS-DOUE A DALV DA GEMENT-TRA!

Mz 24,23...
2 Pêr 3,3
1 Yn 2,18
1 Kor 10,30
Ob 10,15
Mz 15,11

¹ Ar Spered hel lavar frêz: en amzeriou diweza, e tistago lod diouz ar feiz evid heulia sperejou touelluz ha kelennadureziou tud diaouleg: ² ar re-ze a lavar gevier dre zindan, ha gourlosket eo o c'houstiañs: ³ difenn a reont dimezi, ha debri euz lod traou e-neus Doue krouet evid beza kemeret, gand trugarez, gand ar re a gred hag a zo deuet da anavezoud ar wirionez: ⁴ pep tra, krouet gand Doue, a zo kaer, ha n'eus netra da daoler kuit ma vez kemeret gand trugarez: ⁵ santelleet e vez dre Gomz Doue ha dre ar bedenn. ⁶ O kelenn kement-se d'ar Vreudeur, e vezi eur ministr kaer d'ar C'hrist Jezuz, maget gand Komzou ar feiz ha gand re ar gelennadurez kaer az-peus-te heuliet...

⁷ Lez a gostez mojennou dizakr ar gwrahed! Dit kreñvaad e doujañs Doue ; ⁸ rag kreñvaad ar c'horv ne dalvez ket da galz a dra, med doujañs-Doue a dalvez da bep tra, p'he-deus promesa ar Vuez, an hini a-vremañ hag an hini da-zond!

Rom 8,27...
Mz 5,14

⁹ Kreduz eo ar Gomz ha mad da zegemer: ¹⁰ ablamour da gement-mañ emaom-ni o poania hag o stourm: ablamour m'on-eus fiziañs en Doue-Beo a zo Salver an oll dud, Hini ar Grederien dreist-oll! ¹¹ Dit kemenn ha kelenn an dra-ze! ¹² Arabad da zen dismega da yaouankiz, med bez eur skwer d'ar Grederien dre da Gomz, dre da vuez, dre da garantez, dre da feiz, dre da c'hlander! ¹³ Beteg ma teuin, stag da lenn, da gentelia, ha da gelenn! ¹⁴ Na

zilez ket an donezon speredel a zo ennout hag a zo bet roet dit dre ar brofe-
diez da-heul astenn-daouarn ar Gozidi! ¹⁵ Bez prederiet gand an traou-ze!
Bez aketuz gand an traou-ze! Ma vo sklêr d'an oll ez ez war wellaad! ¹⁶ Taol
ev ez ouzit da-unan, hag ouz da gelennadurez: kendalc'h ganto, rag oc'h ober
evelse, e salvi ha te da-unan hag ar re a zo ouz da zelaou!

-5-

DIT KENTELIA EN OLL C'HLANDER!

¹ Arabad dit gourdrouz eur C'hoziad, med dit e gentelia evel eun tad,
ar bôtred yaouank evel breudeur, ² ar merhed en oad evel mammou, ar
merhed yaouank evel c'hoarezed, en oll c'hlander...

Lk 2,37...
Lk 18,7...

³ Dit enori an intañvezed a zo, evid gwir, intañvezed. ⁴ M'he-deus eun
intañvez bugale pe vugale-vian, ra vezint da genta desket da ziskouez dou-
jañs d'o zi o-unan ha da renta o dle d'o c'herent: an dra-ze a zo plijuz da
Zoue! ⁵ An hini a zo evid gwir intañvez, lezet hec'h-unan, he-deus lakeet he
fiziañs e Doue hag a gendalc'h d'ober goulennou ha pedennou noz-deiz! ⁶ An
hini a zo dirollet, goude dezi beza beo, a zo marvet! ⁷ Kement-se eo dit
kemenn, dit beza direbech! ⁸ An neb na intent ket ouz e dud, dreist-oll ouz
tud e di, hennez e-neus nahet ar feiz hag a zo gwasoc'h eged eun den difeiz!

Yn 13,14
Ob 9,11
Disk 2,4

⁹ Ra vezo dibabet eun intañvez ma z'eo oajet a dri-ugent vloaz da
nebeuta, ha bet gwreg d'eur gwaz hepken, ¹⁰ ma z'eo brudet dre oberou kaer,
m'he-deus savet mad he bugale, degemeret an dud diavêz, gwelhet treid an
dud santel, skoazellet an dud trubuillet, ha m'he-deus kroget e peb oberenn
vad! ¹¹ Lez avad a-gostez an intañvezed yaouankoc'h, rag pa zirollont a-eneb
ar C'hrist, e fell dezo dimezi, ¹² o tegas warno eur varn, p'o-deus int-i nahet
ar feiz kenta! ¹³ Ha da-heul, dilabour ma vezont, e teskont ober tro an tiez,
n'eo ket hepken dilabour, med ranezenn* ha ranell*, o tibuna traou dizonest!
¹⁴ Me a fell din eta e teufe an intañvezed yaouank da zimezi, da c'heneb
bugale, da rén mad o zi, heb rei d'an Enebour eun digarez bennag da wall-
gomz! ¹⁵ Rag a-vremañ o-deus lod troet fall oc'h heulia Satan! ¹⁶ M'he-deus
eur vaouez kreder intañvezed en he zi, ra bourvezo dezo, evid na vo ket sam-
met an Iliz ha ma c'hello pourvezi d'ar re a zo intañvezed evid gwir...

Rom 12,8
Dt 25,4
Dt 24,15
Dt 19,15

¹⁷ Ar Gozidi a zeven kaer o c'harg a dle kaoud eun hanter muioc'h a
enor, dreist-oll ar re a stag da brezeg ha da gelenn! ¹⁸ Rag lavared a ra ar
Skritur: "*Ne winelli ket an ejen a zo o flastra an êd!*" hag ive: "*Dîn eo an
oberour ouz e c'hopr!*" ¹⁹ A-eneb eur C'hoziad, *na zegemer tamall ebed
nemed digand daou pe dri dest!* ²⁰ Dirag an oll, gourdrouz ar re a bec'h, m'o-
do aon ive ar re all! ²¹ Dirag Doue hag ar C'hrist Jezuz ha dirag an Elez diba-
bet, e c'houlennan stard diganez mired kement-se, heb rag-varn dén, hag heb
ober tra pe dra dre wall-bleg!

²² Na astenn ket re vuan da zaouarn war zén, ha na vez ket ken-lodeg e
pehejou tud all! En em zalc'h glan da-unan! ²³ Na vez mui eun 'ever-dour',

*Ranezenn: glabouserez. *Ranell: fri-furch.

med kemer eun nebeudig gwin, en abeg d'az stomog ha d'az fallaennou nive-
ruz! ²⁴ Pehejou tud 'zo a vez anad araog beza degaset d'ar varn! Evid tud all,
e vezont anavezet da-c'houde! ²⁵ Evelse, ive, an oberou kaer a vez anad, ar re
all ne c'hellont ket chom kuzet!...

-6-

STOURM ETA STOURM KAER AR FEIZ!

Ef 6,5

Filem 16

Rom 6,15

Gal 1,6...

Rom 1,29

Heb 13,5

Mz 6,24

¹ Ar re oll a zo sklav dindan suj, dezo soñjal eo o mistri din a beb dou-
jañs, evid na vo ket blasfemet Ano Doue pe ar Gelennadurez! ² Ar re o-deus
mistri kreder, dezo diwall d'ho dispriza war zigarez ez int Breudeur! Med
dezo o zervicha gwelloc'h, ablamour m'eo tud kreder ha karet ar re a denn
gounidigez euz o labour mad! Evelse eo dit kelenn hag alia! ³ Ma kelenn
unan bennag traou all, ha ma ne ra van ebed ouz ar C'homzou yac'h, re Jezuz
Krist on Aotrou, nag ouz ar Gelennadurez a zo hervez doujañs-Doue, ⁴ hen-
nez a zo dallet gand moged al lorc'h: ne intent seurt, med klañv eo wardro
enklaskou ha rendaelou; diwarno e sav gwarizi, dael, blasfemou, difiziañs-
fall, ⁵ breujou etre tud kollet ganto o fenn, ha dioueret diouz ar wirionez o
soñjal e vez gounidigez diwar zoujañs-Doue! ⁶ Gounidegez vraz eo avad
doujañs-Doue, gand ar reizder! ⁷ Rag n'on-eus degaset seurt er Bed, ha ne
c'hellom kas seurt ganeom kuit! ⁸ P'on-eus avad boued ha dillad, tremenom
laouen ganto! ⁹ Ar re a glask pinvidikaad, a gouez en eun tentadur hag en eur
roued hag e kalz c'hoantegeziou diboell ha noazuz, a zañka an dud er maro
hag en argoll! ¹⁰ Rag gwrizienn an oll zrougou eo ar youl-arhant! Deuet d'en
em rei dezi, ez eus lod distroet diouz ar feiz evid koueza don en eur bern poa-
niou...

1 Kor 9,25

¹¹ Te avad, ô Gwaz-Doue, tec'h diouz kement-se! Klask bepred ar jus-
tiz, doujañs-Doue, feiz, karantez, dalc'h, douster! ¹² Dit stourm eta stourm
kaer ar feiz, dit tizoud ar vuez peurbaduz: dezi out bet galvet hag henn disk-
lêriet az-peus dre eun disklêriadur kaer dirag kalz testou!

Mz 27,11

Yn 18,33...

Disk 17,14

¹³ Dirag an Doue a ro buez d'an oll draou, ha dirag ar C'hrist Jezuz e-
neus testeniet eun disklêriadenn gaer dirag Ponz Pilat, dit e kemennan: ¹⁴ mir
ar gourhemenn dinamm ha direbech beteg ma paro Jezuz Krist on Aotrou! ¹⁵
D'e amzer, e raio dezañ para ar Mestr-Eüruz n'eus nemetañ, Roue ar roua-
ned, Aotrou an aotronez, ¹⁶ an Hini n'eus nemetañ divarvel, hag a zo o chom
en eur Sklêrijenn dreist, an Hini n'e-neus dén gwelet ha ne c'hell dén gwe-
led! Dezañ enor ha galloud peurbadel! Amen!

Rom 12,16

Mz 6,20

Lk 12,17

Jk 1,10

¹⁷ An dud pinvidig er Bed-mañ, kemenn dezo diwall ouz soñjou
lorheg, ha lakaad o fiziañs, n'eo ket e moged ar binvidigez, med e Doue, a ro
deom brokuz an oll draou, deom d'ober ganto! ¹⁸ Kemenn ive dezo ober ar
mad, pinvidikaad en oberou kaer, beza brokuz ha mad da lodenna, ¹⁹ dastum
eun teñzor kaer evito o-unan, evid an amzer-da-zond, dezo da baka ar vuez
gwirion...

donou dizakr ha goullo, ha diouz eneb-lavarou ar fals-ouiziegez: ²¹ ouz he
c'helellenn, o-deus lod faziet war dachenn ar feiz!

Ra vezo ar C'hras ganeoc'h!...



Astaol e Plourin-Montroulez. Sk Y.-P. C.

2 Da Dimote

-1-

GOUZAÑV POAN EVID AN AVIEL

Ob 16,1 ¹ Paol, Abostol ar C'hrist Jezuz dre volontez Doue, hervez promessa ar Vuez a zo er C'hrist Jezuz, ² da Dimote, va mab karet, gras, trugarez ha peoc'h digand Doue an Tad ha digand Jezuz Krist on Aotrou!

Fil 3,5 ³ Trugarekaad a ran Doue, -a adoran war-lerc'h va zadou-koz gand eur goustiañs c'hlan-, pa ran dalhmad koun ahanout em fedennou, noz-deiz... ⁴ C'hoant am-eus d'az kweled, o soñjal en da zaelou, din da veza leuniet a levenez! ⁵ Ha koun a zalhan euz ar feiz a zo ennout, hag a zo bet dalhmad da genta en da vamm-goz Loida hag en da vamm Eunike; fiziañs am-eus avad ema ive ennout-te!

Rom 8,15 ⁶ Rag-se e kemennan dit entana a-nevez Donezon Doue a zo ennout dre astenn va daouarn: ⁷ rag n'e-neus ket Doue roet deom eur Spered a lentegez, med unan a nerz, a garantez, a reizder! ⁸ Arabad dit eta kaoud méz gand Testeni on Aotrou, na ganin-me, eread ma z'on evitañ, med gouzañv poan evid an Aviel, dre nerz Doue! ⁹ Eñ e-neus or salvet ha galvet dre eur galv santel, n'eo ket hervez on oberou, med hervez e vennad e-unan, hag hervez e c'hras: ar c'hras-ze a zo bet roet deom er C'hrist Jezuz araog an amzeriou kenta, ¹⁰ ha disklêriet eo bet avad bremañ dre m'e-neus paret ar Zalver, ar C'hrist Jezuz. Hemañ e-neus kaset ar Maro da get, ha lakeet e-neus ar Vuez hag an divarvez da skedi dre an Aviel, ¹¹ ez on-me bet lakeet evitañ da Embanner, da Abostol ha da Gelenner! ¹² En abeg da-ze ive am-eus kementse da c'houzañv, med n'am-eus ket a véz, rag gouzoud a ran e piou am-eus lakeet va fiziañs; ha fiziañs am-eus eo-Eñ gouest da vired an Teñzor fiziet ennon beteg an Deiz-ze!

Rom 5,5... ¹³ Dalc'h mad stumm ar C'homzou yac'h az-peus klevet ganin, e feiz hag e karantez ar C'hrist Jezuz! ¹⁴ Dre ar Spered Santel a zo o chom ennom, mir an Teñzor kaer fiziet ennout...

¹⁵ Gouzoud a rez an dra-mañ: va dilezet o-deus ar re oll a zo en Azi! En o zouez ema Figel hag Ermojen. ¹⁶ D'an Aotrou diskouez trugarez da di Onezifor: meur a wech e-neus va frealzet ha n'e-neus ket bet a véz gand va ereou! ¹⁷ Degouezet e Rom, ez eo deuet d'am c'hask ha va c'havet e-neus! ¹⁸ Plijet gand an Aotrou rei dezañ kavoud trugarez dirag an Aotrou, d'an Deiz-ze! Ha pegement e-neus-eñ servichet e Kêr Efez, gouzoud a rêz mad awalc'h...

-2-

DALC'H SOÑJ EUZ JEZUZ KRIST!

¹ Te eta, va Mab, klask kreñvaad er c'hras a zo er C'hrist Jezuz! ² Ar pezh az-peus klevet diganin dre galz a destou, dit fizioud kement-se e tud kreder, er re a zo gouest da gelenn re all! ³ Gouzañv poan evel eur brezeler kaer d'ar C'hrist Jezuz! ⁴ Pa vez eun den o vrezelia, ne emell ket ouz traou ar vuez, a-benn plijoud d'e c'hoprêr! ⁵ Ma c'houren unan bennag, ne vez kurnet nemed ha gourenet e-nefe hervez ar reolenn! ⁶ Ar c'houer a zo o poania a rank kaoud al lodenn genta euz ar frouez! ⁷ Soñj mad er pezh a lavaran: an Aotrou a raio dit intent pep tra!...

⁸ Dalc'h soñj euz Jezuz Krist, adsavet a-douez ar re varo, ganet euz ouenn David hervez va Aviel! ⁹ Ennañ e poanian-me beteg an ereou, evel eun torfetour! Med Komz Doue ne vez ket ereet! ¹⁰ Ablamour da-ze e c'houzañvan pep tra evid an dud dibabet, dezo ive da gaoud ar zilvidigez er C'hrist Jezuz gand gloar peurbaduz. ¹¹ Kreduz eo ar Gomz: ma z'om bet marvet a-unan gantañ, a-unan ive e vevim! ¹² Ma c'houzañvom, a-unan gantañ ive e renim! M'or-bo nahet, Eñ ive or naho! ¹³ Ma teuom da veza difeal, Eñ a jom feal, rag ne c'hell ket en em nac'h e-unan.

¹⁴ Degas soñj euz kement-se, o c'hourhemenn dirag Doue miroud da rendael, rag n'eo an dra-ze mad da netra nemed da goll ar re a zelaou! ¹⁵ Bez aketuz d'en em zelher dirag Doue evel eun den bet kavet mad, evel eun oberour divéz, en eur heulia eeun Komz ar wirionez. ¹⁶ Diwall avad diouz ar rondonou dizakr ha goullou, rag bez' e kasont dreist-oll d'an dizoujañs, ¹⁷ hag ema o c'homz o kemer he boued evel eur c'hrign-beo! En o zouez ez eus Imene ha Filed! ¹⁸ Ar re-ze o-deus faziet war ar wirionez o lavared eo a-vremañ degouezet an Adsao, hag e tispahont feiz hiniennou! ¹⁹ Med an diazez stard lakeet gand Doue a zalc'h mad, p'e-neus ar ziell-mañ: *'An Aotrou a anavez ar re a zo dezañ'* hag ive: *'Ra deho diouz an direiz kement-hini a c'halv Ano an Aotrou!'*

²⁰ En eun ti braz, ne vez ket hepken listri aour hag arhant, med ive re goad ha re bri: ar re genta da veza prizet, ar re all da veza disprizet... ²¹ Ma teu eta unan bennag d'en em c'hланаad euz a-douez ar re-mañ, e teuo da veza eul lestr prizet, santelleet, talvouduz evid ar Mestr, stummet evid peb oberenn vad!...

²² Diwall diouz c'hoantegeziou ar yaouankiz: klask dalhmad justiz, feiz, karantez, peoc'h a-unan gand ar re a c'halv an Aotrou gand eur galon c'hlan... ²³ Tec'h diouz an enklaskou sod ha dizonest, o c'houzoud e tegasant rendaelou. ²⁴ Eur zervicher d'an Aotrou ne dle ket rendaela, med beza laouen e-keñver an oll, mad da gelenn, gouest da c'houzañv, ²⁵ leun a zouster o reizha an eneberien, beteg gouzoud ha ne zeuio ket Doue da rei dezo an Distro ouz Doue, dezo da anavezoud ar wirionez, ²⁶ ha da veza diluziet diouz roued an diaoul, paket ma z'int gantañ ha dalhet d'ober e c'hoant...

-3-

DALC'H MAD D'AN TRAOU AZ-PEUS DESKET!

Rom 1,29...

¹ Red eo dit avad gouzoud e c'hoarvezo reuziadou kaled en amzeriou diweza, ² rag bez' e vezo an dud digar, rasteller, lorhuz, dicheg, blasfemer, dizen, dihrad, dizakr, ³ digalon, dizamant, divruder, direiz, divadelezuz, ⁴ trubard, taer, dallet gand al lorc'h, troet war ar plijadurioù kentoc'h eged ouz Doue. ⁵ Bez' o-deus doare doujañs-Doue, med nac'h a reont he nerz! Diwall ive diouz an dud-ze, ⁶ rag euz o-zouez e teu ar re a zil en tiez hag a douell merhedigou sammet a behejou, poulzet gand c'hoantegeziou a bep seurt, ⁷ bepred stag da zeski heb gelloud morse dond da anavezoud ar wirionez! ⁸ Evel m'o-deus Iannès ha Mambre enebet ouz Moizez, evelse ive ema ar remañ oc'h enebi ouz ar wirionez, tud gwallet o spered ha troet fall war dachenn ar feiz! ⁹ Med ne z'aint ket gwasoc'h, rag d'an oll eo anad o diboell, evel m'eo bet ive hini an daou-ze!

Fil 3,19

Rom 2,20

Mz 23,14

Ob 17,21

1 Kor 13,13...

Ob 13,44

2 Kor 11,23

Ob 14,22

¹⁰ Te avad az-peus heuliet a-dost va c'helennadurez, va buez, va mennad, va feiz, va nerz-kalon, va c'harantez, va dalc'h, ¹¹ va heskinou, ha va foaniou, ar seurt degouezet din e Antioch, e Ikoniom hag e Listr! Ar seurt heskinou am-eus gouzañvet, ha diouto oll e-neus an Aotrou va diframmet! ¹² Hag an oll re a fell dezo beva gand doujañs er C'hrist, a vezo heskinet! ¹³ Tud droug ha korvigeller a ia war wasaad, o touella hag o veza touellet! ¹⁴ Te avad, dalc'h mad d'an traou az-peus desket hag az-peus kredet stard, o c'houzoud digand piou az-peus o desket, ¹⁵ hag o c'houzoud ive az-peus adal da vugaleaj anavezet ar Skrituriou Sakr, ar re a c'helle rei dit furnez evid kaoud ar zilvidigez dre ar feiz e Jezuz Krist! ¹⁶ Pep Skritur, bet awenet gand Doue, a zo talvouduz da gelenn, da c'hounid, da reiza, da stumma er justiz, ¹⁷ evid da zén-Doue beza peurvad, stummet evid peb oberenn vad...

2 Pêr 1,19...

Rom 15,4

-4-

AR STOURM KAER AM-EUS-ME STOURMET!

Ob 10,42

1 Pêr 4,5

Ob 20,20

1 Tim 4,1

¹ Dirag Doue ha dirag ar C'hrist Jezuz, -Eñ hag a zo prest da varn ar re veo hag ar re varo, dre e Zistro hag e Rouantelez-, e tisklêrian stard: ² stag da embann ar Gomz, da boueza warni, er mare pe en divare, da zifazia ha da c'hourdrouz, da gentelia en oll habaster, ha kelennadur! ³ Bez' e vezo eur poent ha ne c'houzañvint ket ar gelennadurez gouest d'o yahusaad, med, hervez o c'hoantegeziou ha gand an debron en o diskouarn, e vodint eur bern kelennerien, ⁴ ha diouz ar wirionez e tistroint o diskouarn evid o zrei warzu mojennou... ⁵ Da eo dit beza war evez e pep tra, gouzañv poan, ha seveni oberenn eun Avieler, ha peurzeveni da vinistrerez...

Fil 2,17

1 Kor 9,24

⁶ Rag a-vremañ ema va gwad lid-skuillet! Ha deuet eo poent va maro. ⁷ Ar stourm kaer am-eus stourmet, va redadenn am-eus peur-echuet, ar feiz

Disk 2,10 am-eus miret! ⁸ A-hend-all, ema dirazon kurunenn ar justiz, a roio din, en Deiz-ze, an Aotrou, ar Barner reiz, n'eo ket avad din-me hepken, med ive d'ar re oll o-do c'hoanteet e Ziskuliadenn!

Kol 4,14 ⁹ Bez aketuz da zond buan davedon, ¹⁰ rag va dilezet e-neus Demas dre garantez evid ar Bed-mañ! Eet eo da Desalonig, Kreseñz avad d'ar Galati, ha Tit d'an Dalmati! ¹¹ Ema Lukaz e-unan-penn ganin. Kemer ha degas Mark ganit, rag talvouduz braz e vez din evid ar vinistrerez. ¹² Tichig am-eus kaset da Efez; ¹³ en eur zond, kemer ganit ar vantell am-eus lezet e Troaz e ti Karpoz, hag ive al leoriou, ha dreist-oll ar parchou...

Kl 24,12 ¹⁴ Aleksandr-ar-C'hoevreur e-neus diskouezet din kalz a zrougiez: *an Aotrou a rento dezañ diouz e oberou!* ¹⁵ Te ive, diwall dioutañ, rag gwall-enebet e-neus ouz or C'homzou...

Ob 23,11 ¹⁶ E-doug va difenn genta, n'eus bet dén em c'hichenn! Med an oll o-deus va dilezet... Na vezet ket kontet dezo an dra-ze! ¹⁷ An Aotrou avad a veze em c'hichenn, ha va c'hennerzet e-neus, d'an Embann beza drezon kaset da-benn ha d'an oll baganed e gleved. "*Ha diframmet on-me bet diouz geol al leon!*" ¹⁸ Va diframma a raio an Aotrou diouz peb droug-ober ha va zalvi en e Rouantelez euz an Neñv!

Dezañ ar C'hloar a-hed ar c'hantvejou a gantvejou! Amen!

¹⁹ Dit saludi Priskaz hag Akile, ha ti Onezifor!

²⁰ Erast a zo chomet e Korint, ha Trofim am-eus lezet klañv e Milet... ²¹ Bez aketuz da zond araog ar goañv! Da zaludi a ra Eouboul ha Pudeñz, Lin ha Klaodia, hag an oll Vreudeur.

²² Ra vezo Jezuz an Aotrou gand ho spered!

Ra vezo ar c'hras ganeoc'h oll!

Da Dit

-1-

LAKAAD E KARG KOZIDI DIREBECH!

Rom 1,1

¹ Paol, -servicher Doue hag Abostol Jezuz Krist evid degas an dud dibabet gand Doue d’ar feiz ha da anaoudegez ar wirionez a zo diouz doujañs-Doue, ² da c’hortoz ar Vuez peurbaduz e-neus an Doue-Dihaou prometet araog an Amzeriou Kenta ; ³ d’e Amzer avad e-neus-Eñ disklêriet e Gomz dre an embann a zo bet fiziet ennon-me hervez kemenn Doue or Zalver-, ⁴ da Dit, va mab karet hervez or feiz deom oll: Gras ha peoc’h digand Doue an Tad ha digand Jezuz Krist or Zalver!

Mz 5,16

Ef 1,9
Rom 3,26

Gal 2,1...

⁵ Evid kement-mañ am-eus da lezet e Kret: dit da beureeuna kement e-neus ezomm, ha da lakaad Kozidi e karg e peb kêr evel m’am-eus kemennet dit, ⁶ ma z’eus unan bennag direbech, bet pried d’eur vaouez hepken, ha dezañ bugale gredig, na tamallet nag a ziroll nag a zizuj! ⁷ Rag an Episkob a rank beza direbech evel merour Doue, na dicheg, na taer, nag ever-gwin, na kanner, na skraper, ⁸ med mad da zegemer, madelezuz, poelleg, just, santel, diorged, reiz, ⁹ aketuz da lavared komzou difazi, skweriet war ar Gelennadurez; dezañ ive beza gouest da gentelia dre eur Gelennadurez yac’h, ha da c’hounid an eneberien...

1 Tim 3,2

2 Tim 21
Tim 4,1,24

¹⁰ Rag bez’ ez eus kalz tud dizuj, randoner ha toueller, dreist-oll ar re a zeu euz an Amdroc’h! ¹¹ Red eo stanka o genou d’an dud-ze, a zispac’h tiez a-bez o kelenn ar pezh n’eo ket dleet evid eur gopr mézuz!

¹² Unan anezo, o frofed dezo o-unan, e-neus lavaret:

“Kretiz! Bepred gaouiad, loened fall, kovou lezireg!”...

¹³ Gwir eo an testeni-ze! Rag-se, dit krozal rust dezo, a-benn dezo yahaad er feiz, ¹⁴ heb heulia mojennou juzeo ha gourhemennou an dud a zinac’h ar wirionez. ¹⁵ Glan eo pep tra evid an dud glan! Evid an dud nammet ha difeiz, n’eus netra c’hlan, rag nammet eo, enno, hag o spered hag o c’houstiañs! ¹⁶ Disklêria a reont anavezoud Doue, med e nac’h a reont dre o oberou, pa z’int euzuz, diskredig, didalvez evid peb oberenn vad...

Mz 15,11
Rom 14,20...

-2-

DIT LAVARED, KENTELIA, REBECH!

¹ Te avad, lavar kement a zo diouz ar Gelennadurez yac’h! ² D’ar re

1 Kor 13,13 goz beza dilonteg, reiz, poelleg, yac'h er feiz, er garantez, en dalc'h! ³ D'ar merhed en oad, koulz all, beza en o buez skweriet diouz ar zantelez, na tamaller, na sklav d'ar gwinn, kelennered gaer, ⁴ evid deski d'ar gwraez yaouank kared o fried ha kared o bugale, ⁵ ha beza ive poelleg, glan, kem-penn, madelezuz, sujet d'o gwaz, evid na vezo ket blasfemet Komz Doue!

⁶ Dit kentelia evelse ive ar re yaouank da veza poelleg! ⁷ E pep tra, en em ziskouez da-unan evel eur skwer a oberou kaer! En da Gelennadurez, dis-kouez reizder, glander, eur Gomz yac'h ha direbech, ⁸ d'an neb a zo a-eneb, distrei diouz e veno, pa ne gav droug ebed da lavared diwar-or-penn!

⁹ Kelenn d'ar sklaved suja d'o mistri e pep tra ha beza plijuz dezo, heb o dislavared, ¹⁰ nag o laerez dre guz, med o tiskouez eur feiz peurvad, evid kaerraad e pep tra Kelennadurez Doue or Zalver! ¹¹ Rag deuet eo gras Doue da bara, ar c'hras gouest da zalvi peb den; ¹² gouest eo ive da zeski deom nac'h dizoujañs-Doue ha c'hoantegeziou ar Bed, deom rén en amzer a-vremañ eur vuez poelleg, just ha doujuz da Zoue, ¹³ en eur c'hortoz an esperañs evuruz hag an diskouezadenn euz gloar on Doue braz ha Salver, Jezuz Krist! ¹⁴ Eñ e-neus en em roet evidom, evid on daspren a beb direiz hag evid glanaad dezañ e-unan eur Bobl dispar douget-tre d'an oberou mad! ¹⁵ Lavar ha kelenn kement-se, ha degas an dud da gredi dre da oll c'halloud! Arabad da zén da zisprizoud!

-3-

DOUE E-NEUS OR SALVET HERVEZ E DRUGAREZ!

Rom 13,1...
1 Pêr 2,13 ¹ Degas soñj dezo e tleont suja d'ar renerien, d'ar galloudegeziou, senti outo, beza prest evid peb oberenn vad, ² miroud da vallozi unan bennag, beza tud a beoc'h, habask, ha diskouez leun a zouster e-keñver an oll. ³ Rag bez' e oam-ni kentoc'h diveiz, dizent, dianket, sklav da bep seurt c'hoantegeziou ha plijaduriou, o veva en drougiez hag en avi, kasañ hag o kasaad an eil egile...

Rom 1,28
Yn 3,5
Ef 2,8... ⁴ Pa z'eo deuet madelez Doue or Zalver da bara hag ive e garantez evid an dud, ⁵ e-neus or salvet, n'eo ket avad ablamour d'an oberou on-nefe greet er justiz, med hervez e drugarez, dre ar Vadeziant a ra deom beza ganet ha neveset gand ar Spered Santel! ⁶ Doue e-neus skuillet brokuz ar Speredze ennom dre Jezuz Krist or Zalver, ⁷ deom beza justizet dre ar c'hras ha dond da veza, en esperañs, Hêred euz ar vuez peurbaduz!

Yn 15,5... ⁸ Kreduz eo ar Gomz-mañ, ha war gement-mañ e fell din e vefez kennerzet: ma stago ar grederien da veza e penn an oberou mad! Bez' ez int traou kaer ha talvouduz d'an dud! ⁹ An enklaskou sod avad, hag an taolennou-lignez, ar rendaelou hag an tabutou diwar-benn al Lezenn, diwall diouto: bez' ez int didalvoud ha goullou!

Mz 18,15 ¹⁰ Goude beza e genteliet eur wech pe ziu, lez a-gostez ar fazier, ¹¹ o c'houzoud eo eur seurt dén troet da fall: pehi a ra pa n'en em varn ket e-

unan!

Mz 5,16 ¹² Pa gasin davedout Artemaz pe Dichig, bez aketuz da zond davedon da Nikopol, rag eno am-eus divizet goanvi! ¹³ Pourchas gand aked beaj Zenon, al Lezenner, hag hini Apolloz, ma ne vezo dezo dienez ebed! ¹⁴ Ra zesko ive on tud-ni da veza ive e penn an oberou kaer evid an ezommou diouz red, da viroud outo beza difrouez!

¹⁵ Da zaludi a ra an oll re a zo ganin! Ha te, salud ar re or c'har er feiz!

Ra vezo ar c'hras ganeoc'h oll!

Al Lizer da Filemon

N'eus amañ, da weled, nemed eul Lizerig..., med pebez perlezenn! Pa ne oa nemed Lukaz, an Avieler, en e gichenn en amzer m'e-neus skrivet al Lizer-mañ, e-neus Paol, a-dra-zur, e skrivet dre zorn ar mestr-skrivagner-ze!

Evel m'e-neus greet, gand taerder, en eil Lizer da Gorintiz (2 Kor 6,11...), e teu amañ an Abostol, gand douster, da zispaka deom teñzor e galon birvidig, izel ha tener, leun a evez, a zoujañs, a vadelez evid an oll, dreist-oll evid ar re e-neus ganet d'ar vuez kristen, evid e vibien er feiz.

Filemon, eur mestr-tiegez dezañ sklaved, a zo bet degaset d'ar feiz gand Paol: dleour braz eo d'an Abostol evid an donezon e-neus resevet dre e vinistrerez. Onezim, sklav e ti Filemon, e-neus tehet diouz ti e vestr... Kabluz eo eta a gastiz, a varo marteze... Paol avad e zegemer en e gichenn hag e zegas ive d'ar feiz; c'hoant awalc'h e-nije zoken d'e zelher: dre e labour, Onezim a rentje da Baol ar pezh a zle dezañ Filemon...

*An Abostol avad ne fell ket dezañ mond dre nerz d'e vab Filemon; evel ma skriv en eil Lizer da Gorintiz (2 Kor 1,22...), ne fell ket dezañ ober e aotrou war e feiz. Jezuz, emezañ c'hoaz (Gal 5,12...), e-neus or galvet d'ar frankiz, hag e-neus ive diskouezet deom penaoz ober, pa lavare d'ar pôtr yaouank pinvidig deuet da c'houlenn hent ar vuez: **“Ma fell dit beza peurvad!”** Ya, ma fell dit!*

Pell diouz mond dre nerz, e c'houlenn Paol digand e vab Filemon kaoud ar vadelez da zegemer mad e sklav Onezim, n'eo ket kén evel sklav avad, med evel eur gwir vreur, ha d'ober evitañ e wir wella!

A-dra-zur e-no Filemon selaouet e dad er C'hrist, ha greet e wir wella evid ar sklav diemzav, bremañ e vreur muia-karet...

Da Filemon

ONEZIM, KENT DIDALVEZ, BREMAÑ TALVOUDUZ!

Ob 16,1
Kol 4,17
1 Paol, prizoniad ar C'hrist Jezuz, hag ar Breur Timote, da Filemon or c'henlabourer karet, ² ha da Apia or C'hoar, ha da Arkip or c'henstourmer, ha d'an Iliz a zo en da di, ³ deoc'h gras ha peoc'h digand Doue on Tad ha digand Jezuz an Aotrou!

1 Kor 13,13
Fil 1,3
2 Kor 7,4
⁴ Trugarekaad a ran bepred va Doue oc'h ober koun ahanout em fedennou, ⁵ o kleved ano euz ar garantez hag euz ar feiz az-peus e-keñver Jezuz an Aotrou hag evid an oll dud santel! ⁶ Ra zeuio da gomuniez er feiz da ziskouez gand nerz kement mad a zo en ho kalloud evid ar C'hrist! ⁷ Rag leve-nez vraz ha frealz am-eus bet diwar da garantez, Breur, pa z'eo bet kalon an dud santel frealzet drezout!

Fil 1,20
Gal 4,19
⁸ Rag-se, goude din kaoud er C'hrist an oll hardisegez da gemenn dit da zevel, ⁹ e teuan kentoc'h dre garantez d'az pedi, evel ma z'on, evel Paol ar C'hoziad, ha bremañ ive evel eur prizoniad d'ar C'hrist Jezuz... ¹⁰ Da aspedi a ran evid va mab, an hini a zo ganet drezon er prizon, Onezim, ¹¹ an hini bet kent didalvez dit, bremañ avad talvouduz braz ha dit-te ha din-me!

Rom 6,15
Ef 6,5
¹² Davedout am-eus e gaset endro: degemer mad an den, da lavared eo: an hini a zo anezañ va c'halon-me! ¹³ Bez' e felle din e zelher em c'hichenn, dezañ d'am zervicha en da ano, e liammou an Aviel! ¹⁴ Heb da veno avad, n'eo fellet ganin ober netra, evid ma vefe da oberenn vad n'eo ket dre red, med a galon vad! ¹⁵ Rag evid kement-mañ marteze eo bet pelleet diouzit evid eur pennad: dit e gaoud endro da viken, ¹⁶ n'eo ket mui evel sklav, med dreist eur sklav, evel eur Breur karet, din-me dreist-oll, ha pegement muioc'h c'hoaz dit-te, hag hervez an natur-den, hag en Aotrou!...

¹⁷ Ma reez eta ganin-me eur c'heneil, degemer-eñ evel me va-unan! ¹⁸ M'e-neus da wallet, e tra pe dra, pe ma tle dit eun dra bennag, laka kement-se war va c'hont-me! ¹⁹ Me, Paol, me a skriv dit gand va dorn va-unan: "Me a baeo!" heb lavared dit ez out-te em c'heñver dleour ahanout da-unan!...

²⁰ Ya! Breur, din-me da gaoud dudi ennout-te, en Aotrou! Ha dit seder-raad va c'halon er C'hrist! ²¹ Gand fiziañs en da zentidigez, e skrivan dit o c'houzoud e ri zoken dreist ar pez a lavaran! ²² Da heul avad, bez ive prest d'am zegemer, rag esperoud a ran e vezin-me, dre ho pedennou, roet dre c'hras deoc'h endro!

Kol 4,10...
²³ Da zaludi a ra Epafraz, va c'heneread er C'hrist, ²⁴ ha Mark, Aristarg, Demaz, ha Lukaz, va c'henlabourerien.

Gal 6,18
²⁵ Ra vezo Gras Jezuz Krist an Aotrou, gand ho spered! Amen!

Al Lizer da Hebreiz

A-barz nemeur goude ar Pantekost, e teu eun niver braz a veleien juzeo da zenti ouz ar feiz (Ob 6,7). Hebdale, siwaz, e tiroll eur gwall gorventenn war Iliz ar Jude... Hag ar veleien-ze da zoñjal ez int kastizet da veza dilezet o c'harg! Ouspenn a zo: na disterig eo al Liderez gristen e par d'al Liderez juzeo en Templ!

P'emaint war-nes mond war o c'hiz, e teu eun diskib da Baol (Apolloz ?, Barnabe ?) d'o c'hennerza er feiz: dre eur bern testennou euz o Skrituriou Sakr, e tiskouez dezo ez eo al Liderez gristen kalz kaerroc'h hag uhelloc'h eged al Liderez juzeo.

1 - 2. Gwechall e-neus Doue komzet meur a wech d'e Bobl dre Voizez hag êlez. Bremañ avad e-neus komzet deom, eur wech evid mad, dre e Vab... Ha n'eo ket an Elez eo o-deus saveteet ar Béd, med Jezuz: red eo eta delher stard d'e gelennadurez!

3 - 10. Beleg-Meur or feiz a zo kalz uhelloc'h eged ar Beleg-braz juzeo!

Ar Beleg-braz juzeo n'eo nemed eur mab-den;

Jezuz, or Beleg-Meur, a zo Mab gwirion da Zoue!

Ar Beleg-braz a zo eun den peher;

Jezuz a zo dinamm, glan, dispartiet mad diouz ar beherien...

Ar Beleg-braz juzeo a zo beleg diwar hêrez;

Jezuz a zo bet galvet gand Doue e Dad!

Ar Beleg-braz ne jom nemed eur pennadig;

Jezuz a zo Beleg-Meur da viken!

Ar Beleg-braz a zeven e garg war an douar, e Jeruzalem;

Jezuz a zo Beleg-Meur en Neñv, dirag e Dad!

Ar Beleg-braz a ginnig sakrifisou, gwad-loened evitañ hag evid ar Bobl, heb ehan;

Jezuz a ginnig e wad e-unan, hag evid an dud all, eur wech evid mad!

Ar Beleg-braz a ginnig sakrifisou ha n'hellont ket justiza ar galon;

Jezuz e-neus kinniget eur Zakrifis barreg da justiza an oll.

D'ar veleien juzeo delher o fiziañs e Doue: gouzañvet o-deus trubuillou, bez' e resevint eur gopr just ha brokuz! Siwaz avad d'an hini a gouez en diskred, rag skrijuz eo koueza etre daouarn an Doue beo.

11 - 13. D'ar veleien juzeo kemer skwer diwar an tadou: oll o-deus dalhet mad d'o feiz, rag heb ar feiz ne c'heller ket plijoud da Zoue! En o amzer e veze kastizet kaled ar re a zileze an Emgleo Koz! Kaletoc'h e vo kastizet ar re a zilez an Emgleo Nevez!

D'ar Gristenien beva er zantelez, o kemer skwer diwar o Ministred hag o senti outo! Dezo bale war roudou Jezuz e-kreiz an trubuillou!

Da Hebreiz

-1-

DOUE E-NEUS KOMZET DEOM EN E VAB!

- Yn 1,3 ¹ Meur a wech hag e meur a c’hiz e-neus Doue komzet d’on Tadou dre ar Brofeded. ² E ‘Fin-an-Amzeriou-ze’, e-neus komzet deom en e Vab: Hemañ e-neus Doue lakeet da Bennhêr euz an oll draou, ha drezañ e-neus greet ar Bed a-bez. ³ Ar Mab-ze a zo anezañ sked e C’hloar ha skeudenn e Natur, ha dougen a ra pep tra dre e C’hér galloudeg. Glaneet gantañ or pehejou, ez eo eet da azeza a-zehou d’an Doue-Meur e lein an Neñv. ⁴ Deuet eo da veza seul welloc’h eged an êlez m’e-neus bet da hêrez eun Ano disheñvel diouz o hini! ⁵ Rag da behini euz an êlez e-neus Doue lavaret eun dro bennag:
- Salm 2,7... *“Mab oc’h-c’hwi din! Diouzin-me ez oc’h hirio ganet!”*
- Salm 7,14 Ha c’hoaz: *“Me a vezo dezañ Tad! Hag Eñ a vezo din Mab!”*
- ⁶ Hag adarre, pa gas er Bed e Vab kenta-ganet, e lavar:
- Salm 92,7 *“Ra stouo dirazañ oll êlez Doue!”*
- ⁷ D’an êlez avad e lavar:
- Salm 104,4 *“Euz e êlez e ra sperejou, hag euz e zervicherien, flammou-tan!”*
- Salm 45,7-8 ⁸ D’e Vab avad: *“Ho trôn, ô Doue, a jomo epad ar c’hantvejou a gant-vejou!”*
- Hag ive: *“Eur wialenn a eeunder eo gwialenn ho Rouantelez:*
 ⁹*“Karet ho-peus ar justiz ha kasaet ho-peus an direiz!*
 “Rag-se, ô Doue, hoc’h olevet e-neus ho Toue,
 “Gand eoul a levenez kentoc’h eged ho kenseurted!”
- Salm 102,26... ¹⁰ Ha c’hoaz: *“Er Penn-kenta, Aotrou, ho-peus diazezet an Douar,*
 “Hag an Neñv a zo anezañ oberenn ho Taouarn!
- ¹¹ *“Mond a reint da netra! C’hwi avad a beurbado!*
 “Oll e kosaint evel eur pezh dillad!
- ¹² *“O roll a reoc’h evel eur pallenn,*
 “Evel eur vantell ive e vezint kemmet!
 “C’hwi avad a jom heñvel,
 “Hag ho ploaveziou ne vezint ket laeret deoc’h!...”

¹³ Da behini euz an êlez e-neus lavaret eun dro bennag:

Salm 110,1

“Azezit a-zehou din ken n’am-bo lakeet hoc’h eneberien

“Da skabell dindan ho treid!”

Mz 4,11
Lk 1,26...

¹⁴ Daoust ha n’int ket oll sperejou e-karg, a vez kaset da skoazella ar re a zo war-nes kaoud ar zilvidigez da hêrez ?

-2-

RED EO DEOM TAOLER EVEZ!

2 Pêr 3,17

¹ Rag-se eo red deom taoler founnusoc’h evez ouz kement on-eus klevet, gand aon da vond da goll! ² Rag ma z’eo bet stard ar Gomz embannet dre an êlez, ha m’he-deus bet peb bresadenn ha peb dizentadenn eur c’hastiz deread, ³ penaoz deom-ni tehed, ma vezom dibreder ouz eun heveleb silvidigez ? Homañ a zo bet digoret dre embann an Aotrou, ha gand ar re o-deus klevet, eo-hi bet miret striz beteg ennom ; ⁴ rag dezi e-neus Doue roet testeni dre zinou ha marzou ha burzudou a bep seurt, en eur ranna ar Spered Santel hervez e youl...

Gal 3,19

2 Kor 3,7

⁵ Rag n’e-neus ket sujet d’an êlez ar Bed-da-zond a gomzom anezañ, ⁶ rag testeniet e-neus unan bennag en eun tu bennag o lavared:

“Petra eo an Den pa zalhit koun anezañ,

“Ha Mab-an-Den, pa barit warnañ ho sell!

⁷ *“Epad eur pennadig ho-peus e lakeet izelloc’h eged an êlez.*

“A c’hloar hag a enor ho-peus e gurunet!

⁸ *“An oll draou ho-peus sujet dindan e dreid!”*

Dre zuja an oll draou, n’e-neus lezet netra dizuj dezañ! Bremañ avad ne welom ket c’hoaz e vefe an oll draou sujet dezañ!

⁹ *“An Hini avad a zo bet evid eur pennadig lakeet izelloc’h eged an êlez, Jezuz, gouzañvet gantañ ar maro, e weled a reom kurunet a c’hloar hag a enor”*. Evelse, dre c’hras Doue, e-neus tañvet ar maro evid mad an oll! ¹⁰ An Hini a zo an oll draou drezañ hag evitañ, hag a zo o kas mibien e-leiz d’ar c’hloar, dezañ e oa deread peur-reiza, dre boaniou, Penn-Rener o zilvidigez! ¹¹ Rag an Hini a zantella hag ar re a zo santelleet a zeu euz Unan hepken! Ablamour da-ze n’e-neus ket a véz ouz o gelver ‘Breudeur’, ¹² o lavared:

“Degemenn a rin hoc’h Ano d’am Breudeur!

“E-kreiz an Iliz e kanin-me deoc’h meuleudi!”

¹³ Hag ive: *“Me a vo leun a fiziañs ennañ!”*

Ha c’hoaz: *“Setu me hag ar Vugale e-neus Doue roet din!”*

Mz 16,17

¹⁴ Pa z'eo eta ar Vugale kenlodeg er gwad hag er c'horv, ez eo-Eñ koulz all ive kenlodeg enno, dezañ, dre ar maro, kas da get an hini e-neus galloud war ar maro, da lavared eo: an Diaoul, ¹⁵ ha dezañ ive dieubi ar re a oa, dre aon rag ar maro, dalhet er sklaverez a-hed o buez! ¹⁶ Rag n'e-neus biskoaz kemeret karg euz an êlez! Med euz gouenn Abraham e kemer karg! ¹⁷ Diwar-ze, e tle e pep tra beza heñvellet d'e Vreudeur a-benn dond da veza Beleg-Meur trugarezuz ha feal en darempredou gand Doue, evid gwelhi pehejou ar Bobl! ¹⁸ Rag, p'e-neus e-unan gouzañvet en eur veza tentet, e c'hell skoazella ar re a vez tentet...

Yn 12,31

Rom 5,32

Rom 8,3...

-3-

NA GALEDIT KET HO KALONOU!

Fil 3,14

Ef 1,18

¹ Rag-se, Breudeur santel, c'hwi hag a zo kenlodeg er galv deuet euz an Neñv, parit ho sellou war Jezuz, Abostol ha Beleg-Meur or C'hredenn-ni! ² Feal eo an Hini e-neus e c'hreet, evel ma oa ive Moizez en e Di a-bez! ³ Rag bet eo-Eñ kavet mad evid brasoc'h gloar eged Moizez, e kement ha ma vez brasoc'h enor d'an Hini a zav eun Ti eged d'an Ti e-unan! ⁴ Rag peb Ti a vez savet gand unan bennag, med an Hini a zav pep tra eo Doue! ⁵ Moizez a zo bet feal en e Di a-bez e-giz Servicher, evid rei testeni d'an traou a vefe lavaret! ⁶ Med ar C'hrist e-giz Mab en e Di e-unan! An Ti-ze dezañ ez om-ni, ma talhom stard hardisegez ha lorc'h on esperañs, beteg penn!...

Ef 2,19

Kol 1,23

Yn 1. 14,18

⁷ Rag-se, evel ma lavar ar Spered Santel:

Salm 95,7...

“Hirio, ma teuit da gleved e vouez,

⁸ *“Na galedit ket ho kalon evel e Meriba-an-Dael,*

“Da zeiz Massa-an-Tentadur, er gouelec'h,

⁹ *“El lec'h m'o-deus ho tadou va zentet, beteg gouzoud,*

“Goude dezo gweled va oberou, ¹⁰ a-hed daou-ugent vloaz!

“Rag-se on-me bet kounnaret a-eneb ar rummad-ze,

“Ha lavaret am-eus: ‘Bepred e faziont a-galon!’

“Int-i avad n'o-deus ket anavezet va heñchou!

¹¹ *“Evelse am-eus touet em c'hounnar: ‘Ma teuint em Diskuiz?’”*

2 Tes 2,3...

¹² Gwelit, Breudeur, na vefe en unan bennag ahanoc'h eur galon fall ha diskredig o vond da zistaga diouz an Doue-Beo! ¹³ Med skoazellit an eil egile, deiz ha deiz, keid ha ma vez ano euz eun 'Hirio', evid na vo hini ahanoc'h kaledet gand touellerez ar pehed! ¹⁴ Rag deuet oc'h da veza kenlodeg er C'hrist, gand ma talhit stard beteg-penn d'an nerz-kalon genta, ¹⁵ rag lavaret ez eus: *“Hirio, ma klevit e vouez, na galedit ket ho kalonou evel e Meriba-an-Dael!”* ¹⁶ Rag pe-re, ouz e gleved, o-deus rendaelet ? Daoust ha n'eo ket an oll re a zo deuet dre Voizez er-mêz euz an Ejipt ? ¹⁷ A-eneb pe-re

2 Tes 2,10

1 Kor
10,10

eo bet kounnaret epad daou-ugent vloaz ? Daoust ha n'eo ket a-eneb ar re o-deus pehet, hag a zo kouezet o c'horvou a-flao er gouelec'h ? ¹⁸ Da be-re e-neus touet na zeufent ket en e ziskuiz, nemed d'ar re a ziskrede ? ¹⁹ Ha gwelad mad a reom n'o-deus ket gallet mond e-barz, en abeg d'o diskred!

-4-

POANIOM DA VOND E DISKUIZ DOUE!

1 Kor 10,1...
Salm 95,11

¹ Pa z'eo gourzezet* ar Bromesa da vond en e ziskuiz, deom-ni eta kaoud aon na gavje da unan bennag ahanoc'h ez eo re ziwevad! ² Rag deom-ni ive eo bet degemennet ar C'helou koulz ha d'ar re-ze ive, med ar Gomz klevet ganto n'he-deus ket greet a vad dezo, pa n'int ket bet unanet dre ar feiz gand ar re a zelaoue. ³ Rag mond a raim en Diskuiz, ni ar Grederien, hervez m'e-neus lavaret: *"Evel m'am-eus touet em c'hounnar: 'Ma teuint em Diskuiz!'"*. Rag evid gwir, bez' e oa echu e oberou abaoe Krouidigez ar Bed...

Gen 2,2
Salm 95,11

⁴ Rag evel-henn e-neus komzet en eun tu bennag diwar-benn ar zeizved devez: *"Ha Doue e-neus diskuizet er zeizved devez euz e oll oberou!"* ⁵ Ha c'hoaz eno ive: *"Ma teuint em diskuiz!"*. ⁶ Peogwir e vez eta lezet tud da vond ennañ, ha pa n'eo ket eet ennañ ar re o-deus bet ar C'helou da genta, en abeg d'o dizentidigez, ⁷ e-neus Doue adarre merket eun Devez, eun 'Hirio', o lavared dre Zavid, goude keid all a amzer, evel m'eo bet lavaret uhelloc'h: *"Hirio, ma klevit e vouez, na galedit ket ho kalonou!"*. ⁸ Rag m'e-nije Jozue roet dezo diskuiz, n'e-nije ket Doue komzet goudeze euz eun 'Devez-all'! ⁹ Bez' ez eus eta dalhet eur 'Zabadvez' evid Pobl Doue...

Disk 14,13

¹⁰ An hini a z'aio en e ziskuiz, a ziskuizo e-unan euz e oberou evel ma ra Doue euz e oberou e-unan! ¹¹ Poaniom eta da vond en diskuiz-ze, gand aon na zeufe unan bennag da goueza en eun heveleb dizentadenn! ¹² Rag beo eo Komz Doue, ha nerzuz ha lemmoc'h eged eur c'hleze a zaou droc'h! Mond a ra don, beteg gwask ar spered hag an ene, beteg gwask ar mellou hag ar mel-askorn, en eur varn youlou ha mennadou ar galon! ¹³ Ha n'eus krouadur ebed displann dirazañ, med ema an oll draou noaz ha dispak dirag daoulagad an Hini a zo deom komz diwar-e-benn!

1 Pêr 1,23
Disk 1,16...
Rom 1,9...

Job 34,21

¹⁴ Pa z'eus deom eta eur Beleg-Meur dreist, treuzet gantañ an Neñv, Jezuz, Mab Doue, dalhom stard d'or C'hredenn! ¹⁵ Rag n'eus ket deom eur Beleg-Meur dihalloud da c'houzañv a-unan ganeom or sempladureziou, rag bet eo-Eñ tentet e pep tra dre veza heñvel ouzom-ni, heb ar Pehed! ¹⁶ Tostaom eta gand hardisegez ouz Trôn ar C'hras, deom tenna truez ha kaoud ar c'hras da veza skoazellet d'ar poent mad!

Yn 8,46
Rom 8,3
Rom 3,25

*Gourzeza: dalea.

-5-

C’HWI A ZO BELEG DA VIKEN!

Lev 9,7

¹ Rag bez’ e vez peb Beleg-Braz kemeret a-douez an dud, ha lakeet evid mad an dud war gement a zell ouz Doue, dezañ da ginnig provou ha sakrifisou evid ar pehejou. ² Kendruezi a c’hell gand an dud digelenn ha faziet, p’ema e-unan ive e-kreiz ar zempladurez, ³ hag en abeg dezi e tle kin-nig provou evid ar pehejou, evel ma ra evid ar Bobl, evelse ive evitañ e-unan!

Erm 28,1

⁴ Ha ne gemer den an enor-ze evitañ e-unan, med hepken an hini a vez galvet gand Doue, evel m’eo bet ive Aaron! ⁵ Hag evelse, n’eo ket ar C’hrist e-neus roet dezañ e-unan ar c’hloar da veza Beleg-Meur, med an Hini e-neus lavaret dezañ: *“Mab oc’h-c’hwil din! Ganin-me ez oc’h bet hirio ganet!”* ⁶ evel ma lavar ive en eul lec’h all: *“C’hwil a zo Beleg da viken hervez urz Melkisedeg”*.

Salm 2,7

Salm 110,4

Mz 26,39...

Fil 2,8

Yn 14,31

Yn 17,15

⁷ E deveziou e vuez a-zen, e-neus-Eñ, gand eur youhadenn greñv ha gand daerou, kinniget goulennou hag aspedennou d’an Hini a c’helle e zave-tei diouz ar maro! Ha bet eo selaouet ablamour d’e zoujañs. ⁸ Goude beza Mab, diwar ar pezh e-neus gouzañvet e-neus desket petra eo ar zentidigez! ⁹ Peurreizet dre-ze, ez eo deuet da veza, evid ar re a zent outañ, Penn ar zilvidigez peurbaduz. ¹⁰ Ha gand Doue eo bet embannet ‘Beleg-Meur hervez urz Melkisedeg’!

1 Pêr 2,2

Fil 1,10

Rom 16,19

¹¹ Diwar-e-benn on-nefe da lavared deoc’h komzou niveruz ha diêz da zisplega, pa z’eo poud ho tiskouarn! ¹² Rag pa vefe deoc’h gand an amzer beza kelennerien, ho-peus adarre ezomm e vefe desket deoc’h lod euz penna-dou kenta lavarou Doue, hag ezomm ho-peus a lêz ha n’eo ket a voued kreñv! ¹³ Rag kement hini a zo gand lêz a zo digustum ouz komz ar justiz: eur bugelig a zo anezañ! ¹⁴ Ar boued kreñv eo hini an dud peur-reizet: dre gustum o-deus int-i skiant stummet-mad da zigemna ar Mad diouz an Droug!

-6-

OC’H OBER PROMESA DA ABRAHAM, DOUE E-NEUS TOUET

Rom 1,18...

Rom 2,6...

¹ Rag-se, en eur zilezel ar gomz genta diwar-benn ar C’hrist, savom d’ar peur-reiz heb displega adarre an diazez, a zo anezi: an Distro diouz an oberou marvel, ar feiz e Doue, ² kelennadurez ar vadeziantou, an astenn-daouarn, adsao ar re varo, ar varn peurbaduz. ³ Hag evelse e raim, da vianna ma plij gand Doue...

Rom 5,5

Ef 5,15

1 Yn 5,16

⁴ Rag ar re a zo bet sklêrijennet eur wech, hag o-deus tañvet an Donezon neñvel, hag a zo bet kenlodeg er Spered Santel, ⁵ hag o-deus ive tañvet Komz kaer Doue hag ive burzudou ar Bed-da-zond, ⁶ hag a zo deuet

da goueza, ne c'heller ket adarre o nevesaad evid an Distro ouz Doue, pa stagont o-unan adarre Mab Doue ouz ar groaz ha pa daolont warnañ dismeg! ⁷ Rag eun dachenn zouar, ma ev ar glao kouezet warni meur a dro ha ma ro peuri mad d'ar re he labour, a zegemer endro bennoz digand Doue. ⁸ Ma ro avad spern hag askol-toulleg, e vez-hi disprizet ha tost d'ar malloz! Fin e vo dezi en tan...

2 Tim 2,6

⁹Evidoc'h-c'hwi avad, Breudeur karet, e c'hortozom gwella ha talvoudusa madou ar zilvidigez, ha goude deom komz evel uhelloc'h! ¹⁰ Rag n'eo ket Doue direiz da ankounahaad hoc'h ober hag ar garantez ho-peus diskouezet evid e Ano! Servichet ho-peus ha servicha a rit an dud santel. ¹¹ C'hoant on-eus avad e tiskouezfe pep hini eun heveleb aked da startaad en esperañs beteg penn, ¹² deoc'h da viroud beza poud a spered ha deoc'h da gemer skwer war ar re o-do ar Bromesa da hêrez dre ar feiz hag an dalc'h! ¹³ Rag Doue, oc'h ober Promesa da Abraham, pa ne oa dezañ hini brasoc'h ebed da doui drezañ, e-neus touet drezañ e-unan, ¹⁴ o lavared:

Ef 1,15

Gal 3,14
Gen 22,16

“Ya vad! Da venniga a rin hag e rin!”

Gen 12,16

“Ha da lignez a lakin da greski ha da greski!”

Rom 4,20

¹⁵ Hag evelse, dre e zalc'h, e-neus bet ar Bromesa...

¹⁶ An dud a dou dre vrasoc'h egeto, hag evito e vez al lé-douet termen peb dael, d'an termen beza stard. ¹⁷ Rag-se, pa felle da Zoue diskouez founnoc'h, da oll hêred ar Bromesa, an divrall euz e Vennad, e-neus enklozet eul lé-douet, ¹⁸ deom-ni kaoud -dre zaou dra divrall na c'hell ket Doue lavared gevier enno!-, deom-ni eta kaoud eur c'hennerz kalz kreñvoc'h, ni hag a red da grapa an esperañs a zo dirazom. ¹⁹ Homañ a zo deom, evid on ene, evel eun eor asur hag ive stard, hag eet e diabarz an Neñv, a-dreñv ar ouel, ²⁰ el Lec'h m'eo eet Jezuz evel Kannad evidom, deuet da veza da viken Beleg-Meur hervez urz Melkisedeg.

Salm 110,4
Tit 1,2

-7-

C'HWI A ZO BELEG HERVEZ URZ MELKISEDEG!

Gen 14,17...
Salm 110,4

¹ Rag ar Melkisedeg-se, roue Salem, beleg an Doue-Uhel-meurbed, eet eo-eñ da ziambroug Abraham pa zistroe diouz ar stourm a-eneb ar rouaned, ha d'e venniga! ² Dezañ e-neus ive Abraham roet an deog a bep preiz. Hennez a vez intentet e ano, da genta 'roue ar justiz', da c'houde ive 'roue Salem', da lavared eo 'roue ar peoc'h'. ³ N'eus dezañ na tad na mamm na lignez, na digor d'e amzer na fin d'e vuez! Med heñvel eo ouz Mab Doue, ha chom a ra beleg evid atao! ⁴ Gwelit mad peger braz eo hennez! Dezañ e ro Abraham, an Tad-Meur, an deog* euz gwella lodenn e breiz! ⁵ Evid gwir, ar re euz bugale Levi a zegemer ar velegiezh, o-deus hervez al Lezenn, gourhemenn da zeoga ar Bobl, da lavared eo o breudeur, goude dezo beza deuet euz kalon Abraham! ⁶ An hini avad n'eo ket euz o lignez, e-neus deoget Abraham hag e-neus benniget an hini a zo dezañ ar Promesaou! ⁷ Heb mar

Yn 7,27

Gen 14,20

Dt 14,22

*an deog: an degved.

ebed, e vez an hini disterra benniget gand an hini gwella! ⁸ Amañ e vez tud marvel o tegemer an deogou: aze avad ema an hini a zo testeniet beza beo da-vad! ⁹ Ha dre Abraham koulz lavared eo bet ive Levi deoget, eñ hag a zegemer deogou: ¹⁰ rag e kalon e dad e oa c'hoaz pa zeuas Melkisedeg d'e ziambroug...

¹¹ Ma oa eta degouezet ar peurreiz dre velegiez Levi (rag en e amzer eo bet sujet ar Bobl d'al Lezenn), peseurt ezomm a vefe c'hoaz da lakaad e karg eur Beleg all, hervez urz Melkisedeg, ha n'eo ket unan disklêriet hervez urz Aaron ? ¹² Rag pa vez cheñchet ar velegiez, dre red e vez cheñchet ive al Lezenn! ¹³ Rag an Hini a zo lavaret kement-se diwar-e-benn, a zo kenlodeg en eur Meuriad all, na vez anezañ den ebed oc'h ober wardro an Aoter! ¹⁴ Rag sklêr eo: on Aotrou a zo savet euz Juda! Evid ar Meuriad-ze, n'e-neus Moizez lavaret grig diwar-benn 'beleien'! ¹⁵ Ha kalz muioc'h c'hoaz eo sklêr an dra-ze, ma sav eur Beleg-all heñvel ouz Melkisedeg, ¹⁶ ha ma sav, n'eo ket hervez eul Lezenn a c'hourhemennou evid ar c'horv, med hervez Nerz eur Vuez heb diskar! ¹⁷ Rag testeniet eo: "*C'hwi a zo Beleg da viken hervez urz Melkisedeg!*" ¹⁸ Taolet eo bet kuit ar gourhemenn a-ziaaraog, peogwir e oa dinerz ha didalvez! ¹⁹ Al Lezenn n'he-deus peurreizet netra! Med gwelloc'h esperañs a zo degaset: Drezi e tostaom-ni ouz Doue! ²⁰ Ha seul welloc'h eo-hi, ma n'eo ket heb Lé-douet! Ar re-ze a zo deuet heb lé-douet da veza beleien! ²¹ Hemañ avad dre Lé-douet an Hini e-neus lavaret dezañ:

Mz 1,1
Rom 1,3
Disk 5,5

Salm 110,4

Salm 110,4

*"Touet e-neus an Aotrou, ha keuz ebed ne zeuio dezañ:
"C'hwi a zo Beleg da-viken!"*

Rom 8,24
1 Yn 2,1

²² Ha seul welloc'h eo an Emgleo, pa z'eo Jezuz deuet da veza kred anezañ!

²³ Ar re-ze a zo deuet niveruz da veza beleien, rag outo e vire ar maro da jom atao! ²⁴ Hemañ avad, pa jom da viken, e-neus eur velegiez peurbaduz! ²⁵ Ahano e c'hell ive salvi evid atao ar re a ia drezañ daved Doue, rag dalhmad e chom beo da aspedi evito!

Lev 16,6...

Salm 2,7

²⁶ Rag deom ive e oa deread kaoud eun heveleb Beleg-Meur, santel, dizroug, dinamm, disparti diouz ar beherien, ha savet uhelloc'h eged an Neñv! ²⁷ Unan ha ne rank ket bemdez, -evel ar Veleien-Vraz kent!- kinnig provou evid e behejou e-unan ha goudeze evid re ar Bobl! An dra-ze e-neus greet eur wech evid mad, oc'h en em ginnig e-unan! ²⁸ Al Lezenn a lakee da Veleien-Vraz tud dezo sempladurez! Komz al Lé-douet, deuet warlerc'h al Lezenn, he-deus lakeet ar Mab, bet peurreizet da viken!...

-8-

HANTEROUR EUN EMGLEO GWELLOC'H!

Salm 110,1
Ob 2,11

¹ Setu ar peb penna euz ar pezh a zo bet lavaret: bez'on-eus eur seurt Beleg-Meur: "*eet eo da azeza en tu-dehou d'an Uhel-Meurbed en Neñv,*" ²

- Heb 5,1 dezañ da veza Ministr an traou sakr hag an Deltenn wirion, savet gand an
 Heb 7,1 Aotrou ha n'eo ket gand eun den! ³ Peb beleg-braz a vez lakeet da ginnig provou ha sakrifizou: ahano e rank Hemañ ive kaoud eun dra bennag da ginnig!
 Disk 11,14... ⁴ Ma vefe bet war an douar, ne vefe ket bet beleg zoken, pa z'eus tud o kin-
 2 Kor 3,6 nig provou hervez al Lezenn! ⁵ Ar re-mañ a zo o servicha skeudenn ha skeud traou an Neñv, evel m'e-neus klevet Moïzez pa gase an deltenn da-benn:
 "Gwel mad, emezañ, ha gra diouz ar Skwer diskouezet dit war ar Menez!"
⁶ Bremañ avad, e-neus Hemañ bet eur Zervich seul welloc'h ma z'eo ive e-unan Hanterour eun Emgleo gwelloc'h, ha reizet gand Promesaou gwelloc'h! ⁷ Ma vefe bet direbech an emgleo kenta-ze, ne vefe ket bet klas-
 Jer 31,31... ket a-lec'h evid unan all! ⁸ Ouz o c'hourdrouz e lavar (Doue):
 "Setu ma c'hoarvez deveziou, eme Doue,
 "Hag e reizin eun Emgleo Nevez gand Ti-Izrael ha gand Ti-Juda:
 Mz 16,18... ⁹ "N'eo ket ken an emgleo am-eus greet gand o Zadou-meur,
 "En Deiz m'am-eus kroget en o dorn d'o zenna euz Douar an Ejipt!
 "N'int ket chomet em Emgleo, hag o dilezet am-eus!", eme an Aotrou!
¹⁰ "Setu an Emgleo a ziazezin-me gand Ti-Izrael,
 "Goude an deveziou-mañ", eme an Aotrou;
 "Va lezennou a lakain en o spered hag a skrivin en o c'halonou:
 Me a vezo o Doue hag int-i a vezo va Fobl.
¹¹ "Ha n'e-no ket ken pep hini da gelenn e genvroad,
 "Na pep hini e vreur o lavared: "Anavez an Aotrou!"
 "Rag va anavezoud a reint oll, adal ar bianna beteg ar brasa!
¹² "Ha truezeg e vezin ouz o direiz,
 "Hag euz o fehejou ne zalhin ket koun!" ...
 Disk 21,24 ¹³ Dre lavared 'Emgleo Nevez' e kosa an hini kenta! Hag ar pez a zo koseet ha kabaheet a zo tost da veza taolet kuit...

-9-

ANTREET EO JEZUZ E SANTUAL AN NEÑV!

Erm 25...

¹ An Emgleo kenta e-noa ive reolennou evid al Liderez hag eur zantual er Bed, ² rag bet e oa reñket eun deltenn, an hini genta: enni e oa ar c'hantolor, hag an daol ha Provad ar baraennou; anvet e veze 'santual'. ³ Goude an eil ouel, e oa an deltenn anvet 'santual ar zantualiou': ⁴ enni e oa aoter aour an ezañs hag 'arc'h-an-emgleo', goloet a aour tro-dro; en homañ e oa eur jarl leun a 'vann', ha baz Aaron deuet da vrousta, ha taolennou an emgleo! ⁵ A-

uz dezi, kerubined a-c'hloar a skeudenne 'Trôn-an-Drugarez'... N'eo ket deom bremañ komz diwar-benn an traou-ze hini hag hini.

Lev 16,2 ⁶ An traou a oa reñket evelse: en deltenn genta ez ae bepred ar veleien da zeveni al liderez. ⁷ En eil avad, eur wech ar bloaz nemetken ez ae ar beleg-braz hag eñ hepken, ha n'eo ket heb ar gwad a oa dezañ da ginnig evid e behejou e-unan hag evid re ar Bobl! ⁸ Dre-ze e tiskouez ar Spered Santel an dra-mañ: n'eo ket c'hoaz digor frank hent an eil zantual keid ha ma chom en he lec'h an deltenn genta! ⁹ Homañ a zo anezi eur barabolenn evid an amzer-mañ: evel ma tiskouez mad, an donezonou hag ar zakrifizou a vez kinniget ne c'hellont ket peurreiza al lider en e goustiañs! ¹⁰ N'eus anezo nemed reolennou ar justiz evid an den war dachenn ar bouejou, an evachou hag an emwalhou a bep seurt lakeet beteg 'Amzer-ar-Reiz'...

Heb 4,14...
Heb 9,24 ¹¹ Ar C'hrist avad, deuet evel Beleg-Meur ar Madou-a-zeu, e-neus treuzet an Deltenn vrasoc'h ha gwelloc'h (unan ha n'eo ket greet gand dorn an den, da lavared eo: unan ha n'eo ket euz ar Grouadelez-mañ!); ¹² ha n'eo ket gand gwad bohed ha tirvi, med gand e Wad e-unan eo-Eñ antreet er Zantual eur wech evid mad, gounezet gantañ eun Daspren peurbaduz! ¹³ Rag ma c'hell gwad bohed ha tirvi, ha ludu onner, sinklet war dud saotret, santellaad da rei glander ar c'horv, ¹⁴ na pegement muioc'h e c'hell Gwad ar C'hrist, -Eñ hag e-neus, dre ar Spered peurbadel, en em roet e-unan, dinamm, da Zoue-, glanaad ho koustiañs ouz an oberou maro, deoc'h servicha an Doue-Beo!

Heb 12,24
1 Tim 2,5 ¹⁵ Ablamour da-ze eo-Eñ Hanterour eun Emgleo-Testamant Nevez; evelse, dre e varo gouzañvet evid pardoni ar vresadenou greet a-hed an testamant kenta, e c'hell an dud galvet degemer Promesa an hêrez peurbaduz. ¹⁶ Rag el lec'h ma z'eus eun testamant, e rank beza testeniet maro an testamant! ¹⁷ An testamant a vez stard warlerc'h ar re varo, pa n'eus dezañ nerz ebed keid ha ma vev an testamant... ¹⁸ Ahano ive n'eo ket bet an Testamant Kenta embannet heb gwad, ¹⁹ rag, lennet gantañ d'ar Bobl peb gourhemenn hervez al Lezenn, e-neus Moizez kemeret gwad tirvi ha bohed, gand dour, gloan ruz-tan hag eur sikadez da sparfa al Leor hag ar Bobl a-bez, ²⁰ en eur lavared: "*Hemañ eo Gwad an Emgleo-Testamant e-neus Doue kemennet deoc'h!*" ²¹ Rag an deltenn hag oll listri al liderez e-neus ive sparfet gand gwad: ²² hervez al Lezenn, e vez an oll draou, pe dost, glaneet gand gwad, hag heb skuill gwad, n'eus pardon ebed!...

1 Yn 2,1
1 Kor 10,6... ²³ Red eo eta e vefe glaneet skeudennou Traou an Neñv gand an traou-ze, med Traou an Neñv o-unan gand sakrifizou kalz gwelloc'h eged ar reze!... ²⁴ Rag n'eo ket eet Jezuz en eur zantual greet gand daouarn tud, skeud euz an hini gwirion, med e-barz an Neñv e-unan, da bara bremañ dirag Doue evidom! ²⁵ Ha n'eo ket evid en em ginnig meur a dro - evel ma z'a ar Beleg-Braz beb bloaz er zantual, gand eur gwad n'eo ket e hini e-unan - ²⁶ rag neuze e-nefe ranket gouzañv meur a dro abaoe Krouidigez ar Bed! Bremañ avad, eun dro hepken, e fin ar c'hantvejou, e-neus-Eñ en em ziskouezet evid diskar ar pehed dre e Zakrifiz e-unan! ²⁷ Rag evel m'eo merket d'an oll dud mervel eun dro hepken, ha goudeze e vez ar Varn, ²⁸ evelse ive, eo bet ar C'hrist kinniget eun dro hepken evid lemel pehejou an oll; ha d'an eil tro,

Heb 9,12
Gal 4,6

Fil 3,20
1 Pêr 2,24

heb doare ar pehed, e paro d'ar re a vezo ouz e c'hortoz evid ar zilvidigez...

-10-

DRE BROVADENN KORV JEZUZ E VEZOM SANTELEET!

Kol 2,17
Rom 7,12...
Heb 11,40...

¹ Al Lezenn he-deus eun damskeud euz an Traou-a-zeu, med n'he-deus ket ar Skeudenn hec'h-unan euz ar Madou-ze! Rag-se, beb bloaz, dre an heveleb sakrifizou, kinniget dalhmad, ne c'hell morse peurreiza an dud a ia daved Doue! ² Anez-da-ze, daoust ha ne vefed ket ehanet d'o c'hinnig, pa ne jomfe koustiañs ebed ken a behejou d'al liderien a vefe bet glaneet eun dro evid mad ? ³ Med drezo e vez degaset koun euz ar pehejou beb bloaz, ⁴ rag gwad tirvi ha bohed ne c'hell ket lemel pehejou!

Salm 40,7

⁵ *Rag-se, en eur zond er Bed, e lavar (ar C'hrist):*

“N'ho-peus klasket na sakrifiz na Provadenn!

“Eur C'horv avad ho-peus stummet din!

⁶ *“Olokostou ha sakrifisou evid ar pehed n'o-deus ket plijet deoc'h!*

⁷ *“Neuze am-eus lavaret: ‘Setu ma teuan-me,*

“-evel m'eo skrivet e Talbenn al Leor diwar-va-fenn-

“ô Doue, evid ober ho polontez!”

Yn 6,38
Mz 26,39
Yn 10,17

⁸ Da genta e-neus lavaret: *“Olokostou ha sakrifisou evid ar pehed n'ho-peus na klasket na kavet mad!”*, goude dezo beza kinniget hervez al Lezenn! ⁹ Ha neuze e-neus lavaret: *“Setu ma teuan evid ober ho polontez!”* Lemel a ra ar Reiz kenta evid diazeza an eil! ¹⁰ Dre ar volontez-ze om-ni bet santelleet, dre Brovadenn Korv Jezuz Krist eur wech evid mad!

Heb 10,1...
Heb 10,10

¹¹ Ha peb beleg a zalhe bemdez da lida ha da ginnig meur a wech an heveleb sakrifisou na c'hellent ket lemel ar pehejou! ¹² Hemañ avad, kinniget gantañ eur Zakrifiz hepken evid ar pehejou, a zo eet evid atao da azeza a-zehou da Zoue, ¹³ *“o c'hortoz a-neuze e vefe lakeet e eneberien da skabell dindan e dreid!”* ...

Salm 110,1
Heb 11,40
Yn 17,19

¹⁴ Dre eur brovadenn hepken e-neus peurreizet evid atao an dud santelleet. ¹⁵ Testenia a ra deom ive ar Spered Santel, rag goude beza lavaret:

Jer 31,33

¹⁶ *“Setu an Emgleo a ziazezin-me ganto en deveziou-ze”, eme an Aotrou,*

“Va lezennou a lakain en o c'halonou hag a skrivin en o sperejou;

¹⁷ *“Euz o fehejou hag euz o dizurziou ne zalhin koun ebed!”*

¹⁸ El lec'h ma z'eus pardon d'an traou-ze, ne vez mui kinniget netra evid ar pehed!

Yn 14,6
Mz 27,51

¹⁹ Neuze 'ta, Breudeur, pa z'om-ni sur da gaoud digor er Zantual, dre Wad ar C'hrist, ²⁰ -an Hent nevez ha beo e-neus digoret deom a-dreuz ar

Rom 6,4
1 Pêr 3,27
Ef 5,26
1 Kor 1,9
1 Kor 1,8
Heb 6,46

ouel, da lavared eo: e Gorv-, ²¹ ha pa z'eus deom eur Beleg-Meur e penn Ti-Doue, ²² tostaom 'ta outañ a wir-galon, e leunder ar feiz, sparfet or c'halon euz peb koustiañs fall, ha gwelhet or c'horvou gand dour glan. ²³ Dalhom divrall anzav on esparañs, -rag feal eo an Hini e-neus prometet!- ²⁴ ha taolom evez an eil war egile, ma z'aio war gresk ar feiz hag an oberou kaer ; ²⁵ diwallom da zelezet or bodadegou, evel m'eo kustum da lod, med skoazel-lom an eil egile, seul vuioe'h ha ma welit an Deiz o tostaad!

1 Tim 2,4
Dt 17,16
Dt 32,35
Rom 12,19
Mz 10,28

²⁶ Rag pa behom, gand rat*, goude beza bet anaoudeg euz ar wirionez, ne jom sakrifiz ebed ken evid or pehejou! ²⁷ Ne jom nemed gortoz er spont ar Varn ha gwrez an tan prest da lonka an eneberien! ²⁸ An neb a zistaol Lezenn Moizez *"a vez lazet heb truez ebed, diwar desteni daou pe dri!"* ²⁹ Na pege-ment gwasoc'h kastiz, e c'hellit kredi, a vezo dleet d'an hini e-no breset Mab Doue, hag e-no ive greet eun dra dizakr gand Gwad an Emgleo e-neus e zantelleet, hag e-no c'hoaz dismeget Spered ar c'hras! ³⁰ Rag anavezoud a reom an Hini e-neus lavaret: *"Din-me ar c'hastiz! Me eo a rento !"*, ha c'hoaz: *"An Aotrou a varno e Bobl!"*. ³¹ Spontus eo koueza etre daouarn an Doue-Beo!

1 Kor 4,9
Mz 5,40
Mz 6,20
Iz 26,20

³² Dalhit koun euz an deveziou kent: goude beza bet sklêrijennet, ho-peus-c'hwi gouzañvet eur gwall stourmad a boaniou. ³³ Gwech oc'h bet diskouezet d'an oll e-kreiz dismegou ha trubuilhou; gwec'h-all oc'h-c'hwi deuet da veza kenlodeg gand ar re a c'houzañv kemend-all! ³⁴ Rag gouzañvet ho-peus an ereou, ha gand levenez ho-peus degemeret skraperez ho madou, o c'houzoud ez eus deoc'h madou gwelloc'h ha paduz! ³⁵ Arabad deoc'h eta dilezel hoc'h hardisegez: dezi e vezo digoll braz! ³⁶ Bez' ho-peus ezomm a zalc'h, deoc'h da c'hounid ar Bromesa oc'h ober bolontez Doue!

Heb 2,3
Lk 21,28
Rom 1,17

³⁷ *"C'hoaz eur pennadig bian, hag e tegouezo an Hini-a-zeu ha ne zaleo ket!"*

³⁸ *"Va den just dre ar feiz a vevo!"*

"Med ma teu dezañ kiza, ne gavo va ene dudi ebed ennañ!"

³⁹ Ni avad, n'om ket tud da giza evid mond da goll, med tud a-feiz evid daspren on ene!

-11-

HEB AR FEIZ, NE C'HELLER KET PLIJOUD DA ZOUÉ!

Rom 1,16
2 Kor 5,7
Gen 1,1...

¹ Ar Feiz avad a zo anezi diazez an traou a c'hortozom, merk an traou na welom-ni ket! ² Diwarni o-deus on tadou-koz bet testeni mad! ³ Dre ar feiz ec'h intentom eo bet stummet ar Bed gand eur Gér euz a Zoue! Rag-se e teu ar pez a weler euz kement na weler ket!

Gen 4,4
Mz 23,35
Gen 5,24

⁴ Dre ar feiz e-neus Abel kinniget da Zoue eur zakrifiz talvoudusoc'h eged Kain: drezi eo-eñ bet testeniet da veza just, -p'e-neus Doue e-unan testeniet war e brovou!-, ha drezi, goude ma z'eo marvet, e talc'h da gomz! ⁵

*Gand rat: a-ratoz-kaer, a-fetepañs.

- Mz 23,35 Dre ar feiz eo bet lamet Enok, da viroud outañ gweled ar maro, ha n'eo ket bet kavet, p'e-neus Doue e lamet kuit! Araog dezañ beza lamet, e-neus bet an testeni e plije da Zoue: ⁶ heb ar feiz avad ne c'heller ket plijoud da Zoue, rag d'an hini a ia daved Doue eo red kredi ez eus Anezañ hag e tigollo ar re a zo ouz E glask...
- Gen 6,8 ⁷ Dre ar feiz e-neus Noe bet kelou euz traou na weler ket c'hoaz. Leun a zoujañs, e-neus-eñ aozet eun arc'h da zavetei e Di: dre-ze e-neus-eñ barnet ar Bed, ha da hêrez e-neus bet ar justiz dre ar feiz. ⁸ Dre ar feiz, pa z'eo bet galvet, e-neus Abraham sentet da vond d'eul lec'h a oa dezañ da gaoud da hêrez: eet eo en hent heb gouzoud da belec'h ez ae! ⁹ Dre ar feiz eo eet da jom e Bro ar Bromesa evel en eur vro estren, en eur veva e teltennou gand Izaag ha Jakob, kenhêred euz an heveleb Promesa. ¹⁰ Rag bez' e oa o c'hor-toz ar Gêr a zo dezi diazevou ha dezi Doue da Ijiner ha da Zalver! ¹¹ Ha dre ar feiz he-deus bet ive Sara hec'h-unan galloud da zavel eul lignez, hag hi a-ziwar an oad! Kredet he-deus ez eo feal an Hini a bromete dezi! ¹² Rag-se ive, diwar eun den hepken, evel diwar eun den hanter-varo, ez eus ganet Bugale niveruz evel stered an neñv hag evel an trêz diniver war ribl ar mor...
- Yn 8,56 ¹³ Gand ar feiz eo marvet an oll dud-ze, heb kaoud ar Bromesa, med ouz he gweled hag ouz he zaludi a-bell, hag oc'h anzav ez int o-unan estren ha divroad war an Douar! ¹⁴ Ar re a gomz evelse a ziskouez frêz emaint o klask eur Vamm-Vro! ¹⁵ Ha m'o-defe dalhet soñj euz ar Vro ez int deuet diouti, o-defe c'hoaz bet amzer da zistrei di! ¹⁶ Med bremañ e c'hoantaont unan welloc'h, da lavared eo unan en Neñv! Rag-se, n'e-neus Doue tamm méz ebed da veza galvet 'o-Doue-dezo', rag dezo e-neus kempennet eur Gêr!
- Gen 22,1...
Jk 2,21
Gen 21,12
Rom 4,12 ¹⁷ Dre ar feiz e-neus Abraham kinniget Izaag, pa z'eo bet tentet! An den e-neus bet ar Bromesa a zeu da ginnig e vab unganet, ¹⁸ goude m'eo bet lavaret dezañ: *"Dre Izaag e vezo galvet dit eul Lignez!"* ¹⁹ Kredi a ra ez eo Doue gouest zoken da adsevel a-douez ar re varo! Ahano e-neus bet e vab endro, dezañ da veza eur barabolenn! ²⁰ Dre ar feiz ive e-neus benniget Izaag, Jakob hag Ezau evid an Amzer-da-zond! ²¹ Dre ar feiz ive, e-neus Jakob, war e varo, benniget pep hini euz mibien Jozef, hag e-neus stouet, harpet war benn e vaz! ²² Dre ar feiz, e-neus Jozef, e par ar maro, degaset koun euz Tehadeg Bugale Izrael, ha roet gourhemennou diwar-benn e relegou...
- Ob 7,20 ²³ Dre ar feiz, ez eo Moizez, nevez-ganet, kuzet gand e dud epad tri miz, rag gwelet o-deus eo koant ar bugelig ha n'o-deus ket aon rag kemenn ar roue! ²⁴ Dre ar feiz, e-neus Moizez, deuet braz, nahet beza kemeret evid eur mab da verc'h Faraon: ²⁵ dibab a ra kentoc'h beza gwall-gaset da-heul Pobl Doue, eged kaoud plijadurez amzeriad ar pehed... ²⁶ Ha kavoud a ra dezañ ez eo dismegañs ar C'hrist brasoc'h pinvidigez eged teñzoriou an Ejipt, rag war an digoll e par e zellou! ²⁷ Dre ar feiz e-neus kuiteet an Ejipt, heb kaoud aon rag fulor ar roue: dalhet mad e-neus evel pa welfe an traou na weler ket!
- Erm 12,12
Erm 14,22 ²⁸ Dre ar feiz e-neus greet ar Pask ha sparfet ar gwad da viroud ouz ar Gwaster da douch ouz o mibien kenta-ganet! ²⁹ Dre ar feiz o-deus int-i treu-
- Joz 2,11

Barn 6... zet ar Mor Ruz evel douar sec'h! O tenti kemend-all, ema islonket an Ejiptiz... ³⁰ Dre ar feiz eo kouezet mogerioù Jeriko, bet greet an dro da Gêr epad seiz devez! ³¹ Dre ar feiz, n'eo ket eet Rahab ar zerc'h da goll gand an dud diskredig, rag er peoc'h he-deus degemeret ar spieren.

³² Ha petra 'livirim-ni c'hoaz ? An amzer a rafe din diouer evid displega diwar-benn Jedeon, Barag, Samson, Jefte, ha David ha Samuel, hag ar Brofeded! ³³ Dre ar feiz o-deus int-i gounezet war rouanteleziou, heuliet ar justiz, bet ar Bromesa, serret geol leoned! ³⁴ Mouget o-deus nerz an tan, tehet diouz dremm ar c'hleze ; bet int kreñveet diouz o dinerzder, kaloneg int bet er brezel, ha taolet o-deus er-mêz strolladou estren! ³⁵ Gwragez o-deus adkavet o zud maro, dre an adsao! Lod avad a zo bet bazatet d'ar maro, heb asanti d'an daspren, dezo kaoud gwelloc'h adsao! ³⁶ Lod all o-deus gouzañvet tentadur ar goaperez hag ar skourjerez, pe hini an ereou hag ar prizon. ³⁷ Bet int labezet, heskennet! Marvet int a daoliou kleze! Bet int dizañvez, trubuillet, gwall-gaset... ³⁸ Int-i ha ne oa ket ar Bed dîn anezo, setu int-i o redeg er gouelehiou, er c'heviou, e toullou-douar...

³⁹ Ar re-ze oll, goude kaoud testeni mad dre o feiz, n'o-deus ket bet ar Bromesa, ⁴⁰ evid na vefent ket peurreizet hebdom-ni:

Doue e-neus rag-welet gwelloc'h tra evidom oll!...

-12-

Rom 7,27
1 Kor 9,24

EN EUR BARA OR SELLOU WAR RENER OR FEIZ!

Gal 5,7
Fil 2,6
Salm 110,1
KI 3,11

¹ Setu perag eta, ni ive, o kaoud endro deom eur seurt bodad testou, hag en eur bellaad diouzom pep samm hag ar pehed speguz, redom gand dalc'h d'ar stourm a zo kinniget deom, ² en eur bara or sellou war Jezuz, Rener ha Reizer or feiz! El lec'h al levenez kinniget dezañ, e-neus-Eñ gouzañvet ar groaz, en eur zisprizoud ar véz! *“Hag azezet eo bremañ en tu-dehou da Drôn Doue!”* ³ Sellit mad ouz an Hini e-neus gouzañvet eur seurt enebiez digand ar Beherien, gand aon da veza fêzet dre fall-galoni! ⁴ Rag n'ho-peus ket c'hoaz enebet beteg ar gwad o stourm a-eneb ar pehed! ⁵ Daoust hag ankounaheet ho-peus ar gentel roet deoc'h e-giz da vibien:

“Va mab! Diwall d'ober fae war gastiz an Aotrou!”

Disk 3,19
Yn 15,2

“Diwall da fall-galoni pa vezez abebet gantañ!”

⁶ *“Rag an Aotrou a gastiz an hini a gar mad,*

“Ha skourjeza a ra peb mab a zegemer!”

⁷ Dalhit mad e-kreiz ar c'hastiz: ema Doue oc'h intent ouzoc'h evel ouz mibien! Piou eo ar mab na zeu ket e dad da gastiza ? ⁸ Ma chomit avad heb ar c'hastiz a vez an oll kenlodeg ennañ, ez euz ahanoc'h avoultred, ha n'eo ket mibien!

⁹ Ouspenn-ze, on-noa-ni on tadou euz an douar evid or c'hastiza, hag o douja a reem... Daoust ha ne zujim ket kalz muioc'h c'hoaz da Dad ar sperejou, deom kaoud buez ? ¹⁰ Rag ar re-ze or c'hastize evid eun nebeud amzer, evel ma karent... Hemañ avad evid ar pez a dalvez deom dond da veza kenlodeg en e zantelez.

2 Kor 7,8
Yn 16,20

Iz 35,3 ¹¹ Pep kastiz, war an taol, n'eus ket dezañ liou al levenez, med hini ar glahar... Diwezatoc'h avad e toug frouez a beoc'h hag a justiz d'ar re a zo bet stummet drezañ. ¹² Rag-se, "*sounnit ho taouarn kouezet, hag ho taoulin laoskeet!*" ¹³ *Ha kompezit ar rollec'hiou evid ho treid, evid na vo ket diaozet e dreid d'eun den kamm, med pareet kentoc'h!*"

Mz 5,8
Rom 12,18
Dt 29,17

Gen 25,33

¹⁴ Klaskit ar peoc'h gand an oll, hag ar zantelez: hebti, ne welo den an Aotrou! ¹⁵ Gwelit na zeuio den da zioueri gras Doue, "*ha na vefe ive gwri-zienn c'hwero ebed o lakad dispac'h dre zewel uhel*", d'an oll beza nammet drezi! ¹⁶ Gwelit na vefe c'hoaz den serheg na dizakr ebed evel Ezau, e-neus gwerzet e wir a-vab-hena evid eun tamm boued! ¹⁷ Rag gouezet mad: da c'houde, o klask kaoud ar Vennoz da hêrez, n'eo ket bet degemeret mad, -rag n'e-neus ket kavet tu d'an distro-, goude klask ar Vennoz gand daerou...

Erm 19,12...
Dt 4,11

Erm 19,16

Dt 9,19

Disk 14,1...
Disk 21,10

¹⁸ Rag n'oc'h ket degouezet gand eun dra êz da zornata, "*na gand eun tan-flamm, na gand eun deñvalijenn, na gand eur goabrenn, na gand eur gorventenn,*" ¹⁹ *na gand tregarn eun drompill, na gand Mouez al Lavarou*" (ar re he c'hleve o-deus goulennet na lavarfe grig all ebed dezo, ²⁰ rag ne c'houzañvent ket ar pez a oa gourhemennet: '*ma teu eul loen da douch ouz ar Menez, e vezo lazet!*'). ²¹ Ken spontuz e oa ar pez a bare, m'e-neus lavaret Moizez: "*Spouronet on-me*" ha krenedig!"

1 Pêr 1,2
Heb 11,4

Heb 2,2...

Aje 2,6

Mz 24,35

Dt 4,24
Iz 33,34

²² Med bez'ez oc'h degouezet war Menez Sion, hag e kêr an Doue-Beo, e Jeruzalem-an-Neñv, gand mil miliadou a Elez, e Lidadeg ²³ hag e Ilizad an dud kenta-ganet, enskrivet en Neñv, ha gand Doue, Barner an oll, ha gand Sperejou an dud just peurreizet, ²⁴ ha gand Jezuz, Hanterour an Emgleo-Nevez, ha gand eur Gwad-sparfa a gomz kalz gwelloc'h eged hini Abel!

²⁵ Diwallit da zistaoler an Hini a gomz! Rag ma n'o-deus ket ar re-ze tehet diouz ar c'hastiz, distaolet ganto an hini a gomze dezo war an douar, kalz kentoc'h a-ze na dehim-ni ket ma tistroom diouz an Hini a gomz deom diouz an Neñv! ²⁶ E vouez-dezañ he-doa neuze lakeet an douar da vralla! Bremañ avad e ra promesa o lavared: "*Eur wech c'hoaz e lakin da vralla, n'eo ket hepken an douar, med ive an Neñv!*" ²⁷ Ar geriou 'Eur wech c'hoaz' a ziskouez e vezo kemmet an traou brallet, pa z'int traou krouet, ha ne jomo goudeze nemed an traou divrall!

²⁸ Rag-se, degemeret ganeom eur Rouantelez divrall, dalhom d'ar c'hras: drezi, servichom en eun doare plijuz da Zoue, gand doujañs ha gand gred, ²⁹ rag on Doue deom-ni a zo anezañ eun Tan-Gwall!...

-13-

RA ZEUIO DOUE D'HO REIZA E PEP TRA VAD!

Yn 13,34
Mz 25,36
1 Ra gendalho en ho touez ar garantez etre breudeur! 2 N'ankounahait ket da zegemer kaloneg an dud estren, rag dre-ze o-deus lod degemeret êlez!
3 Dalhit koun euz ar Brizonidi, evel pa vefec'h ereet a-unan ganto, hag ive euz an dud wall-gaset, p'emaoc'h hoc'h-unan o chom en eur c'horv!

Gal 5,19
Ef 5,5
Lk 12,33
Dt 31,6
4 Ra vezo ar briedelez enoret gand an oll, ha dinamm gwele ar priede-jou! Rag dond a ra Doue da varn ar zerheged hag an avoultrerien! 5 Dalhit ho kalon distag diouz an arhant, en eur veza laouen gand ar pez a zo deoc'h, rag lavaret e-neus (Doue): "Nann! N'az kuitain ket! N'az tilezin-me ket!" 6 Evelse'ta e kredom lavared:

Salm 118,6
"An Aotrou a zo din eur skoazell!

"N'am-bo aon ebed! Petra' c'hello eun den ober din!".

1 Kor 4,16
Ob 1,17
7 Dalhit soñj euz ho Renerien, euz ar re o-deus embannet deoc'h Komz Doue: en eur zelled mad ouz fin o buez, kemerit skwer diwar o feiz! 8 Jezuz Krist a zo an heveleb Hini dec'h hag hirio hag a-hed ar c'hantvejou!

1 Kor 8,8...
Lev 16,27
Mz 21,39
Yn 19,17...
9 Na vezit ket diboellet gand kelennou briz hag estren! Kaer eo d'ar galon beza kreñveet gand ar c'hras, ha n'eo ket gand bouejou n'o-deus talvezet da netra d'ar re a ree ganto! 10 Ni on-eus eun Aoter, ha servicherien an Deltenn n'o-deus gwir ebed da zebri diouti! 11 "Rag al loened a veze o gwad degaset er zantual gand ar beleg-braz, evid ar pehejou, a veze o c'horvou devet er-mêz euz an Deltaoueg!" 12 Rag-se ive, evid santellaad ar Bobl dre e Wad e-unan, e-neus Jezuz gouzañvet er-mêz euz Dor-Kêr!

1 Kor 7,29
Heb 11,10
13 Evelse, deom eta davetañ er-mêz euz an Deltaoueg en eur zougen e zismeg! 14 Rag n'on-eus ket amañ eur Gêr evid mad, med emaom o klask an hini-da-zond! 15 Drezañ eta, kinnigom bepred eur zakrifiz a-veuleudi da Zoue, da lavared eo: Frouez or muzellou oc'h embann e Ano!

Rom 10,9
Ob 2,21
1 Kor 16,16
2 Kor 1,12
16 Na ankounahait ket ar vadoberez nag ar gomuniez: ar seurt sakrifi-sou a blij da Zoue! 17 Sentit ouz ho Renerien, ha sujit dezo -rag emaint o veilla war hoc'h eneou evel tud o-deus da renta kont!-, dezo d'henn ober gand levenez ha n'eo ket o klemm, rag noazuz e vefe deoc'h an dra-ze! 18 Pedit evidom-ni ive: fiziañs on-eus da gaoud eur goustiañs kaer en eur glask rén eur vuez kaer e pep tra! 19 Ho pedi a ran kalz muioc'h d'henn ober, ma vezin-me buannoc'h roet deoc'h endro!

Yn 10,12
1 Pêr 2,25
20 Ra zeuio Doue ar peoc'h -Eñ hag e-neus degaset a-douez ar re varo Jezuz on Aotrou, Pastor-Meur an Deñved dre Wad an Emgleo peurbaduz!-, 21 d'ho stumma e pep tra vad evid ober e volonte, ha d'ober ennoc'h ar pez a blij dezañ, dre Jezuz Krist!

Dezañ ar C'hloar a-hed ar c'hantvejou a gantvejou! Amen!

²² Me ho ped avad, Breudeur, degemerit mad ar Gomz-mañ a-frealz, rag ez-verr am-eus skrivet deoc'h! ²³ Deoc'h gouzoud ez eo bet diliammet ar Breur Timote! Ma tegouez buan, ez in-me gantañ d'ho kweled!

²⁴ Saludit hoc'h oll Renerien hag an oll dud santel!

Ho saludi a ra re an Itali!

²⁵ Ra vezo ar C'hras ganeoc'h oll! Amen!



Sant Jakez e Nevez. Sk J.F.

Lizer Jakez

Skrivet eo bet al Lizer-mañ, n'eo ket gand an Abostol Jakez, breur Yann, med gand Jakez "breur" (kenderv) d'an Aotrou (Jezuz) (Mz 13,55), ha marteze 'mab da Alfe' (Mz 10,3).

Adal deveziou kenta Iliz-Vamm Jeruzalem, eo bet Jakez eur Penn-rener a bouez e-touez ar Gristenien (Ob 1,23; 12,27; Gal 1,19). E Sened-Meur Jeruzalem, goude m'eo bet selaouet Pêr o tisklêria eo bet drezañ digoret frank dor an Iliz d'ar Baganed, (Ob 15,8), gand evez eo selaouet ive Jakez, pa verk petra eo mad goulenn digand ar Baganed deuet d'ar feiz:

Diwall diouz an idolou,

Diwall diouz an hudurnez,

Diwall diouz an tammou kig bet kinniget d'an idolou (Ob 15,13).

Jakez a anavez mad ar Skrituriou Sakr: enno e kav testennou kaer, mad da sklêrijenna ar Juzevien deuet d'ar feiz. Sed amañ ar c'huzulioù penna evid o buez kristen:

Beza kaloneg, hag ive laouen en trubuillou: bez' e vo eur gopr...

Goulenn ar wir furnez digand Doue.

Ne vezer ket tentet gand Doue, med diwar an techou fall.

Ar vuez kristen gwirion: miroud d'ober diouz dremm an dud!

Beza leun a zoujañs, a resped evid ar beorien.

Ar feiz ne dalv nemed da heul oberou mad.

Red eo beilla dalhmad war an teod!

Ar wir furnez a vez anavezet dre an oberou.

Diwall diouz ar c'hoantegeziou fall, a zegas dizemgleo, brezel...

D'ar binvidien, diwall da lakaad o fiziañs en o danvez.

D'ar glañvourien, gelyer ar veleien da bedi evito ouz o olevi d'o farea...

An hini a zegas eur peher war an hent mad a zaveteio e ene...

“Dalhit 'ta da c'hortoz, Breudeur, ken na baro an Aotrou!” (5,7)

Lizer Sant Jakez

-1-

BEZIT OBEROURIEN AR GOMZ !

1 Pêr 1,1
Ob 15,22

¹ Jakez, servicher Doue hag hini Jezuz Krist an Aotrou, d'an Daouzeg Meuriad a zo er Skignadeg: Salud!

Rom 5,3

1 Pêr 1,5...

Mz 5,48
Mz 11,24

² Lakit da levenez vraz, Breudeur, pa gouezit e bep seurt tentaduriou, ³ o c'houzoud e teu amprou ho feiz da zegas dalc'h! ⁴ Ra zegaso an dalc'h eun ober peurvad, deoc'h beza peurvad ha peurleuniet, e diouer a netra! ⁵ Ma z'eus unan bennag dioueret a furnez, dezañ goulenn digand an Doue a ro d'an oll a galon vad hag heb rebecha: ha dezañ e vezo roet! ⁶ Ra c'houlenno avad gand feiz, heb nehi, rag heñvel eo an hini a nec'h ouz gwag ar mor savet gand an avel ha dirollet! ⁷ Rag arabad d'an den-ze soñjal e tegemero tra-pe-dra digand an Aotrou, ⁸ den daou-zoñjeg ma 'z-eus anezañ ha direiz en e oll heñchou!

1 Pêr 1,24
Iz 40,60
,

⁹ Ra vezo lorhet avad ar breur izel pa vez uhelleet, ¹⁰ an den pinvidig pa vez izelleet, rag evel bleun ar geot e tremeno! ¹¹ Rag savet eo an heol hag e wrez, ha "*Setu dizehet ar geot ha kouezet e vleun!*", ha kaerder e zremm a zo eet da netra! Evelse ive e teuo an den pinvidig da weñvi en e valeaden-nou...

1 Pêr 5,4
1 Kor 9,5

Rom 7,7...
Rom 9,12
Rom 6,23

¹² Eüruz an den a c'houzañv eun tentadur, rag ma vez kavet mad e tegemero kurunenn ar vuez e-neus Doue prometet d'ar re o-dezo e garet! ¹³ Ra viro eun den tentet dond da lavared: "Gand Doue on-me tentet!" Rag ne vez ket Doue tentet gand drougou, ha ne zeu ket e-unan da denti den ebed! ¹⁴ Tentet e vez pep hini dre veza sachet ha touellet gand e c'hoantegez e-unan; ¹⁵ Da-c'houde, ar c'hoantegez, p'he-deus kroget, a zoug ar pehed, hag ar pehed, eur wech peurhreet, a zoug ar maro!

Mz 7,11

Yn 1,13

Ef 4,26

¹⁶ Diwallit da fazia, va breudeur karet! ¹⁷ Peb road mad ha peb done-zon peurvad a ziskenn euz an Neñv digand Tad ar Gouleier ha n'eus Ennañ na kemmadenn na skeud a-hedro! ¹⁸ A-greiz-kalon e-neus roet deom ar vuez dre Gomz ar Wirionez, deom beza eun tamm frouez-prim euz e Grouadurien. ¹⁹ Deoc'h gouzoud mad, va Breudeur karet: ra vezo peb den dillo da zelaou, teuc'h da gomz, gorreg da gounnari: ²⁰ kounnar eur gwaz ne zegas ket justiz Doue! ²¹ Rag-se, en eur zistaoler peb stlabez ha peb restad a zrougiez, degermerit gand douster ar Gomz emplantet ennoc'h hag a c'hell salvi hoc'h eneou...

Mz 7,26

Rom 2,13

²² Stagit da zeveni ar Gomz, ha n'eo ket hepkén d'he zelaou oc'h en em zireiza hoc'h-unan! ²³ Rag ma vez unan bennag o selaou heb he zeveni, ez eo hennez heñvel ouz eur gwaz o selled ouz e zremm ginidig en eur mele-zour! ²⁴ Sellet mad e-neus outañ e-unan! Hag eet kuit, e-neus raktal ankouna-heet penaoz e oa...

Mz 5,17
Rom 8,2
Yn 13,17

Salm 34,19

Mz 26,40

²⁵ An neb avad a zell mad ouz Lezenn peurvad ar frankiz, hag a zalc'h d'he heulia, -deuet da veza, n'eo ket eur zelaouer ankounahauz, med eur sevener a oberou-, hennez a vezo eüruz diwar e oberou! ²⁶ Ma kav da unan bennag beza devod heb gwistigna e deod, med o touella e galon, ez eo didalvez e vuez devod! ²⁷ Setu amañ ar vuez devod glan ha dinamm dirag Doue an Tad: mond da skoazella an emzivadad hag an intañvezed en o zrubuill, hag en em zelher distlabez diouz ar Bed.

-2-

DIFROUEZ EO AR FEIZ HEB OBEROU!

1 Kor 2,8
Heb 10,25

¹ Va Breudeur, arabad e teufe ho feiz e Jezuz Krist d'ober diouz dremm an dud! ² Ma tigouezfe en ho Podadeg eun den dezañ gwalinier aour gand dillad skeduz, ha ma tegouezfe ive eur paour-kêz dezañ dillad louz, ³ ha ma taolit evez ouz an den a zoug dillad skeduz ha ma lavarit dezañ: "Te, azez kaer amañ!", ha ma lavarit d'ar paour-kêz: "Te, chom aze en da zav!", pe: "Azez e traoñ skabell va zreid!", ⁴ daoust ha ne zegemmit ket drezoc'h hoc'h-unan, ha daoust ha n'oc'h-c'hwi ket barnerien a zivizou-fall ?"

1 Kor 1,26
Lk 12,21

⁵ Selaouit, va Breudeur karet! Daoust ha n'e-neus ket Doue dibabet ar re baour dirag ar Bed-mañ da veza pinvidig e feiz ha lodeg er Rouantelez e-neus-Eñ prometet d'ar re o-dezo e garet ? ⁶ C'hwi avad ho-peus greet fae war ar paour! Daoust ha n'eo ket an dud pinvidig o-deus ho kwasket ? ⁷ Daoust ha n'eo ket int-i o-deus ho kaset dirag ar varnerien ? Daoust ha n'eo ket int-i a vlasfem o-unan an Ano kaer a vez galvet warnoc'h ?

Mz 22,39

Gal 3,10

Mz 5,19

⁸ Ma peurhrait koulskoude Lezenn ar Rouantelez, hervez ar Skritur: "*Da nesa a gari evel dout da-unan!*", neuze e rit kaer! ⁹ Med ma rit diouz dremm an dud, neuze e rit ar pehed, hag emac'h tamallet gand al Lezenn da veza breserien! ¹⁰ Rag an hini e-neus miret al Lezenn penn-da-benn, en eur vankoud avad en eur gourhemenn hepkén, an den-ze a zo kabluz e-keñver an oll c'hourhemennou! ¹¹ Rag an Hini e-neus lavaret: "*Ne avoultri ket!*", e-neus lavaret ive: "*Ne lazi ket!*". Ma ne avoultrez ket, ma lazez avad, ez oute deuet da veza eur breser Lezenn!

Rom 6,15
Mz 6,14...
Mz 19,34

¹² Komzit evel-henn! Grit evel-henn: evel tud prest da veza barnet dre Lezenn ar frankiz; ¹³ ha didruez e vezo ar varn ouz an hini n'e-no ket bet a druez: an druez avad a denn lorc'h euz ar varn...

Gal 5,6
Mz 25,41...
1 Yn 3,12

¹⁴ Petra 'dalvezo, va Breudeur, ma lavar unan bennag kaoud feiz, ma n'eus ket dezañ a oberou ? Daoust hag ar feiz a c'hell e zalvi ? ¹⁵ Ma z'eus eur Breur pe eur C'hoar e-noaz ha dioueret a vara pemdezieg, ha ma lavar dezo unan bennag ahanoc'h-c'hwi: ¹⁶ "Kit er peoc'h! Tommit deoc'h ha debrit mad!" heb avad rei dezo an traou red d'ho c'horv, petra dalvez an draze ? ¹⁷ Evelse ive, ar feiz, ma n'eus ket dezi a oberou a zo maro diouti hec'h-unan!

¹⁸ Med unan bennag a lavaro: "Te az-peus feiz! Ha me am-eus oberou!"

Mz 8,29 Diskouez din da feiz heb an oberou, ha me a ziskouezo dit va feiz diwar va oberou! ¹⁹ Te a gred ez eus eun Doue nemetken! Kaer a rez! Med an diaoulou ive a gred kement-all, en eur greña! ²⁰ Ha c'hoant az-peus, den kêz, da c'houzoud ez eo ar feiz difrouez heb an oberou ? ²¹ Daoust hag Abraham, on Tad-meur, n'eo ket bet justizet diwar oberou, "*dre ginnig e vab Izaag war an aoter ?*" ²² Gweled a rez e oa ar feiz o kenoberia gand e oberou, hag ez eo bet e feiz peurwelleet dre e oberou ? ²³ Evelse eo bet peurzevenet ar Skritur a lavar: "*Abraham e-neus kredet e Doue, ha kement-se a zo bet kontet dezañ da justiz,*" ha bet eo-eñ galvet '*Mignon da Zoue*'. ²⁴ Gweled a rit e vez an den justizet diwar oberou ha n'eo ket diwar feiz hepkén! ²⁵ Evelse ive, Rahab, ar zerc'h, daoust ha n'eo ket bet hi justizet diwar an oberou, dre zege-mer ar gannaded ha dre o c'has kuit dre eun hent all ? ²⁶ Rag evel ma vez maro eur c'horv heb spered, evelse ive e vez maro ar feiz heb oberou!"

-3-

EUZ AN TEOD E TEU BENNOZ HA MALLOZ!

Mz 23,8
1 Kor 12,28 ¹ Na vezit ket niveruz o vond da Gelenner, va Breudeur, o c'houzoud or-bo strisoc'h barn! ² Rag e kalz traou e vankom oll! Ma ne vank ket unan bennag dre gomz, hennez a zo anezañ eur gwaz peurvad, barreg ive da wistigna e gorr a-bez! ³ Ma lakom ar wistign e genou ar c'hezeg, dezo da zenti ouzom, e teuim ive da vlenia o c'horv a-bez! ⁴ Gwel ive al listri: pegen braz bennag e vefent, ha dezo beza kaset gand aveliyou diroll, bleniet e vezont gand eur stur bianig d'al lec'h ma c'hoanta striv ar sturier! ⁵ Evelse eo an teod ive eun ezel bianig, med lorhi a ra diwar traou braz! Setu ma c'hell eun tammig tan entana eur mell koad! ⁶ An teod a zo ive eun tan, eur bed a-zireiz! An teod a zo, e-kreiz an izili, an hini a vez o namma ar c'horv a-bez hag oc'h entana tro ar Bed, entanet ma z'eo e-unan gand ar jeenn!

Mz 5,22
M%z 15,11 ⁷ Beb seurt loened-gouez ha laboused ha loened-stlej pe a loened-mor a vez doñveet pe a zo bet doñveet gand rumm an dud! ⁸ Teod an dud avad ne c'hell den ebed e zoñvaad: bez'ez eus anezañ eun droug dispaher, leun a bistri a-varo*! ⁹ Gantañ e veulom an Aotrou ha Tad, ha gantañ e vallozom an dud a zo bet greet heñvel ouz Doue! ¹⁰ Euz an teod hepkén e teu bennoz ha malloz! Va Breudeur, arabad e vefe an traou evelse! ¹¹ Daoust hag eun eienenn, deuet euz eun toull hepkén, a ro dour dous ha dour c'hwero ? ¹² Va Breudeur, daoust hag eur wezenn-fiez a c'hell dougen olivez, hag eur winienn rei fiez ? Ha dour zall ne c'hell ket rei dour dous!

Ef 4,1... ¹³ Piou a zo fur ha gouizieg en ho touez ? Dre e vuez kaer, ra ziskouezo e vez e oberou greet e douster ar furnez! ¹⁴ M'ho-peus avad erez c'hwero ha korvigell en ho kalon, diwallit da lorhi ha da lavared gevier a-eneb ar wirionez! ¹⁵ Ne ziskenn ket ar 'furnez-ze' euz an Neñv, med euz an douar, euz an natur, euz an diaoul! ¹⁶ Rag el lec'h ma vez erez ha korvigell, eno e

* Pistri: binim, bilim.

1 Kor 13,4... vez dispac'h ha peb oberenn fall! ¹⁷ Ar furnez a zeu euz an Neñv avad a zo, da genta, dinamm, ha da-c'houde habask, reiz, madelezuz, leun a drugarez hag a frouez mad, hegarad, didroidell... ¹⁸ Eur frouezenn a justiz a vez hadet e peoc'h evid ar re a laka peoc'h...

-4-

N'EUS AHANOC'H NEMED EUR VORENN!

Rom 7,23 ¹ A-belec'h brezelioù ? A-belec'h kannou en ho touez ? Daoust ha ne zavont ket alese: euz ho plijadurioù, a zo o stourm en hoc'h izili ? ² C'hoantaad a rit, ha n'ho-peus ket! Laza a rit ha gredusaad, he ne c'hellit ket paka! Kanna a rit ha brezelia, ha ne zeuit ket da gaoud, ha ne c'houlennit ket! ³ Goulenn a rit, ha ne zegemerit ket dre ma c'houlennit fall, deoc'h da zispign en ho plijadurioù!

Mz 6,24 ⁴ Avoultreien, daoust ha ne ouezit ket ? Ar vignoniezh evid ar Bed a zo enebiezh da Zoue! An neb a fell eta dezañ beza mignon d'ar Bed, en em laka enebour da Zoue! ⁵ Ha kavoud a ra deoc'h e lavar ar Skritur en aner: "*Beteg an erez e c'hoanta a-galon ar Spered a zo ennom!*" ⁶ Med brasoc'h gras a ro deom, rag-se e lavar: "*Herzel a ra Doue ouz tud uhel! Da dud izel avad e ro e c'hras!*" ⁷ Sujit 'ta da Zoue! Harzit avad ouz an diaoul hag e teho diouzoc'h! Tostait ouz Doue, hag e tostaio ouzoc'h! ⁸ Glanait ho taouarn, Peherien! Hag eeunit ho kalonou, tud daou-zoñjeg! ⁹ Gwelit ho reuz! Dougit kañv ha skuillit daerou! Ra droio ho c'hoarzedeg e kañv hag ho levenez e glahar! ¹⁰ Izellait dirag an Aotrou, hag e teuo d'hoc'h uhellaad!

Mz 7,1 ¹¹ Breudeur, diwallit da zroug-prezeg an eil a-eneb egile! An neb a zroug-prezeg a-eneb eur Breur, pe an neb a varn e Vreur, hennez a zroug-prezeg a-eneb al Lezenn hag a varn al Lezenn! Ma varnez al Lezenn, n'out ket eun oberour euz al Lezenn, med he barner! ¹² Al Lezenn hag ar Barner, n'eus anezo nemed Unan, an Hini a c'hell salvi ha kas da goll! Piou avad a zo ahanout-te, te hag a varn da nesa ?

Lk 12,19 ¹³ Deuit-ta bremañ, c'hwi hag a zo o lavared: "Hirio, pe warhoaz ez aim-ni d'ar gêr-mañ-gêr, hag eno e chomim a-hed bloaz! Kenwerz a raim hag arhant a c'hounezim!" ¹⁴ C'hwi ha ne ouezit ket petra 'vezo warhoaz! Rag peseurt buez eo hoc'h hini ? N'oc'h nemed eur vorenn, a zo anezi epad eur pennadig, ha da-c'houde ema teuzet! ¹⁵ El lec'h kement-se, deoc'h lavared: "Ma plij gand Doue, e vezim-ni beo hag e raim an dra-mañ-dra!"... ¹⁶ Bremañ avad e lorhit gand ho kloubourez: peb lorc'h a seurt-se a zo fall! ¹⁷ An neb a oar ober eun dra gaer hag a jom heb hec'h ober, dezañ eo kement-se eur pehed...

SETU AR BARNER E TAL AN NOR!

Lk 6,24 1 Deuit bremañ, tud pinvidig! Skuillit daerou en eur hirvoudi war ho reuziou-a-zeu! 2 Ho pinvidigez a zo breinet, hag ho tillad a zo preñvedet! 3 Mz 6,19 Hoc'h aour hag hoc'h arhant a zo merglet, hag ar mergl warno a vezo eun testi a-eneb deoc'h, hag evel eun tan, e tebro ho korvou! Teñzoriet ho-peus en deveziou diweza! 4 Setu gopr an oberourien o-deus medet ho parkajou, ar gobr ho-peus-c'hwi dalhet diouto, a zo o youhal, ha garmadeg an eosterien a zo degouezet da ziskouarn an Aotrou Zabaot! 5 Lk 16,10 Renet ho-peus war an douar eur vuez a-stroñz hag a hudurnez! Fest ho-peus roet d'ho kalonou da zeiz al lazadeg! 6 Gwall-varnet ho-peus! Lazet ho-peus an den just! N'e-neus ket harzet ouzoc'h!

Lk 21,19 7 Gortozit 'ta, Breudeur, ken na baro an Aotrou! Setu ar C'houer o Heb 10,26... c'hortoz frouez talvouduz an Douar, o telher da c'hortoz ken n'e-no dastumet 1 Tes 2,16 an drevad abred hag an drevad ziwevad! 8 Dalhit 'ta da c'hortoz, c'hwi ive, startait ho kalonou, rag ema an Aotrou tost da bara...

Mz 5,12 9 Breudeur, na glemmit ket an eil a-eneb egile, gand aon da veza barnet. Setu an Barner en e zav, e tal an Nor! 10 Breudeur, e-giz skwer a reuz hag a hir-c'hortoz, kemerit ar Brofeded, int-i hag o-deus komzet en Ano an Aotrou. 11 Setu ma kanom eürusted ar re o-deus dalhet mad! Klevet ho-peus ano euz dalc'h Job, ha gwelet ho-peus ar fin miret dezañ gand an Aotrou... Rag leun barr eo kalon an Aotrou a drugarez hag a druez!...

Mz 5,34 12 Dreist-oll, va Breudeur, na douit ket, na dre an Neñv na dre an douar 2 Kor 1,17 na dre netra all! Med ra vezo ho ya 'Ya!', hag ho nann 'Nann!', gand aon da goueza dindan ar varn...

Kol 3,16 13 Daoust ha glaharet eo unan bennag en ho touez ? Dezañ pedi! Ha Mz 6,13 laouen eo kalon unan bennag ? Dezañ kana salmou! 14 Ha koezet eo klañv Mk 16,18 unan bennag en ho touez ? Dezañ gelver davetañ Kozidi an Iliz! D'ar re-mañ pedi evitañ ouz e olevi gand eoul en Ano an Aotrou! 15 Pedenn ar feiz a zaveteio an den dister hag e teuio Doue d'e zevel adarre en e zav! Ha m'e-neus-eñ greet pehejou, dezañ e vezint pardonet...

Ob 14,15 16 Anzavit eta ho pehejou an eil d'egile, ha pedit an eil evid egile, ma vezit yaheet! Braz eo galloud pedenn nerzuz eun den just! 17 Eli a oa eun den heñvel ouzom-ni: en eur bedenn e-neus-eñ goulennet na gouezfe ket a c'hlaou! Ha n'eus ket koezet a c'hlaou war an Douar epad tri bloaz ha c'hwec'h miz! 18 Hag adarre e-neus pedet, hag an Neñv e-neus roet glao, hag an douar e-neus douget e frouez...

Mz 18,15 19 Va Breudeur, ma teu unan ahanoc'h da dehed diouz ar wirionez, ha 1 Pêr 4,8 ma tegouez d'unan all d'e zegas endro, 20 da hemañ gouzoud an dra-mañ: an hini a zegas eur peher da zistrei diouz an hent m'eo-eñ dianket, hennez a zaveteio e ene diouz ar maro hag e c'holoio eur bern pehejou!

Lizeri Pêr

Al Lizer I

Kristenien an Azi (an Turki a-vremañ), a veze neuze trubuillet, hag aliez gwallgaset gand ar Baganed, hag ive gand Juzevien: tamallet e vezent a zispac'h a-eneb ar gouarnamant, pa gasent da netra kustumou ha relijionou ar Vro! (Ob 19,23). N'eo ket souezuz e vefe deuet an Ebestel d'o sklêrijenna war ar feiz hag ar vuez kristen dre o Lizeri: Lizer Paol da Efeziz ha da Goloziz, Lizer Jakez d'ar Gristenien skignet en Azi abez, al Lizer-mañ kaset gand Pêr d'ar re a zo amañ hag ahont dre an Azi, ha diwezataoc'h diskuliadenn Yann, skrivet gantañ evid skoazella kristenien ar vroiu-ze e-kreiz eun heskinerez kriz, wardro ar bloavez 96...

Wardro ar bloavez 62, p'ema Pêr prizoniad e Rom, e skriv al Lizer I dre zorn Silvan, dezañ eur breur feal. Ennañ e tiskouez eur vadelez a dad evid ar Gristenien, a zo dezañ evel Bugale vian nevez-ganet dre ar vadeziant. Dezo e ro kalz kuzuliou tennet euz ar Skritur Zakr, evid diskouez frêz dezo an hent o-deus da heulia e-kreiz eur bed diroll.

Dezo meuli Doue ha tridal a levenez: Doue a zalc'h dezo eur gopr burzuduz!

Red eo dezo rén eur vuez santel: gand gwad Jezuz eo ez int bet gwalhet!

A-unan ez int eur rouantelez a veleien, evid kinnig sakrifiz ar veuleudi.

Dezo diskouez doujañs d'ar galloudegeziou, ha d'ar vistri, ha kaled e vefent.

D'ar priejou rén eur vuez santel er Briedelez.

Da bep hini beza prest da renta kont euz an esperañs a zo en e galon.

Dezo beza kaloneg ha laouen, ma tiwaskont ablamour d'o feiz, o kemer skwer diwar Jezuz, eet d'ar maro heb lavared grig...

D'ar Gozidi seveni o ministrerez evel gwir Bastored, o rei skwer vad.

D'an Oll enebi ouz an Diaoul, bepred o klask o loñka!

Al Lizer II

Al Lizer II a zo bet skrivet diwezataoc'h, a-dra-zur gand unan euz Diskibien Pêr: lakeet eo bet en e ano, rag deom e tegas c'hoaz e gelennadurez... Kalz kuzuliou a zegas deom, tennet euz Skrituriou an Testamant Koz, pe euz ar Skridou kristen, ha dispaket e-neus evidom lodennou kaer euz ar gelennadurez kristen.

Pebez teñzor a ro Doue deom dre ar feiz: drezi ec'h anavezom Doue hag e c'hellom kaoud perz en e natur a-Zoue!

N'eo ket mojennou a gont deom Pêr: eñ e-unan, war ar Menez, e-neus klevet Doue an Tad o lavared eo Jezuz e Vab karet.

Bez' on-eus c'hoaz eun testeni a-bouez: hini ar Brofeted!

Dale ez-eus gand Distro Jezuz, gand Deiz an Aotrou!' eme lod!

N'eus dale ebed, eme Pêr: Doue e-neus an oll amzer!

Doue a fell dezañ rei deom amzer... deom oll da veza prest!

Lizer kenta Sant Per

-1-

HO FEIZ HAG HOC'H ESPERAÑS A ZO E DOUE!

Jk 1,1

¹ Pèr, Abostol Jezuz Krist, d'an dud a zo divroet e Skignadeg ar Pont, ar Galati, ar C'hapadoz, an Azi hag ar Bitini, hag a zo bet galvet, ² -hervez rag-ouiziegezh Doue an Tad, dre veza santelleet gand ar Spered-, da zenti ouz ar feiz ha da veza sparfet gand Gwad Jezuz Krist: ra vo founnuz ennoc'h ar c'hras hag ar peoc'h!

Rom 8,29
Heb 12,24

Kol 1,12
Yn 10,28

³ Meuleudi da Zoue ha Tad Jezuz Krist on Aotrou! Hervez e druvez vraz, e-neus roet deom beza adganet evid eun esperañs veo, dre Adsao Jezuz Krist a-douez ar re varo, ⁴ evid eun hêrez a jom dinamm, heb breina na gweñvi, dalhet evidoc'h en Neñv; ⁵ bez'ez oc'h diwallet gand galloud Doue, dre ar feiz, evid ar zilvidigez a zo prest da veza diskuliet en Amzer ziweza...

Rom 5,2
2 Kor 4,17

Rom 2,7

Yn 17,20
Yn 20,29
Rom 6,22

⁶ Diwar-ze e tridit, nebeud bremañ ma z'eo red, pa z'oc'h glaharet gand bep seurt tentaduriou! ⁷ Evelse, amprou ho feiz, -kalz talvoudusoc'h eged hini an aour dibad, a vez amprouet dre an tan!-, a droio evidoc'h e meuleudi, e gloar hag en enor d'an Deiz ma vo diskuliet Jezuz Krist! ⁸ E gared a rit heb e weled; dre gredi ennañ bremañ heb c'hoaz e weled, e tridit gand eul levenez dreist-lavar, ha leun a c'hloar, ⁹ dre gaoud silvidigez hoc'h eneo evid frouez ho feiz!

Lk 24,26

Ef 3,10

Lk 2,13

¹⁰ Diwar-benn ar zilvidigez-ze o-deus ar Brofeded klasket ha furchet, ar re o-deus profedet diwar-benn ar c'hras roet deoc'h-c'hwi! ¹¹ Furchet o-deus da c'houzoud pe boent ha peseurt poent a verke Spered ar C'hrist pa oa enno o testenia poaniou evid ar C'hrist hag an enoriou a vefe war o lerc'h! ¹² Dezo eo bet diskuliet ne oa ket evito o-unan, med evidoc'h-c'hwi e oant o servicha an traou degemennet deoc'h bremañ gand ar re a embann ar C'helou-Mad dre ar Spered Santel kaset euz an Neñv, an Traou o-deus an êlez c'hoant da weled!

Lk 12,35

Rom 12,12
Ef 2,3

Lev 19,2

Mz 6,9
Rom 2,11

1 Pèr 4,3

Heb 9,4

¹³ Rag-se, gourizet ganeoc'h dargreiz ho spered, bepred war evez, bezit da-vad o c'hortoz ar c'hras a vo degaset deoc'h dre Ziskuliadenn Jezuz Krist! ¹⁴ Evel bugale zentuz, arabad deoc'h chom stummet gand ho c'hoantegeziou a-ziagent, pa oac'h diouzieg; ¹⁵ med, hervez an Hini e-neus ho kalvet, deuit c'hwi ive da veza santel en ho puez a-bez, ¹⁶ rag skrivet eo: "*Santel e vezoc'h, peogwir ez on-me santel!*" ¹⁷ Ha ma c'halvit 'Tad' an Hini a varn diouz oberou pep hini, heb ober diouz an dremm, tremenit en doujañs an amzer a zo deoc'h da jom amañ; ¹⁸ gouzoud a rit n'eo ket gand traou breinuz, aour pe arhant, ez oc'h bet dasprenet diouz ar vuez aner a renec'h hervez kustumou ho tadou, ¹⁹ med gand eur Gwad talvouduz evel hini eun Oan direbech ha dinamm, Gwad ar C'hrist! ²⁰ Dibabet araog d'ar Bed beza krouet, n'eo bet diskleriet nemed e 'Fin an Amzeriou', ablamour deoc'h, ²¹ c'hwi

Ef 1,4 hag a zo deuet bremañ da gredi en Doue e-neus E adsavet a-douez ar re varo
 Yn 14,6 hag a ro dezañ ar C'hloar! Evelse, ema ho feiz hag hoc'h esperañs troet
 Yn 17,17 warzu Doue! ²² Glaneet ganeoc'h hoc'h eneoù dre zenti ouz ar wirionez, evid
 kaoud etre Breudeur eur garantez didroidell, karit dalhmad an eil egile gand
 eur galon c'hlan, ²³ rag a-nevez ez oc'h bet ganet, n'eo ket diwar eun hadenn
 1 Yn 3,9 vreinuz, med diwar Unan na vrein ket, dre Gomz an Doue-Beo ha peurbadel!

Iz 40,6 ²⁴ *“Rag heñvel eo peb den ouz geot:*

“Setu dizehet ar geot ha kouezet ar bleun!

²⁵ *“Komz an Aotrou avad a bad a-hed ar c'hantvejou!”*

Ar Gomz-ze eo ar C'helou-Mad bet degemnet deoc'h-c'hwi!...

-2-

DIAÑKET E OAC'H! DISTROET OC'H D'AR PASTOR!

Ef 4,22 ¹ Dilezet ganeoc'h peb drougiez ha peb touellerez, peb korvigell, avi
 ha droug-prezeg, ² evel bugaligou nevez-ganet, c'hoantait lêz didouell ar
 Heb 5,12 Gomz, evid kreski drezañ er zilvidigez, ³ da vianna *“m'ho-peus tañvet ez eo*
 Salm 34,9 *madelezuz an Aotrou!”* ⁴ En eur vond davetañ, *-Eñ, ar Mên-Beo,* distaolet
 Mz 21,42 gand an dud, med dibabet evel priziuz dirag Doue-, ⁵ evel Mein-beo e vezit,
 1 Pèr 2,9 c'hwi ive, savet warnañ, evel eun ti speredel, da veza eun 'urz santel a
 Rom 12,1 veleien' evid kinnig sakrifisou speredel plijuz da Zoue, dre Jezuz Krist!

⁶ Rag-se e kaver er Skritur:

Iz 28,16 *“Setu ma lakan e Sion eur Mên-korn, dibabet evel priziuz:*

Rom 9,33

“An hini a gred ennañ n'e-no ket da gaoud méz!”

⁷ Enor eta deoc'h-chwi, ar Grederien! D'an dud diskredig avad,

Salm 118,22 *“Ar Mên o-deus distaolet ar Vañsonerien,*

Mz 21,42

“Henez a zo deuet da veza Mên-korn, ⁸ ha Mên-asoup ha Roc'h-skoill!”. Ar re a zeu da asoupa o tizenti ouz ar Gomz a zo bet lakeet evid kement-se...

⁹ C'hwi avad a zo

Iz 43,20

“Eur Ouenn dibabet, eur Rouantelez a Veleien, eur Vroad zantel,

Rom 3,24

“Pobl an dud frankizet evid embann e vurzudou!”,

burzudou an Hini e-neus ho kalvet euz an deñvalijenn en e Sklêrijenn zouezuz!

Oz 1,6...

Oz 2,3...

¹⁰ *“Ar re ne oant ket neuze e Bobl, a zo bremañ ‘Pobl-Doue’!*

“Ar re na oa truez ebed outo, bremañ avad o-deus kavet truez!”

¹¹ Breudeur karet! Ho pedi a ran, Diavezidi ha Divroidi ma z'oc'h, da

1 Pèr 2,12 - 3,8

- Gal 5,24 ziwall diouz c'hoantegeziou an natur, a vez o vrezelia a-eneb an ene! ¹² Renit
Mz 5,16 eur vuez kaer e-touez ar Baganed: evelse, goude dezo ho tamall evel torfe-
tourien, o para o zellou war lod euz hoc'h oberou kaer, e tougint gloar da
Zoue en Deiz ma teuio d'or gweled!
- Rom 13,1... ¹³ Ablamour d'an Aotrou, sujet da beb den: d'ar roue evel penn-rener ;
¹⁴ d'ar renerien e-giz tud kaset gantañ da gastiza ar re a ra an droug ha da
veuli ar re a ra ar mad! ¹⁵ Ha kement-mañ eo bolontez Doue: dre ober mad,
Gal 5,13 lakaad da devel diouiziegez an dud diboell! ¹⁶ Renit ho puez evel tud frank!
N'eo ket evel tud a vez dezo ar frankiz evel eur ouel war o drougiez, med
evel servicherien Doue! ¹⁷ Enorit an oll! Karit an oll Vreudeur! Doujit Doue!
Mz 22,21 Enorit ar roue!...
- Ef 6,5... ¹⁸ Sklaved, gand peb doujañs, bezit sujet d'ho mistri, n'eo ket hepkén
d'ar re a zo mad hag habask, med d'ar re a zo trabasuz ive! ¹⁹ Rag eur c'hras
eo, -pa z'eo Doue ken-ouiziegl-, ma teu unan bennag da ziwaska glahar o
Mz 5,10 c'houzañv a-eneb gwir! ²⁰ Rag peseurt gloar a vo deoc'h da veza cholpadet
war-lerc'h ober droug ? Med ma c'houzañvit diwaska poan en eur ober mad,
ez eo kement-se eur c'hras dirag Doue! ²¹ Rag evid-se ez oc'h bet galvet,
Mz 16,24 peogwir e-neus ar C'hrist ive gouzañvet evidoc'h en eur lezel ganeoc'h eur
Yn 13,15 skwer, deoc'h da vale war e roudou... ²² Eñ, "*n'e-noa greet pehed ebed, ha
Iz 63,9 n'eus bet kavet touellerez ebed en e c'henou!*" ²³ Eñ, pa veze dismeget, ne
zismege ket endro! Pa c'houzañve poan, ne c'hourdrouze ket, med en em rei
Iz 53,12 a ree d'an Hini a varn reiz! ²⁴ Eñ, "*douget e-neus e-unan or pehejou*" en e
Gorv war ar groaz-koad, deom-ni mervel d'ar pehed ha beva evid ar justiz!
Iz 52,6 "*Dre e c'houlou dezañ ez oc'h bet yaheet!*" ²⁵ Rag "*bez'e oac'h evel Deñved
Erm 34,5 dianket*", med distroet oc'h bremañ da Bastor ha da Episkob hoc'h eneou!

-3-

TEHED DIOUZ AN DROUG HAG OBER AR MAD!

- Ef 5,22 ¹ E giz-ze ive, c'hwi, gwragez, bezit sujet d'ho priejou: evelse, ma ne
gred ket lod anezo er Gomz, dre vuez o gwreg, heb komz ebed, e vezint gou-
nezet, ² o selled ouz ho puez c'hlan renet en doujañs! ³ Ra vezo deoc'h, n'eo
ket ficherez diavêz: bleo plañsonet, kinklou aour pe wiskamant mantilli, ⁴
1 Tim 2,9 med an den-diabarz a-galon, divrall dre eur spered dous ha sioul! Talvouduz
braz eo kement-se dirag Doue. ⁵ E giz-ze ive o-deus en em fichet ar gwragez
santel a espere e Doue, o veza sujet d'o gwazed, ⁶ evel m'he-deus Sara sentet
Gen 18,2 ouz Abraham, hag *e c'helver a ree hec'h 'aotrou!* Deuet oc'h da veza bugale
dezi oc'h ober vad heb kaoud aon rag an trubuill!
- Ef 5,25 ⁷ D'ar wazed koulz all beva gand o fried, en eur c'houzoud ez eo
gwannoc'h natur ar vaouez, hag en eur ziskouez dezo enor, evel da dud a zo
ive hêred euz gras ar Vuez, ma na vo skoill ebed evid ho pedennou!"
- Rom 12,6 ⁸ Benn ar fin avad, bezit oll heñvel-boell, kenetrezoc'h truezuz, karan-
tezuz, trugarezuz, izel a-galon! ⁹ Na zistroit ket droug evid droug, dismeg

Mz 5,44
1 Pèr 2,23

evid dismeg! En-eneb, deoc'h benniga, rag evid-se ez oc'h bet galvet, evid deoc'h kaoud ar vennoz da hêrez!

Salm 34,13-17

¹⁰ “Rag an hini a fell dezañ kared ar vuez ha gweled deveziou mad,
“Dezañ diwall e deod diouz an droug, hag e vuzellou diouz komzou touelluz!

¹¹ “Dezañ tehed diouz an droug hag ober ar mad,
“Dezañ klask ar peoc'h ha kendelher d'he c'hask!

¹² “Rag daoulagad an Aotrou a zo paret war an dud just,
“Hag e zaouarn a jom digor d'o fedennou!

“Dremm an Aotrou avad a zo troet a-eneb ar re a ra an droug!”

Mz 5,10
Iz 8,12
Mz 10,26

¹³ Ha piou ho kwallo, ma vezit aketuz d'ober ar mad ? ¹⁴ Med m'ho-pefe zoken da c'houzañv evid ar justiz, bezit eüruz! “Na vezit ket spontet na strafuillet gand aon razo!” ¹⁵ Santellait an Aotrou Krist en ho kalonou, ha bezit atao prest da respont da gement-hini a c'houlenn kont diganeoc'h diwar-benn an esperañs a zo ennoc'h! ¹⁶ Med ra vezo gand douster ha doujañs vad, evid ma vo, -war ar pez a damallont deoc'h- goloet a véz an dud a rebech deoc'h ho puez vad er C'hrist!

Rom 6,10
Heb 9,28
Heb 10,10
1 Pèr 2,21...

Furn 10,4

Ef 6,26

Ef 1,20

¹⁷ Rag, -ma vefe bolontez Doue!-, gwelloc'h eo d'an dud gouzañv poan goude beza greet ar mad eged diwar ober an droug! ¹⁸ Rag ar C'hrist ive, eur wech evid mad, a zo marvet evid or pehejou, Eñ just ma oa, evid tud direiz, a-benn ho kinnig da Zoue! Lakeet eo bet d'ar maro hervez e naturden, adsavet eo beo avad dre ar Spered! ¹⁹ Dre ar Spered ive eo eet d'ober an embann d'ar sperejou dalhet er prizon: ²⁰ diskredig e oant bet gwechall pa oa pasianted Doue o c'hortoz, en deveziou ma ree Noe an Arc'h: enni eun nebeud tud, da lavared eo eiz den, a zo bet saveteet dre an dour... ²¹ An Dourze a zo skeudenn ar Vadeziant a zeu bremañ d'ho salvi, c'hwi ive, n'eo ket dre lemel stlabez ar c'horv, med dre c'houlenn eur goustiañs vad, dre Adsao Jezuz-Krist, ²² Eñ hag a zo bremañ en tu dehou da Zoue, pignet d'an Neñv goude beza sujet dezañ e-unan Elez, Galloudegeziou ha Nerziou!...

-4-

BEZIT LAOUEN MA Z'OC'H LODEG E POANIOU AR C'HRIST!

Rom 6,2...

1 Yn 2,16...
Rom 1,29
Ef 2,2

1 Pèr 1,18

¹ M'e-neus eta ar C'hrist gouzañvet en e Gorv, gwiskit ive ar mennadze: an hini e-neus gouzañvet en e gorv a ziskrog diouz ar pehed, ² dezañ beva an amzer a jom gantañ er c'horv, n'eo ket hervez c'hoantegeziou an dud, med hervez bolontez Doue! ³ Rag awalc'h eo deom an amzer tremenet ganeom oc'h ober youl ar baganed, o vale en orgedou, er c'hoantegeziou, er vezvaduriou, er banveziou, en evadegou, e gwall-lidou an idolerez! ⁴ War gement-se e chomont souezet, pa ne redit ket kén a-unan ganto d'ar seurt diroll a c'hadaliez, hag e vlasfemont! ⁵ Ar re-ze a zegaso kont d'an Hini a zo prest da varn an oll, ar re veo hag ar re varo! ⁶ Ablamour da-ze eo bet kaset

1 Pèr 4,6 - 5,9

- Rom 14,9... ar C'helou-Mad d'ar re varo ive, dezo da veza bet barnet da genta en o c'horv hervez an dud, ha da veva goudeze er Spered, hervez Doue!
- 1 Kor 5,5 ⁷ Ema tost fin kement-tra! Bezit 'ta poelleg ha beillit da bedi! ⁸ Dreist-oll, ho-pet dalhmad karantez an eil evid egile! *Rag ar garantez a c'holo kalz pehejou!* ⁹ Degemerit an eil egile heb klemm! ¹⁰ Hervez m'e-neus pep hini degemeret eun donezon speredel, deoc'h d'e lakaad da dalvezoud kenetre-zoc'h, evel merourien gaer euz gras skeduz Doue!
- 2 Kor 6,2
Heb 17,2
Lav 10,12
1 Kor 10,31 ¹¹ Ma tispleg unan bennag lavarou, ra vezo evel lavarou Doue! Ma ser-
vij unan bennag, ra vo dre an nerz a ro Doue, ma vo e pep tra douget gloar da
Zoue dre Jezuz Krist, a zo dezañ ar C'hloar hag ar Vestroni a-hed ar c'hant-
vejou a gantvejou! Amen!
- Mz 5,12 ¹² Breudeur karet, na vezit ket sebezet gand an tan-gwall degouezet en
ho touez evid ho tenti, evel pa vefe degouezet eun dra zouezuz! ¹³ Med bezit
laouen, peogwir ez oc'h lodeg e poaniou ar C'hrist, deoc'h ive tridal a leve-
nez pa vo diskuliet e C'hloar! ¹⁴ Ma vezit dismeget en Ano ar C'hrist, eüruz
oc'h-c'hwi, rag ema Spered ar C'hloar, Spered Doue o chom warnoc'h!
- Ob 5,41 ¹⁵ Arabad da hini ahanoc'h kaoud da c'houzañv evel muntrer pe laer
pe dorfetour pe evel diskulier! ¹⁶ Ma z'eo avad evel kristen, arabad dezañ
kaoud méz! Dezañ rei gloar da Zoue dre an Ano-ze! ¹⁷ Rag deuet an amzer
da zigeri ar Varn gand Ti Doue! Ha ma z'eo ganeom-ni da genta, petra vo fin
ar re a zizent ouz Aviel Doue ? ¹⁸ Ha ma vez a-vec'h salvet an den just,
pelec'h e vo kavet an den dizoue ha peher ? ¹⁹ Evelse, ar re a c'houzañv her-
vez bolontez Doue, dezo fizioud o eneou er C'hrouer feal, dre ober ar mad...
- Fil 1,20
2 Tes 1,8
Lk 23,46

-5-

PASTURIT, O KLASK BEZA SKWER AN TROPELL!

- Ob 11,30 ¹ Digand ar Gozidi a zo en ho touez, e c'houlennan, me Koziad a-unan
ganto ha Test euz poaniou ar C'hrist, ha kenlodeg ive er c'hloar a zo prest da
veza diskuliet: ² pasturit an Tropell a zo endro deoc'h, en eur daoler evez
warnañ, n'eo ket dre heg, med dre gaer hervez Doue, n'eo ket evid eur gopr
mézuz, med a galon vad, ³ ha n'eo ket oc'h ober ho mistri war ho lodenn-
dud, med o veza skwer an Tropell! ⁴ Pa zeuio ar Pastor-Meur da bara, e tege-
meroc'h ar gurunenn na weñv ket, hini ar C'hloar...
- Yn 10,12
2 Kor 1,24
Mz 20,25
1 Kor 9,25 ⁵ Evelse ive, tud yaouank, sujit d'ar Gozidi! C'hwi oll avad, bezit
gwisket gand poell an izelder, an eil e-keñver egile, rag "*herzel a ra Doue
ouz an dud dicheg, med d'ar re izel e ro e c'hras!*" ⁶ Izellait eta dindan Dorn
nerzuz Doue, dezañ d'hoc'h uhellaad er poent! ⁷ Deoc'h fizioud ennañ hoc'h
oll boaniou, rag intent a ra ouzoc'h!
- Yn 13,4...
Lav 3,34
Mz 6,24 ⁸ Bezit kerreiz ha beillit! Rag hoc'h enebour, an Diaoul, evel eul leon o
yudal, a dro endro deoc'h o klask pehini lonka! ⁹ Harzit outañ, stard en ho
feiz, o c'houzoud e vez greet ar seurt poaniou d'ho Preudeur dre ar Bed! ¹⁰
- Ef 6,11

Rom 8,18 Med an Doue a ro peb gras hag e-neus ho kalvet d'e C'hloar peurbaduz er C'hrist, eur wech gouzañvet ganeoc'h eun tamm poan, a zeuio e-unan d'ho peur-stumma, d'ho skoazella, d'ho kreñvaad, d'ho startaad! ¹¹ Dezañ ar gal-loud, a-hed ar c'hantvejou a gantvejou! Amen!

1 Tes 2,12 ¹² Dre Zilvan, -a ran gantañ eur Breur feal!-, am-eus skrivet deoc'h e berr gomzou, evid ho kentelia hag evid testenia eo honnez gwir c'hras Doue! Ha chomit enni! ¹³ Ho saludi a ra (an Iliz) a zo e Babilon, galvet a-unan ganeoc'h, hag ive Mark, va mab! ¹⁴ Saludit an eil egile gand eur pok a garan-tez!

Heb 13,22

Peoc'h deoc'h-c'hwi oll a zo er C'hrist!...

Eil lizer Sant PÊR

-1-

BEZA KENLODEG E NATUR DOUE!

Ob 15,14 ¹ Simon Pêr, servicher hag Abostol Jezuz Krist, d'ar re o-deus bet eur feiz ken talvouduz hag on hini, dre justiz on Doue ha Salver Jezuz Krist: ² ra vo founnuz ennoc'h ar c'hras hag ar peoc'h, dre anavezoud Doue ha Jezuz on Aotrou!...

1 Pêr 2,9 ³ Rag oll donezonou e c'halloud a Zoue e-neus roet deom evid kaoud Buez ha gred dre anavezoud an Hini e-neus or galvet dre e c'hloar hag e nerz! ⁴ Dre ar re-mañ eo bet roet an talvoudusa ha brasa donezonou bet prometet deom, deoc'h dond da veza drezo kenlodeg e Natur Doue, o tehed diouz ar vreinaurez a zo er Bed diwar c'hoantegez fall! ⁵ Hag evid-se, en eur lakad peb aked, er feiz lakait ar vertuz, er vertuz ar ouiziegez, ⁶ er ouiziegez ar poell, er poell an dalc'h, en dalc'h ar gred, ⁷ er gred ar vignoniez, er vignoniez ar garantez!

1 Yn 2,9 ⁸ M'ema ennoc'h ar vertuziou-ze, ha ma kreskont, ne reont ket ahanoc'h tud dilabour ha difrouez evid anavezoud Jezuz Krist on Aotrou! ⁹ An neb avad n'ema ket ar re-ze ennañ, hennez a zo eun den dall o wilhad, ankounaheet gantañ ez eo bet glaneet e behejou a wech-all! ¹⁰ Rag-se, bezit kentoc'h aketuz da startaad ho kalv hag ho tibab: oc'h ober evelse, nann, ne vankoc'h ket! ¹¹ Rag evelse e vo roet brokuz deoc'h mond e-barz Rouantelez peurbadel on Aotrou ha Salver Jezuz Krist!

1 Yn 2,21
2 Kor 5,1
Yn 21,18... ¹² Ablamour da-ze e vo din bepred degas soñj deoc'h euz an traou-ze, ha goude deoc'h gouzoud ha delher stard ar wirionez-ze! ¹³ Reiz e kavan, e-keid m'emaon en deltenn-mañ, ho telher dihun dre gentelia, ¹⁴ o c'houzoud e vo dizale tennet kuit va zeltenn, hervez m'e-neus ive diskouezet din Jezuz Krist on Aotrou! ¹⁵ Klask a rin avad ma vezit gouest bepred d'ober koun a gement-se, goude va zremenvan...

Lk 9,31
Yn 1,14
Mz 17,5... ¹⁶ Rag n'eo ket oc'h heulia mojennou touelluz on-eus-ni degemennet deoc'h ez eo deuet Jezuz Krist on Aotrou da bara en e c'halloud, med diwar weled on-unan e Vraster! ¹⁷ Rag dirag Doue an Tad e-neus-Eñ bet enor ha gloar, pa z'eus deuet dezañ, euz kreiz ar C'hloar skeduz, ar seurt mouez: "*Hemañ eo va Mab muia-karet, a gavan-me ennañ va dud!*" ¹⁸ Rag ar vouezze on-eus-ni klevet o tond euz an Neñv, pa oam gantañ war ar Menez santel.

Lk 1,78
1 Pêr 1,10 ¹⁹ Ha bez'on-eus, startoc'h c'hoaz, lavar ar Brofeded: kaer a rit o selled mad outañ, evel ouz eul lamp o skedi en eul lec'h teñval, ken na baro an Deiz ha ken na zavo ar Skêrijenn skeduz en ho kalonou! ²⁰ Da genta, deoc'h gouzoud kement-mañ: Profediez ebed euz ar Skritur n'eo da ziluzia diouz menoz an-unan! ²¹ Rag n'eo biskoaz deuet ar Brofediez diwar volontez eun den, med dre veza poulzet gand ar Spered Santel o-deus tud komzet en Ano Doue...

-2-

DOUE N'E-NEUS KET DAMANTET D'AN ÊLEZ!

Mz 24,24

¹ Bet ez eus ive fals-profeded er Bobl, evel ma vezo en ho touez fals-kelennerien: degas a reint rannou gwastuz ha nac'h ar Mestr e-neus o zave-teet, o sacha warno o-unan eun diskar trumm! ² Ha kalz tud a heulio o orge-dou, ha drezo e vezo blasfemet Hent ar wirionez! ³ Ha piz ma z'int, klask a reint ho suna dre gomzou touelluz! Evito ne baouez ket ar varn abaoe pell-zo, hag o diskar n'eo ket mor-gousket!

Rom 2,24
Rom 16,18
2 Kor 9,5

Mz 8,29

⁴ Rag n'e-neus ket Doue damantet ouz an êlez o-deus pehet, med o roet e-neus da veza stlapet en Tartar, en islonk an deñvalijenn, dalhet ma z'int evid ar varn... ⁵ N'e-neus ket ive damantet ouz ar Bed kenta -en eur ziwall avad an eiz den, gand Noe, embanner ar justiz!-, ha dirollet e-neus an Dour-Beuz war ar Bed dizouj... ⁶ Barnet e-neus c'hoaz kêriou Sodom ha Gomor, hag o fulluhet e-neus dre eun dislonkadenn-dan, da rei eur skwer d'an dud a vev en dizoujañs... ⁷ Diframmet e-neus ive Lot, an den just, heuget ma oa gand buez orgeduz an dud dizoue! ⁸ An den just-ze, o chom en o zouez, euz an eil devez d'egile a zraille e spered just diwar o oberou direiz, ouz o gweled hag ouz o c'hleved! ⁹ An Aotrou a oar eta diframma an den doujuz diouz pep tentadur, hag ive delher an dud direiz evid Deiz ar Varn, dezo da veza kastizet, ¹⁰ dreist-oll avad ar re a vale war hent an natur gand he c'hoantegeziou louz, en eur zismega an aotrouniez! Hardiz, dicheg ma z'int, heb krena e tismegont o gloar. ¹¹ An êlez koulskoude, goude dezo beza brasoc'h a nerz hag a c'halloud, ne zougont ket a-enepto, dirag an Aotrou, eur varn a valloz...

1 Pèr 3,20

Mz 10,15

2 Tes 1,5...

1 Kor 10,13

Jud 10

Jud 9

Jud 16

¹² An dud-ze avad, -evel loened direiz, ganet dre natur da veza paket ha da vreina-, a zo o vlasfemi kement n'anavezont ket! Breinuz ma z'int, da vreina ez aint! ¹³ O c'hastiz a vezo gopr o direiz! Kavoud a ra dezo ez eo eur blijadur an orged e-kreiz an deiz! Tud saotret ha mézuz a zo anezo: o dudi a gavont ouz ho touella, en eur ober fest ganeoc'h! ¹⁴ O daoulagad a zo leun a avoultriez, ha troet dibaouez warzu ar pehed! Sacha a reont ganto eneo laosk. Eur galon kustum da zastum madou o-deus int-i, bugale a valloz ma z'int! ¹⁵ Dilezet ganto an Hent eeun, deuet int da goll an hent o vond warlerc'h Balaam a Vosor: hemañ e-neus karet gopr an direiz, ¹⁶ ha bet e-neus eur rebech evid e zireiz: eul loen-zamm divouez, o komz gand eur vouez a-zen, e-neus laket harz da fallentez ar profed!

Jud 12

Ob 2,14

Jud

Jud 12

Jud 16

Yn 8,34

Rom 6,16

¹⁷ An dud-ze a zo eien dizour, koumoul lamet gand eur gorventenn! Evito eo dalhet islonk an deñvalijenn! ¹⁸ O lavared traou dicheg ha goullo, e sachont, dre c'hoantegeziou an natur ha dre an ordego, an dud o-deus a-vec'h tehet diouz ar re a vev er gaou! ¹⁹ Frankiz a brometont dezo, ha bez'ez int o-unan sklav d'ar vreinaurez! Rag "*d'an hini e plegez, dezañ out deuet da veza sklav!*".

Mz 12,45

²⁰ Ar re o-deus tehet diouz nammou ar Bed dre anavezoud an Aotrou hag ar Zalver, Jezuz Krist, ma teuont adarre da veza luziet ganto, ema dezo ar

Lk 12,47
1 Kor 11,2 stad ziweza gwasoc'h eged an hini genta! ²¹ Gwelloc'h e oa dezo chom heb anavezoud Hent ar justiz eged distrei, goude e anavezoud, diouz ar gourhemenn santel fiziet enno! ²² Degouezoud a ra ganto ar pezh a zispleg ar c'hrenn-lavar gwirieg: "Ar c'hi a zistro d'e zislonk!" hag ive: "Ar wiz nevez-gwelhet a ia da ruilla er fank!"

-3-

DOND A RAO DEIZ AN AOTROU!

Jud 17 ¹ Setu amañ, Breudeur karet, an eil Lizer a skrivan deoc'h! Dre al Lizeri-ze e tihunan ho spered lemm evid degas deoc'h da zoñj: ² deoc'h delher koun euz al lavarou lavaret deoc'h gand ar Brofeded santel, hag euz gourhemenn hoc'h Ebestel, a zo hini an Aotrou hag ar Zalver...

Jud 18

1 Tim 4,3
Mz 23,48

³ Kement-mañ eo deoc'h gouzoud da genta: d'an amzeriou diweza e teuio, gand goaperez, goaperien da veva hervez o c'hoantegeziou, ⁴ ha da lavared: "Pelec'h ema ar bromesa euz e Zistro ? Abaoe m'eo marvet on tadou, e chom pep tra evelse, abaoe penn-kenta ar Grouidigez!"

Mz 24,38

⁵ Rag ne zeu ket koun d'ar re a intent evelse, e oa an neñv da genta oll, hag an douar, diazezet euz an dour ha dre an dour gand Komz Doue, ⁶ ha drezo eo bet kaset da goll ar bed a-neuze, beuzet en dour! ⁷ An neñv hag an douar a-vremañ, dre an heveleb Komz, a zo miret evid an tan a zo dalhet evid an Deiz ma vo barnet ha kaset da goll ar Bed dizouj!

Rom 2,6

Heb 2,3
Rom 2,4
Mz 24,43

⁸ Breudeur karet, na jomit ket heb intent an dra-mañ: eun devez hep-kén dirag an Aotrou a zo evel mil bloavez! Ha mil bloavez evel eun devez! ⁹ Aotrou ar Bromesa ne zale ket evel ma kav da lod e-neus-Eñ dale! Med amzer a gemer ablamour deoc'h, pa fell dezañ na zafe ket lod da goll, med ma teuio an oll da drei ouz Doue! ¹⁰ Deiz an Aotrou avad a zeuio evel eul laer! En Deiz-ze e tremeno an neñvou o strakal! Lodennou ar bed a vo entanet hag a deuzo... An douar hag an oll oberou a zo warnañ a vo pulluhet!

Mz 24,29

Ob 3,19

Disk 21,1...

¹¹ Peogwir e vo evelse kaset an traou-se da netra, na peseurt tud eo red deoc'h beza, dre eur vuez santel ha doujuz, ¹² en eur c'hortoz hag o hasta Deiz Doue da bara, a vo ennañ kaset da netra an neñv entanet, hag ive teuzet lodennou pulluhet ar bed! ¹³ Hervez e Bromesa, emaom o c'hortoz an Neñv-Nevez hag an Douar-Nevez, a vo enno ar Justiz o chom!

Rom 8,19

Jud 24

1 Kor 3,10

Heb 2,1

¹⁴ Ablamour da-ze, Breudeur karet, o c'hortoz kement-se, lakit aked da veza kavet gantañ dinamm ha direbech er peoc'h! ¹⁵ Ha soñjit mad: hiramzeri Doue a zo deom-ni silvidigez, evel m'e-neus ive Paol, or Breur karet, skrivet deoc'h, hervez ar furnez bet roet dezañ, ¹⁶ hag en e oll lizeri all, pa gomz euz an traou-ze... Enno ez eus kalz traou diêz da intent, o-deus tud dizesk ha laosk intentet a-dreuz koulz hag ar Skrituriou all, dezo o-unan mond da goll...

Jud 25

¹⁷ C'hwi eta, Breudeur karet, pa ouezit en araog, diwallit da veza sachet gand touellerez an dud direiz-ze ha da goll ive ho talc'h hoc'h-unan, ¹⁸ deoc'h kreski e gras hag e anaoudegez Jezuz Krist on Aotrou!...



Lizeri Yann

Al Lizer I

War-dro fin ar c'hantved kenta, e-neus Yann -breur Jakez ha diskib muia-karet Jezuz- skrivet ar pevare Aviel. D'ar poent-se ive, ha gand ar memez doare-skriva, e-neus skrivet an tri lizer-mañ da Ilizou an Azi. Kristenien ar vroioù-ze a veze trubuillet en o feiz gand fals-prezegeerien, ha gwall-gaset ive gand Paganed ha Juzevien. Yann a fell dezañ o startaad en o feiz hag en o buez kristen e-kreiz o zrubuillou.

1 - 2. Embann a ra dezo ar Verb a Vuez, dezo beza e komuniez gand Doue...

Sklêrijenn eo Doue: d'e Vugale kerzed ive er sklêrijenn:

o tiwall diouz ar pehed;

o heulia gourhemenn ar garantez;

o tiwall diouz ar Béd, o chom stard er feiz...

3 - 4,6. Pa 'z int bugale da Zoue, dezo beva evel gwir vugale:

o tiwall diouz ar pehed;

o vired ar gourhemenn: kredi e Jezuz ha kared an eil egile;

o tiwall diouz ar Béd, o kredi eo Jezuz deuet da veza dén...

4,7 - 7. Karantez eo Doue, ha deom e-neus diskouezet frêz e Garantez

o rei deom e Vab, hag o rei deom e Spered.

An neb ne gar ket Doue, hennez n'anavez ket Doue!

An neb ne gar ket e vreur, ne gar ket Doue...

Bez' e karom bugale Doue, pa garom Doue e-unan...

Al Lizer II

Dre al lizerig-mañ, kaset gand Yann d'eun Iliz renet gantañ, e tegas da zoñj ez eo red d'ar gristenien beva er garantez etre breudeur hag evid an oll. Red eo diwall diouz an Touellerien, ar fals-prezegeerien a vez o konta dre oll n'eo ket deuet Mab Doue da veza dén.

An neb ne zalc'h ket d'ar gredenn wirion n'e-neus nag an Tad nag ar Mab.

Al Lizer III

Yann a ro meuleudi da gristenien an Iliz-se, pa vevont hervez ar wirionez. O meuli a ra c'hoaz da veza skoazellet mad, evid o beaj, ar Vinistred o-deus labouret en o zouez...

Ha Yann da gonta penaoz ema Diofretez (eur c'hoziad karget euz eun Iliz) oc'h ober e benn-fall hag o kas an dud diwar e dro!

“An hini a ra ar mad a zo euz Doue! An neb a ra an droug n'e-neus ket gwelet Doue!”

Dezañ ar C'hloar ha bremañ hag a-hed Deiz ar Beurbadelez! Amen!

Lizer kenta Sant Yann

-1-

AR VUEZ HE-DEUS PARET DIRAZOM!

Yn 1,1...

Yn 20,20

1 Yn 5,20
Ob 4,20

1 Kor 1,9
Yn 15,11

¹ Ar pezh a oa adal ar penn kenta, ar pezh on-eus klevet, ar pezh on-eus gwelet gand on daoulagad, ar pezh on-eus sellet outañ hag o-deus on daouarn touchet outañ, euz Verb ar Vuez, ² (ha deuet eo ar Vuez da bara: ha ni on-eus gwelet, hag e testeniom hag e tegemennom deoc'h ar Vuez peurbadel, an Hini a zo e-kichenn an Tad hag a zo deuet da bara dirazom!); ³ ar pezh on-eus gwelet hag on-eus klevet a zegemennom deoc'h, deoc'h-c'hwi ive kaoud komuniez gantañ, hag or c'homuniez deom-ni a zo gand an Tad hag gand e Vab Jezuz Krist! ⁴ Kement-se a skrivom deoc'h, ma vo peurleniet on levenez!

Yn 8,12

Yn 3,21

Rom 3,24

Mz 6,12

Gal 3,22

⁵ Hag hemañ eo ar C'helou-Mad on-eus klevet gantañ hag a zegemennom deoc'h: Doue a zo anezañ Sklêrijenn, ha n'eus ennañ tamm teñvalijenn ebed! ⁶ Ma lavarom on-eus komuniez gantañ ha ma valeom en Deñvalijenn, e lavarom gevier ha ne reom ket ar Wirionez! ⁷ Ma valeom avad er Sklêrijenn evel m'ema Eñ er Sklêrijenn, on-eus komuniez an eil gand egile, ha Gwad Jezuz e Vab or glana a bep pehed! ⁸ Ma lavarom n'on-eus ket a behed, en em douellom on-unan, ha n'ema ket ennom ar Wirionez! ⁹ Ma anzavom or pehejou, ez eo-Eñ feal ha just evid pardoni deom or pehejou, hag evid or glanaad a beb direiz! ¹⁰ Ma lavarom n'on-eus ket pehet, e reom gantañ eur Gaouiad, ha n'ema ket ennom e Gomz!...

-2-

AN HINI A GAR E VREUR A JOM ER SKLÊRIJENN!

Heb 7,25

Rom 3,25

Yn 10,14

Yn 14,21

Yn 13,15

Yn 13,34

¹ Va Bugaligou! Kement-se a skrivan deoc'h evid ma tiwallit da behi! Ha m'e-neus pehet unan bennag, ez eus deom eur Skoazeller dirag an Tad, Unan just, Jezuz Krist! ² Hag Hemañ eo an Trugarezer evid or pehejou, n'eo ket evid or re-ni hepkén, med ive evid re ar Bed a-bez! ³ Ha diwar an dramañ ec'h ouzom ez om deuet d'E anaoud, ma virom e c'hourhemennou! ⁴ An neb a lavar: 'Deuet on d'E anaoud!', ha na vir ket e c'hourhemennou, henez a zo eur gaouiad ha n'ema ket ennañ ar Wirionez! ⁵ An hini avad a vir e Gomz, evid gwir, eo deuet ennañ karantez Doue da veza peurvad! Diwar an dramañ ec'h ouzom emao-ni ennañ: ⁶ an hini a lavar emao o chom ennañ a dle ive bale evel m'e-neus Henez baleet!...

⁷ Breudeur karet, ne skrivan ket deoc'h eur gourhemenn nevez, med eur gourhemenn koz, ho-peus bet adal ar penn-kenta! Ar gourhemenn-koz-

1 Yn 2,9-29

Rom 13,12 ze eo ar Gomz ho-peus klevet. ⁸ Adarre e skrivan deoc'h, ha gwir eo an draze hag Ennañ hag ennoc'h: tremen a ra an Deñvalijenn hag ema a-vremañ ar Sklêrijenn wirion o para! ⁹ An neb a lavar ema er Sklêrijenn hag a gasa e vreur, a zo en Deñvalijenn beteg-henn! ¹⁰ An hini a gar e vreur a jom er Sklêrijenn, ha n'eus ennañ skoill ebed! ¹¹ An neb avad a gasa e vreur a jom en Deñvalijenn hag ema o vale en Deñvalijenn, ha ne oar ket da belec'h ez a, peogwir he-deus an Deñvalijenn dallet e zaoulagad...

¹² Deoc'h e skrivan, Bugaligou, rag pardonet eo bet deoc'h ho pehejou dre e Ano! ¹³ Deoc'h e skrivan, Tadou, rag anavezet ho-peus an Hini a zo adal ar penn-kenta! Deoc'h e skrivan, tud yaouank, rag trehet ho-peus d'an Hini droug! ¹⁴ Deoc'h e skrivan, Bugaligou, rag anavezet ho-peus an Tad! Deoc'h e skrivan, Tadou, rag anavezet ho-peus an Hini a zo adal ar penn-kenta! Deoc'h e skrivan, tud yaouank, rag bez' ez oc'h kreñv, hag ema Komz Doue o chom ennoc'h, ha trehet ho-peus d'an hini droug!...

¹⁵ Na garit ket ar Bed nag an traou a zo er Bed! Ma teu unan bennag da gared ar Bed, n'ema ket ennañ karantez an Tad: ¹⁶ kement-tra a zo er Bed, -c'hoantegez an natur, ha c'hoantegez an daoulagad, ha stroñs ar vuez-, ne zeu ket euz an Tad, med dond a ra euz ar Bed! ¹⁷ Ha tremen a ra ar Bed hag e c'hoantegez ive! An hini avad a ra bolontez Doue a jom da virviken!

¹⁸ Bugaligou, an eur ziweza eo, hag, evel m'ho-peus klevet e teu an anti-krist, bez' ez eus bremañ zoken meur a anti-krist! Dre-ze ec'h ouzom ez eo an eur ziweza! ¹⁹ Euz on touez ez int deuet, med ne oant ket euz or re-ni! Rag ma vefent bet euz or re-ni, e vefent chomet ganeom! Med dre-ze o-deus diskouezet ne oant ket euz or re-ni!

²⁰ C'hwi ho-peus bet eun Olevadenn digand ar Zant, hag her gouzoud a rit oll! ²¹ Ne skrivan ket deoc'h ablamour n'anavezit ket ar wirionez, med peogwir hec'h anavezit ha na zav gaou ebed diwar ar wirionez! ²² Piou eo ar gouiad, nemed an hini a nac'h eo Jezuz ar C'hrist! Henez eo an anti-krist, an neb a nac'h an Tad hag ar Mab! ²³ Kement hini a nac'h ar Mab, n'e-neus ket kennebeud an Tad! An hini a anzav ar Mab e-neus ive an Tad! ²⁴ Ar pez ho-peus-c'hwi klevet adal ar penn-kenta, ra jomo ennoc'h! Ma chom ennoc'h ar pez ho-peus klevet adal ar penn-kenta, e chomoc'h hoc'h-unan er Mab hag en Tad!

²⁵ Hag homañ eo ar Bromesa e-neus-Eñ prometet deom: ar Vuez peurbaduz! ²⁶ Kement-se am-eus skrivet deoc'h diwar-benn ar re a glask ho touella! ²⁷ An Olevad ho-peus degemeret digantañ a jom ennoc'h, ha n'ho-peus ezomm ebed e teufe tud d'ho kelenn, p'ema an Olevad ouz ho kelenn war bep tra; pa z'eo Hemañ gwirieg ha pa n'eo ket gauiad, hervez ar pez a zesk deoc'h, chomit ennañ! ²⁸ Ha bremañ, Bugaligou, chomit ennañ, deom kaoud hardisegez pa zeuio da bara, ha deom-ni chom heb kaoud méz dirazañ da Zeiz e zistro! ²⁹ Ma ouezit ez eo-Eñ just, deoc'h ive gouzoud eo bet ganet anezañ kement hini a ra ar justiz...

-3-

ROET E-NEUS E VAB! NI A DLE REI OR BUEZ!

Rom 8,14
Yn 16,3
Yn 1,12

¹ Gwelit pebez karantez e-neus douget deom an Tad, deom da veza galvet bugale Doue, ha bez' ez om-ni! Ablamour da-ze, ne zeu ket ar Bed d'on anavezoud, peogwir n'e-neus ket E anavezet...

2 Kor 3,18

² Breudeur karet, bremañ ez om Bugale da Zoue, med n'eo ket c'hoaz anad petra 'vezim! Gouzoud a reom: pa zeuio-Eñ da bara, e vezim evel ma z'eo Eñ e-unan! ³ Ha kement hini e-neus Ennañ an esperañs-ze, en em c'hlana e-unan evel m'eo glan e-unan!

Mz 7,23

1 Pèr 2,24
Rom 6,14

⁴ Kement hini a ra ar pehed, a ra ive an direiz, rag ar pehed eo an direiz! ⁵ Gouzoud a rit e-neus Hennez en em ziskouezet evid lemel ar pehejou, ha n'eus ennañ pehed ebed! ⁶ Kement hini a zo o chom ennañ ne bec'h ket; kement hini a bec'h n'eo ket deuet d'E weled na d'E anavezoud...

Yn 8,44
Yn 12,31

1 Yn 3,6

⁷ Bugaligou, na vezet den ouz ho touella! An hini a ra ar justiz a zo just, evel m'eo Hennez just! ⁸ An hini a ra ar pehed a zo euz an Diaoul, rag adal ar penn-kenta ema an Diaoul o pehi! Evid-se e-neus Mab Doue en em ziskouezet: evid dismantra oberou an Diaoul! ⁹ Kement den a zo bet ganet euz Doue ne ra ket a behed, rag ema e Hadenn o chom ennañ. Ne c'hell ket pehi, pa z'eo bet ganet euz Doue. ¹⁰ Dre-ze e vez anad bugale Doue ha bugale an Diaoul: kement hini na ra ket ar justiz n'eo ket euz Doue, na kennebeud an neb na gar ket e Vreur!

Yn 13,34

Mz 5,11...
Yn 15,8

Yn 8,44

¹¹ Rag hemañ eo ar gourhemenn ho-peus klevet adal ar penn-kenta: deom kared an eil egile, ¹² n'eo ket evel Kain, a oa euz an Hini droug hag e-neus lazet e vreur! Fall e oa e oberou, re e vreur avad a oa just! ¹³ Na zouezit ket, Breudeur, m'e-neus ar Bed kas ouzoc'h! ¹⁴ Ni a oar ez om tremenet euz ar maro d'ar Vuez, peogwir e karom or Breudeur! An neb na gar ket a jom er maro! ¹⁵ Kement hini a gasa e Vreur a zo eul lazer-den! Ha gouzoud a rit: n'eus lazer-den ebed o kaoud ar Vuez peurbaduz o chom ennañ e-unan...

Yn 13,1
Gal 2,20

Mz 25,40...

Heb 4,16

Mk 11,54

Yn 6,29

Rom 8,9

¹⁶ Dre-ze on-eus-ni anavezet ar Garantez: Hennez e-neus roet e vuez evidom, ha ni a dle ive rei or buez evid or Breudeur. ¹⁷ An neb avad e-nefe danvez ar Bed-mañ hag a welfe e Vreur en dienez hag a zerrfe dezañ e galon, penaoz e vefe karantez Doue o chom ennañ? ¹⁸ Bugaligou, na garom ket dre gomz pe gand an teod, med dre ober hag evid gwir! ¹⁹ Dre-ze ec'h anavezim ez om euz ar wirionez, ha dirazañ e c'hounezim war or c'halon, ²⁰ petra benag a damallfe deom or c'halon, rag Doue a zo brasoc'h eged or c'halon hag a anavez pep tra! ²¹ Breudeur karet, ma ne ra or c'halon rebech ebed deom, on-eus hardisegez dirag Doue, ²² ha kement tra a c'houlennfem a zegemerom digantañ, pa virom e c'hourhemennou ha pa reom ar pez a blij dezañ! ²³ Ha setu e c'hourhemenn: red eo deom kredi en Ano e Vab Jezuz Krist, ha kared an eil egile evel m'e-neus gourhemennet deom! ²⁴ An hini a vir e c'hourhemennou a zo o chom e Doue ha Doue ennañ! Ha dre-ze ec'h anavezom ema o chom ennom, dre ar Spered e-neus roet deom...

DOUE A ZO KARANTEZ!

Mz 7,15 ¹ Breudeur karet, na gredit ket e pep spered, med amprouit ar sperejou
 1 Kor 12,3 da weled hag euz Doue ez int, rag meur a fals-profed a zo deuet er Bed. ² Dre-
 Yn 8,47 ze ec'h anavezit ar Spered a zo euz Doue: kement spered a anzav eo deuet
 Mz 12,29 Jezuz Krist en eun natur-den, a zo euz Doue! ³ Ha kement spered na anzav ket
 Yn 15,19 Jezuz, n'eo ket euz Doue: hennez a zo spered an anti-krist ; klevet ho-peus e
 Yn 8,47 teuio, hag a-vremañ ema er Bed! ⁴ C'hwi a zo euz Doue, Bugaligou! Ha trehet
 Yn 10,26... ho-peus d'ar re-ze, rag brasoc'h eo ar Spered a zo ennoc'h eged an hini a zo er
 Bed! ⁵ Int-i a zo euz ar Bed rag-se e komzont euz ar Bed hag ar Bed o zelaou!
⁶ Ni avad a zo euz Doue: an hini a anavez Doue or selaou; an neb n'eo ket euz
 Doue n'or selaou ket! Diwar-ze ec'h anavezom Spered ar wirionez ha spered
 ar fazi!

1 Tes 4,9 ⁷ Breudeur karet, karom an eil egile rag ar garantez a zo euz Doue! Ha
 1 Yn 4,16 kement hini a gar a zo bet ganet euz Doue, hag a anavez Doue! ⁸ An neb na
 Yn 3,16 gar ket, n'anavez ket Doue: Doue a zo Karantez! ⁹ Dre-ze eo bet diskouezet
 Rom 5,8 karantez Doue evidom: Doue e-neus kaset e Vab unganet er Bed, deom-ni da
 veva drezañ! ¹⁰ Ar garantez a zo anezi an dra-mañ: n'eo ket ni on-eus karet
 Doue, med Eñ e-unan e-neus or c'haret hag e-neus kaset e Vab evel
 Trugarezer evid or pehejou...

Mz 18,33 ¹¹ Breudeur karet, m'e-neus Doue or c'hared, kement-se, e tleom, ni
 Yn 1,18 ive, kared an eil egile! ¹² Doue, n'eus biskoaz deuet den d'E weled! Ma
 Rom 5,5 karom an eil egile, ema Doue o chom ennom, ha deuet eo e garantez da veza
 Yn 3,17 peurvad ennom. ¹³ Dre-ze ec'h ouzom emaom o chom ennañ hag Eñ ennom,
 dre m'e-neus roet deom euz e Spered! ¹⁴ Ha ni on-eus gwelet hag e teste-
 niom: an Tad e-neus kaset e Vab da veza Salver ar Bed! ¹⁵ An hini a anzav eo
 Jezuz Mab Doue, ennañ ema Doue o chom hag eñ e Doue! ¹⁶ Ha ni on-eus
 anavezet ar garantez e-neus Doue evidom hag enni e kredom: Doue a zo ane-
 zañ karantez, hag an hini a jom er garantez a zo o chom e Doue ha Doue o
 chom ennañ!

Rom 8,15 ¹⁷ Dre gement-mañ e teu ganeom ar garantez da veza peurvad, deom
 kaoud hardisegez da Zeiz ar Varn: 'Vel m'eo Hennez, evelse ive ez om-ni er
 Bed-mañ! ¹⁸ Ne vez tamm aon ebed er garantez, med ar garantez peurvad a
 stlap an aon kuit, rag an aon a zoñj er c'hastiz! An neb e-neus aon n'eo ket
 deuet peurvad er garantez...

Mz 12,29 ¹⁹ Karom eta, rag Eñ da genta e-neus or c'haret! ²⁰ Ma lavar unan ben-
 Mz 25,40 nag: 'Me a gar Doue!' ha ma kasa e vreur, ez eo eur gaouiad, rag an neb na
 gar ket ar breur a wel, ne c'hell ket kared an Doue na wel ket! ²¹ Setu ar
 gourhemenn on-eus bet digantañ: "An hini a gar Doue, dezañ kared ive e
 vreur!".

-5-

AN HINI GANET EUZ DOUE NE BEC'H KET!

1 Pèr 1,22 ¹ Kement hini a gred ez eo Jezuz ar Mesiaz a zo bet ganet euz Doue, ha kement hini a gar an Tad, a gar ive an Hini a zo ganet anezañ! ² Dre-ze ec'h anavezom e karom Bugale Doue, pa garom Doue ha pa virom e c'hourhemennou! ³ Rag kement-mañ eo ar garantez evid Doue: deom-ni mired e c'hourhemennou. Hag e c'hourhemennou n'int ket sammuz, ⁴ rag kement hini a zo bet ganet euz Doue a drec'h d'ar Bed, ha setu an trec'h he-deus trehet d'ar Bed: or feiz-ni!

Yn 14,15
Mz 11,30
1 Yn 2,14
Yn 19,34
Yn 14,26
Yn 5,32
⁵ Piou eo avad an hini a drec'h d'ar Bed, nemed an hini a gred ez eo Jezuz Mab Doue ? ⁶ Hemañ eo a zo deuet dre an Dour hag ar Gwad, Jezuz Krist: n'eo ket gand an Dour hepkén, med gand an Dour hag ar Gwad. Ar Spered a ro testeni, hag ar Spered eo ar wirionez. ⁷ Ha Tri a zo o rei testeni: ⁸ ar Spered hag an Dour hag ar Gwad, hag o zri ne reont nemed unan!

Yn 3,33
Yn 5,21...
Yn 20,31
⁹ Ma tegemerom testeni an dud, testeni Doue a zo brasoc'h! Ha setu testeni Doue: an testeni e-neus roet d'e Vab! ¹⁰ An hini a gred e Mab Doue e-neus an Testeni-ze ennañ e-unan! An neb na gred ket e Doue a ra gantañ eur gaouiad, pa ne gred ket en testeni e-neus Doue testeniet diwar-benn e Vab! ¹¹ Ha setu an testeni: Buez peurbaduz e-neus Doue roet deom, hag ar Vuez-ze a zo en e Vab! ¹² An hini e-neus ar Mab e-neus ar Vuez! An neb n'e-neus ket Mab Doue, n'e-neus ket ar Vuez!

Mz 7,7...
Mz 12,31
¹³ Kement-se a skrivan deoc'h, deoc'h gouzoud ho-peus Buez peurbaduz, c'hwi hag a gred en Ano Mab Doue! ¹⁴ Ha setu an hardisegez on-eus-ni dirazañ: ma teuom da c'houlenn tra pe dra hervez e volonte, or selaou a ra! ¹⁵ Ha ma ouzom e vezom selaouet gantañ, petra bennag a c'houlennfem, ec'h ouzom ive or-bo kement on-eus goulennet digantañ.

Yn 15,22...
Yn 17,15
¹⁶ Ma wel unan bennag e Vreur o pehi, dre eur pehed na gas ket d'ar maro, dezañ pedi hag e roio ar vuez d'e vreur. Evelse eo evid ar re a ra pehejou na gasont ket d'ar maro. Eur pehed a zo hag a gas d'ar maro: n'eo ket evid hennez e lavaran pedi! ¹⁷ Peb direiz a zo pehed, ha bez' ez eus pehed na gas ket d'ar maro...

Yn 17,3
¹⁸ Gouzoud a reom: an hini bet ganet euz Doue ne bec'h ket, rag an Hini ganet euz Doue e ziwall e-unan, hag an hini droug ne douch ket outañ. ¹⁹ Gouzoud a reom ez om euz Doue, hag ez eo ar Bed a-bez astennet en droug. ²⁰ Gouzoud a reom ervad eo deuet Mab Doue, ha deom e-neus roet meiz evid anavezoud an Hini gwirion; en Hini gwirion emaoim-ni, hag en e Vab Jezuz Krist! Hennez eo an Doue gwirion hag ar Vuez peurbadel!

²¹ Bugaligou, en em ziwallit diouz an Idolou!...

Eil lizer Sant Yann

1 Pèr 5,18
Yn 3,31
1 Tim 1,2

¹ Ar C’hoziad d’an Itron a zo bet dibabet, ha d’he Bugale, a garan-me er wirionez, -ha n’eo ket me hepkén, med an oll re a anavez ar wirionez- :² ablamour d’ar wirionez a zo o chom ennom hag a vezo ganeom a-hed ar c’hantvejou, ³ bez’ e vezo ganeom gras, trugarez, peoc’h digand Doue an Tad, ha digand Jezuz Krist, Mab an Tad, gand gwirionez ha karantez!

1 Yn 2,7
1 Yn 5,3

⁴ Laouenneet kenañ ez on-me bet, p’am-eus kavet lod euz da Vugale o vale er wirionez, hervez ar gourhemenn on-eus degemeret digand an Tad. ⁵ Ha bremañ e c’houlennan diganit, Itron, -n’eo ket evel pa vefen o skriva dit eur gourhemenn nevez, med hervez an hini on-eus bet adal ar penn-kenta- : deom-ni kared an eil egile! ⁶ Ha setu amañ ar garantez: deom-ni bale hervez ar gourhemennou! Hemañ eo ar gourhemenn hervez m’ho-peus klevet adal ar penn-kenta: deoc’h bale er garantez!

1 Yn 2,18
Gal 4,11
1 Yn 2,23

⁷ Rag dre ar Bed ez euz deuet kalz touellerien, tud n’anavezont ket ez eo deuet Jezuz Krist en eun natur-den! Henez eo an toueller hag an anti-krist! ⁸ Beillit warnoc’h hoc’h-unan, evid na golloc’h ket ar pezh ho-peus greet, med deoc’h kaoud ar gopr en e bez! ⁹ An neb a ia er-mêz ha na jom ket e kelennadurez ar C’hrist, n’e-neus ket Doue gantañ e-unan! An hini a jom er gelennadurez, henez e-neus gantañ e-unan hag an Tad hag ar Mab!

¹⁰ Ma teu davedoc’h unan bennag ha na zegas ket ar gelennadurez-ze, arabad deoc’h e zegemer en ho ti, na lavared dezañ ‘Salud!’... ¹¹ Rag an hini a lavar dezañ ‘Salud!’ , a zo kenlodeg en e oberou fall!

1 Yn 1,4

¹² Goude din kaoud kalz traou da lavared deoc’h, ne fell ket din o displega war baper pe gand liou! Med fiziañs am-eus da veza en ho kichenn ha da gomz a c’henou da c’henou, ma vezo peurleuniet on levenez!

¹³ Da zaludi a ra Bugale da C’hoar a zo bet dibabet!

Trede lizer Sant Yann

VA BUGALE A VALE ER WIRIONEZ!

- 2 Yn 1 ¹ Ar C'hoziad d'ar Breur karet Gaiuz, a garan-me er wirionez!
- 2 Yn 4 ² Va Breur karet, dreist-oll e pedan, dit da vond brao gand da hent ha chom yac'h, evel m'ema da ene o vond brao gand hec'h hent! ³ Rag laouenneet kenañ on-me bet, pa z'eus degouezet Breudeur o rei testiñ war da wirionez, hervez ma valez er wirionez! ⁴ N'eus ket din brasoc'h levenez eged homañ: kleved ema va Bugale o vale er wirionez!...
- Tit 3,13
Ob 20,35
Heb 13,2 ⁵ Breur karet, hervez ar feiz e rez kement a rez evid ar Vreudeur, hag an dra-ze evid tud diavêz! ⁶ Ar re-mañ o-deus roet testiñ d'az karantez, dirag an Iliz: kaer a ri ouz o ambroug en eun doare deread ouz Doue! ⁷ Rag evid an Ano ez int eet kuit heb degemer seurt digand ar Baganed! ⁸ Ni a dle eta skoazella ar seurt tud, deom poania a-unan evid ar Wirionez!
- Mz 20,27 ⁹ Skrivet am-eus d'an Iliz, med Diotrefez, sod gand ar reñk kenta, n'on degemer ket! ¹⁰ Rag-se, ma teuan, e tegasin dezañ soñj euz an oberou a ra, o rimadella komzou fall a-eneb deom! Ha n'eo ket an dra-ze awalc'h dezañ! Ne zegemer ket zoken e-unan ar Vreudeur! Miroud a ra zoken ouz ar re a glask henn ober, hag o stlepel a ra er-mêz euz an Iliz.
- 1 Yn 3,6 ¹¹ Breur karet, na gemer ket skwer diwar an droug, med diwar ar mad! An hini a ra ar mad a zo euz Doue! An neb a ra an droug n'e-neus ket gwelet Doue!
- 1 Yn 5,6
Yn 19,35
Yn 21,24 ¹² Da Zemetriuz e vez roet testiñ mad gand an oll, hag ive gand ar wirionez! Ha ni ive a ro testiñ, ha gouzoud a rez eo gwir on testiñ! ¹³ Kalz traou am-eus da skriva dit, med ne fell ket din skriva dit gand liou hag eur bluenn! ¹⁴ Fiziañs am-eus da vond dizale d'az kweled, hag e komzim a c'henou da c'henou...
- ¹⁵ Peoc'h dit! Da zaludi a ra ar Vignoned!
Dit-te saludi ar Vignoned hini hag hini!

Lizer Jud

An hini e-neus skrivet al lizer-mañ en em laka 'breur da Jakez', moarvad Jakez an abostol, penn-rener Iliz Jeruzalem: Jud n'en em laka ket e reñk an Ebestel.

Warlerc'h e vreur Jakez, e kav mad skriva d'ar memez Kristenien en Azi: enkrezet eo e galon o c'houzoud e vezont dalhmad gwall-gaset ablamour d'o feiz, gand tud bet en o zouez heb beza evid gwir en o zouez (1 Yn 2,19)... D'ar vreudeur-ze e tegas da zoñj e-neus Doue gwechall kastizet rust an dud bet salvet ha deuet da-c'houde da zizenti ha da ziskredi: hervez Hebr. 10,31: "Skrijuz eo koueza etre daouarn an Doue-Beo!"

Ar brezegerien-ze, evid gwir, n'eus anezo nemed tud diroll, difrouez, dizakr, peherien dicheg hag hudur. A-hend-all, lavaret o-deus deom an Ebestel e teufe seurt tud en amzeriou diweza...

*D'ar Gristenien, chom stard er feiz, en eur veva er garantez;
dezo c'hoaz sikour o breudeur da jom pe da zistrei war an hent mad.*

Lizer Sant Jud

STOURM EVID AR FEIZ FIZIET EN DUD SANTEL...

Mz 13,55
1 Pèr 1,2
¹ Jud, servicher Jezuz Krist, Breur da Jakez, d'an dud a zo bet galvet hag a zo e Doue an Tad ha dalhet da Jezuz Krist: ² ra vo ennoc'h trugarez ha peoc'h ha karantez founnuz...

2 Pèr 1,5
Gal 2,4
2 Pèr 2,1
1 Kor 10,5
Yn 8,44
³ Breudeur karet, aket a lakan da skriva deoc'h diwar-benn or Silvidigez, ha red eo bet din skriva deoc'h evid hoc'h alia da stourm evid ar feiz fiziet en dud santel, eur wech evid mad! ⁴ Rag dre guz o-deus tud en em zilet, -ar re a zo bet merket evid an torfed-ze-, tud dizouj, hag a zo o trei gras Doue en diroll, hag o nac'h Jezuz Krist, ar Mestr hag an Aotrou n'eus neme-tañ! ⁵ Me a fell din degas deoc'h koun euz kement-mañ, goude deoc'h gouzoud pep tra evid mad: saveteet gantañ ar Bobl euz douar an Ejipt, da-c'houde e-neus an Aotrou kaset da goll ar re a zo deuet da ziskredi! ⁶ Hag an êlez, -ar re n'o-deus ket dalhet d'o stad kenta, med o-deus kuiteet o demeurañs-, Doue e-neus o dalhet en ereou peurbaduz e-kreiz an deñvalijenn, a-benn Barn an Deiz braz...

Mz 10,15...
2 Pèr 2,10
2 Pèr 2,10...
⁷ Evel Sodom ha Gomor, ar c'hêriou endro dezo ive, -deuet da zerhi en eun doare heñvel ouz o hini, ha da zarempredi gand eur c'horv dizonest,- a zo bet diskaret evid beza eur skwer dre c'houzañv kastiz eun tan peurbaduz! ⁸ Evelse koulskoude e ra an dud-ze, -sorghennet ma z'int-, o saotri o c'horv, o tisprizoud an Aotroniez, o vlasfemi ar C'hloar! ⁹ An arhêl Mikael avad, o taela gand an diaoul, pa zivize diwar-benn korv Moizez, ne gredas ket dougen ar varn a vlasfem, med lavared a reas: "An Aotrou da gastizo!" ¹⁰ An dud-ze avad a vlasfem an traou n'anevezont ket! An traou avad a anavezont dre natur evel al loened dilavar, gand an traou-ze e vezont kaset da fall...

2 Pèr 2,15...
¹¹ Siwaz dezo! War hent Kain e valeont! Evid fazi Balam o-deus bet eur gopr! Ha gand taol-dispac'h Kore ez int eet da goll! ¹² An dud-ze a zo nammou en ho prejou a vreudeur, o festa heb aon, oc'h en em voueta o-unan! Koumoul dizour a zo anezo, skubet gand an aveliou! Gwez an diskar-amzer, difrouez, diou wech marvet, diwrizennet! ¹³ Tonnou gouez ar mor, oc'h eonenni o méz! Stered touelluz, a zo dalhet evito islonk an deñvalijenn evid ar c'hantvejou!

Mk 8,38
¹⁴ Evid an dud-ze e-neus ive profedet Enok, ar zeizved Tad-meur adal Adam, o lavared: "Setu an Aotrou o tond, e-kreiz e Viliadou Zantel, ¹⁵ evid ober ar Varn a-eneb d'an oll, ha da c'hounid war an oll dud dizouj, e-keñver o oll oberou dizakr o-deus drezo dizoujet, hag e-keñver an oll draou kaled o-deus peherien dizouj lavaret a-eneb dezañ!

¹⁶ An dud-ze a zo grozmolerien klemmuz, o vale hervez o c'hoantegeziou! O genou a lavar traou uhel, ha ne brizont an dud nemed diouz ar gounid a zeu anezo!

¹⁷ C'hwi avad, Breudeur karet, dalhit koun euz ar Gomz bet lavaret

1 Tim 4,1 deoc'h gand Ebestel Jezuz Krist on Aotrou ; ¹⁸ deoc'h o-deus lavaret: “En Amzer ziweza e tegouezo goaperien o vale hervez o c'hoantegeziou a dud dizouj!” ¹⁹ Ar re-ze eo a jom diouz o zu, ‘denel’ ma z'int pa n'o-deus ket a Spered! ²⁰ C'hwi avad, Breudeur karet, en em skwerit hoc'h-unan war ho feiz santel meurbed, o pedi ar Spered Santel ²¹ oc'h en em zelher e karantez Doue, o c'hortoz trugarez Jezuz Krist on Aotrou, evid mond er Vuez peurbaduz!

Jak 5,19 ²² Ha gounezit lod euz an dud-ze, ar re a zo nehet! ²³ Deoc'h o zavetei ouz o diframma diouz an tan! Ho-pet truez ouz al lod-all, gand aon ive, beteg kasaad zoken ar zae bet nammet war o c'horv!...

Rom 16,25 ²⁴ D'an Hini a c'hell ho telher divrall, hag ho tegas direbech dirag e C'hloar en eur dridal a levenez,

1 Tes 5,23 ²⁵ d'an Doue n'eus nemetañ, or Zalver,

Rom 16,27 dre Jezuz Krist on Aotrou,

1 Tim 1,17 Gloar, Braster, Nerz ha Galloud

2 Pèr 3,18

Araog pep kantved, ha bremañ hag a-hed an oll gantvejou!

Amen!

An Diskuliadenn

Er bloavez 96, e teu an Impalaer roman, Domitian, da zifroll eun heskinadeg spontuz a-eneb ar Gristenien (Disk 1,9). Kaset eo bet Yann, an Abostol, en harlu war enezenn Patmoz; eno e teu Jezuz da bara dirazañ ha da c'houlenn digantañ skriva d'an Diskibien evid o sklêrijenna hag o c'hennerza en o zrubuill (Disk 1,13).

Er pennadou 1 - 3 euz e leor, e skriv, en ano Jezuz, da zeiz Iliz (da lavared eo: d'an Iliz a-bez), dezo da veza aketuz da veva eur vuez kristen birvidig: ne vezint trec'h d'an enebourien nemed o telher stard d'ar Zalver Jezuz (Disk 1 - 3).

Er pennadou 4 - 11, e teu da glask startaad fiziañs an Diskibien er Zalver. evid-se, e skeudenn dirag o daoulagad Jezuz en e c'hloar, Mestr hag Aotrou war ar Bed oll: ober a ra kement e-neus profedet ha prometet! Peogwir he-deus kêr Jeruzalem iriennet a-eneptañ, ha da c'houde a-eneb an Ebestel hag an Diskibien, e-neus Jezuz profedet, e Leorig an Aviel, e vefe dismantret ar Gêr Zantel (Lk 19,41...; Mz 24,1...; Mk 13,1...; Lk 21,5...) Ha Yann da gonta, en eun doare kuzet, penaoz e-neus Eñ sevenet, er bloaveziou 70-71, ar pez e-noa profedet en Aviel. Gwir eo e-neus daleet! Kemeret e-neus e amzer, med dalhet e-neus d'e C'hêr, ha bet eo trec'h war e enebourien...

Er pennadou 12 - 20,6, e tispleg Yann, d'ar Gristenien a zo bremañ heskinet, e vo Jezuz trec'h koulz all war Gêr Rom hec'h-unan! A-eneb an Iliz eo bremañ dirollet an Impalaer Domitian, a-unan gand kalz rouaned ha gand ar relijionou pagan... En o zrubuill, e youc'h ar Gristenien warzu an Aotrou, ma teuo d'lo d'o savetei... Eñ avad a gemer e amzer, med dond a raio d'o frankiza, ha da ziskar an oll heskinerien! D'an Diskibien lakaad Ennañ o fiziañs...

Er pennadou diweza euz e leor (20,7 - 22) e klask Yann merka d'e Ziskibien e tremeno an traou evelse ive da Fin ar Bed... O c'houzoud e vo prest echu e amzer, e tistago Satan eur stourm kriz a-eneb an Iliz, a-unan gand galloudegeziou fall ar Bed a-bez (Lk 18,8). Med, hervez Promesa Jezuz, "Galloudegeziou an Ivern ne vint ket trec'h dezi!" (Mz 16,18). Neuze, adsavet gantañ an oll dud, an Aotrou a stlapo, e lenn an tan hag ar soufr, Satan, ar Maro, an Ivern hag ar re oll a ra an droug: sed an eil Maro (Mz 25,34).

Bodet e Kêr Zantel Jeruzalem-an Neñv, an Iliz a vo neuze anezi ar Plac'h-Nevez, kinklet kaer a zantelez evid beza kinniget d'he Fried, Oan Doue (Ef 5,25-27)...

"Eüruz ar re a zo bet galvet da Lein-Eured Oan Doue!" (Disk 19,9).

Diskuliadenn

-1-

SKRIV AR PEZ A WELEZ!

¹ Diskuliadenn Jezuz Krist: Doue e-neus he roet dezañ, evid diskouez d'e Zervicherien ar pezh a rank c'hoarvezoud dizale, hag Eñ e-neus he diskouezet ouz he c'has, dre e êl, d'e Zervicher Yann! ² Hemañ e-neus testeniet: kement e-neus gwelet a zo anezañ Komz Doue ha Testeni Jezuz! ³ Euruz an hini a lenn hag ar re a zelaou komzou ar brofediez-mañ, hag ar re a vir an traou skrivet enni, rag ema tost ar poent!

⁴ Yann d'ar zeiz Iliz a zo en Azi: Deoc'h gras ha peoc'h digand an Hini eo a zo hag a oa hag a zeu, ha digand ar seiz Spered a zo dirag e drôn, ⁵ ha digand Jezuz Krist, an Test feal, ar c'henta-ganet a-douez ar re varo, penn-rener rouaned an douar! D'an Hini e-neus or c'haret hag e-neus or gwelhet diouz or pehejou, ⁶ d'an Hini e-neus greet ahanom-ni eur Rouantelez a veleien d'e Zoue ha Tad, -dezañ ar C'hloar hag ar Galloud a-hed ar c'hantvejou a gantvejou! Amen!- ⁷ Setu Eñ o tond gand ar c'hoabr: E weled a raio peb lagad, hag ive ar re o-deus toullet dezañ e gostez, ha warnañ e hirvoudo oll veuriadoù an Douar! Ya! Amen!

⁸ “Me eo a zo’ an Alfa hag an Omega! eme Doue, an Aotrou, an Hini eo a zo hag a oa hag a zeu, an Oll-C’halloudeg!”

⁹ Me, Yann, Breur deoc'h ha kenlodeg ganeoc'h en trubuill hag er Rouantelez hag en dalc'h da Jezuz, me a oa en Enezenn galvet Patmoz, ablamour da Gomz Doue ha da Desteni Jezuz! ¹⁰ Bet on e dalc'h ar Spered da Zeiz an Aotrou, ha klevet am-eus a-dreñv din eur vouez kreñv evel hini eun drompill, ¹¹ o lavared: “Ar pezh a welez, skriv en eul Leor ha kas d'ar seiz Iliz: Efez, Smirn, Pergam, Tiatir, Sard, Filadelfi ha Laodise!”

¹² Distrei a ran da weled ar vouez a gomz ouzin, hag, eur wech distroet, e welan seiz kantolor aour, ¹³ hag e-kreiz ar c'hantoloriou, evel eur Mab-Den gwisket gand eur zae hir, gourizet e vruched gand eur gouriz aour! ¹⁴ E benn avad hag e vleo a zo gwenn-kann evel gloan, gwenn evel erc'h! E zaoulagad a zo evel flamm-tan ¹⁵ hag e dreid a zo heñvel ouz arem ruz-tan, evel entanet en eur forn; e vouez a zo evel mouez douriou braz. ¹⁶ En e zorn dehou, e-neus seiz steredenn, hag euz e c'henou e teu eur c'hleze lemm a zaou droc'h. Hag e zremm a zo evel an heol o para e-kreiz an deiz...

¹⁷ Ouz e weled, e kouezan e-harz e dreid, hanter-varo! Astenn a ra e zorn dehou warnon en eur lavared: “N'az-pezh ket aon! ‘Me eo a zo’ ar C'henta hag an Diweza, ¹⁸ an Hini-Beo! Bet on maro, ha setu Me beo evid ar c'hantvejou a gantvejou, ha din eo alhweziou ar Maro ha re an Ifern... ¹⁹ Skriv 'ta ar pezh a welez, ar pezh a zo bremañ hag ar pezh a zo prest da zegouezoud goudeze! ²⁰ Mister ar seiz steredenn a welez em dorn dehou hag ar seiz kantolor aour ? Ar seiz steredenn eo êlez ar seiz Iliz, hag ar c'hantoloriou eo ar seiz Iliz...”

-2-

DA EL AN ILIZ A ZO EN EFEZ...

Disk 1,16
2 Kor 11,13
Mz 7,15

¹ Da êl an Iliz a zo en Efez, skriv: “kement-mañ a lavar an Hini a zalc’h ar seiz steredenn en e zorn dehou, an Hini a vale e-kreiz ar c’hantoloriou aour: ² “Gouzoud a ran da oberou, da boan ha da zalc’h; amprouet az-peus ar re a lavar ez int ebestel, ha n’int ket! Ha kavet az-peus ez int gaouiad! ³ Ha dalc’h a zo dit, ha gouzañvet az-peus ablamour d’am Ano, ha n’az-peus ket fall-galonet! ⁴ Med bez’ ez eus din a-eneb dit: dilezet az-peus da garantez kenta! ⁵ Dalc’h soñj eta a-belec’h ez out kouezet! Tro da galon ouz Doue ha gra da oberou kenta! Anez-da-ze e teuin davedout hag e lohin da gantolor euz e lec’h, ma ne droez ket ouz Doue! ⁶ Med bez’ ez eus dit kement-mañ: kasaad a rez oberou an Nikolaiz, a gasaan-me ive!”

Disk 22,2
Gen 2,9

⁷ An hini e-neus skouarn, ra zelaouo petra lavar ar Spered d’an Ilizou: “D’an treher e roin da zebri euz Gwezenn ar Vuez a zo e Baradoz Doue!”

DA ÊL AN ILIZ A ZO E SMIRN

Disk 1,16
Jak 2,5
Rom 9,6
Disk 3,9
1 Tes 2,16
Jak 2,12

⁸ Da êl an Iliz a zo e Smirn, skriv: “Evel-mañ e lavar ar C’henta hag an Diweza, an Hini a zo bet maro hag a zo deuet beo: ⁹ “Gouzoud a ran da drubuill ha da baourentez, -med pinvidig out!-, hag an dismeg a-berz ar re a lavar ez int Juzevien, -ar pez n’int ket, med sinagog Satan!-... ¹⁰ N’az-peuz ket aon rag ar pez emaut o vond da c’houzañv: setu an Diaoul o vond da stlepel lod ahanoc’h er prizon, deoc’h beza tentet! Trubuill ho-po epad deg devez! Bez feal beteg ar maro, a dit e roin kurunenn ar Vuez!”

¹¹ An hini e-neus skouarn, ra zelaouo petra ’lavar ar Spered d’an Ilizou: “Nann, ne vo ket gwallet an treher gand an eil maro!”

DA ÊL AN ILIZ A ZO E PERGAM

1 Kor 8,10
Jud 11
1 Pêr 2,15

Mk 1,15

Disk 19,12

¹² Ha da êl an Iliz a zo e Pergam, skriv: “Evel-mañ e lavar an Hini e-neus ar C’hleze lemm a zaou droc’h! ¹³ Gouzoud a ran pelec’h emaut o chom: el lec’h m’ema tron Satan! Delher a rez d’am Ano, ha n’az-peus ket nahet da feiz ennon-me, na zoken e deveziou Antipaz, an test feal din, bet lazet en ho touez, el lec’h m’ema Satan o chom! ¹⁴ Med bez’ez eus din eun nebeud traou a-eneb dit: bez’ az-peus aze tud hag a zalc’h da gelennadurez Balaam, an hini e-neus desket Balag da daoler eur mên skoill dirag Bugale Izrael, dezo da zebri kig an idolerez ha da zerhi! ¹⁵ Evelse, en eun heveleb doare, az-peus ive tud o telher da gelennadurez an Nikolaiz! ¹⁶ Tro ’ta da galon ouz Doue! Anez-da-ze e teuin buan davedout da vrezelia a-eneb dezo gand ar c’hleze euz va genou! ¹⁷ An hini e-neus skouarn, ra zelaouo petra lavar ar Spered d’an Ilizou: “D’an treher e roin euz ar mann kuzet! Dezañ e roin ive eur mênig gwenn, hag, enskrivet war ar mênig, eun Ano Nevez, na oar den nemed an hini e zegemer”...

DA EL AN ILIZ A ZO E TIATIR

Disk 1,14 18 Ha da êl an Iliz a zo e Tiatir, skriv: “Evel-mañ e lavar Mab Doue, an hini e-neus e zaoulagad evel flamm-tan hag e dreid evel arem ruz-tan: 19 Gouzoud a ran da oberou, ha da garantez ha da feiz ha da vinistrez, ha da zalc’h, ha da oberou diweza niverusoc’h eged ar re genta! 20 Med bez’ ez eus din a-eneb dit: en he roll e laoskez ar Vaouez Jezabel, a lavar ez eo hec’h-unan profedez, hag ema o kelenn hag o touella va zervicherien, da zerhi ha da zebri kig an idolerez! 21 Roet am-eus dezi amzer da drei ouz Doue, med ne fell ket dezi distrei diouz he zerherez! 22 Setu ma teuin d’he stlepel war eur gwele, ha da stlepel ar re a zerc’h ganti en eun drubuill braz, ma ne zistroont ket diouz hec’h oberou dezi! 23 Hag he bugale a laz in a varo! Hag an oll Ilizou a ouezo: ‘Me eo a zo’ an Hini a furch lonezi ha kalonou, ha da bep hini ahanoc’h e roin diouz hoc’h oberou!”

Jer 11,20
Jer 17,10 24 “Lavared a ran avad deoc’h-oll e Tiatir, c’hwi ha n’ho-peus ket bet ar “Gelennadurez-ze” ha n’ho-peus ket anavezet “Donderiou Satan”, evel ma lavaront: ne daolin warnoc’h samm all ebed! 25 Med dalhit mad ar pez ho-peus, beteg ma teuin endro!”

2 Kor 2,10 26 “An treher, an hini a zalho beteg penn d’am oberou, “*dezañ e roin galloud war ar Baganed!* 27 *O mesa a raio gand eur wialenn houarn: evel podou-pri e vint bruzunet!*” 28 Ar galloud-ze am-eus bet ive digand va Zad! Dezañ e roin ive ar Steredenn-beure!”

Salm 2,8...
Mz 28,18 29 An hini e-neus skouarn, ra zelaouo petra lavar ar Spered d’an Ilizou!

-3-

DA ÊL AN ILIZ A ZO E SARD

Mz 13,1...
Mk 13,33 1 Ha da êl an Iliz a zo e Sard, skriv: evel-mañ e lavar an Hini e-neus seiz Spered Doue hag ar seiz steredenn: “Gouzoud a ran da oberou! Ano a zo dit da veza beo, hag ez out maro! 2 Chom dihun! Kennerz kement a jom anezañ hag a zo war-nes mervel! Rag n’am-eus ket kavet da oberou peurvad dirag Doue! 3 Dalc’h eta soñj euz ar pez az-peus degemeret ha klevet: dit hen mired, ha trei ouz Doue! Ma ne jomez ket dihun eta, e teuin evel eul laer, ha ne ouezi ket da bed eur e tegouezin warnout!”

Disk 7,14... 4 “Med bez’ az-peus e Sard eun nebeud tud ha n’o-deus ket stlabezet o dillad! D’am heul e valeint gand dillad gwenn, rag bez’ ez int din!”

Fil 4,3
Lk 9,26 5 “An treher a vo evel-se gwisket gand dillad gwenn, ha ne zilamin ket e ano diwar Leor-ar-Vuez: anzav a rin e ano dirag va Zad ha dirag an êlez!” 6 An hini e-neus skouarn, ra zelaouo petra lavar ar Spered d’an Ilizou!

DA ÊL AN ILIZ A ZO E FILADELFI!

Disk 1,18
Iz 22,22 7 Ha da êl an Iliz a zo e Filadelfi, skriv: evel-mañ e lavar an Hini santel ha gwirion: “*an Hini e-neus alhwez David, an Hini a zigor ha ne c’hell den*

serri, an Hini a zerr ha ne c'hell den digeri!" ⁸ "Gouzoud a ran da oberou! Setu m'am-eus lakeet dirazout eun nor zigor na c'hell den serri,- rag n'eus dit nemed nebeud a nerz!-, ha dalhet az-peus d'am C'homz, ha n'az-peus ket nahet va Ano!"...

1 Tes 2,16
Rom 9,67
Iz 60,14
Yn 17,6

⁹ "Setu ma roan dit lod euz 'Sinagog Satan', euz ar re a lavar ez int unan Juzevien, ha ne z'int ket, med gevier a lavaront! *Setu ma rin dezo dond da stoui e-harz da dreid,* ¹⁰ *ha da c'houzoud am-eus-me da garet!* Peogwir az-peus miret va ali war an dalc'h, da viroud a rin-me ive diouz an tentadur a zo prest da zond war ar Bed a-bez evid tenti tud an Douar! ¹¹ Dond a rin dizale! Dalc'h ar pez az-peus, ma na bako den da gurunenn!"

Disk 22,22

¹² "An treher a lakain-me da biler e Santual va Doue, ha ne z'aio ket ken er-mêz! Warnañ e skrivin Ano va Doue, hag Ano Kêr va Doue, ar Jeruzalem-Nevez a zo o tiskenn euz an Neñv a-gichenn Doue, hag ive va Ano-Nevez din-me!" ¹³ An hini e-neus skouarn, ra zelaouo petra 'lavar ar Spered d'an Ilizou!

DA ÊL AN ILIZ A ZO E LAODISE

Kol 4,13

¹⁴ Ha da êl an Iliz a zo e Laodise, skriv: evel-mañ e lavar an Amen, an Test feal ha gwirion, Penn-Kenta Krouadelez Doue: ¹⁵ "Gouzoud a ran da oberou: n'out na yén na tomm! Mad e vefe dit beza yén pe domm! ¹⁶ Evel-se ez out klouar, na tomm na yén! Emaon o vond d'az tistaoler euz va genou! ¹⁷ Peogwir e lavarez: 'Me a zo pinvidig, pinvidikeet on, n'eus din diouer a netra!', n'ouzout ket ez out reuzeudig, truezuz ha paour ha dall ha noaz! ¹⁸ Dit e roan an ali da brena diganin aour flammet dre an tan, evid dit pinvidikaad, ha dillad gwenn da lakaad warnout ma na vezo ket gwelet da noazter mézuz, hag ive louzou da leda war da zaoulagad, dit da weled mad!"

Yn 1,3

1 Kor 3,18
Oze 12,9

1 Pèr 1,7

Lav 3,12
1 Kor 11,12
Mk 13,34...
Yn 14,23...

¹⁹ "Ar re a garan, ar re-ze a abegan hag a reizan". Bez eta greduz, ha tro da galon ouz Doue! ²⁰ Setu-me dirag an nor, hag o skei! Ma teu unan ben-nag da gleved va mouez, ha ma tigor an nor, ez in-me davetañ! Koania a rin gantañ hag eñ ganin-me!"

Mz 19,28

²¹ "An treher a zegasin da azeza ganin war va zrôn, evel m'am-eus-me trehet ha ma z'on eet da azeza gand va Zad war e Drôn!"

²² An hini e-neus skouarn, ra zelaouo petra 'lavar ar Spered d'an Ilizou!

-4-

SANTEL! SANTEL! SANTEL AN AOTROU DOUE!

Iz 6,1
Iz 24,23

¹ Ha gweled a ran da-c'houde: setu eun Nor zigor en Neñv! Hag ar vouez am-eus klevet da genta, evel hini eun drompill, o komz ouzin, a lavar: "Pign amañ, hag e tiskouezin dit an traou a rank c'hoarvezoud goudeze!" ²

Hag emañ raktal e dalc'h ar Spered! Ha setu eun Trôn lakeet en Neñv, ha war an Trôn Unan war e azez! ³ An Hini azezet a zo heñvel da weled ouz eur mên-yalp hag ouz eur mên-agaten, ha gwareg-ar-glaeo endro d'an Trôn a zo, da weled, heñvel ouz eun emrodenn...

Iz 24,23 ⁴ Endro d'an Tron ez eus pevar drôn war'n-ugent, ha war an trônou, pevar Goziad war'n-ugent war o azez, gwisket gand dillad gwenn, ha war o fennou, kurunennou aour! ⁵ Euz an Trôn e teu luhed, moueziou ha taoliou-kurun. Seiz lamp a zo o tevi dirag an Trôn: bez'ez int seiz Spered Doue...

Ezek 24,10 ⁶ Dirag an Trôn ez euz evel eur mor gwer heñvel ouz strink; hag e-kreiz an Trôn hag endro d'an Trôn, pevar loen leun a lagadou en a-raog hag en a-dreñv! ⁷ Al loen kenta a zo heñvel ouz eul leon, an eil heñvel ouz eun taro, an trede a zo dezañ eun dremm heñvel ouz eun den, hag ar pevare a zo heñvel ouz eun erer o nijal! ⁸ Ar pevar loen-ze, pep hini anezo e-neus c'hwech askell; endro dezo hag en diabarz ez int leun a lagadou, ha n'eus ehan ebed dezo da lavared noz-deiz:

Iz 6,3 “Santel! Santel! Santel an Aotrou Doue, an Oll-C'halloudeg,
“An Hini a oa hag a zo hag a zeu!”

⁹ Ha pa zoug ar pevar Loen-ze gloar, enor ha trugarez d'an Hini azezet war an trôn, d'an Hini a vev a-hed ar c'hantvejou a gantvejou, ¹⁰ e kouez ar pevar Goziad war'n-ugent dirag an Hini azezet war an trôn, da adori an Hini a vev a-hed ar c'hantvejou a gantvejou, hag e taolont o c'hurunennou dirag an trôn en eur lavared:

¹¹ “Bez' ez oc'h dñn, ô! on Aotrou hag on Doue,

“Da gaoud gloar, enor ha galloud,

Rom 4,17 “Rag krouet ho-peus an oll draou,

“Ha diwar ho polontez ez eus anezo, hag ez int bet krouet!”

-5-

AN OANIG BET LAZET A GMER AR ROLLAD!

Ezek 2,6
Iz 29,11 ¹ Ha gweled a ran, e dorn dehou an Hini azezet war an trôn, eur Rollad, skrivet en diabarz hag en diavêz, siellet gand seiz siell. ² Gweled a ran ive eun êl galloudeg oc'h embann a vouez kreñv: “Piou a zo din da ziroll ar Rollad ha da zistaga e ziellou?” ³ Nag en Neñv na war an douar na dindan an douar ne c'hell dén digeri ar Rollad na selled outañ! ⁴ Ha me da ouela ha da ouela, pa ne vez kavet dén ebed din da zigeri ar Rollad na da zelled outañ! ⁵ Hag e lavar din unan euz ar Gozidi: “Arabad dit gouela! Al Leon euz meurriad Juda, Gwrizienn David, setu m'eo bet trec'h! Dezañ digeri ar Rollad hag ar seiz siell!”

Lk 7,13
Rom 15
Iz 11,1

Yn 1,29 ⁶ Ha gweled a ran, e-kreiz an trôn hag ar pevar Loen hag e-kreiz ar Gozidi, eun Oanig en e zav, bet lazeta da weled, dezañ seiz korn ha seiz lagad,

a zo anezo seiz Spered Doue kaset dre ar bed a-bez! ⁷ Dond a ra da gemer ar Rollad euz dorn dehou an Hini azezet war an trôn. ⁸ Ha pa gemer ar Rollad, e kouez d'an douar ar pevar Loen hag ar pevar Goziad war'n-ugent dirag an Oanig, pep hini anezo gand eun delenn ha gand hanafou leun a louzou-c'hwez-vad, a zo pedennou an dud santel! ⁹ Kana a reont eur c'han nevez o lavared:

Disk 14,1

“Bez'ez oc'h din da gemer ar Rollad ha da zigeri e ziellou,
 “Rag lazet oc'h bet, ha saveteet ho-peus da Zoue dre ho Kwad
 “Tud euz peb Meuriad ha peb yez, euz pep Pobl hag euz peb Broad,
 “Hag anezo ho-peus greet d'on Doue eur Rouantelez a veleien,
¹⁰ “Ha rén a raint war an douar!”

Jud 14...

Fil 2,7...

¹¹ Hag e welan hag e klevan mouez êlez e-leiz endro d'an Trôn, d'ar pevar loen ha d'ar Gozidi, hag o niver a zo mil milier a viliadou! ¹² A vouez kreñv e lavaront: “Dîn eo an Oanig bet lazet da gemer ar Galloud, ar Binvidigez, ar Furnez, an Nerz, an Enor, ar C'hloar hag ar Veuleudi!” ¹³ Ha kement krouadur a zo en Neñv, ha war an douar, dindan an douar ha war ar mor, ha kement hini a zo enno a glevan o lavared:

“D'an Hini a zo azezet war an Trôn, ha d'an Oanig,
 “An Enor, ar C'hloar hag ar Vestroni a-hed ar c'hantvejou a gantvejou!”

¹⁴ Hag ar pevar loen a lavar ‘Amen!’, hag ar Gozidi a gouez d'an douar da adori...

-6-

AN OANIG A ZIGOR AR SEIZ SIELL!

Mz 24,1-44
Lk 21,5-33

¹ Ha gweled a ran an Oanig o tigeri ar genta euz ar seiz siell, hag e klevan unan euz ar pevar loen o lavared gand eur vouez-kurun: ‘Deus!’ ² Ha gweled a ran: setu eur marc'h gwenn, hag an hini azezet war e gein e-neus eur wareg: dezañ ez eus roet eur gurunenn, hag eñ mond er-mêz evel eun treher o vond da drehi! ³ Pa zigor an eil siell, e klevan an eil loen o lavared: ‘Deus!’ ⁴ Hag e teu eur marc'h ruz-tan: an hini a zo azezet war e gein a zo roet dezañ lemel ar peoc'h diwar an douar ha lakaad an dud da laza an eil egile: dezañ ez eus roet eur c'hleze braz...

Lk 21,9-10

Lk 21,11

⁵ Pa zigor an trede siell, e klevan an trede loen o lavared: ‘Deus!’ Gweled a ran: setu eur marc'h du! An hini azezet war e gein e-neus eur wi-lenn en e zorn. ⁶ Hag e klevan evel eur vouez e-kreiz ar pevar loen, o lavared: “Eur vuzuliad winiz: eun diner! Tri vuzuliad eiz: eun diner! Na ra droug ebed d'ar gwin ha d'an eoul!” ⁷ Pa zigor ar pevare siell, e klevan ar pevare loen o lavared: “Deus!” ⁸ Gweled a ran: setu eur marc'h glaz! Hag an hini azezet war e gein a zo e ano ‘Ar Maro’ ha d’e heul e teu an ifern! Roet ez eus dezo

Mz 24,6 galloud war ar bevarenn euz an Douar, da laza dre ar c'hleze, dre an naonegez, dre ar vosenn, ha dre loened gouez an Douar!"

Lk 18,6-8 ⁹ Ha pa zigor ar pempved siell e welan dindan an aoter eneou an dud bet lazeta ablamour da Gomz Doue ha d'an Testeni a zougont ! ¹⁰ A vouez kreñv e youhont: "Beteg peur, ô Mestr santel ha gwirion, e c'hortozoc'h da varn ha da gastiza, en abeg d'or gwad, an dud a vev war an Douar?" ¹¹ Da bep hini anezo ez eus roet eur zae wenn, ha lavaret ez eus dezo gortoz c'hoaz eur pennadig amzer, ken na vezo peurleniet niver o C'henzervicherien hag o Breudeur prest da veza lazeta evel int-i!

Mz 24,7 ¹² Ha pa zigor ar c'hwehved siell e welan e tegouez eur gwall gren-douar: an heol a zeu da veza du evel eur zac'h-reun, al loar en he fez a zeu da veza evel gwad; ¹³ stered an neñv a gouez war an douar evel ma teu eur wezenn-fiez da stlepel he fiez glaz pa vez hejet gand avel greñv...

Lk 21,22-27 ¹⁴ Hag an neñv a zo kaset kuit evel eur rollad pa vez rollet; ha peb menez ha peb enezenn a zo bountet kuit euz o lec'h. ¹⁵ Ha rouaned an Douar hag ar pennou-braz, an ofiserien, an dud pinvidig hag ar re c'hallouduz, peb sklav ha peb den frañk a ia da guzad er c'heviou hag e rehier ar menezioù. ¹⁶ Lavared a reont d'ar menezioù ha d'ar rehier: "Kouezit warnom! Ha deoc'h or c'huzad diouz dremm an Hini azezet war an Trôn, ha diouz kounnar an Oanig! ¹⁷ Rag deuet eo Deiz braz o C'hounnar! Ha piou a c'hell chom en e zav?"

Lk 21,36

- 7 -

GWALHET O-DEUS O ZAEOU E GWAD AN OANIG!

¹ Goude-ze e welan pevar êl, en o zav e pevar c'horn an Douar, o telher war bevar-avel an Douar evid na zeuio an avel da c'hweza na war an Douar na war ar mor na war gwezenn ebed! ² Gweled a ran eun êl all o sevel euz ar Zav-Heol, gantañ siell an Doue-Beo: a vouez kreñv e youc'h d'ar pevar êl a zo roet dezo ober droug d'an Douar ha d'ar mor, ³ o lavared: "Na rit droug ebed d'an Douar na d'ar mor na d'ar gwez, beteg m'or-bo siellet war o zal servicherien on Doue!"

⁴ Hag e klevan niver an dud siellet: kant pevar mil ha daou-ugent, siellet euz peb meuriad Izrael:

Ob 2,47 ⁵ Euz meuriad Juda, daouzeg mil siellet ; euz meuriad Ruben, daouzeg mil ; euz meuriad Gad, daouzeg mil ; ⁶ euz meuriad Aser, daouzeg mil ; euz meuriad Neftali, daouzeg mil ; euz meuriad Manase, daouzeg mil ; ⁷ euz meuriad Simeon, daouzeg mil ; euz meuriad Levi, daouzeg mil ; euz meuriad Isakar, daouzeg mil ; ⁸ euz meuriad Zabulon, daouzeg mil ; euz meuriad Jozef, daouzeg mil ; euz meuriad Benjamin, daouzeg mil.

Ob 4,4
Ob 5,14
Ob 6,7...

Mk 13,10 ⁹ Goude-ze e welan: setu eur Boblad vraz na c'hell den niveri, euz peb broad ha meuriad, euz pep pobl ha peb yez! En o zav ema an dud dirag an

Trôn hag an Oanig, gwisket gand saeou gwenn ha palmez en o daouarn. ¹⁰ A vouez kreñv e youhont o lavared:

“Ar Zilvidigez d’on Doue azezet war an Trôn, ha d’an Oannig!”

¹¹ Hag an êlez a jom oll endro d’an Trôn, d’ar Gozidi ha d’ar pevar loen: koueza a reont, dirag an Trôn, o zal d’an douar, da adori Doue, ¹² o lavared: “Amen! Ar bennoz, ar c’hloar, ar ’furnez, an drugarez, an enor, ar galloud, hag an nerz d’on Doue, a-hed ar c’hantvejou a gantvejou!... Amen!”

Lk 21,12-19
Mk 24, 9-13
Ob 8, 1-3

¹³ Hag unan euz ar Gozidi a stag da lavared din: “An dud-ze, gand o zaeou gwenn, piou int hag a-belec’h e teuont ?” ¹⁴ Ha dezañ e lavaran “Va Aotrou! Te a oar!” Hag e lavar din: “Ar re-ze eo ar re a zeu euz an trubuill braz! Gwelhet ha kannet o-deus o zaeou e Gwad an Oanig! ¹⁵ Ablamour da-ze emaint dirag Trôn Doue, ouz E zervicha noz-deiz en e Zantual, hag an Hini azezet war an Trôn a stign warno e deltenn.

Lk 21,19
Mz 5, 11-12

¹⁶ N’o-dezo mui naon ha n’o-dezo mui sehed, ha warno ne gouezo mui nag heol na gwrez ebed: ¹⁷ an Oanig a zo e-kreiz an Trôn o fasturo hag o henchcho da Stivell-Douriou-ar-Vuez! Ha Doue a zeho peb daeraouenn euz o daoulagad”.

-8-

GWELED A RAN SEIZ ÊL, DEZO SEIZ TROMPILL!

Lk 18, 7-8

¹ Pa zigor ar seizved siell e tegouez sioulder braz en Neñv, epad wardro eun hanter eur. ² Gweled a ran ar seiz êl a zo en o zav dirag Doue: roet ez eus dezo seiz trompill! ³ Dond a ra eun êl all: chom a ra en e zav war an aoter, gantañ eur podig ezañs, ha dezañ ez eus roet louzou-c’hwez-vad e-leiz, da ginnig gand pedennou an oll dud santel war an aoter aour a zo dirag an Trôn! ⁴ Sevel a ra maged al louzou, gand pedennou an dud santel, euz dorn an êl, beteg Doue. ⁵ Hag an êl a gemer ar podig ezañs: e garga a ra gand tan an aoter hag e stlepel war an Douar ; neuze e c’hoarvez taoliou kurun, moueziou, luhed ha kren-douar...

Mz 24,6...

Mk 13,6...

⁶ Ar seiz êl o-deus bet ar seiz trompill a jom prest da drompilla! ⁷ Hag e krog ar c’henta da drompilla. Degouezoud a ra grizill gand tan mesket gand gwad, ha stlapet eo kement-se war an Douar: ha pulluhet eo an drederenn euz an douar, ha pulluhet an drederenn euz ar gwez, ha pulluhet an oll leton glaz...

Mz 24,40

⁸ Hag an eil êl da drompilla: evel eur mell-menez tan-flamm a zo stlapet er mor: an drederenn euz ar mor a dro e gwad, ⁹ hag e varv an drederenn euz ar grouadurien a zo beo er mor, ha drastet eo an drederenn euz ar bagou... ¹⁰ Hag an trede êl da drompilla: euz an neñv e kouez eur steredenn vraz, tan-flammet evel eul lamp! Koueza a ra war an drederenn euz ar stêriou ha war

eien an doureier. ¹¹ D'ar steredenn-ze e vez roet an ano a 'C'hweroder'. An drederenn euz an douriou a zo troet e c'hweroder, ha mervel a ra an dud diwar an douriou-ze, rag bez' ez int c'hwerveet...

Mz 24,40

¹² Hag ar pevare êl da drompilla, hag ez eo skoet an drederenn euz an heol, hag an drederenn euz al loar hag an drederenn euz ar stered, ken ma z'eo teñvalleet an drederenn anezo ha ma ne bar ket an deiz epad an drederenn anezañ, hag an noz kemend-all! ¹³ Gweled ha klevet a ran eun erer o nijal e-kreiz an neñv hag o lavared a vouez kreñv: "Siwaz! Siwaz! Siwaz d'an dud a zo war an Douar, diwar ar moueziou all a roio trompill an tri êl a zo o vond da drompilla!

-9-

AN DUD A JOM NE ZISTROONT KET DIOUZ O OBEROU!

¹ Hag ar pempved êl da drompilla! Hag e welan eur steredenn kouezet euz an neñv, ha dezi eo roet alhwez puñs an islonk... ² Digeri a ra puñs an islonk, hag euz ar puñs e sav eur vogidell evel mogidell eur fornez vraz, hag ez eo teñvalleet an heol hag an êr gand mogidell ar puñs...

Mz 24,40

³ Euz ar vogidell e teu killeien-raden war an Douar, ha dezo ez eus roet eur galloud evel ar galloud o-deus kruged an Douar. ⁴ Ha lavaret ez eus dezo diwall d'ober droug da yeod an douar, da beb glazienn ha da beb gwezenn, da bep tra nemed d'an dud n'o-deus ket siell Doue war o zal! ⁵ Roet ez eus dezo, n'eo ket d'o laza, med d'o gwana epad pemp miz, hag o gwanadur a zo evel gwanadur eur grug pa grog en eun den! ⁶ En deveziou-ze, ema an dud o klask ar maro, ha ne gavont ket! C'hoant o-deus da vervel, hag ar Maro a dec'h diouto!

⁷ Ma z'int heñvel ouz killeien-raden, bez' ez int ive evel kezeg kemennet evid ar brezel: war o fenn ez eus kurunennou heñvel ouz aour, o dremm a zo evel dremm tud ; ⁸ bleo o-deus evel bleo merhed, hag o dent a zo evel re leoned ! ⁹ Bruchedou a zo dezo evel bruchedou-houarn, ha mouez o diwaskell a zo evel mouez kirri-kezeg niveruz o redeg d'ar brezel! ¹⁰ Bez' o-deus ive lostou heñvel ouz kruged, hag ive eur flemm, hag en o lostou ema o galloud d'ober droug d'an dud epad pemp miz! ¹¹ Da roue warno o-deus int-i êl an islonk: 'Abadon' eo e ano en hebreeg, 'Apolluon' e gresianeg, da lavared eo: 'Gwaster'! ¹² Tremenet eo ar 'Siwaz' kenta! Setu daou 'Ziwaz!' all o tond warlerc'h ar re-ze...

¹³ Hag ar c'hwehved êl da drompilla! Klevet a ran eur vouez o tond euz pevar c'horn an aoter aour a zo dirag Doue, ¹⁴ hag o lavared d'ar c'hwehved êl a zo gantañ an drompill: "Diliamm ar pevar êl a zo dalhet ereet war ar stêr vraz Eufрад!" ¹⁵ Hag ez eo diliammet ar pevar êl a zo dalhet ereet a-benn an eur hag an deiz hag ar miz hag ar bloaz dezo da laza an drederenn euz an dud... ¹⁶ Ha niver ar vrezelerien-war-varc'h a zo diou wech deg miliad a zeg

miliad! Kleved a ran o niver! ¹⁷ Evel-se e welan ar c'hezeg en eur weledigez, hag ive ar re a zo azezet war o c'hein, warno harnez liou d'an tan, d'an elestr ha d'ar soufr... Pennou ar c'hezeg a zo evel pennou leoned: euz o genou e teu tan, moged ha soufr...

¹⁸ Gand an teir gwalenn-ze eo lazet an drederenn euz an dud, gand an tan, ar moged, gand ar soufr a zeu euz o genou, ¹⁹ rag ema galloud ar c'hezeg en o genou hag en o lostou! O lostou a zo heñvel ouz naered ; pennou o-deus ha ganto e reont droug...

Mz 24,40
Mz 24,10-12

²⁰ Hag an dud a jom, ar re n'int ket bet lazet gand ar gwalennou-ze, ne zistroont ket diouz oberou o daouarn, na diouz o muntrou, na diouz o breou*, na diouz o zerherez, na diouz o laeroñsi...

-10-

HEBDALE, E VEZO PEURZEVENET MISTER DOUE!

¹ Gweled a ran eun El galloudeg all o tiskenn euz an Neñv, gand eur goabrenn endro dezañ, ha gwareg-ar-glao war e benn! E zremm a zo evel an heol, hag e dreid evel pilierou-tan! ² Hag en e zorn ez eus gantañ eur Rolladig digor. E droad dehou a laka war ar mor, hag e hini kleiz war an Douar. ³ A vouez kreñv e youc'h evel ma yud eul leon. Pa youc'h, e teu ar seiz kurun da zével o mouez. ⁴ Pa zav ar seiz kurun o mouez, e stagan da skriva hag e klevan eur vouez euz an Neñv o lavared: "Siell kement a lavar ar seiz kurun ha na skriv ket kement-se!".

⁵ Hag an El am-eus gwelet en e zav war ar Mor ha war an Douar "*a zav e zorn dehou warzu an Neñv: ⁶ toui a ra dre an Hini a zo beo evid ar c'hantvejou a gantvejou, hag e-neus krouet an Neñv ha kement a zo ennañ,*" hag an douar ha kement a zo warnañ, hag ar mor ha kement a zo ennañ: "ne vo dale ebed ken! ⁷ Med da boent mouez ar seizved êl, pa stago da drompilla, e vo peur-zevenet Mister Doue, evel m'e-neus embannet d'e zervicherien ar Brofeded!"

Dt 32,40

Rom 16,25

⁸ Hag ar vouez am-eus klevet euz an Neñv a gomz din adarre, hag e lavar: "Kê ha kemer al Leor digor e dorn an El a zo en e zav war ar mor ha war an Douar!" ⁹ Mond a ran daved an El hag e lavaran dezañ rei din al Leorig! Ha din e lavar: "Kemer-eñ ha lonk! C'hwervaad a raio da greiz, med en da c'henou e vo dous evel mel!" ¹⁰ Hag e kemeran al Leorig euz dorn an êl hag e lonka a ran! Em genou ez eo douz evel mel, med p'am-eus e lonket, setu c'hwerveet va c'hreiz! ¹¹ Hag e lavaront din: "Red eo dit adarre profedi war galz poblou, broadou, yezou ha rouanteleziou!"

Lk 1,3

Yn 20,30

*Breou: achantouriez, strobinnellerez.

-11-

AOTROU! SETU DEGOUEZET HO KOUNNAR!

Mz 10,22-23
Mz 24,15...
Lk 21,20-24

¹ Roet ez eus din eur gorzenn heñvel ouz eur vaz, en eur lavared: “Sav! Ha muzul Santual Doue, an Aoter, hag ar re a ador ennañ! ² Lez a gostez Porz-diaavêz ar zantual: arabad dit e vuzula, pa z’eo roet d’ar Baganed! Ar Gêr Zantel ive a vresint epad daou viz ha daou-ugent! ³ Ha rei a rin d’am zaou Dest profedi a-hed daouzeg kant devez, gwisket gand sehier! ⁴ Bez’ ez int an diou Olivezenn hag an daou Gantolor en o zav dirag Aotrou an Douar. ⁵ Ma fell da unan bennag ober droug dezo, e teuio euz o genou tan da bulluha o enebourien! Ha ma fell da unan bennag ober droug dezo, evel-se e vo red dezo beza lazet!”.

Dan 7,21

⁶ An Daou-ze o-deus galloud da alhweza an Neñv, evid na gouezo ket a c’hlaou epad amzer o fropediez, ha galloud o-deus war an doureier evid o zrei e gwad, ha da skei an Douar gand peb gwalenn, ken aliez ha ma karont... ⁷ Ha p’o-dezo douget o zesteni, “*e savo al Loen-Vil euz an islonk d’ober brezel dezo, ha dond a raio da veza trec’h dezo ha d’o laza..*”. ⁸ O c’horv a jomo war Leur ar Gêr-Vraz a vez galvet en eun doare speredel Sodom hag Ejipt, el lec’h m’eo bet ive staget o Aotrou ouz ar groaz... ⁹ Ha tud euz poblou, euz rummadou, euz yezou, euz broadou, a zello ouz o c’horv epad tri devez hanter, ha ne lezint ket lakaad o c’horvou en eur bez! ¹⁰ Laouennaad ha tridal ha ra an Douar diwar-o-fenn, ha donezonou a gasont an eil d’egile, rag an daou Brofed-ze o-deus gwanet tud an Douar...

¹¹ Goude an tri devez hanter, e teu enno eur spered a vuez deuet euz a Zoue ; sevel a reont war o zreid, hag e kouez spont braz war ar re a zo o selled outo! ¹² Kleved a reont eur vouez kreñv euz an Neñv o lavared dezo: “Pignit amañ!” D’an Neñv e pignont en eur goabrenn, hag e chom o enebourien da zelled outo!

¹³ D’an eur-ze e c’hoarvez eur c’hren-douar braz: koueza a ra en he foull an degvedenn euz ar Gêr, ha dre ar c’hren-douar ez eus lazet deg milier a dud! Ar re all a zo spontet hag e tougont gloar da Zoue an Neñv! ¹⁴ Tremenet eo an eil ‘Siwaz’! Setu an trede ‘Siwaz’ o tond dizale...

Mz 23,27...
Lk 13,34...
Lk 23,28...

¹⁵ Hag ar zeizved êl da drompilla! Sevel a ra moueziou kreñv en Neñv o lavared: “Deuet eo Rouantelez an Neñv d’on Aotrou ha d’e Grist! Ren a raio a-hed ar c’hantvejou a gantvejou!” ¹⁶ Hag ar pevar Goziad war’n-ugent, ar re a zo dirag Doue azezet war o zrôn, a gouez, o zal d’an douar, da adori Doue, ¹⁷ o lavared:

Lk 18,6-8

“Ho trugarekaad a reom, Aotrou, Doue Oll-C’halloudeg, an Hini a zo hag a oa, rag paket ho-peus krog en ho Kalloud, braz evid gwir, ha staget ho-peus da ren! ¹⁸ Kounnaret e oa ar Baganed, ha setu degouezet ho Kounnar deoc’h-c’hwil! Deuet eo ar poent evid ar re varo da veza barnet, ar poent da rei o gopr d’ho Servicherien ar Brofeded ha d’an dud santel, d’ar re a zouj hoc’h Ano, bian ha braz, ha da wasta ar re a wasta an Douar!” ¹⁹

Heb 9,3-8

Heb 9,3-8 19 Hag e tigor Santual Doue, hini an Neñv: gwelet 'vez Arc'h-an-Emgleo
 Heb 9,24 en e Zantual, hag e tegouez luhed, moueziou, taoliou-kurun, kren-douar, ha
 grizill braz...

-12-

EUR VAOUEZ KELHIET GAND AN HEOL!

Mz 1,18 1 Ha setu eur sin braz o para en Neñv: eur Vaouez kelhiet gand an
 Lk 1,28... heol, al loar dindan he zreid, ha war he fenn, eur gurunenn a zaouzeg stere-
 denn! 2 Dougeraz eo-hi, hag e youc'h o c'henel he Bugel e-kreiz poaniou
 kriz... 3 Eur sin all a zeu da bara en Neñv: setu eun Erouant braz ruz-tan,
 dezañ seiz penn ha deg korn, ha war e bennou seiz taled. 4 E lost a skub an
 Mz 2,13-14 drederenn euz stered an neñv, hag o stlap war an douar. An Erouant a jom en
 e zav dirag ar Vaouez a zo o wilioudi, evid dezañ lonka he Bugel kerkent ha
 ganet...

Lk 24,51 5 Genel a ra-hi eur Mab, an Hini a dle pastura an oll Baganed gand eur
 Ob 1,9 wialenn houarn! Tennet eo kuit he Bugel daved Doue ha daved e Drôn! 6 Hag
 ar Vaouez a dec'h d'ar gouelec'h: eno e kav eul lec'h kempennet gand Doue,
 Yn 19,27 dezi da veza maget eno epad daouzeg kant devez ha tri-ugent. 7 Hag e
 c'hoarvez brezel en neñv ; ema Mikael hag e êlez o vrezelia gand an Erouant:
 ha brezelia a ra an Erouant hag e êlez, 8 med n'int ket ar c'hreñva hag ne
 gaver lec'h ebed kén dezo en neñv! 9 Er-mêz eo stlapet an Erouant braz, an
 Naer a-wechall-goz, an hini galvet Diaoul ha Satan, an hini e-neus touellet an
 Douar a-bez! Stlapet eo war an Douar, ha d'e heul eo stlapet e êlez...

Yn 12,31 10 Ha kleved a ran eur vouez kreñv en Neñv o lavared: “Degouezet eo
 bremañ Silvidigez ha Nerz ha Rouantelez on Doue, ha Galloud e Grist, pa
 z'eo stlapet kuit Tamaller or Breudeur, an hini o zamalle dirag Doue noz-
 deiz! 11 Int-i o-deus trehet dezañ dre Wad an Oanig ha dre Gomz o zesteni,
 Ob 7,58... rag bez' o-deus disprizet o buez beteg mervel! 12 Rag-se, Neñvou, tridit a
 Ob 8,1... levenez, ha c'hwi, an dud a zo o chom enno! Siwaz d'an Douar ha d'ar mor,
 Ob 12,1-2 rag diskennet eo an Diaoul davedoc'h, fulor vraz ennañ, o c'houzoud na jom
 gantañ nemed eur pennad amzer!”

Yn 12,31 13 Pa wel an Erouant ez eo-eñ stlapet war an Douar, e stag da wall-gas
 ar Vaouez a zo anezi ganet ar Paotr! 14 Ha d'ar Vaouez ez eus roet diou askell
 an erer braz, dezi da nijal d'ar gouelec'h beteg he lec'h: “*eno e vezo maget
 eur Pennad ha daou Bennad hag eun hanter Pennad*”, pell diouz dremm an
 Naer! 15 An Naer a strink eur stêr euz e c'henou warlerc'h ar Vaouez, o klask
 ober dezi redeg gand kas an dour! 16 Med an Douar a skoazell ar Vaouez: an
 douar a zigor e c'henou, hag a lonk ar stêr e-neus an Erouant strinket euz e
 c'henou! 17 Kounnaret eo an Erouant a-eneb ar Vaouez, hag ez a da vrezelia
 gand ar rest euz he lignez, ar re a vir gourhemennou Doue hag a zoug testeni
 Jezuz... 18 Chom a ra war drêz-aod ar mor...

-13-

EUL LOEN-VIL O SEVEL EUZ AR MOR!

- Disk 1,9-10 ¹ Gweled a ran o sevel euz ar Mor eul Loen-Vil, dezañ deg korn ha seiz penn! War e gerniel ez eus deg taled, ha war e bennou anoiou a vlasfem... ² Al Loen-Vil a welan a zo heñvel ouz eul loupard, hag e dreid a zo evel treid eun arz, e c'henou evel genou eul leon ; an Erouant a ro dezañ e nerz hag e drôn hag ive e c'halloud braz.
- Mz 27,22
Dan 7,3...
Lk 4,6
- Ob 21,33
Ob 24-25...
- Mz 24,24 ³ Gweled a ran ez eo unan euz ar Pennou evel gloazet d'ar maro hag ez eo pareet e c'houlia-varo! Souezet eo an Douar a-bez, hag ez a warlerc'h al Loen-Vil! ⁴ Adori a reont an Erouant peogwir e-neus roet e c'halloud d'al Loen-Vil, hag adori a reont ive al Loen-Vil, o lavared: "Piou a zo heñvel ouz al Loen-Vil, ha piou a c'hell brezelia gantañ ?" ⁵ Roet ez eus dezañ eur genou da lavared traou dicheg ha blasfemuz! Roet ez eus ive dezañ galloud da oberia epad daou viz ha daou-ugent! ⁶ Digeri a ra e c'henou da lavared blasfemou a-eneb Doue, da vlasfemi e Ano, e Deltenn, hag ar re a zo e Teltenn an Neñv! ⁷ Roet ez eus dezañ ive d'ober brezel d'an dud santel ha da veza trec'h dezo. Roet ez eus dezañ galloud war beb Meuriad ha Pobl ha yez ha Broad! ⁸ Ha d'e adori e teu oll dud ar Bed, ar re n'eo ket o ano enskrivet adal krouidigez ar Bed war Leor-a-Vuez an Oanig!
- Yn 19,11
Mk 10,15
- Mz 26,52 ⁹ M'e-neus unan bennag skouarn, ra zelaouo! ¹⁰ Ma z'eus unan bennag o kas d'ar prizon, d'ar prizon ez aio e-unan! Ma z'eus unan bennag o laza gand ar c'hleze, e ranko e-unan beza lazet gand ar c'hleze! Aze ema dalc'h ha feiz an dud santel!...
- Mz 7,13 ¹¹ Hag e welan eul Loen-Vil all o sevel euz an douar: bez' e-neus daou gorn heñvel ouz re an Oanig, ha komz a ra evel an Erouant. ¹² Lakaad a ra da c'hoari oll c'halloud al Loen-Vil-all dirag hemañ, o tegas ar Bed hag ar re a vev ennañ da adori al Loen-Vil kenta, a zo pareet dezañ e c'houlia-varo. ¹³ Sinou braz a ra, beteg zoken lakaad tan da ziskenn euz an neñv war an douar, a-wel d'an dud! ¹⁴ Touella a ra tud ar Bed dre ar zinou a vez roet dezañ ober dirag al Loen-Vil, o lavared da dud ar Bed ober eur skeudenn d'al Loen-Vil e-neus eur gouli-kleze hag a zo deuet beo adarre. ¹⁵ Ha bez' ez eus roet dezañ galloud da rei buez da skeudenn al Loen-Vil evid ma komzo zoken al Loen-Vil ha ma lakaio laza an oll re na adorint ket skeudenn al Loen-Vil! ¹⁶ D'an oll, d'ar re vian ha d'ar re vraz, d'ar binvidien ha d'ar beorien, d'an dud frank ha d'ar sklaved, e ra ive lakad eur merk dezo war o dorn dehou pe war o zal, ¹⁷ evid na c'hello den prena pe werza, nemed an neb e-neus ar merk, ano al Loen-Vil pe niver e ano. ¹⁸ Amañ ema ar skiant: an hini e-neus spered, dezañ konta niver al Loen-Vil: eun niver a-zen a zo anezañ, hag an niver-ze eo: c'hwec'h-kant-ha-c'hwec'h-ha-tri-ugent: 666!".
- Mz 24,24...
2 Tes 2,9...
- Disk 17,9

-14-**MEULIT DOUE! DEUET EO EUR E VARN!**

¹ Ha gweled a ran: setu an Oanig en e zav war Menez Sion, ha gantañ kant-pevar-mil-ha-daou-ugent hag o-deus e Ano hag Ano e Dad enskrivet war o zal! ² Hag e klevan eur vouez euz an Neñv evel mouez douriou braz hag evel kurun braz, hag ar vouez a glevan a zo evel kanerien o lirenni war o lirennou! ³ Kana a reont eur c’han nevez dirag an Trôn ha dirag ar pevar Loen hag ar Gozidi. Ne c’hell den deski ar c’han-ze, nemed ar c’hant-pevar-milier ha daou-ugent, ar re a zo bet saveteet euz an Douar. ⁴ Ar re-ze eo ar re n’int ket bet saotret gand merhed, rag bez’ ez int gwerc’h! Ar re-ze a zo o heulia an Oanig, da belec’h bennag ez a! Ar re-ze a zo bet tennet a-douez an dud, evel Frouez-prim da Zoue ha d’an Oanig! ⁵ En o genou, n’eus bet kavet gaou ebed: bez’ int direbech!

Mz 10,18
Mz 10,26-33
Mz 5,10-12
Ef 5,9-27

⁶ Gweled a ran eun êl all o nijal e tu ar C’hreisteiz, gantañ an Aviel peurbadel a zo da embann d’ar re a zo o chom war an Douar, ha da beb broad ha meuriad ha yez ha pobl! ⁷ A vouez kreñv e lavar:

“Doujit Doue ha roit dezañ gloar, rag deuet eo Eur e Varn!

“Adorit an Hini e-neus greet an neñv hag an douar,

“Hag ar mor hag eien an doureier!”

⁸ Hag eun êl all, an eil, a zeu war e lerc’h o lavared:

“*Kouezet eo! Kouezet eo Babilon Vraz,*

“*An hini he-deus degaset an oll Baganed*

“*Da eva euz gwin-fulor he zerherez!*” ...

Iz 21,9

Yn 16,33

Jer 51,7...

⁹ Eun êl all c’hoaz, an trede, a zeu war e lerc’h en eur lavared a vouez kreñv: “Ma teu unan bennag da adori al Loen-Vil hag e skeudenn, ha ma kemer e Verk war e dal pe war e zorn, ¹⁰ hennez ive a evo euz gwin-fulor Doue, skuillet digemmesk e hanaf e Gounnar, ha bez’ e vo gwanet en tan hag er soufr dirag an êlez santel hag an Oanig! ¹¹ Ha moged o gwanidigez a zavo epad ar c’hantvejou a gantvejou! Ne vo diskuiz ebed, noz-deiz, d’ar re a ador al Loen-Vil hag e skeudenn, na d’an neb a gemer merk e ano”.

Iz 51,10
Rom 1,18-32

¹² Amañ ema dalc’h an dud santel, a re a vir gourhemennou Doue ha feiz Jezuz! ¹³ Kleved a ran eur vouez euz an Neñv o lavared: “Euruz ar re varo a varv en Aotrou, adal bremañ! Ya, eme ar Spered, dezo diskuiza euz o foaniou, rag d’o heul ez a o oberou!”

¹⁴ Ha gweled a ran: setu eur goabrenn wenn, hag, azezet war ar goabrenn, Unan heñvel ouz eur Mab-Den, dezañ eur gurunenn aour war e benn, hag en e zorn, eur falz lemm! ¹⁵ Euz ar Zantual e teu eun êl all, en eur youhal a vouez kreñv d’an Hini azezet war ar goabrenn: “Taolit ho falz ha medit! An

Mz 9,37...
Mz 13,30...

eur eo da eosti, rag deuet eo sec'h eost an Douar!"¹⁶ Hag an Hini azezet war ar goabrenn a stlap e falz war an Douar, hag ema medet an Douar!

Yn 15,1...

¹⁷ Dond a ra eun êl all euz Santual an Neñv: bez' ez-eus dezañ ive eur falz lemm!¹⁸ Hag eun êl all a zeu euz an aoter, dezañ galloud war an tan, hag e youc'h a vouez kreñv d'an hini e-neus eur falz lemm, o lavared: "Stlap ar falz lemm, ha mendem blokajou gwinienn an Douar, rag dare eo he rezin!"¹⁹ An êl a stlap e falz war an Douar: mendem a ra gwinienn an Douar hag he stlepel e gwaskerez vraz fulor Doue!²⁰ Ha gwasket eo ar waskerez er-mêz euz kêr, hag euz ar waskerez e teu gwad beteg gwistign ar c'hezeg, war c'hwezeg-kant stad a-hed...

-15-

ER SEIZ GWALENN ZIWEZA E VEZO PEURZIROLLET FULOR DOUE!

¹ Gweled a ran, en Neñv, eur zin all, braz ha souezuz: seiz êl, ha ganto seiz gwalenn, ar re ziweza, rag enno e vezo peurzirollet fulor Doue!² Gweled a ran evel eur mor-strink mesket gand tan, hag en o zav war ar mor-strink, ar re o-deus trehet d'al Loen-vil, d'e verk, ha da niver e ano, ganto lirennou Doue!³ Hag emaint o kana kan Moizez servicher Doue, ha kan an Oanig, o lavared:

Salm 92,4

"Braz ha souezuz eo hoc'h Oberou, Aotrou, Daoue oll-c'halloudeg!

Salm 145,17

"Just ha gwirion eo hoc'h heñchou, ô Doue ar Baganed!

Jer 10,17

⁴ *"Piou a jomfe heb kaoud doujañs hag heb renta gloar d'hoc'h Ano?*

"Rag bez' ez oc'h santel heb ken all,

Salm 86,4

"Ha dond a raio an oll Baganed da adori dirazoc'h,

"Ha splannet o-deus hoc'h oberou just!"

Disk 11,19
Disk 15,1

⁵ Gweled a ran goude-ze: digoret eo bet ar Zantual euz Teltenn-an-Testeni en Neñv!⁶ Euz ar Zantual e teu ar seiz êl a zo ganto ar seiz gwalenn: gwisket int gand lin, glan ha skeduz, ha gourizet endro d'o bruched gand gourizou aour.⁷ Unan euz ar pevar Loen a ro d'ar Seiz êl seiz hanaf leun a fulor, fulor an Doue a vev a-hed ar c'hantvejou a gantvejou!⁸ Ha karget eo ar Zantual gand ar vogedenn a zav diwar C'hloar Doue ha diwar e c'hal-loud, ha ne c'hell den mond er Zantual ken na vo sevenet seiz gwalenn ar seiz êl.

-16-**SEIZ HANAF KOUNNAR DOUE!**

Iz 66,6 ¹ Klevet a ran eur vouez kreñv o tond euz ar Zantual, hag e lavar d'ar seiz êl: "Kit ha skuillit war an Douar seiz hanaf fulor Doue!" ² Hag ez a ar c'henta da skuilla e hanaf war an douar, hag e tegouez eur gouli-beo, fall ha droug, war an dud o-deus merk al Loen-Vil ha war ar re a ador e skeudenn. ³ Hag an eil a skuill e hanaf war ar mor: dond a ra da veza gwad eun den maro, hag e varv peb buez a zo er mor! ⁴ An trede êl a kuill e hanaf war ar steriou hag en eien an doureier, hag e troont e gwad! ⁵ Klevet a ran êl an doureier o lavared: "Bez' ez oc'h just, C'hwi, an Hini a zo hag a oa, an Hini santel, pa warnit evel-se!" ⁶ Rag skuillet o-deus gwad an dud santel hag hini ar Brofeded, ha gwad ho-peus roet dezo da eva! Din e oant a gement-se!" ⁷ Hag e klevan an Aoter o lavared: "Ya! Aotrou Oll-C'halloudeg! Gwirion ha just eo ho parnou!"

Erm 10,21 ⁸ Hag ar pevare êl a skuill e hanaf war an heol. Ha dezañ ez eus roet galloud da bulluha an dud en tan! ⁹ Ha pulluhet eo an dud dre eur pulluc'h braz, hag e vlasfemont an Doue e-neus ar galloud war ar gwalinier-ze, med ne zistroont ket da zougen gloar dezañ! ¹⁰ Hag ar pempved êl a skuill e hanaf war drôn al Loen-Vil: teñvallaad a ra e rouantelez, hag an dud da chokad o zeod gand ar boan! ¹¹ Blasfemi a reont Doue an Neñv en abeg d'o faoniou ha d'o gouliou, med ne zistroont ket diouz o oberou fall...

Iz 11,15... ¹² Hag ar c'hwehved êl a skuill e hanaf war ar stêr Eufrad: dizehet eo an dour evid ma vo kempennet hent rouaned ar Zav-heol! ¹³ O tond euz genou an Erouant hag euz genou al Loen-Vil hag euz genou ar fals-profeded e welan tri spered fallagr evel gleskered! ¹⁴ Bez' ez int sperejou a ziaoulou! Ober a reont sinou ha mond a reont daved rouaned ar bed a-bez d'o c'hennstrolla evid ar brezel a vo da Zeiz braz an Doue Oll-Challoudeg!

1 Tes 5,2 ¹⁵ "Setu ma teuan evel eul Laer! Euruz an hini a jom dihun, hag a zalc'h e zillad evid na vo ket en noaz ha na vo ket gwelet e véz gand an dud!" ¹⁶ O c'hennstrolla a ra en eul lec'h galvet en hebreeg 'Armagedon'.

Iz 66,6 ¹⁷ Hag ar zeizved êl a skuill e hanaf en êr! Dond a ra eur vouez kreñv euz ar zantual, diwar an trôn, hag e lavar: "Deuet an Eur!". ¹⁸ Hag e c'hoarvez luhed, moueziou ha taoliou-kurun! C'hoarvezoud a ra ive eur c'hrendouar braz: heñvel outañ n'eus ket bet abaoe ma z'eus tud war an douar, ken braz-all eo ar c'hrendouar-mañ!

¹⁹ Rannet eo ar Gêr-Vraz e tri damm, hag e kouez d'an traoñ kêriou ar Baganed! Babilon-Vraz a zo deuet e koun dirag Doue, dezañ da rei dezi kalirad gwin-fulor e gounnar! ²⁰ Ha peb enezenn a dec'h kuit, ha ne vez mui kavet a veneziou! ²¹ Grizill braz evel talantou a ziskenn euz an neñv war an dud, hag an dud a vlasfem Doue en abeg d'ar grizill braz, rag braz kenañ eo e walenn...

-17-**BARN AR ZERC'H VRAZ!**

¹ Dond a ra unan euz ar seiz êl a zo ganto ar seiz hanaf, da gomz ouzin o lavared: “Deus! Hag e tiskouezin dit barn ar Zerc’h Vraz azezet war zoureier e-leiz! ² Ganti o-deus serhet rouaned an douar, hag an dud a vev war an douar o-deus mezet gand gwin he zerherez!” ³ Hag eñ d’am zegas a-spered d’eur gouelec’h, hag e welan eur Vaouez azezet war eul Loen-Vil ruz-tan, leun a anioiu a vlasfem, dezañ seiz penn ha deg kern! ⁴ Ar Vaouez a zo gwisket e moug hag e ruz-tan, alaouret a aour gand mein priziuz ha perlez, ganti en he dorn eur c’halir aour leuniet gand traou euzuz ha dihlan he zerherez! ⁵ War he zal ez eus skrivet eun ano, eur mister: “Babilon-Vraz, Mamm serhed hag euzaduriou ar Bed!”

Iz 23,17

Ezek 28,13

2 Tes 2,7

⁶ Gweled a ran ar Vaouez, mesvet gand gwad an dud santel, ha gand gwad testou Jezuz: ouz he gweled e choman souezet ha souezet braz! ⁷ Hag an êl a lavar din: “Perag e souezez? Me a zo o vond da lavared dit Mister ar Vaouez, ha Mister al Loen-Vil a zo ouz he dougen hag a zo dezañ seiz penn ha deg korn! ⁸ Al Loen-Vil a welez a oa ha n’eus ket kén anezañ! Ema o vond da zevel euz an islonk: dond a ra evid mond da goll! Souezet e vo ar re a vev war an douar, -ar re n’eo ket skrivet o ano war Leor-ar-Vuez adal krouidigez ar bed!-, o weled al Loen-Vil a oa ha n’eus mui ken anezañ hag a zo anezañ adarre!”

Disk 20,15

Disk 21,27

⁹ “Amañ, ar spered e-neus furnez! Ar seiz penn a zo seiz menez, el lec’h m’eo ar vaouez azezet warno! Bez’ ez eus ive seiz roue: ¹⁰ pemp anezo a zo kouezet, unan a zo bremañ, an hini all n’eo ket deuet c’hoaz, ha pa zeuiu e ranko chom eun nebeud amzer! ¹¹ Hag al Loen-Vil, an hini a oa ha n’eus mui kén anezañ, eñ eo an eizved, hag unan euz ar seiz eo ive, hag ema o vond da goll! ¹² An deg korn a welez a zo deg roue ha n’o-deus ket c’hoaz kemeret a rouantelez, med degemeret o-deus galloud evel rouaned epad eun eurvez, a-unan gand al Loen-Vil! ¹³ Ar re-ze n’eus dezo nemed eur mennad hepkén: lakaad o nerz hag o galloud da skoazella al Loen-Vil!

Disk 19,16

¹⁴ Ar re-ze a vrezelio ouz an Oanig... hag an Oanig a vo trec’h dezo (pa z’eo Aotrou an aotronez, ha Roue ar rouaned!), hag ive ar re a zo gantañ, an dud galvet ha dibabet ha feal...

¹⁵ Ha din e lavar c’hoaz: “An doureier a welez el lec’h m’eo azezet ar Zerc’h a zo poblou, bodadegou, broadou ha yezou! ¹⁶ An deg korn a welez hag al Loen-Vil, ar re-ze a zeuiu da gasaad ar Zerc’h, d’ober anezi eur gouelec’h noaz, da zebri he danvezioù ha d’he fulluha en tan! ¹⁷ Rag Doue e-neus lakeet en o c’halon da zeveni e vennad dezañ, da zeveni eur mennad hepkén: rei o rouantelez d’al Loen-Vil ken na vo sevenet Komzou Doue! ¹⁸ Hag ar Vaouez a welez eo ar Gêr-Vraz a ra he Rouanez war rouaned ar Bed”.

-18-***KOUEZET EO BABILON-VRAZ!***

Iz 13,21
Jer 9,11
Iz 23,17

¹ Goude-ze e welan eun êl all o tiskenn euz an Neñv, dezañ eur galloud braz, ha sklêrijennet eo an douar gand e c'hloar! ² Youhal a ra a vouez kreñv o lavared: “Kouezet eo! Kouezet eo Babilon Vraz! Troet eo en eun toull diaoulou, en eun toull-bac'h evid pep spered fallagr, en eun toull-bac'h evid peb labous dihlan, evid peb loen-vil, fallagr ha kasauz! ³ Rag euz gwin-fulor he zerherez o-deus evet an oll baganed! Ha rouaned an douar o-deus serhet ganti, rag deuet eo marhadourien an douar da binvidikaad diwar nerz he stroñs!”

Iz 48,20
Iz 52,11
Iz 47,8

⁴ Kleved a ran eur vouez all euz an Neñv o lavared: “O va Fobl! Kit er-mêz anezi, gand aon da veza kenlodeg en he fehejou ha da baka lod euz he gwalinier! ⁵ Rag he fehejou a ra eur bern da dapoud an neñv, ha Doue a zo deuet soñj dezañ euz hec'h oberou direiz! ⁶ Rentit dezi evel m'he-deus rentet hec'h-unan, ha roit dezi eun hanter muioc'h diouz hec'h oberou! Er c'halir mesket, meskit dezi an hanter muioc'h! ⁷ Evel m'he-deus klasket he gloar ha bevet er plijaduriou, evelse eo deoc'h rei dezi kastiz ha glahar! Rag en he c'halon e lavar: “Evel rouanez ez on-me azezet ha n'on ket intañvez ha ne welin glahar ebed!” ⁸ Rag-se, en eun devez hepkén, e c'hoarvezo he gwalinier: ar maro, hag ar glahar hag an naon! En tan e vo pulluhet, rag kreñv eo Doue, an Aotrou a zeuio d'he barn!

Ezek 27-28

⁹ Gouela hag hirvoudi a raio warni rouaned an douar (int-i hag a zo ganti o serhi hag o veva er stroñs!), pa welint warni moged an tan-gwall! ¹⁰ En eur jom pell, gand aon rag he c'hastiz, e lavarint: “Siwaz! Siwaz dit! Kêr-Vraz, Babilon, ar Gêr c'halloudeg! Rag en eur ober eun eur hepkén eo deuet da Varn!”

¹¹ Marhadourien an douar a ouelo hag a c'hlaharo warni, pa n'eus den ebed kén da brena o lestrajou, ¹² lestrajou aour hag arhant, mein priziuz ha perlez, danvez lin, moug, seiz ha skarleg, pep seurt koad tuia, peb lestrad oli-fant, peb lestrad koad-priziuz, arem, houarn ha marpr; ¹³ hag ive kanell, amon, louzeier-c'hwez-vad, mir, ezañs, gwin, eoul, bleud fin ha gwiniz; ejened, deñved, lestrajou kezeg ha kirri, sklaved ha tud... ¹⁴ “Ar frouez a c'hoantae da galon e-neus tehet pell diouzit! An traou druz ha skeduz a zo kollet evidout, ha biken kén ne vezint kavet ennout!”

¹⁵ Marhadourien an traou-ze, bet pinvidikeet ganti, gand an aon rag he c'hastiz, a jom a-bell da ouela ha da c'hlahari, ¹⁶ o lavared: “Siwaz! Siwaz! O! Ker-Vraz! Gwisket gand lin ha moug ha skarleg, alaouret a aour gand mein priziuz ha perlez! ¹⁷ Rag en eur ober eun eur hepkén eo bet gwastet eur binvidigez ken founnuz-all!” Ha pep sturier, peb bageer war al lec'h, ar vordaidi hag an oll re a labour war ar mor a jom a zav, a-bell, ¹⁸ hag e youhont o selled ouz moged he zan-gwall, o lavared: “Piou a zo heñvel ouz ar Gêr-Vraz?” ¹⁹ Poultrenn a daolont war o fenn, hag e youhont en eur ouela hag en

Iz 44,23 eur c’hlahari, o lavared: “Siwaz! Siwaz d’ar Gêr-Vraz! Enni, diwar he finvidigez, eo deuet da binvidikaad an oll re o-deus listri war vor, rag en eur ober eun eur ez eo-hi bet gwastet!”²⁰ “Deoc’h-c’hwi tridal ablamour dezi, ô Neñv! Ha c’hwi ive, tud santel, hag Ebestel, ha Profeded! P’e-neus Doue barnet ho parn deoc’h-c’hwi, diwar he c’houst dezi!”

Iz 24,8
Jer 25,10
Mz 23,35
²¹ Hag e teu eun êl kreñv da baka eur mên, braz evel eur mên-milin, ha d’e stlepel er mor en eur lavared: “Evel-se, en eun taol, e vezo stlapet Babilon, ar Gêr-Vraz, ha ne vezo mui kavet!”²² Ha mouez lirennerien, sone-rien, fleüterien, ha trompillerien ne vezo mui klevet ennout-te. Ha micherour ebed euz micher ebed ne vezo mui kavet ennout-te! Na mouez milin ebed ne vezo mui klevet ennout!²³ Ha sklêrijenn lamp ebed ne skedo mui ennout! Ha mouez gwaz-nevez ebed na plac’h nevez ebed ne vezo mui klevet ennout! Rag bez’ e oa da varhadourien pennou-braz ar Bed, ha gand da strobinnellou eo bet touellet an oll baganed!”²⁴ Rag enni eo bet kavet gwad ar Brofeded hag hini an dud santel hag hini an oll re a zo bet lazet war an douar!

-19-

ALLOUOIA! AN AOTROU KROG DA RÉN!

¹ Goude-ze e klevan evel mouez eur Boblad vraz en Neñv, o lavared:
“Allelouia! Ar zilvidigez, ar c’hloar, hag an galloud d’on Doue-ni!
² “Rag gwirion ha reiz eo e Varnou! Barnet e-neus ar Zerc’h Vraz,
“An hini a walle an douar dre he zerherez!
“Hag euz he dorn e-neus tennet gwad e Zervicherien!”

Iz 34,10
³ Hag eun eil gwech e lavaront: ‘Allelouia!’. Hag ar moked anezi a zav evid ar c’hantvejou a gantvejou!”...⁴ D’an douar e kouez ar pevar Goziad war’n-ugent hag ar pevar Loen, hag ec’h adoront Doue azezet war e Drôn, o lavared: “Amen! Allelouia!”.⁵ Dond a ra eur vouez euz an Neñv hag a lavar:

Salm 115,13
“*Meulit on Doue, c’hwi oll, e Zervicherien!*
“*C’hwi, bian ha braz hag a zo doujuz dezañ!*”

⁶ Hag e klevan evel mouez eur Boblad vraz, evel mouez doureier e-leiz, hag evel mouez taoliou-kurun ponner, o lavared:
“Allelouia! Rag da vad ema o rén an Aotrou, an Doue Oll-C’halloudeg!”

Mz 22,3
⁷ “Deom-ni laouennaad ha tridal, ha dougen dezañ gloar,
“Rag degouezet eo Eured an Oanig, hag e Bried he-deus en em fichet!

Yn 2,1
Yn 3,29
⁸ “Bez’ez eus roet dezi gwiska lin fin, skeduz ha glan:

“Hag al lin fin eo oberou just an dud zantel!”

Mz 22,1...

⁹ Ha din e lavar: “Skriv: ‘Euruz ar re a zo galvet da Bred-Eured an Oanig!’”. C’hoaz e lavar din: “Ar C’homzou-ze a zo gwir Gomzou Doue!”. ¹⁰ Hag e kouezan e-harz e dreid d’e adori! Ha din e lavar: “Diwall d’ober! Kenzervicher on-me ganit ha gand da Vreudeur a zoug Testeni Jezuz: ador Doue hepkén! Ha testeni Jezuz eo Spered ar Brofediez!”

Disk 1,5...

¹¹ Gweled a ran ez eo digor an Neñv: setu eur marc’h gwenn! Hag an Hini a zo azezet war e gein a vez galvet ‘Feal’ ha ‘Gwirion’: barn ha brezelia a ra er justiz! ¹² E zaoulagad avad a zo flamm-tan, ha war e benn ez eus talgennou e-leiz. Bez’ e-neus eun Ano, enskrivet, ha dén n’e anavez nemed Eñ hepkén! ¹³ Gwisket eo gand eur vantel bet soubet er gwad, hag e Ano a vez galvet ‘Komz Doue’. ¹⁴ Armeadou an Neñv a ia d’e heul war gezeg gwenn, gwisket gand lin fin, gwenn ha glan! ¹⁵ Euz e c’henou e teu eur c’hleze lemm, dezañ da skei gantañ ar baganed! Eñ e-unan o fasturo gand eur wialenn houarn, hag Eñ e-unan a wasko ar waskerez a ro gwin-fulor kounnar an Doue Oll-C’halloudeg! ¹⁶ War e vantell ha war e vorzed ez eus dezañ ive eun Ano enskrivet: ‘Roue ar rouaned, hag Aotrou an aotronez’!

Lk 10,22
Yn 1,1

Salm 2,9
Disk 2,27

Ezek 39,17

¹⁷ Gweled a ran eun êl nemedken en e zav en heol! Youhal a ra a vouez kreñv d’an oll laboused a nij e tu ar C’hreisteiz: ‘Deuit! En em vodit evid Pred-Braz Doue, ¹⁸ da zebri kig rouaned ha kig ar penn-ofiserien, ha kig tud nerzuz, kig kezeg ha kig an dud azezet war o c’hein, kig an oll dud, frank ha sklav, bian ha braz!’”

Yn 12,31

¹⁰ Hag e welan al Loen-Vil, ha rouaned an douar hag o armeadou bodet d’ober brezel gand an Hini azezet war gein ar marc’h ha gand e Armead! ²⁰ Hag ez eo paket al Loen-Vil, ha gantañ ar falz-profed, an hini a ree dirazañ ar zinou a veze drezo touellet ar re a gemere merk al Loen-Vil hag a adore e skeudenn. Bez’ ez int stlapet o daou, ez veo, e lenn an tan flammet er soufr! ²¹ Ar re all a vez lazet gand ar c’hleze a zeu euz genou an Hini azezet war gein ar marc’h, hag an oll laboused a zo bouetet gand o c’hig...

Disk 14,10

-20-

AR MARO HAG AR JEEN STLAPET E LENN AN TAN!

Mz 12,28

2 Tes 2,6
2 Kor 6,2...

¹ Gweled a ran eun êl o tiskenn euz an Neñv, gantañ alhwez an islonk, hag eur jadenn vraz en e zorn. ² Dond a ra a-benn euz an Erouant, an Naer a-wechall-goz, a zo an Diaoul ha Satan! Hag e liamma a ra evid mil bloavez, ³ e stlepel en islonk, alhweza ha siella warnañ evid na douello ket ar baganed beteg ma vo peurechu ar mil bloavez! Goudeze e ranko beza diliammet evid berr amzer...

⁴ Ha gweled a ran trônou: ar re a zeu da azeza warno a zo roet dezo ar Varn. Gweled a ran ive eneou an dud bet dibennet ablamour da Desteni Jezuz ha da Gomz Doue: ar re-ze n’o-deus ket adoret al Loen-Vil nag e skeudenn; ha n’o-deus ket ive kemeret e verk war o zal ha war o dorn! Adveva ha rén a

reont gand ar C'hrist a-hed mil bloavez. ⁵ Ar rest euz ar re varo ne advevont ket, ken na vo peurechuet ar mil bloavez. Hennez eo an Adsao kenta. ⁶ Euruz ha santel an hini e-neus lod en Adsao kenta: an eil Maro n'e-no galloud ebed war ar re-ze, med bez' ez int beleien da Zoue ha d'ar C'hrist, ha gantañ e renint epad ar mil bloavez...

2 Tes 2,9...
Lk 21,24

⁷ Pa vo tremenet ar mil bloavez, e vo Satan diliammet euz an toullbac'h. ⁸ Hag ez aio da douella ar baganed dre bevar c'horn ar Bed, Gog ha Magog, ha d'o strolla evid ar Brezel: o niver a zo evel trêz ar mor... ⁹ Sevel a reont war ledander an Douar, da gelhia Deltaoueg an dud santel hag ar Gêr karet! Hag e tiskenn tan euz an Neñv d'o lonka! ¹⁰ Hag an Diaoul a oa ouz o zouella a vezo stlapet e Lenn an tan hag ar soufr, el lec'h m'ema al Loen-Vil hag ar falz-profed; bez' e vezint gwanet noz-deiz a-hed ar c'hantvejou a gantvejou!...

Rom 2,6
2 Pêr 3,7

¹¹ Ha gweled a ran eun Trôn, braz ha gwenn, hag an Hini a zo azezet warnañ: a-zirag e zremm e tec'h kuit an douar hag an neñv: ne vez kavet dezo lec'h ebed ken! ¹² Hag e welan ar re varo, braz ha bian, en o zav, dirag an Trôn: hag ez eus digoret Leoriou! Eul Leor-all a zo degaset: Leor-ar-Vuez! Barnet e vez ar re varo diwar ar pez a zo skrivet el Leoriou, diouz o oberou dezo... ¹³ Ar Mor a ro ar re varo a zo ennañ, hag ar Maro hag an Ifern a ro ar re varo a zo enno, hag ez int barnet hini hag hini diouz o oberou... ¹⁴

Disk 3,5

Mz 25,31

1 Kor 15,26

Ar Maro hag an Ifern a zo stlapet e Lenn an tan: ar Maro-ze eo an eil, Lenn an tan! ¹⁵ Ma z'eus unan bennag ha n'eo ket e ano enskrivet e Leor-ar-Vuez, hennez a vez stlapet e Lenn-an-tan!...

-21-

KÊR ZANTEL JERUZALEM O TISKENN EUZ AN NEÑV!

Rom 8,29...

¹ Gweled a ran eun Neñv Nevez hag eun Douar Nevez, rag an neñv kenta hag an douar kenta a zo tremenet, hag ar mor n'eus ket ken anezañ! ² Hag ar Gêr Zantel, ar Jeruzalem Nevez am-eus ive gwelet o tiskenn euz an Neñv a-gichenn Doue, fichet evel eur Plac'h-Nevez kinklet evid he Fried! ³ Hag e klevan eur vouez kreñv o lavared euz an Neñv: "Setu Teltenn Doue e-touez an dud! Hag en e Deltenn e vezo o chom en o zouez! Bez' e vezint e Bobl, ha Doue e-unan a vezo ganto! ⁴ Hag e seho peb daeraouenn euz o daoulagad, hag ar Maro ne vo mui anezañ! Na glahar na youc'h na poan ne vo ket kén anezo, rag tremenet eo an traou kenta! ⁵ Lavared a ra an Hini a zo azezet war an Trôn: "Setu ma ran pep tra nevez-flamm!" C'hoaz e lavar: "Skriv! Rag feal ha gwirion eo ar C'homzou-ze!" ⁶ Ha din e lavar: "Degouezet eo! 'Me eo a zo' an Alfa hag an Omega! Ar Penn-kenta hag ar Penn-diweza! D'an hini e-neus sehed e roin euz Eienenn-Dour-ar-Vuez evid netra! ⁷ An treher e-no kement-mañ da hêrez: 'Me eo a vo' e Zoue, eñ a vo va Mab! ⁸ D'an dud laosk avad, d'ar re zifeiz, d'an dud euzuz, d'ar vuntreien, d'ar re zerheg, d'ar strobinnerien, d'an idolerien, d'an oll gaouidi, o lod dezo a vo e Lenn an tan flamm et soufr: setu an eil Maro!"

Iz 35,10
1 Kor 15,34...

2 Kor 5,17

Rom 1,29...

Ef 5,25-27
Iz 60,1

⁹ Hag e teu unan euz ar seiz êl a zo ganto ar seiz hanaf leuniet gand ar seiz gwalenn ziweza, hag e komz din o lavared: “Deus! Mond a ran da ziskouez dit ar Plac’h-Nevez, Pried an Oanig!” ¹⁰ Va c’has a ra gantañ, er spe-
red, war eur Menez braz hag uhel, ha din e tiskouez Kêr Zantel Jeruzalem o tiskenn euz an Neñv a-gichenn Doue! ¹¹ Warni ema gloar Doue, he sked a zo heñvel ouz eur mên-priziuz-kenañ, evel eur mên-yasp, sklêr evel strink.

Disk 7,1...

¹² Bez’ ez eus dezi eur voger vraz hag uhel, gand daouzeg dor, dirag an doriou, daouzeg êl, hag anoiou a zo enskrivet, re daouzeg Meuriad Bugale Izrael! ¹³ E tu ar Zav-Heol: teir zor ; e tu an Hanternoz, teir zor ; e tu ar C’hreisteiz: teir zor ; e tu ar C’huz-heol, teir zor. ¹⁴ Da voger-kêr ez eus daou-
zeg diazez, ha warno an daouzeg ano euz daouzeg Abostol an Oanig...

¹⁵ An hini a gomz ouzin a zo gantañ, e-giz muzul, eur gorzenn aour, dezañ da vuzula ar Gêr hag he dorojou hag he moger. ¹⁶ Ar Gêr a zo pevar-
c’horneg, keid a-dreuz hag a-hed. Gand e gorzenn e vuzul ar Gêr: daouzeg mil stad! He hirder, he ledander hag hec’h uhelder a zo keid ha keid! ¹⁷ Muzula a ra ive he moger: kant pevar ilinad ha daou-ugent! Eur muzulad a zen eo hini an êl... ¹⁸ Diazez he moger a zo mên-yalp, hag ar Gêr a zo aour glan heñvel ouz strink glan! ¹⁹ Diazezou moger ar Gêr a zo kaerreet gand bep seurt mein priziuz ; an diazez kenta a zo mên-yalp ; an eil diazez, safir ; an trede diazez, kakedon ; ar pevare, emrodez ; ²⁰ ar pempved, sardoniz ; ar c’hwec’hved, agatenn ; ar seizved, aourvên ; an eizved, beril ; an naved, topaz ; an degved, mên glaz-aour ; an unegved, zirkon ; an daouzegved, amestist! ²¹ An daouzeg dor a zo daouzeg perlezenn. Peb hini euz an dorojou a zo greet gand eur berlezenn hepkén! Leur-Vraz ar Gêr a zo aour glan evel strink treuz-weluz!

Yn 2,19...
2 Kor 3,18
Iz 60,3...

²² Ne welan enni santual ebed, rag an Aotrou, an Doue oll-c’halloudeg, eo he zantual, hag ive an Oanig! ²³ Ar Gêr n’he-deus ezomm ebed euz an heol nag euz al loar, dezo da bara warni, rag ema gloar Doue ouz he sklêrijenna, hag he Lamp eo an Oanig! ²⁴ Ar Baganed a valeo ouz he sklêrijenn, ha rouaned an douar a zegaso dezi o gloar! ²⁵ He dorojou ne vint ket serret war an deiz, ha ne vo eno tamm noz ebed! ²⁶ Dezi e kasor gloar hag enor ar baganed. ²⁷ Enni ne z’αιο netra zihlan, nag an neb a ra traou euzuz, na gaouiad ebed, med hepkén ar re a zo enskrivet war Leor-ar-Vuez an Oanig...

-22-

“AMEN! DEUIT, AOTROU JEZUZ!”

Yn 4,1...

¹ Diskouez a ra din Stêr Dour-ar-Vuez, skeduz evel strink, o tond euz Trôn Doue hag an Oanig. ² E-kreiz al Leur-gêr hag ar Stêr a zo a bep tu dezi, ema Gwezenn-ar-Vuez! Dougen a ra daouzeg drevad frouez: beb miz e ro he frouez! Ha deliou ar Wezenn a zo mad da barea ar baganed...

³ Ne vo mui ano a valloz: enni e vo Trôn Doue hag an Oanig. Hag e Zervicherien a vo ouz e zervicha. ⁴ Gweled a raint e zremm, hag e Ano a vo

1 Yn 3,2
1 Kor 13,12
war o zal. ⁵ Ne vo mui a noz, ha n'o-deus ezomm ebed euz sklêrijenn eul lamp, nag euz sklêrijenn an heol, rag Doue an Aotrou a sklêrijenno warno, ha ren a raint a-hed ar c'hantvejou a gantvejou!

Disk 1,3...
⁶ Din e lavar c'hoaz: "Ar c'homzou-ze a zo feal ha gwirion! An Aotrou, Doue sperejou ar brofediez, e-neus kaset e êl da ziskouez d'e Zervicherien ar pez a rank c'hoarvezoud dizale!" ⁷ "Ha setu ma teuan dizale! Eüruz an hini a vir Komzou ar Brofediez a zo el Leor-mañ!"

⁸ Ha me, Yann, me eo an hini e-neus klevet ha gwelet kement-se! Ha p'am-eus klevet ha gwelet, ez on kouezet d'an douar da adori e-harz treid an êl a ziskouez din an traou-ze. ⁹ Hag e lavar din: "Diwall d'hen ober! Kenzervicher on-me ganit ha gand da Vreudeur ar Brofeded, ha gand ar re a vir Komzou ar brofediez-mañ: Doue eo dit adori!"

Iz 40,10
Disk 7,14
Rom 1,29
¹⁰ Lavared a ra c'hoaz: "Na ziell ket Komzou ar Brofediez a zo el leor-mañ, rag erru eo ar Poent!" ¹¹ An neb a wall, ra wallo c'hoaz! An den hudur, ra hudurraio c'hoaz! An den just, dezañ ober c'hoaz ar justiz! An hini santel, ra zantellaio c'hoaz!" ¹² "Setu ma teuan dizale! Va gopr a zo ganin, da rei da bep hini hervez e ober!" ¹³ 'Me eo a zo' an Alfa hag an Omega, ar C'henta hag an Diweza, ar Penn-kenta hag ar Fin! ¹⁴ Eüruz ar re a zoub o zae evid kaoud galloud war Wezenn-ar-Vuez, ha mond er Gêr dre an Norojou! ¹⁵ Er-mêz ar chas, ar gorvigellerien, an dud serheg, ar vuntrerien, an idolerien, ha kement den a gar hag a ra ar gaou! ¹⁶ Me, Jezuz, me am-eus kaset va êl da destenia deoc'h an traou-ze evid an Ilizou! 'Me-eo-a-zo' Gwrizienn ha Lignez David, Steredenn skeduz ar Beure!"

Iz 55,1
¹⁷ Ar Spered hag ar Plac'h-Nevez a lavar: "Deuit!" Hag an hini a zelaou, dezañ lavared: "Deuit!". Hag an hini e-neus sehed, dezañ dond! Hag an neb a gar, dezañ kemer Dour-ar-Vuez evid netra!...

Dt 4,2
¹⁸ Testenia a ran da gement-hini a glev Komzou ar Brofediez a zo el Leor-mañ: ma teu unan bennag da staga outo tra pe dra, e teuo Doue da staga outañ ar gwalinier skrivet el Leor-mañ! ¹⁹ Ha ma teu unan bennag da zilam tra pe dra euz ar C'homzou a zo el Leor a Brofediez-mañ, e teuo Doue da zilemel e lod euz Gwezenn-ar-Vuez hag euz ar Gêr Zantel a zo skrivet diwarno el Leor-mañ!...

Fil 1,23
Ob 3,20
1 Kor 15,23
²⁰ Lavared a ra an Hini a zo o testenia an traou-ze:
"Ya! Dond a rin dizale!" ... "Amen! Deuit! Aotrou Jezuz!"

²¹ Gras Jezuz an Aotrou gand an oll dud santel! Amen!...